

Archives et bibliothèque diocésaine de Quimper et Léon

Document numérisé
Source : <http://catholique-quimper.ccf.fr/diocese/bibliotheque-et-archives.html>

2011

Feiz ha Breiz

E TAL AN TAN

An diskar-amzer a zo aet war-araok gand e labour; an avel foll, ar glao, ar reo, o deus peurzistaget an deliou melenet diouz ar gwez; deuet int a-benn evel, pa lavarfen, da laza ar vuhez en hor parkeier hag en hor c'hoajou; an traou, hag a zeblante kel laouënik c'hoaz, breman 'z'eus eun nebeut miziou, n'ez eont mui e tu ebet; evel maro int. An oabl a zo deuet da veza golbet a goumoul teo, a guz an heol ouzomp hag a vir ouz e vannou skedus ha tomm, da bara war an douar; al laboused ive a zo chenchet, evel re all en o flas; gwelet e vezont a vandennou bras, o tremen a-us d'hor pennou, o vont war-du ar c'hoajou douñ, ankounac'haet ganto o c'hanaouennou lirin; pep tra endro d'eomp, a ro da anaout, eo dizroet ar goanv, ar goanv tenval, ar goanv kriz. Nag ez int eurus ar re o deus ti hag oz, hag eur gwele da gousket en noz; eurus int ar re a c'heil, war an deiz, labourat da domma o izil; hag a c'hell pa deu an noz, azeza e kichen eun oaled leun a dan.

Digoret eo, pell zo, ar beilhadegou endro d'ar c'hef dero pe d'ar podad boued o poazat e korn an oaled. Amzer griz, avel yen, barrou kazarc'h ha glao, an noz o tont a-daol, mall a zo da ober al labour ouz al loened, ma vezo gellet mont d'an ti, el lec'h m'eo sklêr ha gwasket ha laouen en em gaout asamblez, goude beza bet dispar-tiet, a-hed an deiz. Tenval sac'h eo, ne weler ket liou an daouarn ermaez, an avel-gwalarn a c'houez, a c'houez, hag a laka an doriou da storlokât hag an ti da grena; o va Doue, na brao en em gaver en ti, endro d'an daol, war-ni boued tomm da zebri; na reuzeudik int an dud paour n'o deus ket kavet a lojeiz da dremen an noz.

Kerkent ha ma' z eo dastumet traou koan, e koumans ar veilhadeg; ar merc'hed, goude beza graet o dever ouz ar vugale vihan, a grog en o nadoziou; ar gwazed o chacha war eur c'hornad-butum, a stag ive d'ober eun tamm bel-beterez bennak, e keit ha m'eman ar vugale, a vez er skol, daoubleget war o leoriou hag e chal da zeski o c'henteliou. An tan koulskoude a zo breman bras; e welet a rer, o pilammât en oaled; bremaik pep hini a glasko e blas war ar skabell endro d'ezan, hag unan eus ar vugale gosa a gemero eul leor brezonek hag a lenno a vouez-uhel er gountadenn pe eur gentel bennak; holl dud an ti a zigoro bras o diskouarn hag a zelaouo gant plijadur.

— Ar marvailhou ken nebeut, ne vankint ket, marvailhou an amzer goz, kekeier an amzer vreman, ar pezh a vez bet klevet da zul ha da zeiz ar marc'had, pep unan a gav e beziad da lavaret. Aliës da zul hag awechou da zadorn d'an noz, eman ar c'hiz d'ober eun abadenn gartou pe zomino, etre tud an ti pe gand an amezeien. — Buan ez a ar veilhadeg endro, den na vez inouet, rak karantez ha doujans a zo er c'halonou, an eil evid egile ha peb unan en em gav eurus er stad hag er renk m'eman. Pa glever an horolach o sini eiz taol, e teu peurliesha ar mare da lenn buhez ar zent, buhez ar zent! na vez ket dilezet, e gwirionez, dek gwech edoug ar bloaz, rak zoken, pa vez kalz labour, e kaver an tu d'he lenn epad ma walc'her an traou koan. Al leor santel! an holl o deus plijadur ouz e zelaou hag an eil goude egile eo, e fell d'ezo he lenn; pa zaver d'ar penn-uhela d'an ti, her gweler du-hont, kluchef war stal ar bara, koz koz eo, hag a forz da veza bet digoret bemdez, n'en deus ket a c'hoant da zarra mui, n'eo ket eur souez e vefe mogedet ha louzet eun tammig gant roudou an daouarn; sonjit ta, ar vamm-goz eo he devoa he bet antronoz he eured digand eur voereb d'ezi. Koulskoude ar vugale-vihan a zo koulsket-mik en o gwele; o c'hlevet a rer bep an amzer, evel o komz hag o c'hervel unan bennak e kreiz o c'houk, met an holl a oar emaint oc'h hunvreal; den ne ra evez outo. Ne glever mui grik ebet, an holl a zo tavet breman en ti, er maez, an avel a c'houez atô, eur vouez neuze a lavar « En hano an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel », hag a lenn buhez ar

zent. Endro d'an oaled, an daouarn o deus graet ive sin ar groaz; n'ez eus mui nemet skouarniou o selaou rak er c'homzou, er c'henteliou, er skoueriou a gouez diwar muzello al lenner, ez eus evel eur vertuz, eun nerz hag a zigas dudi er spered ha joa er galon. Epad an deiz, al labour, an amzer a zo bet tenn, prest oar bet da fallgaloni ha da goueza dindan ar zamm ha breman ar zonz eus an holl boaniou-ze a nij kuit hag a lez hepken ar zonz eus ar miritou gounezet. Ar zent koz eo a zav eus o beziou; kemeret a reont buhez a-nevez hag e teuont evit rei kalon, evit komz ha kelenn o bugale. Goude buhez ar zent, goude beza o gwelet evel gand an daoulagad, o c'hlevet evel gand an diskouarn, nag aës, na freaüs eo d'an tiad tud a-bez, koueza d'an daoulin evit lavaret grasou. Dre ar bedenn oa bet koumanset an dervez, en eur zével diouz ar mintin, dre ar bedenn c'hoaz, eo e vezo echuet. Da Zoue oa bet roet ar galon en eur zihuna, da Zoue eo e vezo roet en eur vont da gousket; e gwirionez, da Zoue ha gand Doue, eo bet ar galon-ze epad an deiz, epad m'oa daoubleget ar c'horf evid al labour er parkeier, penaos Doue ne zigasfe ket breman e elez da astenn o mantell war an ti kristenze, evid e zifenn enep danjeriou an noz du hag evit ma vezo laouen an hunvreal...

An den a c'hello mont da bell eus ar gêr, c'bench a c'hello bro ha micher, gwelet a c'hello kals traou kaer, kerio ha broio pinvidik, morse ne gavo netra par, e nep lec'h ne danvo netra ken mat ha ken c'houek d'e galon a vreizad, eget ar beilhadegou-goanv-ze, tremenet e kichen e dad hag e vamm garet, laouënaet gant c'hoarzadennou lirin e vreudeur hag e c'hoarezed, endro d'an oaled leun a dan.

« An nep a c'houez bemdez a c'hounit e repoz
D'an dud vat Doue en deus graet an noz. »

L. B.



Eun nebeud mennoziou diwar-benn ar vuhez

Petra bennak pe h'ou bennak a vev a rank, eme an Doktor bras sant Thomas, kaout ennan e-unan, ha nann gortoz-a-ziavaez, mammenn e nerz ha gwriz enn e ober; den eta ne vezo douget da rei an hano kaer a « veo », na d'ar steredenn aour a sked a-uz hor penn, na da blanedenn ront an douar-ma, eviti da ober, war he hirgelc'h, eire peder ha pemp kant leo dre vunud, na d'an êr skanv, ledet a bep tu d'eomp hag a dreuz a-denn-askell, adalek ar mintin beteg an ncz, bandennou laboused, na d'ar mor finvus a luska, war gr-bell e goummou, ar stur'er hag e vag, na d'ar menezioù mac'hagnet, aet o blêo diwarno. Traou evelse ne hellont, dreizo o-unan, e nep doare, degas kemm ebet en o stad; skijaved int holl, penn-kil-ha-troad, ha netra ken, laouen evelato, diouz lavar ar prophet Baruch, da veuli o C'hrouer, dre o aked da blega d'al lezennou roet dezô gantan, poan ha doan enno, er c'hontrol, hervez meno an Abostol, ken aliës tro ma implij an den o servichou evit dic'hoanta e youlou divalo.

E rouantelez ar plant eo en em ziskouez ar vuhez evit ar wech kenta; ganto eo goloët he fazenn izella hag an diweza soun e tistag, evel ma komz sant-Denez, enno eo her c'hlever. Ar « philosoph » Aristot a ro d'eomp da anaout n'eo buhez ar plant nemet eur c'houk dibaouez; o begou hir ha tano, emezan, a sankont en douar, evit dastum eno ha tenna ac'hano o bevans pemdeziek, hag o « c'horollennou » a ginnigont da bokou an aezenn pe da vannou an heol, da veza livet brac, araog ma taolo an nevez-amzer war o fenn he c'hurunenn a yleûn. Ouspenn eun hanter

million a rummou plant a zo sk'gnet dre bevar c'horn ar bed, kaeroc'h, skedusoc'h, souezusoc'h an eil eget egile, ha neb a vefe lemm awalc'h e lagad evit dineiza kement marvailh en deus k'zellef dourn Doue war o dremm ne gafe ket, evit sur, e holl yezou an dud, komzou gouest da embann, egiz ma vefe red, braster, furnez, gouiziegez an Oberour hep par en deus graet an traou ze.

Gant an anevaled mut e savomp eur bazennn uheloc'h war skeul verr ar vuhez; d'shenvel diouz ar plant ne hellont na diblas na santout, ar c'houec'h kant million rumm eo graet ganto arme vras al loened a danv dousder ar vuhez, muioc'h pe nebeutoc'h, hag a vale, a ruz, a red, a nij, diouz an doare anezo, eus eul lec'h d'eul lec'h all, bountef holl warzu o fal, dre eun hent dichanjus, gant eun nerz kuzet ha misterius, aes evelato d'vinout ennan galloud hep muzul ar C'hrouer e-unan. Arvesti a-dost ouz anevaled zo, ha pa ne ve nemet epad eun dek munud hepen, a zo eun dudi, ken evit ar spered, ken evit ar galon, kement a vurzudou en em zispleg dirag an daou-lagad digor bras da zellet; beachou ar pesked, n'ezioù al laboused, boaz'ou an amprevaned, pebez traou estlammus! ar gwenan dillo a ziskoulm, en eur c'hoari, a lavar an Aotrou Marchal, eur gudenn, pe skaeroc'h, e galleg, eur « problème de minima » kavet d'aes gant paotred ar c'halkul uhela; ha p'ou ne anavez ket ar ger-man euz an « entomologist » brudet Fabre, bet keit all penn ouz penn gant e amprevaned: « Ne gredan ket e Doue, e welet eo a ran ».

Eur gammed c'hoaz ha setu ni pignet beteg an den, sounnet e dinell war an douar, met troet e dal

warzu an nenv ha gouest d'e dizout, gant ma chomo harpet dalc'hmât e wanded war nerz an Holl-C'hal-loudek; eur spered en deus, frank, ledan, doun, d'gor da gement gwirionez a zo, hep astal war roud an eil pe eben anezo; seulvui en deus, seul vui en deus c'hoant kaout, ha n'en do e walc'h morse, nemet leu-niet e ve, dreist gonvor, gant ar feunteun-ze a skian-chou ma 'z eo ar Wirionez keita; eur volonteiz en deus, hi, ivez, divent, hep termen na muzul, graet evit ar Mad, atao o kestal hini pe hini, fals pe wir, bras pe vihan; an naon hepred etre he dent, peira bennag a zebr, ha barnet da gaout naon, keit ha ma ne vo ket bouetet gant ar Mad a ziver hag a zired diou-tan kement mad all a zo; eur galon en deus, hep be-venn evel e spered hag e volonteiz, douget da garout, dre gaer pe dre heg, met re alies s'ouaz! pouzet war henchou a-dreuz-gant drouk-youlou ar c'hig ha gwal-leurus awalc'h evit en em zaotra, e teil al loudouriez, hag hi graet evit en em veuzi er mor hep ribl a garan-tez ma 'z eo an Aotrou Doue. Paotred ha merc'héd fo-ran, re voazet da zarempredi ar feunteunioù flierius, selaou't mouez h'rvoudus ha leun a zaelou ar paour-kez barz, Alfred de Musset, bet lazet yaouank c'hoaz-gant chas klav e dechou heugus:

(Er plijadur'ou faos e karan o gervel
E kavan blaz ker fall mag e kredan mervel).

Ah! buhez an den, buhez e spered, buhez e volon-tez, buhez e galon, na kaer int o zeir, pa vezont reizet mat! Met pegen pell emaint goulskoude euz hini an Aelez, e huelder an nenv, euz hini Doue, dreisi-holl, penn-abeg, gwirizenn, eienenn an holl vuhez ou all!

(Da genderc'hel).

J. L'HELGOUACH, O. M. I.

Buhez an Tad Maner

Misionou 1669 a voe graet e eskoptioù Kemper ha Leon. Eun niver bras a dud adarre a voe kelennet ha santellaet.

N'ouzomp ket kalz a dra diwarbenn misionou Nevez. Esk'bienn, Aodiern, Primelin, Sant-Tujan, Riek, Mer-leak, Koray. Eskob nevez Kemper, an aotrou Koeflogon, a welas ar parrezioù-ze goude ar mision hag a roas en-no ar Gonfirmasion. Evelse e kave tud preparet mat da glevet e gentelioù hag e c'hoare'hemennou.

Da viz mae, evel kustum, an Tad Maner a brezegas e Douarnenez. Skurz maro oa. Met Doue her frealzas o ti-gas d'ezan eur misioner eus an dibab, an aotrou Es-nault, doktor e Sorbon. Heman a oa eur misioner bru-det, en doa prezeget e kalz parrezioù eus Frans, hag en doa c'hoant gwelet gant e zaoulagad e-unan petra oa misionou Breiz. Dont a reas war droad eus Paris da Vreiz, hag evit gellout labourat en hor bro, ec'h en em lakeas da zeski ar brezoneg.

Eur misioner all a en em ginnigas d'an Tad Maner: an aotrou a Bonkallek, eus Riek. Heman, epad mision Riek, a zeskas gant an Tad Maner en em zistaga mui-oc'h mui d'ouz madou ar bed. Ker skoet e voe e spered, ma kuiteas ar bed eun nebeut bloavezioù war-lerc'h, goude maro e wreg evit beza beleg. Mervel a reas person e Riek.

Erfin an Tad Maner a gavas an den a c'hede a bell zo: eul Lean eus e Urz, gouest da gemeret war e zis-koaz eul lodenn eus e garg pounner. Er bloaz 1668 e teuas d'ezan an Tad Visant Martin, Breizad dre ar gwad, ha Breizad a galon. Anaout a rae ar brezoneg, yec'hed en doa; yaouank oa c'hoaz, rak n'en doa ne-met 40 vloaz, desket bras war ar skianchou sakr, pre-

zeger helavar. Meur a wec'h p'edo yaouank, en doa klevet an Tad Maner o prezeg, ha c'hoant en doa d'ober evel dan vad d'an eneou, d'o gounit da Zoue.

Dre vision Lesneven eo e komansas an Tad Mar in. An aotrou Esmault a voe ive hag eur beleg all, dok'or e Sorbon evel dan, Andre ar Meur. Eun ugent beleg bennak a ziredas da vision Lesneven.

Kalz tud a zistroas ouz Doue, ha da zeiz ar gommunion evit an Anaon, 18.000 den bennak a dosteas ouz an daol zan'el. Evel m'hon eus lavaret diwarbenn Landivis'au, tud eus a bell a zirede d'ar barrez e veze mision enni, evit gounit induljansou o komnia evit an Anaon.

Da fin ar bloaz 1669, eskob Kemper, an aotrou a Goetlogon, a skrivas d'an Tad Maner ez oa en e eskopti eur barrez hag he doa ezomm bras da veza sikouret: parrez Tregunk. An Tad Maner a gasas eur misioner da barrez Tregunk da gompesa an traou ha da brepari an dud d'ar mision.

Hen a yeas da Wened da velet an Tad Kerlivio hag an Tad Huby, evit goulenn kuzul diganto diwarbenn sevel eun ti a Retred e Kemper evel ma oa e Gwened. Chom a reas e Gwened eul lodenn vras eus miz'ou genver ha c'houevrer 1670, ha pa zistroas da Kemper e klevas lavaret n'oa ket aet mat an traou e Tregunk. An dud n'oa doa c'hoant ebet da gaut eur mision, hag an aotrou person zoken ne felle ket d'ezan rei digemer d'an Tad Maner.

An Tad Maner, hep marc'hata, a en em lakeas en hent evit mont da Dregunk gant dek misioner hag an Tad Martin. Kavet e voe lojeiz ha kement a oa ezomm. Goude ar brezegenn genta, an dud a voe gounezet hag a ehansas da cnebi ouz ar mision. An aotrou person e-unan a voe gounezet; pedi a reas ar visionerien da leina en e di, hag eun taol chans eo n'en dije ket roet lojeiz d'ezo, rak epad ar mision ar presbital a goue-

zas en e bouff eul lodenn anezan. Ma vije bet ennan ar visionerien e vijent bet flastret dindan an treustou.

Ar mision a voe kaer meurbet. An holl a goveseas o fec'hejou, beteg ar yugale sez vloaz. Epad m'edo, eun deiz, an Tad Maner o prezeg diwarbenn sant'elez ar Werc'hez Vari, e voe klevet eur vaouez o lenva, glac'haret holl. An dud all a lenve ive, hag ar prezeger e-unan n'hellas ket derc'hel e zaelou. Ar vaouezze a lenve, evel Madalen, war he fec'hejou; goulenn a reas pardon a vouez uhel evit he skoueriou fall, ha da c'houde ez eas da veva en eul lec'h all, gant aon da goueza adarre er pec'hed.

E Tregunk an Tad Maner, oc'h ober tro an tiez, a gavas eur beleg koz koz, hanvet Yann ar Baradoz, eus hano ar ger m'oa ganet enni. Kant vloaz en doa, ha santel en doa bevet; en eur vro hag edo enni an dud ken troet da eva, n'oa bet morse rebech ebet d'ober d'ezan.

Ep'ad mision Tregunk, d'an 19 a veurs 1670, gouel sant Jozef, eo e voe digoret e Kemper ti ar Retred. An Tad Maner eo a c'hoant eas kaout e Kemper an ti-ze, rak gouzout a rae pegement a vad a oa bet graet gant an ti Retred savet e Gwened. Gwened a oa re bell evit tud eskopti Kemper, ha talvoudus oa kaout tostoc'h eun ti henvel.

N'e ket hep poan, sklear eo, e voe savet ti Retred Kemper, rak her e kouste, hag aluzennou an dud vad, d'ezo da veza bras ha niverus, ne zigasent ket an arc'hant a oa ezomm. Met e penn skolach Kemper oa bet hanvet an Tad Jegou, eun den desket bras, hag ouspenn leun a nerz-kalon hag a ijin. Heman a gasas al labour da henn. Sikouret e voe gant an itron a Vrennilhe hag an aotrou Picot, person Plougernevel. Ar re-man, etrezo o daou, a roas 500 lur. Beleien, tud-chentil, micherourien, lahoreurien a zikouras ive, o rei lod arc'hant, lod mein, koad, lod all labour o di-

vrec'h. An itroun a Bratelas, pinvidik bras ha karan-tezus meurbet, a roas he-unan peadra da zevel eul lodenn vras eus an ti.

Eun ti kaer a voe graet, enna 80 kambr, hag ous-penn salion bras, diou renkad gweleou enno. Plas a oa da z'gemeret 200 den er memes amzer.

E Gwened e veze gwelet beteien, tudchentil, bourc'hizien, labourerien, micherourien o tont da heulia ar memes retred. E Kemper, an Tad Maner a roas ali d'ober dishenvel, da c'hervel er memes amzer an dud eus ar memes stad, tudchentil gant tudchentil, bourc'hizien gant bourc'hizien, labourerien gant labourerien. Evelse e veze gellet rei aesoc'h da bep rumm ar c'henteliou o doa ezomm da glevet. E Gwened, an Tad Huby eo a rene ar Retred gant daou eus e genvreudeur. O zri e choment stag ouz skolach ar Jesuisted. E Kemper an ti a voe renet gant an Tad Jegou, mestr ar skolach, ha da c'houde gant ar re a zeuas en e blas.

Adaleg ar penn kenta, ti ar Retred a reas kalz vad. Eun dudi oa gwelet an dud o senti ouz ar reolenn, oc'h ober kement a veze gourc'hemennet d'ezo. Gant diegi e kuitaent an ti santel, ha sklerijennet, kennerzet, ez aent da skigna en dro d'ezo skoueriou ha kenteliou mat.

Daoust d'al labour en doa bet gant Retred Kemper, an Tad Maner a reas evelato misionou er parrezion. Goude Tregunk ez eas da Veuzek-Konk, Moelan, Lanriek, Langolen. Epad miz mae e prezegas e Douarnenez, ha da c'houde e Plourin-Montroulez hag e Ploumoger.

An Tad Visant Martin a gendalc'he da labourat. Met deuet oa ar mare d'ezan d'ober ar pezh a hanver e drede bloaz en eul leandi Jesuisted. An Tad Oliva, Rener bras an Urz, hen diskargas eus ar bloaz-ze hag a lavaras d'ezan kenderc'hel d'ober misionou e Breiz. « Ar

misionou-ze emezan a dalvezo d'ezan da drede bloaz.

An Tad Oliva a skrivas ive d'an Tad Maner a-nevez: « Eurus oun o klevet hoc'h eus kavet en Tad Martin eur misioner evel a c'hoantaec'h. E rei a ran d'oc'h a galon vat. Marteze e c'hello tenna diwar ho keh eul lodenn eus ar bec'h hoc'h eus da zougen. N'hellan ket lenn ar c'heleier diwarbenn misionou Breiz hep santou ar Garantez evit Doue o kreski em c'halon. Kendalc'hit, Tad ker, da labourat er winienn-ze, evel hoc'h eus graet bete vremen. Ra blijo gant Doue skuilh heb ehan e c'hraou war bro Vreiz, Eun deiz ar Vretoned-ze a vezo evidoc'h eur gurunenn a c'hloar. »

Y. U.



An diou voutailh

Gwilhou an Ozac'h, merour Kerzavid, e parrez Plougonven, a oa eul labourer mat hag eun den a urz; poania a rae edoug an deiz, e vaouez hag hen, evit sevel e dri bugel ha paea e C'houel-Mikael, met n'en devoa ket a chans; koll war goll a en em gave gantan hag en deiz-se edo o vont da Vontroulez da werza e vuoc'h ziweza.

Tenval e oa e benn; krog e kabestr e vuoc'h e kerze en he raok, strafuilhet, o sonjal en amzer da zont. Petra deuje da veza hen, koulz hag e dud, ma ne c'hellje ket paea e C'houel-Mikael?

Ker reuzeudik ec'h en em gave ha ker fallgalonet pa dremene ebiou-kroaz Bohast, savet war lein eun dosenn e weler diwar he c'hern traonienn ar Jarlot ha Trovongant hag, er penn pella, Montroulez, ma azezas war chichenn ar groaz goude beza tennet e dok d'he saludi.

En eun taol, Gwilhou an Ozac'h hanter voredet, ker skuizet e oa gand ar bale ha gand an enkreuz, a voe dihunet gand eur vouezig skiltrus :

— Selaou 'ta, paotr, gwerza a rafes d'in-me da vuoc'h ?

Gwilhou o klêvet komz outan a zizroas hag a welas eur c'hoz tamm paotr bihan ha n'en devoa ket a dri droatad uhelder daoust m'en devoa doare da gaout eun daou tigent vloaz bennak, da nebeuta ; gwisket e oa evel eun dijentil, gand eur zae c'hlas, eun tok du, eur bluenn wenn outan, ha bodreou ler en dro d'e ziwesker. E zaoulagad a verve en e benn. Evid an eil gwech e lavaras : « Lavar 'ta, gwerza a ri d'in da vuoc'h ? »

Goude beza bet nec'het, eur pennad, ar c'houer a respontas gand enkreuz, o veza m'en devoa aoun rak unan hag a gemere evid eur c'hornandon : « Gwerza a-walc'h a rafen va vuoc'h d'it ma roes d'in 50 skoued eviti ; n'her roin ket evit nebeutoc'h, rak muioc'h eged evelse a daly ! »

Ar paotr bihan a c'hoarzas : « N'ez pezo diganen nag aour, nag arc'hant, met eun dra bennak kals presiusoc'h eged an dra-ze. Gouzout a ran ez out paour raz-iliz, mat, ar pez a ginnigan d'it az tenno eus an dienez hag az kraio pinvidik ma ouezes hel lakat da dalvezout ! »

En eur vont kuit e tennas eus e c'hodell eur voutailh wer tenval da ziskouez da Wilhou :

— Mont da rei va vuoc'h evid ar c'hoz boutailh-ze, a ! biken avat; petra 'rin-me gand eur penefi evelse ? Nann ! nann ! ma 'z peus c'hoant d'he c'haout degas hanter kant skoued aman !

— Selaou aman gamen, va mignon, a lavaras ar C'hornandon ; ma kinnigan ar voutailh-ze d'it eo evit da vrasa mad; kemer-hi eta; Dizro d'ar gêr, lak hi war an daol ha lavar : « Boutailhig, gra da vicherig ! » Ne lavaran ket hirroc'h d'it ; gwelet a ri da-unan petra denni anezi. »

Gwilhou a jomas pell hag hir nec'het :

— Tou d'in aman, dirak ar C'hrist a zo ouz ar groaz-ze n'emaout ket o klask paka eur paourkaez den.

— Me ne douan netra, eme ar c'hornandon ; lez pe gemer; gra unan a zaou; bez dinoc'h, ma ne gemeres ket va boutailh e varvi en da baourentez.

— Mat, kemer va buoc'h, eme an tregeriad, ha ra 'z i gand an diaoul ma 'z peus klasket va laerez.

— A ! breman 'welan e komprenes eun dra ben-nak, eme ar c'horrig. Hep dale am trugarekay ; dizro d'ar gêr ha lavar d'az kwreg skuba da di ha kompenn an daol ha gra neuze ar pez am eus lavaret d'it.

Mont a eure dre wenojenn Milin-Vreon, o chacha ar vuoc'h a-bouez ar gordenn ha Gwilhou an Ozac'h a zizroas da Gerzavid gand e voutailh en e c'hodell nec'h et a-walc'h en aon da veza degemeret fall gand e wreg :

— Sell 'ta, emezi, te ' zo dizro, ken abred all !

— Ya ! emezan; kavet em eus eur prener e kroaz. Bohast hag em eus gwerzet raktal.

— Michans ez peus bet eur priz kaer; hanter kant pe dri ugent skoued, da nebeuta; ezomm a-walc'h hon eus.

— A-raok lavaret netra ebet ken d'it, eme an ozac'h, e c'houlennan ouzit ober daou dra: skuba an ti ha renka ar skudili war an daol; goudeze e livirin d'it perak an dra-ze.

Ar wreg souezet a glaskas gouzout perak e roe he gwaz d'ezan an urziou a roe, met hen ne lavare grik ; Skuba a eure evelato an ti ha goudeze e lakeas eun doubier war an daol gant pemp skudell ha pemp loa. Neuze Gwilhou a dennas ar voutailh eus e vruched, he lakeas war an daol evel ma oa bet gourc'hemennet d'ezan gand ar

c'hornandon hag a lavaras: « Boutailhig, gra da vicherig ! »

Raktal ar bont a darzas evel bont eur voutailh Champagn hag e fiskennas eus ar voutailh daou geginer koant, gwisket e gwenn, gant diouaskell war o c'hein, hag a zounge war o daou zourn pladennou arc'hant; en unan e oa eun tamm ragot hag en egile stripou.



An ozac'h, ar wreg hag an tri bugel a jomas sebezet, na petra 'ta, o welet kemend all; an daou geginer a renkas ar pladou, hag a en em dennas kerkent adarre en o boutailh.

— Da eo d'ecamp debri, eme an ozac'h d'e wreg; an traou-ze holl a zo d'eomp.

Hag e stagjont da zebri; mat e oa ar geustereunn dreist holl evito ha n'o devoa da zebri nemet bara du, krampoez ha laez tourgouilh. Unan eus

ar geginerien a zegasas eur voutailhad chistr hag egile eur voutailhad win.

— O! na peger mat eo an traou-man, eme ar vugale a oa eur blijadur o gwelet o tebri endra m'edo o zad o konfa penaos en devoa troket e vuoc'h ouz ar voutailh vuzudus-ze.

Eur wech ma voe debret ar ragot hag ar stripou ar geginerien a zegasas per poazef er gwin hag eur peziad kouign amann. Pa voe debret al lipou-zerez-ze e voe degaset ar c'hafe.

— Biskoaz n'em eus graet eun hevelep pred, a lavare ar vaouez estlammet; na pebez chans ez peus bet, Gwilhou, o kaout ar c'hornandon-ze war da hent; hiviziken e vezo eur blijadur d'eomp beza war an douar-man.

Hag, e gwirionez, bep pred, ec'h-en em gave an daou geginer bihan da zervicha da Wilhou, d'e hini goz ha d'e vugale, ar pez a oa dleet. Pa veze tud diavaez e veze muioc'h a voued war ar pladou ha den ne zave diouz taol hep m'en divije gellet debri leun e gof. Dizale ne oa ken brnd dre ar vro nemed eus boutailh vuzudus Gwilhou hag an holl o devoa ioul da goueza war eun taol chans evel-dan.

Eun dervez, mestr Kerzavid a c'hoanteas gwelet e-unan penaos ec'h en em gemeret evit lakat ar voutailh da ober he labour. Goude beza debret hag evet mat e lavaras d'e verour:

— Sell aman, Gwilhou; red eo d'it gwerza ar voutailh-ze d'in!

— O! biken avat, aotrou; re, en holl, a vad a ra d'in.

— Sellaou aman ganen ha gwel ar pez a ginnigan d'it; m'her roes d'in e roin d'it Kerzavid gand an teir ferm a zo enni hag eo an hini a laboures ar vihana anezo o zeir. Ouspenn-ze e roin d'it teir

gazeg, dek buoc'h, hanter kant penn danvad, pemzek penmoc'h lart ha 500 skoued c'hoaz war ar marc'had. Gwelet a res peger brokus oun en da genver. Gand an holl draou-ze e vezi unan eus pinvidika ezec'h Sant Itrop.

Touellus e oa komzou an aotrou; ar paourkaez Gwilhou, goude beza ginet eur pennad, a roas e voutailh. E vestr a reas hervez ar marc'had ha Gwilhou an Ozac'h a deuas da veza eun tiek pinvidik bras.

Siouaz! an traou ne 'z ejont ket endro hervez e c'hoant; kals loened a varvas d'ezan; an tan gwall a zegas Kerzavid vras hag an eost a oa el labour; eun-noter laer a lakeas Gwilhou da zina paperiou d'e beurrivina. E tri bloaz en devoa kollet e holl beadra hag edo adarre o vont da foar Vontroulez gand an diweza buoc'h a oa en e graou da welet ha kaout a c'hellje eur gwenneg bennak eviti rak ne oa ket eur gwenneg en ti.

Endra ma tremene ebiou kroaz Bohast e chomas a-zav da zonjal er chans en devoa bet da gaout eur c'hornandon, dre eno, tri bloaz kentoc'h:

— A! emezan, ma kafe ar c'horrige rei d'in eur voutailh all henvel ouz ar genta, ne vijen ket ker sot ken d'he gwerza d'eun all!

A vec'h m'en devoa lavaret ar c'homzou-ze ma welas ar c'hornandon o tont warzu ennan eur zae wer war e gein hag eur bodreou ler endro d'e ziwesker:

— N'ez peus ket a zoare da veza gwall laouen, na gwall binvidik, Gwilhou an Ozac'h, daoust ha torret ez pije va boutailh?

— N'em eus ket torret ho poutailh, aotrou, met diskiant a-walc'h oun bet d'he gwerza ha kollet em eus kement tra am oa bet eviti. Eun aluzen

gaer a rafec'h d'in, sellit, ma karfec'h rei eun all d'in henvel outi.

— Dre druez ouzit, eme ar c'hornandon e roin d'it eun all hag a vezo gwelloc'h c'hoaz zoken eged ar genta ; met diouall n'he c'hollfes, rak ne roin hini all ebet d'it ken ha n'am gweli ket ken !

Laouen bras, Gwilhou a roas e vuoc'h evid ar voutailh hag a zistroas d'ar gêr d'ar red :

— Emaomp barrek, adarre, emezan d'e wreg ; eur voutailh all am eus bet !

Ar wreg, lore'h enni, a en em lakeas raktal da gempenn an daol ha pa oa prest pep tra warni, Gwilhou a lavaras ar gomz vurzudus :

— Boutailhig, gra da vicherig !

Met, siouaz ! en taol-man n'eo ket daou geginer koant eo a lammas er maez eus ar voutailh, met daou gornandon koz a dorras kement tamm priach a oa en ti hag a en em lakeas da skei goudeze en dra c'helljont war ar gwaz, ar wreg hag ar vugale daoust d'o youc'hadennoù ha d'ar boan a gemerent da dec'hout diouz an taoliou. Pa voent skuiz o skei e fammjont er voutailh o lezel holl dud an ti bronduet o c'horfou gand an taoliou baz.

Endra ma ouele ar wreg hag ar vugale, Gwilhou an Ozac'h a zonje. En eun taol e savas, e tapas ar voutailh villiget hag ez eas da vaner Rosampoull el lec'h m'edo e vestr koz o chom. Kacut a eure an aotrou er zal vras, gand eun toullad mignoned, o leina diwar goust ar voutailh en devoa gwerzet :

— A ! ta ! Gwilhou, emezan d'e verour koz da ! m'hen anavezaz, n'ez peus boutailh ebet ken da werza d'in !

— Eo, laouen, avat, eme Wilhou ; eun all am eus, gwelloc'h eun tamm mat eged ar genta. Ez an da ziskouez d'eoc'h ar pez a c'heller da ober ganti.

Kerkent ha m'en devoa lavaret. « Boutailhig,

gra da vicherig ! » Setu ma voe gwelet eun toullad diaoulou bihan o lammat eus ar voutailh hag o skei war gement hini a oa er zal ha dreist holl war an aotrou. Ne gleved nemet youc'h an dud o klemm ha strak ar gwer hag an asiedou o terri :


— En hany Doue, eme an aotrou, kloz an daou ziaoul fall-ze en o c'haoued pe e vezin lazet ganto !

— N'o galvin, eme Wilhou an Ozac'h, nemet p'ho pezo restaolet d'in va boutailh all.

— Kemer hi, eta ! Her rei a ran d'it, met, en hany Doue, n'es ket da lezel al loened fall-ze d'am laza !

Gwilhou a graouias e zaou gornandon fall hag a zistroas d'ar gêr gand e ziou voutailh. Adalek neuze e vevas eurus. An daou geginer a lake boued sasun war e daol hag an daou ziaoul a en em garge da rei roustadou bazadou da gement hini a gemere gwarizi outan. Pa varvas, e vevelien a en em vesvas epad ar pred a voe servichet en dizro eus an enterramant hag a dorras an diou voutailh vurzudus. Abaoe den ebet n'en deus klevet hano eus a hevelep boutailhou.

G. P.



AR C'HORN HAG AR C'HI

Eun dimezell goz a oa azezet, gant he c'hi bihan, e korn kombod eur wagon, e kichenik an nor.

Dirazi e oa eun aotrou koz a jache kement war e gorn-butun ma oa bec'h oc'h en em welet er wagon gand ar moged a zav dioutan.

— Aotrou, eme an dimezell, ar butun a ra droug d'in.

— : D'in-me e ra vad.

— : Din-me e ra droug pa lavaran d'eoc'h.

— : Moged a rankan da ober da gas kuit ar flaer an diaoul a zav diouz ho koz ki bihan.



— : Va...

— : Ya ! eun donjer eo e welet.

— : Petra livirit ?

En he c'hounnar an dimezell a dapas krog e korn-butun an Aotrou koz hag her strinkas er maez, dre ar prenestr.

Ha setu i o daou da zeni evit lakat an tren da jom a-zav. Eur vunutenn goude edo an tren a-zav.



Mestr an tren a deuas da welet petra a oa en em gavet :

— Aotrou, eme baotr e gorn-butun, an dimezell-ze n'eo ket fur a-walc'h !

— : Aotrou, eme an dimezell goz, an den-ze a zo eun torfetour.

— : Laeret he deus va c'horn-butun.

— : Lazet en deus va c'hi.

Ne oa test ebet, rak ne oa nemeto o daou er c'hombod. Mestr an tren a oa laket ken nac'het hag eur c'hi war eur c'hrovaz ; en eun taol setu ma voe gwelet ar c'hi bihan o tont d'an daou lamm warzu kombod e vestrez, ar c'horn en e c'henou ; an aotrou a bokas d'ar c'hi ; an dimezell a venas ober kement all d'ar c'horn, met e lec'h pokat d'ar c'horn e pokas d'e vestr. Dimezi a rejont demgoude ha beva a rejont eurus o daou ; hen ne glev ket ken a flaer gand ar c'hi nag hi gand ar butun.



DRE AR BED

AN HOLEN

An holl, emichañs, a oar petra eo an HOLEN, anvet c'hoaz *halen* pe *c'hóalen* e broioù a zo. An holl a oar e talv evit salla, evit rei blas d'ar boued a vefe gwall c'hoular a-hend-all, hag e talvez ivez da virout ouz an traon da vont da fall. Roet e vez d'an dud dindan daou zoare, an *holen glas* hag an *holen gwenn*.

Brcman, ma n'am befe nemet an dra-se da lavarout d'ecc'h ne dalvezfe ket ar boan d'ia mont da zua pa'en-nou *Feiz ha Breiz*. Eun dra a gav d'in a zo evelato mat da ober : lavarout d'hol lennerien ar pezh ne ouzont ket diwar-benn an hollen.

Kavet e vez an hollen er mor; ezomn ebet da lavarout, ma 'z eus ennañ war-dro 30 grammad dre bep litrad dour. N'eo ket hepken hollen a zo er mor, a bep seurt traou a-ze, kement tra a c'hellfer lavarout, betek an aour zoken, hep ankounac'haat ar pesked, ar c'hregin hag ar bezin hag a dalv e gwirionez kalz muioc'h eget an aour e-unan. Talvoudeka tra a gaver er mor eo avat an hollen.

An hollen hag an den

An hollen n'eo ket mat hepken da wellaat blaz boued an den ; ret eo d'ezan. Hólen a zo e diabarz an den : ar gwad hag an dourenn a red dre an holl izeli a zo sall. Mont a ra er-maez dre an traoz hag ar c'houlzenn. Evit stanka al lec'h gouloet evelse eo e ranker kemer hollen da heul ar bevañs. Hólen a zo e pep-tra : en dour, el laez, er c'hig, el louzeier kegin ; n'eus ket trawalc'h, avat, ha setu perak e rankomp kemer c'hoaz ouz o heul. Ma ne vefe ket a hollen pep tra a varvfe : ne chomfe ken ar vuhez war an douar : gwelet ez eus bet e gouelec'hioù kras Afrika al loened gouez o tont eus a bell evit

gellout lipat eur maen hollen bennak. E-touez an dud gouez e talv a-wechoù an hollen evel ar'e'hant, kement a bouez en deus evito. Ha setu perak eo ken talvoudek kaout hollen marc'had-mat.

An holene gou

Kemeromp eur banne dour mor en eur gastolodenn ha graomp tan dindan. Ma talc'homp an dour da virvi e-pad pell amzer, nebeut dre nebeut an dour a yelo da vaged, uza a raio, evel ma lavarar, hag e chomo e foñs ar gastolodenn eun dra wenn : hollen eo evit an darn vrasa. Pa 'z eer d'an aod e weler alies ivez en hañv toulladou hollen war ar reier.

Ma ne reer nemet evelse, avat, ne gavor nemet nebeut nebeut a hollen; dacust ha n'hellfer ket lakaat an dour mor da vont da aczenn hep ma vije ezomm da ober tan dindan ? Eo. Hag e-giz-se eo e reer peurvuia evit kaout hollen. Pa vez izel an aod (paludou) e vez graet lennou hirgarrezek tost d'an aod; ne vez ket graet gwall zoun al lennou-se rak seul vui ma ne vezint ket doun, seul vui e kouezo buan an hollen d'ar strad. Etre al lennou-se hag ar mor ez eus eur rañvel hag a zigorer pa vez ar mor o tont ; an dour a ya el lennou ha pa vez ar mor o vont kuit e vez scrret ar rañvel, hag an dour a chom.

Seurt lennou a vez graet *holene gou anezo*. Da genta, evel just, eo ret lakaat an dour da zilavi : evit se an dour mor a ya diouz eun eil lenn en eben. En hini genta e chom ar pri (lec'hid), an tammou bizin hag an traoù ali a c'hellfe ar mor kas gantañ. Nebeut dre nebeut goude-se an hollen a ya ivez d'ar strad : ar gwella hollen a vez tennet diouz al lennou pella.

Neuze e teraou labour an *holenerien* anvet c'hoaz *paluderien* (moarvat dre ma vez al lennou-hollen peurvuia a-hed an aodou paludek). N'eo ket ar c'haera micher, bini an holener. Gant eun doare rozell pe rastell e skub an hollen diouz goueled al lenn dre ma kouez, ha goudeze e tacl an hollen se a verniou bras evit disec'ha, da c'hortoz beza gwerzet. Lavaret am eus ne oa ket ar gwella micher ha setu amañ perak : ne c'heller labourat ne-

met e-pad an hañv; an holl e oar ervat e chom an dour da sach'a pa vez gleb ha yen an amzer, ha bloaveizou a zo evel 1930, ma ne vez hañv ebet !

E Breiz n'eus ket nemeur a holenegou nemet e kostezioù Bro-Rez ha Gwenrann, etre aberioù ar Wilen (stêr Roazon) hag al Liger (stêr Naoned).

Mengleuziou-holen

War bord darn eur moriou ar broiou tomm ha kras e weler tammou holen evel ma weler amañ skourn e-pad ar goañv. E broiou a zo, zoken, evel ar Sahara, ma oa moriou bihan gwechall, dizec'het krenn bremañ, ma weler holen chomet war-lerc'h ar moriou-se.

Broiou all a zo ivez ma oa moriou enno gwechall; ar moriou se a zo dizec'het o lezel holen en o lec'h; goloet eo bet an holen-se gant an douar ha chomet eo a weleadow teo dindan. N'eo ket disheñvel an holen-se diouz eur maen ha setu perak eo anvet *maenholen*. Kenta tro ma 'ez eus bet soñjet en dra-se e oa o welout eiennou sail, dour an eimenennou-se a zo salloc'h c'hoaz eget an dour mor (arabat d'an neb en deus sez'het mont d'he zerri duhont). En eur doulla puñsou ez eus bet kavet berniou holen dindan an douar. E kals broiou ez eus evel-se holen er douar.

Evit tenna an holen ac'hano e reer e daou zoare. An doare nevesa eo ober eur puñs, lakaat an dour da redek ebarz; an holen a deus ennañ ha pa greder e vez teuzet a-walc'h e vez tennet kuit gant plomennou. Evit kaout an holen e vez lakaet da c'houde e lennou evel holenegou. Evelse eo e reer e Reter Bro-C'hall. Met pa vez teuzet re a holen e c'hell toullou bras chom a-zindan hag an douar a ziazez awechou en eur ober kals droug.

Eun doare all a zo, kosoc'h, ma reer gantañ e Polonia: ober puñsou ha ribouliou dindan-zouar evel evit tenna glaou, ha gant al langede e tenner an holen kuit. Da geroc'h e teu marteze, suroc'h eo avat. E Polonia ar C'hreisteiz e reer evelse abaoe kantvedou; meur a gilometrad hentou dindan zouar a zo tro-war-dro kêr Viéitchka; tiez ha chapelioù zoken a zo eno, graet en holen holl. An aoterioù, ar pileroù, pep tra a zo graet e maenholen, ha

n'eus netra kaeroc'h, eme ar re a zo bet eno, eget gwelout ar chapel-se, ar mogerioù anezi o lugerni pa vez ar gouleier war enaou.

Bep bloaz e tenner diouz mengleuzioù holen Viéitchka ha Bochnia war-dro 800.000 lur holen. Eur binvidigez eo evit ar vro.

An holen hag ar c'henwerz

Da genta e talv da zebri d'an dud. Daou seurt holen a zo anavezet: an *holen glas* hag an *holen gwenn*. An holen glas n'eo ket bet labouret, an holen gwenn, heñ, n'eo nemet holen glas bet strinket a-gas enep tammou houarn-ruz.

Talvezout a ra ivez d'ar chatal ha mat e vefe lakaat d'ezo atao eun tammig etouez o gouelien. Mat eo ivez e lakaat e-touez ar foenn. Gwellaat e vlaz ha mirout outañ da domma a ra war eun dro.

Erfin al labourerien-douar n'am dislavarint ket pa lavarint d'ezo eo talvoudus c'hoaz d'ezo an holen evit salla o c'hig hag ar besketaerien evit salla o fesked: e broiou a zo ez eus kalz goulenn d'ar pesked dalc'het en *hill*.

G. DEWI.

Eus an Arvor d'ar Menez

An A. Perrot, Rener *Feiz ha Breiz* hag a oa kure e Plougerne abaoe ar brezel a zo het hanvet da berson e Scrignac d'an 23 a viz du; paotred yaouank e gelc'h-studi a-en em vodas evid ar wech diveza en dro d'ezan e Kervikael, d'an 3 a viz kerzu, hag unan anezo, en han eo an holl, Stephan ar Boucher, eus a Enez-Cadeg, a lennas d'ezan ar c'hiniad-man :

Aotrou Perrot,

Setu seiz vloaz tremenet, abaoe miz here, m'ho peus savet kelec'h-studi « Paotred Mikael an Nobletz » e Plougerne; adalek ar miz-se betek vrcman ez omp bet en em vodet en dro d'eoc'h, en ti-man, ouspenn seiz kant kwech, met tremen a-ra pep ira hag hizio, siouaz, eman ar vodadeg ziweza! hizio eman bodadeg ar c'hiniad; hizio eman bodadeg ar c'henavo.

Holl ez omp glac'haret ha pa zonzomp er pezh a zo het graet ganeoc'h en ti-man evidomp e chomomp a-bañ da zellet an cil cuz egile ha poaniet holl, ec'h en em c'houlennomp petra e teuo da veza hiviziken an darempred hon eus bet gand an ti-man epad ouspenn seiz vloaz.

An ti-man a oa eu ti laouen ha digor d'an holl; an ti-man a oa eun ti a zeskadurez e gwirionez breizat; en ti-man e doug pennadou eus nevezioù hir ha tenval ar goanv ha pardaezioù laouen sulveziou an hanv hon eus dastumet madou, nann madou korf, met madou spered : gouiziegez war ar vicher, gouiziegez war ar vro, gouiziegez war ar feiz.

En ti-man ho peus desket d'eomp beza diou wech den, nann den hepken evel ma 'z omp dre ar c'horf, met den ivez dre hor spered.

En ti-man hon eus desket ganeoc'h pevar ha tregont pezh-c'hoari; re-zoanius ha re farsus, met holl kentelius; o c'hcariet hon eus aman hag a-hont d'an nebeuta kant kwech; da heul ar peziou c'hoari-man ho peus desket d'eomp ivez kanaouennoù brezonek, kanaouennoù kaera hor bro; o c'hanet hon eus dre bevar c'horn Breiz-Izel.

Eus an ti-man ho peus c'hoaz hor blieniet a-dreuz hag a-hed eskoptioù Breiz da Gemper, da Zantez Anna, da Wened, da Lokronan, da Zourarnenez, da Vontroulez, da Wengamp, da Landreger ha da veur a lec'h all, gwech evel perc'hirined, gwech all evel bleun-brugerien evit gwelet traou kaera hor bro, lochennoù he sent koz, lec'hioù o merzerenti, he ilizoù meur, he chapelioù hag he c'halvarioù kizellet, bolzoù a enor hon tud vrudet hag hor brezelourien; he c'hastell krenv ha touribellet hag he boaeoù dudius ha dispar; ouz hor c'has evelse da ober anacudegez gand oberou hon tud koz ho peus startet ennomp ar feiz, desket d'eomp istor hor bro hag hol laket d'he c'haret ha da gomz anezi d'an holl.

An holl draou-man, daoust ma 'z int kaer dreist, daoust ma 'z int zentorioù, a zo nebeud anavezet gand an dud; met ni eo hon eus bet an eur-vad d'ho kaout da ziskouez d'eomp hor peadra, c'houi, Rener *Feiz ha Breiz*, c'houi, tad ar *Bleun-Brug*, c'houi, tad ar baotred yaouank, c'houi, istorier hep par hor bro.

Ar boan ho peus kemeret d'hor c'helenn ne vezo biken ankounac'haet hag ar gwrizioù ho peus sanket en hor c'halon ne 'z aint morse da hesk; ni a denno talvoudegez anezo, a gomzo anezo dalc'h-mat, en-dro d'eomp d'hor c'herent, d'hor mignoned, d'hon amezeien, gant plijadur, mar bez bolontez Doue, d'hor bugale ha d'hor bugale vihan, ha divezatoc'h p'hor c'havoc'h pe e Santez Anna, pe er *Bleun-Brug*, pe e Plougerne, pe e n'eus fors pe lec'h, e kavoc'h atao Bretoned kalonek, kristenien start ha leun evidoc'h a anaoudegez vat ha diwezatoc'h c'hoaz pa vezo kerzet kalz bloaveziou, pa vezo aet, pell a vezo, pep hini eus e du, pa c'houl'ennoc'h meneg eus Plougerne, eus o c'hoarierien goz, fizians am eus e vezo gallet respont d'eoc'h atao, ez a atao kalz tud da bardona da Zantez Anna, e vez graet atao pardon an Arvoriz ha benniget ar mor, ez eo atao o c'hoarierien goz Bretoned fur, tud a skouer vat hag a boagn da zeski d'o bugale ar pezh a zo bet desket d'o zad.

Ha breman, paotred, a-raok ma 'z aio an Aotrou-Perrot eus an ti-man, an doare gwella a gav d'in d'e drugarekaat eo toui d'ezan e talc'himp atao start d'e gentelioù hep.

morse o ankounac'haat hag e pedimp evitan en hor goue-
liou bras, en hor pardonioù, ma plijo gant Doue ken-
delc'her da skuilh warnan e vennoz ma c'hello ober du-
hont e Scrignac ar vad en deus graet du-man e Plougerne.

Ar c'himiad kalonec-se a oa sinet gant S. Boucher, eus a
Enez Cadeg, Pierre Abjean, eus ar vourc'h, Theophile Caraës
eus ar vourc'h, Andre Pronost eus a Gerferre Vihan, Joseph
Simier, eus a Enez Cadeg, François Loaec eus a C'horre-kêr,
Stephan Loaec, eus a Gerferre Vras, Joseph Merrien, eus ar
C'hrouaneg, Louis Loaec, eus a Gergasken, François Salaün,
eus a Groaz-Boulic, Joseph Abguillerm, eus a Hellez, Lucien
Kerandel, eus a Zant Kenan, Jean Lossec eus a Gerilly, Fran-
çois Floc'h, eus ar C'harbont, Gabriel Roudaut, eus ar vourc'h,
klanv war e wele, n'en devoa ket gellet dont d'ar vodadeg.

An A. Perrot, goude beza o zrugarekaet eus ar c'homzou o
devoa gouezet trei ker brao da lavarar d'ezan o c'henavo, a
lavaras d'ezo o divije, hiviziken, digand an A. Gourmêlen, an
harp, ar skoazell hag ar sklaerijenn o deveze digant an : kelc'h-
studi Kervikael ne dlê ket koueza ha ne gouezo ket.

D'ar 14 a viz kerzu, da zeiz pardon sant Kaourintin, patron
eskopti Kerne, eo e voe peurlaket an A. Perrot, en e garg
nevez, gand an A. Falhon, person Huelgoat, dirak an A. Ta-
labardon, person Plougerne, an A. Grall, person Kraozon, an
A. Bihan, person Berrien, an A. Kerêbel, person Poullaouen,
an A. Lec'hvien, person retred Landeger, an A. Madec, kure
Elliant, holl guzulierien iliz Scrignac; an A. Connan, eus a
Berros-Gwireg hag e vab a oa deuet ivez d'ar gouel en hano ar
Bleun-Brug.

Antronoz e teuas mignoned *Feiz ha Breiz*, en o fenn an A.
Uguen, person Plougastel, ha beleien ar parrezioù tro-wardro,
da welet ar person nevez. Da gloza lein, an A. Clisson, person
Plounerin hag an A. Gargadennec, person Brennillis, a ganas
an diou ganaouenn a gavoc'h aman warlerc'h.



AL LABOURER

*Evel eun arouez a zougans, hag a gengarantez evit ar
BREZONEG, d'an Ad. PERROT, person nevez Skrignac.
14-12-30.*

Ton : Ar *CHOUANTED*.

'Vit gounit e d'amm bara, e renk ar paourig-kaez,
Daoust d'e stad ha d'e vicher, e ker ha war ar maez,
Pigosat e dachennig hag he c'hempenn ervat,
Goulenn ivez gras Doue, da founna pep trevad.

Abred-kaer diouz ar beure, diwezat diouz an noz,
Daoubleget e gein gantan a-us d'an havreg koz,
Ha pegen trist e zoare, pa vez hep surentez,
Da gaout eur begad amann, 'vit frita paourentez.

O, bez ez eus a-dra-sur micherioù gounidus ;
Labour diwar an dorchenn, peurvuia distrivus.
War dachenn ar Brezoneg, daoust peger lemm ar falc'h,
E renk ober alies bouzellenn voan ar yalc'h.

Met mar deo an dachenn-man diaes da zifraosta,
N'en deus met mui a zellid neb outi a dosta.
Gant ho kalon a Vreizad, daoust d'an avel a-benn,
E strivit diouz ho kwella da gas an erv da benn.

Prest oc'h atao da zifenn ouz tud fall ha direiz,
Hor Breiz hag hor brezoneg, hor gizioù hag hor feiz ;
Evit reiza eeun pep tra, ha difenn hor Yez koz,
Veze bepred lemm ho pluenn ; ho teod ne vez ket saoz.

E-pad pemp bloaz war nugent, ho tourn war an alar,
Hoc'h eus en hor Breiz-Izel, daoust d'ar bean, d'ar c'hia
[c'har,
E-kreiz tommder an hanvou ha skouladou ar c'hrug,
Digoret kalz a antou, ma vleunje ar « Bleun-Brug ».

Eul labour didalvoudus evit dastum madou,
 Met kals-well eo beva paour ha heulia hon Tadou ;
 Dere'heñ bepred evelto, daoust da skilfou pep bleiz,
 Birvidik-en-hor c'halon, karantez Feiz ha Breiz.

Neb a labour eviti chomo ket dizano,
 Met e-pad ar c'hantvedou, e vleupio e ano.
 'vit kizellat hoc'h hini, bugale Breiz-Izel,
 A renko kas da aoura hep-mar beg o c'hizell.

Hizio ar bleun-brugerien, e pevar c'horn-hor Breiz,
 A drid ouzoc'h o c'halon, ha n'eo ket souez, va feiz.
 Hag e Nenvou hor Sent koz, ganto Arzur, Marzin,
 E seblant d'in o gwelout, gant stad o vousec'hoarzin.

'tousez ar brug, al lann melen, war lein ho menezioù,
 Ra skedo dindan ho tounn, hed-ha-bed an deizioù,
 'vel an heol an eneoù, birvidik-en-o c'hreiz,
 An diou rezenn vuzudus o ano « Feiz ha Breiz ».

Krug = skourn du.

Menez-Laouenan, 12-12-30. P. J. GOUR-NA-DIL.

Da aotrou person nevez Scrignac

War don : Noel, Noel.

1

Er mintin-man, abred war zao,
 Al lapoused gand o mouez vrao,
 War ar skourrig holl a gane,
 Bennoz Doue gant karante.

2

'Vel al lapous breman ive,
 Ni 'lavaro : Bennoz Doue.
 Ha ni gano gant levenez
 D'hoc'h enori, kaera dervez.

3

Va c'hanaouenn 'vo da genta,
 Evit laret, na petra 'ta,
 Da vro ar Brug 'z eus degaset
 Eur beleg mat anavezet.

4

O ya ! laouen, e Bro Gerne,
 E Bro Leon, Tregor ive,
 Aotrou Perrot, c'houi zo brudet
 'Vid ar c'henta 'tousez ar Varzed.

5

Brizeuk gwechall, ar barz karet
 E Galleg flour en deus skrivet
 Person Scrignac, beleg gouiziek
 Zo mestr dispar ar Brezoneg.

6

Gand ar Bleun-Brug, bokedig koant
 Ar gwir vreizad a lavar-drant :
 — Doue, va yez, va bro, va gouenn
 Zo va zenzor a wir gristen.

7

Ar Varzed koz e Breiz-Izel.
 'Viras ouz ar Feiz da vervel ;
 Gant Feiz ha Breiz ganeoc'h renet
 Ar gizou mat 'vo kendalc'het.

8

Ken etrezomp, ema ar c'hiz
 D'en em welet eur wech er miz ;
 Oc'h en em welet alies
 E starta an unvaniez.

9

Va mignon ker, ho kenvreudeur
Eus Huelgoat, Berrien, Botmeur,
Hini Plouye hag e gure
O resevo ha noz ha de.

10

Da Volazec ha d'ar Fouilhez,
E c'hellit mont gant levez
Hag e ti Jak Lok-Maria
E kavfot mat ho tamm bara.

11

E Poullaouen 'peus eur mignon,
'Zo evidoc'h frank a galon,
E Plougonven, e Gwerleskin,
Grit eun azez, tanvit ar gwin.

12

E Betsorhel, Lanneaou,
E vez freskad war an taoliou ;
Bouest Fanch David 'ra tro an ti
Da zistanka d'an holl o fri.

13

E Carnoet, mignoned vat
Ouzoc'h hepred a ray kals stad,
Hag en o zi ar veleien
A gay blaz vat gand ar zoubenn.

14

E Brennilis, eul lochennig,
'Vid ar person 'zo eun nezig ;
Pa vez kavet ebarz er gêr,
Ra dor zigor d'an holl seder.

15

Va mignon Paol (1), dalc'h mat atao,
Bez yac'h, nerzus, skany, war da bao,
Hag e vo kig ha fars ive,
Pa vezi person, hep dale.

16

Eur spered den eus ar barrez (2)
En deus dastumet er menez,
Eur zon koant a ray plijadur
D'an holl aman, o ya ' dra sur.

17

Va son d'in-me ma n'eo ket koant
He c'hana deoc'h em eus bet c'hoant
Nemet laret va c'harantez
D'am c'henvreur ar person nevez.

18

O va breudeur, yec'hed d'eomp holl,
Hor yez biken ne 'z ay da goll,
Savomp eta sounn hor gwerenn,
Da Feiz ha Breiz, ya... da viken !

Y. GARGADENNEC.



(1) An A. Jezequel, kure Scignac.


(2) An A. Madec, kure d'EKiant.

KELEIER AR MIZ

Kantved an A. Gwilhou e Penmarc'h

Ma oa bet kaer an gouel graet e Cleder en enor d'an A. Gwilhou, d'an 18 a viz gwengolo diweza, an hini graet e Penmarc'h, d'an 30 a viz du, a zo bet kaeroc'h c'hoaz koulz lavaret; bugale eleiz evid al lenn hag ar c'hana; kemend a dud en oferenn-bred ma rankas meur a hini anezo chom er maez eus an iliz; goude lein prezegerien, kanerien ha kanerezed, c'hoarierien ha c'hoarierezed eus an dibab ha gand an draze an amzer war he zu.

An oferenn-tred a voe kanet gand an A. Pemp; kure Gwitalmeze, ginidik eus a Benmarc'h hag ar brezegenn a voe graet gand an A. Fave, kure Scaer, eur c'hlederad evel an A. Gwilhou. Goude an oferenn an Aotrou 'n Eskob



Aod Sant Gwennole Penmarc'h

deuet e-unan da ren ar gouel a lavaras eun nebeud komzou da veuli an A. Gwilhou, beleg santel ha skrivagner dispar, ha da drugarekaat ar gristenien a oa deuet ken niverus d'hen enori: iliz vras Penmarc'h n'oa ket bet kei leun ha ma oa en deiz-se, mil bell a oa. Parrez Penmarc'h

a zo brudet evit he aoc'hou gouez hag he gwall-vor, he martoloded dispart hag he zud a feiz: « Al eme an Aotrou 'n Eskob, gand a reoc'h, mirit ho feiz. Epad an XIX^{vet} kantved, parrez Penmarc'h he deus roet nebeud a-walc'h a veleien d'an eskopti; poagnit, c'houi dreist-holl, mammou kristen, da lakat da ziouan e kalon unan pe unan eus ho



Merc'hed Sant Gwennole Penmarc'h

pugale an iou! da vont da veleg: eun enor eo evid eun tiegez rei unan eus he bugale da Zoue! »

Goude an oferenn ez ejod e prosesion d'ar vered da gana al *Libera* war bez an A. Gwilhou hag an Aotrou 'n Eskob.

a lavaras ar bedenn ziweza. Lein a voe servichet raktal goudeze e ti-skol ar merc'hed; ouspenn pevar c'hant den a oa ouz taol; a-raok kloza ar pred, an A. Cornic, Rener-meur ar *Bleun-Brug*; an A. Fave, kure Scaer, an A. Quiniou, person Penmarc'h hag an A. Duparc, Eskob Kemper a gomzas. An otrou 'n Eskob a reas meuleudi an A. Gwilhou ha meuleudi martoloded Penmarc'h. Eun dervez ma komze d'ar Pab diwar o fenn, henman a lavaras d'ezan: « Kalonekoc'h int c'hoaz eget kaloneka tud an amzer goz! »

Wardro teir eur e oa pe c'helljod staga gand ar c'hoaria-deg, er patronach; ouspenn pemp kant den a c'hellas mont er zal, met kement all a renkas chom er maez.

An A. Perennes a reas neuze eur brezegenn war dalvoudegez an A. Gwilhou evel skrivagner breizat. Ganet e Arvor Cleder ha tremenet gantan e bemzek vloaz diweza e arvor Penmarc'h, an A. Gwilhou en deus renket en e werziou eleiz a daolennou dudius a wele war aochou e vro.

Kement-se a deu da veza anat, dreist-holl, pa lenner *Bagig Sant Per*, an diweza kanaouenn a gaver e Kantikou Eskopti Kemper ha Leon.

Merc'hed yaouank ar Gilvineg a ganas ar c'hantik savet er bloaz 1886 evit Jubile ar Gilvineg.

An A. Gwilhou en deus kanet ar Werc'hez e eleiz a gantikou a gaver e Kantikou an Eskopti, savet er bloaz 1880 hag e *Miz Mari an Eskob dall*, savet gand an A. Sann, person Bannaleg ha moulet er bloaz 1891. Merc'hed ar Gilvineg a ganas ivez unan eus ar c'hatikou-ze: Kantik I. V. Lambader, savet er bloaz 1877.

An A. Gwilhou en deus savet c'hoaz eleiz a gantikou evit konsekrasion meur a iliz nevez, evel evit sant Yann Trolimon, Lannilis, Plobannalec ha Treboul; ar c'haera anezo eo Kantik iliz nevez Treboul: an A. Perennes her c'hanas, en eur boueza war ar c'houblajou o devoa ar muia talvoudegez.

Warlerc'h an A. Perennes, daou baotr eus skol sant Gabriel Pont 'n Abad a zisklaerias « *Sant Yann Vadezour hag Herodez* », eun diviz savet gand an Gwilhou.

Merc'hed Penmarc'h a c'hoarias *Ar Yar zu hag ar Yar Wenn* ha merc'hed ar Gilvineg « *Eur penn-skanv a blac'h.* »

Noz du e oa hag e chomet c'hoaz da zellet ouz ar c'hoari ha da zelaou ar c'han. Bennoz ar Zakramant a glozas ar

gouel. Trugarez d'an A. Quiniou ha da Renerien Bleun-Brug Kerne da veza renket ker mat eur gouel ker kaer.

Oberou an A. Gwilhou

Setu aman aneioù rak-prenerien miz du.	
An Tad Camenen, 2 rue Volney, Angers.....	1
An A. Talabardon, person Plougerne.....	1
An A. Bihan, kure Plougerne.....	1
An A. Gourmelon, kure Plougerne.....	1
An Dim. Mari Abguillerm, Kerjegu, Plougerne.....	1
An A. Eugène Le Gallo, Inguiniel (Morbihan).....	1
Ieanezed hospital Kemper.....	3
An A. René Manuel, kure Briec.....	1
An A. F. Guivarc'h, kure Briec.....	1
An I. Halleguen, Pleyben.....	2
An A. Goff, kure Ergué-Gabéric.....	1
An Dim. M. A. Cabon, « Léonarde », Plougerne.....	1
An A. Louis Loaec, Kergasken, Plougerne.....	1
An A. Caroff, kure Landunvez.....	1
An A. Louis Loaec, Kergasken.....	1
Kenvreuriezh ar Brezoneg, Kloerdi Kemper.....	2
An A. Joseph Quemeneur, Kloerdi Kemper.....	1
An A. Yv. Floc'h, Kloerdi Kemper.....	1
An A. Kaour Calvez, Kernec'h, Plougerne.....	1
An A. J. Le Bot, skolaer, Daoulas.....	1
An A. Barre, 21, rue Fautras, Brest.....	1
An A. Keranflec'h, person Bulat-Pestivien, skoazeller.....	1

Rakprenerien miz kerzu

An A. Bernard, kure Penmarc'h.....	25
An A. Le Gall, person Gilvinec.....	5
An A. Blons, kure Gilvinec.....	1
Aotrou person Plomieur.....	10
Aotrou person Plouneour-Lanvern.....	5
An A. Auffret, kure Loctudy.....	1
An A. Coeffeur, Pont 'n Abad.....	1
An A. Marc, Kernevel.....	1
An A. Paugam, skol St-Gabriel, Pont 'n Abad.....	1

An A. Le Bec, Pont 'n Abad.....	1
Aotrou person Clohars-Carnoët.....	1
An A. Quiniou, person Penmarc'h.....	10
An I. Janvier, Kernevez Penmarc'h.....	1
An I. Lucas Tanneau, Kervilon Penmarc'h.....	1
An A. Lossouarn, Penn-ar-Gér, Penmarc'h.....	1
An A. Berlivet, Kerity-Penmarc'h.....	1
An A. Le Borgne, tour-tan Eckmühl, Penmarc'h.....	1
An A. Sebastian Jaouen, Pont 'n Abad.....	1
An A. Michel Henaff, Ploudreuzic.....	1
An dim. ar Minor, rue Victor Hugo, Pont 'n Abad.....	1
An A. Calvez, Kerskaven, Penmarc'h.....	1
An A. Auguste Millio, 18 rue Voltaire, Pont 'n Abad.....	1
An A. Alan Peron, entrepreneur, Penmarc'h.....	1
An I. Le Pape, Lorc'h-ar-Joa, St-Guenole-Penmarc'h.....	1
An A. Gwil. Tanneau, Penmarc'h.....	1
An A. Auguste Drezen, Penmarc'h.....	1
An A. J.-P. Seven, Penmarc'h.....	1
An A. Alan Gueguen, Penmarc'h.....	1
An A. Cornic, Rener ar Bleun-Brug, Douarnenez.....	3
An A. P. Durand, Rener skol Sant-Gabriel.....	5
An A. Gab. Monot, Pont 'n Abad.....	1
An I. Nounat Floc'h, Loc'h-Taro, Penmarc'h.....	1
Intanvez ar Guiriec, Penn-ar-Prad, Penmarc'h.....	1
An Dim. Leonie Nedelec, Kerity-Penmarc'h.....	1
An A. Rene Le Bec, Kerflank, Plomeur.....	1
An I. J.-M. Boderet, Penmarc'h.....	1
Itron Louis ar Penn, Kerquidan, Penmarc'h.....	1
An A. Nehu, Plomeur.....	1
An A. Lan ar Gall, Penmarc'h.....	1
An A. N. Queffelec, Penmarc'h.....	1
An A. Hénaff, Cons. gén., Pouldreuzic.....	2
An A. Queinnec, dean chaloned Kemper.....	1
An A. J. Stephan, rue Danton, Pont 'n Abad.....	1
An A. Eugène Jacq, Douarnenez.....	1
An A. Abolivier, Kure Ploare.....	1
An A. J. Guichaoua, Sant-Guenole-Penmarc'h.....	1
An I. Marechal, 83, Hent ar gar, Gilvinec.....	1
I. J.-M. Tanneau, Penmarc'h.....	1
An Dim. Le Chat, directrice de la Poste, Penmarc'h.....	1
An A. Morvan, Sant-Guenole, Penmarc'h.....	1

Intanvez Pichanvel, Penmarc'h.....	1
Intanvez an Drezen, Penmarc'h.....	1
Intanvez Ap. Stephan-Gloanec, Penmarc'h.....	1
Intanvez Laouenan, Sant-Guenole, Penmarc'h.....	1
An A. J.-M. ar Penn, Leskoaz, Penmarc'h.....	1
I. Visant Helias, Sant-Guenole, Penmarc'h.....	1
I. Jean-Lucas, Kervilon, Penmarc'h.....	1
I. an Treo, Penn-ar-Gear, Penmarc'h.....	1
An I. Boderet, Sant-Guenole, Penmarc'h.....	1
An A. P. Rioual, Kervilon, Penmarc'h.....	1
An A. Rene Donnard, Sant-Guenole, Penmarc'h.....	1
An I. Drezen, Budoc Leskoaz, Penmarc'h.....	1
An I. Nicolas Drezen, Formazal, Penmarc'h.....	1
An A. P. Tymen, Sant-Guenole, Penmarc'h.....	1
An A. Louis Lozes, Sant-Guenole, Penmarc'h.....	1
An I. Stephan Jegou, Sant-Per, Penmarc'h.....	1
An I. Louis Drezen, Kerveleg, Penmarc'h.....	1
Intanvez al Lucas, Loctudy.....	1
An I. Daoulas, Penmarc'h.....	1
Int. ar Pronost, Kerferre, Plougerne.....	2
An A. Y. an Drezen, Skrivagner er C'hourrier.....	2

Leoriou rakprenet er c'houec'h miz kenta:

$$148 + 89 + 138 + 45 + 25 + 131 = 602$$

Ra gendalc'ho mignoned an A. Gwilhou ha mignoned ar brezoneg da zegas o ano da Rener « Feiz ha Breiz », Scignac, kenta ma c'hellint.

Ar re ne brenint ket al leor a-raok ma vezo moulet a ranko, m'o devez c'hoant d'e gaout, e baco kalz keroc'h goudeze.



DIVINADENNOU

DIVINADENNOU MIZ GENVER

- I. — Eur vuoc'hig velen 'm eus er prad
hag a' ro lamm d'ar baotred vat.
20 p. ar r. *Degaset gant Jean Le Vasseur, Logonna-
Daoulas.*
- II. — Breur ha c'hoar 'ya da foar ar Faou
Unan 'lar gwir, eun all 'lar gaou
hag e leront henvel o daou.
20 p. ar r. *Degaset gant Jean Le Vasseur, Logonna-
Daoulas.*
- III. — E pelec'h ema ar pevar beleg a zo atao o tougen
an eskob war o dioukoaz?
20 p. ar r. *Degaset gant G. ar Ber, Rest, Taole.*
- IV. — Pet lizerenn a ya da ober eur cedula?
20 p. ar r. *Degaset gant G. Mailloux, Bohars.*
- V. — Petra raer da genta a-raok mont d'ar gwele?
20 p. ar r. *Degaset eus Toulon gaud eur martolod
breizal.*

Degas ar respontchou hepken da fin an tri miz.

Prenit er miz-man :

Almanag Feiz ha Breiz

4 real ar pezh her goulenn ouz an A. Paul Raoul, 11, Rue
Algésiras, Brest.

Feiz ha Breiz

War dreuzou ar bloaz nevez

« Dihunamb » (1) he deus graet, er sizunioù tremenet gouel
he fempet bloaz war nugen ha « Feiz ha Breiz » a gasas he
gwella gourc'hemennou hag he brasa meulendioù d'he Rener,
an A. Loeiz Herrieu, ar barz labourer, en deus stourmet hag
a gendalc'h da stourm atao ker c'houek evit mirout ha lakat
ar brezoneg. — yez Yvon Nicolazig ha yez Santez Anna —
da vleunia e Bro-Wened.

Setu e « Dihunamb » miz genver diweza, homzou a bouez,
komzou fur, e gwirionez hag a lenno hol lennerien gant pli-
jadur:

Tolpet (bodet) hon eus, a dra sur, endro d'eomp eun
toullad skrivagnerien hag a vije bet mouget, eleiz anezo,
anez *Dihunamb*.

Graet hon eus hent da skrivagnerien a bouez, hep par
e Breiz, 'vel Bleimor, Golvañnig, Heneu (Hep komz eus ar
re a zo beo.).

Kement-se a zo, ervat, eul levenez evidomp.

Met en tu all d'ar skrivagnerien en deus graet *Dihu-*
namb o brud ha gellout a reomp lavaret, o deus hor
skridou, hor prezegennou dihunet hor c'henvroiz?

Aze siouaz! ne d'eo ket ken anat hol labour.

Ha perak?

Perak? Dre ma 'z eus eun dra hag a zispenn hol labour
kerkent ha m'eo graet : ar skol.

Ni labour ni evit dihana spered broadel hor c'henvroiz.
Peurliesha ne gavomp diragomp nemet tud a volentez vat,

(1) *Dihunamb* eo *Feiz ha Breiz* Bro-Wened; evit her c'haout
diouz ar bloaz kas 12 lur d'he Rener, an A. Herrieu, Kerneuc,
Henbont. (C/C 241-28, Nantes).

met diouzièk tre war ar pezh a zell ouz o bro; aes a-walc'h e vije distrei al lodenn vrasa anezo eus an hent fall int bet laket da gemer.

Met kerkent ha ma teuomp a-benn da zistrei kant ha d'o brezonekaat endro, bugale a villierou, e skolioù hor bro, a vez savet er gevier evid ar pezh a zell ouz istor o bro; en disprijans evid ar pezh a zell ouz ar brezoneg, ar gwiskamanchoù ha spered ar vro. Hag e welomp bagadoù bugale evelse o kreski, o sevel tiegezh hag o tihencha rummadoù ha rummadoù bugale all hag a bella bepred diouz an hent breizek.

Gwelet a reer, en darn vuia eus ar parrezioù, da betra e tenn al labour milliget-se. N'int ket mui breizek tud yaouank hor bro hag e klaskont hen diskouez e kement mod a zo. Galleg a gomzer ha galleg *soudard*; ne ouezer ket mui dansal e giz ar vro, met red eo deski dansou Frans. Ha setu merc'hed yaouank ha paotred yaouank hor bro aet e belbi gant dansou tud gouez; gwiskamanchoù ar vro n'int ket aes; n'int ket « à la page » ha setu ar merc'hed o tizelei an tri c'hart eus o zamm kig, zoken er goanv!

C'hoarioù, plijadurioù, gizioù ar vro a zo diskianterez. Traou nevez zo rei kaout: c'hoarioù, plijadurioù, modou estren.

Hag ez oc'h souezet neuze e wanna ar Feiz hag an onestiz en hor bro!

Grit kevredigezioù tud yaouank kristen, cinéma kristen, « patronachoù », strewit leorioù ha kazetennou « mat », an traou-ze holl a gempenn an hent, a zegor an nor d'ar « mor fank » a zeu warnomp, a vro Frans, gand ar galleg.

Laza a reer spered ar vro er vugale, perak e fell d'eoc'h c'houi miret outo da « brofita » pa vezint yaouank eus ar spered estren oc'h eus laket en e lec'h?

Eur bobl hag a zo lammet diganti he sevenedigezh broadel a gemero bepred ar pep aesa eus ar sevenedigezh estren laket en he lec'h; da lavaret eo ar *blizadur* hag an *techou*. Evelse ec'h arru gant Breiziz.

... Digoret eo dorioù Ker-lz, met piou o serro. Ema an alc'houezioù gant Dahut...

Mall eo dihana; mall eo da bep hini sonjal e amzer da zont hor bro hag en em lakat a-zevri da zispenn labour ar skolioù, ma talc'hont da c'hallekaat hor bugale, evel m'o deus graet betek hen.

Ma fell d'eomp gwelet Breiziz o kendalc'her da veza tud a galon; feal, sounn en o c'hredennou, ema dâ d'eomp o sikour d'en em vrezonekaat endro.

Setu al labour a glaskomp-ni ober. Ne gredan ket e vefemp bet sikouret tra a-walc'h gand ar re o deus karg da ren hor c'henvroiz. N'eus ket kalz anezo hag o defe komprenet pegen nerzus eo spered ar vro evit derc'hel hor c'henvroiz war hent an onestiz hag o sikour da ober er bed-man al labour kaer en deus roet Doue d'ar Gelled da ober.

Anez da ze, en divije bet hizio *Dihunamb*, goude 25 bloaz labour, ouspenn ugent mil lenner hag e vije bet *Ar Re Zihunet* krenv ha doujet.

Gras da lod kaer da gompren kement-se war dreuzou ar bloaz nevez.

LOEIZ HERRIEU.

Leanezed ar C'halvar, e Kemper

Ar re a zo bet soudarded e Kemper a anavez mat an ti bras a zo war hent Pont-n-Abad, en tu dehoù pa gуй taer Kemper, liorzou bras klozet gant mogerioù uhel endro d'ezan, hag eus tu ar c'hreisteiz, eur c'hoad gant renkennadou gwez kaer ennan.

Eno eo bet ar c'hloerdi bras epad tost da gant vloaz, goude amzer an Dispac'h betek miz genver 1907, betek ma voe kaset kuit ar gloareged gant archerien ha soudarded, goude lezenn an disparti, lezenn hag a freuze an emgleo savet gwechall gant Bonapart etre ar Pab hag ar Frans.

An ti-ze a zo breman soudarded ennan, ha goulskoude ez euz e Kemper eur c'hazarn bras awalc'h evit loja ar zoudarded.

Araok Dispac'h bras 1789, Leanezed eo a veve eno. Leanezed Itroun Varia ar C'halvar, eus à Urz sant Beneat. Ar chapel a zo atao en he sav, he dor-dal a zo war ar ru.

Al Leanezed-ze a gendalc'has, goude 1789, da bedi en o zi evel araok, hag a voe lezet e peoc'h eun nebeudig amzer. Met paotred ar freuz hag an drailh a greske bendez o c'hounnar ouz Doue hag e zervicherien, hag urz a rojont ive da laerez o zi da Leanezed ar C'halvar. Unan eus ar re-man he deus skrivet istor an amzer griz-se, hag he skrid a zo bet kavet e Angers, e ti Leanezed ar C'halvar. Setu hen aman, troet e brezoneg:



« D'ar 14 a viz gwengolo 1794, gouel ar Groaz savet, eur vandennad tud a oa bodet e kichen hon ti, o youc'hal en eun doare euzus. Deuet oant d'ober goap eus al Leanezed a dlee beza kaset kuit en deiz-ze.

Ar polis, an archerien, a roas urz da zigeri dor al Leandi. Ni a voe graet d'eomp en em voda ha dilezel hon dilhad leanezed. Eun draik bennak a voe lezet

ganeomp evel golc'hed plouz hor gwele a dhe servichout d'eomp en hor prizon.

Epad m'en em breparemp, an archerien a daole evez mat, gant aon n'hor bize kemeret re a draou. Neuze oamp laouen da veza kuzet mat, en derveziou araok, archedou kaer ar relegou, ar c'hayerou hag an traou a briz.

Breman oa ret ober buan. An dud er maez a youc'he muioc'h-mui, mall ganto hor gwelet: Stilejet e voemp ha poulzet, hag an nor a zigoras evit lezel da dremen Leanezed ar C'halvar a oa d'ar mare-ze pemp warn' ugent anezo. Youc'hadennou, pep seurt gerioù divalo a gouezas warnomp. Leanezed ar C'halvar o doa ive o Fasion.

Ar Briolez, hor Mamm vat, Katell a Zant Fransez (de Penfenteunio), sioul ha dispart, a en em lakeas e penn ar vandenn. Al Leanezed, war daou renk, a voe kaset d'ar prizon (an ti a zo hirio ar Prefed o chom ennan). E kichen, war ar blasenn, edo ar c'hilhotin. Al Leanez Korantina a zantez Elisabeth, oajet a 80 vloaz, he doa poan oc'h heulia hor Mamm Priolez, oajet a 62 vloaz. E gwirionez, lec'h a oa da gaout truez ouz al leanez koz. Met, e lec'h diskouez kaout truez, epad an hent tud fall-lakr a youc'he heb ehan hag a c'hoapae.

Kerkent ha m'hor boe kuitaet ar C'halvar, ez eas ennan eur vandenn laeron ha skraperien a grogas e kement a blije d'ezo hag a zistrujas ar pezh n'hellent ket laerez. Eus tu al liorz ez oa eur groaz kaer e mein ar vro. Eus pemp gouli ar C'rist, evel eus pemp mammenn, e tirede dour a goueze en eul lennig. Ar groaz-ze, hag he doa kement a briz, a voe bruzunet. Spontus eo!

O klevet ar c'heleier-ze, hor c'halon a frailhe en hor c'hreiz.

Kalz leanezed all a oa prizoniet er memes ti ganeomp. Ni a voe kaset d'ar sanailh, dindan an doenn met, a drugane Doue, holl er memes lec'h. Kerkent hor Mamm Priolez a renkas an traou gwella ma c'hellas, evit ma c'helfemp beva hervez hor reolenn, e Leanezed. He nerz-kalon, he madelez, he feiz krenv, he fizians e Doue, he c'harantez en hor c'henver hor frealze hag hon harpe e kreiz hon trubuilhou. Hini ac'hanomp ne fallgalonas morse, ar re grenva a gennerze ar re zempl, hag er bedenn e kavemp sikour Doue.

Ar goañv a voe kalet. Dindan an doenn oa yen. Ar glao hag an avel hon tige, ha meur a wech, dioc'h ar mintin, e kavjomp war hor gwele eur vantell erc'h.

Doùe en devoe truez ouzomp e kreiz hon ezomou hag a gavas an tu d'hor zikour dre zaouarn unan eus hor C'hoarezed, al Leanez Elizabeth a zant Jozef (de Longay de Lesquiant), he doa neuze 27 vloaz hag a oa eus unan eus familhou brasa Kemperle. He zud a boanie d'he zenna eus ar prizon evit he c'huzat en eul lec'h sur, met al leanez a responte e c'hoantae beva ha met-vel gant he c'hoarezed.

Evelato, daoust ma chomas ganeomp, e reseve bep sizun digant he zud peadra d'hor beva. Unañ eus he c'hoarezed a bourchase d'eomp ar pez hor boa ezomm. Archerien ar prizon a zelle piz ouz pep tra, met røet e veze d'eomp an traou a veze digaset, hag evelse e c'hel-jomp miret hor yec'hed mat awalc'h. N'hellimp biken trugarekaat awalc'h ar familh-ze ken madeleuz.

Eun deiz hor boe eur glac'har bras. Al leanez Julia a zantez Regina (Moreau), oajet a 33 vloaz, a en em lakeas eur wech er prenestr p'edod o tic'houzouga tud war ar blasenn, hag e welas d'an ampoent eun eontr d'ezi e pignat war ar chafod. Ken strafilhet e voe, ma kollas he fenn ha ma chomas follez ar rest eus he buhez.

Beva a rajomp evelse tost da zaou vloaz, awechou, er peoc'h awechou en enkreiz, o c'hedal bemdez beza kaset d'ar maro, met ato leun a fizians e Doue, harpet gant hor feiz, prest da rei hor buhez evit silvidigez ar vro.

Eun deiz e voemp souezet holl o klevet lavaret d'eomp eomp libr. Kouezet oa Robespierre, ha dor hor prizon a voe digoret. Urz a voe røet d'eomp d'en em zispartia-met kenderc'hel a rajomp da veva e leanezed beteg an deiz ma voemp adarre bodet er memes ti.

Y. U.

Buhez an Tad Maner X

(1671-1674)

(Kendalc'h)

Da di Retred Kemper e tirede kalz tud, ha grasou bras a veze skuillet eno war an eneou. Met ti Kemper ha ti Gwened n'hellent ket digemeret ar re holl a c'hoantae en em zantellaat epad eun nebeut derveziou er peoc'h, pell diouz trouz ar bed. Abalamour da-ze an Tad Maner a glaskas an tu d'ober retrejou epad e visionou, pa vije kavet eul lec'h bennak da zigemeret an dud.

E Lannion, epad mision bras 1671, eo e reas da genta al labour nevez-ze. Eno, endro d'an aotrou Grammier, eskob Treger, oa diredet ouspenn 30 misioner, doktored eus ar Sorbon, chalonied eus Tréger, personed ha preze-gerien eus an eskopti, gant Tadou Jezuisted. An dud a veze bodet e iliz vrasa Lannion. An aotrou 'n eskob e-unan a govesae an dud evit sikour ar visionerien.

Epad ma veze graet prezegenou ar mision en iliz vras, ez oa eur reired e chapel an Aogustined. An Tad Maner a vodañ eno, epad teir zizun dioc'htu, 300 den bep gwech, hag e teske d'ezo sevel uhel e skeul ar zantelez, o pleustri war boaniou Hor Zalver epad e Basion.

Kalz vad a voe graet e Lannion. E amzer meurlarjez edod. Er bloaz-ze, ne voe hano ebet eus dansou ha c'hoariou all, an dud a oa holl o sonjal en o zilvidigez. N'e ket e Lannion hepken met er parrezioù tro war dro e teuas ive gwellaenn.

Goude Lannion, an Tad Maner a zistroas adarre da eskopti Kemper, evit prezeg e Krozon, Kameled, Roskanvel. O tigouezout e kichen Krozon, e kavas eur vandenn vugale vihan a reas d'ezan kalz plijadur, rak gouzout a raent ober ar bedenn a galon, pleustri war gwirioneziou ar feiz. Digant unan anezo ha n'en doa ket c'hoaz dek vloaz, e c'houlennas penaos ec'h en em ge-

mere evit pleustri war ar Basion : « Em c'halon, emezan, eo e sellan ouz ya Zalver. Her gwelet a ran, gwech stag ouz ar peul; dispennet a daoliou fouet, gwech kurinet gant spenn, gwech o tougenñ e groaz, gwech all o vervel war ar groaz. Sellet a ran ouz e Vamm venniget a zo e kichen ar groaz, hag e c'houlennan diganti perak en deus he Mab gouzanvet kement a boaniou; peseurt talvoudgezh o deus bet ar poaniou-ze evidomp, ha petra non eus d'ober eus hon tu evit eun Doue en deus hor c'haret betek mervel evidomp. Ar Werc'hez, eme ar bugel, war a gredan, a respont d'an holl goulennou. Hag e pleustran war he c'homzou; adori a ran va Zalver o c'houzanv evidon, kemeret a ran perz en e boaniou, e drugarekaat a ran eus e vadelez, goulenn a ran ar c'hras da jom hep pec'hi, ha lavaret a ran d'ezan, ma plij gantan va c'hennerza, e talc'hin d'e garantez betek va maro. »

Pegen bras eo madelez Doue ! a skrive an Tad Maner, goude beza klevet ar bugel-ze ! E kreiz al lenneier, bugale hag o deus doare da veza bugale dilezet, mesaerien o vev e kreiz al loened, a anavez traoù an Nenv kerrouks ha gwelloc'h eget ar brasa doktored !

Beza gwelet ha klevet ar vugale-ze a lakeas joa ha fi-zians e kalon an Tad Maner, ha laouen e krogas e labour ar mision. D'an ampoent edo person e Krozon an aotrou a Goetlogon, breur da eskob Kemper. Renet mat oa ar barrez; al lidou sakr, ar c'han-iliz a oa eus ar re gaera. Kalz beleien a oa e Krozon d'ar mare-ze, ha skler oa evit an daoulagad oa an aotrou a Goetlogon eus den gouest, evel e vreur, da c'houarn eun eskopti. Ne voe ket eskob, rak ne vevas ket pell awalc'h.

E Krozon eo e skrivas an Tad Maner e gantikou war ar Basion, hag a zo bet kanet e Breiz epad daou c'hant vloaz. Kanet e voent da genta e Krozon, Kameled ha Roskanvel ha deski a rajont da eleiz a dud pleustri war boaniou ar Zalver.

Eus Krozon, an Tad Maner a yeas, d'ober misionou e eskoptiou Treger, Dol ha Leon.

Er bloaz 1672 e teuas da Gemper, ha goude beza prezeget e Kemper, ez eas d'ober misionou e Pont-Kroaz, Landudek, Beuzek-Kap-Sizun, Mahalon, Tourc'h. Kuitaat a reas eskopti Kerne evit mont adarre da eskopti Treger,

da barrez Pedernek, el lec'h m'edo an aotrou a Germaria o prezeg eun mision. Ar brosesion vras da gloza ar mision a gemeras hent chapel sant Herve, war Mene-Bre; tregont mil den bennak a oa diredet da gemeret perz enni, hag e teue an daerou en o daoulagad pa zellent ouz skeudennou ar Basion. Epad prezegenn an Tad Maner war Mene-Bre, eur glao spontus a ziroilas hag a badas pell amzer, met den nefinvas; aotrou 'n eskob Treguer, an aotrou a Dremaria a voe glebiet holl evel ar re all, met chom a rajont en o flas beteg ar fin.

Eskob Sant Briek a c'houlennas ive an Tad Maner. An Tad n'helle ket lavaret nann, rak eskob Sant-Briek, an aotrou de la Barde, a oa eun eskob santel doujet gant an holl, ha ne glaske nemet ober vad e pep giz d'an eneoù. Daoust m'en devoa ouspenn 90 vloaz, m'oa gwenn kann e benn, e teuas da barrez Treve a voe digoret enni eun mision gant an Tad Maner. Diouz ar mintin e veze gant ar re genta en iliz; azezet war eun bank, e kovesae ar re holl a zirede, hag e chome beteg ar fin. An Tad Maner en devoe kalz joa e Treve. « Kavet em eus eno, emezan eneoù kaer meurbet, leun a garantez evit Doue. Eun den yaouank dreist-holl en deus skoet va spered. Glan oa evel eun ael, hag o komz eus Doue, ec'h implije yezh an ael; ne golle morse ar zonz eus a Zoue, hag e kreiz e labourou e chome unanet gantan a spered. » Eur plac'h a gavas ive, eun emzivadez, hag a oa savet uhel meurbet e skoul ar zantelez. Izel a galon, troet holl ouz he Doue, e c'houzanve poaniou kalet gant joa, ato laouen; pinijennou bras a rae, hag e kenver he nesa'oa ato madelezus; ne glaske nemet ober plijadur d'ar re all.

Ar brosesion da gloza ar mision a voe graet da chapel Sant Eutron, eul leo diouz Treve. Eun dek mil den bennak a oa diredet eus a bep tu. A vec'h m'edo an holl en em gavet e kichen ar chapel, ma teuas koumoul du da c'holoi an heol, hag ar glao a'en em lakeas da goueza. An Tad Maner, goude beza komanset e brezegenn, a lavaras: « Pedomp ar Werc'hez evit ma c'houlennno d'eomp amzer vras ha ma c'hellimp kenderc'hel gant ar brezegenn. » A vec'h m'oa echuet an *Ave Maria*, ma teuas an amzer d'en em zizoloi, an heol d'en em zispaka, hag ar peurrest eus an deiz a voe bras.

Er bloaz-ze, 1672, e Douarnenez, e c'hoarvezas eun dra souezusoc'h c'hoaz. Evel kustum, an Tad Maner a oa aet di evit pardon Sant Mikael, hag edo c'hoaz eno d'ar 7 a vezeven, Jun ar Pantekost. D'ar mintin e lavaras da Vac'harit Poullaouek, a roe lojeiz d'ezan: « Hirio, e vezo eur gw all grogad war vor etre hor martoloded ha re Vro-Zaoz, met an trec'h a vezo d'eomp. » Goude ar Gousperou, e pignas er gador e chapel Douarnenez, hag e kreiz e brezegenn, e chomas a zav, evel pa welte dirazan traou es-tlammus. « It d'an daolin, emezan d'an dud; pedomp Doue, evit ma chomo an trec'h gant ar Frans a zo breman o stourm ouz Bro-Zaoz hag ar Holland. Pedomp dreist-holl evit martoloded Douarnenez. » Hag e lakeas kana eur c'hantig da c'houleñn skoazell ar Werc'hez.

Da fin ar c'hantig, e lavaras: « Evit c'hoaz n'eus gloazet martolod ebet eus Douarnenez. Met riskl a zo atao. Rakse kendalc'hit da bedi. »

Eun nebeut dervezioù goudeze, e voe klevet ez oa bet stourmad, e Sole-Bay, etre skouadrenn Frans, en he fenn an amiral d'Estrées, ha skouadrenn ar Holland, en he fenn an amiral Ruyter. An diou skouadrenn a lavare o doa gounezet. En unan eus listri Frans a voe ar brasa riskl, ar Vaillant, ez oa kalz martoloded eus Douarnenez. Hini anezo n'em devoe droug, ha kouskoude endro d'ezô kalz re all a voe lazet.

War an dra-man e voe graet enklask diwezatoc'h dre urz aotrou'n eskob Kemper. Ar vartoloded a oa bet e stourmad Sole-Bay a douas, dirag an aotrou Paillart, doktor e Sorbon ha person Ploare, diskleria ar wirionez penn da benn. D'an deiz ha d'ar mare ma lavaras an Tad Maner e chapel Douarnenez, edont o stourm ouz an enebourien, hag an Tad n'helle anaout kement-se nemet sklerijennet gant Doue.

Daoust d'ar vad a-rae e pep lec'h ar misionou, an Tad Maner a voe kavet evelato rebechou d'ober d'ezan. An Tad Pinette, ensellour war ar Jezuisted, deuet d'ober eun dro da Gemper, a glevas ar rebechou-ze hag o selaouas gant re a evez. Lavaret a reas d'an Tad Maner e tlie en em gemeret e giz alj gant e visionou, pe e vije kaset pell eus Breiz, da gear Pontoise, e kichen Paris. Petra a reas an Tad Maner? E lec'h en em glemm na klask en em zifenn

ez eas da gambr an Tad Pinette, e vantell war e skoaz e vaz en eun dourn, hag e vrevier en dourn all. En em deurel a reas d'an daolin dirag an Tad Pinette. « Da belec'h e roit urz d'in da vont? Gourc'hemennit, ha me a zento. » An Tad Pinette a reas d'an Tad Maner sevel, hag a vriatas anezan gant karantez en eur skuilh daerou. « Kendalc'hit, emezan, da brezeg e Breiz; en han' Doue, kendalc'hit. »

Kenderc'hej a eure, hag ez eas, pedet gant eskob Treger, d'ober eur mision bras da Wengamp. An aotrou a Dremaria a gouezas eno klanv gant ar skuisher, hag an Tad Maner a c'hellas ober d'ezan mont da ziskuiza eur pennadig da di e dud, e Pléumeur-Bodou.

An aotrou Grangier, eskob Treger, a labouras ive e mision Gwengamp, ha deiz ar gommunion evit an Anaon, ouspenn pemzek mil den a dosteas ouz an daol zantel.

N'eo ket ankounac'haet c'hoaz ar mision bras e Gwengamp.

Eus Gwengamp, an Tad Maner a zistroas da eskopti Kemper, a brezegas e Glomel, e Elliant, Sant-Yvi, Lok-Maria-an-Hent, Rosporden, ha da c'houde ez eas de vision Kastel-Paol. Ar mision-man a voe digoret e kreiz miz here 1673 dre eur brezegenn graet gant an aotrou'n eskob. An aotrou a Dremaria a labouras ive e Kastel-Paol hag a zispignas eno ar pezh a jome gantan a nerz. N'hellas ket chom beteg ar fin.

Deiz ar gommunion evit an Anaon, dek mil den hag ouspenn a zaoulinas ouz an daol zantel evit gounit an indujans plenier.

E penn kenta ar bloaz 1674, an Tad Maner a brezegas e Sant-Vaze Montroulez hag e Kerahez; da c'houde ez eas betek Telgruc ha Landevennek.

Evit ober plijadur d'an aotrou a Germaria, klanv war e wele, ez eas d'ober eur mision da barrez Pléumeur-Bodou. Da zul an Dreinded, 22 a vae 1674, e voe digoret ar mision-ze. An aotrou a Dremaria, o welet e tostae ar maro d'ezan, ne reas mui nemet en em brepari da ginnig da Zoue eun ene kaer. Ne leze beleg all ebet nemet an Tad Maner da zont en e gambr. « Komzit d'in eus Doue, emezan, hag eus ar mision. » Kregi a-rae alies en e grusifi hag e starde anezan war e galon. Goulenn a reas ar gommunion a voe

digaset d'ezan gant an Tad Maner. Araok beza nouet, e krogas er c'houlouenn venniget hag e c'houlennas pardon digant an holl, hag o lavaret e *Gredo*, e tisklerias en dije skuilhet e c'hwad evit difenn peb artikl anezan. Respont a reas e-unan d'an holl bedennou epad m'edo an Tad Maner o rei d'ezan an Nouenn. Chom a reas c'hoaz unek dervez e buhez hag e tremenas an derveziou-ze o pedi, o tiskleria e garantez da Zoue, o selaou pennadou-lenn pe ar c'hantikou war Basion Hor Zalver. Mervel, a eure d'an 23 a vezeven, kennerzet gant an Tad Maner. Epad 18 vloaz en doa labouret er misionou. E gorf a voe beziet e Lannion, met e galon a joñas e Plomeur-Bodou.

E fin ar bloaz 1674 an Tad Maner a zistroas da Gerahez gant 25 misioner, en o zouez eur prezeger dispar, an aotrou Falchier, person Kleden-Poher. An dud a ziredas niverus da glevet ar prezegennou, hag eur c'halz a goveseas holl bec'hejou o buhez.

Evit dougenn an dud da lakaat o fizians er Werc'hez, an Tad Maner a zavas eur Vreuriezh evit ar wazed, eur Vreuriezh dindan skoazell ar Werc'hez. Ar Vreuriezh-ze a badas betek an Dispac'h bras (1789) hag a reas kalz vad e Kerahez.

Y. U.

An Aotrou Gwesbriant Eskob Burlington 1816-1899

Ar pennad-man a zo bet tennet gant an dimezell de Boisanger eus Buhez an A. Gwesbriant skrivet gant an Tad Kerlidou, eur misioner hag a zo bet ganet er Roc'h, e kichenik Landerne.

Lanurvan a zo eur barrezig vihan ha kristen, harp e Landerne, anavezet mat evit he devosion da Zantez Anna ha d'ar Werc'hez hag he deus roet d'an Iliz eleiz a visionerien zantel; ar brudeta anez-ze eo an Aotrou Loeiz Gwesbriant (1) a deuas er bed, e Kerzaoulas d'ar 4 a viz eost 1816.


Ez yaouank e klevas, en e galon mouez an Aotrou Doue ha pa deuas da veza brasoc'h e santas e oa galvet da vont da visioner.

Staga a reas da studia er gêr hag abenn eur pennad goude e c'houlennas mont d'ar skolach. Eno e poanias muia ma c'hellas; eur spered digor en devoa; kaset e voe ac'hano da gloerdi bras sant Sulpis, da Baris da zeski an theolojia; tri bloaz e chomas eno ha d'an 13 a viz mezeven 1840 e voe beleget gant an Aotrou 'n Eskob Rozati. Ne roas ket d'e vamm al laouenedigez d'e welet oc'h oferenna rak lavaret a eure e oferenn genta war al lestr her c'hase d'an Amerik.

Doanuis meurbet e oa stad katoliked an Amerik en amzer-ze; tenval e oa neuze amzer da zont an Iliz; brezel a veze graet d'ezi; eur beleg a oa e riskl da goll e vuhez e straedou ledan kêr Boston


(1) E galleg, an hano-man a vez skrivet: *de Goësbriand*.

koulz hag er riboulou war ar maez; kristemen a vilierou, fuithet hini aman, hini a-hont, hep beleg ebet da brederia ganto, a deuc dillo da goll o feiz. En o anken, eskibien an Amerik a c'houlennas skoazell an Europ hag a glaskas beleien yaouank gouest da zont war o sikour. An Aotrou Gwesbriant a voe unan eus ar re genta a glevas ar galv-ze. Kuitaat a eure laouen Bro Goz e Dadou evit mont d'ar « *Bed Nevez* » warzu ar boan hag an dienez; gand e zeskadurez kaer en divije gellet chom er c'hêriou bras; mont a eure el lec'h m'oa tenna al labour; treuzi a eure menezioù A legha



Iliz Lanurvan

ny evit lakat e volontez vat etre daouarn an Aotrou Purcel, eskob Ohio; raktal e voe karget gantan eus parrez Louisville. An Aotrou Doue a venigas e labour; keriou a voe savet tro-war-dro d'e barrez ha pa voe savet eun eskopti e Kleveland, an Aotrou Rapp, an eskob nevez, a zibabas an Tad Gwesbriant evid ober anezan e vikel vras. Ac'hano e voe hanvet da eskob e Burlington, e bro Ver-




Tiez koz harp ouz pont Landerne

mont, er bloaz 1859. En eskopti-ze e oa neuze 10 iliz ha 5 beleg hepken. Ar gatoliked a oa 10.000 bennak anezo ha hep bloaz e teue re all da greski o niver eus ar C'hanada pe eus a Iwerzon. Diouz klevet an dud ne oa nemet trubuilh war drubuilh da gaout dre eno, met evid eun eskob misioner ne glasse nemet gloar Doue ha silvidigez an eneoù e oa eur frealzidigez gouzout e oa kalz vad ha kalz labour da ober dre eno. An Aotrou Gwesbriant ne fallgalonas ket eta; lakaat eure e fizians e Doue

hag e kemeras da c'her-stur himi e dud koz e Breiz : « *Deus providebit* », « *Dieu a bourveo* ».

Gwelet a reas e oa red d'ezan kaout muioc'h a veleien; evit kreski o niver ec'h en em erbedas ouz ar Werc'hez dre ar c'homzou-man a lakeas skigna dre e eskopti : « Rouanez an Ebestel, krouet hep pec'hed, pedit mestr an eost ma kaso d'eomp eosterien da labourat en e bark. »



Maner Kerzaoulas e Lanurvan

Ober a eure tro Vreiz, tro ar Frans ha tro Iwerzon da glask beleien da zont davetan ha kaout a eure misionerien kalonek a boanias da ziazeza da vat an eskopti nevez; eus ar C'hanada e teuas ivez eur beleg bennak hag, en deiz a hizio, ma 'z eus 78 iliz en eskopti Burlington e c'heller lavaret ez eus ivez eur beleg dre barrez pe dost ; 59.000

katolik a zo hag evit lakat ar skolioù da vont en dro ez eus menec'h ha leanezed. Leanezed ar Broidans o deus ouspenn kant emzivad, en eun ti eus ar re vraoa.

Etouez ar re o deus poaniet asamblez gand an Aotrou Gwesbriant e Burlington e ranker henvel an Tad Rapp, ganet e ker Arras ha kaset da visioner da Doledo, er bloaz 1840. Eno ec'h anavezaz an Aotrou Gwesbriant; labourat a raent a-zevri evit gloar Doue, tizet alies gant klenvejou eus ar re wasa ; pa voe hanvet an Aotrou Ropp da eskob e lakeas e vignon da renner war e gloerdi, er c'hloerdi dister savet en eur c'hraou zaout.



Chapel L. V. Trevarn, e kichenik Kerzaoulas

E nebeud bloaveziou e kreskas niver er veleien hag an ilizou hag an Aotrou Gwesbriant a deuas da veza viket vras an Aotrou Rapp betek ma voe hanvet e-unan da eskob.

E 1870 e oa dishenvel an traou ; daoust d'e zantelez, an Aotrou Rapp a voe dispennet e vrud d'ezan gand an teodou fall ; kuitaat a eure e eskopti, glac'haret holl, hag e teuas da jom da Vurlington, gand e gamarad koz, hag eno e labouras, evel eur misioner santel, betek e varo a zigouezas er bloaz 1877.

Petra bennak m'en devoa eleiz a gargou, an Ao-



Skoued an Aotroued Gwesbriant hag o c'hêr goz, maner ar Wazglas, e Plouezoc'h.

trou Gwesbriant en deus labouret gand e spered ; savet en deus leoriou kaer ha troet e saozneg meur a hini evel : « *Prederennou evid ar Veleien* », « *Leor Beleien an Amerik* », « *Istor Katolik ar*

Vermont » hag an talvoudusa anezo holl : « *Ar C'hrist war an Aoter* ».

An Aotrou Gwesbriant n'en devoa nemet seiz vloaz ha tregont pa voe hanvet da eskob ha c'hoaz ne zouge ket e oad. Eun dervez, eun den, eus ar C'hanada, a lavaras d'ezan : « Gwall yaouank oc'h, Aotrou, da veza eskob ! » hag o veza ma wela ne rae an Aotrou Gwesbriant nemet mousc'hoarzin, hep ranna ger, e lavaras : « Met, koz a-walc'h oc'h, evelato, war a welan, evit gouzout ar pezh a rankit da ober ! »

Er bloavez 1890 e voe graet goueliou bras e Burlington, en enor da 50^{vet} bloaz belegiaj an Aotrou Gwesbriant ; eskibien, beleien ha kristenien eleiz a deuas da ginnig d'ezan o gwella gourc'hemennou ; kals profou a voe roet d'ezan ; e veleien a baeas d'ezan eur gammell arc'hant, mein prisius outi. Eur glozenn-arc'hant da virout ar Zakramant ha bet kinniget d'ezan ivez, en deiz-ze, gand unan bennak a roas da iliz Lanurvan, « iliz e vadiziant ». An tenzor-ze a virer atao e Lanurvan.


An amzer a gerzas hag ar gozni a deuas ; an Aotrou Gwesbriant a rankas kemeret an Aotrou Michaud, eus a Vurlington, d'e zikour, en e garg ; seder e oa c'hoaz evelato, rak mont a c'hellas da bardona, da Jerusalem, er bloaz 1893 hg e kanas an oferenn er chapel a zo bet savet war al lec'h m'edo ti santez Anna ha sant Joakim gwechall ; eno e pedas c'houek evid e eskopti ; skignet en deus etouez e gristenien an devosion da zantez Anna, mamm goz ar Vretoned. Chapel Santez Anna a voe benniget gantan d'an 20 a viz gouere 1893 ; Breuriez santez Anna a voe savet ivez evid enori Mamm ar Werc'hez, enoret, a heb amzer, er vro-ze.

En hevelep bloavez an Aotrou Gwesbriant a yeas da Rom da welout Hon Tad Santel ar Pab

a roas d'ezan eur mell eus ereou sant Per. Evit digemeret ar releg-ze e voe graet gouelioù kaer e Burlington, kêr-benn an eskopti, d'ar 5 a viz eost 1894 : pevar arc'heskob, eiz eskob hag eun niver bras a dud a deuas eus a bep lec'h, da enori ar mell prisius. Ereou sant Per a zo eur skeudenn eus an unvaniez a zo en iliz katolik ha romen. Krog e oa an Aotrou'n Eskob en e bevar ugent vloaz, met daoust da-ze e oa krenv en e gorf ha seder en e ene, evel eur gwir vreizad. D'ar 25 a viz du 1894, e renas c'hoaz eur gouel kaer e New-York, en enor da Jann d'Arc ; kana a eure an oferenn-bred ha goude lein e pignas er gador da ober eur brezegenn.

Kendelc'her a eure c'hoaz gand e labour epad pemp bloaz all ha d'an 3 a viz du 1899, e varvas, en e eskopti. Bras e voe an diouer anezan hag ar re o deus e anavezet a lavar o deus anavezet eur zant. E hano a zo beo atao en Amerik, el lec'h m'en deus graet kement a vad ; ni, Breiziz, arabad eo d'eomp hen ankounac'haat ken nebeud ha trugarekaat a dleomp. Doue en deus laket bleunv ker kaer da ziouan war douar benniget hor Breiz.

Troet gant Tintin Anna.



Balum sant Brendan hervez eur skeudenn goz

Oferenn Sant Brendan

Ar skeudenn a welit e penn-an-nec'h ar bajenn-man a zo bet tennet diwar eun all kosoc'h bet engravet er bloaz 1621 ; diskouez a raer enni d'eomp unan eus an traou sebezusa a en em gavas gand ar manac'h Brendan, (hanvet c'hoaz Brevalar hag a zo enoret evel patron e Lok-Bre, e kichen Lesneven hag en devoa chapelioù e Plouenan hag e Botsorhiel), pa redas ar mor bras, wardro ar bloaz 550, evit dizellei broioù nevez da c'hellout prezeg enno relijion Hor Zalver Jezuz-Krist. Sant Malo e

ziskib ha c'houezek manac'h all a oa gantan ha teir bag graet gand aozilh ha krec'hin ejenned gwriet mat ha goloet gand eur gwiskad koltar hag amann, o douge.

Diouz ar skridou a zo chomet ganeomp war o baleadennoù sebezus e weler e rankont beza bet diskennet, da genta, e enezennou Asor pe e Kanari, a lezhanvet gwechall enezennou an eurusted ; d'ar zul warlerc'h, hag a oa sul Fask, sant Brendan, o welet e oa eun enezenn distag diouz ar re all, a vennas diskenn enni da lavarout an oferenn ; kaer meurbed e voe an oferenn-ze kanet gand ar venec'h hag ar vortoloded. Goudeze ee'h en em lakejod da c'houeza tan da aoza al lein-Bask, met kerkent an enezenn a grenas, a finvas hag a ziskennas ken dillo er mor ma o devoe bec'h ar gristenien geiz o c'hellout pignat en o bagou: war gein eur balum (baleine) eo en devoa sant Brendan kanet oferenn-bred ar zul Fask !

Diwezatoc'h e klever hano c'hoaz eus ar balum pe gentoc'h eus ar « *jaconius* » evel m'her galv ar skrivagner koz, met en taol-man n'en em ziskouez nemed evit maga gand e gig ar rederien vor n'o devoa mui eur c'hriñsenn da zebri hag a varve gand an naoun.

Sant Brendan hag e venec'h a dizas, da gredi eo, ar C'hanada, rak en em gaout a rejont e aber eur ster vras, hag a dlee beza ster sant Lorans. E buhez sant Brendan ez eus traou estlammus ha traou gwirion; gand ar re-man hepken ez eus a-walc'h evit gellout lavaret eo sant Brendan kaera skouer ha kaera patron a c'hellfed rei da vortoloded Breiz.

G. P.

Miser

Gwechall ez oa eun houarnier kezeg, e hano Miser. E unan edo o chom gant e gi bihan, hanvet Dienez. Miser a oa ker paour, ma ne oa mui den da werza d'ezan, nemet paea a raje dioustu, ha n'en doa mui eur gwenneg war e hano.

Eun deiz, an Aotrou Doue ha Sant Per oc'h ober tro ar bed, a dremenas dirak ar c'hovel. Stumm ar baourentez a oa warno o daou, hag an Aotrou Doue a oa war gein eun azen, nevez kollet gantan unan eus e hern. « Hag houarna a rafec'h va azen? » eme an Aotrou Doue. — « Ya vat, » eme Viser. N'en doa mui an distera tamm houarn en e c'hovel. Petra a reas? Eur blouk arc'hant en doa hag a oa brazik; hag hen lakaat ar blouk war an anneo, ha dao warnan mar gouie. « Petra a rez gant an arc'hant-se? » eme an Aotrou Doue. — « Eun houarn d'hoc'h azen, zur, » eme Viser. Hag hen lakaat eun houarn arc'hant da azen an Aotrou Doue. « Pegement a vankan d'id, » eme an Aotrou Doue. — « Oh, netra an holl, eme Viser; rak, dious a welan n'eo ket hirroc'h ar peuri gameoc'h eget ganen va unan. » — Mat, pa ne c'hoantaez ket arc'hant, me a roi d'id tri zra: gra mat da zonz, ha goulenn ar pez a giri. » Sant Per a lavare d'ezan e pleg e skouarn: « Goulenn ar Baradoz. » — Amzer zo, eme ar bôtr ar c'hovell; me a c'houlenn n'hello netra a gement a ielo em yalc'h-butun dont er maes anez va actre-me. » — « Evel-se bezet graet, eme an Aotrou Doue; ha da eil goulenn? » — « Goulenn ar Baradoz a lavare sant Per goustadik. — « Ro peoc'h d'am peni, koz rambreer; amzer avoalc'h am eus. Me c'houlenn n'hello hini a gement a azezo em c'hador sevel ken n'am bezo hel lavaret d'ezan. » — « Evel-se bezet graet, eme an Aotrou Doue. Taol evez breman; n'ec'h eus mui nemet eur goulenn da ober; gra mat da zibab. » — « Goulenn ar Baradoz » eme zant Per. — « Serr da glapez, diot koz, eme ar marichal. Pa vezin maro, ne ran fors e pelec'h e vezin lakaet. Me a c'houlenn n'hello hini a gement a bigno em gwezen graon diskenn ac'hano ken n'hel lavarinn d'ezan. » — « Evel-se bezet graet » eme an Aotrou Doue. Hag hen pignat war

gein e azen, ha mont en e hent, Sant Per war droad en gichen.

**

Gant kement-se holl, yalc'h Miser a oa ken tano hag araok: ne zebre ket atao leiz e gof, hag ar paourkeas ki Dienez a oa treud evel eun tach. « Ah! emezan aliez outan e unan, pegen diot oun-me bet pa n'em eus goulennet madou ! Kerkent all ec'h en em rofen d'an diaoul.

Eun devez, dious ar pardaez, edo o klemm gwasoe'h eged biskoaz, pa welas eun aotrou o tont en e c'hovell. « P'eo gwir, emezan, e fell d'id gwerza da ene, gra marc'had ganen-me, ha me a roi d'id priz mat evitan : aour hag arc'hant ar pez a giri. » — « Mat, eme Vizer ; ped vloas a roes d'in ? » — « Ugent vloaz ? Mat ; graet ar stal. »

Miser hen deveze digant Paolik aour hag arc'hant ar pez a gare, he beva a rae dizoursi kaer. Hogen ugent vloas a dremen buhan pa ne vezer ket inouet ha pa vez atao c'houezet ar yalc'h. Tremenet an ugent vloas, Paol gornek a deuas da gerc'hat Miser. « Ya, ya, eme Viser, mont a ran dioc'htu : gortoz hebken ma 'z an d'en em voalc'hi ha d'en em ficha eun tammig : n'oun ket kempenn avoalc'h evit mont da heul eun aotrou eveldot-te. Azez er gador-ze da c'headal ; ne vezin ket pell. » Ha Paolik da azeza e kador Miser. Heman ne oe ket pell oc'h en em gempenn. « Allo, dont a rez ? » emezan. Paolik, stad ennan dre m'en doa paket ar paotr fin, a glaskas sevel en e zav. Siouas ! ar gador a deue gantan, egis pa vije bet stag ous e ziadre : « Ac'hanta, deus ta ; d'ober petra e chomes aze ? » — « N'hellan ket dibrada ac'halen, » eme Baolik. — « Mat, pet vloas a roi d'in c'hoas, ha me 'z laosko da vont kuit ? » — « Ugent vloas all. » Ha Paolik kuit mar gouie.

Ugent vloas a dremen buhan, pa ne vezer ket inouet ha pa vez atao c'houezet ar yalc'h. Pa voe tremenet an ugent vloas, setu va Faolik en dro, ha tri diaoul all gantan : « Ya, ya, eme Viser, mont a ran ; gortoz ma 'z an da ober eun tammig kempenna. Ma c'hoantaez dibri kraon d'am gedal, aze er wezenn ez eus hag a zo dare : biskoas n'ec'h eus tanveet ar seurt-se. » Ha Paolik gant e dri lakez er wezenn. Miser ne voe ket pell. « Ahanta, emezan, ha gwelet ec'h eus

avelloc'h biskoas ? Deomp breman. Allo, deus ta buhan. Da ober petra e chomez aze ? N'eo ket leun da gof ? Laosk unan bennak war da lerc'h. » Paolik a c'hope hag a yude : « Laosk ac'hanomp da vont kuit, ha me a roi d'id ugent vloas all, hag ar pez a giri a arc'hant. » Miser o laoskas da vont kuit, hag ez ejont lostok evel al louarn bet paket gant eur var.

Hogen ugent vloas a dremen buhan, pa ne vezer ket inouet ha pa vez atao c'houezet ar yalc'h. En dro-man Pluton, mestr an diaoulou, a deuas da gerc'hat Miser, ha war e lerc'h holl diaoulou an ifern. « Prest oun, eme Viser. Sell ta, me 'm eus klevet e helles mont ker bihan ha ma kerez ; daoust ha gwir a leverer ? Ha mont a c'hellfes, te ha da holl diaoulou, e korf enr verienenn ? » — « Ya avat, » eme Bluton. Kerkent e lec'h an diaoul bras hag a vevelien, e voe gwelet eur verienenn. Miser ha lakas en e yalc'h butun, hag he lakas war an anne : ha dao, ha dao, ken na vo skuiz ha gleb-teil o c'houezi. Hag an abadenn-ze a veze bemdeiz c'houlou.

Diwar neuze ne voe mui war an douar na brezel na breut, dre n'edo mui an diaoul o c'houeza froudennoù fall e kalon an dud. An holl a oa eürus, nemet ar varnerien hag a varve gant an naoun. Mont a rejont d'en em glemm ouz ar roue, ha goude enklask e voe gouezet edo an holl diaoulou gant Miser en e yalc'h butun. Kemennet e voe d'ezan, dindan voan da veza krouget, o lezel da vont kuit, evit mirout ne-varvje an holl varnerien gand an naoun. Miser ne c'houlenne ket lakat e c'houzoug er groug-lasou, hag o laoskas da vont, gant ma ne deujent mui d'e glask. Heb dale e tirol-las brezel ha breut : ar varnerien a zastume arc'hant a zac'hadou, hag ar roue a oa stad ennan.

**

Eun deiz, an Ankou a deuas da gerc'hat Miser. Mont a reas bete dor ar Baradoz, ha gantan e gi Dienez. Hag hen skei war an or : Pan, Pan ! Sant Per, lunedou gantan war e fri, a deuas da zigeri. « Sell, te zo aze, Miser. Allas ; n'eus ket a blas evidot aman. Perak n'ec'h eus ket goulennet ar Baradoz ? Hel lavaret am oa d'id. Gwas a ze evidot. » Hag e serras an nor ouz e fri. Miser a ieas da skei war dor ar

Purkator: Pan, Pan! Ar porzier a zigoras an dorikell, hag a zellas ous paperiou Miser. « Re a bec'hejou bras, ha re nebeut a bec'hejou bihan evit chom aman, emezan; kea larkoc'h da glask lojeiz. » Hag e serras an or. Digemeret fall e toull dor ar Baradoz hag e toull dor ar Purkator, Miser a leas da velout ha gwelloc'h digemer en dije en ifern. Ar porzier, dal m'her gwelas, a brennas an or hag ha harpas starta ma helle: « Kea peli ac'haleu, Miser, emezan Biken ne vezi digemeret aman; re vras ac'h eus graet deomp p'edomp en da yalc'h butun. »

Red voe da Viser distrei war an douar. Eno eo chomet abaoe. Gwellet e vez aliez o vont dre an henchou, war bouez e vaz, gwisket a druilhous, hag e gi Dienez en e gi-chen.

Renket gant Yann Kostarreun.



Maner Kergroadez

Goude Kastell Keryann n'eus kastell ebet e Bro-Leon par da hini Kergroadez, e parrez Brelez, a zo nevez bet renket gand ar C'houarnamant etouez traou talvoudeka ar vro hag e vezo graet eta hivi-ziken ar pezh a zo red evit e virout en e gaer.

An hano a Kergroadez a zo eun hano hag a zo anavezet a-bell 'zo e Goueled-Leon. E bered Plourin, e weler c'hoaz, daoust pegen torret eo bet d'an Dispac'h, bez eur marc'heg, Roparz Kergroadez, hag hini e wreg, Benona Carn, a veve wardro ar bloaz 1390 ; an tiegez-se a vevas hag a roas servicherien vat da Vreiz betek an XVIII^{vet} kantved. Goude brezelioù ar Re Unanet, Fransez Kergroadez, savet c'hoant gantan da gemerout skouer war Louis Barbier, aotrou Keryann, a zavas eur maner nevez, etre ar bloaz 1595 hag ar bloaz 1613, eur maner karre, gand eun tour e pep korn. Daoust

ma ne oa ket a zouvezioù en dro d'ezan, evel e Kerriann, e c'helled en em zifenn ennan brao-bras a eneb ar Zaozon a glaske a-wechou ober o diskeñ war hon aochou, koulz hag a eneb al laeron a rede ar vro, en amzer-ze.


Diou verc'h a zougas da ziweza an hano a Kergroadez ; unan anezha a zimezas da varkiz Kerrouartz hag eben da varkiz Roquelaure ; goude prosezou hir ar maner a jomas gand an Aotrou Roquelaure hag abaoe, e lec'h e henvel maner Kergroadez e vez hanvet a-wechou maner Roquelaure.

Markiz Roquelaure a voe dibennet epad an Dispac'h ; e vaner a voe kemeret gand ar C'houarnamant ha graet eun hospital anezan evid ar zoudarded a oa o c'hamp e kichenik Lanveneg, war zouar Lanriouare ha Milizac.

Dilezet ha disto, Kergroadez a voe gwerzet gand an diweza tudchentil a zougas an hano a Roquelaure d'an A. Mevel, noter e Lokournan, ha breman eo perc'hennet, dre zimezi, gand an A. Julian Chevillotte en deus e doet hag e renket a-nevez er bloaz 1912. Er miziou tremen, siouaz, an A. Chevillotte en deus kollet ar Vretonez vat ma 'z oa e bried hon devoa gwelet leun a yec'hed, e *Bleun-Brug* Gwengamp eun nebeud sizuniou araok. Fiziens hon eus, daoust d'ar groaz-ze, e chomo e hano hag hini e vugale stag epad pell hag hir amzer ouz ar maner koz en deus gouezet kempenn ker kaer da c'houatori e diegez.

Pa vezo peurrenket ar pondalez a zo a-zioc'h an nor-borz ha laket eun doenn vegok war dour ar chapel ha war dour ar paperiou koz, Kergroadez a vezo ker kaer ha ma oa e bloavezioù kenta ar XVII^{vet} kantved hag an dremenidi a jomo sebezet o kaout eun dra ker kaer en eul lec'h ken distro.

G. P.



AL LIGNEZ VEUR

hennet

D'an Otrou Yann-Vari Perrot, person Skrignag, er 14 a viz kerdu 1930.

Ar wazienn a red e kreiz an douaro,
Gwech kuzet a-zindan ha gwech all war c'horre ;
Pa sko an heol re domm, 'chom dindan an erô ;
Met pa dec'h ar sec'hor, e tfluk adarre.

Gwech e tarz en arvor, tost da drêz an ôcho ;
Gwechall, kreiz an argoad, en draouienn, er mene ;
He nerz a gresk bemdeiz, rak ni he gwel hirio
E kant lec'h o-strinka d'an hevelep mare.

Mammenn sakr an dour-red a zalc'h beo en hon c'hreiz
Gwrizienn ar garantez e kenver an Tado,
Tra m'hon do beleien, en hon zouez c'houi redo ;
Tra m'hon do Personed 'vel Guillou, 'vel Henry,
Vel Perrot ; — al Lignez gantan 'vo ket divi ! —
Tra 'pado Lignez veur Personed « Feiz-ha-Breiz ».

E. AR MOAL.



PEMOC'H BRAS HELLEZ

Heñchou Breiz, gwechall, a oa eun danjer mont drezo. Treuzi a raent lanneier diskurlu, hep ti ebet, koajou hag e oa aes d'al laeron en em guzat enno, traoniennou doun, brouskoajou ha reier, a bep tu d'ezo, e c'helle an ailhoned en em zila en o zouez da lammat war gar eur marc'hadour bennak a welent o pignat gand ar c'hrec'h.

An henchou-ze, en deiz a hizio, a zo dilezet dre ma oa re vras o saoiou, met an dud a zo o chom en o c'hichen n'o deus ket ankounac'haet an torfejou a zigoueze e koad Malaunay, etre Gwengamp ha Kastell-Audren, e pont Sant-Hubert, etre Montroulez ha Lannveur, e Toull-ar-Barac'hou, etre Montroulez ha Keraëz, e Kelern, e Koad-Toull-

Zac'h, etre Montroulez ha Sant-Thegonneg, e Toull-ar-C'hrogou, etre Lannbael ha Landivisiau, er Vadalen, etre Montroulez ha Kastell-Paol, e koad Sant-Gweltas, etre Kastellin ha Lokronan, hep konta an daou lec'h brudet falla, Leo-Draez Treger, etre Sant-Efflam ha Lok-Mikael ha Leo-Draez Kerne, etre Plomodiern ha Telgruc, war aochou Sant-Vic. En daou lec'h-se, goude ma veze lazetañ an dud e vezent douaret en traez hag ar mor, o vont hag o tont a beurguze an torfed : « N'eus ebet ebet renket kaeroc'h eget va hini ! » a lavare mestr eun toullad laeron a « labouré » etre chapel Sant-Efflam hag hini Lanncarre.

An holl laeron, evelato, ne oant ket lazerien tud ; darn anezo a laere o nesa, hep re en holl a fallagriez, o c'hoari troiou kamm d'ezo ; daou laer evelse a oa e bro Dreger : paotr Koadalan hag ar Bilz, daou baotr fin ha n'o devoa ket o far er vro. Eun dervez ec'h en em gavjont an eil gand egile e foar Sant Mikael ; meur a vezvier ha meur a varc'hadour dievez a oa bet flemmet ganto ; n'o devoa ket graet eun dervez re fall hag edont o tizrei d'ar gêr, laouen, ha leunet o ilc'hier ganto. En eur vale, e lavarent an eil d'egile, an troiou kamm o devoa c'hoariet en o buhez, ha bep wech m'en em gavent gand eur chapel bod-ilio bennak e choment a-zav da ober eun diskuiz ha da eva eur banne. Kerent ha m'en deveze unan anezo kontet eun taol fin, egile a gave an tu da gonta eun taol bennak all finoc'h c'hoaz ; deuet e oant da gaout eur stlabez-gwarizi an eil ouz egile :

— Brao bras e komzes, va mignon, a lavaras Paotr Koadalan, met n'eo ket a-walc'h konta taoliou kaer, red eo, dreist holl, beza gouest da zont a-benn anezo ; gwelet a res an aochaer-ze, eus a Lok-Kireg, a zo o tont d'ar ger, eus an aod, gand e gar, daou ejen starnet outan ; mat, lakomp eur

glaoustre, mar keres, em bezo laeret e zaou loen digantan a-raok eur c'hard eur aman ha ne vezin ket nec'het c'hoaz.

— : Gra da daol ! eme Vilz, ma vezo gwelet pebez pabor out.

Ha setu i da vale dillooc'h eget paotr ar c'har evit mont en e raok ; pa ne c'helle ket ken an aochaer e welet Paotr Koadalan a dennas unan eus e voutou ler hag hel lezas war an hent ; kenderc'hel a eure da vale ha tri c'hant metr pelloc'h e lezas e eil botez war an hent.

O tremen dirak ar votez kenta paotr Lok-Kireg



An daou laer war c'hed

a lavaras : « Sell 'ta, setu aze eur votez avat ha n'he deus ket a zoare da veza re fall ; met, petra 'rin gand eur votez hepken ? ne dalv ket ar boan he dastum ! » Hag e kendalc'has gand e hent ; p'en em gavas gand an eil botez e savas keuz gantan da veza lezet he farez el lec'h ma oa : « Feiz ! avat, emezan, mont a rankan d'he c'herc'hat ; epad an amzer-ze va ejenned a c'hello diskuiza ! » Hag hen,

war e giz ; met, a vec'h m'en devoa digorn-troiet ma lamme Paotr Koadalan eus ar brouskoad m'oa en em guzet ennan ; distarna a eure an ejenned d'ar red hag hen ganto d'ar c'hoad d'o c'huzat en eur c'hraou dindan zouar hag e oa an alc'houez anezan gantan en e c'hodell :

— N'eo ket diaesoc'h eged evelse, emezan da Vilz, lorc'h ennan ; setu aze eun taol kaer ha ne vijes ket bet deuet a-benn anezan.

— : Ha perak ? eme Vilzig oc'h heja e ziouskoaz. Laeret ez peus an daou ejen met koll az peus ranket da voutou ha breman e vezo red d'it bale diarc'hen ken na 'z pezo kavet an tu da laerez eur re all da gere Lanveur. An taol a rin-me a vezo kaeroc'h c'hoaz eget da hini. Anaout a res maner Hellez (1) hag an aotrou a zo o chom ennan ; gwe-lout a ri hep dale, penaos her flemmin ; o larda eur penmoch ema abenn goueliou Nedeleg. Mat, n'em eus ket aoun o lavarout d'it, laerez a rin e bemoch d'ezan ha dilhad nevez flamm am bezo c'hoaz digantan e lec'h ar re a zougan ha n'int mat da metra ebet ken nemet da lakat e sac'h ar pilhaouer.

— Kredi a rin an dra-ze, eme Baotr Koadalan, pa 'm bezo her gwelet !

— : Mat va mignon, deus, en noz a zeu da rei an dour d'in hag her gweli ; n'az pezo ket a geuz rak ranna a raimp, dre an hanter, ar pemoch a laerimp hag a dle beza koulz da c'houzout ha ma 'z eo da welout. Graet eo ar marc'had ?

— : Ya ! ya ! eme baotr Koadalan, graet eo.

Mont a rejont da ziskuiza eur pennad da ostaleri Pont-Menou a anavezent mat hag ec'h en em gavjont o daou, wardro hanter noz dirak maner

(1) Hellez a deu eus an daou c'her *Hen* da lavarout eo *koz, hen, henoc'h, hena* ha *lez* = cour, e galleg.

koz Hellez kousket dindan e doennou uhel kuzet e tenvalijenn an noz.

Dor ar porz a oa prennet ; Bilzig hag a anaveze an doareou a lammas dreist ar voger hag a zigo-



An daou laer oc'h en em gaout e Hellez

ras, heb ober trouz, an nor vihan. Ar c'hi, strobinnellet gantan, a jomas sioul ha ne reas ket eun harzadenn. En em rinkl a eurent neuze o daou, e gamarad hag hen, er c'hraou ; stanka a rejont e c'henou d'ar penmoc'h da virout outan da wic'hal, ha goude beza her gwintet en eur garrigell ez ejont ac'hano gantan. Pa voent digouezet war an hent bras, Bilz a lavaraz d'e gamarad mont atao e-unan betek ar gêr ma vezent alies a enni da lavarout eo

fourn an Hospital e Plestin. Dizrei a eure neuze d'ar c'hraou goulo ; tenna a eure an truilhou a oa gantan war e gein ; o c'huzat a eure en teil hag ec'h en em guzas er c'holo da virout ouz ar riu da gregi re en holl ennan ha da c'hedal an deiz.

Kerkent ha kan ar c'hilhog, aotrou Hellez a deuas, evel en derveziou all, da welout al loen a vage gant kement a breder ; tost e voe d'ezan koueza war e benn a-drenv pa welas eun den, en noaz dibitailh gourvezet etouez ar c'holo :

— Malloz ruz ! emezan ; oc'h ober petra an diaoul emañ te aze ?

Ha va fenmoc'h, e pelec'h eo aet ?

Petra zinifi traou evelhen ?

— : Me, aotrou, eo ho penmoc'h, eme Vilz, ken doujus ha tra.

— : Te, va fenmoc'h ? Pe seurt istor a zibunes d'in aze ? Va fenmoc'h a oa eul loen ha te, evelato, daoust ma n'out ket gwall gaer da welout a zo eur c'hristen badezet.

— : A ! siouaz, Aotrou, me a zo en em gavet a bep seurt gamen. An Aotrou Doue en deus va c'has-tizet ; dizoare oun bet e kenver va mamm ; he lezanvet em eus penn rous, eun dervez m'he devoa nac'h rei arc'hant d'in da vont da eva ; kemeroùt a ris arc'hant evelato, hep gouzout d'ez ; mont a ris d'an ostaleri ; ober a ris eur c'hovad hag en eur zont d'ar gêr e kouezis, e foz an hent hag antronoz pa zihunis e oan troet e penmoc'h ; eur c'houer o font ebiou am c'havas hag am gwerzas d'eoc'h, Aotrou. Va maga mat ho peus graet hag evelato ne oan ket eurus hag estlammet e oan o sonjal en dervez m'ho pije graet gwadegennou ha silzig gamen. Doue en deus gwelet pegement a geuz am oa d'am fec'hed ha va zroet en deus a-nevez e den. Mont a ran breman da gaout va mamm da Dreduder ha da c'houlenn pardon diganti ;

ar rest eus va buhez, a c'hellit kredi, a dremenin oc'h ober pinijenn ha morse ne c'hellin ober ne da drugarekaat an Aotrou Doue da veza teurvezet va fardoni evel m'en deus graet.

Aotrou Hellez a jome a-ban da zelaou prezegenn Bilzig ha gounezet gand e gomzou flour e lavaras :

— Da gontadenn a zo eur gontadenn sebezus ! Daoust d'ar pez em eus paeet ennout ha daoust d'ar pez am eus dispignet gamez ouz da vaga oun laouen e vije digouezet eun hevelep tra em zi. Rak-se, dizro d'az kêr, laouena da vamm ha ra deuiio ar vugale ha n'o deus ket a zoujans a-walc'h evid o zud da bleustri war ar pez a zo bet en em gavet gamez. N'out ket gouest da vont evelse ac'han ; mont a ran da gerc'hat d'it eur roched hag eur re zilhag koz am eus em c'hampr ; da c'headal kerz atao d'en em walc'hi d'ar feunteun !

Eun hanter eur goudeze, an ailhon fall a de- c'he diouz ar maner. Gwisket mat, gand eun dour- nad realed en e zourn roet d'ezan war marc'had an dilhad gand an aotrou da ober e hent.

Antronoz edo fest an ouc'h gantan hag aotrou Hellez, na petra 'ta eo a baec al lein ; Bilzig a la- ke ar re a oa ouz e daol da c'hoarzin leiz o c'hof o konta d'ezo penaos e oa deuet a-benn eus e daol ha Paotr Koadalan e-unan a ranke anzav ne oa laer ebet er vro ker fin ha Bilzig.

G. P.



KELEIER AR MIZ

An XXXI^{vet} Kendalc'h a ra ar bed-holl en enor d'ar Zakramant.

Er bloaz a zeu e tiredo da Zublin, kêr-benn Iwerzon (*Ireland*, e saozneg) tud eus pevar c'horn ar bed da geme- ret perz er gouelioù dudius a vezo graet eno en enor d'ar Zakramant, meulet ra-vezo, eus an 22 d'ar 26 a viz meze- ven.

War *Ave Maria* miz kerzu 1930, p. 790, e lennomp e tle ar c'hardinal Hlond, arc'heskob bras ar Pologn, en em gaout e Dublin a-benn ar gouelioù-ze : « Karout a rafen kalz gwelet Iwerzon, eme ar c'hardinal, rak kals henvele- digez a zo etre ho Pro hag ar Pologn ; hor broioù o deus gouzanvet en hevelep amzer ha c'hoarezed int bet en dru- builh.

Ar Polonad hag an Iwerzoniad o deus ranket tec'het eus o bro etrezek broioù ar c'huz-heol, war an hevelep digar- ez : n'oant ket evit gounit o bara en o bro. Evid an diou bobl stourm evit miret o Feiz a oa stourm evit difenn o broadelez, rak o diou o devoa c'hoant da virout o broade- lez ha da virout o broadelez katolik ; e istor o relijion koulz hag e istor o bro ez eus eleiz a bajennou-hag a zo henvel mat. »

Ma 'z eus henveledigez ha kerentiaez — hag ez eus, — etre ar Pologn hag Iwerzon, etre hor Breiz-ni hag enezenn ar zent, perlezenn ar broioù keltiek ez eus dek gwech muioc'h c'hoaz a henveledigez hag a gerentiaez.

Iwerzoniz a gomz eveldomp-ni eur yez keltiek ; gwas- ket eo bet an iwerzoneg epad ar c'hantvejou tremenet gand ar saozneg evel m'eo bet gwasket hor brezoneg-ni gand ar galleg, met e Iwerzon koulz hag e Breiz e wella an traou da vont.

Iwerzoniz a zo kristenien eus an dibab ; o bro eo bro ar Zent koz o deus laket sklerder ar feiz da bara war aochou an Arvor ; n'eus ket a ziou bobl war an douar gouestoc'h d'en em glevet eget pobl Breiz ha pobl Iwer-

zon ha setu perak, fizians hon eus, e vezo eleiz a Vretoned hag a dreuzo ar mor, er bloaz a zeu evit mont da welet o breudeur tramor!

Ar *Bleun-Brug* goude beza en em glevet gant ar c'hevredigeziou breizek all a boanio da renka pep tra evid ar gwella.

Ar wech kenta eo d'eomp da welet kendalc'h bras ar Zakramant graet en hor broiou keltiek ha marteze ne vezo ket adwelet ken eun hevelep nevezenti-se en tregont vloaz kenta-man!

Arabad eo eta d'eomp hel lezel da dremen hep kemet perz ennan: eur pec'hed e vefel ha setu perak e lakimp eur ger bennak aman bep miz hiviziken, diwar-benn ar gouelioù dispar-ze.

Oberou an A. Gwilhou

Setu aman anioù rak-prenerien miz genver:	
An A. Joseph Mescam, Scrignac	1
An A. Paul Jezequel, Scrignac	1
An A. Sezni ar Gall, Kerlaz	1
An A. Y. Uguen, Plougastel	24
An A. Lec, Cléden-Poher	2
An A. Cuillandre, Cléden-Poher	1
An A. Louis ar Guennec, Kemper	2
An A. J. Laot, Melgven	6
An A. Gaonac'h, Pouldreuzic	1
Leoriou rakprenet betek-hen :	39

$$602 + 39 = 641$$

Daoust hag en tu all du c'halloud ar Vretoned eo tizout ar mil?

Gwelet e vezo.

Ra gendalc'ho mignoned an A. Gwilhou ha mignoned ar brezoneg da gas o ano da *Rener* « Feiz ha Breiz », *Scrignac*, kenta ma c'hellint.

Kroaz enor an A. Duparc

Ar C'houarnamant a zo o paouez rei ar groaz enor d'an A. Duparc, eskob Kemper ha Leon « evid al labourvat en deus graet er vro, evel beleg, abaoe daou vloaz hag hanter kant ».

An holl Vretoned a vezo lorc'h enno o klevet ar c'he-louze hag a bedo evit ma chomo pell hag hir amzer c'hoaz an eskob breizat hag helavar-ze war-gador sant Kaourintin.

Emgleo sant Iltud

Izili Emgleo sant Iltud a zo o bodadeg e Brest d'ar zadorn 14 a viz c'houevrer da 2 eur e Keriltud, 11, rue Algésiras.

Lein a c'hello beza aozet a-benn kreisteiz, evid eiz lur dre benn, d'ar re a garo, e ti Leanezed an Adorasion, 77, rue de la Vierge, gant ma kasint eur ger d'an A. Paul Raoul, 11, rue Algésiras, Brest, abenn an 12 a viz c'houevrer, da ziwezata.

Bleun-Brug 1931

XXI^e Kendalc'h ar Bleun-Brug a vezo graet er bloaz-man e Henbont, e Bro-Wened, e miz gwengolo a zeu.

Er miz a zeu e roimp aman reolenn ar gouelioù kaer-ze.

II. — Petra eo sota tra a zo en ti ?

DIVINADENNOU

- I. — Divin d'in-me divinadenn
Me 'm eus peder dimezell wenn
Pa rafe glao kement ha mein
Ne gouesfe, banne war o c'hein.
20 p. ar r. *Degaset gand eur mignon eus Kerne.*
- II. — Petra eo sota tra a zo en ti?
20 p. ar r. *Degaset gant P. Penrianeac'h,
Plogonnec.*
- III. — Petra eo neta tra a zo e ti al loudourenn?
20 p. ar r. *Degaset gant M.-F. Calvez,
Wourc'h-Wenn.*
- IV. — Salligen dizalligen n'he deus na kig na kroc'hen;
Koulskoude mamm, salligenn ha dizalenn he
[deus kig ha kroc'hen.
20 p. ar r. *Degaset gant Mari Cloarec, Cleder.*
- V. — Petra a ya d'ar marc'had
Ar c'hlizenn war e lagad?
20 p. ar r. *Degaset gand eur mignon eus Kerne*
*Degas respouchou Genver, C'honneurer ha Meurz, da
fin miz Meurz.*

Mystère de la Bonne Rencontre

Pièce en 3 trois actes, en vers

En vente chez l'auteur :

M. l'abbé CADOUX, Recteur de Kervignac (Morbihan)
Prix : 4 francs

Feiz ha Breiz

Deveriou an Tad a familh

*Lizer a bastor aotrou 'n eskob
Kemper ha Leon evit korreiz 1931.*

HOR BREUDEUR KER,

I. — E penn kenta al Lizer-man e lakamp d'eoc'h
eur bajenn eus al Lizer-meur nevez skrivet gant ar
Pab diwarbenn ar Briedelez.

Er bajenn-ze e komzer eus karg uhel ar gerent, eus
an dever santel o deus da zevel mat o bugale.

Setu aman komzou ar Pab:

« Ar gerent kristen a gompreno n'o deus ket hep-
ken da lakat an dud da greski war an douar, da zevel
tud hag a enoro Doue; uheloc'h eo o c'harg, an dever
o deus da rei bugale da Iliz Jezus-Krist, da lakat da
greski niver ar zent er baradoz, niver ar re a anavez
Jezus-Krist evit o Doue hag o Zalver. E gwirionez, ar
gerent kristen, zoken pa vezont bet santellaet o-unan,
n'hellont kei rei ar zantelez d'o bugale: holl vugale an
dud a zo taget gant ar pec'hed orijinel. Evelato ar
gerent a zalc'h eul lodennig bennak eus ar stad ma
voe krouet enni hon tad hag hor mamm genta e ba-
radoz an douar; ar c'halloud o deus da ginnig o bu-
gale d'an Iliz, evit ma vezint digemeret gant ar
Vamm-ze leun a deneridigez a roio d'ezo ar vuhez

dreist natur dre zeur ar Vadiziant, a raio anezo mem-prou da Jezus-Krist, heritourien ar c'hloar eternel e palez an Dreinded er baradoz.

« Eur vamm gristen hag a bleustro war ar wirio-
nez-ze a gompreno brao eo bet lavaret eviti ar c'hom-
zou-man eus Hor Zalver :

« P'he deus ar vaouez laket eur c'hrouadur er bed,
« e teu da ankounac'hât he foaniou dre ar joa he
« deus o sonjal ez eus ganet eur c'hrouadur er bed. »
Trec'h eo da bep poan, da bep enkrez, da bep karg,
ha lec'h he deus d'en em fougeal eus he bugale kalz
muioc'h eget Kornelia, eun itroun vras eus Roum
gwechall, a lavare n'he doa ken braoigou nemet he
bugale.

« An tad hag ar vamm a zigemero gant joa hag
anaoudegez vat ar vugale roet d'ezo gant Doue. Sonjal
a raint eo ar vugale eun tenzor fiziet enno; n'e ket o
mad o-unan, na mad ar vro a dleont da c'hortoz da
genta digant ar vugale-ze; nann: da zeiz ar varn, ar
vugale-ze a zo da veza restaolet da Zoue gant ar frouez
a dleint beza douget.

« Ar bugel deuet er bed dre vadelez Doue a dle
beza savet dereat. Doue, an Hini a zo d'ezan pep
furnez, en dije taolet nebeut a evez ouz ar vugale,
ma n'en dije ket roet d'o c'herent ar gwir hag ar garg
d'o sevel. Evit buhez an douar-man zoken, an holl a
oar n'eo ket gouest ar bugel da gaout ar pezh a vank
d'ezan. Evit ar pezh a zell ouz ar vuhez dreist-natur,
en devezo, epad kalz bloaveziou, da veza harpet, skle-
rijennet, hentchet. Piou o deus ar gwir hag ar garg
da hentcha ar vugale? Sklaer eo: ar re o deus bet ar
garg d'o lakat er bed, hag a zo eun dever evito ken-
derc'hel o labour e kenver ar vugale, a vije sur d'en
em em goll ma ne vijent ket sikouret. Doue en deus
beilbet war gement-se, o sevel sakramant ar Briedelez:

ar gwaz hag ar vaouez, unanet etrezo dre liammou
n'hellont ket beza torret, a laka o daou o aked da
zevel ar vugale. »

H. B. K., kement a lavarimp d'eoc'h ne raio nemet
displega komzou ar Pab ha rei d'eoc'h ar c'henteliou
a zired anezo.

Ret eo lavaret, en hon amzer, an darn vrasa eus
ar vugale n'int ket savet evel ma c'houleñn ar Pab.
Ne glever e pep lec'h nemet tud oc'h en em glemm
hag o lavaret: « N'eus mui a vugale ». Ha dre ar ge-
riou-ze ez eus c'hoant da lavaret: « Ar vugale n'ou-
zont mui senti. Fae a reont war o c'herent, war ar
re holl o deus da welet warno, ne fell d'ezo mui ober
nemet o fenn o-unan. Mat c'hoaz, pa ne jenchont ket
penn d'ar vaz, pa ne lakont ket o c'herent paour da
blega d'ezo, d'ober kement a c'hoantaont ».

« Hag e lavarer c'hoaz: N'e ket er familh hepken
e vez laket evelse freuz ha dizurz, met er broiou ive.
Ar vugale-ze, ha n'o deus ket gouezet senti er gêr, a
zo « anarchisted » bihan, a lakaio ive freuz diweza-
toc'h e kement lec'h ma vezint. Daoust ha ne vezint
ket paotred an drailh hag an dispac'h? »

Setu aze an droug bras a ziskulier en deiz a hirio.
Holl familhou hor bro, n'int ket taget gantan a dru-
gare Doue, met siouaz! re skignet eo e pep lec'h.

En em glemm ne dalv da netra. Ret eo klask gwri-
zienn an droug, evit he zenna, mar bez gellet. Piou
eo a zo da damall? Pe ar vugale n'ouzont ket senti,
pe ar gerent n'ouzont ket komandi?

Hirio e komzimp d'eoc'h eus ar familh, hag e la-
varimp d'eoc'h, hervez kelennadurez an Iliz hag her-
vez an dud fur, da biou eo da c'houarn ha penaos e
fleer komandi. Gwelet a reoc'h, war ar poent-man evel
war ar re all, an Iliz eo an hini a ro ar starta harp
d'ar familh, rak e skol an Iliz e tesker atao senti ha
kaout doujans.

Da biou eo da c'houarn ?

II. — Ar familh a dle beza unan bennak en he fenn, sklaer eo. Penaos e c'hellfe kreski, chom en he sav, ma ne vije ket unan bennak hag en dije ar gwir hag an dever d'he diwall, d'he difenn, da bellaat diouti an danjeriou, da renka an traou en diabarz, o verka da bep hini e blas, e labour, o lakaat an holl da blega ha da zenti gant doujans, pa vez ret? Karg diaes, n'heller ket da anaout re vat, met skanvaet evelafo evit ar gerent dre ar garantez a laka Doue en o c'halon.

Ar penn er familh eo dreist-holl an tad. Ar skiant vat hel lavar: d'an tad da c'houarn, da zével ar yugale.

Sikouret e vezo gant ar vamm. Douster ar vamm a zo e kichen galloud an tad. An tad a vezo fur ma oar ranna gant ar vamm ar gwir da c'houarn, met ne ziskrogo morse a-grenn eus ar gwir-ze. Ar vaouez a zo gwreg ar gwaz, an hini a dle rei kuzul d'ezan, her sikour; met n'eo ket ken uhel hag ar gwaz. Ar vaouez eo rouanez an ti, ha gouzout a raio skuilh joa ha teneridigez endro d'ezi; met n'eo ket d'ezi da c'houarn, dindan galloud ar gwaz eman; n'hello gouarn nemet pa ne vezo mui ar gwaz gouest d'hen ober; emgleo, ha nann brezel, a dle beza etrezo, hag ar vugale ne welfint ket dirak o daoulagad an dizunvaniez etre o zad hag o mamm, rak n'eus netra gwelloc'h evit laza e kalon ar vugale an doujans a dleont d'o c'herent.

Er familhou a vezo enno kalz bugale, an tad a c'hello en em harpa war ar re gosa evit gouarn ar re yaouank evel eur roue a gemer ministred d'e zikour da c'houarn e vro. Met ne ziskrogo ket evit mat eus ar stur; ar vugale gosa ne c'houarnint nemet en e hano.

Ha dreist pep tra, ar c'houarnamant ne glasko

ket beza mestr er familh. Ar c'houarnamant en deus da welet war ar familh, klask a dle he mad. Ober a c'hell lezennou talvoudus evit an urz vat er familhou; setu aze labour ar c'houarnamant, ne dle ket klask freuza ar pezh a zo bet graet gant Doue, tenna digant ar gerent o gwir. E kement lec'h m'en deus ar c'houarnamant klasket kemeret plas an hini a zo zet choazet gant Doue da zerc'hel ar garg a dad, kregi er vugale evit o zével hervez e faltazi, bep gwech eo bet gwelet oa ar c'houarnamant ar falla eus an holl dadou.

III. — Evit en em denna mat eus e garg ken bras, ken uhel, an tad, penn ar familh, a zello da genta ouz galloud Doue.

Mar deo an tad karget da c'houarn, ar garg-ze a deu d'ezan digant eun all brasoc'h evitan. E gwirionez, n'eus nemet eur mestr er bed: Doue. Hag ar re holl o deus da c'houarn a zalc'h plas Doue, a c'houarn en hano Doue. O galloud n'eo ket bihanoc'h evit-se; er c'hountrol, brasoc'h eo, hag ar re o deus da zenti, a zento gant muioc'h a zoujans o sonjal e talc'h an tad plas an Aotrou Doue. Ra vo abred desket d'ar vugale ar wirionez-ze: e sentont ouz Doue pa zentont ouz o zad hag o mamm; ha mat e vezo lavaret d'ezo eo meulet gant Doue ar vugale o deus doujans evit o c'herent, hag ive e vez skoet a-wechou en eun doare spontus ar re o deus pec'het eneb ar pevare gourc'hemenn a Zoue.

Digant Doue e teu e c'halloud d'an tad. Ouspennze, Doue a dle ive servichout da skouer d'an tad. Doue a zo Hon Tad. An hano-ze a gemer araok an holl hanoiou all. An hano-ze a c'hoanta e rofemp d'ezan bemdez er Batez. Doue a zo holl-c'halloudek, fur, santel dreist ar pezh a c'hellomp kompren. An holl berfeksionou a zo d'ezan, hag holl e servichont d'e vadelez a dad. Tad ebet n'hellfe karet e vugale kement

ha m'omp karet gant Doue. Hini ebet n'en deus kement a aked gant eürusted e vugale, ne ziskotez kement a basianted gant o faout, kement a druéz outo p'eo devez keuz! Ha goulskoude tad ebet n'eo ken ankounac'haet, ken dispriet gant lod eus e vugale. Pebez kenteliou kaer a ro Doue d'an tadou a familh! Met n'e ket Doue a zesk d'ezo beza laosk e kenver o bugale. Lezel a ra warnomp ar poaniou a bep seurt a zo bet digaset er bed-man gant ar pec'hed. Ar poaniou-ze a ra glac'har d'eomp, hag e karfemp e vijent pellaet diouzomp, met Doue, en e furnez, a wel ez eus tro aze evidomp da baea dle ar pec'hed, da greski e santelez. Hon Tad eus an Nenv a laka hor poaniou da dalvezout d'eomp; er Baradoz, ha nann war an douar-man, eo e c'hoanta hor gwelet eürus. Ra vo komprenet ar gentel-ze gant an tadou o deus eur gwir garantez evit o bugale!

Doue ne ro ket hepken eur skouer da heulia, rei a ra, öuspenn, nerz d'an hini a oar e bedi. Truezus eo stad eur familh a zo en he fenn eun tad ha ne oar ket pedi. Eur jeneral araok ar stourmad, eur barner araok dougenn e varnedigez, eur mestr araok en em lakat da gelenn bugale, a dle goulenn sklerijenn ha sikour Doue. Muioc'h a ezomm en deus c'hoaz eun tad a familh da c'houlenn gras Doue evit ober mat bemdez deveriou e garg. Ha mar deus eur bedenn hag a zo dreist holl selaouet gant Doue, daoust ha ne vije ket ar bedenn graet d'ezan a greiz kalon ha gant eur feiz krenv gant ar re o deus bet digantan eul lodenn eus e c'halloud a dad? Penaos ne glevje ket pedenn an tad hag ar vamm daoulinet dirak ar memes kroaz pe ar memes tabernakl o c'houlenn digantan benniga o bugale, a zo o c'hurunenn, a ra o joa, met ive o enkrez?

Goude beza pedet Doue, an tad a familh a zonjo en e vugale. Ar c'hrouadurig-ze ken dinerz a zo c'hoaz en e gavell, pebez hent kaer a zo digor dirazan! Ar

bugel-ze warc'hoaz a vezo eun den; e gorf en devezo nerz, e spered a vezo sklerijennet; e galon, e volonte, e goustians her graio dishenvel diouz ar grouadurien all, diouz al loened mut. N'eo ket tra e dad, na tra e familh, na tra ar c'houarnamant, na tra breuriez ebet. N'eo nemet d'ezan e-unan, dindañ gallow Doue e Grouer, ha dindan e gerent ive karget d'e hentcha. Doue a ro d'ezan ar gwir d'ober e volonte, liberte da gemeret an hent a garo gant sikour e c'hras ne vanko morsé d'ezan.

Ar bugel-ze a vezo *sitoyan*, a vezo digemeret en eun unvaniez a ginnigo d'ezan ar binvidigez, an deskadurez a zo bet dastumet a-nebeudou gant an dud koz a-dreuz ar c'hantvejou. E lod en devezo eus madou n'int koustet netra d'ezan. Met ive deveriou en devezo e kenver e vro. Ret e vezo d'ezan anaout e vro, he c'haret, he zervicha, senti ouz he lezennou. Ar vro a dleio gellout konta warnan, goulenn digantan rei d'ezi sikour, rei d'ezi eus e arc'hant, rei e vuhez zoken, pep tra nemet e enor hag e goustians.

Ar vro he deus ezomm eus tud fur ha gouziek e pep stad hag e pep renk. An den a ra ar muia a vad d'e vro n'eo ket ato an hini a zo savet er c'hargou uhela, met an hini a ra gant lealded e zever er garg a zo bet fiziet ennan gant Doue.

Ar bugel-ze a vezo eur c'hristen. Kristen eo bet graet dre ar Vadiziant. Deuet da veza bugel da Zoue, en deus resevet digant e Dad eus an Nenv nann hepken eun hano, met eur vuhez ha ne c'houlenn nemet kreski ha bleunia. An diou vuhez, buhez ar c'horf ha buez an enè, ne dleint ket en em zispartia; unanet e vezint evel diou wazenn a vesk o dour evit ober eur ster hepken, evel seo ar wezenn hag an emboudenn a labour a-unan hag a ro frouez mat. Dre an Iliz eo e ro Doue e c'hrasou d'ar c'hristen, hag heman n'hellou reseo ar grasou-ze nemet o senti ouz gourc'hemennou ha lezennou an Iliz.

Penaos e tleer komandi ?

IV. — Arabat e vije ar bugel-ze diwezatoc'h dis-henvel diouz ar pezh a c'hedomp digantan.

D'ezan eo, pa vez deuet da zen, d'ober, gant ar vrasa liberte, ar vad a dle ober. Met simpl, hep skiant-prêna, en deus ezomm da veza harpet. Deski a dleer d'ezan beza den, beza krenv eneb an dentasion, beza trec'h d'an holl enebourien a gavo war e hent hag a gavo ennan e-unan.

Ar bugel n'eo na mat mat na fall fall dre natur. E kreiz techou mat e kaver techou euz ar re falla. Ar bugel ne laka ket a gemm etrezo, ha ma ne daoler ket evez, e sento ker buan ha buanoc'h zoken ouz an techou fall eget ouz an techou mat. Eus eun tu ar bugel a zo mat, hegarat, anaoudék, leun a fizians, gwirion, kalonek; desket e vezo d'ezan karet ha lakat da greski an techou-ze. Met, eus eun tu all, ar bugel a vije troet da zonzal ennan hepken, d'ober e benn, da glask en em venji, d'ober droug, da zizenti. Techou fall ar re ze, hag a ranker da zic'hwrizienna, rak, ma vijent lezet da boulza, ar bugel a deufe da veza ar pezh a c'halver « eur c'hrouadur savet fall, eun didalvez, eun hailhon mat da netra ». Ober a rafe mez ha poan-spered d'e gerent, ha d'ar vro, e lec'h ober vad, ne rafe nemet droug.

Peur komans eüna bolontez ar bugel?

Er bloaveziou kenta, da zaou, tri bloaz, ar skiant n'eo ket deuet c'hoaz d'ar bugel, pe da vihana ne ra nemet en em ziskouez eun tammig. Ar volontez ken nebeut n'eus ket c'hoaz anezi. Ar bugel ne glask nemet ar pezh a blij d'e gorf. Ha goulskoude e c'hell dija kemeret plegou, mat pe fall, hag a jomo epad e vuhez. Ar bugel a ziskouez ioulou, c'hoantegeziou, frouden-nou, hag e karfe e vije sentet outo war an taol. Mat eo neuze e welfe en e gichen unan bennak krenvoc'h evitan, gouest da zenti outan pa c'houlenn traou mat,

ive da harpa outan pa c'houlenn traou direzoun. Neuze eo evel eun tamm koar pe eun tamm houarn ruziet en tan, a c'heller rei d'ezo ar furm a garer. Ar gerent a dle d'erc'hel mat. Ar bugel ne vez ket peil evit gwelet pe e vez sentet ouz e c'hoantegeziou pe ne vez ket, pe e vez pleget d'ezan pe ne vez ket. Evit dont a benn da gaout ar pezh a c'hoanta, e tiskouezo pep seurt ijin ha finesaou, hag e vezo da deurel evez outan. D'ar gerent eo da gaout skiant evit ar bugel ha d'ober d'ezan bale eün. Arabat kaout truez ouz e glemmou, arabat ober kamambre d'ezan. Ret eo beza rust a-wechou: mad ar bugel her goulenn. Arabat ober eur merzer anezan, evel ma c'hoarvez a-wechou, pa vez kerent dinatur; met arabat ive e lezel d'ober e vestr. Mistri ker yaouank-ze n'eo ket brao beza din-danno. Pa virit ar bugel beza kastizet, korrijet, e ranker hen ober, evel ma vez roet louzou d'ezan, pa vez klanv. Er Skritur Sakr e lennomp: An eneb en deus damant d'ar vialenn ne gar ket e vugel.

Ar bugel a zo kresket. Skiant a zo deuet d'ezan ha bemdez e kompren gwelloc'h gwella an traou. Labour an tad n'eo ket echu: ne ra nemet komans. Muioc'h eget biskoaz e tle heilha war ar bugel, deski d'ezan penaos implija e liberte. Netra diesoc'h eget hentcha ar bugel-ze a wel nerz o tont d'ezan hag a garfe ober evel an dud vras pa n'eo c'hoaz nemet eur bugel. Aman e ranker cheuch doare da gomandi. Eman ar skiant o tont, hag e ranker koms d'ezan gant mouez ar skiant. D'an oad-ze, ar bugel a gav brao kement a ra e dad: evitan e dad a zo ar brasa, ar c'hrenva, ar fura eus an holl dud: henvel ouz e dad e c'hoanta beza, pa vo bras. An tad, d'ar mare-ze, a ouezo rei ar c'huzulou, ar c'henteliou a zo ret; awechou e c'hourdrouzo. Alies ne vezo ket ezomm da vont dre ruster. Eur zell, eur ger lavaret o sevel ar vouez a vezo awalc'h evit lakaat ar paotr da vale eün. Arabat evelato e lakaat da goll

e benn, arabat mont dre ruster, dre nerz, nemet goude beza klasket e c'hounit e giz all.

Mont a ra an amzer en dro. Setu breman an den yaouank war ar poent da veva en e roll e-unan. Neuze ar gerent n'o dezo mui da welet warnan. Eürus ar baotred yaouank, ar merc'hed yaouank o deus gouezet, evit senti ouz lezenn Doue, dskouez doujans ha karantez d'o zad ha d'o mamm. Eürusoc'h c'hoaz ar baotred yaouank a vezo sklerijennet gant o mamm, hag o devezo desket ganto labourat, ober o dever, en em ankounac'haat evit ober vad endro d'ezo. Tre-men a c'hellint, hep re a riskl, ar bloaveziou danjerus-ze a vez kollet enno kement a dud yaouank. N'e ket i a gaso da bourmen o zadou hag o mammou war zigarez ma klasker o lakaat da zerc'hel d'ar gizioz koz breman dilezet gant an holl, war zigarez ma ne gompren ar re goz netra en amzer a hirio.

V. — Ar gerent ne dleont ket kaout aon o klevet traou diskiant. O dever a raint penn da benn. Derc'hel a reont plas an Aotrou Doue. Ra zigorint o daoulagad, war ar maez evel er c'heriou, rak e pep lec'h ez eus da deurel evêz, da welet gant piou ez a o bugale, e peseurt tiez e lakont o zreid, peseurt levriou a lennont, ha dreist pep tra ez eus da veilla war ar plijadureziou fall a goll an dud yaouank korf hag ene. Ar saliou-dans, en amzer a hirio, a ra kement a zroug d'ar feiz eget ar skoliou dizoue. An tadou hag ar mammou ne dleont morse ehana da c'houarn o bugale. Bez ez eus bet rouaned, ha pa welent ar revolution o tont, a gile ato dirak an dispac'herien, a roe d'ezo kement a c'houlennent, o kredi e teufent a benn d'o ambrega, hag ar c'hontrol a c'hoarveze; o tiskouez kaout aon, e lakent anezo da veza hardisoc'h. Ar pennou familh ive a dle derc'hel mat, diskouez ez int ar vistri, sevel o mouez da gomandi.

Klevet hon eus konta istor eun tad en devoe da gas-

tiza eur mab 18 vloaz, hag a oa en eur skolaj. Eur faot bras bennak en doa graet eneb ar reolenn. An tad a roas d'ezan eur zaead vazadou dirak e holl gamaraded, evit e gorrija. Ne aliomp ket d'ober evelse gant bugale eus an oad-ze. Ha goulskoude kentel an tad a zougas frouez. An den yaouank-ze a zilezas e vuez diroll, mont a reas da vanac'h, ha nebeut bloaveziou goudeze e varve evel eur zant.

Klevet hon eus ive eur wech eur vamm a familh, eur vamm vat goulskoude, oc'h ober he akt a gontrision araok mervel, hag o lavaret: « Ah! Ra bardono Doue d'in da veza bet re sempl e kenver va bugale! Ah! m'am bije da gomans a-nevez! » An traou-ze, siouaz! ne vezont ket komanset a-nevez. Evel m'int bet graet er wech kenta e chomont.

Kement hon eus lavaret diwarbenn an tadou hag ar mammou a zell ive ouz an vistri-skol hag ar mestrezed-skol e fiziont enno o bugale. Bugale katolik a dle beza savet gant mistri ha mestrezed katolik.

Ar Pab Pi XI en e Lizer war ar skoliou a lavar evelhen: « Labour an deskadurez kristen eo sikour gras Doue da ziskenn e kalonou ar vugale hag an dud yaouank evit ober kristenien start anezo. Ra fizio eta ar gerent o bugale e mistri gouest d'ober al labour-ze. »

Met, goude kenteliou kristen, gwella zo evit reizha ar vugale eo rei d'ezo skoueriou mat.

Eur vuhez direbech diskouezet gant an tad d'e vugale a zo gwelloc'h eget kenteliou ha gourdrouzou. Eur gwir dad ne vezo ket e oberou dishenvel diouz e gomzou. Ne raio ket traou hag a c'hellfe da rebech d'e vugale. Rak neuze ar pezh a rafe gant eun dourn a vije freuzet gant eun dourn all. Sentus e vezo ouz ar re o deus da welet warnan, ouz lezennou e vro. N'en em zavo gant kounnar nemet ouz al lezennou a glaskfe taga ar relijion, ar familh, al liberte, hag ar gwir da veza perc'henn d'eun dra bennak. Ne c'houzanvo ket e vije

klasket trabas ouz ar vistri en devezo karget da skolia e vugale. Kristèn mat e vezo e pep lec'h ha senti a raio ouz holl gourc'hemennou Doue ha re an Iliz. An hini ne fell ket d'ezan senti ouz e Dad eus an Nenv, penaos e c'helfe en em glemm ma wel e vugale o tizenti outan? Met, pa welo ar vugale o zad o faoulina dirak Doue, p'e glevint o pedi evitan e-unan, evit e familh, evit e vro, evit ar re holl o deus da welet warnan, p'her gwelint oc'h en em unani ganto evit ober dispont e zeveriou a relijion, neuze e lakint doun en o spered hag en o c'halon ar gentel o devezo bet, hag e talc'hint sonj anezi, ha d'o zro e roint anezi d'ar re a deui war o lerc'h.

An Tad a raio evelse en devezo bugale sentus ha leun a zoujans, hag er memes amzer labouret mat er devezo evit an Iliz hag ar Vro. Eus an Nenv Doue, hag en deus eur garantez vras meurbet evit ar re eus e vugale a zent outan, a lakaio da zskenn warnan ha war e familh e vennoz hag e c'hrasou.

† ADOLF,

Eskob Kemper ha Leon.

Buhez an Tad Maner

(1675-1676)

(Kendalc'h)

Freuz ha reustl e Breiz

Chom a rae kêr Landerne, deuet da veza adarre kear ar plijadureziou hag an dizurziou hag a roe digemer d'an dud yaouank tro war dro evit o c'holl. An Tad Maner a reas eur mision eno araok koraiz 1675.

Mikael an Nobletz n'en doa ket gellet, gwechall, ober kalz a dra e Landerne. An Tad Maner en devoe muioc'h a chans. Kerkent ha m'en em gavas gant e visionerien, gras Doue a c'houezas war gêr hag an dud a ziskouezas kaout keuz d'o fec'hejou; dont a rajont da zelaou ar visionerien. Epad ar mision e teuas da Landerne tud yaouank diwardro da glask plijadur, evel m'edo ar c'hiz, met souezet e voent o welet meurlarjez o tremen hep dansou na c'hoariou, ha mont a rankjont da glask an traou-ze da lec'h all.

E mezeven e teuas tro Kleder. Kleder a oa eur barrez vat. An aotrou persoun en doa diwallet gant evez e zened, hag an Tad Maner n'en devoe ken d'ober nemet startaat an dud en o feiz, o alia da genderc'hel war hent an Nenv.

Eus Kleder an Tad Maner a zistroas adarre da eskopti Kerne. Eur mision a voe graet e Kastellin, met ne gavomp tamm skrid ebet da lavaret d'eomp penaos e tremenas an traou.

Wardro an amzer-man eo e c'hoarvezas e chapel Itron Varia Gonfors eur burzud kaer a ziskouez pege-ment a breder a gemere Mikael an Nobletz, goude e varo, gant ar misionou. Er bloaz 1675 eded. An Tad Maner hag an aotrou Galerne, person Mur-e-Breiz, o daou war varc'h, a gerze dre hent Pont-Kroaz. Edont e parrez Meilars, e kichen chapel Itron Varia Gonfors. Raktal Mikael an Nobletz, eur surpiliz gantan, a en em ziskouezas d'ezo. An daou varc'heger a ziskennas diwar varc'h hag a en em daolas d'an daoulin war dreujou ar chapel. Alc'houezet oa an nor, met digeri a reas kerkent dirazo. Eur sklerijenn skedus a lurgerne er chapel. A-uz d'an aoter, ar Werc'hez Vari, kaer meurbet da welet, a oa evel aze e war he zron, aelez eus an Nenv endro d'ezi. Mikael an Nobletz a oa daoulinet. Kinnig a reas d'an aelez ha d'ar Werc'hez an Tad Maner a oa deuet beteg an aoter. Rouanez an Nenv a droas warnan he daoulagad leun a vadelez, a roas d'ezan he bennoz, ha da c'houde ne voe mui gwelet. An Tad Maner a drugarekeas e Vamm, hag a zistroas da draon ar chapel, da gaout an aotrou Galerne chomet e kichen an nor.

Ezomm en doa an Tad Maner da veza kennerzet, rak edo o vont da gaout trubuilhou bras. Ar brezelioù a zo ato noazus d'ar broioù. Ouspenn ma lazont kalz tud, ez int c'hoaz eur rivin, ha war o lerc'h e teu alies ar gernez. Ar Frans, epad amzer Louis XIV, a voe e brezel heb ehan, kouls lavaret. Evit kaout arc'hant da baea an dispignou, e voe ret lakat tailhou nevez war an dud. E pep korn eus ar vro e savas klemm. Met ar ministr Colbert a roas urz da zenti ha da skei kalet war ar re a glaskfe enebi. E Breiz an tailhou war ar paper timbret, dreist pep tra, a lake an dud da grial.

Freuz a voe e pevar c'horn ar Frans. Raouzoun a en

em zavas ive d'ar 16 a ebrel 1675, hag ive Montfort, Dinan, Lamballe, Gwened ha dreist-holl Naoned.

Dre holl eskoptioù Breiz e c'houezas eun avel foll. War zigarez en em glemm eus ar paper timbret, an dud diwar ar maez, e kalz parrezioù, henvel ouz dispac'herien, a en em gemeras ouz ar prizounioù, ar manerioù, a grogas er reseourien hag o lazas, a reas pep seurt traou spontus. Person Plestin a skrive: « An dud diwar ar maez a gred o deus pep gwir, eo d'ezo an holl vadou; ne esperont ket zoken ministred an Iliz; klask a reont laza lod anezo ha kas ar re all eus o farrezioù. »

Kastellin a zeuas warni daou vil plouezad gant o armou, hag ar markiz de la Coste, letanant ar roue e Breiz, a voe eno gwall vac'hagnet.

E Sant-Hernin kastell Kergoat a voe laeret kement a oa ennan gant tud diredet eus ugent parrez tro war dro.

Person Daoulas a skrive: « Hailhoned fall, tud a neira o deus pouezet Breiz d'en em zével ouz ofiserien ha reseourien ar Roue, ouz an dudhentil, ar varnerien, ouz an Iliz zoken. Tud diskiant. Klask a reont diskar ar feiz evit gellout senti ouz o ioulou fall ha beva evel loened. »

An Tad Maner a oa bet galvet gant person Plougernevel d'ober eur mision. Met eno ive e oa kalz freuz. An dud a oa savet ar gwad d'o fenn hag a oa prest d'ober taolioù fall, da laerez ha da laza zoken. P'en em gavas ar visionerien er barrez, eun teod fall bennek a lavaras: « Em'aint deuet evit teurel tailhou nevez war hor c'hein. »

An holl a gredas, sklaer eo, ha setu an dud d'an iliz evit miret ouz ar mision da veza digoret ha kas kuit ar visionerien. An aotrou person a glaskas lakaat an dud da devel o tiskleria ne vije ket goulnnet en iliz

eur gwenneg muioc'h diganto eget gwechall ha n'edo ket deuet ar visionerien da deurel tailhou nevez war o c'heïn. Ret e voe d'ar pemp misioner sina, dirak eun noter, war eur follenn-baper, da lavaret ne zigasent ket tailhou nevez. Neuze hepken ec'h ehanas an trouz, hag e voe gellet kana an oferenn.

Goude kreisteiz an Tad Maner a oa en iliz o teski d'ar vugale kana ar c'hantikou. Dont a reas tud da welet petra a oa a nevez, met plijadur o devoe o klevet ar c'hantikou, hag o c'hounnar a gouezas. D'ar par-daez e voe gellet digeri ar mision, hag ez eas mat awalc'h an traou. Evelato bandennou tud diwar ar maez o doa laket en o fenn ober skrap er c'hloerdi hag e ti an aotrou person. Me gredjont ket kas da benn o menozioù fall, hag araok m'oa klozet ar mision, an holl a oa gounezet, hag ar peoc'h a renas adarre er vro.

O klevet petra a oa c'hoarvezet e Plouguernevel, gouarnner Breiz, duk Chaulnes, a alias an Tad Maner da gendec'hel da brezeg d'an dud evit rei d'ezo da gompren o doa da c'hounnit o chom e peoc'h. Hen, an duk Chaulnes, a skoe kalet ha didruez war ar re a glaske ober freuz.

An Tad Maner a-glevas lavaret ez oa meur a barrez, pell awalc'h eus Plouguernevel, warnez en em zével d'o zro. Petra d'ober? Mont d'ar parrezioù-ze a vije marteze reie lec'h d'an trouz da gomans kentoc'h. Gwelloc'h oa digas an dud er maez o farrezioù ha rei d'ezo eun tanva eus ar mision. Evit-se, an Tad a reas prozesion vras Plouguernevel eiz dervez araok m'oa merket, hag a gasas kelou d'an holl barrezioù tro war dro da zont da welet.

An traou a dremenas evel m'en doa kredet. Tud eleiz a ziredas hag eus a bell, hag a heulias ar brosesion. En eur gloza e brezegenn, an Tad Maner a c'halvas d'e gichen ar beleg a skeudenne Jezus skourjezet, hag

oc'h en em drei ouz an dud, e lavaras gant eur vouez krenv: « Ha breman, ken kriz e vezot hag ar Juzevien? Ha krial a reot eveldo: « Ra vo'krusifiet, ra vo'krusifiet? Petra a lavaran? Hag hen staga a reot hoc'h unan ouz ar greaz dre ho tizurziou? » Daerou a zivere eus daoulagad an holl. Ha da fin ar brosesion, an dud a zistroas d'ar gêr, en eur c'houlenn pardon eun o fec'hejou, habaskaet o spered.

Evit ober d'ezo dec'hel mat, An Tad Maner en doa o fedet da zont, d'ar zul warlerc'h, da gommunia evit an Anaon ha da c'hounnit an induljansou. Dont a rajont, ha dre ar govesion hag ar gommunion o doa graet, oant deuet adarre war o zu mat.

Setu azé penaos e ranker en em gemeret gant tud Breiz. Aes eo lakat froudennou en o fenn. Met gant douster, gant madelez, ha dreist pep tra gant sikour ar feiz, ar relijion, e c'heller o gounit hag o distrei diwar an hent fall.

An Tad Maner a lakae e fizians e trugarez Doué. Boda a reas e Santez Anna Wened ar gristenien wella eus ar parrezioù, hag e pedas patronez Breiz-Izel da veilha war he bugale ha da zistrei diwar ar vro ar gwalleuriou a venne koueza warni. Mont a reas da c'houde da Wened da bedi ive sant Visant Ferrier, misioner Breiz.

En eur zistrei, e tremenas dre Borz-Louis, el lec'h m'edo an duk Chaulnes, gouarnner Breiz. Konta a reas d'ezan petra a oa tremenet e Plouguernevel ha tro war dro, hag ec'h en em ginnigas d'ezan evit e zikour da zigas ar peoc'h er vro; ma vije tud koundaonet da vervel, e c'houlenné aotre d'o frepari d'ober eur maro mat. Chaulnes a drugarkeas an Tad Maner evit ar pezh en doa graet e Plouguernevel, hag a roas d'ezan e c'houlenn. Daou dad all a voe goulnnet eus skolaj Kemper evit al labour-ze ken dies.

E miz eost 1675, an duk Chaulnes, gant e zoudarded,

a en em lakeas da redet e Breiz evit lakaat an dud da bléga ha kastiza ar re o dou graet ar muia freuz. D'ar 24 a eost e skrive da c'houarnner Montroulez da lavaret e feue ar parrezioù, an eil goude eben, d'en em rei d'ezan; teir eus ar re wasa o doa-araok goulenñ pardon, digaset o armou da dudchentil ar maneriou, diskennet ar c'hleier; e kichen Kemper, e oa bet enni laket d'ar maro unan eus brasa dispac'herien ar vro, ne jome mui nemet Kombrit ha diou-barrez all n'hellent ket beza pardonet; e kichen Kemperle, an dud o-unan a gastize ar re a oa kablus, evit kaout evelse aesoc'h o fardon.

An Tad Maner a yeas gant an duk Chaulnes er parrezioù brasa eus eskoptiou Kemper ha Treger, nann evit sponta an dud, met evit prezeg, komz en hano Doue, rei aliou mat ha sikour ar relijion.

Pa voe peure'hraet o labour gant armeou roue Frans, pa zeuas adarre ar peoc'h er vro, an Tad Maner a zonjas edo ar mare d'ober muioc'h c'hoaz a visionou, rak hep Doue an tiegeziou nag ar broiou n'hellont ket chom en o sav.

E Pontivy e voe prezeget ar mision kenta e miz du. Gant an Tad Maner edo an tad Martin, an tad Champion, an aotrou Galerne, person Mur, an aotrou Esnault, doktor ar Sorbon, ha kalz re all c'hoaz.

E Pontivy e oa bet kalz freuz. Meur a blouezad a oa bet kaset d'ar maro. Ar mision a zougas kalz frouez, an dud a ziskouezas ar vrasa bolonte vat.

Mision Plozevet a glozas ar bloaz 1675. An Tad Maner a jomas eno epad miz kerzu penn da benn. Eun aotrou bras eus ar barrez hag e c'hwreg a en em ginigas da zervicha ar visionerien. Ar c'hwreg a aoze boued d'ezo hag a lavare evelhen: « Ma n'am eus ket an enor, evel Martha, da zervicha ar Mestr, oun eürus da vihana da c'hellout kinnig da zebri da veur a hini eus e ziskibien. » Goude beza labouret epad an deiz,


ec'h en em denne, epad an noz, en eun toull kambredigor d'an avel ha d'ar glao. « Ar Werc'hez, emezi, he doa c'hoaz falloc'h lojeiz e kraou Bethleem. »

Evit paea an dud vat-ze, an Tad Maner a bedas evito an Aotrou Doue. O merc'h a oa klanv war he gwele, hag i o daou o doa ive d'en em glemm eus o yec'hed. Da fin ar mision, o zri oant pare ha pare mat.

Er bloaz 1676 an Tad Maner a brezegas unek mision: e Penmarc'h, Beuzek-Kap-Sizun, Plomeur, Treflagat, Tréogat, Pleyben, Riek, e eskopti Kerne; Kommana, Lokornan, e eskopti Leon; Alre ha Kaudan, e eskopti Gwened.

E Pleyben oa bet kalz trouz gant ar paper timbret. Eun noter eus ar vro, an hini a oa e penn an dispac'herien, a oa bet lazeta gant aotrone Tymeur. Kalz vad a oa eta d'ober e Pleyben. An Tad Maner a en em gavas eno gant 50 misioner. Boazet, abaoe 36 vloaz, da ren ar misionou, e fellas d'ezan, e Pleyben, lezel ar garg-se gant eun all, ha senti, ober al labour a veze merket d'ezan. Kovez a eure hag ober katekiz, evel pa ne vije ket bet gouest d'ober eul labour all.

E Pleyben em 'an c'hoaz kroaz vras ar mision, merket warni hano ar bloaz 1676.



DRE AR BED

TIEZ ANNEZ

I — Er-maez a Vreiz

Kaout e di d'ezañ e-unan, setu c'hoant meur a hini a dra sur en deiz a hizio. Meur a hini a labouro start e-pad meur a vloavez evit dont a-benn da sevel o zi. Met penaos sevel eun ti p'eo ken ker ar vein, ken ker ar c'hoadaj, ken ker al labourerien ha reut e rank beza ar


yalc'h evit herzel ouz ar boulc'ha a vez graet d'ezi.

Daoust hag an aesa ne vefe ket da bep hini ober e-unan e di evel ma ra tud a zo dre ar bed, hag en hor bro zoken. Evit an neb a garfe deski eun dra ben-

nak war ar poent-se eo e raimp tro ar bed asamblez da deurel eur sell ouz an tiez marc'had mat ha c'houi a lavaro d'in goudeze ha plijout a reont d'eo'h.

Tiez erc'h

Kemeromp an hent hor c'haso d'ar Groenland, pe d'an Alaska. Eno e kavimp tud velen, teo ha bihan, kuzet mat e kroc'hen loened, rak e c'hellit kredi, n'eo ket tomm an amzer du-hont; e-pad tri pe bevar miz ne weler ket lagad an heol; e-pad tri pe bevar miz, ivez avat, ne guz ket hag e vez c'hoaz gwelet da hanternoz, uhel en oabl. — E Thule, er Groenland ne vez ket



- Sk. I -

gwelet an heol e-pad wardro 100 devez er goañv, ha ne ya ket da guzat e-pad wardro 108 devez en hañv, hag e vez skournet an douar, pe goloet a erc'h e-doug eiz pe nao miz ar bloaz; ne gresk na gwez, na geot; ne weler o vale nemet loened evel ar bleiz pe an arz gwenn, ha bale a ranker an-unan gant treinellou dindan an treid hag eur vaz en dourn. Nebeut a dud a zo o chom du-hont e c'hellit kredi ha koulskoude e karont o bro, evel doc'h, ha ne blijfe ket ganto ober ar cheñch-ouzoc'h, Eskimoed a vez graet anezo.

Da varc'had mat e teu o zi d'ezo peogwir ez eo graet

en e bez gant erc'h; ya, gant erc'h, tud paour, erc'h kaledet; ober a reont gantañ lochennou heñvel ouz ar re a welit war ar skeudenn genta. Evit mont e-barz, n'eus nemet eur riboulig striz, ma ranker mont war ar barlochou dreizañ, heñvel a-walc'h, e feiz, ouz douarenn al louarn.


Hag ar paour kêz Eskimoed, ne vezont ket skournet e-barz? — Nann, avat, hag en em gavout mat a reont diouz ar vuhez-se. Gouzout a rit e vir an erc'h ouz ar plant da veza devet gant ar yenienn e-doug ar goañv. Evelse eo e c'hoarvez ivez er vro-se: an erc'h a zalc'h tommder e diabarz an ti hag a vir ouz an avel yen da vont ennañ.

Bremañ ez eo dâ d'imp gwelout pegen plijadurus ez eo ar vuhez en *iglou* (hennez eo anô o lochenn); ouz an doenn, ma 'z eus toenn, emañ a-istribilh ar c'hleuzeur eol-reunig (1): gant eol reunig e vez tommet an ti ha poazet ar boued — an eol-ze a vez debret: ya, debret, rak er broiou yen-se ne vez ket kavet ken heugan an traou yen ha ma 'z int dre amañ, — pa ne vez ket gwelloc'h, arabat beza figus. Flaer ha maged an eol se a zo leun an ti ganto, met an dud a rank chom eno e-pad meur a viz evit gortoz an hañv, ne santont ket ken: boazet int: eur wech deut an hañv e teuz eun tammig an erc'h hag e c'heller mont da chaseal pe da ober troiou gant treinellou staget chas outo: evel ti e vez neuze graet gant eun telt krec'hin.

Petra bennak a vezo lavaret n'eo ket gwall blijadurus buhez an Eskimoed ha ne gredan kel e vefe stank ar re ac'hanoc'h a garfe mont da veza en o zouez.

Diskennomp bremañ var-zu ar broiou tommoc'h dre ar C'hanada. Eno e kavomp pobladoù ha n'o deus ket c'hoaz lezet a-gostez o ziez marc'had-mat ken nebeut.

(1) — ano eun aneval eus ar moriou yen. *Phoque*, e galleg.



**E-touez
an Indianed**

An Indianed eo an dud-se. Pemp kant vloaz a zo e oant c'hoaz mestr war Amerika a-bez. Nebeut dre nebeut ez int bet chaseet dre ma feue ar re wenn da c'hounit ar vro. Kollet int bet dre

m'o doa re a c'hoant da zerc'heil d'o frankiz hag ivez dre m'o doa ar boaz fall da ober brezel kenetrezo hep ehan; ha dre ma kavent gwall

vat ar gwin-ardant, an « dour-tan » evel ma lavarent. Kaer ez eus bet ober e chom c'hoaz anezo e koadou bras ar C'hanada. Hag emaint c'hoaz war-dro 250.000 er Stadou-Unanet e-lec'h ma 'z eus bet graet d'ezo chom e kornou-bro a zo, hag ez aer di d'o gwelout evel ma vefent anevaled souezus. Gwechall e redent kompezennou bras Amerika war o c'hezeg nerzek ha skañv, en eur skrapa chatal ha tud dre ma 'z aent.

SK. 2.

O ziez-annez a zo chomet atao heñvel; pe diez koad pa chomont pell en eul lec'h, hag an tiéz-se, lochen-nou lous pe lousoc'h anezo, a zo savet e frankizennou ar c'hoad pe wat ribl eul lenn. Aliesoc'h, avat, n'o deus nemet eun tamm tell kroc'hen-ejen-moueek (gwechall) pe groc'hen-kezeg (bremañ), heñvel ouz ar re a welomp war ar skeudenn 2, Tro-dro, ar c'hezeg a c'hell peuri e peoc'h da c'hortoz ma teuio ar mare da vont larkoc'h.

Setu aze tud, da vihana, ha n'int ket nec'het gant o c'hêr; pa vezont skuiz en eul lec'h, setu int o vont da lec'h all.

(eur pennad all er miz a zeu).

G. DEWI.



Aotrou Traon-Kerret hag e viliner



Chapel sant Vaodez

Pa gemerer, en eur vont, er maez, eus a gêr Montroulez, penn hent Keraez, e kaver, en tu kleiz, e traonienn ar C'hefleud, harp er ster, eur maner koz, e vilin, en e gichen : Traon-Kerret eo hano ar maner-ze ha dont a ra d'ezan eus hano an dudchentil her perc'henne gwechall.

N'eus ket a dudchentil ken eno, en deiz a hizio, met chom a ra atao eun tour eus ar maner koz, en e zav, hag, e kreiz ar porz, eul lochenn a-ispilh ouz ar voger, evel eun

neiz gwenniled, hag a c'helle beza chapel an aotroued.

Kosa tudchentil a oa e Breiz, a lavared gwechall, oa aotroued Kerret hag e iliz Sant Vaze Montroulez, war ar skaon, savet war bez Herve Kerret, aotrou an Traon, eil kabiten kêr, er bloavez 1503, hag A. Gwiczaznou, e bried, e lenned :

An dud kenta a oa er bed
A oa Gwiczaznou ha Kerret.

Hervez ar re goz, unan eus aotroued Traon-Kerret skuiz o klevet dalc'h mat e amezeien o lavaret gaouiad an eil d'egile a glaskas rei d'ezo eur gentel evid o lakat da derri o zech fall. Da bardon Pont-Paol, a vez graet e penn bali Leskifiou, en dro da chapel sant Vaodez, hag a vez darempredet gant kalz tud eus Treger hag eus Leon, dre m'en em gaver eno e kreiz etre an daou eskopti hag e kroaz-hent an hentchou bras a ya eus a Montroulez da Gemper hag eus a Geraez da Gastell-Paol, eo e reas e daol. Pa oa eur bern tud e disheol ar gwez fao, e pignas war barrikenn eur soner hag e komzas evelhen :

— Selaouit mat, hag e klevfoc'h gwell a-ze. Kounnari a ran p'ho kwelan o kaout difizians an eil eus egile; e lec'h beza atao o tamall ho nesa da veza laer ha gaouiad, grit eta evel-doun hiviziken. Hini ac'hanoc'h ne c'hell lavaret en divije va c'hlevet o tamall eun all da veza gaouiad; pa ne gredan ket ar pezh a leverer d'in e ran da vihana an neuz d'hen ober hag a-walc'h eo. Grit evel-doun ha neuze ne vezo ket gwelet kement a dabut hag a drouz etrezoc'h. Evit diskouez d'eoc'h e c'hell an hell ober ar pezh a ran, e ran le, aman, war relegou an Aotrou Sant Vaodez, da rei va merc'h, da bried, d'ar c'henta ac'hanoc'h, denchentil, bour-

c'hiz pe gouer, a c'hello va lakat da lavaret d'ezan n'eo nemed eul laer. Befek an Angelus am c'havoc'h dindan telt Jiletta an Ozac'hmeur: Klevet eo, n'eo ket. 'ta!

Pa voe klevet an nevezenti e savas trouz etouez tud ar pardon ha meur a zen yaouank a deuas da ostaleri Jiletta da gonta a bep seurt sorc'hennou da welet ha gounit a c'helljent, en doare-ze, merc'h an Traon; an aotrou Kerret, e gorn-butun en e c'henou, o selaoue an eil goude egile heb ober eur van; ne hejas ket zoken e ziskoaz pa deuas eur pilhaouer truillhok da glask rei da gredi d'ezan e oa mab da roue an Turki: ar pardaez a deue ha den ebet n'en devoa gellet, e nep tu, c'hoaz kaout an trec'h war an aotrou, pa deuas eur paotr yaouank mentet bras ha kigenet kaer da azeza dirazan; henman oa mab milin an Traon, eur paotrig koant ha speredok; dimezell ar maner a blije d'ezan, met n'oa ket evit kredi e teuje biken a-benn da c'hellout dimezi ganti.

— Sell 'ta! Sell 'ta! Te ez peus c'hoant ivez da gaout va merc'h? Ne dalv ket ar boan d'it klask beza va mab kaer! n'en em gavi biken. Komz, evelato, ma keres, hag a-raok ev ar werennad winze ma vezo distagellet da deod. Eun dra hepken a c'houlennan ouzit: n'es ket da gonta re a zotoniou d'in, rak skuiz oun ouz o c'hlevet.

— N'ho peus ket ezomm da gaout aoun, aotrou; mont a ran da gonta d'eoc'h eun istor gaer ha ne vezo ket enni eur gaou, nemet marteze eur ger pe zaou. Er zizun dremenet edon o vont da gas eur gargad vleud da vanati sant Fiakr pa dorras livenn-gein va marc'h gand ar pouez. Peadra a oa evid eun all da veza nec'het dirak eun hevelep darvoud. A drugarez Doue n'oun ket bet tapet berr biskoaz. Trouc'ha a ris eur vaz hag hel

lakis da staga daou benn livenn-gein va marc'h; kempennet en doare-ze heman a c'hellas kendel-c'her gand e hent betek ar manati :

— E c'hell beza gwir, eme an aotrou o lonka eur c'henaouad. Kendalc'h.

— Antronoz, pa 'z is da denna va loen eus ar c'hraou e welis eun dra estlammus; va baz a oa savet nevezennou warni epad an noz; eur skour a zave a-us lost ar marc'h hag a bigne warzu an nenv; a-benn ar pardaez e veg en devoa treuzet ar c'hoummoul hag e welen e oa stok ouz al loar a oa o para a-zioc'h toseñ Kerarprovost. Eur stultenn a deuas em fenn ha me ha sevel el loar hag ober eur bale drezi; gwelet a ris eno eur bern traoù sebezus ha ne vezont ket gwelet war an douar-man. Pa c'hoantais diskenn avat ec'h en em gavas eur c'hoari all ganen; al loar he devoa kendalc'het da drei hag a oa pell diouz ar skourr e oan bet pignet drezan enni.

— Aze eme an dalc'h, avat, eme an Aotrou.

— Ne ouien ket kals penaos en em gemeret. En em lakât a ris da c'houllia va godellou hag e kavis eur bloue neud en unan anezo; eur penn anezan a stagis ouz al loar hag o kregi mat er penn all e tiskennis; siquaz n'oa ket hir a-walc'h va neudenn evit tizout betek an douar; kemeret a ris neuze va c'hountell hag e trouc'his ar pennad a oa a-us va fenn da staga ouz ar pennad a zalc'hen em dourn; a-bouez ober al labour-ze meur a wech e welen e tostaen braoik ouz an douar.

— Eur gwall varvailher out, eme an aotrou.

— Pa gave d'in edon o vont da goueza war an douar eur c'hoz steredenn lostok a drouc'has va neudenn; koeuza a ris neuze war rejel ar Merdy a-fardigleo ha va fenn a zankas enno betek va diskoaz, evel en eun tamm amann.



Mab Miliner Traon-Kerret o boueza eus al loar

— Kaeroc'h kaera! eme an aotrou.

— A-bouez en em heja e c'hellis en em zistaga diouz ar roc'h-ze; va fenn a jomas ebarz hag e redis da vaner Kervaon da glask eur vaz-houarn d'hen tenna ac'hano.

— Brao bras, eme aotrou Kerret.

— Pa zizrois e kavis eur bleiz a oa o klask ten-

na va fenn eus ar roc'h d'hen debri. Mont a ris e kounnar hag e tistagis gantan eun taol baz-houarn diwar e benn ker-kalet ma tistagis eul lizer. Digeri a ris al lizer-ze hag, e gwirionez, aotrou, ne gredan ket lavaret d'eo'h ar pez a lennis ennau.
— Eo, eo, lavar.


— Hervez al lizer-ze ho tad koz a oa gwechall mevel miliner e ti va zad kunv-me, e milin Pont-mein ha, dre lakat e skudell alies e sac'h pep hini, eo e teuas da veza pinvidik a-walc'h da c'hellout en em lakat e renk an noblans.

— A! en taol-man, avat, eme an aotrou, gant kounnar, ez peus lavaret eur gaou. Ni a zo tud-chentil a-holl viskoaz p'eo gwir e tiskennomp eus aotroued Leon hag eus an tiern Morvan. Portrejou va zud koz a zo em zi, adalek Kaznevet Kerret, skouejer Konan Meriadek, kenta roue Breiz.

— An dra-ze a c'hell beza gwir, Aotrou, met eun dra a zo c'hoaz hag a zo ker gwir all: kollet ho peus ho klaoustre ha ma plij ganeoc'h, an dimezell ho merc'h a vezo va gwreg.

— Sell 'ta, ya! tamm ailion zo ac'hanout; flemmet oun ganez, eme an aotrou o skrabat e benn; c'hoant em dije bet da gaout eur mab kaer eus eun trouc'h uheloc'h eget da hini hag a vije bet muioc'h a skouejou, en e c'hodell, met derc'hel a rin d'am ger; mab kaer e vezi d'in hag al lein eured a vezo graet aman end-eeun, e Sant Vaodez, hag epad eiz deiz e vezo kam, dans ha laouenedigez 'vit ma ne vezo ket ankounac'haet biken penaos e teuas mab miliner Traon-Kerret da zimezi gant penpherez ar maner evid eur ger hepken!

G. P.



Ar c'houldriou *kermet*

N'eus ket eur penn kristen, er vro-man, ha n'en defe ket gwelet, e kichen eur maner koz benmak deuet, gand an amzer da veza eun ti kouer, eun tour ledan hag izel ha beget teo. Kouldriou pe goulmdiou eo an hano a roer d'an hevelep touriou dre m'o saved gwechall da rei goudor d'an dubeed. Mont a raer enno dre eun nor enk hag izel; en o zoenn ez eus eun toull bras hag en o mogeriou renkennadou neizio, betek 500 ha 600 a-wechou ha muioc'h zoken, e pep hini. En neizio-ze e c'helle eur c'houblad dubeed en em loja da zavel o re vihan.

Gwechall goz e ranked beza nobl evit kaout gwir da zavel eur c'houldri diazezet war an douar, evel eun tour; ar vourc'hizien hag ar goueria-ded p'o deveze c'hoant da gaout kouldriou a ranke o sevel war goatach, pe o spaga ouz eur



voger bennak, evit ma vijent dibrad diouz an douar: hevelep kouldriou a gaver stank c'hoaz, e tiegeziou Breiz-Izel. Pa zigoueze gand eur bourc'hiz pe gand eur c'houer prena eur maner, hag e veze eur c'houldri savet war e zouar, e c'helle, na petra 'ta, tenna talvoudgezh anezan, rak ar gwir da gaout kouldri a oa stag ouz an douar ha namn ouz renk ar perc'hen.

N'deo ket ar c'hiz, e Breiz, d'eun denchentil da gaout kouldri anez kaout 300 dervez arat douar, da nebeuta, en dro d'e vaner, evit ma c'hellje e zubeed kaout peadra d'en em vaga enno hep mont war douar ar re all, rak, evel ma lavared, « an amezeien n'oa ket e verourien n'oa ket red d'ezo beva e zubeed ».

Gand ar chapel, al liorz mogeriet hag ar vilin, ar c'houldri oa ar pevare tra a gaved peurliesha endro da bep ti nobl. Ar c'houldriou koz a veze savet, atao, koulz lavaret, 100 pe 200 metr diouz ar maner, en eur park hanvet Park-ar-C'houldri; savet e vezent, war gela'h, rak aesoc'h e veze neuze renka peb tra en o diabarz. Ar mogerioù diavaez a veze graet atao gant mein-ben, flouret mat, evit mirout ouz ar gaerelled da bignat betek an neizioù.

A-wechou, evelato, e vez kavet kouldriou e kreiz al liorzou pe ar porzioù; a-wechou all zoken o c'ha-ver stag ouz ar manerioù.

Ar gwir da gaout kouldriou a zo bet taolet d'an traon d'ar 6 a viz east 1789; eleiz a zo bet freuzet abaoe; daoust da-ze e kaver c'hoaz meur a hini e Leon, Treger ha Kerne; o zourioù ledan ha gololet à ilio a weler atao e kichen ar manerioù koz; a-us dor meur a hini anezo e kaver skouejou ar re o deus o savet hag a-wechou o-hanoioù hag ar bloaz. En diabarz ne weler mui netra; ar wern a veze e

kreiz hag a oa outi divrec'h da harpa ar skeul a zerviche da vont da dapa an dubeed en o neiz a zo graet tan ganti pell a zo.

Ar c'hig dube a veze kavet dreist gwechall; ouz taol rouaned Frans e veze debret bemdez etre 7 hag 800 dube. Al laboused-ze, aozet e kant doare dishenvel, a veze kavet dalc'h mat, war daolioù an dudchentil. Gwad an dubeed a veze graet louzou gantan a-ensb ar boan zaoulagad hag o zeil a oa eus ar gwella d'an trevajoù. Eur c'houldri a veze eta gounidegez gantan; gwaso pezo a oa, toulladou bras a zubeed evelse, — e kouldriou a oa e vaged betek 12.000, — a rae kals droug d'ar parkeier pa veze nevez hadet eun dra bennak enno; peurliesha, red eo hen anzav, e veze stanket ar c'houldri da viret ouz al laboused da vont er maez anezan da vare ar c'hounidegez.

Ar goueriaded o deveze kas ouz an dubeed, ha n'eo ket souez; o felliaat a c'hellent, na petra 'ta, met difennet e oa outo tenna warno; daoust da-ze, e pep ti war ar maez e kaved eur fuzuilh ha diwarni meur a zube a dape plom; an atouù a c'helle klevet an tennou alies a-walc'h, met ne glaske ket gouzout eus a belec'h e teuent: gouzout a rae serra e zaoulagad hag e ziskouarn war meur a dra.

Kaera kouldriou a zo c'hoaz er vro eo, e Treger, kouldriou Kerohant, e Garlan, Kericuff ha Mesgouez e Plougasnou, Kerhallon e Plouegat Gwer-rann, Bruillac, e Plounerien, Koateon, e Lanveur, Kervegen ha Penarprat, e Gwimaec. E Leon, e kaver kouldriou Pennele, e Sant Varzin Montroulez, Kerouzere, e Sibiril, Keryann e Sant Noug, Kokerou, e Mespaul, Brezal, e Gwiniventer, ar

C'burru, e Milizac, Kerleau e Breles, Tremazan, e Landunvez.

E Kerne kaera kouldriou a gaver eo re Tresheol e Plounevez-Portzay, savet gant mein-ben, evel tour krenv eur c'hastell, Ti-Meur, e Poullaouen, ar Ruskeg, e Lokefred, Kergoz, Bodigneo ha Penfeunteuiou e Klohars.

Alies a-walc'h ar c'houldriou a zo savet gant muioc'h a evez eged ar manerioù o-unan ha setu perak ke lavaret e oa lojet gwelloc'h an dubeed, e Breiz, eged o mistri o-unan.



Kouldri Maner Kerverrien, e Trezilide


Ar c'houldriou a-wechou a vez stag ouz ar maner hag a dalv da dour da zifenn ar maner ha da lochenn d'an dubeed; kement-se a weler e Gwiskelle, e kichenik ar Follgoad, e Kernoter, e Plouezoc'h, er Forest, e Kerfeunteun, e Kervenarc'hant, e Melar, e Treouron e Plouneour-Lanvern.

A-wechou all o c'haver stag ouz ar porz-kloz, i en eun tu d'an nor hag ar chapel en eun tu all, evel

e Kerabazan, e Brie, pe e korn al liorz evel e Kerroualle e Gwilers, e Pratmeur, e Gwitalmeze.

A-wechou all c'hoaz emaint er maner e-unan, evel e Lestremeur, e Gwitalmeze.

A-wechou zoken o c'haver a-c'haoliad war dorborz ar maner evit diskouez d'an holl eo an tiez m'int stag outo tiez nobl; setu ar pezh a gaver e Kerverrien, e Trezilide; e Kergoz, er Galvineg, e Lesvadec, e Peumeurit. Kouldriou, er stumman-ze, a gaved gwechall, e Tredern, e Plougoum hag e Meskanton, e Gwitevede, met diskaret int bet.



Kouldri Lesvadec, e Peumerit

Darn eus ar c'houldriou koz-se o deus o istor; beleien a zo bet oc'h en em guzat e kouldri Kerarmeal e Kernouez. Hini Tremazan, e Landunvez a oa eun den o chom ennan, bremen ez eus hanter kant vloaz, ha ne ouied ket eus a belec'h e oa deuet di hag a voe kavet maro eno eun dervez. Gwasa

pez a zo e tiskarer ar c'houldriou muioc'h mui. Gwelet em eus tri o vont d'an traon, e Plouyann e kichen Montroulez ; kouldri ar Veuzit, hini Penlann hag hini Trofeunteuniou. Kouldri Kerodern, e Plougerne hag hini Kerenneur e Plourin a zo bet diskaret a-raok ar brezel.

E Kerc'hizien, e Plougoulm, e Meskeo, e Plougasnou, hag e Korroarc'h, e Kombrit, ne gaver nemet mogeriou hanter gouezet.

A-wechou all, evel e Troheon e Sibiril, ne jom, eus ar maner koz, nemed ar c'houldri ken, en e zav hag eo laket da ober eur glud d'ar yer.

E lec'h diskar ar c'houldriou-ze gwelloc'h e vije c'hoaz o lakât da dalvezout evelse hag o derc'hel, en o sav, dindan o saead ilio; ar varzed o defe tro da gomz anezo en o gwerziou evel an hini a gane:

*Dilezet emañ siouaz ! siouaz ! breman ganti,
Vel gand ar goulmig skanv-benn emañ ar c'hoz kouldri.*

G. P.

KELEIER AR MIZ

Bretoned hag a ra enor d'e Bro

An A. Mary, kelenner e kloerdi Santez Anna Wened, en deus tremenet, d'an 29 a viz genver, eksamin meur ar studiou-keltiek, e Roazon.

Evid an eksamin dre skrid koulz hag evid an eksamin dre gomz en deus bet an uhela notenn a oufed kaout an notenn « mat-tre ».

Laouen omp o kinnig hor goure'bemennou gwella d'an Aotrou Mary a zo anavezet mat gant kement hini a zampred goueliou bras ar Bleun-Brug: setu aze eun hent nevez eus ar re gaera da vont etrezek bro an deskadurez ha salo e vefe niverus ar gloareged hag ar skolaerien yaouank o kerzet war roudou an A. Mary, dispennet gant roudou an A. Batany.

An A. Jaffrennou, ar barz Taldir, anavezet mat, a-bell-zo, en holl broiou keltiek a zo o paouez beza hanvet ivez da ofiser an Deskadurez Poblus. Ouz e guruni, ar c'houarnamant en deus anavezet talvoudegez e labouriou graet hepken evit kana gloar hor Breiz ha lakat he bugale d'he anaout gwelloc'h ha d'he c'haret muioc'h.

Bretoned hag a glask diskar e Bro

Tud a zo ha n'int ket evit kredi e c'hellfed skigna deskadurez, etouez ar bobl, dre ar brezoneg. Setu ar pezh hon eus bet tro da welet, eur wech all c'hoaz, p'hon eus lennet war ar c'hazetennou, er miz tremen, an embanni sebezus-mañ :

Mesdames et Mesdemoiselles,

Depuis longtemps, vous vous attendiez à voir paraître un journal ou une revue qui fut bien à vous et bien faite pour vous.

*La voici enfin parue.
Elle s'appelle « La Fermière ».*

Je demanderai quelle porte un nom plus complet, qui sente davantage le terroir: « La Fermière Bretonne ».

Elle a été en effet inventée, rédigée et lancée par des bretons et bretonnes. Elle sort du cœur même de la Bretagne: Landerneau, et elle est faite pour toutes nos bretonnes de la campagne.

Elle est jolte et fraîche comme la fermière qu'elle doit fréquenter et former, et elle dit des choses sérieuses, gaies, mélancoliques, pratiques à la mode bretonne.

Perak ne gomz « la fermière bretonne » hag hi ginidik eus a Landerne, war he meno, nemed e galleg ?

Daoust ha c'hoant o defe merc'hed Breiz, ar re anezo a zo gallegerezed touet, da rei an ton d'o holl c'henvroadezed ha da veza trec'h d'o mammou a gomze, a lenne hag a gare ar brezoneg ?

Daoust ha n'eus ket a dud en dro d'eomp hag a zo a-zevri o klask divrezonega ar vro hag he divrezonega n'eo ket hepken en iliz ha n'eo ket hepken er skol, met zoken en tiegez, e starn an daol hag e tal an oaled ?

Ma ma 'z eus tud evelse, ha ma n'int ket evid anaout an droug a reont, daoust ha n'eo ket eun dra red d'eomp lavaret d'hor c'henvroiz an ezomn o deus d'en-em ziouali outo ?

Ar Brezoneg, ha nann ar Galleg, eo ene Breiz.

Petra zonjec'h ma vije eur gazetenn hanvet « la Fermière Française » ha ne vije kavet enni nemet skridou brezonek ?

Sonjal a rafec'h o deus bet c'hoant renerezed ar gaze-tenn-ze da ober goap eus o lennerezed.

Mat, mie gred ivez o deus bet c'hoant renerezed « la Fermière Bretonne », o skriva o c'hazetenn e galleg, hag e galleg hepken, da ober goap eu sar Vretonezed o deus c'hoant da gaut da lennerezed.

Leor Oberou an A. Gwilhou

Setu antan anioiu rak-prenerien miz c'houevrer :

An A. hag an I. M. Pleiber, Hent Roskov, Kastel-Paol.	1
An I. Sévère, rue Verderel, Kastell-Paol.	1
An A. F. M. Mallegol, Penfo, Sant-Thegonnec.	1
An A. Tanguy, person an I. V. Kemperle.	1
An A. H. M. Jezequel, Kelenner Skolach Lesneven.	1

An A. L. Herve, Roz-war-Gouesnon, Bro-Dol.	1
An A. E. Corre, person Henvic.	3
An A. J. M. Kermarrec, 46, rue Pasteur, Saint-Ouen.	5
An I. Debauvais, 4, rue Hoche, Rennes.	5
An Dimezell Odette Chevillotte, Kergroadez, Breles.	3
An A. Emmanuel Chevillotte, Breles.	1

Leoriou rakprenet betek-hen : 23
641 + 23 = 664.

A-dreuz al liziri a zigouez ganeomp digant hol lenne-rien o deus c'hoant da rak-prena leor Oberou an A. Gwilhou e klevomp kalon Breiz o tridal e bruched he bugale.

Setu ar pezh hon eus gwelet o lenn lizer c'houek unan eus rak-prenerien ar miz-man e kavomp ennan an diou linenn gaer-man :

En hor gwazied ra vezo hor gwad a vreizad o vervi;
En hor c'halonou ra vezo tan ar garantez o tevi.

Salo e vefe eleiz a dud yaouank e Breiz evel an hini en deus skrivet ar c'houblad gwerziou-ze; salo e vefe da vihana Bretoned a-walc'h, da rakprena leor an A. Gwilhou ma vezo gelllet lavaret ez eus c'hoaz mil gwir Vreizad, da nebeuta, dre ar bed.

Ar rak-prenerien n'o deus ket ezomn da baea al leor kerkent ha m'her rakprenont; her paea a raint pa vezo kaset d'ezo dre ar post.

Aj leor nevez, kaset betek an ti, ne gousto nemef 10 fur. Degas an ano hag an adres kenta ma vezo gelllet d'an A. Perrot, Rener Feiz ha Breiz, Scrignac.

DIVINADENNOU

DIVINADENNOU MIZ MEURZ

I. — Me 'zo ar pezh ma 'z oun-ha n'oun ket ar pezh a heulian, rak ma vijen bet ar pezh a heulian ne vijen ket bet ar pezh ma 'z oun.

Divinit piou oun ?

20 p. ar r. *Degaset gand eur Vretonez eus Kemper.*

II. — Daou dad ha daou vab a zo aet da leina en eun ostaleri. Roet ez eus bet d'ezo peder goulm da breja; debret o deus pep hini e hini hag ez eus chomet unan war ar plad. Penaos an dra-ze?

20 p. ar r. *Degaset gant Bretonez Kemper.*

III. — Me a oa dec'h ha warc'hoaz e vezin adarre. Piou oun 'ta ?

20 p. ar r. *Degaset gant Ph. Guillou, Gwimilio.*

IV. — Eun dra hep treid na diwesker
Hag a gas an hollen e kêr

20 p. ar r. *Degaset gant Ph. Guillou.*

V. — Petra ra an dro d'ar c'hoat hep mont ebarz ?


20 p. ar r. *Degaset Ph. Guillou.*

Degas, ar re o deus c'hoant da gaout prizioù, responchou divinadennoù tri miz kenta ar bloaz da *Renner Feiz ha Breiz, Scrignac*, abenn ar 25 a viz meurz da ziwezata



Feiz ha Breiz

Ene bras an Indez : Gandhi



Eun den a zo, e broioù ar Sav-Heol, brudet en deiz a hizio, dre bevar c'horn ar bed hag a zo o paouez dont abenn, e-unan, eus ar brasa rouantelez a zo war an douar hag hennez eo Gandhi, eun den divadez, siouaz, evit c'hoaz, met eun den a bedenn hag a binijenn, difennour Indeziz o deus e lezanvet Mahâtman, da lavaret eo « Ene bras ».

GANDHI

Mohandus Karanchand Gandhi a zo bet ganet d'an 2 a viz here 1869, e Porbandor, e gwalarn an Indez, eur vro divent, perc'hennet gant ar Zaorn. Pinvidik e oa e dud ha desket mat e voe, nann e yez e vro, met e saozneg; d'e 19 vloaz, er bloaz 1888, e c'hoanteas mont d'ar skolioù bras da Vro-Zaoz; e dud ne oant ket kals e

chal d'e welout o vont keit-se eus ar gêr, rak evito mont eus ar vro a oa koulz lavarout he nac'h, Gandhi, evid o gounit a reas dirazo tri le : al le da jom hep debri kig; al le da jom heb eva ne-tra gouest d'e vezvi hag al le da jom hep tanva plijadur ar c'hig, nag er briedelez, nag er maez eus ar briedelez : ar boan a rankas kemerout evit dere'hel mat d'an tri le-ze a reas anezan eun den hag en deus eun nerz-kallon sebezus. Tri bloaz goude ma oa en em gavet e Bro-Zaoz e oa alvokad hag e tizroas d'e vro, met, e lec'h chom er gêr e kimiadas adarre, diouz e vaouez (dimezet d'e 7 vloaz Gandhi a oa bet eureujet d'e 12 vloaz) hag ez eas da draon an Afrika, da zifenn gwiriou 150.000 eus e genvroiz a oa diskenmet en tu-zeou da c'hounit o bara; ugent vloaz e chomas dre eno hag er bloaz 1914 e tizroas d'an Indez.

Sklêr, evel an deiz, e wele neuze, ar pez en devoa da ober evit savetei e vro : n'eo ket o stlêpêl ar Zaozon er mor eo e vije degaset gwellaenn etouez e genvroiz : ar sperejou a oa gwasket eun tamm mat muioc'h eged ar c'horfou ha red e oa o diliamma a-raok diliamma ar c'horfou.

Ar brezel bras a zigoras gwelloc'h c'hoaz e zaou-lagad. Harpa a eure Bro-Zaoz, hen ha milieroù eus e genvroiz ; evid e drugarekaat, Bro-Zaoz e lec'h rei kabestr d'an Indez a stardas c'hoaz ereou nevez en dro d'ez ; Gandhi-neuze pa welas he zrubar-derez a roas ar gourc'hemenn-man d'e genvroiz : « Grit d'ar Zaoz evel d'eun den lovr ; n'it ket d'e gasaat, met arabad eo d'eooc'h e zarempredi ; n'it ket da gemerout armou d'e gas kuit, met tec'hit diwar e hent ha p'eo gwir an den-ze a ra e vestr er vro, n'it ket da heulia e c'houre'hemennou : ma ra lezennou en hoc'h eneb, n'it ket da zenti outo ; ma teu gand e zoudarded lezit ar zoudarded da

ober o reuz ha d'ho laza zoken : gwelloc'h eo beza lazeta eget laza ; a-eneb nerz ar c'hleze, lakit nerz ar galon. »

Gwechall, eme C'handhi, e tremened heb ar Zaozon, brao bras ; petra vir ouzomp d'hen ober breman ?

Chomomp eta hep darempredi ar skolioù saoz ha gwella ma 'z int da netra eo da zihencha hor bugale ; chomomp hep lakat hon treid el lez-var-niou saoz ha barnomp hor prosezou ken etrezomp ; chomomp hep prena marc'hadourez an tiez-labour saoz ha savomp adarre, en o say, ar micherioù bihan, war ar maez, a roe labour da eleiz a dud hag e teuimp hag e c'hellimp ober hon-unan hon treuz. Ra vezo eur c'harr-neza, e pep ti, ha ra vezimp barrek d'en an wiska ha d'en em vaga heb ezomm da c'houlenn netra, nag evid ar pez a zell ouz ar c'horf nag evid ar pez a zell ouz ar spered, ouz ar Zaoz.

Tud an Indez o deus selaouet Gandhi ha Gandhi, hep freuz, hep taolioù, goude beza stourmet epad dek vloaz, a zo deuet a-benn, en deizioù tremen, da lakat ar Zaozon da blega ha da rei da Indeziz o frankiz.

« Na pejer dishenvel, a skrive Roparz Hemon, breman ez eus seiz vloaz (1), eo emrenerez Gandhi diouz ar pez a anvomp, dre amañ emrenerez Gantañ, ano ebet eus eur gouarnamant distag, nag eus eur Gambr-Gannaded. Diwezatoc'h e teuio an holl drao-se, mar dint ret. Da betra e talv d'eur bobl en em ren, mar deo sklavez da voaziou ha da gredennou an estren ? A-raok kas an estren er-maez eus ho pro, kasit-heñ er maez eus hoc'h ene. Dihuni eur bobl n'eo ket adstumma eul le-

(1) Sellet p. 44 en e leor nevez « *Eur Breizad oc'h adkavout Breiz.* »

zenn eo ; adstumma he spered, adstumma he buhez a-bez, avat, ne lavaran ket ! »

« Ene bras » an Indez, Gandhi en deus dihonet ene an Indez hag an traou all a zo bet roet d'ezan war ar marc'had.

Evidomp-ni, Bretoned, na pebez kentel ha na pebez skouer ; war dal Gandhi emañ liou ar bini-jenn : ne raer netra vras hep poan. Silvidigez an dud n'eo ket bet graet hep poan ; silvidigez ar broiou ne vez ket graet hep poan ; Jann d'Arc m'he deus salved ar Frans, breman ez eus pemp kant vloaz, he deus kavet e penn he hent tantad ar C'hoz-Varc'had, e Rouan ; Gandhi m'en deus salvet an Indez, piou a oar petra zigouezo gantan ?

Diwar e groaz Hor Zalver a lavare d'e Dad, o welout an dud ouz e laza : « Va Zad, pardonit d'ezo, rak ne ouzont ket petra reont ! »

Diwar he c'hroaz, hor Breiz o welout he bugale ouz he laza a c'hellfe lavarout ivez. « Va Doue, pardonit d'ezo, rak ne ouzont ket petra reont ! »

Ya ! eleiz a dud a zo e Breiz, tud diwarlerc'h, hag a ra an droug hep gouzout d'ezo, met, re all a zo ivez, siouaz, hag a ra an droug o c'houzout er vat e reont an droug ha Breiz a c'hellfe lavarout diwar o fenn ar pezh a lavare Jezuz diwarbenn Judas : « Gwelloc'h e vije bet d'ezo ma ne vijent ket bet ganet biskoaz ! »

Ni, da vihana, chomomp heb o harpa, e doare ebet ; harpomp hepken ar re a labour evit hor bro ha ra deuiio kentel Gandhi da zanka doun e spered kement Breizad en deus eun tamm bouedenn-benn henniak, ma vezo gellet gwelet, hep dale, eur vro savet gand ar zent, hag a lavarfed en he bez, o sevel adarre dindan bannou an heol, lagad an deiz, leun a vuhez, a splannder hag a zantelez !
Alleluia !

Y. V. PERROT.

Buhez an Tad Maner

(1677-1679)

(Kendalc'h)

An aotrou a Gerizak a oa anavezet gant an Tad Maner abaoe mision Tonkedek. Dimezet oa da verc'h an aotrou a Dremaria, hag e veve eur vuhez santel meurbet, mat d'ar paour, prest atao d'ober aluzenn d'an ilizou. E wreg a oa henvel outan, hag en o zi e rene an eürusted ar vrasa.

Siouaz ! Ar maro a zigouez evel eul laer, eme Hor Zalver en Aviel. Skei a ra pa ne vezer ket war c'hed, didruez, war ar re goz, ar re yaouank, ar re baour, ar re binvidik. An itron a Gerizak a varvas trumm, e kreiz he nerz, he yaouankiz. N'oa ket bloaz c'hoaz abaoe m'oa maro he zad, ha setu hi ive galvet gant he Barnar.

An aotrou a Gerizak a gavas en e feiz nerz awalc'h evit harpa ouz e boan, hag adalek neuze e komprenas n'oa nemet Doue gouest da rei e walc'h d'e galon, hag e lakas en e benn beza hiviziken da Zoue hepken. An Tad Maner her frealzas e kreiz e c'hlac'har hag a zigoras an hent d'ezan evit mont da veleg. « An den-ze, emezan, a zo eun tenzor kuzet, ha fazia a ran, ma ne vez ket misioner abenn bloaz hanter aman. »

Hag e gwirionez, da fin ar bloaz 1675, an aotrou a Gerizak a c'houlenne beza digemeret e kloerdi Treger, ha nebeut amzer goude e reseve an urziou sakr.

Er bloaz 1677, an Tad Maner a reas misionou e Kerlagaut ha Plouhinek ha da c'houde e teuas da Vrest. Aotrou'n eskob Kastell a dremenas e Brest amzer ar mision, o sturia hag o sikour ar visionerien. An Aotrou a Gerizak, nevez beleget, a voe galvet ive ha karget

d'ober katekiz. Brestiz a voe skoet o spered o welet eun aotrou eus eur renk ken uhel deuet da veza beleg ha misioner, hag e veze klevet tud o lavaret: « Kaout a c'heller an eürusted pell diouz madou ha plijadureziou ar bed-man. » An aotrou a Gerizak en doa ouspenn ugent mil lur leve. Hag en doa dilezet e vaner hag e vadou evit beza servicher e vreudeur ha deski d'ezo hent an nenv.

An Tad Maner, eus e du, a voe digemeret mad gant ofiserien al listri a vrezel, a oa niverus e Brest. Dont a rajont d'e glevet gant mall bras, ha diskouez a raent kaout c'hoant da veza e karantez Doue.

Ne voe oc'h en em glemm eus an Tad Maner nemet paotred ar gwiriou. « Abaoe em 'an hennez o prezeg e Breiz, emezo, e vez evet nebeutoc'h a win bep bloaz, ha koll a reomp war ar gwiriou. »

Eürus oa an Tad Maner o veza m'oa tremenet mat an traou e Brest, met, en derveziou diweza dreist-holl, oa bet gwall skuizet. En em lakat a reas en hent evelato evit mont da Blomodiern gant e holl visionerien, met, o tigouezout eno, e rankas chom en e wele hag e fizas en Tad Martin ar garg da ren ar mision.

Eur wech pare, ec'h en em lakeas da brepari mision Kemper. An aotrou 'n eskob, an aotrou a Gerizak hag ar visionerien all her gedé. Hag e teuas, leun a joa, met siouaz! evit koueza klanv adarre, ha gwasoc'h zoken eget e Plomodiern. Ret e voe ober hepdan al labour. Tadou ar skolaj a boanie gwella ma c'hellent, an aotrou a Gerizak a wele eleiz a dud o tont d'e zelaou da iliz sant Korantin, hag eur misioner nevez all, markiz Pontkallek, a reas ive katekiz epad ar mision, hag evelse ez eas mat an traou e Kemper, daoust da glenved an Tad Maner.

Evelato, ma teue d'ezan misionerien nevez eus an dibab, an Tad Maner a wele ar maro o skei endro d'ezan hag o lemel misionerien hag a oa abaoe pell

amzer o labourat gantan. Koll a reas, e nebeut amzer, fri eus ar re wella: an aotrou Galerne, persoun Mur, an aotrou Jay, person Redene, an aotrou Lestour, person Kaudan. An aotrou Galerne eo ar c'henta a en em ginnigas d'an Tad Maner d'e zikour en e visionou.

Kerkent ha ma voo pare diouz e derzienn, e welas e nerz o tont buan d'ezan; ha da viz du 1677 edo e Treger gant e visionerien, en o zouez an aotrou a Gerizak ha markiz Pontkallek. Mision Landreger a zougas kalz frouez. Eur prezeger brudet, an Tad Chaurand, ginidik eus kreisteiz Frans, en doa savet 120 ospital, a oa bet galvet gant eskob Landreger evit sevel ive eun ospital e ker Landreger.

Eus Landreger, ar visionerien a yeas da Sant-Briek. An Tad Chaurand a brezegas adarre, hag e voe e nebeut derveziou dastumet peadra awalc'h evit eun ospital e ker. Aotrou 'n eskob Sant Briek a vae eürus bras o welet pegement a vad a reas ar mision. D'an eil sul eus an Asvent e voe digoret an ospital. En deiz-se, goude an Te Deum kanet en iliz-veur, ar beorien a voe laket war daou renk, evel e Landreger, hag ar brosession a en em lakeas en hent evit mont d'an ospital. An aotrou 'n eskob a vennigas an ospital ha da c'houde a reas da reina d'ar beorien a dlie beva ennan.

Er bloaz 1678, e voe graet kalz misionou er parrezioù war ar maez, e eskopti sant Briek e parrezioù La Chèze, La Ferrière, Monkontour, Lamballe; e enezenn Brehat, eskopti Dol; e Lokmine, eskopti Gwened; e Sant-Servez, Lesneven, eskopti Leon; e Pontreo, eskopti Treger. E pep lec'h ar mision a badas eur miz. Daou ospital nevez a voe savet; e Monkontour hag e Lamballe. E Monkontour e voe savet ive eur Vreueriez evit ar your'hizien, eun all evit ar varc'hadourien hag ar vicherourien. E Lesneven e voe 40 misioner, ha mision 1678 a reas kement a vad hag hini 1669.

E Pontreo ez eas mat ive an traoù hag e voe savet eur Vreuriezh en enor d'ar Werc'hez. Met unan eus ar visionerien, an aotrou a Gerizak, a gouezas klanv. Er brezegenn genta a reas en iliz, o welet an niver bras a dud a oa bodet endro d'ezan, e komzas gant kement a nerz hag a galon ma voe skuizet holl o tiskenn eus ar gador, hag e voe ret e zougenn beteg e wele. Eur goenvadenn-skeveut a zeuas d'ezan, gant terzienn vras. Gwellaat a reas goude eun nebeut derveziou, met ar pare ne zeuas ket, hag e varvas d'ar 14 a viz genver 1679. N'oa ket bet pell amzer er misionou, met, epad m'oa bet, en doa labourer mat mat. Ar c'horf a voe kaset da Lanuon ha beziet e iliz an Ursulinezed.

Nebeut amzer goude e varve an aotrou Grangier, eskob Treger, eur mignon d'an Tad Maner ha d'ar misionou. Eun eskob santel oa bet epad an tri bloaz ha tregont ma renas eskopti Treger, mat d'ar paour, eun tad hag eur skouer evit e veleien. Savet en doa ar c'hloerdi bras evit prepari beleien, manatiou Leanezed ar Groaz e Landreger, ha re an Ursulinezed e Gwengamp hag e Lanuon. Gervel a reas an Tad Maner da brezeg en e eskopti, hag e teue e-unan d'ar parrezioù da zikour ar visionerien. An Tad Maner en doa evitan eur garantez vras hag a skuilhas kalz daerou pa glevas oa maro.

Kenderc'hel a reas ar misionou er bloaz 1679, e eskopti Treger: e Kemperven, Plestin, Plouyann; e eskopti Gwened, e Pontivy; e eskopti Kerne, e Pouldergat, Pouldavid, Lokronan, Huelgoat, Lok-Maria, Kleder-Poher, Koray. Hini Kleden-Poher a badas c'houec'h sizun, hag endro d'an Tad Maner ez oa 33 misioner. Rak, en amzer-ze Kleden-Poher a oa unan eus parrezioù ar rederien hent, ar glaskerien bara. Bodet e voent holl; ar re grenva, gouest da labourat, a voe klasket plas d'ezo e tiez an dud pinvidik; evit ar re all e voe graet eur gest ha goulennet aluzennoù.

da c'hellont rei bara d'ezo hag ober d'ezo chom er ger. Adaleg ar bloaz 1677, an Tad Maner a en em lakeas d'ober retrejou epad ar misionou. Hag eun dra souezus oa gwelet tud e-leiz, gwazed, merc'hed, o tremen o amzer evel en eun ti-retred, o chom eur zizun hep lavaret ger, o pedi, o pleustri war o finveziou diweza. An Tad Maner a zigemere evelse betek pemp kant eus ar parrezioù all. Dont a raent gant bara, amann, peadra da veza epad eur zizun er barrez a veze enni mision. Kavet e veze dezó lojeiz e gran-chou, e kreier goulo, ar wazed en eul lec'h, ar merc'hed en eul lec'h all. Merket e vezó d'ezo eur ar prezegennoù ar pedennoù, ar govesion. Chom a raent sioul, rak difenn a oa da gozeal. Epad ar zizun o deveze amzer evelse da veza kelennet, amzer da lakaat urz en o c'houstians, hag araok distrei d'ar ger e raent ar gommunion hag e c'hounezent an induljans plerier.

Evelse an Tad Maner a roas tro d'ar re ne c'hellent ket mont d'an ti-retred da Wened, da Gemper pe d'eul lec'h all, d'ober eur retred o chom tost d'ar ger. An dra-ze ne reas droug ebet da diez Gwened ha Kemper, rak ar retrejou en tiez-ze a voe heuliet gant muioc'h mui a dud.

Y. U.

JUDICA ME !

*O doustér en overenneu én ur chapel,
Ur chapelig didrous é mézeu Breiz-Izél.*

(Yann-Ber Kalloc'h).

Pouezit war ar c'homzou-mañ, kristenien ; leun int a velkoni, leun int a feiz, leun int a garantezvro ha dleet eo e vijent anavezet gant kement kristen a zo e Breiz ; savet int bet gant hor c'henvroad brudet Yann-Ber Galloc'h, ganet e Groe d'ar 24 a viz Gouere 1888 ha maro er brezel d'an oad a 29 bloaz.

An Aotrou Kervarker a savas hol levr broadel, ar « *Barzaz-Breiz* », spered Breiz kadarn : Breiz ar Brezeliou, Breiz ar Rouaned hag an Duked ; gwelloc'h en deus graet marteze Kalloc'h, rak savet en deus leor hor Breiz kristen : « *Ar en deulin* » a zo penn-da-benn eun dudi e lenn.

Livirit d'in, hag heñvel hoc'h eus kavet eun oferenn war ar mæz ouz eun oferenn e kêr ? Eun iliz e kêr a zo bras, livet brao, leun a skeudennou sent, a daolennou hag a draou kizellet mat ; leun eo ivez gant trouz ar binviou-muzik... hag an dud. Penaos e c'hellfe hor spered mont etrezek Doue e-touez an trouz-se hag an traou brao ; *non in commotione Dominus* ; stag e chomomp ouz an douar.

Soñj am eus, daou vloaz a zo, e oan bet en eun oferenn war ar mæz, « en eur chapelig didrous ». Eur chapelig zister 'oa avat, bihan, gant eun aoter goz, hep bleuniou warni, dislivet ; Jezuz a oa eno koulskoude, stag ouz e groaz o c'houlenn pardon e Dad evit pec'hejou an dud ; dirazañ eur c'hoz ka-

der-brezeg nevez-livet ; amañ hag ahont, skeudennou sent : sant Erwan, sant Kaourintin gant e vaz eskop, sant Per. Eun 50 bennak a dud a oa en iliz ha leun e oa ganto : kouerien evit an darn vuia anezó.

Staga a reas ar beleg gant e brezegenn ; diwarbenn an neñv hag ar maro e prezegas ; dremm an holl a deuas da veza seder ; ne glevet ket an distera trouz nemet ar beleg o komz. Plijadur a rae d'in gwelout va c'henvroiz atao ken kristen ha ker mat da bedi : lorc'h a c'hell beza ennomp.

Goudeze e voe kanet e latin hag e brezoneg. An holl a gane, darn gant eur vouez dispar, darn all gant eur vouez kreñv, darn all avat gant eur vouez faos ; hogen n'eus forz, eun dudi e oa evelato selaou an holl o kana gant kement a feiz. En eur gana *Kantik ar Baradoz* spered an holl a nijé davet ar gwenva (1) peurbadus e-lec'h ma ne vo mui na tud paour na tud pinvidik, hag e-lec'h ma vo laouen ar spered keltiek pa vo tost ouz Doue.

*... Rak, o Doue, c'houi a zo va c'honfort ha va nerz
Dilezet ganec'h-C'houi, en anken me a gerz.*

Ya, hep Doue n'heller netra. An neb a zilez ar Mestr n'en deus plijadur ebet ken er bed-mañ, henvel ouz plijadur ; bemdez e spered a rebech d'ezañ e follenteziou, hogen, siouaz « pa vez krog ar biz etre dent ar rod, ar c'horf a ya da heul ». Ar paour kêz den-se, kaer en devezo stourm ouz e blegou fall, hep Doue ne ray netra, ha pec'her e vezo betek e eur ziweza ; met

*Digasit d'in ho koulou hag ho kwirionez
Ha ganto e pignin, dillo, war ho menez.*

(1) *Gwenva, da lavaret eo al lec'h gwenn eo an ano a roe hon tud-koz d'ar baradoz.*

Beza ar beleg gredus a-sav ouz an aoter
O kinnig an aberz (2), o douster! o, douster!...

Setu aze, marteze kaera komz a c'hellfe koueza
eus genou eur beleg, rak eur beleg eo bet atao Kal-
loc'h pe da vihana eun danvez dispar a veleg. Ret
e voe d'ezañ redek ar bed evel e genvroiz all
daoust d'e c'halvedigez. Setu perak eo chomet hor
barz atao ken trist; eun dra a vanke en e vuhez:
Doue, beza tost da Zoue.

Bremañ e ene a zo bet kemeret gantañ ha nijet
eo davet ar gwenna, el lec'h m'emañ o pedi evit
e vro e genvroiz, hag ar feiz.

O, douster!...

E. BERTHOU.

(2) Aberz, ger kemraeg hag a ziniñ sakrifis.

DRE AR BED


II

TIEZ ANNEZ

Lennet

Er Mor Habask

Bremañ pa 'z omp bet o welout an Indianed e c'hel-
lomp mont da Vancouver pe da San Francisco da ge-
merout ar vag evit treuzi ar mor Habask. E-lec'h mont
d'ar Japan, kemeromp hent Aostralia dre Honolulu.
Nebeut goude ec'h em gavomp gant eur hern enezen-
nou bihan. Lezomp ar vag da genderc'hel war-zu
Sydney ha diskenomp en unan anezo, en enezennou
Fidji lakaomp. Eno e kavor adarre tiez souezus kenan.



NOEL

SW.-I. EUNTI E POLENEZIA


Dre eno e vev eur ouenn dud speredek ha donezonet
kaer a gar kalz ar c'han, ar c'horoll, ar bleuniou;
eun dra a zo, avat, ha ne garont nemeur: labourat.
Perak ivez mont da labourat pa gaver frouez ha greun
a-walc'h evit beva er c'hoadou ha pesked n'eus forz
pegement el lennou hag er mor. Ar Boleneziz — hen-

nez eo ano ar ouenn dud-se — na petra 'ta né gemeront ket kalz a amzer da sevel o zi. Graet eo holl gant geot kraz.

N'eus nemet ar frammadur hag an treustou hag a vefe graet gant bambouz, ar peurrest a zo graet gant geot sec'h pe foenn evel ma kavfot ar gwella. Eur goudor mat eo koulskoude, nemet pa deu an tan. Neuze avat e sav bec'h!

Ar tiez war bilierou

En em gavout a raïmp levemañ en enezenn vras Borneo. Dre eno an dud, gouez ha kriz evel ma c'heller beza, a ra c'hoaz o ziez evel an dud a veve en horbrioiu, bremañ ez eus 9 pe 10.000 bloaz. Kaer ez eus bet ober n'oar ket deut a-benn d'en em glevout ganto, na zoken da rei d'ezo da anaout an distera tra diwarbenn ar vuhez a-vremañ. Gant kalz poan a c'hellit kredi eo e c'hell herzel ar visionerien aet da skigna gwirioneziou ar feiz aze er broiou reuzeudik-se.



sk II.

Ar baotred-se, evit ma ne deufe ket o enebourien a-benn diouto a sav o ziez (skeudenn II) e kreiz al

lennou, war bilierou. Mont a reer di dre eur chaoser a vez freuzet pa vez gwelet an enebourien o tostaat, pe gant eur vag, pilprennek. N'eo ket pinvidik o arrebeuri: n'eus netra. En doare-se, da vihana, ne gemero ket ar wreg re a amzer o spura ar c'hoadañ!

Ar re a vev e-barz an douar

Gellet hon dije kenderc'hel da deurel evez ouz tiez bihan ar Chinoaed pe Annamiz. Gwelloc'h eo d'imp avat mont dioustu betek menezioù kreiz Azia, betek an Tibet uhel. Eno a-zioc'h kaniennou doun, ouz kostez an torgennou a-ziribin ez eus c'hoaz tud o vev e toullou graet ganto e-barz an douar, e keviou a gavont er reier ha ma reont o annez enno. Divisoc'h eo an dra-ze ha n'ez eus ket ezomm da zevl ti. N'eo ket atao gwall vraz na gwall sec'h an diabarz marteze, mes goudoret mat eo c'hoaz e-keñver ar peurrest eus ar menezioù-se ma c'houez an avel yen ha yut epad ar pep hirra eus ar bloavez. Gwasa ma c'hellfe en em gavout gant ar paour kêz tud-se eo gwelout eun arz pe eun ejen-gouez o vont da chom en hevelep ti ganto, ar pez n'eo ket diouz o c'hoant peurliesha.

Arabat kredi n'eus nemet eno tud o chom evelse en douar e toullou pe e keviou. Er Chin ivez ma 'z eus gweleadou douar melen betek 300 pe 400 m. teoder an dud a ra o ziez ennañ. Kaout ar parkeier war gorre ar penn, setu petra n'omp ket gwall voazet da wrelout, n'eo ket gwir? ha bremañ n'ouzon dare ha plijout ha rafe ganeoc'h cheñch ganto. Evidoun e lavaran dioustu n'her grafen ket daoust ha ma varvfen ama gant an naon en eul lochenn soul.


En Afrika ivez, e kreizdeiz Tunizia, er menezioù, e kaver tud o chom en douar. En Tibet ez aer en douar da virout ouz ar yenienn; amañ, avat, ez aer kentoc'h en douar da herzel ouz an domnder hag ar c'hor euzus a ra reuz er vro-se, a ra d'ar reier skar-

nila ha diskolpa hag a laz kement gwezenn, kement geotenn a c'hellfe diwan.

En hor bro ivez, war a lavar an dud gouiziek, eun amzer 'zo bet — meur a vil bloaz a zo abaoe — e veve an dud er c'heviou en doare-se evit herzel ouz dent al loened gouez o samme ken alies ha traou all. Lavarout a reer zoken ez eus bet tud o chom evelse er *Roc'h Toull*, e Bro-Leon.

Er broiou kras

E broiou 'zo, ma ne vez koulz lavaret tamm glao ebet e rank ar re a sav loened — deñved peurliesa — mont da heul o zorkadou (1) da glask geot ha dour. Evelse eo e c'hoarvez en Turkestan rusiat, pe e Siria, pe c'hoaz e kreisteiz Algeria. En Turkestan rusiat —



SK. III. TELTENN AR C'HAZAKED

eur vro a zo etre Siberia, ar Mor Kaspian, ar Pers hag ar menezioù Altai — a zo an darn vrasa anezañ er stad-se: goloet eo amañ-ahont a draez reiz pe draez du, amañ-ahont a zouar a zoug geot druz, dioustu

(1) torkad : tropell, bagad denved.

pa deu glao. Eno e vev ar c'hazaked, saverien-deñved. O ziez n'int nemet lochennoù graet ar frammadur anezo gand aozil pe wial kutuilhet war dro ar saniou-dour; goloet eo ar frammadur se gant feltr dalc'het gant lerennou (sellout ouz ar skeudenn III). War ar beg eun toull a dalv war eun dro evel toull-moged ha prenestr.

E Siria eo graet an telt gant palennoù gloan deñved ha reun kañval, ledet war bilierou plantet en douar pe er grouan. Evelse eo ivez en Algeria. Ar skeudenn III a ziskouez unan eus an teltou-ze savet eun tu anezi da ziskouez an diabarz.

Talvoudegez an teltou a zo bras : buan e c'hellont beza freuzet, pleget, sammet war gein ar c'hañvaled pe ar c'hezeg ha kaset larkoc'h. Eun dalvoudegez all o deus ivez: trawalc'h a zo anezo evit mirout an dud ouz gor an heol e-pad an deiz ha yenienn an noz, rak gouzout a rit marteze, er broiou dizour-se, ma vez tomm poaz da greisteiz e skourn alies e-pad an noz, dreist-holl pa deu ar goañv.

(Da gendel'her.)

Kastell Perzel


E kichenik ar mulgul a ro hent d'al listri da vont e porz-mor Brest, hag harp e Trez-Hir, e parrez Plougonvelen, eo ema Kastell Perzel. Pell bras a zo aboe m'eo bet savet eno da zifenn an aochou tro-war-dro ha diaes eo da gemeret, rak war eur roc'h hag he deus 67 metr a uhelder ema hag 50 metr a zo etrezi hag an douar bras.

Nebeud a-walc'h a dra a anavezet diwarbenn Kastell-Perzel; pa deue enebourien da glask gwaska ar vro ec'h en em denne eun denchentil ennan gand eun toulladig gwazed dindan o armou.

Er bloaz 1558, an denchentil-ze oa Bastian Bonsilin, aotrou Pouliorc'h, eur maner hag a zo e kichen Plougonvelen. D'an 22 a viz gouere an nebeudig gwazed en devoa laket da ziuall an aochou e Konk, e Lok-Maze hag e Perzel, a welas ar mor goloet gand ouspenn tri c'hant lestr, Saozon, Hollaned ha Spagnoled warno, a lake an aochou da grena gand o zrompilhou hag o c'hanoliou. P'en em gavjont tost a-walc'h d'an aod e taoljont o eoriou er mor ha, war bigi bihan, e tiskennjont d'an douar, demdost da gastell Perzel, an darn vrasa anezo. Bastian Bonsilin a glaskas enebi outo met n'en devoa nemet tri bez kanol; eun dournad tud-chentil hag eur guchennig koueriaded gant fuzuliou; ar Zaozon, dek gwech niverusoc'h a flastras kement hini a gavent war o hent hag a en em ledas, dre ar vro, o laerez hag o lakat an tan dre ma 'z aent.

E parrez Plougonvelen e voe devet an iliz ha 220 ti; e maner Pouliorc'h e voe graet evit 12.000 lur goll; e Konk, 442 ti a voe pulluc'het; eiz hepken a jomas hep beza devet hag ar 37 lestr a oa er porz a voe laeret pe zismantret. E Lok-Maze, an enebourien a zevas

50 ti, ar c'hoc'hu hag ar chapelioù. Lakat a rejont zoken an tan en abati; ar c'hampreier da gousket, ar sakreteri hag ar c'heur a voe devet; ar rest, evelato,



Kastell Perzel

a voe gellet da zavetei; er barrez a-bez e voe evit 200.000 lur goll, ar pezh a dalvesfe, da nebeuta, 8 milion en amzer-man.

Diouz ar pardaez, en deiz-se, Gwilhou ar C'hastell, aotrou Kersimon, kabiten eskopti Leon, a en em gave,

war al lec'h, gand ouspenn 9.000 den, savet d'ar red ouz son kleier ar brezel a voe sonet eus an eil penn d'egile d'an eskopti.

Ar Zaozon a c'hellas en em jacha braoik, met ar Hollaned hag ar Spagnoled, bountet ha divountet, a rankas koueza an darn vrasa anezo ouz torgenn, an amiral Waaken en o fenn; 1.600 anezo a voe prizoniet ha kaset raktal da labourat war mogerioù ker Lamball.

Kastell Perzel a oa bet kemeret ivez ha devet; ad-savet e voe diwezatoc'h ha padout a eure betek an Dispac'h; e ganolioù a zaludas listri Tourville, Coetlogon, Châteaurenault, Duguay-Trouin, d'Orvilliers, Guichen ha Suffren, tud a vor eus ar c'henta hag a ouie lakat ar Zaozon da dec'het diouz aochou Breiz.

Ar skeudenn a lakomp da heul ar pennad skrid-man a ziskouez d'eomp kastell Perzel evel ma oa breman ez eus kant vloaz. N'oa ket eur brao, evel ma c'hellit her gwelet, mont ennan; eur vag a ranked da gemeret hag eur wech digouezet gand ar roc'h e ranked pignat d'ar c'hastell dre eun dereziou ker serz ma oa eun danjer mont drezo pa veze avel.

Diwezatoc'h, evit gellout darempredi ar c'hastell aesoc'h a-ze, e voe staget etrezan hag an douar brasdaou zug krenv, gand eur c'harr bihan outo, plas ennan da c'houec'h den, hag a veze laket da vont ha da zont a-bouez ar suiou-ze. Abaoe ez eus graet eur pont kerdin goloet gant plench.

Eur chapel a oa gwechall e Perzel, savet en enor da zant Berthele; n'ouzon ket pe ema c'hoaz en he sav pe n'ema ket.

G. P.



Maner Kergroadez evel m'ema breman

Eur ger c'hoaz diwarbenn Kergroadez

Warlerc'h ar pennad-skrid hon eus savet, e miz c'houevrer, diwarbenn maner Kergroadez, hon eus bet digant e berc'hen, an A. Juluan Chevillotte, eul lizer hegarat hag a zo ennan eur bann sklerijenn, hag hol lakaio da anaout gwelloc'h c'hoaz istor ar maner koz-se, kaera hini a zo breman, -en e zav, e Goueled-Leon.

Maner Kergroadez pa varvas e ziveza markizez, er bloaz 1785, a oa ker fall an traou, war e dro, ma ne falvezas ket gand an heritourien chom ennan.

Prosez a zavas etrezo, ne ouezer ket mat a-walc'h perak, met, marteze dre ma ne felle ket d'ezo gwelet eun itron Sirey bennak o klask kaout he lod e dauvez ar varkizez.

Ar prosez a badas betek ar bloaz 1829. Ar maner a jomas gant heritourien ar varkizez betek ar bloaz 1860. Prenet e voe neuze gand an A. Mevel hag an A. Le-

jeune, tad koz hag eontr koz an Itron Chevillette a deuas, da varo ar re-man, da veza he ferc'hen.

En hor pennad-skrid, o fiziout er paperiou koz a oa eire hon daouarn e lavaremp e oa bet eun hospital, e Kergroadez epad an Dispac'h; kement-se ne c'hell ket beza gwir, eme an A. Chevillette, rak tudchentil Kergroadez, daoust ma n'edont ket mui er vro a oa atao mistri war ar maner hag ar maner, o veza ma ne gempenned netra ebet ken war e dro, a oa ker fall ma vije bet red ober dispignou bras abarz tenna talvoudou degez anezan ha ne jom merk ebet, e nep lec'h, eus an dispignou-ze ha rak-se ne rankont ket beza bet graet.

G. P.

Aotrou Run ar Vran

Azêzet var e skaon e korn an oaled, eun nozvez goanv, ar C'heumro koz a gomzas evelhen:

Pa vez an amzer evel m'ema hirio, an avel foll o c'hôueza, ar mor dirollet o krozal, hag ar glao beuz o koueza a varajou, e teu bepred em spered ar pezh a c'hoarvezas gant aotrou Run ar Vran.

Thomas Windham, mestr Maner Run ar Vran, en doa ar brud da veza eur penseer aheurtet E atapi ous an aour hag an danvez a oa divent. Bep tro ma veze eur pense war an aochou tosta da Vaner Run ar Vran, Thomas a veze da genta war al lec'h, o rei urziou d'e dud evit ma vije kaset prim an tenzoriou d'e doullkuz. Gant an amzer, e c'hoant na rea nemet kreski; hag evel ma veza alies kollet listri war ar c'hosteziouze, an dud a lavare etrezo en doa Thomas eun dra bennak evit o chacha war ar c'herreg. E gao a oa karget a varrikennou gwin eus ar c'henta, hag a doukennou gwin ardent; kamproù ar maner a oa leun a arrebeuri a briz bras paket divar listri kaer; e irc'hier a oa leun a bez ou aour, arc'hant ha moniz gros, a venviou aour kizellet, a vraoigou talvoudus bras, deuet holl eus kachedou kabitened a vor, beachourien pinvidik ha zoken martoloded paour: rak ar paour kouls hag ar pinvidik a veze laeret gant mestr digalon Run ar Vran. En e wad e ranke beza ioul milliget ar madou gwall zastumet: douarou en doa, kouls hag arc'hant, hag evel a lavare an dud, « n'en doa dienez a netra. » Eun dra hebken a rea poan dezan e kreiz e vadou; e vibien a oa traou dister, ha mervel a raent an eil warlerc'h egile; ne chome gantan nemet unan. Kement a reas d'e wreg lakaat he holl evez da vaga ha da

ziorren ar c'hrouadur-ze, n'en doa nemetan da zerc'hel war e lerc'h e vadour hag e hano. Ar baotred all a oa maro darn ez-vihanig, darn all deuet da grenarded.

An diveza-ma en doa triwec'h vloaz, ha biskoas n'oa bet klanv eun devez. Thomas a oa lawen, kement ha ma c'helle beza. Gant e blijadur zoken ec'h ehanas eur pennadig da zastum danvez en doare m'oa kusfium. An diskar-amzer a deuas, ha goudeze ar gouanv. Pa glevas an avel o vudal hag ar mor o krozal, n'hellas mui padout: e ioul fall hen tagas gwasoc'h eget biskoas. Evit mouga mouez e goustians, e kavas digarez: brasoc'h ezomm en doa a zanvez evit ma vije e vab eur penher pinvidik.

Eun tour koz, gwisket penn-da-benn gant an illio, a oa stag oud ar maner. El lec'h uhela eus an tour-ze e lakeas eul lampr; ha gant aoun na vije ket ententet outan mad awalc'h, ne laoske den d'e gempenn: hen e unan a zic'hlaoue ar boulc'hen hag a lakae an eol. War e veno e veze digollet mad eus e boari pa deue eul lestr pinvidik bennak d'en em vruzuna war ar reier tost d'e zouarou.

Gant aoun na deuje e vab da c'houzoud a belec'h e teue dezan kement a zanvez her c'hasas e Frans hag en Itali, war digarez peurober e zeskadurez beteg e bemp bloas varnugent. Neuze avat e vije festou kaer e Run ar Vran! Tri bloas a oa ac'han di, ha dre ma tosta e an tri bloaz, Thomas en doa muioc'h mui a naoun da greski ar berniou aour, aben ma teuje « ar paotr » d'ar gêr.

Miz gwengolo a zigasas stransadou amzer fall ha avel rust. Mestr Run ar Vran en doe peadra da ober: lampr an tour en doa graet e zever, ha fors listri a benseas en tu-zeou. Tremen a reas miz here, ha dont a reas miz du gant e goumoullou teval hag e vogedell: lampr tour Run ar Vran, na bare ket muioc'h eget eur

c'houlaouenn roussin, pe ar c'houlaouen-gorf a vez gwelet a-wechou araok ar maro. Thomas a zic'hlaouas ar boulc'hen, a lakeas muioc'h a eol, evit ma vije gwelet gwelloc'h adreuz ar vogedell, ha neuze, evel kustum, e tiskemmas e torr an aod da c'hortoz petra a c'hoarvezfe ha da rei e urziou dious ma vije red. N'en doe ket pell da c'hedal. A dreuz ar vorenn e voe gwelet evel skeud eul lestr o tont abenn en aod. « Pep hini d'e bost! » eme ar mestr. Hag e lavare outan e-unan: « Heman eo an diveza pense d'in-me; er zizun a zeu, va mab a vezo distro d'ar gêr; ha neuze, echu ar c'hoari ganen-me; rag arabad eo e oufe hen a belec'h e teu va danvez. » Kerse en doa o lavaret ar c'homzou-ze, evel p'en dije bet c'hoant e padfe ato e vicher villiget. Kaout a rae d'ezan edo oc'h hunvreal. Eun draskadenn hen dihunas.

Eun draskadenn all, brasoc'h; ha setu eul lestr kaer bras bruzunet war ar c'herreg e kichen Beg ar Zorserezed. Dreist c'huiban an avel ha kruz ar mor e voe klevet youc'h ha gwelvan ar geiz a oa varnez kaout eur maro spontus. Etouez kerreg dispennet gant ar mor hag henvel ous dent loened gouez, al lestr a voe munudet heb dale, ha gwagennou ar mor, en eur vont hag en eur zont, a skube tud ha madou.

Da c'houlou-deiz, Thomas a oa adarre en aod: « Ar wech diveza » emezan gant kerse, en eur rei urziou d'e dud; « ar pense diveza d'in-me. » Ha n'oa ket eur gaou.

Darn eus ar c'horfou a oa bet taolet er groa gant ar gourlan. Lod anezo a oa gwisket a zoare. En eur o c'hwilia piz e voe kavet traou talvoudus bras. War unan anezo ez oa bizeier aour, eur montr aour gant eur chadenn aour ive, hag eun toullad mat a vouniz aour. Galvet e voe an aotrou da zellet ous an traou kaer; hag e teuas: penaos 'ta na zeufe ket, « evit ar wech diveza? » Tostaat a ra ous korf an den pinvidik,


hag e sell piz outañ; mont a-ra war e giz hag e tosta adarre, evit gwelet gwelloc'h c'hoaz. Ha neuze, en eun taol, e zremm ker gwenn hag eun tamm paper, hep lavaret grik, e kouez war e giz etre divrec'h e vevélien. Petra oa c'hoarvezet? Ar c'horf sklaset a oa aze dirag e zaoulagad, oa korf e vab, penher Run ar Vran!

Thomas a voe douget d'ar ger evel eur c'horf maro. Pa deuas ennan e-unan, eo evit saouri ar zonzj c'haro: hen e unan eo en doa lazet, ha penaos! e vab penher, e vab deuet d'ar ger heb digas kelou, evit ober eun taol a blijadur d'e dad!

Aotrou penseer Run ar Vran a deuas henvel ouz eun den dibouellet gant krign e goustians, ha goude eun nebeud amzer e kollas e skiant. D'ar morizel e veze, gant skor eun all, o vale en tu-ma hag en tu-hont var an traez, hag ec'h hirvoude, eun druez e welét. Pa deue barrou gwall-amzer, e veze klevet e vouez glac'harus dreist trouz an avel hag ar mor.


Pell-pell goude e varo, diouz lavar tud ar vro spez aotrou Run ar Vran a deue hepred war an aod araog ma veze eur pense bennak, hag ive hep bloas da genver an noz m'oa bet beuzet e vab. Gwelet e veze o kroazia hag o trei e zivrec'h, pe o tremen e zorn war e dal er c'his ma ra an dud dare da vervel; hag e veze klevet oc'h hirvoudi hag o yudal dreist-kroz ar mor dirollet ha c'hwiban an avel foll.

Yann Gostarfeun.



Puns Maner Kervezeg

Pa 'z aer eus a Vontroulez da Lanveur, dre hent koz Lanuon, e treuzer krec'h sant Nikolas, el lec'h ma vez graet, bep bloaz, d'ar 15 a viz here, ar foar vrudet hanvet Foar an Nec'h; tremen a raer e kichen maner ar C'hoz-Wern chapel santez Jenvafa, kastell Kerozar ha Kervolongar hag e kaver, en tu dehou, e kichen kroaz-hent Garlan, unan eus maneriu kaera Breiz-Izel: maner Kervezeg, savet er bloaz 1568.



Maner Kervezeg ha chapel I. V. Loretta

An nor-borz da vont ennan a zo difennet koulz ha dor krenva kastell a zo er vro; toullou a zo,

er voger, a-uz an nor, da c'hellout stlepel drezo mein, tan ha dour vero, war ar re a glaskfe dont da ober droug ha-tarzelloù a zo, tu ha tu d'an nor, da c'hellout tenna war an dispac'herien hag al laeron. En tu dehou e weler eun tour kaer hag uhel ; en tu kleiz e oa eun all, izeloc'hik, gwechall, evel m'hen diskouez ar paper koz am eus tennet ar skeudenn a lakan aman diwarnan ; an tour-ze, a zo bet freuzet aboe ; e traon ar porz ez eus eun ti, gand eul lukarn mein-ben warnan ; ar rest eus ar maner a zo bet savet er c'hant vloaz diwezaman.

Tra souezus, n'oar ket evit dont a-benn da c'houzout piou en deus savet Kervezeg, e kreiz ar XVI^{vet} kantved ; turiet em eus eleiz a baperou koz hep gellout kaout e hano. Kaout a raer, wardro ar ar bloaz 1620, daou zen, Gien Ballavenn hag e wreg Katell Le Voyer, a deu da vadezi o bugale da Lanveur hag e raer anezo aotrou hag itron Kervezeg ; met an hano a Gervezeg a zo ker stank er vro ma n'oar ket evit gouzout e pe Gervezeg edo an daou zenchentil-ze o chom.

War baperiou koz Garlan ez eus nebeud a hano eus tudchentil Kervezeg. Kenta gwech ma 'z eus meneg anezo eo pa voe benniget kloc'h o chapel savet en enor da I. V. Loretta.

Ar c'hloc'h-ze, galvet Franseza, hag a boueze 40 lur, a voe badezet da zeiz ar Yaou Bask, d'ar 14 a viz mae 1665, gant person Garlan, an Aotrou Henri Primaigné, hag he devoe evit paeron, Fransez Blonsart, aotrou Koad ar Roc'h hag evit maeronez, Franseza Barazer eus a Lannurien ; ne leverer ket piou oa mistri ar maner, met o hanoiou a gaver war eur paper koz all skrivet d'an 19 a viz mae 1667. War ar paper-ze eo merket e oa bet en deiz-se, evel bep bloaz, e prosesion, e chapel I. V. Lo-

retta, hag en devoa person Garlan, en dizro, benniget eur groaz nevez hanvet kroaz Kervezeg savet gant Fransez Rollant ha Jann Sanquer, e bried, marc'hadourien e Montroulez ha mistri e Kervezeg.

Ar groaz-ze a weler c'hoaz er c'hroaz-hent met ar penn uhela anezi a zo bet graet en hon amzer Daou skoued a zo warni gand eur c'halur hag eul lilienn a bep tu.

Goude beza bet d'ar Rollanted, Kervezeg a zo bet perc'hennet gant an aotroued Konan, Gwilloton Kerzu ha Gwales Lanzeon.

Alan Louis Gwales Lanzeon, pried Mari Jann Gwilloton Kerzu, a dennas brud war e hano, da genta, evel brezelour, — rak hen eo an hini a oa kabiten kompagnunez kanolierien Lanveur, er bloaz 1758, pa voe roet lamm d'ar Zaozon e Sant Kast, — ha d'an eil, evel tad, rak e bried a roas d'ezan 19 krouadur, da nebeuta ; elleiz anezo, gwir eo, a varvas ez-vihanik.

Ne dec'has ket eus e vaner pa deuas amzer an Dispac'h ha ne voe ket klasket kals a drabas outan daoust-ma oa tec'het pevar eus e vugale eus ar vro, ofiserien o fevar, unan anezo war vor hag an tri all war zouar.

Mervel a rejont o fevar o stourm evid ar roue hag unan anezo dreist holl en devoe eur maro eus ar re boaniusa. Diskenn a eure e Kiberen gand ar Fransizien all a oa tec'het eus ar vro a-raok an Dispac'herien ; prizoniet e voe, kondaonet d'ar maro ha fuzuliet e Alre ; daoust d'an tennou en devoa bet, n'oa ket maro a-walc'h ; tud vad hen dastumas en o zi ; chom a eure kuzet epad pell amzer ha ne gredas en em ziskouez nemet pa glevas ne oa ket ker striz ken al lezennou douget war ar re a oa aet d'an harlu. Dont a eure da glevet e oa eil dimezet e wreg yaouank, Selest a Jentil,

eus Rosmorduc, o kredi e oa maro, ha neuze e te-
c'has a-nevez ha ne voe klevet hano ebet anezan
ken...

Alan Louis Gwales Lanzeon a zo e relegou, aboe
1806, e chapel Kervezeg, el lec'h ma weler e vaen-
bez dirak an aoter. Unan eus e verc'hed a zime-
zas er bloaz-ze gand an A. Potier de Courcy, a
deuas da veza kabiten war vor er bloavez 1816 ;
o mab hena, Paol Potier de Courcy, ganet e Lan-
derne, a deuas da veza war o lerc'h, perc'hen ma-
ner Kervezeg. Henman eo a zavas al leor brudet
Nobiliaire et Armorial de Bretagne, eul leor ha,
daoust d'ar faziou dister a zo ennan, en deus eun
dalvoudgez vras. Eun nebeud leoriou all war
Vreiz en deuz skrivet c'hoaz.

E zaou vreur, Alfred hag Herri de Courcy a voe
skrivagnerien vat eveltan. Ar c'henta a labouras
war an asuransou, evid ar pezh a zell ouz ar c'hol-
lou war ar mor ; er bloaz 1840, el levr hanvet
Français peints par eux-mêmes e kaver pennadou-
skrid savet gantan war ar Vretoned ha war Vreiz ;
er pajennou-ze e weler skeudenn maner Kervezeg.
Ar maner-ze a zo perc'hennet breman gand an
Abrialed.

Er chapel e kaver skeudenn ar Werc'hez, ar
skrid brezonek-man dindan he zreid : *Itron Varia
Kerveec* hag hini Sant Paol Aurelian, heb e zragon
ar pezh a ro tro da gredi eo an A. Paol de Courcy
eo an hini en deus graet eur zant Paol amezan evit
gellout enori e zant patron e chapel e vaner.

Tammou gwer a liou a jom c'hoaz war brenestr
ar chapel hag a ziskouez Hor Zalver e kroaz, o
sevel eus ar bez hag e bemp gouli.

Wardro hanter ar c'hantved diveza mereri Ker-
vezeg a oa dalc'het gant Stephan Taupin mab bi-
han Per Taupin, unan eus mistri brudeta ar choua-
ned, an hini a en em venjas war zoudarded ha tud

ar c'houarnamant ha war brenerien al leveou lae-
ret digant an noblans hag ar veleien, dre ma oa
bet dibennet e wreg, Ursula Thierrier, e Landre-
ger, d'ar 4 a viz mae 1794, eyit beza kuzet, en he
zi, e Lanuon, daou veleg mat an Aotrou Lajeat hag
an Aotrou Gall ; an daou-man a voe dibennet, war
ar Marc'hallac'h, e Lanuon d'an 3 a viz mae 1794.

A-raok an Dispac'h, Per Taupin, ginidik eus an
Normandi, a oa mestr-mevel, gant diweza eskob
Landreger, an Aotrou Le Minter ; pa dec'has e
vestr da Vro-Zaoz, Per a yeas d'e heul.



An Itron Taupin

Pa glevas e oa bet dibennet e wreg evit beza
kuzet daou veleg ez eas e kounnar ouz an alihoned
a oa neuze e penn gouarnamant Frans hag e tis-

kennas e Breiz-Izel, Kenta tra a eure a voe fuzurlia, en e wele, d'an 30 a viz mae 1796, ar Rouz Penn-ar-C'hoad, an hini a oa e penn al lez-varn a gondaonas e wreg d'ar maro : hel laza a eure en eur maner a oa nevez bet prenet gantan, evit netra koulz lavaret, digant ar c'houarnamant en devoa e laeret ; en jem lakat a eure neuze e penn eun toullad chouaned hag e reas brezel gwasa ma c'hellas da enebourien e Zoué hag e Roue. Lazet e voe, e bourc'h Treglamus, d'an 10 a viz c'houevrer 1800, o stourm ouz soudarded ar Republik.

E vugale a oa fuilhet, hini aman, hini a-hont hag eleiz anezo ne weljont ket ken o zad.

Merour Kervezeg a oa eur c'hristen dreist, evel e dad koz, ha Doue a roas d'ezan eur c'hras kaer, m'hen lavar d'eoc'h. Eur verc'hig c'houec'h pe zeiz vloaz en devoa hag a gare hag a bede kals Itron Varia Kervezeg. Eun dervez, ar verc'h vihanze a voe kollet. Kaer a voe he gervel, n'her c'haved e nep lec'h ; abarz ar fin, wann bennak a zontas sellet er puns hag e voe strafuilhet o welet penn ar c'hrouadur a-us an dour. An tad a ziskennas, ne voe ket pell, gant kordenn ar zailh, endra ma 'z edo ar vamm war he daoulin oc'h ober eul le da I. V. Loretta. Pa voe tennet ar verc'h paour eus ar puns, e voe gwelet n'e devoa bet droug ebet, nag o koueza, na gant yenienn an dour : « N'em eus bet nag aoun, na riou, na droug, emezi ; eun itron gaer dilhad glas ha gwenn ganti, a zalc'he va fenn er maez eus an dour ; mousc'hoarzin a rae ouzin ha me a vije laouen ma 'm bije bet gallet chom atao ganti ! »

He c'herent a gredas e oa bet saveteet gand ar Werc'hez ; pa deuas da veza bras ec'h en em c'hreas leanez.

G. P.



Miz Ebrel, askellig an hanv

Ebrel, miz an hanv o trec'hi war ar goanv, miz ar sklerijenn o trec'hi war an denvalijenn, miz ar vuhez o trec'hi war ar maro, miz Hor Zalver maro o sevel beo eus e vez, miz an eneou maro gand ar pec'hed o vleunia a nevez dindan gliz gras Doue, ebrel, askellig an hanv, eo miz an Alleluia, miz ar c'han, kan an holl, kan al laboused ha kan an dud ha n'eo ket souez : gwelet an heol o pokat d'an douar hag o lakat war e benn eur gurunennad bleun lirzin a zo eun dra ken estlammus ma 'z eo a-walc'h evit lakat ar c'han da dregerni eus genou an holl grouadurien.

Miz ebrel eo miz ar c'han hag eun dra vat eo kana ; setu aman petra skrive war gement-se, an A. Herry, er bloaz 1865, e penn kantikou eskopti Kemper ha Leon :

Ar c'hustum da veuli Doue ha da ziskleria, dre ar c'han he vuzudou hag he lezennou, a zo bet a-holl viskoaz etouez an dud. El lezenn goz, e kavomp var ghemend-se, kanennoù Moizez, psalmoù David, diouganou ar Bropheted ; el lezen nevez Magnificat ar Werc'hez, kan Zakariaz ha kentel sant Paol he-unan, pehini a ro d'ar gristenien ghenta ann ali d'en em laouennat e Doue, ha da gana ennn ho ilizou, hag er gheer etre-z-ho, himnou, psalmoù ha kanaouennou.

Eun dra vad a rafe ar veleien digas ha kendere'hel enn ho farresiou an ioul da gana kanaouennou santel ; n'oufer ket lavarout peghen talvoudek e ve ann dra-ze da zilvidighez ann eneou. Ann dud iaouank d'ar zul a dremenfe o kana, meur a heurvez, a dremenont marteze enn d'zurz. Plijadur ho devezo, epad ar zizun, oc'h askana enn ho ziez ar ganaouen ho devezo desket enn iliz ; al labourer gant he atar, a gana he goublad ; an diskourrer var

he vezen a lavar he hini; ar Mesaer a gano, o tiouall he zenned, evel ar plac'h iaouank enn ti o trei he guerzit; holl e veufint Doue halegatik hag al labour a vezo sklanvoc'h hag ar boan a vezo talvoudusoc'h. Ar c'han e-touez ar bobl a zo eur merk a chanz-vad hag a euruzted; ar roue David a lavar: *Vox exultationis et salutis in tabernaculis justorum (Ps. 117, 15)*. Mouez al levenez hag ar zilvidighez a vezo klevet e tiez ann dud vad. *Guelit ma ne ket guir kemend-ze. Pa glevann kana bennoz kanaouennou santel enn eun tieghez, e lavarann hardis eo mad ar bed gat-han; ez euz eno kerent vertuzuz, karet ha doujet; ez euz eno bugale fur, ha tud iaouank desket-mad.*

Neb a gar, a gustum kana, eme Z. Augustin, Cantare amatis est. Ne gaver mui eta e Breiz-Izel, pa na gaver inui. Eun dudi vije gwechall klevet d'an abardaez-noz, ar vughetien-zaoud oc'h holleika an eil ouz egile, pe o kana ker kaer eur verzig verr bennag; hag en tiegheziou, e vije kanet eur c'hantik bennoz a-raog ar pedennou. Perag n'her grear mui? Doujanz ha karantez Doue n'emaint mui eno. Ar vistri a ro aliez skouer fall hag ar zervicherien a zo deuet dizouj.

Ya ! eun dra vat eo kana, en ilizou ha war ar maeziou, er skolioù hag en tiegeziou hag eun dra aes eo kana pa 'z eus e Breiz kantikou ker kaer ha re an Aotrou Herry ha re an Aotrou Gwillou ha soniou ken drant, war doniou ken dudius, hag an hanter kant a zo bet renket warlene e trade leor *Soniou Feiz ha Breiz* (1). Al leor-ze a dlefe beza laket etre daouarn holl yaouankizou Breiz-Izel ha salo e kavfent tud vadeluz da zeski d'ezo toniou ar soniou kaer-ze a lakint goudeze da dregerni eus an eil penn d'egile d'ar vro. Er patronachou e oar marteze re droet da zouplaat ha da wellaat ar c'horfou; gwelloc'h e vije souplaat ha gwellaat ar sperejou; an den a dalv, dre e gorf, gwir a-walc'h eo, met muioc'h, eve-

(1) A gaver da brena evid 20 real, e ti Baol Raoul, 11 rue Algesiras, Brest. C/C 15.916 Rennes.

lato, e talv dre e spered; re droet ivez da c'hoari ha da gana traou gallek ha da ober ruz war ar brezoneg.

Evit c'hoari peziou gallek ha kana soniou gallek e ranker alies paea gwiriou bras; ar skriva-gnerien vrezonek n'int ket ker sellus-ze, met evelato mat e vije o harpa ha goude ma ne vije ken nemed o skignna o soniou e touez o c'henvroiz:

Kemeret hep rei
a lak ar garantez da drei.


Ya ! e holl batronachou Breiz-Izel, er c'heriou koulz ha war ar maeziou, e tlefed kana, embann ha gwerza *Soniou Feiz ha Breiz* rak ouz hen ober e-rafed eur vad dreist d'ar yaouankiz; ar yaouankiz, a rank kana koulskoude ha ma ne gan ket a draou mat e kano traou fall, hag ar yaouankiz eo ar vro da zont.

Y. V. P.




AR VINOREZIG


(LA PETITE MINEURE)



Pa 'z a ar vi - no - re - zig, Trei la la la di bi



de no, Pa 'z a ar vi - no - re - zig D'ar



feun-teun da wit dour.

Pa 'z a ar vinorezig
Trei la la la dibideno
Pa 'z a ar vinorezig
D'ar feunteun da wit dour.

E teu ar c'hloareg yaouank
Evit rei d'ei sikour.

— Salud d'eoc'h, minorezig,
'Peus ket ezomm sikour?

Da winta, da ziwinta
Ho picheradig dour

— Nann, emei, kloareg yaouank,
' Meus ket ezomm sikour

Da winta, da ziwinta
Ma ficheradig dour.

Dastumet e Ploezal
gant F. VALLEE.

KELEIER AR MIZ

XXI^a Gouel ar Bleun-Brug

Goueliou bras ar *Bleun-Brug* a vezo graet, er bloaz-man, e Henbont, e Bro-Wened, d'ar 4; 5 ha 6 a viz-Gwengolo hag a vezo renet gant an Aotrou Trehiou, an eskob breizat.

D'ar gwener, 4 a viz gwengolo, ez aimp, dre vor, betek enezenn Groe, da deurel eur banne dour benniget ha da lavaret eur bedenn war bez brasa skrivagner breizat hon amzer : ar barz Yann Ber Galloc'h.

D'ar zadorn, 5 a viz gwengolo, dervez ar studiadegou hag e vezo komzet enno, diwarbenn an ezomm hag an doare da unani yezou Leon, Treger, Kerne ha Gwened evit ma ne vezo mui dizale nemed eur brezoneg er skridou dou brezonek, evel ma n'eus nemed eur galleg er skridou gallek : anez unvani hor yez emaoamp koll.

D'ar zul, 6 a viz gwengolo, emae dervez bras ar c'hens-trivadegou (concours) : re ar vugale ha re an dud yaouank, re ar lenn, ar prezeg, an displega hag ar c'hana. Goude kreisteiz c'hoariadeg ha kaniri.

Pa vez c'hoant da welout ha da glevout traou kaer eo red mont da Vro-Wened; hol lennerien a en em genero e poent hag en amzer evit gellout mont da dremen tri dervez, goude labourioù tenn an eost, da vro santez Anna.

Kenstrivadegou ar Bleun-Brug

I. — *Kenstrivadeg ar brezegerkez.*

Breman ez eus 1.500 vloaz, bro goz hon Tadou, Breiz-Veur a voe diskaret gant ar Zaizon ha sant Gweltas hag a skrivas neuze *Dismantr Breiz* a lavar d'eomp e voe diskaret dre ma n'en em gleve ket ar Vretoned; Breman ez eus 1.000 bloaz, bro nevez hon Tadou, dibabet ha savet d'ezo gant ar zent koz, a voe diskaret ivez gant an Normaned, hag an dra-ze hepken dre ma n'en em gleve ket he bugale; Breman ez eus 600 vloaz, en amzer Yann Vontfort ha Charlez Bleas, Breiz a vennas koueza adarre en he

foull, dre ma oa rannet he bugale e diou gostezenn. Taolioù kleze dispar ha gloar a zo bet diouz an daou du, met gloar ar brezel (dreist holl brezel etre breudeur) a zo re ger ha ne dalv ket levezeg ar *peoc'h*.

Diskouezet pegen red eo d'ar Vretoned en em unani ma n'o deus ket a c'hoant e vefe diskaret o bro evid atao.

500 lur briziou a zo stag ouz ar genstrivadeg-man hag ar priz kenta a zo 200 lur.

Arabad da briezegen ebet kaout ouspenn peder fajenn; ar skridou a ranko beza kaset, d'an A. Perrot, *Renner Feiz ha Breiz, Scrignac*, a-bean hanter-Eost, da ziwezata.

Ar genstrivadeg-man a zo digor d'an holl dud yaouank, paotred ha merc'hed, ha n'o deus ket c'hoaz ouspenn pemp bloaz war nugen.

II. — Kenstrivadeg an displega.

Ar re o devezo c'hoant da gemerout perz er genstrivadeg-man, (*déclamation*) a ranko deski dindan envor, gwerz Kalloc'h : *Pedenn evit Breiz*, p. 43, ar en Deublin. Her moula a raimp e *Feiz ha Breiz*, er miz a zeu.

Er miz a zeu ivez e roimp da anaout ar c'hanaouennou a vezo da zeski evit gellout kemerout perz e kenstrivadeg ar c'han.

Maro ha ginivelez

An A. L. ar Guennec, leorier leordi Kemper hag a zegas d'eomp, ouspenn ugent vloaz a zo, bep miz, pennadou ker kaer ha skeudennaouet ker brao, war hor c'hestell hor chapelioù hag hon ilizou koz, a zo o paouez koll e wreg; marvet eo e Kemper, goude beza bet he holl zakramanchou, d'ar 25 a viz c'houevrer diweza.

Hol lennerien a lavaro eun *De profundis* eviti hag evit an A. Yann Louis Ollivier, tad hor mignon an A. Joseph Ollivier eus a Landerne, marvet e Sant Brieg eiz dez a-raok.

An A. Yann Sohier, mestr-skol e Plourivo a gemenn d'eomp ganedigez e verc'hig kenta ganet, Mona he ano; gant bennoz ha skoazell he faeron sant Erwan, Mona a vezo eur gristenez vat hag eur vreizadez a-zoare.

Leor an A. Gwillou

O deus rakprenet al leor e miz meurz :

An D. Madalen Rozec, Château-Gontier.....	1
An D. M. Yv. Cardinal, Berven Gwitevede.....	1
An A. Herve ar Menn, Paris, XX.....	1
An A. J.-M. Corre, person Rumengol.....	2
An A. Victor Gouriou, Sant-Thonan.....	1
An D. Jann Marc'hadour, Gottorn, Cast.....	1
An A. Lé Roy, chaloni, Kemper.....	1
An A. Berthou, Renner ar <i>Semaine Religieuse</i> , Kemper.....	1
An A. Livinec, chaloni, Kemper.....	1
An A. Bossus, person Plonevez-Parzay.....	1
An A. Bernard, person Guiler-Plogastel.....	1
An A. Cadiou, person Poulgoazec.....	1
An A. de Kervenoeael, Toull-ar-C'hoad, Roshoen.....	1
	14

Leorioù rakprenet betek-hen :

$$664 + 14 = 678.$$

Fizians hon eus e tegaso miz ebrel muioc'h a anioù d'eomp eget n'en deus graet miz meurz, rak anez e lakimp bloaz all a-raok tapa ar mil, ar pez a vefe eun dismegans evit hor Breiz hag hor brezoneg.

Ar rak-prennerien n'o deus ket ezomm da baea al leor kerkent ha m'her rakprenont; her paea a raint pa vezo kaset d'ezo dre ar post.

Al leor nevez, kaset betek an ti, ne goude nemet 10 lur.

Degas an ano hag an adres kenta ma vezo gallet d'an A. Perrot, *Renner Feiz ha Breiz, Scrignac*.

DIVINADENNOU

Responchoù divinadennou miz genver :

I. — Eur voutailhad gwin-ardant. II. — An ouc'h hag ar wiz. III. — Er vilin. IV. — Ar C. — V. — Tostaat outan.

Responchoù divinadennou miz c'houevrer :

I. — Divron ar vioc'h. II. — Ar zil. III. — Ar vi. IV. — An amann. V. — An amann.

Responchoù divinadennou miz meurz :

I. — Ar skeud. II. — Unan anezo a oa mab da unan ha tad da eun all hag en hent-se ne oa, e gwirionez, nemet tri o leina : an tad koz, an tad hag ar mab binan. III. — Hizio. IV. An amann a vez sallet hag a gas au holenn d'ar marc'had. V. — Ar ruak pe groc'hen ar gwez.

Gounideien tri miz kenta ar bloaz :

Louis Garo, Pont'n Abad, en deus bet 280 poent war 300.

O deus bet 260 war 300 :

Henri 'n Arvor, Meilars; Marsellina Cabon, Gwiseny; Tanguy Creignou, Cleder; Yann Diridollou, Sant Brieg; Yann an Du, Brieg; Louis Floc'h, Plomeur; Victor Gouriou, Saint-Thonan; Mari Laurent, Gwipavas; Marcel Le Parc, Sant-Brieg; J. Marc'hadour, Cast; Mari Rosec, Lesneven. Suzanna Simon, Gwitevede.

Trede divinadenn miz genver :

E pelec'h ema ar pevar beleg a zo atao o tougen an eskob war o diouskoaz? n'eo ket bet kavet he respont gant hini eus hol lennerien; anat eo n'eo ket bet ar re a glaske divinout o c'houlenn sklerijenn digand ar vilin-rien rak ar re-man a oar petra eo o eskob hag a lavaro d'eo c'h e vez atao pevar beleg ouz e zougen.

Kas a raimp o friziu, da fin ar miz-man, d'an 13 gornideg nevez koulz ha da c'honideien tri miz diweza ar bloaz tremen, ha n'eo ket en em gavet o friziu ganto c'hoaz.

Er miz a zeu le tigorimp ivez eur genstrivadeg nevez etre hol lennerien hag a bado adarre tri miz, evel ar re all.

Feiz ha Breiz

Mari

Bannou aour war e dal ha bleun fresk war e zae,
Davedomp setu deut « Miz Mae »,
Hag, e chapeliou Breiz, Mamm Doue, hon Itron,
A wel poblou dirag he zron.

Komzomp eus Mari: diwar he fenn morse ne vezo komzet a-walc'h, a skrive sant Bernez, eur servijer deol d'ezi; e mesk ar grouadurien, ar c'henta eo a-bell; ael ebed, en nenvou, sant ebet, war an douar, ne bign da ufern merc'h Anna ha Joachim; taol-micher an Holle'halloudek eo ar plac'h eurus-se; enorus evit Doue, frealzus evit an den, ginivelez Mari a zo, goude hini Jezuz, kaera burzud a c'hellfed gwelet en draonjenn-ma a zae-lou, re alies doaniet gant arvestou mantrus.
« Piou eo hounnez a zao, he fenn kelc'het gant gloar, Dinamm evel an heol, skedus evel al loar ? »

En unan eus e gantikou brudet, plijus meurbet da lenn, plijusoc'h c'hoaz da selaou, pa o laka da dregerni moueziou skiltrus e gopr kalonou biryidik, An Aotrou Guillhou a skrive gwechall ar gwerzennou-man :

Holl vugale Adam
'Zo diwar ar pec'hed ;
Nep hini n'eo dinamm,
O tont ebars ar bed.

Re wir eo kement se, siouaz! gant liou ar pec'hed eo merket ene an den, en e grouidigez; araok ar

vadiziant, kavell eur bugel nevez ganet a zo evel goloet gant eul lugenn denval: « Pokit d'ho krouadur, a lavare he amezeien da eur gristenez vat, o paouez beza mamm ». — « Nann, emezi, pas breman, n'eo ket koant a-walc'h d'am meno; ra vezo badezet da genta! » Pebez testeni a feiz, re zibaot, zoken e Breiz, en hon amzeriou-ni!

« An diaoul hon deus, eun deiz, bet holl dindan e bao, Met dirag ar Werc'hez krenn eo chomet a zao ».

Dinamm eo Mari: n'eus ket a fank ouz seul he zroad nag a boultrenn e plegou he mantell; etre ar pec'hed hag hi netra boutin nepret; disbenvel int evel ar gwenn hag an du; eur voger uhel, en em goll he c'hern en nenv, a zisparti an daou enebour an eil diouz egile, e doare ma ne hell ket heman sevel beteg enni, nag hi diskenn beteg ennan. Ar « Gonsepsion » dinamm oun, a lavaras Mari da Vernadetta e Lourd, d'ar 25 a viz meurzh, er bloavezh 1858: ha, bet konsevet hep pec'hed, nep gwech, e doug he buhez hir, n'he deus gliziet, gant penn he askell, an eienenn divalo-ze eus an droug, en em zaotr enni, hep mez tebet, hon hini.

Kenedus dreist muzul eo Mari: e Nazareth, e oa saludet « leun a c'hras » gant an ael Gabriel hag, evit gwir, muioc'h he doa a c'hras, pa he c'hrouas Doue, eget brasa sent ar baradoz, ha war gresk eo bet aet ar c'hras-se dalc'hmat, gant peb ober Mari: « Hep paouez, hep ehan, e pign warzu an nenv, Nag he fenn, nag he nij, morse ne zeu adrenv.

Ha saezenni a ra en diavez gened an diabarz: « Daoust ha kaer e oa ar Werc'hez, a c'houlenne digant Bernadetta, neuze war he zremenvan, e Nervers, eur vignounez vihan d'ez? » — « Ker kaer, eme al leanez, he daoulagad savet etrezek an nenv, ken kaer e oa, ma ne ziouan er galon, goude beza

he gwelet, nemet eur c'hoant: mervel evit he gwelet adarre ».

Madelezuz eo Mari: kalz muioc'h eget holl mam-mou an douar: « Me eo an drugarez » a lavare hi, eun deiz, e Pellevoisin, da Estella Faguette, evel Bernadetta, eur verc'hig a netra:

Derc'hel a ra warnomp digor he lagad lemm, Prest eo he diousskouarn da zigemer hor c'hlemm; Eun hirvoud, eur bedenn, eur jestr ha netra ken, Ha setu hi d'an traon, da frealzi an den.

Nag a dud tennet a boan ganti, blieniet, war an hent eun, drezi, goudoret tomm enni!

Galloudus meurbet eo Mari: du-ze, e Lourd, e krizas he zal ha kerkent e redas kuit bandennou diaoulou deuit eno a-raoz evit sponta Bernadetta ha mouga en o bouedenn ar birc'hirinereziou a dlle, er c'hantvejou da zont, digas milionou ha milionou a gristenien, a bevar c'horn ar bed, da gana, da bedi, da « brosesionia », dirag skeudenn ar Werc'hez, e-hars ar Pyrenou.

Lak da zaouarn e kroaz,
Daoulin war al leur noaz,
Ped hirio, ped warc'hoaz,
Te, den laosk, te, krener,
Mari, da Vamm dener;
Kenerzet e savi
Da soroc'h e tavi
Ha kalon a gavi ».

Kanol an holl grasou eo Mari: etre Jezuz, ar Feunteun, ha ni, ar sec'hedet, emañ aze, evit henchacha dour ar vuhez beteg hon dienez, hag eurus, teir gwech eurus neb piou bennak en em dro warzu Mari, da derri e zec'hed!

« Hi hen sturio da eva
E eienenn ar gwir beva ».


Erfin, hor Mamm eo Mari hag eun dra a jom ganeomp da ober, beza he bugale. « Ha karit a rit-hu Mari, a c'houlenned ouz sant Stanislas Kosta ? — Ma e karan Mari, emezan saouzanet ? Met hi eo va Mamm ».

Ma, grit eveldan, karit Mari, rag ho Mamm eo.


« It war ribl ar steriou,
Pignit war lein ar c'hleun,
Ha deuit, gant ho pleun,
Beteg he aoteriou ».

J. L'HELGOUAC'H, O. M. I.

Dinec'ha marc'hadour ⁽¹⁾



Di - ne - c'ha mar - c'ha - dour a zo war an dou - ar



Di - ne - c'ha mar - c'ha - dour a zo war an dou - ar



Di - ne - c'ha mar - c'ha - dour a zo war an dou - ar



E ve - fen, a dra zur, a - nez eur plac'h klou - ar.

(1) Eun ton all a gavoc'h d'ar zon-man e *Chansons populaires du Pays de Vannes*, dastumet gant Loeiz Herrieu, gant ar c'homzou brezonek ha gallek gant an ton merket: Eur pikol levr bras 31 lur 16 gwenneg, e Ti Loeiz Herrieu, Kerneute St Karadeg, Henbont c/c 241-28 Naoned.

1

Dinec'ha marc'hadour a zo war an douar
E vefen, a dra zur, anez eur plac'h klouar.

2

A garan hen gouzout ha karet oun ganti
Ha pa vez pell diouzin ' maoun oc'h huanadi.

3

Dalc'het eo Jannedig ha laket eo e kampr
Alc'houezet warnezi gand eun alc'houez arc'hant.

4

Dont a ray eun antzer e laerin an alc'houez
Me'm bo va Jannedig, en despet d'he lignez.

5

Hag e vefen en dour betek va daoulagad
Ma'm bevez Jannedig me 'n em gavo ervat.

6

Tavit, tavit, va dous, tavit, na ouelit ket;
Tavit, rak an nor-man ne d'eo ket alc'houezet.

7

Den yaouank, va mignon, na dorrit ket ho penn,
An nor ne d'eo serret nemet gand eur blouzenn.

8

An nor ne d'eo serret nemet gand eur blouzenn;
Roit eun taol skoaz d'ez, hi zigoro a-benn!


9

Ha pa voez aet e kampr hag erruet ganti
Eno, savas neuze c'hoarzerez ganeomp-ni.
Dastumet e Kamors gant F. G. Douar-Aire.

Aotrou Pont'n Abad

Kastell koz Pont 'n Abad, laket bremañ da ober ti-kêr, n'eo mui nemed ar skeud eus ar pezh ma oa gwechall, p'edo en e gaer, gand e zaou dour uhel eun doenn sklent war o beg, gand e voger ledan, touribellou warni beb an amzer, a rae an dro d'e horz bras hag e zor war wint ; ñevet eo bet, war a leverer, er bloavezh 1675 gant gwazed Combrit ha Lambourg, pa deujont e ker da zevi bureoioù ar Paper timbr ha da laerez tiez ha dreist-holl kaviou an dud chentil. Ar Roue Loeiz XIV en devoe ar grizder da lakat krouga eun douzenn azeza, da gas eun ugent all bennak d'ar galeou ha da c'hourc'hemenn diskar tour ar barrez hag hini he zrev. Kastell Pont 'n Abad a oa perc'hennet neuze gand eun den eus ar C'hreisteiz, hanvet Hernoton ; eur renka a voe graet d'ezan, met ne voe dalc'het, en e zav, nemed unan eus e dourioù, tour an holorach vrudet-se a voe laeret gant tud Konk-Kerne, epad brezelioù ar Re Unanet, hag a roe tro da Gerneviz da lavarout e veze klevet eus a Konk-Kerne an eur o seni gant olorach Pont 'n Abad.

War a lavar an dud, p'edo ar c'hastell-ze en e gaer, ha pa c'helle e vestr azeza e Parlamant Breiz, etouez nao aotrou brasa ar vro, e oa perc'hennet gand eun den chentil hag a veze ken tennañ e benn hag eur bod-spern e kreiz ar goañv. Ha koulskoude n'en devoa lec'h ebet da veza nec'het gant netra : yec'hed en devoa ; e swreg a oa eur vaouez hegarat ; e vugale a oa koant evel an deiz ha ker pinvidik e oa ma ne quie ket an niver eus e zanvez.



Tour bras Kastell Pont 'n Abad.

Daoust da-ze n'oa ket evid en em laouenaat ha ma c'helle Tregeriz lavaret : *trist evel Doue Pleuveur*, Kerneviz o divije gellet lavaret ivez : *trist evel aotrou ar Pont*.

E gerent hag e vignoned a glask e zidui o lenn d'ezan leoriou plijadurus, o sevel c'hoariou en e gastell, pe ouz e gas da vale a-bell, da Roazon ha d'an Naoned, pe da bardona da Folgoat, d'ar Wir-Zikour, da Venez-Mikael, da Zant Matulin Monkoutour, ha da Zant Juluan Vouvant ; Kaer a oa poania, gwellaenn ebet ne deue ennan. Sonerien ha kanerien a dremene, hag a veze graet d'ezo dont er c'hastell ; an holl a c'hoarze ganto, nemed an aotrou a jome atao ken tenval e benn hag unan hag en divije lonket eur c'harr houarnet.

Dont a reas da veza nec'het e-unan gand e glenved ; mont a reas da gaout medesined hag ar reman a lavaras d'ezan eber tra pep tra evid en em barea diouban ma n'en devoa ket a c'hoant da goueza e stal ar follentez.

Aotrou Pont 'n Abad a lakeas neuze embann, dre Vreiz a-bez, e roje eun dournad mat a arc'hant d'ar c'henta hini a deuje a-benn d'e lakat da c'hoarzin. Dont a reas c'hoarierien, kanerien ha rimadellerien, a-gleiz hag a zehou, da glask e laouenaat ; hini anezo ne deuas a-benn eus e daol ha dizrei a rankjont d'ar gêr, hep beza gounezet an arc'hant edont o klask gounit.

Hogen, en amzer-ze, e oa o chom, e kichenik Kerahez, eun den plijadurus hanvet Laou Gerlaouen : n'oa ket er c'hanton eur marvailher par d'ezan ; sanailhet en devoa, en e spered, eur bern danevellou, istoriou, mojennou, soniou ha gwerziou ha ne veze graet pardon na leur-nevez ebet, er vro, hepdan. Pa glevas petra c'houlenne aotrou Pont 'n Abad, e tiskennas eus ar menez ha dre Gastell-nevez ar Faou ha Kemper ez eas warzu kêr-

benn ar Bigouden. P'en em gavas dirak dor kastell Pont 'n Abad, e komzas ouz ar porzier a oa er porz hag e lavaras d'ezan :

— Klevet em eus eo ken tenval penn da vestr hag hini eur Juzev en deus kollet mid skoed ha den ne deo a-benn d'e laouenaat. Sur a-walc'h n'eus bet, betek hen, war e dro, nemet genaouerien ha ne ouezont ket troada eur marvailh ; me ne vezan ket nec'het gand an dra-ze ha marvailhou am eus hag o divije bet laket ar paour kêz Job e-unan da c'hoarzin war e vern teil. Va c'has betek an aotrou hag a-raok eur c'hart eur aman, ma teu sant Anton war va sikour, e weli da vestr o c'hoarzin hag o tigeri e c'henou kel ledan ha porched Gouesnou.

— : Eun tamm brabanser out, 'm eus aoun, eme ar porzier ; me 'm eus gwelet kals re all o tont aman en da raok hag a oa kel lorc'hus ha te da zont hag o deus ranket mont ac'han, lostok a-walc'h. N'eo ket eun dra aes lakat va mestr-me da c'hoarzin ha neuze, selaou aman ganen, n'as kasin ket beteg hen, nemet toui a rajes rei d'in an hanter eus da c'hounidegez, ma teues a-benn eus da daol ; ma ne doues ket rei an dra-ze, n'ez peus nemed en em denna !

Laou a glaskas lakat ar porzier da rei d'ezan eun tamm rabat war ar gwerz-butun a c'houlenne, met ne deuas ket a-benn amezan ; abarz ar fin, skuiz o chipotal e tonas rei an hanter eus e c'hopr hag e voe kaset da gaout an aotrou, a oa ken tenval ha biskoaz e benn.

— : Te eo, amezan, ken du e benn ha penn eur glaouaer, az peus c'hoant d'am farea eus va zristidigez. Gwelet em eus kement a dud diskiant evel-dout, ma 'z oun heuget ganto. P'eo gwir out deuet betek aman gwel ha dont a c'helli a-benn eus da daol ; ma vankes warnan, ne vezo ket

manket warnout : hanter kant taol baz a dapi di-war-da-gein a-raok ma chachi da skasou ganez er maez eus ar maner-man.



Laou Gerlaouen o c'houlenn hent Pont 'n Abad.

— : Ha ma ho lakan da c'hoarzin ?

— : O ! neuze ez pezo eur yalc'h aour a gant skoed hag e chomi aman keit ha ma kiri d'am di-dui.

— : Mat ! graet eo ar marc'had, eme Laou, ha breman, azevit aze war ar gador vourret-ze ha selaouit mat ar pez ez an da lavarout d'eoc'h.

Ha Laou e en em lakeas da zibuna e varvailhou fentusa ; konta a eure, an eil goude eben, istor Yann Biouber, hag hini Bilz, Foar al Lard e Landreger, ha sotoni tud Berrien a oa o vont da bardona da Zant Yann ar Biz hag a glaskas en em walc'hi en eur parkad lin e bleun o devoa kemeret evid ar mor.

Goudeze e kamas eun toullad soniou eus ar re goanta diwarbenn ar vilinerien hag ar gemenerien. Holl mevelien ar maner, o selaou a-dre kein an noriou a venne freuza o c'hofou o c'hoarzin, met o mestr a jome atao ker mut ha ken trist ha kentoc'h. Goude beza komzet epad diou eur ar paour kaez Laou, gleb teil o c'houezi, a zec'has e dal hag a jomas a-zav.

— : Koll oun ganeoc'h, Aotrou ! Gwelout a ran e vijen deuet a-benn da lakat roc'h krenerez Huelgoat da c'hoarzin en ho raok. Galvit ho pour-reo hag arabad d'ezan skei re galet ganen rak graet em eus gwella ma c'hellen !

Unan eus soudarded ar c'hastell a deuas gand eur pennad baz en e zourn ; gourc'hemenn a eure da Laou diwiska e zae war gorre, daoulina war an douar hag harpa e zaouarn hag e benn war eur skaon ; ar zoudard a stagas da skei, met ne skoas ket re galet ; ar marvailher-reuzeudik a glemme hag a gonte an taoliou ; pa oa kouezet war e gein ar vaz evid ar pempet gwech war nügent, e savas, en e zav, evel eun tenn.

— : Arabad eo sevel c'hoaz, eme an Aotrou ; n'ez peus bet nemed an hanter eus da freskad.

— : Gwir eo an dra-ze, Aotrou, eme Laou, o skrabat e gein ; met ar rest am eus prometet d'ar porzier ; n'en deus va lezet da bignat betek en-

noc'h nemet goude beza roet va ger da ranna gan-tan an hanter eus ar pezh a rojec'h d'in hag en hent-se, breman, ema e dro da zont da lakat e gein aman. Ha p'eo gwir em eus bet pemp taol war nugent, lakit rei ar pemp taol war nugent all d'ezan, breman, rak evelse eo e oa bet graet ar marc'had etrezomp.

— : Ya ! ya ! dileet eo, avat, eme an aotrou ! Grit d'ezan dont aman raktal ma vezo graet eun hilliga d'e gein.

P'en em gavas ar porzier dirak tud ar c'hastell, — rak diredet e oant holl da welout an nevezenti, — ha pa welas ar pezh en devoa chachet war e gein o klask ober e baotr fin e kouezas e veudig en e zourn, e kemeras eur penn ken farsus hag e tiskouezas kaout kemend a aoun, ma tirollas an aotrou da c'hoarzin o sellout outan ; c'hoarzin a eure e walc'h hag e dud a dridas ouz e welout o c'hoarzin : pare e oa.

— : Nag e ra vad c'hoarzin, emezan ; asa, Laou ; deuet out a-benn eus da daol, evelato ; keuz am eus da veza bet laket da skei evel ma 'z out bet skoet ; evit para da vlonsadennou, e lec'h kant skoed tez pezo daou c'hant hag arabad d'it avat rei eur gwenneg anezo d'ar porzier divalo en deus bet c'hoant d'as laerez ; en dizro e chomi hep rei d'ezan e daoliou baz, petra bennak m'en deus o gounezet.

Laou a jomas eun nebeud deizioù er c'hastell ; ha gand e istoriou kaer e roas tro d'an Aotrou da c'hoarzin meur a wech : goudeze e pignas adarre war e venez, pinvidik mor, gand ar gopr en devoa gounezet oc'h ober e dro.

G. P.

Buhez an Tad Maner

Ar bloavezioù diweza. Ar maro

(1680-1683)

Ar bloavezioù a dremene, ar gozni a zeue, met nerz-kalon an Tad Maner ne vihanæ tamm ebet. A vec'h m'en deveze klozet eur mision, ma kroge en eun all, hag ez ae evelse dre eskoptioù Breiz o rei da glevet komzou Doue hag o savetei an eneot.

Eus 1680 da 1683 e prezegas e parrezioù hag o doa e glevet meur a wech araok, evel Plounevez-Kintin e Kerne; Konk La, Lokrist e Leon; e Rohan, eskopti Gwened; e Pont-Melvez, esgopti Treger; e Pluguffan, Plounevez-Portzay, eskopti Kemper, ha dreist-holl e Ploare hag e Douarnenez, a gare kement. O prezeg e chapel sant Mikael, e Ploare, e 1681, e tigasas da sonj d'an dud eus an holl c'hrasou o doa bet digant Doue, eus ar prezegennou a oa bet graet d'ezo abaoe m'oa deuet en o zouez Mikael an Nobletz : « Ah! emezan, tud Ploare ha Douarnenez, Mikael an Nobletz, ho tad ker mat, ha me, e vab, hon eus labouret ha poaniet en ho touez. Me ho ped, evesait, evit na vo ket kollet kement a boanioù, a bedennou, a c'hrasou. » An daerou a zeuas ker puilh d'e zaoulagad, ma ne c'hellas ket echui e brezegenn.

An dud a voe glac'haer bras, rak kompren a raent edo an Tad Maner o lavaret kenavezo evit mad da dud Douarnenez.

Eus Kerne ez eas da eskopti Raozon d'ober eur mision e parrez Sant Sulpis. Galvet da Bariz gant Rénerien e Urz e lezas an Tad Martin da zigeri ar mision. Hen a ziredas ive kerkent ha ma c'hellas, hag ar mision a zougas kalz fronez. Tud paour, tud pinvidik, tud chentil, a zirede da glevet ar visionerien; itronezed a zeue ive d'ober eur reted eiz dervez en abati a oa war douar

ar barrez. Leanezed an abati-ze a zikoure ar visionerien
o kana hag o teski kana ar c'handikou.

Goude Sant-Sulpis, ar visionerien a brezegas c'hoaz e
parreziou all eus eskopti Raouzon, Noyal ha sant Jorj-Rein-
tembaült, bro an Tad Maner.

Da c'houde e tistrojont da vro Gerne, hag an Tad Maner
a jomas da ziskuiza e Kemper, o c'hedal koraiz 1682. E
Krozon eo e prezegas epad ar c'horai-ze, galvet gant an
aotrou person, an aotrou a Goetlogon, eur mignon bras
d'ezan. An aotrou a Goetlogon a wele e fallae yec'hed an
Tad, hag e pede anezan da deurel evez, da espern e nerz.
Eur wech e lavaras d'ezan evelhen : « Tad, ma tleit mer-
vel dizale, marvit aman. Ni a viro ho korf gant doujans. »
An Tad a respontas, en eur vousec'hoarzin : « E Krozon,
abalamour d'ho madelez, n'em eus graet nemet gounit
nerz. Ah nerz-ze a dlean breman da zispign e lec'h all,
hag eul lodenn vras eus talvoudegez va labour a vezo
d'eoc'h. »

Mont a reas eus Krozon da Yvias ha Pempoull, e eskopti
Sant-Briek, ha da Yourbriak, e eskopti Treger. Kaout a
reas er parreziou-ze ar feiz virvidik a oa bet hadet enno
gant ar mision ugent pe dregont vloaz araok. Poania a
reaz d'he startaat c'hoaz, met tost e voe d'ezan koli eno e
vuhez. E Bourbriak, eun dervez, o tiskenn eus ar gador-
brezeg, e kouezas klanv, ha ker klanv ma kave d'an holl
edo o vont da dremen. Gant an urlou, ar gwentr eo e oa
taget, ha biskoaz, emezan, n'en doa bet poaniou ker kriz
da ziwaska. Ar visionerien a oa endro d'ezan a grede oa
graet gantan, hag unan anezo, d'an aotrou Goff, a c'hou-
lennas dizantan : « Daoust hag e Bourbriak eo e tleit mer-
vel? » — « Nann, emezan, met war douar sant Kaourin-
tin. » Eun all a c'houlennas c'hoaz : E pelec'h e c'hoantait
beza beziet? » Hag e respontas kerkent : « Ar wezenn a
jomo el lec'h ma vezo kouezet. »

Eun nebeut nerz a zeuas d'ezan, hag ec'h implijas an
nerz-ze o labourat e diou barrez eus eskopti Kemper,
Plounevezel ha Skrignag. E Plounevezel e pareas an Tad
Martin eus ar hoan-skouarn gant kloc'hig Mikael an No-
bletz. An aotrou Kanant, person ar barrez, a lavaras ez
oa eur plac'hig, foll abaoe pell amzer, ha ne c'helle

ket dont d'ar mision. « Kemerit ar c'hlóc'hig, eme an Tad
Maner d'an Aotrou person; sonit hean dirak skouarn ar
plac'h, ha grit d'ezi pokat d'ezan. » An aotrou person
a zentas, hag ar plac'h a voe paret; dont a eure d'ar
mision evel ar re all.

Pa zigouezas en eil parrez, e Skignag, ar barresioniz o
doa dalc'het sonj eus ar pezh en doa lavaret d'ezo meur
a vloaz araok, e teufe c'hoaz da brezeg d'ezo araok e varo.
Lavaret a rajont neuze enno o-unan : « Tost eo ar maro
d'ezan. » Hag holl o devoe mall da zont da govez gantan
ha da glevet e genteliou diweza. Siouaz! Karantez an Tad
a oa brasoc'h eget e nerz. Ret e voe d'ezan ehana araok
m'oa peurc'hraet ar mision.

Goude beza diskuizet eu nebeut dervezioù, e kredas gel-
lout ober adarre eur mision bennak. Prometi a eure rei
eur mision e Plouye hag e reas eur veach betek Sant-
Brieg evit en em glevet diwarbenn eur mision all e Uzel.
Epad m'edo e Sant Brieg, ec'h en em zantas skuiz-maro,
hag o tremen dre eur ru, e chomas a-zav hag e lavaras
d'an Tad Martin : « Distroomp buan war zouar Kerne. Ret
eo distrei. Doue a zo o tont d'her c'hemenn d'in. » Ha ker-
kent setu i ha kuitaat Sant-Brieg.

O tremen dre Gillio, an Tad Maner a c'hellas komz eur
wech c'hoaz gant an aotrou Priat, unan eus e vrasa mi-
gnoned hag eus e wella misionerien. Eun nebeut derve-
ziou e chomas ive e kloerdi Plougerneve. Eno e kave mi-
gnoned ha misionerien a oa bet kelennet gantan. Eno eo
e prezegas hag e reas katekiz evit ar wech ziweza. Eno
ive eo ez eus dalc'het ar muia sonj anezan.

Daoust m'oa klanv, an Tad Maner a c'hoanteas mont
betek Plevin. Met ne c'hellas ket mont pelloc'h. Digemeret
gant an aotrou person en e bresbital, e rankas mont d'e
wele.

Terzienn vras en doa ha poan en e gostez. Antronoz
ne zavas ket da lavaret an oferenn, ar pezh a ziskoueze
oa gwall zalc'het.

O klevet hano eus klenved an Tad, gouarnar Keraez
hag e wreg a ziredas da Blevin hag a bedas an Tad
Maner da zont d'o maner a oa tost. An Tad a lavaras
d'ezo e anaoudegez vat, met ne fellas ket d'ezan mont

ganto. « Plas eul lean, a lavare d'an aotrou person p'oant aet kuit, n'eman ket en eur maner. »

Ar c'hlenved evelato n'en doa ket a zoare da veza risklus, hag an Tad Martin, deuet da Blevin gant an Tad Maner, e guiteas evit mont da vision Plouye.

Met an derzienn a greskas, hag ar medesin a zisklerias oa dalc'het an Tad Mat gant eur goenvadenn-skevent, ar pez a oa gwall risklus evit unan eus e oad. Kaset e voe kelou da Gemper.

Anna a Gernaflen, madoberourez ar misionou, a en em lakéas en hent raktal gant an aotrou Castel, gwella medesin Kemper. N'helle ket en em viret da lenva o welet an Tad. Heman a layaras d'ezi : « Pedit. » — « Pedit a rin, emezi, met c'houi, pedit ive, evit ma roio Doue ar yec'hed d'eo'h. » — « Doue, emezan, n'en deus ket goulennet kuzul diganeomp p'en deus hor c'hrouet; ne c'houlenno ket kennebeut, p'hor galvo davetan. »

Evel ma fallae bemdez, an Tad Maner a reas e govesion ziweza d'an Tad Demaine hag a en em breparas da reseo e Zoue er go'munion. Goude béza kommunit gant ar vrasa feiz ha karantez, e c'houlennas ar c'houlouenn venniget, hag e lennas a vouez uhel e vouestlou a Lean eus Kompagnunez Jezus. Lavaret e voe d'ezan komz a vouez izeloc'h, gant aon da lakaat an derzienn da greski: senti a reas raktal, met gwelet e veze war e vuzellou ar garantez a verve en e galon d'ar mare-ze. En em rei a rae holl da Zoue ha da Jezus, e Vestr.

Epad ma huanade, e veze klevet ar c'homzou-man o tont eus e c'henou : « Jezus eo va buhez; mat eo d'in mervel, Jezus eo va c'harantez. » — « Mari, mamm a drugarez, hon difennit ouz enebour hon encou, hon digemerit da eur hor maro. »

An derzienn hen deve, ha goulskoude n'oa ket a vall da rei d'ezan an Nouenn, rak lavaret en doa e c'houlennfe e-unan, pa vije poent. Goulenn a reas, ha p'en em gavas an Tad Demaine gant an eol sakr, her pedas da lavaret a vouez uhel ar pedennou, evit ma c'helfe o c'hlevet ha respont. Respont a reas, hag e tiskoueze kement a feiz, a garantez ma lakae an holl da ouela.

Ar c'helou eus e glenved a oa en em skignet buan dre holl eskopti Kemper. Eus a bep tu e tirede tud, beleien ha tud lik, da c'houlenn penaos edo an *Tad mat* ha da reseo e vennoz. An Tad Maner a zigemere an holl hag e kendalc'he beteg ar maro da gelenn ha da rei aliou mat. Ar medesin a oa souezet o wele: e c'helle c'hoaz, gant eur c'hlenved evel m'en doa, komz gant kement a furnez hag a nerz.

An deiz araok e varo, evel pa n'en devije ket mui e skiant-vat, e lavaras, a benn diou wech dioc'h tu : « Roit eur gador d'an aotrou Nobletz. » Met, piou a oar ha n'edo ket, e gwirionez, Mikael an Nobletz en e gichen war e dremenvar? Piou a oar ha n'oa ket digaset gant Doue Mikael an Nobletz evit hen difenn, d'ar mare-ze, eneb ardou an drouk-spered?

An Tad Maner a c'houlennas ive an tad Martin, e genvreur karet, Lavaret e voe d'ezan ne c'helle ket kuitaat Plouye abalamour d'ar mision. « Mat eo, emezan, ra vo lezet e Plouye; eno ez eus ezomm anezan. Met ra vo roet d'ezan, e testeni eus va c'harantez, ar grusifi a zougan war va c'halon. »

Nebeut amzer araok ar maro, an Tad Demaine a c'houlennas e vennoz, goulenn a rae ive e vennoz evit aotrou Kanant, person Plevin, hag evit an holl visionerien. An Tad Maner, gant ar vrasa madelez, a zentas hag a bedas Hor Zalver d'o benniga holl ha da venniga o labour.

Seulvui e tostae ar maro, seulvui oa laouen ar c'hlanvour. En em ginnig a rae holl da Zoue, hag e lavare komzou a garantez keit ha ma c'hellas finval e vuzellou. Eur c'hart- eur goude ma ne c'hellas mui kaozeal, e roas e huanad diweza, d'an 28 a viz genver 1683, wardro eiz eur diouz an noz. Mervel a reas goustadik, ha goude ma voe tremenet, e vije bet lavaret oa kousket. Oajet oa a 77 vloaz hag 58, en doa tremenet e kompagnunez Jezus.

Kerkent ha ma voent sur oa maro, ar re holl a oa war e dro a gouezas d'an daoulin, ha goude beza poket d'e zaouarn gant doujans, a en em erbedas outan evel ouz ar zent eus ar baradoz. Pep hini a glaskas kaout eun dra bennak eus ar pez a oa bet d'ezan.

DRE AR BRD

III

TIEZ ANNEZ

Tiez pri


En em gavout a reomp goudeze en Ejipt, el lec'h ma oa eur sevenadurez a oa e barr he brud 4.000 bloaz bennak a zo — ar beziou dizoloet, ar Sfins hag ar Pikerniou (1) brudet a ziskouez pegen skiantek ha pegen pinvidik e oa ar re a oa mistri war ar vro d'ar mare-se. Eno e kaver c'hoaz breman eun doare da ober tiez ha n'en deus ket kemmet abaoe ar mare-se. Kouerien ar vro ne gavont netra dereatoc'h eget ober o ziez e pri. Ya, gant pri ha kolo hepken — hag eun dreujenn wez bennak da ober ar frammadur — eo e vezont savet. Ejiptiz a ra eun doare ardhilh en eur veska o c'holo gant ar pri hag etre ar postou e lakaont da genta kolo. A bep tu avat e lakaont eur palastrad mat a bri diabarz ha diavaez. Kement-se holl ne vez ket pell o sec'ha dindan gor an heol.

Du-hont ne gemerer ket a amzer da ober brik evit sevel an ti; hemañ a deu da vrik goudé ma vez savet. N'eo ket mat, avat, e kouezfe, re an holl a c'hlaou rak a-hend-all e vefe buan dispennet an ti hag ez afe gant an dour. A drugarez Doue evit an dud a zu-hont e vez a-wechou bloaveziou a-hed ha ne gouez ket eun dive-radenn c'hlaou. Int, da vihana, ne c'hellint ket klemm abalamour ma n'o devezo bet hañv ebet.

(1) Pikerniou : les pyramides.


E bro ar re zu

En Ejipt emamp dija en Afrika, bro ar re zu. Ejiptiz, avat, n'int ket c'hoaz renket e-touez ar gouennou du. Ret eo d'imp kenderc'hel gant an Nil e-pad pell amzer evit degouezout e gwirionez gant ar vorianed.



Peogwir ez eomp etrezek ar c'hreizteiz, deomp betek bro al lennou bras, betek bro ar C'hongo belgiat. Ar C'hongo a zo eur vro domm goloet a goadou bras ha stank. Enno e vev an anevaled brasa: an olifant, ar frikorneg, an dourvarc'h, an naered bras, an gnoù ha kalz re all c'hoaz. Muioc'h en hanternoz, er Soudan e kaver al leon hag ar jirafenn.

Er vro-se, er c'horn anvet Ouganda e kavomp eun doare tiez eus ar suezusa. Taolit eur sell war ar skeudenn a zo aman uheloc'h. Petra eo an tamm traou-se? emezoc'h. Eur gestenn wenan a dra sur, petra 'ta e vefe ken; nann, paour kêz tud, eun ti eo ez eo, eun ti evel pep hini. N'am eus ket klevet lavaret ha yac'hus int, gouzout a ran avat ne glemm ket ar vorianed diouto.



Diaes eo ober hent dre an Afrika; gwella 'zo d'ober eo mont war-zu an hanternoz betek al lenn Tehad ha mont da c'houde da dapout ar stêr Nijer evit mont dre vag betek ar Senegal. En eur ober an hent-se e c'hellimp gwelout ouspenn kant doare lochennoù disheñvel; lod a zo karrez, ha lod all kelc'hiek pe beuzke c'hiek. Lod o deus eun doenn a-bik, lod all o deus eun doenn e stumm eur voull. An tiez-se a zo graet o mogerioù a-wechou gant pri, mes aliesoc'h ez int e kolo pe e skourrou gvez. Toet int gant kolo, pe raosk, pe vouted. Kement a zo anezo ma n'hellomp ket chom da dreinella ganto.

Lavaromp eta kenavo d'ar vorianed ha kemeromp eur vag evit distrei da Vreiz e-lec'h ma 'z eus c'hoaz ivz tud o veva e tiez marc'had-mat.

G. DEWI.

Theresa Neumann

Ar plac'h a zoug gouliou Hor Zalver



Theresa Neumann

Konnorsreuth a zo eur barrezig vihan eus a eskopti Ratisbunn, er Baviera hag e tremen enni, abaoe ar bloaz 1923, traou ker sebezus ma 'z eo deuet da veza anavezet evel unan eus lec'hioù brudeta ar bed. An hini he deus chachet brud war ar barrez-se eo Theresa Neumann. Dont a eure er bed d'an 9 a viz ebrel 1898, a goueze, en dervez-se da Zadorn-Fask; he zad a oa kemener, dre e vicher, hag a zalc'he eun tammig douar a labour e-unan; dienez a oa bet en ti, meur a wech, met tud a feiz a oa en e benn ha gourc'hemennou Doue ha re an Iliz a heulient gwella ma c'hellent.

Theresa a oa ar gosa eus a zek hag abred e rankas staga d'al labour; d'he fevarzek vloaz e oa krenv hag eur sac'had a 150 lur n'edo ket en tu all d'he galloud. Kaset e voe da zervicha en eun ostaleri hag he brasa poan oa gwalet ar pec'hejou a rae eno ar yaouankiz ken etrezo ha gwella ma c'helle e klaske d'goll an Aotrou Doue eus an d'smegans a daoie warnan pec'hejou an dud.

D'an 10 a viz meurzh 1918, e krogas an tan gwall en fi tosta d'an hini m'edo ennan o servicha; eur zulvez e oa hag epad ar brezel edod c'hoaz; ne oa ket a wazed er gêr; Theresa a labouras, gwella ma c'hellas, da vouga an tan; pignet war eur skeul e savas n'eo ket aes gouzout pet sailhad dour da stlepel war an doenn o tevi; glep-dour-teil e oa; en eun taol e krogas eur boan skrijus en he c'hein; kaout a eure d'ezi e oa torret he-mell kein; ar zailh a gouezas eus he dourn ha mil boan he devoe o tizrei d'he zi; adalek an deiz-se betek ar 17 a viz mae 1925, e tremenas he holl amzer etre an oaled hag an tan hag e miz meurzh 1919 e kollas zoken ar gweled. Goul'ou, al lin-brein o tont anez; a zavas en he c'hein ha kof he gar gleiz a oa eun toull ken doun ennan ma wellet an askourn.

Er bloaz 1923, Theresa ne oa ket gouest ken da gemerout netra nemed eul loiadig traou pe ziou da eva; he zud n'o devoa fizians ebet ken d'he gwelout o pa-rea ha rannet o devoa he dilhad a-gleiz hag a-zehou.

En he c'hlenved Theresa a voe eur skouer vat evit kement hini a deue d'he gwelout; astennet war he gwele hep gellout ober eun holl vad, e lec'h en em glemm e klemme he mamm a ranke chom da evesaat outi hag hi eun hanter re da ober.

Evit kaout nerz da c'houzanv he foaniou e pleustre war boaniou Hor Zalver hag ec'h en em erbede alies ouz eul leanez a gleve hano anezi hag he devoa bet, evel di, kals poan da c'houzanv edoug he buhez: The-reza ar Mabig Jezuz.

Tra souezus, d'an 29 a viz ebrel 1923, d'an deiz ma voe laket gloar Karmel Lisioux war roll an dud eurus, Theresa Neumann a deuas da welout sklêr.

D'ar 17 a viz mae 1925, d'an deiz ma voe laket hano Theresa Martin war roll ar zent, Theresa Neumann a glevas eur vouez o c'houlenn outi: « C'hoant ez peus da veza pare? » —: « Ya! emezi! ma plij an dra-ze d'an Aotrou Doue! pe beza klanv, pe vervel, an dra-ze a zo henvel! » Harpet gand eur vrec'h ne wele ket, Theresa Neumann a zavas war he c'hoazez, ar pezh n'he devoa ket gellout ober, c'houec'h vloaz hanter a oa: « Gouest oun breman da vale, » emezi hag e voe klas- ket dilhad d'ezi p'eo gwir e oa bet roet he dilhad he-unan d'an dud all gant he c'herent ha n'oant ket gouest da gredi e vije deuet da gaout ezomm anez; ken.

Bale a c'hellas, harpet war eur vaz. D'an 30 a viz gwengolo 1925, eiz vloaz war nugen, deiz evit deiz, goude m'oa maro santez Thereza ar Mabig Jezuz, e teuas eur wellaenn all enni hag, en deiz-se, evid ar wech kenta, abage seiz vloaz, e c'hellas mont d'an iliz hep baz hag hep skôr.

D'an 10 a viz du eus ar bloavezh-se ha d'an 19 a viz du eus ar bloavezh warlerc'h, e voe pareet c'hoaz eus klenvejou all, dre vuzud.

Theresa a oa deuet da anaout da vat evit petra ema an den war an douar-man ha da c'houzout eo hent ar groaz an hent eüna da vont d'ar baradoz. Goude beza he c'hizellet epad pell hag hir amzer gant kizell ar boan an Aotrou Doue a roas d'ezi ar c'hras da welout arvestou ar Basion, an eil goude egile, evel ma vije bet e Jerusalem p'edod ouz e lakat d'ar maro; rei a eure d'ezi ivez ar c'hras da zougen war he c'horf ar gouliou en devoa douget war e hini.

Gouliou ar galon hag ar penn a vez gwelet o tiwada bep gwener epad ma tremen dirak he daoulagad arvestou ar Basion; gouliou an treid hag an daouarr ne deu gwad anezo nemet da wenorveziou ar c'horaiz; da zeiz gwener ar groaz 1926, Thereza a skuilhas daerou gwad evid ar wech kenta hag abaoe, ken alies ha bep gwener, e skuilh daerou evelse.

P'en em gay an Iliz da ober eur gouel laouen bennak da wener, neuze, Thereza Neumann ne wel ket arvestou ar Basion; n'o gwel ket, ken nebeud, epad anzer-Fask; p'o gwel, e vel an dud a zo dirazi o finval hag o vale hag e klév, e arameeg, da lavarout eo e yez Hor Zalver, ar pezh a leveront.

Tra sebezus, abaoe ar bloaz 1923, Thereza Neumann ne zebr tamm, na kals, na ket; abaoe ar bloaz 1927 ne ev banne, na kals, na ket; ne gemer netra 'n holl nemed ar gommunion; n'he deus c'hoant ebet da zebri; c'hoant ebet da eva; c'hoant ebet da gousket, ha daoust da-ze e chom ker yac'h ha n'eus fors p'ou hag e ra he labour pemdeziek.

Ne anavez war an douar nemet daou rumm dud: ar re a gar Hor Zalver Jezuz-Krist hag ar re n'her c'haront ket. Karout a ra ar re a zo er rumm kenta; traez he deus ouz ar re a zo en eil rumm; kredi a ra n'ema ket Pons-Pilat en ifern; c'hoant difenn Hor Zalver en devoa; dre zempladurez eo en deus pec'hei kentoc'h eget dre fallagriez.

Poneza a ra wardro 110 lur; bep gwener epad gweladennou ar Basion e vez ker gwasket ma koll etre 4 hag 8 lur eus he fouez; a-nebeudou e c'hounit goudeze ar pezh he devez kollet. Ne c'heller ket mont d'he gwelout, da wener, pa vez he daoulagad o para war arvestou ar Basion; nemed aofreet e vefed bet evid an dra-ze gand eskob Ratisbonn; anez an dra-ze e vije mantrus ar berniou tud a vije war he zro.

Eul labousig melen, pesked rus ha bleuniou a zo en he c'hampr ha p'he devez eur pennad amzer d'ezi he-unan he brasa dudi eo beza o kempenn an iliz; tra souezus, he labousig melen hag a vez eun drugar e glevet o kana ne gred ket digeri e veg, da wener, pa vez he daoulagad o para war Basion an Aotrou Doue.

Daoust d'he faourentez ha daoust da baourentez he zud, Theresa ne gemer ket eur gwenneg na netra a dalvoudégez digand ar re a deu d'he gwelout. Distag diouz madou ar bed-man, glan a galon, sentus ouz an Iliz setu petra eo ar verc'h a zo bet dibabet gant Mab Doue evid dougen e c'houlou dirak an dud.

An Iliz a gemer he amzer ha n'he deus douget barnedigez ebet c'hoaz war burzudou Konnersreuth, met an eskobien hag ar c'hardinal Faulhaber, arc'heskob Munich, o deus o gwelet a gred, e goueled o c'halon, daoust ma n'hen embannont ket c'hoaz ema dourn Doue eno ha Pi XI en deus kaset e vennoz a bab da Dhereza Neumann ha d'an Aotrou Naber, person Konnersreuth, he c'hofesour.

Ar burzudou-ze, daoust ma n'eo ket ker ret ken o o c'haout, ha ma oa gwechall, a ra vad; lakat a reont ar gristen en da zevel o daoulagad etrezek ar bed all ha ma 'z eus tud hag a laka diaes o fenn ganto eo an dud difeiz ha ne fell ket d'ezo gwelout an Aotrou Doue oc'h astenn e viz dirak o daoulagad da ziskouez d'ezo hent ar baradoz; ar pezh a dremen, en amzer-man, e Konnersreuth o laka da skanvbenni ha da gounnari. C'hoant o deus da virout ouz an Aotrou Doue da ziskouez e c'halloud hag an Aotrou Doue, dre e oberou, a lavar d'ezo: « Aman emañ, ha n'eus mestr all ebet nemedoun! »

Ar burzudou-ze o deus laket feiz morgousket meur a hini da zihuna ha graet da veur a gristen dizrei war hent an iliz.

Da wener eo e tigor Thereza he daoulagad war ar-vestou ar Basion hag ez eus kristenien en dro d'eomp, dievez a-walc'h evid ankounac'haat eo da wener eo en deus Mab Doue gouzanvet ar maro. evito, pa ne fell ket d'ezo ober ar binijenn zister a c'houlenn an Iliz ouz he bugale, o chom hep debri kig en dervez-se.

Pevar bloaz a zo abaoe ma n'he deus Thereza debret tamm nemet bara an Elez e sakramant an Aoter a vez roet d'ezi bemdez. Lavarout a c'hell evel sant Paol: « N'eo ket me eo a vev met ar Christ eo a vev ennoun! »

Na pebez kentel hag a embann d'rak ar bed-holl an nerz a zo e sakramant an aoter: nerz ev d' ar c'horf ha nerz evid an ene ha setu perak kals tud goude beza bet e Konnersreuth, — ha n'eo ket souez, — o deus kemeret ar pleg mat da vont da gommunia bemdez.

Evel Thereza Neumann, karomp ar baourentez hag ar c'hlanded; sentomp ouz lezennou hag alioy an Iliz; pleustromp war boaniou ha gouliou Hor Zalver Jezuz-Krist; war an douar-man, koulskoude, n'eus nemed eun dra hag a vefe ret: kredi e Jezuz-Krist ha reizha hor buhez hervez ar gredenn-ze; an traou all e skoaz an dra-ze ha netra a zo henvel.

Y.-V. PERROT.

Al liver breizat Yann Loeiz Nicolas



Y.-L. Nicolas d'e 80 vloaz.

Er bloaz 1816 e veve, e Montroulez, e traon straed ar Bournet, el lec'h ma n'eus nemet tud paour, kouls lavarout ken, o chom e tiez marc'hadourien pinvidik an amzer goz, eun tiad tud a renk izel. Ar wreg a werze laez, legumach ha yod kerc'h ha setu perak e oa lezhanvet Mari Louisa ar Yod; an ozac'h a veze bemdez, diouz an deiz,

hag a rae a bep seurt labouriou, lemmel al le-
c'hid diouz ar porz koulz hag enaoui goulou kêr ;
eun tammig gounidegez a c'hellent da dapa ivez
diouz an daou pe dri benmoc'h a zavent e traon
o forz.

Mari-Louisa ar Yod a oa ginidik eus a Blougiel,
e kichenik Landreger ; mizez e oa d'ar barz dall
Yann ar Gwenn hag hi eo her rene e Montroulez
pa deue e kêr da werza e ganaouennou a veze
moulet d'ezan e ti al Ledan. Evelse eo e reas
anaoudegez gant Yann Nicolas, an hini a dlee
beza he gwaz hag a oa eun tregeriad eveldi, gini-
dik eus a Berros, nemed edo o labourat e Mon-
troulez. Plijout a rejont an eil d'egile hag e voent
eureujet. Yann-ar-Gwenn a oa deuet hag a ana-
veze kerkoulz Montroulez ma c'helle en em den-
na hep den d'e ren ; daoust da-ze e wreg, Mari
Petitbon, eur vaouez teodet mat, ma oa unan, a
veze ouz e heul hag a gane gantan e ganaouen-
nou het meulet gand ar barz Brizeuk ; ar gwen-
neien a zastument evelse, a veze laket an darn
vrasa anezo e bannoù *micato* (kafe gant gwin-
ardant ennan) pe e bannoù ratafia.

Er bloavez-ze, 1816, eo e teuas eur mab d'ezo,
er bed, e hano Yann Loeiz ; re zister her c'haved
a gorf evit gellout e drei war al labouriou tenn
hag e voe klasket eur plas a « gommis » d'ezan
en eun ti e kêr. D'e ugent vloaz ne voe ket kavet
krenv a-walc'h da vont da zoudard, ar pezh ne vi-
ras ket outan da veva betek e 83 bloaz. E blijadur
oa tresa (dessiner) eun dra bennak hag e gerent
hel lakas evel mevel bihan e ti eul liver-tiez eus
kêr. Eun dervez e voe diskouezet d'an A. de la
Fruglaye, eus a vaner Ker-ar-Rouz, e kichenik
Montroulez, traou skeudennaouet gantan war ba-
per ; an aotrou-man a gavas en devoal ar paotr
yaouank ijin, lagad ha dourn hag a en em ginni-

gas evit paea e skol e Pariz ; met, net e vije bet
d'ezan tec'het diouz e vamin hag e kave, koulz
hag hi, re galet an dra-ze. Chom a eure eta e ti e
vestr ; an Aotrou de la Fruglaye a gendalc'he
d'hen harpa ha da rei kalon d'ezan ha, diouz an
noz, goude beza bet epad an deiz o liva doriou,



Straed ar Bourret e Montroulez wardro 1816.

prenecher ha speurennier, e tiskuiza o skeuden-
naoui, gwella ma c'helle, ouz sklerder eur gou-
lou-lutik, an dud a wele alies. Da zul, pa veze
oc'h ober eur bale, war ar maez, e skeudennaoue,
war e baper, ar goueriaded, ar beorien, al lec'hiou
kaer, ar milinoù koz, ar reier hag ar gwez a gave
war e hent ; dont a reas, evelse, dre e labour pem-
deziek hag e youl d'en em gaout, da veza eur
skeudennaouer mat, hep mestr all ebet nemetan

e-unan hag ar pezh a wele dirak e zaoulagad. En amzer-ze, kouls ha breman, ne c'helled ket dont da veza eul labourer dreist anez beza bet eur pennad bennak oc'h ober tro ar Frans. Eun dervez eta, Yann Loeiz, a lakas ouz e dreid eur boutou-ler nevez, tachou mat enno, war e gein eur sac'h e oa ennan e zilhad hag e venviou hag en e zourn eur penn-baz kalet hag hen he hent etrezek Pariz. Tri bloaz war nugen en devoa neuze.

Labourat a eure, eur pennad, er gêr vras hag ec'h heulias skol Julian ; ac'hano ez eas d'an Havr-Nevez, d'an Naoned, d'ar Roc'h (Roche-sur-Yon) ha da Vourdel. E Naoned ec'h anavezaz ar jeneral Cambronne a roas d'ezan eur pennad eus ar gouriz tri liou a zouge e Waterloo. Estreged eur wech e veze plat e yalc'h ha neuze evit paea e skodenn e skeudennaou an hini en deveze e zigemeret pe e kane kanaouennou brezonek a blijed d'an holl, daoust ma n'o ententet ket, dre an tonion kaer a ouie rei d'ezo.

E Bourdel, e kouezas gwall glanv hag e rankas tremen meur a viz en ospital ; dal ma voe lezet da vale e reas war e droad ar 175 leo hen dispartie diouz Montroulez ha p'en em gavas er gêr e oa pare klok. Ar pezh a glaskas neuze eo mont en e stal e-unan evit gellout dimezi d'an hini a gare. Da Vrest eo ez eas da brena ar pezh en devoa ezomm da lakat en e stal hag an darn vrasa eus e brenadenmou a zegase da Vontroblez, war e gein. O tremen dre Landivisiau e rae e ziskenn e ti Jef Bollore, an hini a dlee beza e bried, merc'h eur gweraer, hag en hent-se ne gave ket ken hir na ken skuizuz an hent.

Neuze eo e tremenas Yann-Loeiz Nicolas bloaveziou laouena e vuhez. Brudet mat e oa hag a gleiz hag a zehou hier goulenned da labourat war-dro ilizou, chapelioù ha manerioù ar vro, o veza

ma ouezed pegen dournet mat e oa ha pegen aes e oa en em glevet gantan diwarbenn ar prizioù. Mont a rae, war e droad, abred, hag e kane da heul al laboused, kel laouen hag an heol o sevel. Eur mevel bihan a veze gantan hag her sikoure



Ti Yann ar Gwenn e Krec'houllet hervez Y.-L. Nicolas


da vounta war ar c'har bihan a zouge o benvia-chou. E c'hellit kredi e welas meur a dra souezus o redet hentchou evel ma rae. Sonj a zalc'has dreist-holl da veza bet tost da veza lonket gand eur bleiz du gand an naon a zailhas warnan, epad eun nozvez-c'hoanv, e kreiz lanneier Dirinon, ha ne deuas a-benn d'en em zizober dioutan.

nemed o skei warnan, en dra c'helle, a daoliour baz.

Liva a rae sent ha sentezed war mogeriou an ilizou ; dont a reas c'hoant d'ezan zoken d'o liva war ar gwer hag e savas eur fourn en e borz da boazat skeudennouigou pri stummet gantan ha plajou e live warno Bretoned ha korniou braoa ar vro : eun nezerez gant kouef Scrignac, eur bes-ketaerez koz eus a Lok-Gwenole, eur pilhaouaer kamm, peorien, mesaerien gand o bragou bras hag o c'hroc'hen gavr ; kastell kouezet ar Penhoat, milin ar Merdy, kastell an Taro, bigi an Dourdu, Menez Are.

Ne deuas ket a-benn, en taol kenta, da ober gwer a liou, rak kals traou ker a ranker da breña ha kals traou uhel a ranker da c'houzout abarz ober gwer evelse. Yann-Loeiz Nicolas ne fallgalonas ket ; trouc'ha a rae e-unan e wer ; ober a rae e-unan e liouiou ; e blom a denne eus a goz listri-kegin a brene e ti ar bilhaouerien ; e wer a liou a voe kavet kaer, ha, war goulenn eleiz a ber-soned, e reas gwer evelse evid ilizou Lanveur, Kernitron, Lannilis, Dirinon, Plouyann, Plouigno, Plourin, Plougouven, Sant-Yann ar Biz, Sant-Sev, Carantec, Roscoff, Louargat, Plouye, ar Fouilhez, Sant-Vik, Rumengol, Brasparts, Santez-Mari-ar-Mene-Hon hag all. Deuet e oa, brao bras, a-benn da dapa ar stumm da ober gwer a liou ker kaer ha re ar weraerien goz hag eur bloavez ma oa eur c'hendalc'h tud gouizieq, e Montroulez, ez ejont da ober eur hale betek Lanveur, hag eno unan-anezo a jomas a-ban da zellout ouz gwer eur pre-nestr a oa emezan eus an XIII^{vet} kantved : sebezet e chomas pa voe lavaret d'ezan e oa ar gwer-ze gwer graet gant Yann-Loeiz Nicolas ha ne oa ket a ugent vloaz c'hoaz, mat a-walc'h, abaoc ma oant laket eno.

Holl ilizou ha chapelioù Montroulez, Sant-Vaze, Sant-Melani, Sant-Varzin, ar Salett, sant-Joseph, sant-Charl, e weler enno e labour. Ar werenn a liou e skeudennaouas warni an Dukez Anna oc'h en em gaout e Montroulez, er bloaz 1506, a voe e gaera tamm labour ; kaset e voe da ziskouez d'an diskouezadeg vras a voe graet e Pariz er bloaz 1867 ha graet e voe he meuleudi e kazetennou an amzer-ze.



Eun tour-tan e kichen Montroulez.

(Diwar eur skeudenn graet gant Y. L. Nicolas).

Eur c'hristen mat e oa Yann Loeiz Nicolas hag e blijadur oa labourat evit gloar an Aotrou Doue hag himi sent Breiz-Izel a live war ar gwer o rei d'ezo pennou graet diouz pennou e gerent hag e anaoudegez, evel penn e vaouez a gaver skeudennaouet war gwer I. V. ar Vur, e Montroulez, e verker enno diazezadeg an iliz gand an duk Yann II ha prosesion ar Werc'hez mirakulus douget gant plac'hed yaouank Montroulez. E iliz Sant Melani en deus livet badiziant Hor Zalver, war ar maenfont. E Rumengol e tiskouez ar roue Gralon o kin-

nig eun iliz d'ar Werc'hez, dirak sant Kaourintin, sant Gwennoel, sant Gwenael hag eun drouiz. E iliz-veur Kastell-Paol, e livas kroummenn staliou ar c'heur, hag evid espern e wenneien e veze gwelet hep sadorn da noz oc'h ober war e droad ar pemp leo a zo etre Kastell ha Montroulez.


E vrasa dudi, e Montroulez, oa gellout darempredi tud desketa Montroulez hen degemere, en o zouez, evel unam anezo, daoust pegen izel bennak e oa e dud; en doare-ze eo e teuas da c'hellout ober anaoudegez gand Emile Souvestre, Edouard Corbière, Hippolyte Violeau, Amédée Bourgeois, Yan d'Argent, Jul Jaegher, Gwilhou Lejean, hag ar c'hizeller Yann an Arc'hantek. Enoret gand an holl evid e ijin hag e furnez, Yann Loeiz Nicolas a dremenas bloaveziou e gozni en ti en devoa laketa sevel, hag er stal en devoa roet d'e baotred Loeiz ha Francis, dournet mat, o daou, evel o zad; tremen a eure eno d'an 10 a viz meurzh 1899, laouen da c'hellout mont da welout, pelloc'h, e gloar an nenv, ar zent en devoa skeudennaouet ken alies e doug e vuhez ha laouen ivez da c'hellout mervel, eur zadornvez da noz, evel eul labourer mat, echuet penn-da-benn e zizun gantan.

Ti an Nicolased, gwasa pezh a zo, a zo bet serret goude maro e eil mab, Francis, d'an 2 a viz genver 1929; henman a oa breur da Varia, mamm goz ar skrivagnerez Marie-Paule Salonne he deus skrivet war he zad kuny eun nebeud pajennou kaer hon eus laketa an diverra anezo aman.

Eur mab bihan all da Yann Loeiz eo hor mignon Mauris Nicolas, ar barz Mab-ar-Gwenn, eur breizad kalonek en deus savet ar pezh-c'hoari *An di-roet* hag a zo breman o chom en Normandi gand e dud.

G. P.

Diwardenn Kastell koz Keryann



Kastell Keryann

Ne 'z an ket da gonta d'eoc'h troiou kamm paotred ar Zabat na danevellou doanuis an anaoun a zistro a-wechou, gand aotre an Aotrou Doue, el lec'h m'o deus bevet. Nann ! ne rin nemet dislavaret ar gevier a vez savet ha laketa e lec'h ar wirionez. N'emaoun ket da genta oc'h ober an dra-ze hag atao ema em spered ar zontj eus eur pennadskrid a zo bet moulet war « *La Croix* » breman ez eus daouzek pe bemzek vloaz. Ha setu aman an diverra eus ar pezh a oa er skrid-se : « Perc'hen ar c'hastell krenv a vez gwelet e douriou ac'han, eme ar beleg en devoa graet ar skrid, a zo eur mignon d'in; anavezeta ha kareta eo gand e holl amezeien rak ne ro nemet skouer vat d'e genvroiz ha ne ra nemet vad en dro d'ezan. E kreiz e vrud

ema hag en em glevet dreist a ra gand e bried evid ober implij vat eus e zanvez : rei a reont o daou, hervez an ezommou : boued, dilhad, louzeier hag aliou mat, ha me, person ar barrez, ne ehanan ket da drugarekaat an Aotrou Doue, da veza laket war va hent kouls kristenien hag ar re-ze. Er zizun dremenet edon oc'h ober an dro evit diner an Iliz ; p'en em gavis er maner edo an Aotrou o rei eur guchennad keuneud d'an intañvez a zo e Penn-ar-Pont. Lavarout a reas d'e vevel rei eun hordenn bennak c'hoaz hag e teuas, laouen, d'am diambroug.

— D'eomp er zal, emezan, da ober eur varvailhadenn, ha me d'e heul, na petra ! ta !

Kerkent ha ma oan aet en ti e chomis souezet o klevout eun trouz taoliou a skoed dindan an douar hag e liviris :

— Daoust hag unan bennak a vefe dre aze o klask diskar ho maner ?

Va mignon a vouse'hoarzas :

— O lakat toulla dindan an ti emacoun, emezan, evid ober toullou kuz ha bac'h, a hanver « oubliettes », e galleg, hag e veze stlapet ar brizonierien enno gwechall ha lezet eno goudeze da zizec'ha war o zreiz !

— Perak e rit an dra-ze ? emeve, en eur zellet outan, tenval va fenn.

— Evit rei da gredi ez eus bet toullou er seurt-se, dre aman, gwechall goz ; aman, evel a ouzoc'h, Aotrou Person, e vez kalz divroidi o welout ar maner ; mat, Youenn goz a zo ganen abaoe ma 'z eus ac'hanon, a vez ganto oc'h ober an dro d'ar mogerriou, o tiskouez ar c'hampreier hag ar saliou ; gwerz ar butun en devez diganto, ar pezh a blij d'ezan ke-

nan ; hizio ez eus pemzek dez e teuas d'am c'haout, diaes e benn :

— Ne ran gwenneg ebet ken, emezan ; an dremenidi a glemm o veza ma n'eus ket a doullou-kuz da ziskouez d'ezo ; en eur c'hastell evelhen ez eo dleet kaout traou evelse, emezo.

— Mat, evid er c'hastell-man, da vihanan, n'eus ket bet a doullou bac'h evelse, morse, na war an douar, na dindan an douar ; met evelato, evid ober plijadur d'it e lakin toulla unan kenta ma c'hellin. Ha Youenn, laouenaet e benn, a redas antronoz da gerc'hat ar vicherourien ha setu aze perak, Aotrou Person, eo e klevit kement-se a drouz. Nebeud a dra eo !

— Nebeud a dra, a gav d'eoc'h, va mignon, eme-ve ; nac'h a rit ho kouenn ; ne welit ket emac'h o rei armou d'an dud fallakr da skei gant ho tud koz ; paouezit gant ho labour gaouiad ha list Youenn da gana ; koll eun tamm gwerz-butun n'eo ket kals a dra ; brud vat eur rumm dud a dalv hirroc'h : c'houi, karget da zifenn enor ho familh ha da zougen eun hano dizaotr a zo o vont da lakat eur bern torfejou war gein ar re a zo bet aman en ho raok ha da strinka fank war hoc'h hano : pouezit ervat war ar pezh a lavar an d'eoc'h ha livirit d'al labourerien, en hanv Doue, chom a-zav.

Mont a ris kuit, war ar gomz-ze. Ne ouzon ket pe e sento aotrou ar maner ouzin pe n'her gray ket met pec'hi a-eneb e ouenn a ray ma n'her gra ket.

Setu an diverra eus ar pennad-skrid am oa lennet war « *La Croix* » ha m'her moulan war *Feiz ha Breiz* eo dre ma klevan ivez eur vouez o lavarout d'in :

— Pep hini a zo karget da zifenn e dud koz, dre e vuhez ha dre e skridou ha da gendelc'her o labour.

Pemp kart brao ac'han ez eus eur maner, eur c'hastell koz, bet gwechall d'am zud : ar C'houarnamant en deus e brenet ha bemdez e teu tud da zellout outan ha da c'houlenn e pelec'h eman an toullou hac'h e veze stlapet enno ar brizonierien. E miz gouere diweza, eur mestr-skol anavezet mat a yeas droug ennan dre ma ne wele ket dre eno unan eus an toullou-ze, *e oa red kaout er manerion koz, emezan, da ziskouez d'an dud !*

An hini a zo breman o tiouall ar maner a zo eun den a zoare ha n'eus netra da damall d'ezan, met, en e raok, ez eus bet re all ha ne oant ket henvel ; gevier a droadent ken uhel ha tour uhela ar c'hastell ; graet e veze ar « prizon » eus ar gampr vaen e veze miret enni an diellou (1) ha mil dra zot evelse ; ar re a oa aman, emezo, a oa gwall dud !

Eur wech bennak e vezent dislavaret : « Gevier a deu gameoc'h ; me a oar, brao bras, n'eus bet aman nemet kristenien vat, tud ha n'o deus laket krouga biskoaz den ebet na nac'het an aluzen ouz paour ebet ! »

Hag int-i a responte neuze : « An dud o devez plijadur o klevout sorc'hennou evelse hag an aotronez koz ne devint ket en dro d'hon dislavarout ! »

Mat, deuet int, ha warnon-me an distera eus o bugale vihan o deus youc'het : « Sav da vouez

(1) An diellou, da lavarout eo ar paperou koz, e galleg: les archives.

évit hon difenn : e peoc'h emamp gant Doue, en e varadoz, met ar wirionez a rank beza disklariet ; an torfejou a damaller d'eomp n'o deus ket bet pouezet morse war hor c'honsians ; laket gand an Aotrou Doue evid ober vad en hor stad hon eus graet gwella m'hon eus gallet hag an hini ac'hanomp en deus laket sevel ar maner en deus graet vad da veur a hini rak tud dilabour a oa kals er bloavez-ze ; sonj pet den en deus ranket klask evit tenna ar vein-ze, o c'hizella hag o sevel el lec'h m'emaint ; da bet en deus roet bara ? »

Evid o lakat da rei peoc'h em eus kroget em fluenn ha duet ar baperenn-man ; birvi a ra va gwad pa glevan tamall unan bennak e gaou, dreist-holl pa damaller tud varo ha n'int ket gouest ken d'en em zifenn, hag an dud-se eo va zud koz, Doue r'o fardono, ar re o deus stummet va c'halon, evel m'ema, karantez Doue skoulmet enni gand karantez Breiz, gant hano ar Werc'hez Vari e kreiz.

TINTIN ANNA.



Leor oberou an Aotrou Gwilhou

O deus rakprenet al leor e miz Ebrel:

An A. Gall, Louvain (Beljik)	1
An A. Pennec, Chef-Boutonne (Deux-Sèvres)	1
An A. Bellec, vikel vras Sant Brieg	1
An A. Jak. Kermarrec, Kermelinec, Dirinon	1
An A. Yv. Kermarrec, Sireat-Veur, Lesneven	1
An A. Cario, person Sant Tudal (Morbihan)	1
An A. Moal, Rener « Breiz », Coadou	5
An A. J.-B. Marzin, photographe, Lanveur	1
An A. Albert Uguen, Kerenez, Kerlouan	1
An A. Deniel, person Breles	1
An A. Léostic, Plozevel	2
An A. Parcheminou, Mahalon	1
An A. Prigeac, person Confors	2
An A. Colin, person Eskibien	1
An A. Toscer, kelenner Pont-Kroaz	1
An A. Guellec, kure Douarnenez	1
An A. F. Uguen, kelenner Pont-Kroaz	3
An A. Erwan Renan, Priel (Plouguiel)	1
An A. Morvan, Person Plouneour-Menez	1
An A. Pouliquen, person Lok-Maria	1
An D. Maïvon Jaouen, straed ar Roue Gralon, Kem- per	1
An A. Ed. Bachellery, 160, Boulevard Pereire, Paris (15 ^e Arrondissement)	1
An A. J. Delalande, mestr-skol, Tregunc	1

31

Leoriou rakprenet betek-hen: 678 + 31 = 709.

Ar rak-prenerien n'o deus ket ezommi da baea al leor kercent ha m'her rak-prenont; her paea a raint hepken pa vezo, kaset d'ezo dre ar post.

Al leor nevez, kaset betek an ti ne gousto nemet 10 lur.

Degas an hano hag an adres, kenta ma vezo gallet d'a A. Perrot, Rener *Feiz ha Breiz*, Scrignac (Finistère).

Feiz ha Breiz

Kalon Jezuz

Me da wel, bugelig, war da wele kolo,
Ruziet eo gant ar riu da zaouarn dizolo,
Ar goany kriz, hep truez, da flemm ;
Dre an toullou-moger en em zil an avel,
Frim stag ouz he alan da liva da gavell,
Ha ganez ne 'z eus ket eur c'hlemm.

Me da wel, paotr yaouank, e stalig Nazaret,
Gant Josef ha Mari, da dud muia-karet,
Eur benveg ganit en da zorn,
Eur c'houezenn ouz da dal, da gein pleget e daou,
Ha, graet ganez, -soc'hou, skinvier hag eur bern
[traou

Aze renket piz en eur c'horn.

Me da wel, pastor mat, o redek ar meziou,
Pounner plegou da zae gant gwirioneziou
N'en deus ar bed tanvet biskoaz ;
Ha, pa zigouez ganit, en da droiou, denved
Warno dent ar bleizi pe liou fall ar c'hlenved
Te o samm kercent war da skoaz.

Me da wel, dasprener, war an dorgenn vezus,
Laket e kroaz, dirag da Vamm vadelezus,
Gant ar bobl follet a garez ;
Ha dousder eo a bar e goueled da sellou,
Ha ne gouez, evel mel, diwar da vuzellou,
Nemet komzou a drugarez.

Me da wel, o mister dreist an holl misteriou !
 O chom, noz dez, ganeomp, e telt hon aoteriou :
 Ha diganez pa c'houlennan
 A be lec'h e teu d'eomp largenteziou ker foll,
 En da galon kignet, digor, a-wel d'an holl,
 Ar ger « KARANTEZ » a lennan.

Jersey, 11-5-31.

J. L'HELGOUAC'H, O. M. I.

Teir gwalenn spontus

I. — Ar genta eo ar skol dizoue, deuet da veza, re alies, siouaz, ar skol a-eneb Doue. Kement-se a dlee c'hoarvezout, hervez komz Hor Zalver e-unan : « An neb n'eman ket ganen a zo em eneb ! »

Eus ar seurt skoliou ne deuio nemet bugale difeiz ha direiz ; her gwelout a reomp eur pennad a zo ; an dud yaouank o deus o darempredet n'o deus tamm relijion ebet ken, eun darn vat anezo.

II. — An eil gwalenn eo ar zul, dervez santel an Aotrou Doue deuet da veza dervez al labour, dervez an ebatou, dervez an diaoul. Ar walenman a deu eus ar genta hag a ra chadenn ganti ; bep sul breman, da vihanan, en hanv, ez eus aman hag a-hont, tennadegou, redadegou kezeg ; ha n'eo ket hepken ar rederien eo a jom hep mont d'an oferenn ; ar zellerien a jom ivez. Ober a reer pep tra evit pellaat an dud diouz an ilizou ha siouaz, dont a raer a-benn, betek re, da douella an dud, zoken ar Vretoned. Hag ar zul, an dervez

santel, a dremen evid eur maread tud, heb oferenn, na pedenn.

III. — An trede gwalenn eo ar gazetenn fall a deu bep mintin pe bep sizun da aoza d'ar gristenien laosk ha klouar eur bern gevier diwarbenn an istor, Doue, Jezuz-Krist hag an Iliz.


An dud a lenn ar c'hazetennou-ze o devez poan goudeze o kredi ar pezh a glevont gand ar veleien ; o c'hazetenn avat, hounnez ne c'hell ket fazia !

Ar gazetenn dizoue eo skol dizoue ar re vras.

Bretoned, va breudeur, ma n'ho peus ket a c'hoant da welout ho pro o koueza, en he foull, evel eleiz a vroioù all a zo o paouez mont ouz torgenn, diarbennit an teir gwalenn-man : anez em graet gand Breiz ha ne vezo ket pell ken an dale c'hoaz.

Gand a reoc'h ivez mirit ho prezoneg :

Gand ar brezoneg eo deuet ar Feiz gand ar galleg ez ay a Vreiz !



BUHEZ AN TAD MANER

An anterramant

Pa zigouezas ar c'helou oa gwall glanv an Tad Maner, aotrou 'n eskob Kemper, an aotrou a Goetlogon, chaloned iliz Sant Korantin ha Renner ar skolach a en em glevas diwarbenn an anterramant. Goude ar maro, korf an Tad a dlie beza digaset da Gemper evit beza beziet en iliz-veur. Ar Jezuisted a c'houlenne ar galon da viret en o chapel. Eun nebeut amzer goude ar maro, an Tad Demoine a roas da anaout ar gourc'hemennouze da berson Plevin, hag ouspenn-ze, eul lizer a verke d'ezan e vije eskumunuget ma klaskfe enebi.

Ar galon a voe tennet gant ar medesin, gorroet en eun tamm lien kaer, da c'hedal-beza kaset da Gemper.

Ar c'helou eus ar maro a redas buan, nann kepken betek keraz, met dre Vreiz a-bez, hag e tiredas eus a bep lec'h eleiz a dud da Plevin. Ar c'horf a voe gwisket d'ezan dilhad oferenn ha laket war eur varv-skaon, evit ma c'hellfe an dud dont d'e welet. Ar re a oa en em gavet da genta a vije chomet epad an deiz da zellet ouz an Tad, ma vijent bet lezet. Ret e voe lavaret d'ezo en em denna evit ober plas d'ar re all.

An holl a boke d'an treid, an treid-ze o doa redet dre Vreiz epad keit amzer. Ar gamps hag an dilhad oferenn a vije aet e tammou, ma ne vije ket bet taolet evez mat. O welet ne c'hellent ket trouc'ha tammou eus an dilhad, an dud a douche

o levriou hag o chapeledou ouz an treid, an daouarn hag an dilhad.

Ne ehanas ket an dud da zont, keit ha ma chomas an Tad war ar varv-skaon.

Tri dervez goude ar maro, d'an 31 a viz genver, goude kreisteiz, unan bennak a lavar e vezo kaset an Tad Maner da Gemper da anterri. Ker buan hag eul luc'hedenn ez a ar c'helou-ze dre ar barrez. An dud raktal a zav war o zreid hag a lavar a vouez uhel n'ez aio ket korf an Tad Maner da Gemper, e vezo beziet e iliz Plevin. Tud ar parreziou all a en em laka a du gant tud Plevin, hag e tiskleriont e vezint en deiz warlerc'h mintin mat, gant o armou, er vered a ra an dro d'an iliz ha d'ar presbital. Da c'hedal, lod anezo a jomo da deurel evez epad an noz, gant aon na zigouesfe unan bennak da glask laerez korf an Tad mat.

En em gaout a reas en deiz-ze, diwezat diouz an noz, an aotrou Collier, vikel vras Kemper, gantan gourc'hemennou eskob Kemper ha re ar chaloned. O welet n'oa gantan nemet kure Koray ha n'en doa ket a gezeg awalc'h evit kas da Gemper korf an Tad Maner, an dud a rae ar ged er vered e lezas da vont er presbital.

O welet sioul an traou e pep lec'h, e kave d'ezan e c'hellfe, antronoz, ker brao ha tra, samma korf an Tad.

Met, antronoz vintin, peger souezet ne voe ket, pa welas an dud, gant o armou, dirag ar presbital, o krial : « Nann, nann, ne vezo ket laeret diganeomp hon Tad mat. Ma vije beziet e Kemper, e c'hoarvesfe gantan evel gant an Tad Bernard. Ne rafe ket a vurzudou e Kemper, hag aman e raio. »

Eskob Kemper en doa divinet petra a c'hoarvesfe ha roet urz d'e vikel vras da deurel an eskumunugenn war an dud ha da vont d'ezo dre nerz, ma vije ret.

An aotrou Callier a gerzas eta da vaner Kerlouet, da gaout gouarner Keraez, ha goude beza diskouezet lizer an aotrou 'n eskob, e lavaras d'ezan : « Va zikourit da zont a benn eus va zaol. » Ar gouarner, o c'houzout eo gwelloc'h mont dre zouster d'ar Vretoned eget dre nerz, a ambrougas ar vikel vras betek Plevin, a gomzas brao ouz an dud hag o fedas da zenti ouz eskob Kemper.

Met an aotrou Kerlouet, gouarner Keraez, n'oa ket deuet e-unan. E wreg a zeuas ive hag houman he doa c'hoant gwelet bezia an Tad Maner e Plevin. Epad ma klaske he gwaz lakaat an dud da blega, hi, didrouz, a rede eus eur rumm da gaout eur rumm all hag a lavare : « Dalc'hit mat, paotred ! »

Aotrou person Plevin, an aotrou Canant, heb hen diskouez, a boanie ive da zerc'hel an Tad Maner en e barrez.

Ar vikel vras, o welet e kendalc'he an dud da enebi ouz e c'hourc'hemenniou, a glaskas neuze o sponta dre an eskumunugenn. Pedit a reas person Koray, unan eus misionerien an Tad Maner da rei da anaout d'an holl urz aotrou 'n eskob Kemper ha da ziskleria e kouesfe an eskumunugenn war ar re a jomfe hep senti.

Met ne c'hounezas netra. An dud a lavare : « Lamm et vezo diganeomp hor buhez, mar d'eo ret, met ne vezo ket diframmet eus hon daouarn korf an Tad Maner. »

Nec'het oa ar vikel vras. Mont a reas d'an iliz

hag edo o wiska e zilhad evit lavaret eun ofenn-blean evit an Tad Maner, pa zigouezas er zakreteri, a-berz ar barresioniz, eur vandenn dud da ziskleria an dra-man : « Ma ne gas ket ar veleien ar c'horf d'an iliz d'her bezia eno, ni her c'haso hag her bezio hon-unan. »

An aotrou Kerlouet a lavaras neuze d'ar vikel vras : « Evit lakat an dud da rei peoc'h, n'eus ken d'ober nemet bezia en iliz-man an Tad Maner, hag epad an noz e vezo gellet samma ar c'horf hag e gas da Gemper. »

Ar vikel vras a gavas mat an ali-ze. Kana a reas an oferenn anterramant, hag an Tad Maner a voe beziet e iliz Plevin.

Eno e voe beziet, hag eno e chomas. Diouz an noz, an iliz a voe prennet. Ar vikel vras a goanias e maner an aotrou Kerlouet. Pa zistroas, goude koan, da Blevin, gant ar gouarner, e kavas tud en iliz gant o armou, o tiouall ar c'horf.

N'en doa netra ken d'ober nemet distrei da Gemper da lavaret d'an aotrou 'n eskob ha d'ar chaloniad penaos oa tremenet an traou e Plevin.

Ne voe gellet kas da Gemper nemet kalon an Tad Maner. An Tad Demaine a en em gargas eus al labour santel-ze. Gant eur seizenn endro d'e c'houzoug e touge ar galon, hag e reas hent gant ar vikel vras en eur c'harroz. Pa dosteas ar c'harroz ouz Koray, ar c'hleier a voe sonet hag ar barresioniz, ar veleien en o fenn, a zeuas e prosesion da ziambroug ar relegou zantel.

P'en em gavas ar galon e Kemper, an aotrou 'n eskob a yeas d'ar skolach evit enori d'e dro kalon ar misioner bras. Pokat a reas gant teneridigez

d'ezi en eur lavaret: « Setu aze eur galon hag he deus bet kasoni ouz an diaoul ! » Gellet en devije lavaret: « Hag he deus diskouezet karantez vras evit an Aotrou Doue ! »

Ar galon a voe gorroet en eur voest ploum furm eur galon d'ezi. Goude eur servich bras kanet evit an Tad Maner, ar voest a voe laket dindann eur skritell arc'hant e keur ar chapel, dirag an tabernakl.

E Plevin, goude ma tistroas ar vikel vras da Gemper, e renas ar peoc'h. Epad eiz dervez dioc'h tu e voe kanet servichou dirak bez an Tad Maner, ha d'an deiz diweza, an aotrou Falc'hier, person Kleden-Poher, a reas eur brezegenn gaer evit meuli ar misioner, tad, kelenner, salver Breiz.

N'oa ket echu c'hoaz an abadenn goulskoude. Kenvroiz an Tad Maner, parresioniz Sant-Jorj, Reintembault, pa glevjont ar c'helou eus e varo, a c'hoanteas ive kaout ar c'horf. « Aman eo ganet, emezo, hag aman ive e tle beza beziet e gorf. » Hano a voe zoken da bedi Kambrevras Breiz da zirouestla ar gudenn, Evelato, a-nebeudou, e voe gellet renka an traou. Evit ober plijadur da dud Sant-Jorj, e voe kaset d'ezo eus Plevin dilhad ofenna hag a oa bet douget gant an Tad Maner.

Evel m'en doa lavaret pell araok, an Tad Maner a varvas war douar Sant Korantin, e eskopti Kemper, rak Plevin, tost da Geraez a oa d'ar mare-ze stag ouz eskopti Kemper.

Hag e gorf, evel m'en doa lavaret ive a zo chomet el lec'h m'eo kouezet.

Y. U.

Kenteliou Mistral

Lennet em eus, n'eus ket pell, eur pennad skrid diwarbenn eun den hag eo bet graet gouel kantvet bloaz e c'hinivelez warlene: e hano eo Mistral; eur provansad kalonek e oa hag en deus labourer evid e vro evel m'eo deus labourer evit Breiz an Aotrou a Gervarker, an Aotrou Gwilhou, an Aotrou Herry, Y. Ber Galloc'h ha kals re all a zo aet da anaoun, evel ma labour en deiz a hizio skrivagnerien *Feiz ha Breiz*, ha re *Walarn*, *Breiz* ha *Dihunamb* ha meur a hini all c'hoaz, a drugarez Doue.

Kals henveledigez a zo etre bro Mistral hag hon hini ha falvoudus eo lakat kenteliou fur ar barz dispar-ze dirak daoulagad hol lennerien. Savet war ar maez, e skridou a zo bet graet evid an dud diwar ar maez; karout a rae e vro kement ha ma c'heller hen ober. Alia en deus graet e genvroiz da jom en o bro, da gomz o yez, disprijet e skolioù ar Provans, siouaz, evel ma vez disprijet ar brezoneg e skolioù Breiz.

Kenteliou Mistral a zo didroïdell, leun a furnez hag a skiant; setu aman darn anezo:

Difennomp douar hon tadou,
Aochou, parkeier ha koadou;
Eurus an neb a c'hell mervel
En ti lec'h m'eman e gavell.

Hag a-wechou e kane a-bouez penn:

Muioc'h a blijadur am eus
O terri kraon e skeud ar c'hleuz,
Eget beza o terri mein
War hent Pariz! Gwell eo d'am lein
Eun aval ruz poazet er gêr
Eget traou mat aozet e kêr!

Frailha a rae e galon o sonjal en droug a ra Gouarnamant Frans da sperejou ar re yaouank rak abaoe an Dispac'h ne glasker nemet distaga an dud diouz o gwir vro : « N'eus mui, emezan, a Brovansiz nag a Vreiziz; holl e vezont taolet en hevelep draillberrez; klask a raer lakat holl vugale ar Frans da veza henvel petra bennak ma 'z eo dishenvel o broiou hag o gouennou; ober a raer pep tra evid o diswrizenia hag o distaga diouz o bro goz ! »

Ar wirionez eo an dra-ze, penn-da-benn, hag eur barz all, mignon da Vistral, en deus he displeget evelhen : « Pe seurt istor a zesker d'ar c'hrouadur er skol ? Hini e rann-vro ? hini e barrez hag e gêr ? Nann ! hanter-amzer e tremeno e vuhez hep gouzout ar ger kenta anezo ! Deski a vezo graet d'ezan, avat, eur bern brezelioù hag emganou ha n'eo ket nec'hetoc'h ganto, eget gand e votez kenta, dreist-holl ma 'z eo bet ganet en eur vro hag a zo bet staget, n'eus ket keit-se c'hoaz ouz ar Frans, evel ma 'z eo Breiz, ar Provans, ar Bearn hag ar Rousillon. Den ne zesko d'ezan anaout kaerder e vro, karout he gened hag he melkoni, ar pezh a dle degas sonj eus an amzer dremenet; kondaonet eo da veva war eun douar henvel ouz eun douar ha ne vefe bet den ebet o veva warnan hiskoaz ha ne zanto ket e ene oc'h en em staga outan. Pe seurt yez a vezo desket d'ezan ? Ar galleg ? Mat a-walc'h e vefe ma vefe graet stad eus e yez e-unan, ma vefent desket d'ezan, an eil e serr eben; met, siouaz, ne vezo komzet eus e yez nemet evit lakat en e spered ez eo eun dra vezus, izel ha gouez : eur yez mat d'an dud dizesk ha da gonta marvailhou goulo, dister pe gomzou hudur.

Ar baskeg, ar brezoneg, ar provansseg, yezou kaer hag a zo eun dudi o studia hag a vez komzet gant tud gouiziekl, desket e vezo d'ar vugale o dis-

prijout hag o slepel e mesk ar c'hoz traou rak ne vezo lavaret hano ebet anezo d'ezo morse; N'eus ket a urz d'o c'homz; goudrouzet ha laket e vezo e pinijenn ar c'hrouadur en deus o desket war bennenn e vamm ma vez klevet eur ger eus ar yezouze o kolieza eus e c'henou !

Eun nebeud bloavezioù goudeze e vezo dispar-tiet ar paotr yaouank diouz e vro, korf hag ene, rak galvet e vezo da vont d'ar c'hazarn. Petra a welo ha petra a glevo eno ? Ober goap eus e barrez; lezhennel e dud, tud diwezat; c'hoarzin war e stad ha war e ouenn. Lenn a ray kazetennou Pariz, savet ha skrivet e yez Pariz; ma komzer eus e vro warno ne vezo nemed evit he disprijout ha rei d'ezan da gredi n'eus nemed eur gêr hag e c'hellfed ober stad anezi: Pariz gant he zour Eiffel hag he lec'hiou-c'hoari flaerius !

Evelse eo e lazer an eneoù hag e teuer a-benn da ziskar ar c'haera gouennou-tud rak pa deuiou ar baotred yaouank-se d'ar gêr, — ma tizroont, — e vezo leun o fenn eus ar marvailhou o deus klevet. kemerout a raint o zud evit tud diskiant: « C'houi, ne ouzoc'h netra, va zad ! » pe: « Dre aman, va mamm, n'eus nemet tud diwarlerc'h ! »

Setu aze, n'eo ket 'ta, komzou hag a vezo laonen d'ar re goz o c'hlevout; klevout o bugale o lavarout d'ezo ez int tud diwezat dre ma karont ar vro he deus maget o c'horf hag o spered hag e oa dleet eta d'ezo anaout ha karout he yez hag he istor.

Gouzout a reomp he deus ezoimm hor bro d'en em harpa war eun all brasoc'h ha krenvoc'h egeti: ar Frans, met hon tud yaouank a fazi a-grenn pa ne lakont ket yez hag istor Breiz da genta en o spered hag en o c'halon; o fedi a ran da zonjal er vat e kement-se ha da gana ganeomp a-greiz o c'halon:

Dourn ha dourn, Breiziz, ha gwitibunan,
 Adsavomp hor yez dispar hag unvan,
 Rak hi eo, hep mar, ene Breiz karet
 Hag a stag an den ouz maen an oaled
 Hag a zalc'h kerkoulz an neiz ouz ar skour
 En em vodomp holl evit he sikour.

TINTIN ANNA.

KERROUE

Maner Kerroue a zo kuzet e kreiz eur c'hoat e
 kichenik Loguivy-Plougras ha chapel gaer Sant
 Emilion. N'eo ket bet peurc'hiraet biskoaz hag,
 evelato, evel m'eman, eo c'hoaz unan eus tiez
 kaera tud chentil Breiz-Izel.

Kerroue a zo bet savet, wardro ar bloaz 1650,
 gant Fransez an Dresnay, gwaz Mari Benmarc'h;
 perc'hennet eo bet, goudeze, dre zimezi, gant La-
 gadeien Mezedern ; an diweza anezo a varvas e
 Montroulez, er bloaz 1837, hag a voe sebeliet e
 chapel ar maner. Kerroue a zo a leve, breman,
 d'an Aotroued de Roquefeuil.


Perc'henned koz ar maner o devoa deskadu-
 rez ; e leordi Kemper e kaver eul leor skrivet
 gand an dourn, en Itali, er XV^{vet} kantved, eleiz a
 lizerennoù livet hag allaouret ennan, hag a oa da
 aotrou Kerroue.

N'eus den ebet ken o chom e Kerroue ; an ilio
 a c'holo e vegeriou hag ar c'hoatach hag an toen-
 nou a gouez, en o foull, tamm ha tamm.

Meur a istor a zo stag ouz ar maner koz-ze ; ar
 gaera anezo eo istor Bilz, paotr Lohuec, a roas
 tro, gand ar muia, da Dregeriz da zével ar c'hrenn
 lavar-man :

Paotred Lohuec,
 laeron kezeg.

G. P.



Kloareg Koad ar C'hrannou ha Pennherez Kerzanton

Karantez ha glac'har !!!

Tud yaouank a Vreiz-Izel, didostait da glevet
An istor eus va daelou ha va foaniou kalet ;
Me 'zo eur c'hloareg yacuank (1) a eskopti Kemper
Am oa choazet eur vestrez en eskopti Treger.

E hars ar mor oun ganet e bro sant Gwennole,
Ha biskoaz nemet glac'har n'em eus bet em buhez ;
Glac'har ha gwir garantez, setu va flanedenn,
Planedenn-rust ha kalet da heulia penn-da-benn.

Pa oan em bugaleach, va mamm baour alies,
A lavare d'in : « Va mab, ped bepred ar Werc'hez ;
« Ped hi, beudez, va mabig, ped, Gwerc'hez Rumengol ;
« Mar he fedes, a galon, biken ne di da goll. »

Patronez va mamm dener, Gwerc'hez vat Rumengol,
Pet gwech hoc'h eus hu miret na doun me aet da goll !
Ho pedet am eus bepred, breman a-raok mervel,
E kanin ho meulendi d'am breudeur Breiz-Izel.

Pa gimiadis diouz va zud, pa 'z is pell eus ar gêr
Evit mont war ar studi da skolach Landreger,
N'em oa nemet pemzek vloaz, me a ouele dourek,
Rak evidon ne oa ken, allas!... a eurusted.

O tostaat ouz Landreger e kavis eur plac'big,
Koant 'vel eun aelig Doue, he hano oa Metig ;
D'ar gouent e 'z ae ivez da ober he studi,
He c'halonig 'oa maniret kement ha va hini.

(1) Eur c'hloareg a zo eun den yaouank hag a ra e
studi en eur skolach hag a c'hell goudeze chom er ger,
mont da veleg, da noter, da vedesin pe da ofiser, evel
ma plijo gwella gantan. — Ar Rannou pe ar C'hrannou
eo ar c'hoad bras a zo demdost da Rumiengol.

— : Salud d'eoc'h plac'big yaouank, a lavaras d'ezi,
Eveldon oc'h ankeniet o kuitaat tud ho ti,
Ho tournig flour em dournig, lakit gant karantez
Hag e vezimp eurusoc'h, o ouela asamblez.

Ar plac'big a lavaras — : O kloareg Gwennole,
Pedomp Doue alies an eil 'vit egile,
Er joa koulz hag en anken dalc'hit sonj a Vetig,
Eus a vremen da viken ez eo ho mestrezig.

— : O Metig, va c'harantez, rozenn gaer Breiz-Izel,
War ho mignon Gwennole, taolit breman eur zell,
Eur zell digant ho lagad a raio eurusted,
Keit ha m'am lezo Doue da vale dre ar bed.

Erru e kêr Landreger, erru e penn hon hent
E voen kaset d'ar skolach ha Metig d'ar gouent ;
An disparti voe kalet, c'houero hag ankenius,
An eurusted, er bed-man, n'eo ket eun dra padus...

Dre ma chomis er skolach skeudenn dous Metig kez,
En deiz, en noz, dirazon a deue alies ;
Neuze e peden Doue ha sent koz Breiz-Izel,
'vit ma vije 'n he buhez, laouen, eurus, santel.

II

Pa voe echu va studi, ez is da Rumengol,
Da bedi c'hoaz eviti, Gwerc'hez vat Remed-holl ;
Seiz tro a ris d'an aoter, dervez ar pardon bras,
Ha seiz tro d'an iliz sakr war benn va daoulin noaz.

Goude an ofereñn-bred, o pebez levenez!...
Er vered, gant he mamm ger, e welis Metig kêz,
Laouen eo evel an deiz ha koant evel al loar,
Biskoaz penn-heres ker koant n'eus bet war an douar.

Lugerni a rae he zal, he diou chod gwenn ha ru,
He genou, 'vel eur rozenn, he bleo, he lagad du,
Eur groaz acur en he c'herc'hen, he c'hoef dantelezet,
Lavaret 'vije eun ael eus an nenv diskennet.

— : O! pebez joa evidomp, va c'hloareg Gwennole,
En em gaout e Rumengol, deiz pardon Mamm Doue,

Mamm an holl dud ankeniet, Gwennole, va mignon,
Evidomp, e peb amzer, he fedis a galon.

— : Metig koant, setu aman, ganen, eur walenn aour,
A roas d'in, raok mervel, Annaig, va mamm baour,
Doug hi, dalc'h-mat, war da viz kemer hi diganen,
Me dou war gwalenn va mamm az karet da viken.

— : Ar groaz aour 'zo em c'herc'hen a vo d'it Gwennole.
Eur guchennig eus va bleo a roan d'it ive;
War ar groaz e touan ha dirak ar Werc'hez,
E vi karet gant Metig, tre ma vo e buhez.

Ha daoulinet en iliz hon eus graet eur bedenn
Ha roet, evid offrans, eur gouriz koar melen,
Benniget metalinier, poket d'ar relegou,
Da relegou sent Breiz karet gant ho tadou.

Goude hon eus baleet hon daou dre Vreiz-Izel,
Ha gwelet kalz ilizou, kalz a douriou uhel,
Abati Landevenneg hag e Douarnenez
Al lec'h m'edo Ker-Iz hag ar brinsez Ahez.

Gwelet hon eus Mene-Hom hag iliz-veur Kemper
Mene-Bre, iliz Bulat hag hini Landreger,
Kastell Brest, sant Yann ar Biz, iliz Salaün ar Foll,
Ha kaera tour 'zo er bed, tour uhel Kastell-Paol.

Gwelet hon eus Kerahez, Kemperle, Pont 'n Abad,
Fouenant, bro ar merc'hed koant, Gwengamp hag Huelgoat,
Montroulez ha Lanuon, Kraozon ha Lesneven,
Kallag, bro ar gourinou, Kastellin, Rosporden.

Klevet hon eus o kroazal, ar mor e beg ar Raz,
Biskoaz den n'hen tremenas hep santout aoun pe c'h!
Bet omp e enez Sizun, en Eusa, Molenez,
En Enez Vaz, er Yeoded, koulz hag er Seiz Enez.

Eur bloavez omp bet eurus, evel aelez Doue,

Ha p'hor gwelet o tremen, holl a lavare

— : Setu kloareg ar C'hrannoù, sounn evel eun dervenn,
Setu Metig, e vestrez, fresk evel eur rozenn.

III

Dervez pardon sant Herbot (2) e klevis eur c'helou,
En deus beuzet va c'halon en eur mor a zaelou,
Gant he zad ha gant he mamm, d'am mestrezig Metig,
E oa choaset da bried eur pagan pinvidik.

Ar pagan-ze oa diot, hep frunez, hep skiant,
Ne gare, war an douar, nemed ar gwin-ardant;
Metig paour ouz her gwelet a grene gant enkreiz;
Hogen he zud 'oa dallet, allas, gand e zanvez.

Mont a ris prim d'he gwelet neuze da Gerzanton,
Dre ma tostaen, em c'hreiz, e krene va c'halon;
War dachenn ar vourc'h o-son e oa ar binion
Tud an eured ha Metig beuzet en he daelou.

Metig a dreuz he daelou a reas ouzin eur zell
En eur lavaret — Kouraj, kouraj, mignon fidel!
Monet a ra en iliz, laret 'ra d'ar beleg:
— Gwenole eo a garan hag hen eo va fried!

Koueza a ra d'an douar raktal ar benn-berez
Ha douget eo dioc'htu krenn eus an iliz er maez;
Dispak he c'hoef, he dilhad ha dispak he bleo,
Seblantout a ra beza eun aelig paour maro.

Mantret holl gand ar c'hlac'hr e kouezis d'an daoulin,
En eur grial : — O Metig, sell a druez ouzin
Pokat a ris d'he dournig, d'he diouchod, d'he c'herc'hen,
O Metig, Metig, Metig, c'houi 'n hini a garen.

An disesper en dro d'in evel eur vantell blom,
Am c'hasas pell ac'hano, pell warzu Mene-Hom,
Va skiant a zo kollet, va c'halon a zo yen,
O Metig, Metig, Metig, c'houi 'n hini a garen.

Eiz dez goude azezet, e kreiz koat ar C'hrannou
War va diou chod e rede diou feunteun a zaelou.
Pa glevis e Rumengol o son an hanter-noz
E liviris estlammet — : Va Doue d'eoc'h bennoz.

(2) A vez graet, bep bloaz, e parrez Ploneve ar Faou,
d'ar gwener warlerc'h sul bras ar Pantekost.

O Gwerc'hez vat Rumengol, sellit ouz va glac'har,
 Aman oun deut da vervel fenoz war ho touar;
 War c'hoaz pa zavo an heol arc'hantet en nenvou,
 Dindan an dervenn goz-man e vin kavet maro!!

O Metig, va dousig koant, e'houi, 'n hini a garen,
 Kenavo 'lavaran d'it er bed-man da viken;
 Gand ar maro unanet, ni c'hoaz en em garo,
 Kenavo er baradoz, kenavo, kenavo!

IV

An deiz warlerc'h, da zav-heol, eun durzunell hep par,
 A hirvoude, en dervenn, he c'hlemmou a c'hlac'har;
 Ar c'hloareg a oa maro, maro gand an anken,
 En eur lavaret : — Metig, te 'n hini a garen.

Ar c'hloareg paour a starde c'hoaz war e vuzelloù,
 Kroaz aour ha bleo du Metig glebiet gant e zaelou;
 War an dervenn 'n doa skrivet hano e garante,
 Ha diou galon unanet treuzet gant eur c'hleze.

Kaset oa bet ar c'hloareg da vered Rumengol
 Ha sebeliet e disheol iliz sakr Remed-holl
 Iliz patronez e vamm en deus bet ken karet;
 Tud yaouank a Vreiz-Izel, pedit 'vitan' bepred.

Setu eta Gwennole en e wele douar,
 Eur miz goude voe klevet huanadou glac'har.
 Eur plac'hig gwisket e du, e bered Rumengol.
 Deut di da bedi Doue ha Gwerc'hez Remed holl.

O tremen dre ar vered, welas war eur maen-be,
 Skrivet nevez-flamm hano he mignon Gwennole,
 Epad an noz daoulinet. Metig ouele dourek,
 Ha d'ar maen-be e poke, e poke kalonek.

— : O Gwennole, emezi, setu te o repoz;
 E douar sakr Rumengol ez out deut d'am gortoz;
 Met kent ma tarzo an de, o va muià karet,
 Er be-man, dre zourn Doue, ni 'vezo unanet.

Da zav-heol, eur beleg koz, 'vont da bedi Doue
 He c'havas hanter varo, gourveet war ar maen-be :

Rei 'reas d'ar plac'hig paour absolver ha pardon
 Metig a varvas laouen rakial gant rann-galon.

En eur vopedenn ezans ene gwenn Metig kez,
 'Vel eur goulmig a nijas d'an nenv gand ar aelez :
 Eus a varadoz Doue eur wabrenn arc'hantet
 War gour iliz Rumengol, neuze 'zo diskennet.

War ar wabrenn ar Werc'hez ha Sent koz Breiz-Izel
 A gurune Gwennole hag e vestrez santel;
 Barzed an amzer gwechall, drant war o zelennou
 Da Zoue, e brezoneg, a gane o gwerzioù.

Sebeliet eo korf Metig, kichen korf Gwennole,
 Ar maro 'n deus unanet an eil gand egile;
 Eur c'hloareg karantezus 'n deus war o be skrivet
 Ar c'homzou truezus-man, gand e zaelou mesket.

— : Aman e repoz e peoc'h, kloarek Koad ar C'hrannou,
 Den a feiz hag a galon, den a garie e vro;
 En e gichen eo kousket penherez Kerzanton,
 Metig an aelig-Doue, maro gant rann-galon.

O Gwerc'hez vat Rumengol, setu ho taou vugel
 Kousket e tal hoc'h iliz ha dindan hoc'h askell;
 'Vel eur vamm garantezus, war gavell he mabig
 C'houi daolo evez war bez Gwennole ha Metig.

Kleier, ograou Rumengol truezus c'houi 'zono;
 Barzed ha perc'hirined, daelou c'houi a skuilho
 War bez Metig, Gwennole, pa reoc'h ho pedenn,
 Eur bedenn a garantez ha karget a anken.

Bevit e doujans Doue, tud yaouank Breiz-Izel,
 Pedit Gwerc'hez Rumengol 'vit ma vezoc'h santel;
 Sonjit ivez e Metig, sonjit e Gwennole
 Bezit evelto fidel ato 'n eil d'egile.

Ar werz kaer-man a zo bet savet gant

I. P. M. AR SCOUR,

BARZ ITRON VARIA RUMENGOL.


Eul leo a zo hir !

Kan-bate dastumet gant *Chim Bellego*, eus
a *Veriaded*, ha bet kurunet d'ezan gant
an *U. R. B.*, er bloaz 1930.

Eul leo a zo hir, paotred, Ha deomp a-raok a-
tao, Eul leo a zo hir, paotred, Ha deomp a-raok a-tao.
pp
Met diou'leo a zo c'hoaz, Hun! hun! hun! tra-la-
la ti-g-dou-lan-la, Met diou'leo a zo c'hoaz, e-leiz
hi-roc'h, me gred, e-leiz hi-roc'h, me gred!

Eul leo a zo hir, paotred, — ha deomp a-raok atao,
Ha deomp a-raok atao.
Met diou'leo a zo c'hoaz — hun! hun! hun! tralala rige-
[doulanla,
Met diou'leo a zo c'hoaz, eleiz hiroc'h, me gred,
Eleiz hiroc'h, me gred!
Pa vo graet an hanter hent — ha deomp a-raok atao,
Ha deomp a-raok atao.
Pa vo graet an henter, — hun! hun! hun! tralala rige-
[doulanla,
Pa vo graet an hanter, e chomo c'hoaz kement.
E chomo c'hoaz kement.
Ha pa vimp erru er penn, — ha deomp a-raok atao,
Ha deomp a-raok atao.
Pa vimp erru er penn, — hun! hun! hun! tralala rige-
[doulanla,
Pa vimp erru er penn. — e vo yen ar zoubenn,
E vo yen ar zoubenn!

Chapel sant Iltud Sizun



Lokiltud

Bourc'h Sizun, daoust m'ema en eur vro baour
a-walc'h, a oa gwechall unan eus ar re e-veze graet
ar muia kenwarz enni. Kals lin a veze gounezet,
er barrez, ha kals gwiaderien a veze kavet hag a
rae lien hag eleiz a varc'hadourien a-weled o re-
det, eus an eil parrez d'eben, war-o enkan, o wer-
za neud, lien, skudellou, bonedou, loereier hag all
dre ma 'z aent.

A-raok ar brezel e weled c'hoaz, er vourc'h, tiez
koz ar wiaderien gand an derezou mein da bignat
er zolier e diavaez an ti. Ar merc'hed a azeze eno,
en hanv, da neza; eno e kavent disheol dindan an
tammig toenn a oa a-us d'an derezou hag ac'hano
e c'hellent teurel evez war-o bugale o c'hoari war

an hent ; ne jom ket kals eus an tiez-se ken, en o sav ; diskaret int ; tiez sklaeroc'h a zo savet en o lec'h, tiez hep gened hag heb envor.

E Sizun ez eus eun iliz eus ar re gaera ha dal-c'h'et kempenn. An tour a zo uhel, tost ken uhel hag hini Kreizker, met n'eo ket ker kaer na ker koz. E kichen an iliz ez eus eur garnel hag eur porz-gwered, kaera hini a zo e Breiz. Er bloaz 1894, pa voe eünet hent Keraez da Landerne Renerien ar Pontchou hag ar Chaoseriou a glaskas freuza an nor-ze kentoc'h eget diskar eun ti bihan a oa en tu all d'an hent : tud a zo hag a ziskarfe eun iliz-veur da zavel eur c'hraou-moc'h en he lec'h.



Eun ti koz e bourc'h Sizun

E tu an hanter-norz da voure'h Sizun ha war hent koz Landerne eman chapel sant Iltud a hanver Lokiltud pe Lokulud ; savet eo bet en enor d'ar zant bras-ze a renas, breman ez eus pemzek kant vloaz, kenta skol veur kristen Breiz hag a reas

skol da zent brudeta hor bro ; sant Paol, sant Gwelhas ha sant Samson.

Chapel Lokiltud a zo bet savet gand aotronez eur maner hag a zo harp eno : maner Kerbileo ; an aotronez-se, a rumm da rumm, a veze miret d'ezo ar garg a falc'honer bras e kastell aotronez Leon.



Ti koz eur gwader er Gollenn

Er bloaz 1907 em eus he gwelet ; neuze edo brao an traou war he zro hag e ris eur skeudenn anezi a welit aman. An aoter vras a oa warni eun daolenn goz e weled enni santez Mac'harit o vresa an dragon dindan he zreid. En eun tu e weled skeudenn sant Paol o ren dragon ar Faou a voe kaset gantan, war a leverer, a-bouez e stol, dre an Trehou, Sizun, Lok-Melar, Lambaol hag an hent koz a hanver atao Bali Kastell, betek an Enez vaz el lec'h m'her beuzas etouez reier Toull-ar-Zarpant ; en tu all edo skeudenn sant Iltud,

patron ar chapel, gwisket evel eur manac'h gand eul leor digor en e zaouarn.

Bez e oa ivez eur zant Eozen azezet, paperou e brosezou en e zourn, hag eur zantez Genovefa a zalc'he en he dourn eur c'houlouenn hag e weled eun diaoul o klask he mouga hag eun ael ouz he enaoui raktal goudeze. An dra-ze a zo graet evit diskouez unan eus burzudou santez Genovefa a deuas a-benn, eun dervez m'oa bet mouget he goulou d'ezi gand an avel, d'he enaoui dre he fedennou.

N'oa kloc'h ebet war ar chapel met teir aoter a oa enni ha war he doriou dero, kizellet kaer e lenned ar bloaveziou 1653 ha 1673. War al lambrusk e weled elez o tougen benviou ar Basion.

Evel eleiz a chapelioù all, Lokiltud a zo bet dilezet gand ar vistri nevez he deus bet abaoe lezenn an Disparti savet er bloaz 1905. N'eus ket pell e oa deuet da veza ker fall he zoenn ma sonjas kuzulierien ti-kêr Sizun he diskar evit gwerza he mein.

An A. Herry, person Sizun, en deus gellet evelato rei da c'houzout da eun nebeud kristenien vat diwardro, ne oa ket dereat da Sizuniz lezel da goueza en e boull eun ti-bedi evelse e oa bet o zud koz o taoulina ennan ken aliés ehars treiñ sent Breiz, sant Iltud, sant Paol ha sant Eozen, ha deuet eo a-benn evelse da zavetei chapel goz mestr abostol kenta Bro-Leon.

Kinnig a reomp d'an A. Herry hor gwella gourc'hemennou ha goulenn a reomp ma vezo kalz og'h heulia ar skouer vat en deus roet : re a diezeva a zo e Breiz-Izel met n'eus ket re a diez-pedi ; klaskomp eta derc'hel ar re a zo en o sav.

G. P.

Breiz, mor a gan

*Darn eus eur brezegenn graet e
Retred Lesneven, er bloaz 1929.*

Eur vro a vez anavezet dreist-holl, dre he c'han hag he yez ; he bugale a gomz hag a gan he yez evit merka o feiz, o c'harantez, o flijadur pe o foan ; kana a reont pa vez laouenedigez en o c'hallon ; pa vez tristidigez enni e kanont ive . eur vro hep kan a zo evel eul labous hep eskell hag, a drugarez Doue, n'eus bro ebet o kaout kement a zoniou, a werziou, a gantikou hag a ganaouennou a bep stumm evel hor Breiz karet.

En eul leor talvoudus hag a dilefe beza e pep ti, ar *Barzaz Breiz*, an Aotrou Hersart a Gervarker, eur breizad a galon, evel ma 'z eus re nebeud, en deus dastumet eur vriad kanaouennou koz. Ha gant piou int savet ? gant hennan ha gant hennont ; gant kloareged, gant milinerien, kemenerien, pilhaouerien gant tud o klask o bara, gant mammou o luskat o bugale, gant paotred yaouank glac'haret o kuitaat o bro hag o dous, gant re goz ha gant re yaouank, rak e Breiz, an holl, kouls lavaret, a oar kana.

Paeron ar gamerien eo sant Herve, eun amezog d'in p'eo gwir eo bet ganet e Lanrioul, demdost d'am lochenn ; e dad hag e vamm a ouie kana, c'hoari gand an delenn ha sevel gwerziou : barzed e oant. Heñ a gane ivez, an dallig paour, o vale dre hentchou Breiz-Izel ; savet en deus kantikou kaer hag a zo deuet betek ennomp, evel kantik an Anaon a laka an dour en daoulagad ha kantik ar baradoz a zibrad an ene diouz an douar ha ne c'hellfe ket beza ker kaer anez ma 'z eo savet gand unan ha ma 'z edo e gorf, war an douar, a oa e spered hag e galon, e bro an aelez...

Ar c'hanaouennou savet ha kanet en hor bro, abaoe ma 'z eus anezi, a zo bet savet, an darn vrasañ anezo gant tud ha n'o devoa ken danvez nemet nerz o divrec'h da labourat hag eur vouez lemm da gana. Sperejou drant ha seder e oant ha sevel a raent o gwerziou evit derc'hel sonj eus eun dra hennak c'hoarvezet er vro, darvoud pe emgann ; breman e verker an traou-ze war ar c'hazetennou ; neuze e saved soniou pe werziou war no ha, war gan, eo ez ae ar vrud anezo dre bevar c'horn ar vro ; ar paour o c'hane e tal an nor ; ar mammou o c'hane e tal kavell he bugale...

Mouez tener ar vamm a ya dre e ziouskouarn betek ene he mabig ; epad e vuhez en devozo sonj eus ar soniou hag eus ar c'hantikou o devozo sec'het d'ezan e zaercu kenta ; skeudenn e vamm hen harpo bepred hag ar paotrig d'e dro a en em voazo da gana. Evelse eo ez eo bet savet hor barzed. Etre daouarn ar merc'hed eo emañ ar ouenn. Diouz ma kanint en eur luskat o bugale, e labourint evid o bro pe e roint d'ezhi taol ar maro.

Mistral, barz brudet ar Provans, pa oa nevez staget da zevel gwerziou, a en em lakas, eun dervez, d'o c'hana d'e vamm ; a-greiz kana e chomas a-zav, rak gwelet a rae an daerou e daoulagad an hini a garie ar muia. — : Perak e ouelit, va mamm ? emezan ; evidoc'h eo em eus savet ha kanet ar gwerziou-ze.

— : Ya ! eme e vamm, brao e c'hellont beza da unan hennak all, met e galleg emaint ; ma vijent bet e yez va mamm hag e yez va bro em hije o c'havet kaer va-unan !

Adalek an dervez-se, Mistral, an den desket bras, hag a zo bet troet e skridou e kement yez a zo er bed, ne gasas ha ne skrivas mui nemed e *provanseg*.

Merc'hed Breiz, bet luskellet gand eur vreizad dez hag eur gristenez, kemerit skouer war ar Provansad kalonek-se, ha kanit atao e brezoneg, ma vezo kaeroc'h hor bro ha laouenoc'h ho tiegeziou !

Ma 'z eus toniou flour da luskat bugale ez eus ivez toniou garo pa vez hano a vrezel er gwerziou a vez c'hoant kana. Kanit, da welout « *Seziz Gwen-gamp* », pe « *Ar re unanet* » pe « *Stourm an tregont* » setu aze neuze toniou hag a ro kalon d'an den hag ouz o c'hlevout o tregerni e maez ar stourm e tle krena an enabourien ; sioul en o labour, ar Vretoned a veze skrijus da welout war dachenn ar brezel ; gwall dud e vezent eno ; hen an-zav a raent o-unan gwechall :

Tec'het a ra 'r Zaoz penn-da-benn,
Pa leveromp-ni, torr-e-benn !

Hag ober a raent evel ma lavarent n'oa den evito hag atao eo henvel : etre 1914 ha 1918 int bet gwella soudarded ar brezel bras. Kana a raent e kreiz an emgann hag o ofiserien o lakae da gana e brezoneg.

Gellout kana pa gren an izili gand ar spont ha mouezc'hoarzin ouz an ankou o tostaat a zo merk anat eun nerz-kalon sebezus : n'eo ket eus an eil dervez d'egile e sav gouennou-tud par d'hon hini.

Bepred mat da gana, hon tadou a gane o c'harantez war eun ton truezus. Sellit ouz ar zon :

Bemdez, bep noz, barz va gwele, va unan,
E lec'h kousket, me ne ran nemet gouelan !

pe « *Ar bennherez a Geroulas* » pe « *Genovefa Rustefan* », pe « *Azenorig* » n'he deus ket gallet kaout he muia karet hag e weloc'h ma n'eo ket gwir. An toniou-ze avat, daoust pegement a vel-

koni a zo enno n'eo ket ar re a blij an nébeuta d'eomp int.

Met an toniou da gana al labouriou n'int ket trist ; anaout a rit, me oar, « Kanaouenn ar fal-c'herien », « An hader », « ar boutaouaer », « Al leur nevez » ; ouz o c'hana e santer nerz-kaon ar re o deus o savet. Yac'h ha krenv, troet ouz al labour, ez aent en dro eus ar mintin beteg an noz, hep klemm, disklabez o ene, skanv o spered, ha pa deue ar mar da ziskuiza, er goaniv, pa veze berr an deiz, ec'h en em vodent e korn an oaled, er beilhadegou, evit sevel ha kana soniou ha soniou a zavent hag a veze laouen ha drant, ton ha komzou. Den n'en deveze c'hoant gouela pa gleve kana son ar miliner :

Ar miliner a lzer ar bleud
A vo daonet betek e veud !

pe zon' ar c'hemener :

Ar c'hemener ne vez ket moan
P'en devez bet krampouez d'e goan.
Pa vez kig ha fars diouz an noz,
Prim e sklak al ler war e gof.

Eun debrer mat e oa, evit doare, ha ne gavan ket souezus e kavfe mat ar c'hig ha fars hag ar c'hrampouez, rak ar re all a ra ivez.

Setu soniou all c'hoaz hag a zo plijadurus da glevout : « Loeizaig », « ar Sitoyan Meularjez », « Disul vintin » hep ankoumac'haat « War bont ar vilin », en deus bet ar priz kenta e Bleun-Brug Douarnenez.

Chomomp war hentchou Breiz ; hentchou Bro-C'hall n'int ket graet evidomp ; evit chota war hentchou Breiz gwella hon eus da ober eo heul'la goueliou ar Bleun-Brug, ar goueliou-ze renet gand

eun dournadig tud hag o deus touet rei o buhez *evid adsevel Breiz ha boda he bugale d'he difenn!*

Ar re a zo e penn ar Bleun-Brug o deus tennet eus an denvalijenn ar c'hanaouennou dilezet hag a zo pec'hed o lezel da vont da goll hag o embanet e leoriou kaer hag a gaver da brena e Keriltud, 11, rue Algesiras, Brest, evid 20 real ar pez (1).

Kanit ar c'hanaouennou-ze hag ez oc'h sur da gana traou kaer Merc'hed yaouank Breiz, labourit evit Breiz ; kana a ouzoc'h ? Kanit ha lennit brezoneg ; skrivit ha skrivit ha skrivit e brezoneg. Ha pa bedoc'h, pedit ha pedit e brezoneg ; Itron Varia Rumengol hag Itron Varia ar Folgoad a oar brezoneg mat ; ar roue Gralon ha sant Gwennole a gomze ouz Mamm Doue e brezoneg ha Salaün ar Foll a rae ive. Evidon-me pa 'z an da bardona da Folgoad pe da Rumengol a en em erbed atao e brezoneg ouz ar Werc'hez : c'houekoc'h e vez va fedenn ha gwelloc'h e vezan selaouet gant Mamm Jezuz.

— : Warnez mont da goll eman hor brezoneg, eme an dud fallakr ; hen harpit eta neuze, en hanv Doue ! Hor bro a zo o vont da goueza en he foull, emezo c'hoaz ! Hen adsavit eta neuze ivez gant ho polontez vat hag evelse ar c'homzour kizellet war bez hor barz Brizeuk a c'hello beza merket ivez war bez pep hini ac'hanoc'h, an diwezata, ar gwella :

— Karout a rae he bro ha lakat a eure ar re all d'he c'harout !

TINTIN ANNA.

(1) *Trede leor Soniou Feiz ha Breiz* a gaver da brena ivez e Keriltud, evid 20 real hag a zo dleet da bep den yaouank breizat e gaout, en e c'hodel, pa 'z a d'eur pardon, d'eun eured pe d'eur gouel brezonek bennak. Evid e gaout skriva d'an A. PAUL RAOUL, 11, rue Algesiras, Brest. C/C 15.916, Rennes.

Ar C'holonel Olier Gervellec ha Rejimant ar Vretoned

E dud koz

E parrez Plouenan, e lu ar c'hreisteiz, etre kroaz-hent ar Groaz-Ruz ha koad Lanuzouarn, e weler ar pezh a jom eus maner koz Kervellec. Ar maner-ze eo eus roet e hano d'eun tiegeziad tudhentil hag a deue ar ouenn anezo eus a gastell koz Penhoat a weler c'hoaz darn eus e vogerioù goloet a ilio a-uz an draonien e lec'h ma teu d'en em douezia dour ar Pennez ha dour Koad-Toullzac'h, e parrez Sant Thegonneg.

Tudhentil Kervellec, kenta ma kléver hano anezo en istor eo pa 'z edo am A. Huet, unan anezo, skouejer gant roue ar Frans, er bloaz 1375. Heman, da gredi eo, oa tad Briant Kervellec a veve er bloaz 1413.

Muia m'en em vrudas tudhentil Kervellec eo er XV^{vet} kanved: Eon Gervellec a oa e penn lez-varnioù Breiz, er bloaz 1395; Per Gervellec e penn ti Arzur Richemont er bloaz 1396; Alan Gervellec a oa kabiten an archerien karget da ziousall an Duk er bloaz 1420; Yann Gervellec oa kuzulier an Duk Yann V hag a voe prizoniet gantañ e Chateauceaux pa gouezas etre daouarn Mac'harit Klisson.

Mab hena Kervellec a zimezas da verc'h Kerloaguen; dre zimeziou, Kervellec a zo bet perc'hennet goudeze gand an Aotronez Carne, Louet, Harlay, Montmorency, Potier de Gavres ha prenet, er fin, gand an A. Kerouartz.

Etouez paotred yaouanka Kervellec dimezet da vont eus ar gêr e kavomp ez eas unan anezo da vab kaer da Gastel-Gall, e Collorec; eus a Gastel-Gall, lignez ar Gervelleien a en em unanet, dre zimeziou gant lignez Kastelled Koad-ar-Roc'h, e Commana, Kernaoued, Kerguz e Taole hag ar Bolarded; er XV^{vet} kantver e kaved tri skour savet diwar al lignez-se o, veva e Kerilly, e Henvig, e Kerulaouen, e Plougouln hag e Kervinaouet, e Tregunc;

arok mervel, ar skour-ze a roas da Vreiz eur zoudard kalonek a zo nevez bet skrivet e vuhez gand ar c'holonel Juge.

E c'hinivelez

Olier Gervellec a die beza bet ganet wardro ar bloaz 1694 hag a dlee beza mab da Renan Gervellec, barner war douar ar Penhoat. Dont a ebre er bed, da gredi eo, e maner ar Genkiz, e parrez ar C'hoastr, el lec'h m'edo e dad koz, Fransez Kervellec, eus Lannerzien, barner abati ar Releg, o chom, er bloaz 1693.

Ma oa e dad hag e dad koz tud a lezenn, meur a hini eus e eotred o devoa graet o zreuz, en arme, hag unan anezo, Gabriel Kervellec-Kerambarz, kabiter kompagnunez markiz Goetzbiand, a oa mard e kreiz an emgann, er bloaz 1667 dirak Lill pe Dournay.

Foar Scrignac er bloaz 1695

Eur C'hervellec all, ofiser evel Gabriel, a zo anavezet, dre glemmou daou baour kaer den eus ar Fouilhez en devoa bet c'hoant da gas da zervicha ar roue Lociz XIV a yanke soudarded d'ezan dalc'h-mat da gas e vrezelioù en dro. Michel Yann Zoudard, neuze koulz ha breman ne veze ket kement-se a vall d'he c'hemerout hag ar re o devoa ar garg da zvel soudarded nevez a ranke touella, en eun doare pe zoare, ar wazed yaouank o deveze c'hoant da gaout da vont ganto d'an arme: laeron-tud e oant, koulz lavarout; kemerout eur banne diwar o c'houst a oa a-walc'h evit beza tapet ganto da vont d'o heul da zervicha ar roue. Daou baotr eus ar Fouilhez, deuet da foar Scrignac, er bloaz 1695, pe wardro, a oa ken dinec'h ha tra oc'h eva peh a vanne en eun ostaleri pa weljont an Aotrou Kervellec hag eun nebeud soudarded o tapa krog enno d'o ezea, evel diou anduilhenn: stlapet e voent en eur c'har bras ha kaset da Vontroulez hag eno daoust d'o lenv ha d'o c'hlemmou e voent laket etre daouarn Oriot ar Porsmeur, le-tanant rejimant ar Pikardi.

Antronoz, abred, abred, e voent laket e penn an hent



Soudard war droad eus rejimant ar Gervelleien

da vont d'ar Flandrez; unan anezo a c'hellas dont a-benn da derri e ereou ha da dec'het diouz e laeron, e Gwengamp; egile a voe dilivret e Kastell-Audren gand eun ofiser a gemeras truez outan o klevout ar pez a oa bet graet d'ezan hag a roas urz d'ar re her rene d'hel lezel da vale rak, emezan, difennet striz eo gand ar roue, kas unan bennak da zoudard dre heg; an hini ne fell ket d'ezan mont dre gaer, n'eus nemed eun dra da ober : hel lezel er gêr.

Dindan an armou

Olier Gervellec oa an eil eus ar vugale: koll a eure abred e gerent rak er bloaz 1710, an A. Kervellec chaloni Kemper ha priol Kernitron a oa e gurator. Eur wech aet en arme e teuas, e berr amzer, da veza ofiser. Perz a gemeras e emgannou Denain, Douai, Quesnoy ha Bouchain er bloaz 1712 ha 1713; er bloaz 1714, e oa letanant hag e teuas da veza dem-goude kabiten e rejimant soudarded Angoulem, eur garg hag a dlee beza fiziet ivez. diwezatoc'h, en e genvroad brudet Malo de la Tour d'Auvergne.

Bez e veze atao e kement lec'h ma veze kavet labour ennan d'e rejimant, e seziz Kehl ha Philipsbourg, er Bavier hag er Bohem; evid e drugarekaat eus al labour vat en devoa graet e voe hanvet letanant-kolonel er bloaz 1746.

« Rejimant ar « Gervelleien »

Er bloavez warlerc'h an A. Kervellec a c'houlennas aotre da zevel eur rejimant nevez hag a vije an hanter eus e zoudarded war varc'h hag an hanter all war droad, evit stourm a-zevri ouz soudarded hanter c'houez Mari Theresa, impalaerez vras an Autrich.

Lezet e voe da ober hervez e c'hoant. Pa ziskennas ar Zaozon er Poulldu, d'an deiz kenta a viz here 1746, evit gellout kerzout ac'hano warzu an Oriant, ar c'holonel Kervellec a voe kaset da zifenn ar gêr-ze, met ar Zaozon a grogas aoun enno dillo hag Olier Gervellec n'en devoe ket amzer da ziskouez e berziou mat a vre-



Soudard war Ioen eus rejimant ar « Gervelleien »

zelour; en em lakat a eure, a zevri, raktal goudeze, avat, da zevel e rejimant nevez ha ne dlee beza ennan nemet Bretoned c'hoant d'ezo da vont zoudarded : 900 soudard war droad ha 300 war varc'h, rannet e 2 gompagnunez a 50 grenadour, 8 kompagnunez a 100 fuzulier, ha 6 kompagnunez a 50 hussard a oa en e rejimant.

Gwiskamant ar « Gervelleien »

D'an 28 a viz du 1746, p'en em vodas aotroned parlamant Breiz, an A. Kervelec a c'houlennas outo lavaret d'ezan liou ha stumm ar wiskamant o devoa c'hoant da rei da zoudarded rejimant ar Vretoned. Aotroned ar Parlamant a roas aotre d'ezan da wiska e zourded el liou hag er stumm a garje : mat o devoa graet rak ar wiskamant a zibabas e-unan evito a oa eus ar re gloka : o mantell war gorre a oa gwenn o tenna war ar rouz gant bevennou glas; o sae dindan a oa dem-c'hlas gant bevennou gwenn; o chelp a oa ruiz, o bragez glas-glizin hag o boned du gand eur bluenn wenn; evel armou o devoa eur fuzuilh hag eur c'hleze hag ar zoudarded war loen o devoa ouspenn peb a ziou bistolenn; o banniel a oa warnan eur groaz wenn herminiget hag ar c'herniel, etre divrec'h ar groaz, a oa an hanter anezo du hag an hanter all melen-aour.

Dre gaer ha dre heg

E c'hellit kredi, ne veze ket gwall aes atao kaout tud hag o divije c'hoant da vont e rejimant ar Vretoned. Parrez Hanvec a lakeas da vont ennan eun foullad aildud-se, alies a-walc'h, evelato, a deus da veza zoudarded vat. Etouez an hanoioù a zo war rollou rejimant ar Vretoned, toueziet gant hanoioù gall ha diavaezidi all e kavomp hanoioù Bretoned evel re aotroned an Tour (eus a zant Noug), Cheffontaines (eur breizad, hanvet Penfeunteniou, hag a zo bet diskiant a-walc'h evit gallekaat e hano), Penvilher Kersanzon, Penhoat-Rousseau. Ansker, du Gage, Keryerho, Kervarzin, Lanvarzin, Guernisac (eus a Witevede), Hudo Keroman.

Bloaz diweza O. Gervellec

Er bloaz 1747, d'an nevez-amzer, ar rejimant a oa prest da vale gand armeou ar Flandrez, dindan urziou ar marchal de Saxe; soudarded Lowendal ha re Gervellec a lakeas seziz, war Berg-op-Zoorn, unan eus plasou krenfa an Europ; epad ar seziz-ze ar « Gervelleien ». (evelse eo e veze lezhanvet alies soudarded an A. Kervellec) a oa karget da virout na deuje an enebourien, a oa o redet ar vro etre Breda ha Berg-op-Zoorn, da zailha dre an a-dre war ar zoudarded a gelc'he ar blasenn. Ar Vretoned o tifenn kêrig Wonde a lakeas brud da goueza war o hano, rak trec'h e voent eno da enebourien hag a oa kals niverusoc'h egeto : 52 anezo a voe lazet, 82 glazet hag, en o zouez, 2 ofiser.

En eul lizer d'ar ministr, Lowendal a ra mentudi ar c'holonel Kervellec, « eun ofiser, emezan, eus ar re genta hag a labour mat dreist ».

Pa voe kemeret Berg-op-Zoorn d'ar 17 a viz gwengolo 1747, ar Vretoned a redas warlerc'h an enebourien o devoa gallet tec'het; bihanaet mat e oa o niver gand an tan ha gand ar c'hlenved; d'an 30 a viz here, an A. Kervellec ha tregond den a jome c'hoaz gantan war o zreid a oa en hent gand 28 pe-kanol ha 250 kar; 1500 enebour bennak a gonezas warno; ar c'holonel a voe lazet mei eus an traou a zioualle ne voe kollet nemed eur c'har.

An A. Blaisel a gemeras penn rejimant ar Vretoned warlerc'h an A. Kervellec; eun nebeud miziu goude ma voe sinet ar peoc'h e Aix-la-Chapelle, d'ar 14 a viz here 1748 e voe taolet d'an traon rejimant ar Vretoned hag an 340 den a oa ennan c'hoaz a voe laket e rejimant ar Flandrez.

Rejimant chaseourien war loen Pontivy, savet ha skoliet e Breiz ha ne jom netra ken anezan, ken nebeud, nemed e vanniel, eo tosta kar, en devoa, e nep lec'h, rejimant ar Vretoned kalonek-se a gerze, gant lorc'h, en XVIII^{vet} kantved da heul banniel herminiget ar « Gervelleien ».

G. P.

Keleier ar miz

XXI Gouel ar Bleun-Brug

Er bloaz-man e vo graet gouel bras ar Bleun-Brug e Henbont d'r 4, 5 ha 6 a viz Gwengolo.

Renet e vezo penn-da-benn gant Eskob karet ar Vretoned, an A. Trehiou.

D'ar 4 ez aimp da zaoulina war bez Y. B. Galloc'h, da enezenn Groe.

D'ar 5 ema dervez ar studiadegou.

D'ar 6 e vezo adalek 8 eur betek 10 eur hanter, — da lavaret eo betek an oferenn a vezo kanet raktal goudeze — kevererez pe gonkour ar c'han : ar muia a strolladou a vezo er c'honkour-ze eo ar gwella.

Eyit kenstriva pe gonkouri eo red deski diou' ganaouenn : unan eus an teir-man : *Kousket, ar Bleun-Brug, ar Christ Roue* hag eun all a zibaboc'h hoc'h unan e diou, pe deir, pe beder mouez, evel an hini genta.

Evit kaout ar c'hanaouennou-ze skriva d'an A. L. Le Milon, 6 rue du Maréchal Foch, Vannes, pe d'an A. Coetmeur, professeur au grand Séminaire de Vannes.

Ar c'hanaouennou all a gavoc'h e « MORCEAUX ET CHŒURS DU BLEUN-BRUG », librairie Emgleo sant'Ild, 11, rue Algésiras, Brest.

Bez e vezo ivez kevererez (pe gonkour) etre kanerien ha kanerezed, bras ha bihan, hag a gano o-unan, e brezoneg. Dibaba a raint ar ganaouenn a girint.

Renerien ar strolladou kanerien a vezo red d'ezo rei da anaout d'an A. Coetmeur ar c'hanaouennou a lakint kana a-raok gouel Maria Hanter-Eost; Lavaret e vezo d'ezo neuze da bet eur hag e pelec'h e vezo ar gevererez (konkour).

Evel ma ouzoc'h ar Bleun-Brug a ro priziu, en ar c'chant, d'ar ganerien : eur gwenneg dre zen ha dre gart-mizou. Evelse e vezint digollet eus eul lodenn vras eus o mizou.

Ra ziredo ar Vretoned da Henbont, a vilierou, d'ar 6 a viz gwengolo a zeu, da gana gloar da Vreiz, o bro.

A-benn bloaz aman

Eus an 22 d'ar 26 a viz mezeven 1932 e vezo graet e Dublin, goueliou bras ar Zakramant : kristenien ar bed, holl a zo pedet da vont d'ar goueliou-ze : ar Vretoned benniget ha renet gand o eskibien en em gavo gand ar re genta.

Unan hag a zalc'h

Bretoned Paris o deus graet eur gouel en enor d'an A. Markiz de l'Estourbeillon, Renner an U. R. B., eun den hag a zalc'h da labourat evit Breiz hanter kant vloaz hag ouspenn a zo, daoust ma kav bemdez war e hent, muioc'h a zrein eget a roz.

An A. de l'Estourbeillon en deus sonj da zevel, er bloaz a zeu, eur skeudenn da Nevenoe, roue Breiz, du-hont, en eun tu bennak, e bro Redon.

Ar Vretoned vat o defe c'hoant da brofi a zo pedet da gas o frof, war eun, d'an A. Markiz de l'Estourbeillon, 4, Rue du Vieux Colombier, Paris, VI.

Rouan : 1431-1931

D'an 30 a viz mae diweza edo pempet kantved bloaz abaoe ma voe devet santez Jann d'Arc e Rouan; e penn ar goueliou dispar-ze edo ar c'hardinal Bourne, arc'heskob Westminster, kannad ar Pab.

Santez Jann d'Arc, emezan, a zesk d'eomp n'eus doare gwelloc'h ebet da garet hor bro eget chom heb ober gaon ouz bro hon nesa. Ra zizroio ar Zaouñ d'o Bro, a lavare Jann, ha Doue r' o bennigo.

Ma karfe an holl boblou bras selaou kenteliou santez Jann d'Arc ne vefe ket gwasket kement eneo ar poblou bihan, ha ma vezont breman c'hoaz, ha ne vefe ket gwelet eur yez evel ar brezoneg, komzet gant daou vilion a dud, ha s'lapet, evel eur baourez, er maez eus ar skoliou. Ma n'eo ket eun druez hag eur vez gwelet eun hevelep tra c'hoaz en hon amzer!

Leor an A. Gwilhou

O deus rakprenet al leor e miz mae :

An A. Herry, person Sizun	1
An A. Badoual, mestr-skol St-Barnabé.....	1

An Tad L'Helgouac'h, Jersey.....	1
An A. hag an I. 'n Her Kervadec, St-Nouga.....	1
An A. Roux, Kure Gwitevede.....	1
An A. Moren, kelenner kloerdi bihan, Ploermel.....	1
Anna-Mari Landure, Lannebeur, Plougerne.....	1
An A. Bernard, person Cast.....	1
An A. J.-F. Guennegan, Kernonenn, Sant-Nouga.....	1
An A. Louis Madec, kurust person Sant-Divy.....	1
An A. Henri Larvor, Kerwad, Meilars.....	1
An D. Marsellina Cabon, Gwiseny.....	1
An A. Tanguy Creignou, Vourn, Cleder.....	1
An A. Y. Diridollou, Kloerdi bras St-Brieg.....	1
An A. Y. an Du, plas ar moc'h, Brieg.....	1
An A. Louis Floc'h, Plomeur.....	1
An A. Victor Gouriou, Sant-Thonan.....	1
An D. Mari Laurent, Rukelen, Gwipavas.....	1
An A. Marcel Le Parc, Kloerdi bras Sant-Briec.....	1
An D. J. Marc'hadour, Gottorn, Cast.....	1
An D. Mari Rosec, skolach Lesneven.....	1
An D. Suzanne Simon, Poullpik, Gwitevede.....	1

25

Leoricou rakprenet betek-hen : 709 + 25 = 734.

Rodig a dro

A ra bro!

Tam ha tamm ivez e tostaomp ouz ar mil, met evid en em gaont eno, evelato, arabad eo d'hor mignoned ebana c'hoaz da zegas d'eomp hanoiou nevez hag ec'h adlavaromp eur wach all ar pezh hon deus lavaret er miziu tremen :

Al leor nevez, kaset betek an ti ne gousto nemet 10 lur. Arabad d'ar rakprenerien her gortoz c'hoaz, rak ne vezo kaset ar skridou anezan d'ar vouterezh nemet pa vezo 800 prener.

Degas an hano hag an adres, heb an ac'hant, kenta ma vezo gelllet, d'an A. Perrot, Renner Feiz ha Breiz, Scrignac (Finistère).

DIVINADENNOU

DIVINADENNOU MIZ MEZEVEN

I. — E pelec'h eo bet skoet,
Kenta ibil bet skoet er bed?
20 p. ar r. *Degaset gant A. Madec, Scrignac.*

II. — Pere eo ar peder gêr eus Frans hag a zo eun e
en o c'hreiz

B	C	x
x	x	x
D	x	E x x
x	x	x
F	x	x

20 p. ar r. ... *Degaset gant J. M. an Duc, Taole.*

III. — Piou a zo c'hoar gaer da c'hoar va zad ?
20 p. ar r. — *Degaset gant V. Gouriou, St-Thonan.*

IV. — Uhel pignet ha fall wisket
Hag a lak an dud da redet ?
20 p. ar r. *Degaset gant A. Madec, Scrignac.*

V. — Ritous diritous,
Soun beg e vitous ?
20 p. ar r. — *Degaset gant Olier Pele, Toull-al-Louarn, Lannilis.*

Gounideien kenstrivadeg divinadennoù tri miz kenta ar bloaz e lec'h kas leoriou d'ezo hag o deus bet c'hoaz, marteze, e lakimp o hano war roll rakprenerien leor oberou an A. Gwilhou hag, en hent-se da vihana, e vezint sur da gaout eul leor nevez a vezo kaset d'ezo evit benoz Doue, raktal ma temio eus ar voulderez.

Gounideien divinadennoù miz mae, miz mezeven ha miz gouere a vezo graet kement all d'ezo ivez nemet gounezet o defe c'hoaz al leor-ze gant divinadennoù tri miz kenta ar bloaz.

Feiz ha Breiz

Pardon bras santez Anna Wened

D'ar 26 a viz Gouere

1. — An Aotrou Doue e-unan eo en deus c'hoant da welout ar bardonerien o vont niverus da Geranna. Satez Anna, breman ez eus 305 bloaz, a lavaras da Yvon Nikolazig : « Doue a fell d'ezan e vefen enoret aman hag e vefe adsavet ar chapel graet evidon, bet diskaret 924 bloaz ha 6 miz a zo. Dibabet em eus al lec'h-man dre m'her c'haran ! »

2. — Santez Anna he deus graet burzudou, a vilierou, e Keranna, en tri c'hant vloaz diweza-man hag ar burzudou-ze n'eus ehan ebet d'ezo c'hoaz ; a gantchou eo e c'heller o niveri bep bloaz.

3. — An iliz a welit breman, e Keranna, a zo bet savet er bloaz 1875, e lec'h ar chapel en devoa lakket ober Yvon Nikolazig ; Breiz a-bez, evit diskouez he anaoudegez vat e kenver he Mamm, eo a zavas an iliz-ze, e tremen drezi, 400.000 perc'hirin, bep bloaz.

4. — Ar Scala Sancta (Skeul Zantel), e pigner enni, war an daoulin, koulz hag ar c'hloastr, em annan hent ar groaz, a zo daou damm labour bet savet, breman ez eus 300 vloaz, gant Tadou Urz Karmel.

5. — Yvon Nikolazig ha Per Geriolet hag e weler o skeudennou a-uz an noriou bihan a zo a bep tu,

d'an nor dal, a zo o beziou dindan an diou aoter genta a gaver a-zehou hag a-gleiz pa 'z aer en iliz.

6. — A-us ar feunteun eo ec'h en em ziskouezas santez Anna, evid ar wech kenta, da Yvon Nikolazig ha d'e vreur kaer, er bloaz 1623. Dour ar feunteun-ze he deus pareet meur a hini.

7. — Talvezout a ra ar boan da vont da welout *Tenzor Santez Anna* ha drezan e weler peger karet eo Mamm-goz Hor Zalver, e Breiz, pa roer kement all a draou kaer ha prisius d'ezi.

Grit ho tiskenn ivez e mirdi (musée) Nikolazig: traou koz ha traou nevez a zo ennan hag a ray plijadur d'eoc'h o gwelout.

8. — An ti, el lec'h m'edo Yvon Nikolazig o chom, a zo war hent Gwened; eun aoter a zo ebarz hag oferennet e vez outi alies; eno, dreist-holl, eo ec'h en em ziskouezas santez Anna da Yvon.

9. — Arabad d'eoc'h ankounac'haat mont da ober eur zell ouz bez-meur Soudarded ha mortoloded Breiz maro er brezel bras ha bezit brokus eno, pa 'z eoc'h da rei ho prof, ma vezo gellet peur-ober, hep dale, ar pezh-labour kaer-ze a vezo eun dud a welout.

10. — Ha gant a reoc'h, grit ho tro e Keranna, nann evit gwelout ha beza gwelet, met dreist-holl evit pedi an Itron vat Santez Anna. Goulennit diganti yec'hed ar c'horf ha dreist-holl yec'hed an ene, madou an douar ha dreist-holl madou an nenv.

Pedit santez Anna, gant fizians, ha pedit-hi gant eur galon ha n'eus pec'hed ebet enni ha rak-se, a-raok en em ziskouez dirak he aoter hag a-raok daoulina ouz taol zantel he mab bihan, gwalc'hit mat ho korf ha gwelloc'h c'hoaz hoc'h ene e lez-varn ar binijenn. En doare-ze hag en doare-

ze hepken eo e c'hell ho tro e Keranna beza eur « pardon » henvel ouz eur « pardon ».

He burzudou diweza

Anna-Mari Duchesne, eur verc'hig 11 vloaz, eus a Allair, — eur barrez hag a zo pemzek leo diouz Gwened, — a oa kilanv, daou vloaz a oa, gand eur c'hlenved nervennoù ha ne gave ar vedesined lousou ebet outan. He zud he gouestlas da Zantez Anna; adalek neuze, ar verc'h a deuas gwellaenn enni hag a-benn an dekyet dervez e oa pare mat; n'he deus bet barrad klenved ebet abaoe.

D'ar 14 a viz mae diweza eo deuet da Geranna, gant he zad, he mamm hag he c'herent, da drugarekaat an Itron vat Santez Anna.

Eur baotrezenn all, Mari-Loeiza A. a zo nevez bet pareet ivez gant santez Anna. Tri miz a oa edo mat ha war lavar ar medesin ne oa pareans ebet ken da c'hortoz eviti. Gouestlet da Zantez Anna ar verc'h a voe pareet hep dale hag abaoe, — da lavarout eo, bloaz a zo, — e c'hell komz koulz ha pep hini hag he yec'hed a zo mat dreist.

Bez-meur Breiziz ar brezel bras

Ar re o deus kollet unan bennak eus o zud er brezel, — eur mab, eur pried pe eur breur, — ha n'o deus ket kaset c'hoaz eur maen-bez en o hano, da Geranna, a zo dleet d'ezo kas 200 lur, kenta ma c'hellint, da *M. le Supérieur de Sainte-Anne, Morbihan. Chèque postal, Nantes, 8-890.*

Kas an holl brofou all d'an adres-ze ivez ma vezo peurc'hraet, ar c'henta, ar gwella, chapel Itron Varia ar Peoc'h war bez-meur soudarded ha mortoloded Breiz maro er brezel bras.

Buhez an Tad Maner

(Kendalc'h)

E c'halloud burzudus goude e varo

Epad e vuhez, an Tad Maner en doa graet burzudou, ha tud Plevin, evel m'eo bet lavaret a c'hoantae derc'hel e gorf en o farrez, dreist pep tra abalamour d'ar fizians o doa e rafe burzudou en o zouez.

Hag e gwirionez, a vec'h m'oa maro an *Tad mat*, ma ti-redas a bep tu ar Vretoned da bedi war e vez da c'houlenn dreizan graou a bep seurt. Selaouet e voe o fedennou, hag ar burzudou c'hoarvezet a zo ken niverus, ma vije ret eul levr bras evit o displega-holl.

Ne gomzimp eta nemet eus eul lodennig anezo.

Eun nebeut dervezion hepken a oa tremenet abaoe maro an Tad Maner, pa c'hoarvezas paredigez eur bugel c'houlennec'h vloaz, Yann Boisadam, euz Keraez, mab d'eur c'hemener. Ar bugel-ze a oa tort; eur bos en doa war e gein hag eun all war e vruched ha n'helle tenna e alan nemet gant kalz poan. Seizet oa ive, ouspenn, hep gellout finval e izili, hag edo war e wele abaoe tri bloaz. E gerent o doa her c'haset gwechall da Blounevezel, epad m'edo eno an Tad o prezeg eur mision, met ar bugel n'oa ket bet pareet en taol-ze. Goulenn a reas digant e gerent mont da Blevin da bedi an Tad Maner evitan. An tad a zentas, hag antronoz, epad m'edont, hen hag e wreg er maez eus o zi o doa alc'houeziet, an Tad Maner a en em ziskouezas d'ar bugel klanv, dirag e zaou vreur bihan. « C'hoant ec'h eus da barea? », eme an Tad. — « Oh! ya, a respontas Yannig. » An Tad a lavaras d'ezan beza mat da bedi, a zisklerias e vije herr e vuhez hag her pedas da c'houlenn digant e gerent beza kaset betek Plevin. Ober a reas sin ar groaz war gein ha war bruched ar bugel, hag e kuiteas an ti. D'an ampoent, an daou vos a voe pareet, hag ar bugel a denne e alan hap poan ebet, met seizet e chome atao.

Ar vamm a en em gavas en ti. O welet en doa he bugel pevar bloaz doare da veza spontet, e c'houlennas digantan : « Petra a zo a nevez? » — « Aon em eus bet rag eur beleg koz a zo deuet da welet va breur klanv. » Ha Yannig a gontas neuze d'e vamm petra a oa tremenet. Houman a zell ouz kein ha bruched he mab : bos ebet ken. Leun a joa, e red da diez an amezeien da rei d'ezo da anaout ar burzud. Buan ar c'helou a zo skignet dre gêr a-bez, hag an holl a c'hoanta dont da welet. Gouarnner kêr, an aotrou Kerlouet, a zired ive. Laouen o welet eun hevêlep paredigez, e ro e garros da gas ar bugel betek Plevin. Eno an Tad Maner e beurehira al labour en doa boulc'het ken brao.

Eur zulvez oa, epad an ofereñn-bred. Kerkent ha ma voe astennet ar paotrig war bez an Tad Maner, eun nerz nevez a redas en e gorf, ha dirag an engroez tud a oa en iliz, e c'hellas, en eun taol, finval e zivrec'h hag e zivesker; raktal e savas, hag, hep beza harpet gant den, e reas an dro d'ar bez burzudus. An dud, souezet ha laouen, a drugarckae Doue da veza roet kement a c'halloud d'an *Tad mat*.

—Ar bugel a vevas e'houec'h miz ya'h mat, met da c'houde e stagas outan klenvejou all hag e varvas. An Tad Maner en doa diskleriet d'ezan ne jomfe ket pell war an douar.

Brud an Tad Maner a greske, sklaer eo, ha fizians ar Vretoned ennan a greske ive. Ar glanvoudien n'oa pare ebet evito a zirede pe a veze digaset da Blevin. Lod a gave ar pare war bez an Tad, lod all en eur zistrei d'ar gêr. Awechou oa awalc'h ober ar bromesa da zont da Blevin.


Diou vamm, an itroun Koethual, eus Plougernevel, ha Franseza Korpian, eus bourg Prisiak, e eskopti Gwened, o doa pep hini eur bugel klanv. Merc'h an itroun Koethual, triouec'h miz d'ez, n'he doa lavaret ger ebet c'hoaz nemet... mamm... na graet kammed ebet, rak he zreid hag he divesker no' doa tamm nerz. Bugel Franseza Korpian, eur paotr a bevar bloaz hanter, a oa distres e dreid, ha n'oa mui fizians ebet d'e welet o vale. An diou vamm a voestlas o bugale d'an Tad Maner hag a reas ar bromesa d'o digas war e vez.

ha dont, hag antronoz edo e keur an iliz o trugarekaat an hini en doa roet d'ezi ar pare. Chom a reas he ye-c'hed ganti ouspenn tregont vloaz da c'houde.

An aotrou Pleuk, eskob Kemper, a yeas e-unan, gant barnerien, da vanati Lokmaria, d'ober enklask war ar burzud-ze.

Ehanomp aman, rak re hir e vije displega an holl vuzudou c'hoarvezet goude pedi an Tad Maner. An aotrou Pleuk, eskob Kemper, o skriva d'ar Pab diwarbenn an Tad Maner, a lavare evelhen : « A vec'h m'omp kroget en eun enklask war unan bennak eus e vuzudou, ma teu kelou d'eomp eus ugent all en em gavet aman hag ahont. An den-ze, dispar, en deus, epad e vuhez graet kalz burzudou. Met abaoe e varo, c'hoarvezet breman ez eus 31 bloaz, en deus graet re all, ha ken niverus, ma teuer, eus pep korn a Vreiz, da bedi war e vez. »

Y. U.



Sant Edern

Sant Edern, gant sant Telo ha sant Herbod, a zo unan eus tri zant brasa meneziou Kerne. Beva a eure dre eno hag iliz Lannedern a zo savet war e vez. Hen eo ivez patron iliz Edern, savet war ar Reun-Du, e kichenik Brieg ha patron iliz Plouedern, e Leon, e tal Landerne.

Ganet en Iwerzonn, evel eleiz a zent all a deuas da brezeg ar feiz da Vreiz-Izel, Edern a dreuzas ar mor gand e c'hoar Genevefa hag a zouaras, er Rize, e kichenik Douarnenez. En em denna a rejont, da genta, en draonienn goant.

el lec'h m'ema breman ar Yeuc'h, war lez koad Neved. Sevel a rejont eno diou lochenn; o fedennou hag o frejou a raent, e boutin, hag Edern pa en deveze amzer, a rede ar vro da zeski d'an dud anaout ha karet an Aotrou Doue.

Eun dervez m'edo Edern o pedi e kichen e beniti e welas eur c'haro, hanter zialanet, o redek a-raok chas aotrou Neved, o koueza e-harz e dreid, evel m'en divije c'hoant da c'houlenn skoazell digantan; pellaat a eure diouz al loenig paour ar chas a venne sailha warnan hag e c'houlennas digant o mestr chom heb ober an distera droug d'ezan. Aotrou Neved a oa kristen; anaout a eure e ranke beza bras santelez Edern pa ouie eul loenig gouez en em erbedi outan evel ma rae hag e roas ar c'haro d'ar zant, d'ezan da ober gantan ar pezh a garje; ar c'haro ne ankounac'heas ket ar vad a oa bet graet d'ezan; chom a eure da veva e serr ar zant; en noz, e kouske, e tal e beniti, hag, en deiz, e kerze, d'e heul, evel eur c'hi.

Nebeud amzer goude, Edern a gredas e oa mat d'ezan mont doumoc'h, en douar bras, evit skigna dre eno kenteliou Hor Zalver Jezuz-Krist. Pignat a rejont, o daou, e c'hoar hag hen, war ar c'haro, hag ez ejont etrezek ar Menezioù Du; chom a eure a-zav, war ar Reun-Du, hag e savas eno e beniti hag ac'hano e rede ar vro da rei da anaout, d'an dud, ar gelennadurez kristen. Eun den mat, eus a gichen, a roas d'ezan eur vioc'hig zu; ar zant en deveze plijadur o vont d'he c'has er maez, hag en dra ma veze o peuri ec'h azéze, war eur roc'h, e weler warni c'hoaz roudou e gorf, hag eno e chome pennadou mat da bleustri war draou an nenv.

N'en devoa nemed eun enebour er vro hag oa aotrou Kistinig e weled, eus a beniti ar zant, tour teo e gastell savet war eur voudenn, douveziou.

leun a zour, en dro d'ezi. An tour, graet gant mein ha koad, a zo kouezet pell a zo, met ar voudenn he douge a hanver atao kastell Kistinig. Aotrou Kistinig a oa payan ha kas en devoa ouz Edern o welout e c'houneze e dud d'ar gwir feiz. Eun dervez, diouz an noz, en dra m'edo ar zant o pedi, e veoc'h a dec'has eun tamm dioutan hag a lammas en eur parkad segal glas hag a oa d'an aotrou; eun nebeud genaouadou segal a lounkas; aotrou Kistinig o tremen, dre eno, a lakeas e chas da zailha warni hag al loen paour a voe diskolpet a dammou. Edern, o klevout an trouz, a ziredas da welout petra a oa a nevez; mantret e chomas pa welas ar pezh a oa digouezet gand e veoc'h hag gand an dra-ze en devoa aoun da glevout trouz gand e c'hoar; Aotrou Kistinig hag e dud, o welout e zisplijadur, e lec'h kaout truez outan, a c'hoarzas d'e-

zan: « Mar
« deo ker gal-
« loudus da
« Zoue, emezo,
« hag a leve-
« res, n'en deus
« nemet dont
« aman da la-
« kat da veoc'h
« adarre en he
« dez; met eun
« dra eo ke-
« ment-se hag
« a dle beza
« dreist e c'hal-
« loud!»
Fazia a rae
aotrou Kistinig;
an Aotrou Doue




Sant Edern iliz Lannedern

n'eus netra dreist e c'halloud ; Edern a zastumas tammou e vioc'h hag o lakeas, gwella ma c'hellas, en o flas ; daoulina a eure da ober eur bedenn hag en hano an Dreinded e c'hourc'hemennas d'ar veoc'h sevel, en he sav ha dizrei d'he c'hraou. Ar veoc'h a zentas, war an taol. O welout eun hevelep burzud, an aotrou a gouezas e-harz treid ar zant da c'houlenn pardon ha badiziant digantan. Dont a eure da veza eur c'risten mat hag eun dervez zoken e voe gwall c'hlazet o klask difenn eur beleg a oa o vont da gas an Aotrou Doue da unan klanv hag e oa sailhet eun toullad laeron warnan. Adalek neuze ha betek an Dispac'h, aotroned Kisting o devoa gwir da vale, eur c'hleze noaz, en o dourn, dirak ar beleg a zouge an Aotrou Doue e profesion sul brás ar Zakramant, e Brieg.

Daou pe dri bloaz goudeze, Edern a vennas mont pelloc'h ; pignet war ar c'haro, e treusjont e c'hoar hag hien ar ster Aon, hag ec'h en em gavjont e traon Menez Are. Eun dervez ec'h en em gavjont e Koad ar Roc'h hag ac'hano e welent dirazo moudenn Kronou a hanver breman Menez Mikael : « Evidoun-me a jomo aman a lavaras Edern da Genovefa ; ar vro a gavan brao. » — : « Me her c'hav trist, eme ar zantez, ha mont a ran pelloc'h da glask eun all laouenoc'h. » Ar vro laouenoc'h a glaske a gavas, eul leo ac'hano, war eur grec'henn uhel troet ouz traonienn ar ster Aon. Pep hini a zavas e beniti, evel ma plije gantan ; ar c'haro hag ar veoc'h a charreas ar pezh a oa ezomm evid ober an diou lochenn.

Kristenienn a en em vodas en dro d'ar zant ha d'ar zantez ha ken niverus e oant ma oa peadra da ober diou barrez. Red e oa, evit kement-se, ranna an douar a oa chomet e boutin, betek neuze. Genovefa he devoa eleiz a herziou mat, met troet e oa da ober he mestrez ; he breur a ranke plega

d'ezi atao. Pa zavas hano da ober diou barrez e c'hoanteas kaout evit he lod an douarou gwella ha ne felle d'ezi lezel gant he breur nemet Koad ar Roc'h hag an nebeudig lanneier treut a oa en e gichen. Edern a oa mat da c'houzanv ; koulskoude ne felle ket d'ezan koll e wiriou ; pa welas n'oa ket evid en em glevout gand e c'hoar e lavaras d'ezi. « P'eo gwir n'omp ket evid en em glevout, lakomp an Aotrou Doue da varner etrezomp ha setu aman penaos. Emberr, pa vezo noz, e pignin war ar c'haro ha ne jomin a-zav nemet pa glevin ar c'hilhog o kana ; an douarou a rin, evelse, an dro d'ezo a vezo d'in hag ar re all a vezo d'it ; evelse, an Aotrou Doue e-unan, eo a ray al lodennou ; mat e kaves? »



Iliz Plouedern

Genovefa a zonjas e oa koz ar c'haro ha ne c'hellje ket kerzout kaer epad tenvalijenn an noz hag, ouspenn-ze, e kreiz an hanv edod hag an noz a oa berr. — Mat e kavas eta ar pezh a ginnige d'ezi he breur.

Dal ma oa kuzet an heol, Edern a yeas da glask

e garo a oa kousket ; pignat a eure warnan hag hen gantan warzu Brasparts ha goudeze hel lezas da vont, evel ma kare. Evel m'en divije gouezet petra c'hede e vestr dioutan, ar c'haro a en em lakeas da redek en dra c'helle hag a vec'h ma stoke e dreid ouz an douar. Ar zant a oa krog e koajou e benn hag a lavare eur ger bennak d'ezan evit m'en divije kalon da vont buanoc'h. Mont a raent evel eur gorventenn, hep teurel evez ouz al lec'hid hag ouz ar reier. An moz, e lec'h beza tenval, evel ma c'hoantae Genovefa, a oa sklaer hag ar stered a lufre e haliou an nenv.

C'hoar Edern a oa aet da azeza war eun dosenn, e kichen he feniti, ha fizians he devoa da welout he breur o tizrei hep beza gellet ober pennad hent ebet, koulz lavarout ; met he laouenedigez a droas he enkreuz pa glevas trouz ar c'haro war an hent ; diou eur noz a c'helle beza c'hoaz hag epad an diou eur-ze Edern war e garo en divije amzer da ober tro an diou barrez. Penaos ober d'ezan chom a-zav ? Genovefa a oa eur vaouez a skiant ha p'eo gwir e c'helle he breur bale betek ma klevje ar c'hilhog o kana, gwella tra he devoa da ober, evit mirout outan da vont pelloc'h, oa lakat ar c'hilhog da gana dioc'htu. Harp en dosenn e oa eun tiegez. Genovefa a ziskennas betek ennan, a zigoras an nor war glud ar yer, ha goude beza tapet ar c'hilhog her soubouilhas en dour yen ; dihunet gand an dour-ze, ar c'hilhog a hejas e ziouskell hag a en em lakeas da gana : mall e oa rak, kerkent, edo ar c'haro o lakat e dreid e porz ar geriadenn.

Daoust d'an dro gamm-ze c'hoariet d'he breur gand ar zantez, parrez Lannedern a zo eun tamm mat brasoc'h eget parrez Lokevred, el lec'h m'ema santez Genovefa patronez. An douarou gwella a zo ivez e Lannedern hag epad pell hag hir amzer

parresioniz Lokevred a zo bet red d'ezo mont da bilhaoua evit gounit o zamm bara.

Eur groaz a zo bet savet, tostik-tost da vourc'h Lokevred, el lec'h ma chomas ar c'haro a-zav hag al loenig mat a zo kizellet war ar groaz-ze. E Lannedern e weler skeudenn ar c'haro ivez, e kichen an aoter vras, gand e vestr, war e gein, war groaz ar vered hag e porched an iliz.

Abaoe an taol-ze n'eus ket bet a garantez a-walc'h etre Genovefa hag he breur rak Genovefa a damall atao he breur da veza lezet ganti eul lodenn re vihan en holl.

Pa voe diskaret tour Lannedern, gand ar gurun, Genovefa a oa lorc'h enni : « Mat, a zo graet da Lannizedern, emezi, ha marteze, hiviziken, ne vezo ket kement a c'hlabous ganto, rak n'o devezo mui eun tour ken uhel ha kel lemm e veg ha va hini ! »

Unan bennak a lavaras da Edern ar pezh a lavare e c'hoar : « O ! eme Edern, arabad da barresioniz Lokevred, youc'hal re, rak n'o devezo en o zour nemet kleier faout hag hini ebet anezo ne vezo skiltrusoc'h eged ourouler marc'h eur pilhaouer ! »

Hag evelse eo ema an traou : tour Lannedern a zo chomet berr ha teo hag e tour Lokevred kaer e vez lakat kleier nevez e vezont gwelét o faouta war o brall kenta.

Edern a zo e relegou e traon an iliz savet war e beniti ; e skeudenn kizellet war e vez, breman ez eus 400 vloaz, hen diskouez, gwisket, e manac'h, e gabel war e benn, hag eur pezh baro war e vruched. Eul reor hag eur vaz houarnet a zo en e zourn. E dreid a zo harpet ouz ar c'haro a lavarfed kousket ker kalet hag e vestr. Pedit a raer sant Edern

evit ar boan zaoulagad dre ma roas ar gweled da unan eus a zuked Breiz, el lec'h m'eman breman iliz Plouedern, savet gand an Duk-ze, en enor d'ar zant, evit diskouez d'ezan e anaoudegez vat.

E karnel bered Lannedern, e virer eur banell-pri, c'houec'h 'kombod enni, skeudennet enno istor karo ha beoc'h ar zant.

G. P.



Eur rod-goro da c'horu ar zaout

An A. L. Kuentz, war Groaz Paris' an deiziouman a lavar deomp penaos e vez goroet 1680 beoc'h eun tiegez bras e Plainsboro (New-Jersey) e Stadou-Unanet an Amerik. A-walc'h eo poueza war eur voutounenn elektrik evit lakat eur rod goro da vale ha dont a ra e-benn da c'horu 50 beoc'h e 12 munutenn hanter, da lavarout eo e c'horu 240 beoc'h bep eur.

Eul leurenn war gelc'h a 18 metr treuz a zo bet savet ha war eur veunn a 4 metr 25 a ra an dro d'al leurenn-ze, en diavaez, ez eus bet graet 50 kombod ; pa deu an eur da c'horu, e vez degaset ar zaout, an eil goude eben, eus o c'hraou, hag e vezont laket da bignat war al leurenn-ze a dro gouestadik en eur ober 4 metr hanter bep munutenn.

Ar zaout, dre ma 'z eont er c'homboujou, e teu eur c'habestr, anezan e-unan, da spega ouz o gouzoug ha d'o derc'hel stag mat. Pa vez eur veoc'h en hanter kantvet kombod, an hini a zo er c'hombod kenta a zo peurc'horu hag a ya kuit diwar ar rod-goro ; eun all a deu kerkent, en he lec'h, hag evelse, ar goro a gendalc'h atao ha ne vez dale ebet e nep lec'h. Epad an troiou kenta a ra al leurenn pep beoc'h a vez gwalc'het, da genta, gant dour tomm ha goude gant dour yen ha sec'het gand eun ezenn glouar.

Eur mevel a deu neuze da zec'ha kosteziou, teziou ha bronnou ar zaout gand eun torch net evit

pep beoc'h hag an torch-se a vez laket er c'houez raktal goude m'en devez graet e labour.

Diou vunutenn ha 45 sekondenn a laka ar mevel da ober ar c'hempennachou-se. Raktal goudeze e vez goroet gand an dourn ha silet gand eur sil keuvr, bihan-bihan e doullou, eur beradig laez a vez kaset dioc'htu d'an ti-laez evit beza barnet ; ma kaver eur si bennak d'ezan eno, laez ar veoc'h-se ne vezo ket laket na da eva, na da werza — ma kaver ez eo mat laez ar veoc'h, e vezo laket war he bronnou ar c'horoez kempennet a-zoare a-raok hag a ya en dro dre an elektrisite.

Pa vez graet eun dro a-bez, gand al leurenn, da lavarout eo, goude 12 munutenn hanter, e vez bet goroet 50 beoc'h ; pa n'eus netra ken en tez e tenner ar c'horoez diwarnan hag ar c'habestr a zalc'he peñn ar veoc'h a zav diwar he gouzoug anezan e-unan ; houman, oc'h en em gaout distag, a ya gant he hent etrezek he c'hraou. Renket eo ker mat an traou, ma ra bemdez ar zaout o vont hag o tont war ar rod-goro eur pennad mat a vale hag a zo a-walc'h evito da jom yac'h.

Al laez, eur wech goroet, a gouez en eur pod gwer hag ac'hano en eur pod all, e lec'h ma vez pouezet ha muzulet. Korzennou kempennet gand ar brasa evez, a lounk neuze al laez hag her pign e kambr ar boutailhou ; eno e vez yenet, laket e boutailhou ha bountet gant benviou graet a-ratoz kaer evid al labour-ze.

Ar zaout a vez medesined, war o zro, alies, hag an dud a vez wardro ar zaout a rank mont bemdez dirak ar medesin.

Laez evelse, hag e taoler kement a evez warnan, ne c'hell ket beza kontammët na gand an dud na gand aer an amzer hag, en hent-se ar re hen ev pe a zebri dienn pe amann tennet anezan, a c'hell beza dienkrez.

Ma tennfed talvoudegez eus ar gentel-ze a ro d'eomp an Amerikaned e vije dalc'het netoc'h ar zaout hag ar c'hrevier saout e Breiz ha ne vije ket gwelet, evel ma vez gwelet, re alies, al laez, du gand ar fank, o koueza diouz bronnou ar zaout e vezer ouz o goro. Marteze, neuze ivez, e vije kals nebeutoc'h a dud oc'h uza hag o tizec'ha war o zreid, kaset d'ar bez, pell a-raok o amzer, gand eun droug-skevent, tapet diwar laez eur veoc'h hag he devoa ar c'hlenved-ze e-unan.

E diou vunutenn ha 45 sekondenn e kempenner, en Amerik, tez eur veoc'h, a-raok he goro. Perak ne rafed ket kement-se ivez e Breiz ?


N'eus nemed eur banne dour
Etre net ha loudour.

Y. V. P.



Ha pa oan-me denig yaouank


Goustaadik. ♩ = 63




Ha pa oan - me de - nig yaou - ank, sei - tek pe



di - ouech' vloa, Sei - tek pe dri - ouech' vl - a.



Ha pa we - len - me va mes - trez, va c'ha - lon a rae joa.



Ha pa we - len - me va mes - trez, va c'ha - lon a rae joa.

1

Ha pa oan-me-denig yaouank, seitek pe driouec'h vloa,
Seitek pe driouec'h vloa,

Ha pa welen-me va mestrez, va c'halon a rae joa,
Ha pa welen-me va mestrez, va c'halon a rae joa.

2

Ha pa laosken eun taol c'houilell, petramant eur poz-kan,
Holl ar merc'hed, eus ar c'hornad, laouenae o c'halon.

3

Holl ar merc'hed, eus ar c'hornad, laouenae o c'halon
Eur wrac'hig koz, e kreiz ar c'hoad, a glêvas ar vouez-se.

4

Eur wrac'hig koz, e kreiz ar c'hoad, a glêvas ar vouez-se;
Hi a redas buan mat d'ar ger, da laret d'he merc'hed.

5

Hi a redas buan mat d'ar ger, da laret d'he merc'hed,
Penaos e oa eun evnig rous o kana 'barz ar c'hoad

6

Hag hen a gan hag a ziskan, a lar dre e bropoz :
« Denig yaouank o klask e zoni, ne gousk na deiz, na noz. »

7

— Tavit, tavit, 'ta, evnig rous, lar't ket ar wirionez ;
Me zo bet me o klask va sonj hag a gouske bemdez.


*Kanet gant Mari Tremelin, eus ar Goz-Ker,
Lann-er-Ster.*

Tennet eus eul leor kaer : *Guerzennou ha sonnennou Bro-
Guened*, chansons populaires du pays de Vannes recueillies
et publiées avec textes bretons et traduction française par
Loeiz Herrien, airs notés par Maurice Duhamel, Troisième
série.

E gwerz e ti an oberour : Sant Karadeg, Henbont (Mor-
bihan).

An teirvet lodenn : 13 lur 10 gwennek.

An teir lodenn, en eul leor bras : 31 lur 16 gwennek, hep
ken mizou, dre ar post.




Kanaouennou nevez moulet

Kanaouennou evid an holl gant Taldir Sav, Breiz-Izel,
— Dacu Soner Landevant — Dalc'h sonj. — Bro goz va
zadou.

Priz : 4 real.

O goulenn digant Rener an Oaled, Carhaix (Finistère).



An tri Goulenn

Eur paourkaez den, diwar ar maez, hanvet Fanch Kerlihouarn, a oa aet, eun dervez, d'ar c'hoad tosta d'e di, da gempenn keuneud. Endra ma lake bouc'hal er c'hoad e sonje gant tristidigez en e baourentez : « A ! emezan ma kavjen aman eur wrac'h vadelezes bennak, evel ma oa gwechall, her pedjen gant kement a galon da zont, war va sikour, ma ne c'hellfe ket chom hep rei d'in va goulenn ! »

A vec'h m'en devoa lavaret ar gomz-ze, ma santas unan bennak o skei war e skoaz ; chom a reas mantret rak n'en devoa klevet trouz den ebet o vale ; pa zizroas e kavas dirazan eun itron gaer, eul lostenn wenn ganti hag eur zae rus-wenn hag eur steredenn skedus, evel an heol, etouez he bleo. An itron-ze a zellas outan, en eur vouse'hoarzin, hag a gomzas outan gand eur vouez ker skanv hag eun ezennig avel o tremen dre skourrou ar gwez dero.

— Da glevet em eus, Fanchig paour ; da anaout a ran, pell a zo ; gouzout a ran ez out mat da labourat ha p'eo gwir bep kant vloaz ma teuan war an douar an Aotrou Doue a ro tro d'in da lakat unan bennak da veza eurus, te eo an hini am eus dibabet, er wech-mañ, evit da vrasa mad ; lavar d'in pere eo an tri dra az peus c'hoant da gaout ; bez ez pezo diganen an tri dra-ze gant ma ne vezi ket divergont ; goulenn a c'helles yec'hed, eurus-ted, pinvidigez, enoriou zoken, gant ma ne ankounac'hay ket ar baradoz hag en hent-se ne vanko netra ebet d'it ken, nag er bed-mañ nag er bed-all !

— : Ha gwir eo kement-se ? Itron, eme Fanch, sebezet ; eur wrac'h vat oc'h hag ho trugarekaat

a ran a greiz kalon. A-raok ober ouzoc'h va goulennou, va lezit, mar kirit, da vont da gaout va gwreg a zo kals lemmoc'h he spered eget va hini hag a ouezo gwelloc'h egedoun ar pez a zo mat da c'houlenn.

— : Mat-eo, eme ar wrac'h, ker brao ha tra ; kerz d'ar gêr ; me jomo d'az gedal aman betek hanter noz. En doare-ze ez pezo amzer d'en em glevout gant da vaouez ; met, en em glevit mat kement hag ober, rak ar pez ho pezo goulennet a vezo roet d'eoc'h ha ne c'helloc'h ket goulenn traou all en o lec'h.



Fanch, laouen bras gand ar pez en devoa klevet, a zammaz eun hordenn geuneud war e skoaz hag a zistroas d'ar gêr da lavarout d'e wreg ar pez en devoa gwelet ha klevet. Houman, da genta, a gredas edo oc'h ober, goap anezi, met dont a eure da welet n'edo ket o klask he zrompla hag e voe laouen bras.

— : Ha ! petra, emezi, a c'hellfemp da c'houlenn ? Pell a zo em eus c'hoant da gaout gwadegenn da zebri ! Dres, eun tan kaer a zo war an aoled d'o foazat hag an dra-ze a zo ker mat ! Betek hen n'em eus ket gellet kaout, ker paour e oan ; eur walennad a zebrfen anezo, va-unan, ha ne vefe ket re leun va c'hof c'hoaz !

A-vec'h he devoa komzet ma kouezas dre ar chiminal, eur wadegenn, keit hag eur walenn, war ar balarenn (1).



— : A ! kre ! penn-zodenn, zo c'hanout ; setu emañ aze, o vont da goll hon eurusted gant eur goulenn didalvez ; n'out nemed eur penn-avel ha salo ez afe ar wadegenn-ze d'en em staga ouz beg da fri.

Raktal ar wadegenn a lammas diwar ar bala-

(1) Ar balarenn a zo eur billig lostok.

renn hag a en em spegas ouz fri e wreg. Kaer he devoe klask he distaga ac'hano ne deuas ket a-benn. Fanch a gemeras e gontell, met daoust pegen lemm e oa ne c'hellas ket he sanka enni.

— : Breman, avat, eme e wreg o ouela, e vezin brao gand ar wadegenn-ze a-ispilh ouz va fri. Eun taol kaer ez peus graet aze, avat, war zigarez ma 'm boa goulennet eun dra hag a oa didalvez, war da veno. Petra rin breman ? Mervel gand ar vez, rak ne gredin ket mont er maez eus va zi !

— : Ro peoc'h, gwreg, eme Fanch mezok ha kounnaret o welout ar pezh a oa degouezet, p'eo gwir e c'hellan ober eur goulenn all e c'houlennin ar binvidigez hag e rin eur glozenn aour da zastum da wadegenn.

— : N'em eus ezomm na klozenn aour, na klozenn arc'hant, eme ar wreg o lenva. Gwelloc'h eo ganen beza paour ar rest eus va buhez ma c'hellfen beza henvel ouz an dud all e lec'h beza o tougen eur fri ken estlammus ma lakin an holl da c'hoarzin d'in. A ! Fanch, mar am c'hares, goulenn, p'eo gwir ez peus eun trede 'tra da gaout, ma vezin dilivret diouz ar wadegenn villiget-se ; anez e varvin gand ar rann-galon, a-raok eiz dez aman.

Fanch en devoa kalon vat ha n'hellas ket chom hep selaou pedenn e wreg. Implija a eure e drede goulenn evit distaga diouz fri e vaouez ar wadegenn a lake kement a ziskar enni hag ec'h en em gavas ker paour ha kentoc'h. Neuze e weljont peger mat eo poueza ar c'homzou a-raok o lavarout ; an Aotrou Doue en deus roet d'eomp diou skouarn hag eun teod hepken, ar pezh a ziskouez e fleomp selaou diou wech a-raok komz eur wech.

G. P.


Listri breizat kizellet er vein

Kavet e vez c'hoaz, e ilizou ha chapelioù hon arvorioù, skeudenoù listri a c'hiz koz, gant rou-
envou ha gant lien, kizellet er vein, war skouer
listri ar XV^{vet}, XVI^{vet}, XVII^{vet} kantved.

En amzer hon Duked diweza, ar c'henwerz, e
Breiz, a zegase kals arc'hant er vro hag o veza ma
oa fall an hentchoù dre zouar ha laeron warno,
e meur a lec'h, e kaved gwelloc'h ober hent dre
vor. Dre vor eo e teue e Breiz, gwin ar Spagn, ar
Gaskogn, an Aunis, gloan ha mezer Bro-Zaoz,
houarn an Alamagn ha staen Iwerzon. Dre vor
ivez eo e veze kaset hol lien d'ar Spagn ha d'ar
Portugal, hor mel, d'ar Flandrez hag hol ler da
Hambourg ha da gerioù all ar Baltik.

E Breiz-Izel hepken e oa neuze eun agent porz
bihan bennak hag e veze graet kals kenwerz en-
no evel Landreger, Toull an Hery, Lanhuon, Mon-
troulez, Penpoull, Roskov, ar Poulldu, ar C'hor-
rejou, e Plougerne, an Aber-Ac'h, ar C'hantell,
Konk, Brest, Landerne, Landevenneg, Kameled,
Poulldahud ha Sant Mikael (Douarnenez bre-
man), Goayen, Penmarc'h, Benodet, Kemper,
Konk-Kerne, ar Poulldu, Kemperle hag all. Pa zis-
kennas ar Zaozon, e Konk, er bloaz 1558, e tevjont,
er porz-ze, goullô breman, 80 lestr, peziou-kanol
warno, ar pezh a ziskouez n'eo ket bagou dister eo
e oant.

Marc'hadourien ha mortoloded an amzer-ze n'eo
ket tud difeiz eo e oant ; kredi a raent e Doue ha
pedi a raent ar Zent da ziouall o listri diouz ar
pense ha diouz al laeron. Sant Jalm, breman ez



eus pemp pe c'houec'h kant vloaz, oa patron ar
vortoloded ; eleiz a ilizou a oa savet en e enor, en
arvorioù, evel e Perros-Gwireg, Lokireg, Montrou-


lez, Poulldahut. An Itron Varia ivez a oa anavezet evit he madelez e kenver an dud a vor.

Pa veze savet eun iliz nevez, en eur porz-mor bennak, ar varc'hadourien a veze brokus hag a c'houlenne kizella o listri war mogerioù o iliz, ma teuje, evelse, an Aotrou Doue da ziuall o zud hag o danvez diouz pep droug.

Er bloaz 1925, eur c'hernevad eus a Gerne-Veur, eun den gouziek bras, an A. Morton-Nance, en deus skrivet en eur gelaouenn zaoznek « *The Mariner's Mirror* » (mellezour ar Vortoled) eun artikl, plidadurus da lenn, war al listri kizellet e mein ilizou Breiz. Kosa re en deus kavet eo ar re a zo kizellet war iliz sant Nonna Treoultre e Penmarc'h. Pinvidik mor e oa ar beg-douar-ze, gwechall, dre genwerz ar pesked dizec'het ; rivinet eo bet gand ar gwall-amzer hag ar brezel, met, en deiz a hizio, e teu adarre d'en em zavel, dre ar pesked hag al legumach d'en em viret a zastumont, bep bloaz. Al listri a gaver kizellet war mogerioù iliz sant Nonna (sellit ouz ar skeudennou 1, 2, 3, 11, 12, 13) a zo bet graet, sur a-walc'h, diwar skouer al listri a zerviche, wardro ar bloaz 1480, da gas ar pesked dizec'h d'ar broioù all. Ar re genta anezo, a zo anat a oa peziadou listri, gand o zeir gwern hag o fennou a-raok hag a-dre, gouest da drec'hi ar mor e kounnar ; ar re all n'o deus nemet diou wern pe unan hepken, met stummet int kaer ha doare o deus da veza mat da ober hent. Gouzout a reont e oa brudet bras listri Penmarc'h hag eus a Vro-C'hall kouls hag eus a Vro-Zaoz e teue tud d'o frena.

War dour koz sant Gwennole, e kichen, e weler c'houec'h lestrig all kizellet (sellit ouz ar skeudennou 17, 18, 21, 22, 23, 24) dem-henvel ouz re Sant Nonna. Penn a-raok ar c'henta a zo teo mantrus

hag hanvet e oa, marteze, ar « Griffon » evel unan eus listri ar mortolod brudet Yann Goatanlem, spont ar Zaozon.




War chapel Itron Varia ar joa ha n'eo ket gwall bell ac'hano, ken nebeud, e weler eul lestr, eur wern hepken d'ezan hag eur gouel e stumm goue-

liou ar XVII^{vet} kantved ; war chapel ar Vadalen eul lestr all (skeudenn 25, tri gwern d'ezan. E chapel Itron Varia Konfort, e Melar, daoust m'ema eul leo diouz ar mor, e kaver ivez listri kizellet er mogeriou ha war eun ti e kichen. (Sellit ouz ar skeudennou 14, 15, 16 ha 26. E bro ar C'hap c'hoaz e kaver listri kizellet er vein e iliz koz Goayen, e Goulien hag e Poullan. Listri an diou iliz diwezaman (skeudennou 19 hag 20 n'int ket ker koz hag ar re all ; er bloavez 1628 eo ez int bet graet hag e beg o gwerniou ez eus laket bannielou da ficher a pezh ne veze ket graet er c'hantvejou a-raok.

E Bro-Leon, muia ma kaver a listri evelse eo war mogeriou iliz Roscoff (skeudennou 5, 6, 7, 8, 9, 10. An iliz-ze a zo bet savet er bloaz 1550, hag al listri kizellet warni a zo eta graet war skouer listri hanterenn genta ar XVI^{vet} kantved ; profer an hini a zoug an niverene 5, en deus bet c'hoant da veza skeudennet war ar c'hastell-lestr hag her gwelout a raer eno gand e yalc'h hag e zac'h-gwin. War benn-a-raok an niverenn 6 ez eus bet kizellet penn eur gwall aneval ; war al lestr a zoug an niverenn 7 e weler ez eus peziou-kanol koulz ha war an hini a zoug an niverenn 9 ; war unan eus gwerniou an diweza-man ez eus eur banniel o ficher. War benn al lestr a zoug an niverenn 9 ; war unan eus gwerniou an diweza-man ez eus eur banniel o ficher. War benn al lestr a zoug an niverenn 10 hag a zo kizellet war chapel an ospital e weler eul le-tarn bras. Al lestr a zoug an niverenn 8 a zo harp ouz eur pezh-kanol-maen en unan eus kerniel an tour.

Ar vein a zo kalet ha setu perak ar gizelterien n'o deus ket gallet labourat o listri evel m'o divije bet c'hoant. Ma vije bet chomet al listri-koad a zo bet roet e prof, d'ar chapeliou, e vije bet gallet gou-



zout diouto kals gwelloc'h penaos e veze graet al listri gwechall goz ; gwas a pezh a zo int breinet pell a zo ; an A. Morton-Nance n'en deus gallet kaout



nemed unan hag a vije eus an XVIII^{vet} kantved, hini iliz-veur Gwened ha c'hoaz ez eus meur a dra, war e dro, hag a zo bet renket a-nevez abaoe. Bre-

man ez eus 60 vloaz an A. Gaultier du Mottay a skrive en devoa gwelet, en eur chapel vihan, e kichen Penpoull, eul lestr roet e prof hag a oa bet graet er bloaz 1554; da gredi eo n e 'z eus netra ebet ken anezan breman.

G. P.



Pedenn evit Breiz

Da veza desket gand ar re o devezo c'hoant da gemerout perz e kenstrivadeg an displegerez (déclamation), e gouel ar Bleun-Brug a zeu, e Henbont, d'ar 6 a viz Gwengolo.

« Et coegerunt illum, dicentés:
Mane nobiscum, quoniam advesperascit. »
Lukas XXIV. 29.

Deut omp holl d'Ho pedi, Jezuz, war hon daoulin,
Da glask en ho kalon konfort en hon anken :
Jezuz, C'houi hor c'hlev, c'houi hor gwel,
Ho pezet truez ouz Breiz-Izel!

Hor bro a oa eurus dindan ho taoulagad,
Beva a raemp e peoc'h, ho lezenn a oa mat,
Met hon tadou o deus pec'het
Ha c'houi 'peus hon ankounac'haet.

Er brezel ez omp bet dispennet hep distro,
An estren a zo deut da vout mestr en hor bro,
Frankizioù hor boa gwecharall
Laeret int bet gand 'n estren fall.

Breman ec'h huanadomp hag ar c'hlac'har hor moug ;
Eur yeo pounner a flastr hon diskoaz hag hor c'hroug ;
D'hor mistri hon eus roet hor gwad
Hag int hol lak dindan an troad.

Hon tadou a oa bras, kabestr ebet n'o doe ;
Vit Mestr ne anzavent nemedoc'h, Aotrou Doue.
Ha ni, eur vagad meveli
O deus hor pleget d'o beli.

Goude hor frankizioù, hor feiz o deus gwasket,
D'an traon ez ay ganto ma n'he diouallit ket,
An aoteriou a ziskarint
Hag ouz ho komzou e c'hoarzint.

Noz du ar bayannach, ar bayannach mezus,
 A led war ar bed koz he mantell donjerus :
 Vit he ambroug en hent tioul,
 Jezuz, chomit gant Breiz-Izell!

O ya! chomit ganeomp. Hepdoc'h ne d'omp netra ;
 Hepdoc'h eur bobl a varv 'vel eur c'horf hep bara :
 War Ho kalon ma n'o goarnet,
 Da biou ez ay ar Vretoned ?

Salver karantezus, d'an druez douget oc'h,
 Ho pezet sonj eus ar gwad hor beus skuilhet 'vidoc'h :
 O Mestr, Ho pezet sonj ez omp bet
 Soudarded Ho kroaz dre ar Bed.

Ho pezet sonj eus hor mez hag hon trubuilhou holl :
 Truez, na lezit ket hor bro da vont da goll,
 Ni ho ped, hon tal war an douar,
 Ouz hor c'hlemmou na vezit ket bouzar...

Ha c'houi, tadou ar vro, c'houi, sent koz holl-doujet,
 Pa 'z omp skuiz el labour, d'hon harpa darnijet,
 Roit d'eomp nerz e kreiz hon anken,
 Goarantit Breiz da virviken.

Y.-B. KALLOCH.

Geriou diaes evit darn. — 19^{vet} linenn : meveli = me-
 velien pe mevelou. — 20^{vet} linenn : beli = galloud. —
 27^{vet} linenn : tioul = tenval.

Keleier ar miz

Dervez bras Lambaol-Wimiliau

Ar *Bleun-Brug* a raio, e Lambaol-Wimiliau, en enor
 d'an Aotrou Abgrall, dean chalonied Kemper, d'an Tad
 Abgrall, misioner en Annam ha da Vari-Anna Abgrall, o
 c'hoar vras, eur skrivagnerez vrezonek, eus an dibab, ma-
 ro o zri, er bloaveziou tremen, eur gouel kaer d'an 9 a
 viz eost a zeu.

Setu aman reolenn ar gouel-ze bet benniget gand an
 A. Duparc, eskob Kemper, hag a vezo renet gant an Aotrou
 'n arc'heskob de Guébriant, ginidik eus a Gastell-
 Paol.

1. — Da 9 eur 1/2 e vezo diambrouget an A. de Gue-
 briant, rener ar gouel.

2. — Da 10 eur, oferenn-bred, kanet gand an A. Bi-
 han, person ar barrez; an A. de Guebriant a brezego en
 oferenn-ze.

3. — Goude an oferenn *Libera* ha *De profundis* war
 bez Mari-Anna Abgrall.

4. — Da gresteiz, lein er skol-gristen, 15 lur dre benn.
 Ar merc'hed, koulz hag ar gwazed, a c'hell'o kemeret
 perz er pred-ze. Kas an hanoiou hag an arc'hant d'an
 Aotrou Quéré, kure Lambaol-Wimiliau, abenn ar 4 a viz
 eost da ziwezata.

5. — Da 3 eur, c'hoariadeg ha kaniri gand paotred ha
 merc'hed Lambaol, Perros-Gwireg ha Scrignac; e kreiz
 ar c'hoariadeg-ze, an A. Perennes a raio meuleudi ar
 Breur bras, ar Breur bihan hag ar C'hoar vras.

Enor o deus graet an tri-ze da Vreiz; dleet eo da Vreiz
 ober enor d'ezo d'he zro.

Goueliou an Traez-Glas e Plouescat

Tri dervez gouel a vezo e Plouescat d'an 22, 23 ha 24
 a viz Eost a zeu; d'an 22 ema dervez an aradeg; d'an 23,
 goude kreisteiz, dervez ar ganadeg, ar c'houtrinadeg hag
 ar c'hoariadeg ha d'ar 24 dervez an nijadeg.

Ar zul 23, dreist-holl, a dalvezo ar boan mont d'e we-
lout; pajennadou kaera istor Breiz, dibabet gant hor mi-
gnon, ar skrivagner Hep-ken, a vezo disklaeriet e taolen-
nou beo hag a lintro dindan bannou an heol pa vezint
laket da ziskenn; goude lein, eus ar vourc'h d'an Traez-
Glas. Goude koan e vezo c'hoariet, evid ar wech kenta,
pez nevez brezonek an A. Tanguy Malmanche : *Ar Bagariz*.

Goude 370 vloaz ehan

Prosesion ar zakramant meulet ra vezo a zo bet graet
adarre, er bloaz-man, e Jersey ; 10.000 den hen heulie ha
15.000, — protestanted an darn vrasa anezo, — a oa deuet
d'he saludi gant doujans.

Hor Zalver Jezuz-Krist a zo bet kanet ha meulet epad
ouspenn teir eur. Goude ar prosesion eo bet kanet kantik
ar Pab, *God bless our Pope*, e saozneg hag e galleg, goude
ma oa bet renket gant hor c'henlabourer mat an Tad
L'Helgouac'h.

Warlene, goude eun ehan a 370 vloaz eo e oa bet graet
ar prosesion-ze evid ar wech kenta; kals kaeroc'h eo bet
c'hoaz prosesion ar bloaz-man ha d'he heul bennoz Doue
a gouezo puilh war an enez ha war an dud a zo enni hag
a lakaio pep tra da vont war well.

Pardon Santez Anna e Scrignac

D'ar 26 eus ar miz-man ema pardon santez Anna, e Scri-
gnac. Oferenn ha prezegenn ar pardon a vezo da 11 eur
hag ar gousperou da 2 eur.

Raktal goude ar gousperou, c'hoariadeg vras e prad Ke-
ranna 200 metr diouz an iliz.

C'hoarierien ha c'hoarierezed nevez Scrignac a zis-
klaerio :

1. — *Eun eured e meneziou Kerne*, gant ar c'hanaouen-
nou dudiusa a zo bet savet war an eured e pevar c'horn
Breiz-Izel.

2. — *Ar mevel hag ar gwenn*, farserez, en eun arvest.

3. — *An hini yaouank o vont da denna he foltred*, far-
serez, en eun arvest. An A. Fanch Taldir Jaffrennou, eus
a Geraez, mab bihan eus a Scrignac, a raio eur brezegenn
da zigeri an abadenn.

Leor an A. Gwilhou

War roll rakprenerien leor an A. Gwilhou ez eus bet
graet daou fazi, er miz tremen : an A. Herry, e lec'h 1
leor a rakpren 2 hag An A. Le Roux e lec'h 1 a rakpren 3.

O deus rakprenet al leor e miz mezeven :

An A.-J. Pelleau, Loc-Maria, Plabennec.....	1.
An A.-J. Lottrian, Dreinog, Plougerne	1
An A.-J.-L. Roue, person Kersent	1
An A.-J.-L. Mear, Kelenner er Wir zikour, Brest	3
An A. Louis Floc'h, Kloerdi bras Sant Brieg	1
An A.-J.-L. Monot, person Sant Thurien	1
An Tad Césaire, o. m. c., 28, avenue de la Marne, Lorient	1
An A. Louis ar Bihan, kloerdi bras, Sant Brieg	6
An A. Theophil Cottonnec, Kerbrat, Scrignac	1
An A. Y. Pelleter, kure Treboul	1
	17.

Leoriou rakprenet betek-hen, 734 + 17 = 751.

Eur rakprener a skriv d'in : « War c'hed emañ eus
oberou an Aotrou Gwilhou » hag e respontan d'ezan ar
pez am eus skrivet er miz tremen : « En deiz ma vezo
rakprenet an 800^{vet} leor e kasin skridou oberou an A.
Gwilhou d'ar voulevez. »

Miz santez Anna, fizians am eus a zegaso d'eomp an
49 rakprener a zo ezomm c'hoaz.

Unan eus hon diweza rakprenerien a skriv diwarbenn
al leor nevez : « Je serai heureux d'y trouver des pages
bien écrites et empreintes du charme d'un esprit vraiment
breton : charme et esprit inimitables que ne peuvent
rendre la littérature dite bretonne en langue française
à l'usage des esprits en quête d'originalité provinciale ou
exotique : celui-là seul le goûte qui a l'âme faite pour le
sentir ».

Ar rakprener-man, n'en devezo digouezenn ebet pa
gouezo al leor nevez etre e zaouarn; kaout a ray ennan
ar pez m'edo o c'hortoz.

SANTEZ AZENOR

Santez Azenor oa mamm sant Budog ; ar zant-man hanvet ivez Beuzeg eo patron Porspoder ha Plourin, e Leon, Beuzeg-Konk ha Beuzeg Kap-Sizun, e Kerne; e vamm n'eo ket bet ken enoret-ze biskoaz; patronez e oa d'eur barrezig vihan, harp e Lesneven : Langengar.

Unan eus touriou Kastell Brest bet savet an darn vrasa anezan en XIII^{vet} kantved a zo hanvet *tour Azenor*.

E Kastellaudren, war lambrusk chapel Itron Varia an Dosenn e kaver taolennou livet enno istor santez Azenor. E karnel goz Porspoder laket breman da ober chapel e weler ivez a-us an aoter eun daolenn eus trubuilhou ar zantez. Iliz Langengar a voe gwerzet d'an Dispac'h ha diskaret, er bloaz 1832.

Feunteun ar zantez, — hanvet Enori gant Langengariz, — a gaver atao er C'hloz-meur, e kichenik Lesneven ; ar mammou n'int ket evit maga o-unan o bugale a deu di d'en em erbedi ouz mamm sant Budog, evit kaout ar c'hras da c'hellout hen-ober; rinsat a reont ar feunteun, en eur bedi ha goudeze ec'h evont eur banne eus an dour fresk kenta a deu adarre enni.

Skeudenn goz santez Azenor hag a oa gwechall e iliz Langengar, goude beza bet eur pennad e chapel ar Spared Santel — n'eus mui nemed eur groaz, en he lec'h, — hag e mirdi (musée) sant Loeiz Brest, a weler breman e iliz Lesneven, e lec'h ma c'hell Langengariz daoulina dirazi da bedi o fatronez galloudus.

H. C.

Ar paeroned hag ar maeronezed hag a vez nec'het o klask gouzout pe scurt hano da rei d'o filhorezed a dlefe o henvel Azenor, eun hano breizat, eun hano kristen, eun hano sklintin ha kaer, mar deus unan (1).

(1) Tennet diwar ar « *Bulletin Diocésain d'Histoire et d'Archéologie*, n° mars-avril 1931 ».

Setu aman taolenn an niverenn-ze :

1. — *H. Pérennès* : notices sur les paroisses du diocèse de Quimper et de Léon. Mahalon (suite) p. 57.
- II. — *Chanoine Calvez* : Languengar. Notes sur la vie et la mort d'une petite paroisse (à suivre) p. 77.
- III. — *Abbé Guéguen*, recteur du Folgoat : Les prônes d'un recteur de Landunvez au temps de Louis XIV (suite) ... p. 91.
- IV. — *Père Armet*, Mission prêchée à Quimper par le Père Honoré, de Cannes, Capucin en 1686 p. 98.
- V. — *Nécrologie* : L'Abbé François Quiniou p. 112.

Le Directeur-Gérant,
Chanoine PERROT,

Secrétaire général de l'Evêché de Quimper.
C/C. 3.480, Nantes.

DIVINADENNOU

DIVINADENNOU MIZ GOURE

I. — N'oun ket roue hag e tougan kurunenn ; n'oun ket marc'heg ha koulskoude em eus gentrou; n'oun ket skri-vagner hag e tougan eur bluenn; n'oun ket keginer hag e roan da zebri.

Piou oun eta?

20 p. ar r. *Degaset gant F. Tineves, Milizac.*

II. — Bimbanv ouz ar skour,
Rè laosk, en e dour,
Sourrellig a c'héd e damm
Hag hel lounko ma ra lamm.

20 p. ar r. — *Degaset gant Janni Kerlosquet, Milizac.*

III. — Bugale,
A-raok o mamm o vale ;
Ar vamm ne vale ket
Ha n'her graio ket!

20 p. ar r. — *Degaset gant Mari Milin, Gwitalmeze.*

IV. — Eus a rouanez
Out aet da vatez,
Furch-difurch, dre 'n ti,

Hep genou, na fri.
20 p. ar. r. — *Degaset gant M. P. ar C'hoat, eus ar C'hleuziou bras, er Vourc'h-Wenn.*

Klaskit pevar ger a deir lizerenn :	X	X	X
Va c'henta zo karet gand an holl			
Raktal ma chencher va lizerenn genta	X	X	X
oun disprijet alies	X	X	X
n'oun ket al liou braoa	X	X	X
n'eo ket hir ar bleo warnan			

20 p. ar. r. *Degaset gant paotred Mespaul.*

Degas respontchou mae, mezeven ha gouere hag an divinadennoù nevez a gavfed abenn ar 26 eus ar miz, da lavarout eo a-benn Pardon bras Santez Anna da : M. le Directeur du Feiz ha Breiz, Scrignac (Finistère).

An dek a vezo da genta a vezo laket o hanoioù, ma n'emaint ket c'hoaz, war roll rakprenerien leor an Aotrou Gwilhou, hag en hent-se, da vihana, e vezint sur da gaout eul leor nevez flamm, war e genta lamm.

XXI^e Gouel ar Bleun-Brug

Gouelioù bras ar Bleun-Brug a vezo graet er bloaz-man, e Henbont, d'ar 4, 5 ha 6 a viz Gwengolo.

Evit konkouri 'vid ar c'han eo red deski diou ganaouenn : unan eus an teir-man, *Kousket, ar Bleun-Brug, ar Peoc'h en tiegez* hag eun all a zibaboc'h hoc'h unan, e diou, teir pe beder mouez, vel ar genta.

Evit kaout an teir ganaouenn merket uheloc'h, skriva d'an A. Le Milon, 6, rue du Maréchal Foch, Vannes pe d'an A. Coetmeur, Professeur au Grand Séminaire de Vannes.

Ar c'hanaouennoù all a gavfoc'h e « *Morceaux et Chœurs des Bleun-Brug* », librairie Emgleo Sant-Iltud, 11, rue Algésiras, Brest.

Rennerien ar strolladoù kanerien a vo red d'ezo rei d'anaout d'an A. Coetmeur, a-raok gouel Maria Hanter Eost, ar c'hanaouennoù a ganint.

Ar *Bleun-Brug* a ro prizioù evid ar c'han hag eur gweneg dre zen ha dre gart-leo da bep strollad kanerien ; evelse e vezont digollet eus eul lodenn vat eus o mizou.

Feiz ha Breiz

Kantvet bloaz ar skolioù lib

Miñoned ha kenvroiz ker

Nec'het a-walc'h oun bet laket, breman ez eus tostik eur miz, pa voe digaset d'in eur bern paperioù, ha goulennet diganen, aoza eun tammig prezegenn, diwar-benn ar pezh a drmenas kant vloaz a zo, endro d'ar skolioù, en hor bro. Klasket em eus, ar pezh en defe klasket, kredabl bras, pep hini ac'hanoc'h, enebi ha lavaret nann, mes kaer am eus bet klask digareziou, n'oun ket bet selaouet hag evit kaout peoc'h, em eus digemeret hag asantet ober al labour. N'eo ket 'ta, evel a-welit, eun doktor nag eur prezeger brudet, eo a deu hirio da gomz d'eoc'h, mes unan eus ho touez hag a c'hortoz muioc'h eus ho madelez eget eus e c'halloud hag e ouisiegez.

Abaoe ' nevez zo, eo deuet ar c'hiz da ober gouelioù a bep seurt, evit enori ginivelez pe mario an dud vras, pe c'hoaz evit enori nevezentioù pe zarvoudoù, c'hoarvezet 50 vloaz, pe 100 vloaz a zo; alies alies e welomp war ar c'hazetennoù meneg eus eur « *centenaire* » en tu man, eur « *cinquantenaire* » en tu all. Ar pezh a zo gwir eo, dre ma pellaer diouz an dud, pe an traou bras, e teu da veza kalz esoc'h o anaout, hag an dra-ze dre ma c'heller gwelet ha kompren gwelloc'h, ar vad o deus graet pe zigaset d'o heul,

Evelse traou bihan da welet d'ar mare m'int erruet, a zo deuet da veza traou bras ha traou pouezus da c'houzout. An darvoud ez oun karget da zisplega dirazoc'h hirio a zo unan eus ar re-ze, bihan da welet ha bras kenan da c'houzout. Breman ez eus 100 vloaz, 3 zen yaouank kristen ha dispont, glac'haret o welet ar skoliou chadennet gand ar c'houarnamant, a lak en o fenn digeri eur skol libr; diarbennet int ha kaset dirag ar justis. Dre o nerz-kalon hag o c'houzou, e lakeont an dud da zavel a-du ganto hag e ti-frammont tamm ha tamm, al liberte evid ar gatoliked da gaout o skoliou d'ezo.

I. — Ar brezel war dachenn ar skol

N'eus netra war an douar, en hon amzer-ni hag a lakafe dua kemend a baper, liva kemend a c'hevier eged ar skoliou; netra ken-nebeut hag a lakafe kemend a drouz hag a gasoni etre an dud.

E c'heller lavaret epad ar c'hant vloaz tremenet, an afer, an abadenn vras etre ar Fransizien eo bet ar skoliou, piou a vezo ar mestr war ar skoliou; eno eo bet an dalc'h gant hon Tadou, eno eman an dalc'h ganeomp-ni hirio, eno e vezo an dalc'h keit ha ma vezo tud dizoue ha tud a feiz o veva skoaz-haskoaz, en hevelep bro. Lavaret a raer alies ar c'houzou-man, an nep piou bennak a zo ar yaouankiz etre e zouarn, hennez a vezo ar mestr en amzer da zont. Setu aze perak ez eus kemend a vec'h diwarbenn ar skoliou. Er skol, evit gwir, ar c'henteliou a vez roet ne deuont ket hepken da vaga spered ar c'hrouadur, mes dont a reont c'hoaz, da vaga e galon hag e ene; hervez ar gelennadurez fall pe vat roet er skol, ar c'henteliou a deu ive peurliesha da drei ar c'hrouadur war an tu fall pe war an tu mat. An tadou hag ar mammou a zo e gwirionez kristen, hag a gompren pebez talvoudegez dispar en deus

ar feiz, ne c'hellont ket asanti e ve kenteliet o bugale en eun doare kontrol d'o c'hredennou. Evito ne c'hell ket beza eun tenzor kaeroc'h da lezel gand o bugale; mes penaos her mirint enno, ma rankont o lakaat etre daouarn mistri hag a zo enebourien touet d'o c'hredennou. Setu perak eur brezel rust a zo digoret en hor bro abaoe seiz ugent vloaz a zo: eus eur c'hostez ar gatoliked, a c'houlell liberte da gaout skoliou hervez o c'hredennou, eus eur c'hostez all, ar c'houarnamant dizoue, sterniet pell a zo ouz kar ar franmansoned, hag a glask taoler e graban war an holl skoliou ha dre-ze ivez war an holl vugale. Ar skoliou, en hon amzer, hag en hor bro eo an dachenn a glask an eil rumm hag egile gounit...

II. — Ar skol a-raok hag en amzer Napoleon I

Araok Dispac'h 1789 an holl deskadurez e Frans e oa renet hag a veze roet gant an Iliz ha bez' e oa 25.000 skol dre ar vro. Potred an dispac'h a reakemend a reuz, a zismantras kemend a draou, ma ne lezjont, koulz lavaret skol ebet en he sav. Pa voe fin d'an drailh e tremenas meur a vloaz, a-raok ma voe digoret ar skoliou er parrezioù bihan. Pa c'hellas Napoleon Bonaparte kemeret ar stur ha beza mestr, e poanias da zigeri ar skoliou ha da lakaat sevel re nevez. Hervez mennoz an den bras-se, ar skoliou ne dlient ket beza dizoue, kemend a draou spontus en devoa gwelet ober epad an Dispac'h, ma n'oa ket evit gouzanv an dud dizoue « ar seurt-tud-se, a lavare; n'int ket din da veza gouarnet mes diskaret a dennou fuzuilh!! » Rei a reas urz ma vije desket ar relijion en holl skoliou dre ar Frans a-bez. Mes an youl da ober eus ar Fransizien tud graet diouz e zourn, aes da gas ha da zigas, a reas d'ezan diazeza an deskadurez war ar memez reolennou. Hag e oue gwelet an dra zouezus-man evid an am

zer ze, holl skoliou ar vro o tont da veza skoliou ar c'houarnamant. Hiviziken, ar c'houarnamant eo a verke an doare da gelenn ar vugale hag an dud yaouank, a lavare peseurt kenteliou rei d'ezo, er fin a zibabe al leoriou da lakaat etre o daouarn. Ar skoliou diwallet ha renet evelse, a deuas buan da veza evel kabestret ha chadennet. E ber' amzer, ne voe mui liberte ebet enno, ha ma z' oa urz da zeski ar relijion, ar c'henteliou a droe alies a enep gwiriou an Iliz. Den ne grede gwikal na sevel e vouez, da ziarbenn eur seurt displealded, ne vije ket bet brao Napoleon, ar Mestr bras, a oa pounner e zourn ha prim da flastra kement hini a glaske derc'hel penn d'ezan.

III. — Ar gatoliked o tihuna

Pa voe diskaret an impalaer galloudus, er bloaz 1814, lezenn ar skol a voe taolet d'an traon, mes ar c'houarnamant nevez, o kredi, evel Napoleon, he devoa eno eur benveg mat, evid he sikour da lakaat ar yaouankizou diouz he c'hostez, he savas buan er he sav. Neuze evelato ar Gatoliked a goumansas hardisaat ha goulenn al liberte. Epad meur a vloaz voe lezet muioc'h a frankiz hag ar relijuzed a c'helljas digeri eun neubeut semineriou bihan, hag o rener hervez o giz. Ne badas ket pell an amzer vrao; poulzet gand ar Franmasoned ar roue Charlez X a embannas eur gemennadurez d'ar 16 a viz mezeven 1828, e tifenne enni ouz ar Jesuisted ober skol hag e verke pegemend a vugale a c'hellje hiviziken beza digemeret er semineriou bihan. Muioc'h mui buhez an dud yaouank er skoliou a deue da veza direol ar gwirioneziou kristen a veze goapaet, an traou santel disprijet; e berr amzer ar re wella a deue da goll o feiz hag o onestiz. Er bloaz 1830 ar roue Charlez X e-unan a voe skubet gand an Dispac'herien; eun avel

a zizurs hag a zismantr a c'houezas a-eneb ar Gatoliked; ilizou a voe devet, kroaziou diskaret; kalz ne reant ket a c'hinou bihan evit diskleria oa echu he amzer gand an Iliz, e Frans... Mes an Iliz ne c'hell ket mervel, ha pa gav d'he enebourien e vez an tosta d'ar bez, neuze eo e sav a-nevez leun a sked hag a vuhez. Setu ar pezh a en em gavas er Frans e 1830. Ar gwel eus kemend a zismantr hadet e pep lec'h dre ar vro a heugas ar Gatoliked hag a lakeas ar gwad da virvi en o gwazied. D'ar 16 a viz here 1830 eur beleg a-spered bras, an aotr La Mennais (1), hag en devoa dija skrivet leoriou kaer, anavezet dre ar Frans a-bez, a zave eur gazetenn nevez hanvet *L'Avenir*. War dal ar gazetenn e weled o lintra skeudenn ar groaz hag hini an aviel gand an daou c'her-man: Doue ha liberte.

Endro d'ar gazetenn-ze, La Mennais a vodo eun toullad tud yaouank kalonek evel dan, an daou vrudeta anezo, Montalembert ha Lacordaire. Gand eur bluenn-dan, e skrivint a-enep dizurziou ar skolachou, e c'houlennit liberte d'an Iliz, liberte d'ar gatoliked da gaout o skoliou. Epad 13 miz, ar gazetenn a yelo dre ar vro, o c'hervel an dud vat da zivorfila ha da zevel war o zreid. « Ha ne glevit-hu ket, a skrive Lacordaire, krial e pep lec'h eo maro ar gatoliked hag int aet da netra; dihunomp, savomp en hor sav ha diskouezomp a vouez-uhel, e lavarer gevier, hag ez omp c'hoaz heo-buhezek, prest da zifenn Doue hag al liberte. » Hep dale eun emgleo evit difenn frankiz d'ar relijion, a voe savet, hag e voe graet ar zonzj da skei eun taol bras, evit goulenn al liberte d'ar skoliou.

(1) *Felix Lamennais*, 1782-1854, eur breizad hag a ranke beza e hano *Ar Menez*, gwechall goz.

IV. — Ar genta skol libr digoret

un dister a dra a roas tro d'an emgleo da ziskouez he nerz. Bez e oa e kêr Lyon, pell amzer a oa, skoliou libr evid ar vugale a veze e servich an Iliz. D'an 29 a viz meurzh 1831, dre eun taol fallagriez, ar c'houarnamant a roas urz da zarra ar skoliou-ze. Ar Gafoliked poulzet gand o c'hazetenn a yeas en egar. « Pegwir, emezo, e klask breman ar c'houarnamant trabas ouz kurusted, ni a zo vont da lakaat gwazed dirazi. » En eun nozvez, mogeriou Paris a voe goloet a baperiou ha warno e c'helled lenn ar c'helou souezus man. « An emgleo, savet evit difenn liberte ar relijion, a zigor e Paris, hep goulenn kounje digant den, eur skol libr evit netra hag ar c'henteliou a vezo roet gant tri eus pennou an emgleo. » Ar c'henta eus ar vistri-skol a c'hiz nevez-se, oa Charlez De Coux. oajet a 44 vloaz, an eil Yann Lacordaire oajet a 29 bloaz, an trede Charlez Montalembert oajet a 21 bloaz. Ar skol a dlee beza digoret dan 9 a viz mae 1831. Pa zigouezas an dervez merket, eun daouzek bennak a vugale a deuas d'ar skol. Dirazo ha dirag eun nebeut iud diredet da welet, Lacordaire a lavaras ar c'homzou man « Deuet omp aman, emezan, evit kemeret ar brasa liberte a zo er bed, an hini a zo evel an eienenn eus ar re all ha ne c'heller hepdi kaout liberte ebet. » Ar skol a goumansas; epad an dervez kenta e voent lezet e peoc'h. D'an eil dervez, d'an 10 a viz mae, ne voe ket ar memez tra: eur c'homiser a deuas, tri bolis ouz e heul. « En hano al lezenn, a lavaras dioc'h-tu, me a fell d'in diskleria sarret ar skol-man hag a zifenn grons ouz ar vugale lakaat o zreid enni ken. » Neuze Lacordaire, hep diskouez en doa klevet, a reas d'ar vugale daoulina evid ar bater ha dichek e lavaras « Bugale c'houi a zo deuet aman war urz ho kerent; ni a zalc'h o flas, galloud

ebet nemet ar justis ne c'hello hon dispartia, bezit holl aman warc'hoaz da 8 eur. »

Antronoz hini ne vankas; wardro nav eur, ar c'homiser a deuas adarre gand e bolised, eur gouriz tri-kolor en taol-man, endro d'e gof. Goulenn a ra neuze digand ar vistri-skol senti ouz lezennou ar vro, mes ar re-man a respontas sec'h d'ezan ne blegint ket, nemet dirag an nerz. « En hano al lezenn, eme ar c'homiser, e roan urz d'ar vugale-man d'en emdenna kuit. » — « En hano ho kerent, o deus roet d'comp galloud warnoc'h, eme Lacordaire, e c'hourc'hemennan d'eoc'h chom. » Betek teir gwech, ar c'homiser a roas urz d'ar vugale da vont er-maez; teir gwech e klevas ar memez respont hag ar vugale holl asamblez a lavaras « n'ez aimp ket kuit! » Ar bolised neuze a grog enno hini da hini hag o stlap er maez, mistri hag all.

Da genderc'hel.

J.-M. PHILIPPOT.



Buhez an Tad Maner

(Kendalc'h)

Ar Vretoned o c'houlenn mav o laket an Tad Maner war an aoteriou

An aotrou de Pleuk, eskob Kemper, a skrive d'ar Pab, d'an 3 a viz gwenngolo 1714 : « Labour ar misioner epad 42 vloaz, e garantez evit Doue, e aked evit gounit an eneou, e nerz-kalon, e zantelez, e holl vertuziou o deus her savet ken uhel e spered ar Vretoned, m'en deus pep hini doujans evitan ha fizians ennan. Rakse, Tad santel, ar Vretoned a c'houlenn diganeoc'h lakat an Tad Maner war roll an dud eürus en Nenv ha war roll ar zent. Ni, eskob Kemper, hon eus bevet gantan hag a zo bet test eus e vertuziou hag eus e vurzudou, a zav hor mouez, a-unan gant an dud fidel, evit Ho pedi da rei d'eomp ar c'hras-ze. »

Eskob Sant-Brieg, an aotrou de Boissieu, a skrive eus e du eun hevelep lizer. Warlerc'h liziri eskilien Breiz, an Tad Le Roux, karget, eus ar prosez e Rom, a lakeas moula, er bloaz 1716, eul levr dastumet ennan vertuziou ha burzudou an Tad Maner.

E Rom e kemerer atao an amzer, ha fur eo gedal, rak gant an amzer e vez desket traou nevez. Ar Jezuzisted, en triouec'hvet kantved, o devoe da c'houlzanv eur brezel kriz a-berz o enebourien fallakr. O Urz a voe zoken diskaret epad eur pennad mat a vloaveziou, ha prosez an Tad Maner sklaer eo, n'ez eas tamm war araok epad an amzer-ze. Epad ar Revolution vras, e Frans, e voe freuz ha dismantr e pep lec'h; ar paperiou a oa e iliz Plevin a voe devet

war ar blasenn, ha kalz anezo a zouge testeri eus santelez ha burzudou an Tad Maner. Evelato ne voe graet droug ebet d'ar bez.

Er bloaz 1847, an aotrou Le Mée, eskob Sant-Brieg, a reas digeri ar bez, hag e fizias al labour-ze e pevar beleg : an aotrou Prud'homme, chaloni eus an iliz-veur, an aotrou Denmat, person Plevin, hag an Tadou Bazin ha Renault, Jezuzisted.

Kavet e voe eun arched hanter-vrein, hag en arched eun nebeut eskern a goueze e poultr kerkent ha ma veze touchet outo; eun askorn evelato hag eun dant a oa miret mat. Ar relegou a voe dastumet mat ha gorroet en eun arched nevez gant eun tamm skrid a verke petra a oa bet kavet. An arched nevez a voe diskennet el lec'h m'edo an hini koz. Aus d'ezan, en diavaez, ez eus breman eur maen marbr gwenn hag a zo skrivet warnan ar geriouman : « Tad Maner. Aman eo beziet an Tad Maner, Jezuzist. Goude beza graet misionou epad 43 vloaz e Breiz-Izel, e varvas evel eur zant e Plevin d'an 28 a viz genver 1683. »

E Kemper, evel m'eo bet lavaret, e voe miret kalon an Tad Maner, e skolaj ar Jezuzisted. Met eno ive e oa bet freuz bras epad ar Revolution. An iliz a oa bet laeret, an aoteriou diskaret. Ar c'holoenn arc'hant a oa war ar maen m'edo ennan kalon an Tad a oa bet diframmet gant eur skraper bennak. Daoust hag ar galon a oa bet espernet?

— Ya, a drugare Doue. D'an 11 a viz gwenngolo 1847, an aotrou Graveran, eskob Kemper, gant an aotrou Keraudy, vikel vras, an aotrou Evrard, sekretour an eskopti, an aotrou de la Houssaye, kelenner er c'hloerdi bras, a yeas da iliz ar skolaj. Dirak an tabernakl, eus tu an henter-noz, ez oa eur maen kizellet warnan furm eur galon; siellet oa ar maen gant ploum. An aotrou Graveran a reas lemel ar

maen-ze, ha dindannan e voe kavet eun all, teo meurbet; e kreiz oa kleuzet e furm eur galon, hag er c'hleuz-ze ez oa eur galon bloum gant ar geriou-man warni : « Kalon an Tad Julian Maner. »

An aotrou 'n eskob a gasas gantan ar galon-ze, da c'hedal ma vije graet eur plas dereat d'he gorrann. Ar plase-ze a voe buan peurc'hraet, ha d'an 10 a viz genver 1848 an aotrou Keraudy, vikel vras, dirak Rener ar skolaj ha meur a veleg, a lakeas kalon an Tad Maner en eur bezig nevez e chapel ar skolaj. Ar maen a c'holoe gwechall kalon an Tad Maner a voe laket adarre war ar bezig nevez ha siellet. Eur plankenn marbr gwenn war c'horre a zo skrivet warnan geriou latin da verka eman eno kalon an Tad Maner.

O veza n'eus mui a Jezusted e skolaj Kemper, an aotrou Duparc, eskob Kemper, en deus goulennet aotre da denna eus ar chapel kalon an Tad Maner, hag en deus he roet d'ar Jezusted evel m'oa dleet. An Tadou Jezusted o deus graet eur bezig nevez en o chapel, e Rozavel, e Kemper, evit digemeret kalon an Tad Maner, ha d'an 31 a viz gouere 1931, deiz gouel sant Ignas, o zant patron, ar galon a zo bet laket er bezig-ze.

Ar Vretoned a dle kenderc'hel da bedi gant fizians an Tad Maner. E c'halloud en Nenv a zo bras; hen diskouezet en deus epad e vuhez ha goude e varo. Hirio, evel gwechall, e kar ar Vretoned ha goulenn a ra evito digant Doue ar grasou o deus ezomm. — Pa vez en eun ti tud klanv, dilezet gant ar medesin, ra vezint erbedet ouz an Tad Maner. Met, pa vezo bet eur pare bennak, dre vuzud, ra vezo diskleriet an dra-ze, evit ma vo gallet lakat buanoc'h an Tad mat war roll an dud eürus ha war roll ar zent.

Ar prosez a gendalc'h atao. Nevezet eo bet d'ar

21 a viz kerzu 1889, ha kaset eo bet da Rom ar pa-periou a oa ret.

Niver ar zent en Nenv a zo bras meurbet. Eun nebeut hepken a zo laket gant an Iliz war an aoteriou, ar re o deus bet ar muia brud, ar re o deus graet traou kaer, traou bras, burzudou skedus.

An Tad Maner ha Mikael an Nobletz a zo eus lignez ar zent. En o buhez ne gaver nemet karantez evit Doue, karantez evit an nesa. An eil hag egile a oa beleien desket bras hag a verve o c'halon gant an ioul da c'hounit eneou da Jezus-Krist. En em ankounac'haat a raent o-unan evit sonjal en nesa; troet d'ober pinijenn, e vevent eur vuhez kalet, ha dre o skouerioù muioc'h c'hoaz eget dre o frezegennou, e kasent an eneou war hent ar zantelez. Skuilhet o deus dre Vreiz greun mat an Aviel ha dre o labour ez eus deuet en hor bro gwellaenn vras. Digoret o deus an hent da visionerien all, ha goude o maro o labour a zo bet kendalc'het. Dre ar misionou ar feiz a zo bet startaet en hor bro; beleien eus ar parrezioù, leaned a bep Urz, a brezeg misionou dre ar parrezioù. Evelse an dud a vez kelennet, ar wirionez a ziskenn en o spered, goulenn a reont ar pardon eus o fec'hejou, gant eun nerz nevez ec'h en em lakeont da zenti ouz gourc'hemennou Doue ha re an Iliz. Ar misionou a ra eur vad souezus.

Trugarekeomp Mikael an Nobletz hag an Tad Maner da veza labouret en hor bro gant kement a galon. Pedomp i ivez evit ma chomo ar Vretoned sentus atao ouz Doue hag an Iliz.

Pedomp bemdez evit ma vezo an daou visioner-ze laketaet dizale war roll an dud eürus ha war roll ar Zent.

Y. U.

ENEZENNOU GLENAN

Peder leo diouz an douar bras, eün hag eün d'ar aber a zo e kreiz etre beg Lok-Tudy ha beg Trevignon hag e kouez ennan dour ster goant an Odet, emañ enezier Glenan: nao o zo anezo, met war an nao n'eus nemet c'houec'h hag o defe talvoudegez: an Dregeg, ar Gioteg, al Loc'h, Kigneneg, Sant Nikolas hag ar Penfred; an teir all n'int nemet reier bras ha ne vev warno nemet morveot ha brini-mor.



Lenn al Loc'h e Glenan

An enezennou-ze a oa stag-ha-stag hag a rae eun enezenn vras, gwechall goz ha pa veze izel ar mor e c'helled mont enni, hep giebia an treid, dre eur chausser, dismantret breman, a gemered e Moustertin hag a dremene dre enezenn an Derved ha reier an Ebeul.

I. — Mistri Glenan

Ar re o deus skrivet istor ar vro a gred e oa perc'hennet enezenn Glenan, da genta; gand abad Loktudy ha menec'h Loktudy, da gredi eo, eo o devoa savet prioldi sant Nikolas.

Pa voe dismantret abati Loktudy gand an Normaned, breman ez eus mil bloaz, e vadou a voe rannet hag enezier Glenan a gouezas gand abati sant Gweltas Rhuys hag a jomas gantan betek an Dispac'h.

En amzer ar roue Loeiz XIV, e denzorier brudet, Nikolas Fouquet a glaskas o frena hag a venne rei evita ar maner en devoa e Koadkanton, e Melgven, met o veza ma voe taolet, er prizon, demi-goude, evid e laeronsiou, ar werzidigez-ze a voe torret. Ar c'houarnamant a glaskas, meur a wech, lakat e graban, war an enezennou-ze, met, betek an Dispac'h, gwiriou sant Gweltas a voe anavezet atao gant holl Lez-varniou ar vro.

II. — Roudou kenta an dud e Glenan

An enezennou-ze a zo bet tud o chom enno a-bell-ze, evel m'hen diskouez maen-hir enez an Derved ha tao-liou mein Sant Nikolas koulz ha beziou koz an Dregeg hag al Loc'h. An A. de Villers du Terrage en devoa daou bod-pri bet graet breman ez eus daou vil bloaz bennak hag en devoa kavet e Sant Nikolas.

Breman ez eus 150 vloaz, ar vortoloded a wele, eun hanter leo diouz enezenn an Derved hag eun ugent troatad bennak dindan an dour, pa veze sioul ar mor, eur volz vein graet gant dourn an den.

Enezennou Glenan a zo hano anezo war gartennou-mor ar XIV^{vet} kantved; o henvel a raed *Grana*, er bloaz 1313 ha *Granan* etre 1330 ha 1379.

An dud ne joment enno nemed epad eur pennad eus ar bloaz, da amzer ar c'hounidegez ha da amzer an eost; ar besketaerien a rae o diskenn enno ivez eur wech an amzer.

Laeron-vor a oa c'hoaz hag a en em guze enno ha, pa veze brezel, a zailhe ac'hano war al listri a welent o vont er maez eus porz Benodet hag hini Konk-Kerne.

Er bloaz 1584, abati sant Gweltas a anzave ne ga-

ved e Glenan nemet letonennoù da beuri hep ti, na den.

Diwezatac'h eur manac'h a deuas da jom, da Zant Nikolas, e lec'h ma oa eur chapel; er bloaz 1717 e welled c'hoaz e di toet gant kolo, e fourn, e liorz, mogeriou tro dro d'ezan, hag eur puns, toullet er vein hag e oa dour mat kenan ebarz.

III. — Konkiz-Kerne e Glenan

O veza ma oa kals pesked er mor a zo tro-war-dro d'an enezeier, eun toullet tud eus a Gonk-Kerne, a zavas eno eun ti da gempenn ha da zalla o sardined. Loeiz XIV a roas aotre d'ezo zoken da c'houlenn 5 gwenneg ouz kement bag a raje he diskenn en enezeier, gant ma savjent eur c'hrenv-lec'h (un fort), dre eno, en eun tu bennak.

Eun tan-gwall a zegas ti Gonkiz-Kerne; dre aoun rak ar Zaozon a rae o diskenn en enezeier, bep wech ma tigure brezel, ar re-man a zistroas d'an douar bras.

IV. — Taol kaer markiz Keryann e Glenan

N'eo ket ar Zaozon hepken eo a deue da enezeier Glenan da ober o diskenn; er bloaz 1648, Spagnoled a oa dre eno, war nao lestr hag o devoa taolet o c'hraban war 50 bag da varc'hadourien pe besketaerien ar porziou tosta. Ken dinec'h ha tra e oant pa weljont eur pikol lestr bras o tont warno, a-diz, hag ar boulji o sotal dioutan ken e strake an aochou tro-war-dro. Renan Barbier, markiz Keryann,, e parrez sant Noug, e Gorre-Leon, eo a oa war al lestr-ze en devoa laket ober e Penpoull evit redet warlerc'h al laeron-vor. Ar Spagnoled strafuilhet a glaskas tec'het, met a-raok m'o devoa gellet sevel o lien, markiz Keryann en devoa gouledet tri eus o listri ha laket an tri all d'en em rei d'ezan ma n'o devoa ket a c'hoant

da welout ker gwas oc'h en em gaout ganto; an tri diweza hepken, daoust ma redas kaer ar markiz, war o lerc'h, a c'hellas tec'het. Ar varc'hadourien vreizat a voe kel laouen o welet markiz Keryann oc'h ober



Lestr Renan Barbier, markiz Keryann


o stal ouz al laeron-ze ma kasjont eun nebeud anezo d'e gaout, en hano ar re all, evit rei d'ezan eun toullet barrikennadoù gwinn e testeni eus o anaoudegezh vat.

V. — Taol kaer ar Rochard e Glenan

Meur a bense a zo bet c'hoarvezet e kichen an enezeier-ze ha n'eo ket souezus, kement all a gerreg a zo war o zro. Ar besketaerien a rae braoa ma c'hellent d'an dud a en em gave da goueza, dre bense, war o aochou, met kemeret a raent evito o madou ha betek zoken o dilhad. An enezeier-ze neuze ne veze ket a dud enno, nemed en amzer ar peoc'h. Pa zigore bre-

zel e ranked en eun denna en douar bras, rak an enebourien a gemere perz enno dillo hag ac'hano e veze aes d'ezo evesaat ouz an aochou, adalek enezenn Groe betek Penmarc'h.

Er bloavez 1744, an A. Aubert de Vincelles, eun ofiser koz a en em ginnigas evit mont da jom da C'hlenan, gant ma vije roet d'ezan eun nebeud soudarded ha mortoloded c'houec'h pez-kanol hag eul lestr,



Krenv-lec'h ar C'houbon

kanolioù warnan. E lec'h ober dioutan e kavjod gwelloc'h sevel, er bloaz 1755, eur c'hrenv-lec'h (un fort) var roc'h ar C'houbon, eur roc'h hag a zo dres a-zioc'h aod ar Gampr, eun aod hag a zo bet roet an hano-ze d'ez i dre m'en em gav ar bagou a vez enni, en andor, daoust peger fall bennak e c'hell beza an amzer war ar mor bras.

Soudarded eus a rejimanchou Chartr, Ailhy hag al Lorren a voe laket er c'hrenv-lec'h-ze met, pa deuas ar peoc'h ne jomas soudard ebet wardro eno ken, adarre, ha tud an enez a laeras koajou an dorioù hag ar prenecher hag a en em lakeas da c'hoari gand ar

peziou-kanol. Eur serjant koz, ar Rochard, a voe kaset d'an enezenn da ziuall traou ar C'houarnamant; en em g'evet a rae gand e amezien, tud al Landais hag ar Viau (hnmnan en devoa 12 krouadur) ha c'hoari a rejont eun taol kaer d'ar Zaozon, er bloaz 1779.

Eul lestr saoz a oa deuet da glask trabas ouz bagou ar besketaerien renket e aod ar Gampr. Ar Rochard a vodas tud an enez hag a roas d'ezo bizier e lec'h fuzulioù, o lakat a eure da ober tro eun dosenn endra m'edo e verc'h, kuzet a-dre an tevenn, o skei war eun daboulin. Ar Zaozon a gredas e oa eno eur gwall doullad soudarded, hag a dec'has en douñvor. Rochard a voe meulet gand ar ministr ha roet 200 lur d'ezan, evid an taol fin en devoa c'hoariet d'ar Zaozon.

Epad brezelioù an Dispac'h, soudarded Glenan a en em gleve, gand ar Zaozon; ar re-man, gant ma vije lezet o ofiserien da chas'al, en enezeier, da gaout legumach ha dour dous, ne lavarent netra ebet d'ezo; didrabas kaer e lezent ivez ar besketaerein ha prena raent zoken diganto pesked, frouez ha bara.

En amzer ar roue Loeiz-Philip e voe savet eur c'hrenv-lec'h all e enez Penfred hag eun tour-tan hag a voe goulaouet evid ar wech kenta d'an deiz kenta a viz here 1838.


VI. — Person Glenan

Er bloaz 1871, an Aotrou Marc'hallac'h, eus a Gemper, a voe hanvet, war e c'houenn, da genta person enezeier Glenan a oa wardro eur c'hant den bennak o cham enno neuze.

E enez al Loc'h e savas eur chapel goat en enor da Itron Varia an Enezeier hag a dalveze da di, goude an ofisoù. Eno eo e lavare bemdez e oferenn. Da zul e veze diou oferenn, diou brezegen, unan e brezoneg hag unan e galleg ha gousperou. Eur mortolod koz eus e lestr ar « Surcouf » a rae ar c'haner. A-wechou ne veze ket kalz a dud en iliz. Eur bloavez, evid ar

pardon, e oa pevar beleg diavaez ha pevar den eus ar barrez. Pa ne c'helled ket tostaat ouz an enezenn, ar pez a c'hoarveze alies a-walc'h er goanv, e veze laket eur banniel, e beg eur wern, a veze pignet pe ziskennet ha diouti e oa aes gouzout e pe lec'h eus an oferenn e vezed en em gavet.

Prosesion ar Zakramant a veze graet gand ar bagou.



Bered Glenan diwar Espey, mirdi Brest

Mont a raed beteg ar Penfred hag eno, er c'hrenv-lec'h, e veze savet eun aoter ha graet eun ehan; ac'hano e veze roet bennoz ar Zakramant ha goudeze e tistroed d'al Loc'h: « Na pebez lec'h dudioz evid eun hevelep lid, eme an A. Rossi; diouz eun tu ar mor divent, diouz eun tu all eul linenn o wenna hag o verka an douar hag a-uz ar penn ar sklerder o koueza eus lein an nenv. »

Eul lestr eus ar Gres a en em gollas war ar reier; unan hepken eus ar vortoloded a oa warnan a c'hellas en em zavetei; an A. person a zigoras d'ezan dor e di hag her sikouras da zistrei d'e vro; sebelia a eure ar re veuzet, en eun toull digoret gantan e-unan.

War ar zizun e veze o welout e barrezioniz hag e teske lenn ha skriva d'ar vugale vihan.

An amzer a oa re c'haro eno evid eun den 64 bloaz; e lestr ar « Surcouf » goude beza bet tost d'ezan en em goll ne voe savetaet nemet dre eul le en devoa graet da Zantez Anna Wened, met eun-nozvez a deuas hag e voe lounket, da vat, gand ar mor.

Dem-goude, an A. Marc'hallac'h a voe galvet gand an A. Nouvel da Gemper hag hanvet vikel vras. An A. Marc'hallac'h eo bet kenta ha diveza person Glenan.

VII. — Gwrac'h al Loc'h

Diou wech oun bet en enezeier-ze. A-bell int glas hag henvel ouz tergin o neunv er mor. A-dost, gand o zouriou-tan, tiez Penfred ha Sant Nikolas hag ar bagou a vez o pesketa en dro d'ar reier, eo anat ez eus buhez ha kalz buhez zoken enno ha red eo sellet, e tu an hanter-noz, ouz roudenn draez alaouret Moustierlin hag Enez Tudy, en traon da venez Lokronan, evit gouzout emaez peder leo diouz an douar bras.

Ar mor harp en enezenn a zo sklaer ha glas el lec'h ma 'z eus traez ha moug el lec'h ma 'z eus bizin. Peurliesia e tiskenner e Sant Nikolas a zo glas ha bleu-niel kaer e mezeven. E kreiz ar porz a ra an holl enezennou-ze, krenv-lec'h ar C'houibon a zispak e vogeriou mein-benez hag e dour e raer diwarnan aroueziou, pa vez ezomm, d'ar vortoloded var vor.

E enezenn Penfred ez eus eun tour-tan a 36 metr, eun arouezva pe semaphor ha daou di.

E enezenn Gwiridenn ez eus bet kavet eskern eun den bras divent.

E kreiz enezenn al Loc'h ez eus eul lenn hag a zo sall e zour evel dour-mor.

Eur wrac'h koz o oa dre eno o chom, gwechall, war a leverer hag a oa pinvidik-mor gant tenzoriou ar re veuzet. Meur a baotr yaouank a glaskas o laerez diganti. Digemeret mat e vezent da genta hag ar

wrac'h, war he meno, a oa prest da zimezi gant pep hini anezo, met, pa veze skuiz gand unan hen troe e pesk, her stlape en eur vagerez hag her roe da zebri d'he gwaz nevez a vije graet d'ezan ar pez a veze bet graet d'ar re a^l a oa bet en e raok.



Gwrac'h al Loc'h o touelli eur paotr yaouank

Emil Souvestr en deus skrivet eur marvailh koant da lavaret penaos e c'hellas Houarn hag e zanvez-pried Bellah en em zizober diouz strobinnellerez gwrac'h al Loc'h ha kas ganto he zenzoriou.

En enezenn al Loc'h eo ez edo gwechall chapel ha bered an A. Marc'hallac'h. Eus ar chapel ne jom mui nemed eun tamm bennak euz he diazevou hag ar c'hrozioù koat a oa er vered hag a weler eur skeudenn anezo war eun daolenn a viret e mirdi (musée) Brest, a zo bet diskaret pell a zo gand ar besketaerien da domma o soubenn-besked.

G. P.

Chapel sant Kadou Gouesnac'h



Etouez ar chapelioù koant a gaver, war lez ar ster Odet, etre Kemper hag ar mor bras, chapel sant Kadou, e parrez Gouesnac'h, eo ar goanta.

E kichen ar chapel ez eus eur groaz, eur feunteun, eun ti-bidi hag eul letonenn gaer disheoliet gant gwez bras.

Ar chapel-ze a zo bet savet er ^{xvii}^{es} kantved ha renket a-nevez, abaoe, estreget eur wech. War he zal e weler armou Fransez Kerc'hoent, aotrou Kergournadec'h, e Kleder, ha re e wreg Jann Bodigneau, eur verc'h eus ar re binvidika, ginidik eus a Fouesnant, a gemeras da bried, er bloaz 1583.

Skouejou all a zo c'hoaz, evel re ar Vestled, aotronez Poulguenan, e Ergué-Armel, kizellet war dalbenn ar feunteun.

Daou bez-kanol maen a zo renket e kornioù an tour; al leurenn diabarz a zo graet gant brik rus poazet en eur fourn da boazat priachou hag a oa gwechall e Toulven.

War goat kizellet kaer an aoter vras e weler armou an

A. Coetlogon, Eskob Kemper, eus ar bloaz 1668 d'ar bloaz 1706 hag armou an A. Louet, eskob Kemper a-raok an A. Coetlogon a weler war ar wareg tosta d'ar c'heur.

A bep tu d'an aoter e weler eur werc'hez o tougen he mabig bihan hag eur zant Kadou, gwisket kentoc'h evel eskibien ar XVII^{vet} hantved eged evel abaded ar VI^{vet} hantved.

Etouez ar zent all enoret e Sant Kadou e kavomp sant Per, eur pez alc'houez en e zourn, sant Anton gand e bemoc'h bihan, sant Tujen gand e alc'houez ivez hag e gi klanv. E kichen sant Vaudez ez eus eun toull, en douar, hag a ziskouez e kemere ar bardonerien eur meurtadig douar ac'hano da lakat war o gouliou evid ober d'ezo paraa kentoc'h.

War eur maen a gaver er chapel kroaz a zo a-gleiz e weler roudou eun houarn loen. Gwechall, war a leverer, sant Kadou oc'h ober eur bale, a reas eun ehan e Gouesnac'h. Er goanv edod ha yen e oa an amzer. Kadou a c'houlennas ouz eun tieg eus a Gerfinaou aotre da c'heilout sevel eun tammig chapel da bedi Doue. Evid en em zizober anezan, an tieg a lavaras da Gadou: Dizro abenn eun nebeud miziou aman ha ma 'm bevez kalz avalou e roin d'it an dachenn a c'houlennes ouzin.

Sant Kadou a zaoulinas hag a bedas. Kerkent al liorzad gwez avalou a oa stok eno a oa e bleun: deliou ar bleun a gouezas hag, en o lec'h, ar frouez a greskas hag a zarevas; ar zant a bede atao; benni eur c'hrt eur, ar skourrou a venne terri dindan eur samm frouez evel ma'n o devoa douget hini, biskoaz, ker pounner!

Sant Kadou, goudeze, a voe roet d'ezan, e c'hellit kredi an dachenn a c'houlenne, met, epad an amzer-ze, e loen a oa skuiz ouz e c'hedal hag a oa en em laket da skel, en dra c'helle, gand e dreid war ar roc'h m'edo warni: ar roc'h-ze, toulllet gant karniou ar zant a virer atao er chapel.

Darn all a lavar e chomas marc'h ar zant a-zav, en eun taol, war an dosenn m'ema warni breman ar chapel ha ne felle ket d'ezan kerzet e tu ebet ken, kaer en devoa e vestr skei warnan, en dra c'helle gand e skourjez ha chacha, war e gabestr, eur wech diskennet d'an

douar. Al loen a enebas kement ouz e vestr ma sankas roudou e dreid er garreg a oa dindannan; ar manac'h santel a welas, dre-ze, e felle da Zoue e chomje da veva dre eno; goulenn a eure aotre, eta, ouz mestr an dachenn, da zevel eno e beniti, henman en devoa damant d'eur wezenn ber a oa e bleun hag a vije ranket da drouc'ha a-raok ma vije dare he frouez: « Koulz per hag ar reze, emez n, ne vezont ket kavet e ker all ebet er barrez! »

Ar zant a lavaras d'ezan neuze: « Daoust hag aotre am bezo d'he diskar, da vihanan, pa vezo graet an east? »

— « Ya! ya! eme ar c'houer ha kerkent ar per a en em grouas hag a zarevas; kement e oa anezo ma venne ar skourrou terri ganto ha per e oant hag a oa ker melen ha ker brao ma teue an dour er genou ouz o gwelet.

Eun hevelep burzud a roas d'ar zant kalz muic'h a vrud eget ne glaske ha setu perak e tec'has ac'hano da glask eul lec'h didrousoc'h, met e di-bidi a jomas hag e vennoz a gouezas war ar baotred yaouank a-dro-war-dro o devoe digantan izili krenv ha soupl evel ma vez ezomm pa vez c'hoant da c'hourin er pardonioù. Sant Kadou eo patron ar brezelourien hag, e Stourmad an Tregont, an Aotrou Kervarker a ziskouez d'eomp soudarded dervenn an hanter 'n hent oc'h en em erbedi outan:

*Aotrou sant Kadou hor paeron,
Roit hu d'eomp-ni nerz ha kalon,
Ma c'hounezimp hizio an deiz,
War (holl) enebourien hor Breiz.*

*Mar deomp-ni, d'ar ger, war hor c'hiz
Ni a roio d'eoc'h eur goureiz
Eur jupenn dour hag eur c'hleze
Hag eur vantell c'hlas liou an nenv.*

*Ma laro an dud o sellet
« Aotrou sant Kadou benniget
En nenv koulz ha war an douar.
Sant Kadou n'en deus ket e bar! »*

Hag eur wech trec'het ar Zaizon ganto setu i o tis-kouez d'ar zant o anaoudegez vat:

*Kar d'ar Vretoned ne vije,
E kêr Joslin neb na youc'he,
O wetet hor re ' tont en dro
Ar bleun balan ouz o zokou.*

*Ne vije kar d'ar Vretoned,
Na d'ar zent a Vreiz kêr nebeut
Neb ma-veule ket sant Kado,
Paeron brezelourien ar vro.*

*Neb n'estlamme, neb na youc'he,
Neb na veule, neb na gane :
« En nerv, koulz, ha war an douar,
Sant Kadou n'en deus ket e bar!*

Chapel sant Kadou Gouesnac'h a zo bet unan eus chapelioù darempreta Bro-Gerne. Goude chapel Menez-Hom, hini Kergoad ha sant Tujen, hini sant Kadou oa an hini a veze roet d'ezi, bep bloaz, ar muia profou. Eus parrezioù pella ar Poher, eus ar Pôrzev, Kemperle ha Gourin, e tiredet da bedi sant Kadou.

Er bloaz 1761 bag an treiz a voe troc'hohiet, kement a dud a oa enni; eun douzenn bennak a re vezet eus a Vrieg, Langolen, ha Kast ha parrezioù all a-bell evelse a voe beziet e Gouesnac'h.

Ar gourenadegou en enor d'ar zant a jache kals tud d'ar pardon-ze e veze gwelet ennan paotred vat Fouenant o klask rei lamm da baotred ouesk Melgven ha Scaer.

Gwasa pezh a zo ar beleg a oa person e Gouesnac'h, wardro ar bloaz 1865, a daolas ar pardon d'an traon, war zigarez ma veze eun taman trouz bennak etre ar c'hourinerien a goll hag ar re a c'houneze. Ar chapel a jomas serret; den n'her c'hempennas; he zoenn hag he lambrusk, taolennou livet warno, a gouezas en o fouñ. Pa deuas eur person nevez e klevas e barrezioniz oc'h en em glemm o veza ma ne veze ket graet ken pardon sant Kadou. Eun doenn nevez a voe laket var ar chapel hag ar pardon a voe adsavet met ar bardonerien a-bell ne zistrojont ket ken.

Epad ma ne veze ket graet e bardon; ar zant, war a lavare ar re goz, a ziskoueze e zisplijadur: wardro amzer

ar pardon e vode war dosenn ar chapel, eneoù ar c'hourinerien wechall,


*Paotred oueska Korre, ar Faonet ha Kerrien,
Re Scaer ha Bannalec, Gwiskri ha Sant-Thurien.*

ha neuze, ouz sklerder al loar, e veze eur c'hourenadeg sebezus hag e kleved youc'h ha trouz lammou ar c'hourinerien dremenet o koueza war al leton.

Siouaz! ne vezo ket gwelet ken e Sant Kadou ar engroez a veze gwechall pa veze ar chistr-alaouret o virvi e gwer an tinellou a veze savet, harp-en-harp, eus ar chapel befek Leskidig; daoust da-ze, ar pardon hag a zigouez da eil sul miz gwengolo a zo kaer hag an dia-vaezidi a deu da dremen an hanv da Veg-Meil ha da Venodet a vez gwelet stank ennan. Gourenadegou a vez atao lart pe eun tok pe eur pakad butum.

Evit diskar eun dra n'eus ket a labour pell: tennoc'h eo hen adsevel ha ne vezer ket sur atao da zont a-benn d'hen ober!

G. P.



Ti-bedi sant Kadou, e Gouesnac'h

« Sed libera nos a malo »

Bez ez eus en dro d'in daou gamarad ha n'o gwelan ket ha koulskoude am heuliont noz-deiz; pere-
eo an daou gamarad-se? Daou Ael, unan mat hag unan fall; ha pep den en deus e re : seluouit o istor, istor an Aelez.

C'houi n'oc'h ket koz; lakomp kant vloaz; an draze n'eo netra. Hag en ho raok? e oa tud war an douar, sur a-walc'h. Ha pegeit a zo ema an dud war an douar? wardro eiz pe zek mil bloaz? Ya na mar-teze dek mil ha kant mil all ganto; n'eo ket aes gouzout.

Hag a-raok? a-raok, ne oa den, na douar, netra 'n holl nemed an Aotrou Doue bet a-viskoaz hag a vezo hag a zo. Ha setu ma krouas an Aotrou Doue eun niver bras a sperejou kaer, an aelez: lugernus evel an deiz ha korf ebet d'ezo; henvel a-walc'h ouz ar bannou-heol, ar bann-heol n'heller na kregi ennan, na steki outan; sklaer eo koulskoude ha tomm. An Aelez! sperejou lintrus evelse, mevelien a-zoare evid an Aotrou Doue. Hag e oa kals diouto? Ya, milionou ha milionou!

Koulskoude ne oa ket digor ar Baradoz, evit c'hoaz; da zen ebet ne vez digoret ma ne lavar ket da genta : Ma Doue me n'oun netra ha C'houi eo pep tra; me a gred ennoc'h; me a bleg d'eo'h; me ho kar. — Ya! a-raok tanva ez eo red kredi; a-raok gwelout Doue war an dispak, eo red e garout dindan guz.

Ha gand an Aelez eo bet ivez evelse; gounit o deus ranket ar Baradoz. Ha setu an Aotrou Doue d'o aprout ha da lakat dirak o spered eun daolenn gaer; diskouez a reas d'ezo ar bed ha warnan krouadurien

hanter-vreudeur d'ezo, nemed e oant gwisket gant pri : eur c'horf o devoa hag ar pezh a oa sebezusa : Doue ar Mab a oa diskennet david an dud-ze ha gwisket gantan ivez eur c'horf. Ha setu evelse e oa renket pep tra evid ar gwella : an Aelez a oa henvel ouz an Aotrou Doue, gand o spered lemm hag an den ivez p'eo gwir e oa deuet an Aotrou Doue da gemerout e wiskamant kig. O! an daolenn dudius! O! an daolenn dudius! etre he divrec'h, eur werc'hez, flammoc'h eged an deiz, a luskelle he mabig, koant dispar, hag hen den ha Doue, war an hevelep tro. Hag e voe lavaret d'an Aelez : Adorit ar Zolver! Gantan e tap Doue beteg an den hag an den paour betek Doue.

Dirag an daolenn e oa bodet an holl Aelez : eun akt a feiz hag eun akt a adorasion a voe goulennet diganto. Hag eur rumm anezo a gavas diaes; unan a oa, dreist-holl, Lusifer e hano. Lusifer! Braoa arc'hael deuet eus a-dre daouarn an Aotrou Doue e oa hen! Gand al lorc'h e savas sonjou fall en e greiz : « Me! adori eun Doue aet da zen? Me, Lusifer, ken lugernus hag ar stered, me plega da hennez? Me ne dlean netra d'ezan, na da Zoue kennebeut! O Doue, re ger e lakit ho Paradoz; mirit hen evit neb a garo; me ne blegin ket! »

Eur bagad re all a lavaras eveltan ken e savas mesk, darn evit Jezuz-Krist ha darn all en e eneb. Lusifer hag e genseurted a youc'he : « Ne blegimp ket! » hag e troent kein. Mikael hag an Aelez mat a lavare : « Na piou a zo bras evel Doue? » hag e stouent d'an daoulin da adori ar Mabig etre divrec'h ar Werc'hez.

Ne badas ket pell : amzer eul luc'hedenn; pa oa graet mat o sonj e reas an Aotrou Doue eun dibab. Ha kerkent, evel eun tarz-kurun, e tistonas e vouez : « A-bell, Lusifer, hag e vignoned! D'an tan sperejou

milliget! » Neb en deus gwelet eur steredenn o koueza eus an oabl a gompreno. Diazezet e oa rouantelez an drouk-aelez hag ar re vat a zavas d'ar Baradoz.

I. — SPEREJOU HA NE GARONT KET

O Lusifer! pebez kemm! Eus kichen Doue, stlapet en Ifern! Taolit pled, koulskoude : eur spered n'eo nemet spered; n'hell ket koll e skiant ha ken lemm ha biskoaz e chom skiant Lusifer, nemed eo distronset krenn; gwechall e kare Doue; breman ne garan seurt, na tra, na den, na Doue. N'en deus, nemet kasoni, ar gasoni en heo. Ni a wel ar prajeier, ar parkeier, ar bleun dindan sklaerijenn an heol; an diaoulou o gwel dindan sklaerijenn rus tan ar gasoni. Diskouezet int bet da zantez Tereza, e kreiz o labour vil : « O! emezi, ar sperejou reuzeudik, ne garont ket! »

Kemeromp aze eun dispac'her hag eur zant ha lakomp d'ezo, en o dourn, peb a yalc'had aour; ar zant, petra zonjo? : Aour? danvez dilhad ha bara mat evit meur a baour! » An dispac'her petra zonjo : « Aour? priz eur bomb; peadra da laza tregont den pinvidik! »

Aze eman klenved Lusifer : klask an tu war Jezuz-Krist evit rei lamm d'ezan. Eur veurevez e voe goulennet ouz Bismark : Kousket mat ho peus? — : Me? taken ebet! — : Na perak! ta? — : Perak? Epad an noz e oan o skrigna ma dent gand ar gasoni ouz Bro-Frans.

Lusifer, da vignoned ha te a zo krog enno terzien ar gasoni; ne gouskint taken ebet edoug an holl amzer.

II. — DINDAN KROC'HEN AN NAER

En ifern emaint ar sperejou lous, oc'h en em beilhat ha gwellañ ebet ne c'hell dont enno; an distro a zo eur vleunenn ha ne ziouan ket en o bro. E rouantelez Lusifer, ne vez ket gwelet an avel o trei. E traon ar Frans du-ze ez eus eur feunteun dour souezus : dre

fors koueza a-dakadennou war eun aval e vez troet an aval e maen; mirout a ra tres an aval; an danvez avat a zo kalet maen. Er stumm-ze eo bet chenchet danvez an aelez fall; rinset ar garantez ha deuet ar gasoni en he lec'h.

Pet vloaz a dremenas? Doue hepken her goar. An diaoulou, bepred, a oa pres warno da ober anaoudegez gand an den. Dre hir-gortoz, setu digoret warno ha distaget ha lezet da zont da zellet ha da douelli. War an douar, e welas Lusifer daou grouadur eus ar c'haera, Adam hag Eva, flamm o daou hag eurus ha sentus. Daoust penaos o saotro? Graet eo gantan e zonzj ha c'hoaz n'eo ket bet peil; setu anan : klevet en deus an Aotrou Doue o lavaret d'ezo : « Na stokit ket er wezenn-man, pe anez e varvoc'h! »

Hag hen da wiska kroc'hen eun naer ha da dostaat ouz Eva — : Perak ne zebfec'h ket eus ar frouez-man? — : Difennet eo anez e varvimp! — : C'hoai, mervel? ya! beza henvel ouz an Aotrou Doue ta ha gwelout reiz an droug hag ar vad.

Hag Eva da zonjal — : Henvel ouz an Aotrou Doue! ha ma vije gwir? Ma! red eo d'in gwelout! Hag hi, gand ar c'hoant, da dapout, da danva ha da rei d'he fried... a-dre o c'hein eur c'hoaradenn a sklokas : tapet e oant! o daoulagad a oa digor; evid ar wech kenta e santjont ar vez : ar pec'hed a oa dishual ha dishual ive an Ankou, ha deuet Lusifer da Roue war ar bed!

III. — SATAN HA JOB

Hag abaoe e pelec'h ema Satan? Dre ar bed-holl ha pres warnan o klask ober dismantr. Roet ez eus bet d'ezan urz da douelli an dud, da boueza warno ha d'o dougen d'ar pec'hed. Ar pezh n'hell ket taga etre e skilfou a zo mat da veza saotret gand e vabouz; al labour-ze a blij d'ezan.

An Istor zantel a gont d'eomp doare an den santel

Job. Eur wech a oa hag ec'h en em zastumas dirak Doue an holl Aelez ha Satan ivez da zigouezout — : Hag o fонт eus a belec'h emañ? — Me? Graet em eus tro ar bed da c'houzout penaos e oa kont. — : Ha va servicher Job? Ar seurt-ze a zo tud, neuze ; eñ da doujus. — : Ya! da! Aes a-walc'h pa ne gouez taol ebet war e choug. Va lezit d'e skei hag e weloc'h. — : Ma! kerz 'ta!

Mont a reas ha skei gand an den santel; seurt ebet ne espernas, na madou, na bugale, na yec'hed ; ne lezas gantan nemed ar vuhez; an den santel Job ne vallozas ket, ne vlasfemas ket ; war galon hennez, Satan a dougnas e ivinou.

Nag a gristenien, siouaz, hag a valloz hag a vlasfem dindan taoliou Satan! An dentasion! labour an diaoul! Pa ne dap ket dre zonz lous, e tap dre gomz lubrik; lec'h ma n'hell ket ar mignon fall mont, ec'h en em zil al levr brein; neb ne gav blas ebet gant plijadur ar c'hig a vez profet d'ezan plijadur an aour; an neb a zo bouzar d'an ourgouilh a vez roet d'ezan ar venjans da danva.

Ha pegeit a zo eo krog Lusifer da denti? Dek mil bloaz, ugent mil bloaz, ha mil gwech muioc'h, mar-teze. Ha c'houi a gav d'eoc'h, n'anavez ket mat kement pleg a zo en ho kalon? Hag an tu d'ho tapout?

E pred ar maro, neuze e savo pres warnan; e kichen ho kwele e vezo ha biken ne dec'ho kuit ken na vezo astennet ho korf, en e c'hourvez, skournet. Ha ma tigouez gantan gounit an taol, pebez skrijadenn a gaso da Jezuz-Krist. Tre e-tal Hor Zalver en deus kavet danvez tud daonet, Judas, c'houi 'oar! Hag e talc'ho da beilhat evelse, betek pegouls? Betek fin ar bed. Neuze e vezo lavaret d'ar re zaonet : « It pell, tud milliget, d'an tan, gand an diaoul hag e gen-seurted ». Eilpennet e vezint e puns an Ifern hag alc'houezet an nor ha biken goude ne zigoro.

IV. — BELEIEN SATAN

An Aotrou Doue en deus e veleien, e ofisou sakr; Satan en deus beleien hag ofisou sakr ivez.

O Jezuz! hon breur, hon breur hena lazet en hor plas, ho kwad eo a vez skuilhet epad an oferenn. Satan a rank kaout gwad den evid e oferennou. C'houi a voe staget ouz ar groaz ha marvet oc'h bet warni heb en em glemm. Satan a zo re fallakr da vervel evid e dud; o laza, avat, o nag e plij-ze d'ezan.

Pa vez an den yaouank war ar studi, er skolachou, e vez roet d'ezan da lenn, leoriou ar Romaned hag ar C'hresianed; rasket e vez ar pajennou lousa hag ar pez a jom n'eo ket c'houez vat eo a zav diwarno atao. Sonjit 'ta, etouez ar bayaned-ze, ne oa ket dereat tremen eur gouel kaer hep laza eun den bennak : gwad tud a ranket kaout da demsi an douarou ha da derra sec'hed an idolou. Bep bloaz e veze lazet eun hanter dousenn bennak en hevelep kêr : tud a oa beleget da oferenna gand o gwad; e kêr Rom e oa savet eun teatr bras d'o gwelout o vervel; ar zoudarded tapet er brezel, petra veze graet d'ezo? Gwisket gant rousin ha c'houezet an tan enno ha graet diouto goulou da sklaerijenna ar gouel. Divezatoc'h e vezo tro ar gristenien da veza ar goulou beo-ze... Ha c'hoariadeg ha laza deg tud, korfou maro a gantchou, en eun dervez, war leurenn an teatr-ze. Ha diou wech er zizun e veze c'hoari hag ar bobl pa veze skuiz o sellet n'he devoa netra da ober nemet mont pelloc'hik da danva an hudurnez : goude adori diaoul ar gwad, mont da adori diaoul ar c'hig.

V. — OFERENNOU AN DIAOUL

Evit gwir, an ilizou payan a oa tiez a vrud fall; a-raok dont er maez, ar plac'h yaouank a veze dizenoret, an den yaouank breinet. Ha pa zonzan em eus me klevet tud o klemm hag o lavaret e oa bet

mouget ar zevenadurez; « la civilisation » gant ar C'hrist! Ya! da! koant e oa sevenadurez ar bayaned. He mouga? Poent bras e oa hen ober. El lec'h ne dap ket skeud ar C'hrist eo danjerus beva. Skarzit ar beleg eus eur barrez ha tregont vloaz goude petra weloc'h? Gwad tud o redek evid oferennou an diaoul. Hag ema ar veleien laik o klask aoza d'eomp eur bed payan. A drugarez Doue e vezo start sevel ar relijion nevez keit ha ma chomo eun iliz en he sav hag eun osti, e dourn ar beleg. Pa vezo mouget, avat, an diveza beleg, dindan dismantrou an diveza iliz, o! neuze, kemerit an tec'h, kemerit an tec'h! Ne vezo ket brao beza mamm; ne vezo ket brao beza den.

VI. — HENNEZ A ZO MUNTRER!

Pa gomze diwarbenn Satan, Hor Zalver a lavare : « Hennez a zo muntrer adalek ar penn kenta! » Muntrer! Satan eo a zikouras laza Abel; hen eo a zalc'has kement war ar Yuzevien, ken e voe lazec'h Jezuz. Kement muntrer a zo da skol piou ez a? Da skol Lusifer. N'hellin biken rei d'ec'h da gompren pegement e plij d'ezan gwad tud.

E bro ar Mexik e oa aet beleien Lusifer da gigerien; eur gigeriez a zalc'hent, eur gigeriez kig-den. E barz ar gêr-veur e oa savet eun Templ da zoue ar brezel; setu ma oa red konsakri an iliz nevez; evit konsakri e oa red kaout gwad hag adarre gwad tud. N'eo ket prizonierien a vanke; digaset e voent hag ar Roue da gregi er gontel ha da skei an hini kenta; daou c'hant beleg a oa o sikour; pevar dervez ha peder nozvez e voe dalc'het da laza ha da laza ken e oant faes, ken e oa beuzet kêr er poullou gwad. Pevar ugent mil a oa bet diwadet. Hag an dra-man a zo re wir.

En hevelêp bro, e veze graet, bep bloaz, gouel kaer an hanv ha prientet bugaligou, amarret o izili, ren-kennadour anezo; eun taol-kountel, trouc'het o gou-

zoug; eun taol all, tennet o c'halon ha debret dirak ar bobl. Ar muia a vugaligou lazec'h, evelse, oa ar gwella evid an eost da veza kaer. — Ya! poent bras e oa da Gristof Colomb dizelei an Amerik hag hada enni greunenn ar groaz : An hadenn-ze a spont an diaoul en he raok.

C'houi a lavaro d'in. : pell a zo abaoe! Ha gwir, meur a gant vloaz. Met, araok ma oa plantet ar groaz, e oa kont evelse dre-holl ; hag e lec'h ma ne dap ket c'hoaz divrec'h ar C'hrist, ema kont evelse ; ha pa ne vezo ket disheoliet Bro-Frans gand ar groaz e vezo kont evelse, enni ivez.

Er bloavez 1860 e tremene eur teachour e Bro an Dahomey. Marvet e oa ar Roue koz setu ma oa red badezi ar Roue nevez ha konsakri e Rouantelez. Breman ar Gristenien a vez badezet gant dour sklaer; ar rote payan a felle d'ezan gwad, gwad tomm ha kals. En eur ober eun nozvez e voe dibennet 500 den ha roet o fennou d'ar bobl da c'hoari. Bez ar Roue koz a oa red e zimanti; kant prizonier a voe lazec'h; gand o gwad e voe distrempet pri ha traez ha 600 gwreg a voe douaret ez-veo kement ha kas kelou d'ar Roue maro. En eur ober eur zizun e voe lazec'h dek mil den.

En Dahomey, adarre, eur gouel kaer bep bloaz. Dre aman da zeiz eur vadiziant, e vez stlapet draje d'ar vugale; e broiou Satan eo gwell ganto pennoutud. Da zerr-noz ec'h en em zastumer war al leur-gêr; e kreiz ar blasenn ez eus savet eul leurenn goat panerou bras warni, tri pe bevar c'hant. Petra a zo ebarz? Tud veo, paket hag ereet o izili, nemed o fennou lezet war an dispak. Ha dansou, ha yudadennou ha cholori. Hini ha bini, e vez taolet ar panerou d'an traon, mesk ar bobl, ha bec'h ha diskrap, kas gouzout piou a dapo; eun taol kontell, setu distag ar penn hag an dud da ziframma ar pennou-maroc'h, an eil digand egile. Ha youc'h, ha ja-

hadao, ha dansou bepred, ken e sailhont er poullou rus; ken eo mastaret o dilhad gant pri rus. Pa darz an deiz, pep hini d'ar gêr, o kas gantan e lod eus ar gouel : eur penn-den trouc'het reiz ar c'hil ; e toull an nor é vez plantet, e beg eur goadenn.

Eur misioner eus an Dahomey a gonte an dra-man n'eus ket pell : « Aet e oan en eun ti ha me o welout, e pign-ouz an treustou eun dra iskiz, henvel a-walc'h ouz rollou-ognon :

— Petra eo an dra-ze?

— : Ma lod eus ar gouel.

— : Ho lod?

— : Ya 'vat! gwella tamm a zo en den, an empenn.

— : Empenn tud?

— : Ya! lavar an d'eoc'h, laket da zec'ha : floura tamm eo hennez; met, siouaz, mont a rà ar gouel da netra...; sonjit 'ta, Aotrou, n'eus bet roet, er bloz-man, nemet 36 panerad. A! gwechall, e oa kaer an traou.

Gwechall! Kredi a-walc'h a ran! Ha c'houi a garfe gwelout Lusifer o tont d'ho parrez gand e staliou? Broiou payan? Ifern an den... Meur a dachenn a vrezel a zo bet en hor bro baour; pa dremen breman al labourer gand e zoc'h, e vez dizac'het, da heul, relegou soudarded.

Dies eo o c'honta; moien a zo evelkent; an dud lazet gant Lusifer hag e relijion, arabad d'eoc'h kredi e teufec'h a-benn d'o c'honta; re stank eo o relegou. Ar c'horfou aet gantan a zo maro; an eneou, siouaz, an eneou aet gantan, ar re-ze ne varvont ket.

VII. — ALC'HOUEZ LUSIFER

Ya! an ene eo a blij d'ezan; an ene, poltred beo Hor Zalver Jezuz-Krist. Ha penaos e plant e skilfoul ebarz an ene? Penaos? Dre ar pec'hed. Hennez eo alc'houez Lusifer. En amzer an Tad Maner e veze

graet ar zabat en hor c'hoajou. Da hanter-noz, en em gave Satan; adoret e veze, ha gwerzet an ene d'ezan raktal hag ar marc'had a veze sinet gand ar gwad. O marc'had spontus! Ma breur paour mar man ar pec'hed marvel en ez kalon, eman sinatur Satan war da ene.

Eur wech e oa Jezuz o prezeg hag endro d'ezan kals a dud, souezet bras, ken kaer ha ma oa ar brezegenn. Biskoaz n'o devoa klevet kement all. A-droc'h taol, eur vouez skiltr hag eun hopadenn — : Jezuz Nazareth, petra fell d'it?

Perak en em zoursial ganeomp?

Ha deuet e vefes d'hor c'holl?

Ha Jezuz da lavarout — : Spered lous, serr da c'henou ha tec'h kuit er maez eus ar c'horf-ze! »

Ha setu krog an den da zifreta; eur youc'hadenn c'hoaz hag e kouezas d'an douar... Prestik e savas hag hen pare ha sioul. Pare mat e oa an den bet perc'hennet gand an diaoul hag ar bobl a lavare — : Na piou eo henman, da gaozeal ken t'er ouz ar sperejou lous, ma sentont outan.

Spered lous, tec'h kuit. Me a bed Hor Zalver Jezuz-Krist da lavarout an hevelep komz war hon ene...

Drouk eo Lusifer : hel lavaret em eus deoc'h. Krenv mat eo? Tamm ebet! Sin ar groaz, eun da-kenn dour benniget hag em a kuit. Beza ez eus unan, dreist-holl, hag e spont en he raok, ar Werc'hez dinamm, Mari, Mamm Doue. Hounnez eo he deus bet flastret e benn d'ezan. Pedomp hi eta: kemeromp korf beo he Mab, er gommunion hag e tec'ho Lusifer...

... Hon Tad hag a zo en Nenv, na bermetit ket e kouesfemp en dentasion, mes hon dilivrit diouz an hini drouk. Evelse bezet graet!

TADIG.

Keleier ar miz

Dervez Bleun-Brug Lambaol-Wimiliau

Poan a gemerer e Leon, Treger ha Kerne evit ma vezo an 9 a viz eost a zeu eun dervez a bedenn, a brezegerez a gan hag a c'hoarz evel ma ne vez a dro da welet ken kouls gwall allies.

Setu reolenn ar gouel :

1. — Da 9 eur 1/2 e vezo diambrouget an Aotrou 'n Arc'heskob de Guébriant, Rener ar gouel.

2. — Da 10 eur oferenn-bred kanet gand an Aotrou Bihan, person ar b'arrez : an A. de Guébriant a brezego en oferenn-ze.

3. — Goude an oferenn. Libera evit mignoned varo ar *Bleun-Brug*.

4. — Da greisteiz, lein er skol-gristen, 15 lur dre benn. Ar merc'hed koulz hag ar wazed a c'hello kemeret perz er pred-ze. Kas an hanoiou hag an arc'hant d'an A. Quere, kure Lambaol-Wimiliau abenn ar 5 a viz eost da ziwezata.

Epad ar pred e vezo graet prezegennou berr gand Rener ar Bleun-Brug, gand an dimezell M. de Kermenguy ha gand an A. Perennes.

5. — Da 3 eur c'hoariadeg ha kaniri gant paotred ha merc'hed Lambaol, Perros-Gwireg ha Scrignac.

Eur mor a gan hag a levenez e vezo Lambaol en dervez-se!

Goueliou breizek ar Faouet

Leoniz d'an 23 a viz Eost o devezo tro da welet eur gouel breizek eus ar re gaera e Plouescat.

Komzet hon eus anezan er miz tremen; en dervez-se ivez Kerneviz ha Gwenediz o devezo tro da welet eur gouel all ker kaer hag hini an Traez Glas savet, e kêrig ar Faouet, e Kerne-Uhel, gant Kevredigez Breiz ha Gorsedd Barzed Breiz.

D'ar yaou, d'ar gwener ha d'ar zadorn, a-raok ar gouel-ze e vezo tri dervez studi.

D'ar zul, da 11 eur, bannielou Breiz a zaludo bez soudarded ar Faouet, maro er brezel.

Da eun eur, c'hoariadeg vras ha kaniri gand Barzed ha Barzedeg Breiz-Izel.

D'al lun 24 a viz eost, da 9 eur e tal chapel gaer santéz 'Barba, e vezo graet, gant lid bras; *Gorsedd digor* Barzed an diou Vreiz.

Da gresteiz lein.

Da z'ep eur, c'hoariadeg vras gant skoazell kanerien Gwiscriff ha re Gevredigez Breiz.

XXI^{vet} Kendalc'h ar Bleun-Brug

Ar Bleun-Brug a reas warlene, e Gwengamp, gouel e bempet bloaz war n'ugent, krœuet m'eo bet er bloavez 1905; n'en deus graet c'hoaz, evelato, nemet ugent kendaic'h bras, dre ma rankas chom a-zav, evel eleiz a draou all, epad ar pemp bloaz brezel.

Goueliou ar bloaz-man, a vezo ker skedus ha marteze skedusoc'h eget goueliou Gwengamp warlene rak Bro-Wened eo bro ar varzoniez hag ar c'han.

Ar goueliou-ze a vezo graet e kêrig Henbont, a zo koulz lavaret en hanter 'n hent, etre Kemperle ha Santez Anna.

— D'ar gwener 4, ar Vretoned vat a gemero perz er goueliou-ze a 'z ay da welet enezenn ha bez ar barz brudet Yann Ber Calloc'h.

— D'ar zadorn 5, studiadeg war *ar brezoneg unvan* hag a c'hello beza lennet gand an holl Vretoned eus an eil penn d'egile da Vreiz : an A. Becot, eus a Bloungoven, an A. Ernault, eus a Zant Brieg hag an A. Goff, eus a Bontivy a gomzo er studiadeg-ze.

— D'ar zul 6, kenstrivadeg vras ar ganerien hag ar strolladou kanerien adalek 8 eur.

Da 10 eur 1/2 : oferenn-bred. Goude kreisteiz, c'hoariadeg vras.

An A. Trehiou, eskob Gwened, a reno an tri dervez breizek-ze a vodo e Henbont kement hini a gar e gwirionez e vrezoneg hag e vro.

Ha breman e lavaromp :

1° *d'ar vugale*. Bez e vezo kevererez (concours) e brezonek etre ar re grenfa, a-bep skol, d'ar zul vintin : gouennet e vezo ganto lenn, displega, skriva brezoneg ... hag an Aotrou 'n Eskob a roio, hen e-unan ar prizioù d'ezo.

2° *d'ar ganerien*. Red e vezo d'ar strolladou kas o hanoù d'an A. Coetmeur, e Kloerdi Gwened, abenn Gouel Maria Hanter Eost, da ziwezata.

3° *D'ar brezegerien*. Red e vezo d'ezo kas o frezegenn pe d'an A. Coetmeur, kelenner, e kloerdi bras Gwened, pe d'an A. Perrot, Rener Feiz ha Breiz, Scignac, abenn Gouel Maria Hanter Eost, da ziwezata.

4° *D'an displegerien*. Ar re-man ivez a ranko rei da anaout d'an A. Coetmeur, abenn Hanter-Eost, e fell d'ezo kemeret perz e kevererez an displegerez, (concours de déclamation).

5° *d'an holl*, d'ar re holl a gar Breiz, d'ar re a venn ma vezo klevet mouez ar yro o tiston, o tiston ker krenv hag ar mouezioù a-ziavaez-bro a glever o trouzal evit hon divrezonekaat... en em zalc'hit prest ha deuit.

Deuit, c'houi holl hag a gar Y. P. Kalloc'h. D'ar gwener 4 e vo graet eur bale, war vor, evit mont da C'hroe; pedet e vezo war bez ar barz hep par; komzet e vezo anezan; c'hoariet ha kanet ar pezh en deus skrivet hen e-unan. Eur bale graet gant kanerien Pleuigner, etre riblou sonezus ar Blanvez, gand eun diskenn e porz-pesked an Oriant, petra c'heller kaout hag a vefe braoc'h eged an dra-ze?

M'ho peus c'hoant e vefe dalc'het plas d'eoc'h, skrivit d'an A. Chevassu, Henbont, a zo karget eus tro C'hroe.

Houman ne gousto, d'ar muia nemet 40 lur, gand ar banvez (banquet) e Groe.

Skrivit holl eta, dioc'htu, evit ma vezo aesoc'h renka pep tra ha dreist-holl ar vag hag ar pred.

Evit kaout loj e Henbont skrivit d'an A. Hingant, marc'hadour, ru nevez, Henbont.

Leor an A. Gwilhou

O deus rakprenet al leor e miz gouere:

An A. Yan ar Gall, Rener an « Union Agricole », Kemperle	1
An A. Mathurin ar Floc'h, Caouet, Plonevez-Portzay	1
An A. Parc, bourg, Plouider	1
An A. Loeiz Andouard, 201, rue de Fougères, Roazon	1
An A. R. Delaporte, studier, La Plaine, Kastellin..	1
An A. Herve Delaporte, La Plaine, Kastellin.....	1
An A. J. de Lesquen, Lieutenant de vaisseau, torpilleur Sénégalais, Brest	2
An A. Stanislas Jaffrès, Kure Guisseny	3
<hr/>	
	10

Leoriou rakprenet betek-hen: 751 + 10 = 761

E traon pajennad leor an A. Gwilhou, e *Feiz ha Breiz* ar miz tremen, hon devoa bet c'hoant da lavarout n'o devezo rak prenerien al leor-ze *dizouezenn* ebet; er voulerez, dre fazi, e lec'h *dizouezenn*, ez eus bet laket d'eomp *digouezenn* : hol lennerien o devezo divanket o-unan, sur a-walc'h, al linenn mouillet fall-ze.

Unan eus rakprenerien ar miz-man a skriv d'eomp : « Fizians am eus e c'hellot embann al leor, hep dalc' ; emañ an holl Vrezoned desket o c'hortoz atao leoriou da lenn; n'eus ket magadurez a-walc'h evit o spered. D'eoc'h ha d'an holl dud a labour da greski hol lennegezh vrezonek, e pep doare, frugarez ha bennoz Doue! »

Sevel lennerien muioc'h-mui d'ar brezoneg eo a zo ezomm: an dra-ze eo labour ar skoliou; n'eus ket eur breizad war gant, m'bar vat, o c'houzout lenn brezoneg; tra sebezus, Breiziz a gomz o yez ha ne ouezont ket he lenn!

Er bloaz-man ez eus 100 vloaz abaoe m'eo bet digoret goude an Dispac'h, kenta skol gristen Frans; pa vezo 100 vloaz goude ma vezor en em laket da zeski enn brezoneg d'ar vugale, e skoliou Breiz e vezo muioc'h a bres war ar skridou brezonek egeñ ne vez breman ha ne vezo ket red lakat bloaz, evel breman, evit kaout gwerz da vil leor brezonek!

Degas an hano hag an adres, heb an arc'hant, kenta ma vezo gelllet, d'an A. Perrot, Rener *Feiz ha Breiz*, Sérignac (Finistère).

Dal ma vezo degouezet 39 hano all e vezo kaset ar skridou d'ar vourerezh ha tri miz goude e vezo al leon nevez etre daouarn al lennerien. Y. V. P.

DIVINADENNOU

1. — *Responchou divinatennou miz mae.*

I. — Tri baotr ha diou baotrez. II. — Eur yar.

III. — Dre ma ne vefe fin ebet d'an oferenn; ar c'hyrie eleison ne echufe ket.

IV. — A L A R
L A N O
A N A D
R O D A

V. — Ahell ar c'har.

2. — *Responchou divinatennou mezeven.*

I. — War e benn. II. — Brest, Dreux, Flers-Creil.

III. — Va mamm. IV. — Ar c'hloc'h. V. — Pod an dour.

3. — *Responchou divinatennou miz gouere.*

I. — Ar c'hilhog. II. — Ar mez ouz ar gwez dero hag ar pemoc'h dindan ar wezenn. III. — Ar roc'h hag ar brennig. IV. — Ar skubellenn valau.

V. — D O U S
L O U S
R O U S
T O U S

Er miz a zeu e roimp hanoioù ar c'hounideien.

Feiz ha Breiz

Lourd Breiz

Itron Varia Gerrien

(e-parrez ar Prevezaye e Kichen Lourd'eg e eskopti Sant Brieg)

Eleiz a dud a ya, bep bloaz, da bardona da Lourd ha n'eo ket souezus; ar Werc'hez Vari he deus en em ziskouezet eno d'eur plac'hig yaouank hanvet Bernadette Soubirous hag aboe ne ehan ket da ober eno burzudou, ken e kenver ar c'horf, ken e kenver an ene.

Breiziz o-unan, hag int eur pennad mat a hent diouz kêrig Lourd, ne c'hinont ket evit dilezel o bro epad eiz deiz da vont da arvesti ouz roudou o mamm garet eus an wenv: karout a reont pokat d'an douar he deus hi taolet warnan he zreid benniget.

Mat, kenvroiz ker, ma teuan da lavarout d'eoc'h: « Perak ez it keit-se da enori ar Werc'hez? » e leveroc'h d'in: « N'eo ket a-walc'h evidomp enori Mamm Jezuz en hor pardonioù brudet; c'hoant hon eus da welout an douar he deus pleustret gant he zreid! »

« Pleustret, gant he zreid? Evit gwelet douar pleustret gant treid ar Werc'hez n'eo ket red mont da venezioù ar Pyrene; it hepken da Gerrien, e

parrez ar Prenessaye, e kichenik Loudieg hag e kavoc'h eno, pell a-raok Lourd, burzud Lourd. An Aotrou de la Barde, eskob Sant-Brieg, en amzerze, hag an Aotrou Olier Audrain, person ar Prenessaye, koulz hag amezeien hag amzeridi ar plac'hig Janned Kourtel o deus kredet e oa en em ziskouezet ar Werc'hez eno.

Setu aman, e berr gomzou, istor burzud Kerrien.

I. — Ar burzud

E Lourd, ar Werc'hez Vari a zo en em ziskouezet d'eur plac'hig yaouank ; e Kerrien, eur baotrezig ivez, hanvet Jannedig Kourtel, he devoe, d'he daouzek vloaz, an eurvat de welout ar Werc'hez Vari.

Jannedig a oa merc'h da Yann Gourtel ha da Janned Marker; an Aotrou Doue he roas d'ezo goude kals a bedennoù ha meur a vloaz goude o eured.

Eur baotrez vras e oa Jannedig ha ne voe ket pell e c'hoarzas ouz he zad hag ouz he mamm; met, allas, kaer o devoa ar bloaveziou tremen, ger ebet ne c'helle entent, na lavarout: Jannedig a oa bouzar ha mut.

An tad hag ar vamm glac'haret holl a oa o klask gouzout pe seurt pec'hed o devoa graet p'oa en em gavet ganto eun hevelep gwall-zarvoud. Pec'hed ebet, evit gwir; ar Werc'hez eo a oa o vont da ziskouez d'ezo he galloud hag he madelez.

Mamm Jannedig a deuas a-benn, dre he ijin hag he c'harantez, da zeski d'ar baotrezig paour pedi an Aotrou Doue hag ar Werc'hez ma teuas houman da veza fur ha troet kenan war draou ar

religion. He amezeien a lavare « e oa eur plac'hig a skiant hag e veze atao ar bedenn en he c'halon.

D'ar yaou, 15 a viz east 1652, edo Jannedig o tiouall an denved, en eur park letoun, demdost da Gerrien, hag a hanvet neuze « park ar feunteunouigoù », dre ma oa ennan kals a vammennoudour. Breman ne vez graet anezan nemet « park an diskouezidigez ».

War bennou he daoulin, war al letoun, Jannedig a lavare he chapeled; goude gousperou edod hag en dervez-se e raet Gouel Itron Varia Hanter-Eost.

A greiz he chapeled Jannedig a glevas trouz tro he c'hein evel trouz unan bennak o tont warzu hi; trei a eure he fenn, dillo, ha kerkent e welas, en he c'hichen, dibrad eun tamm diouz an douar ha douget, war eur valkenn skedus, eur vaouez, kurunet he fenn a sklerder.

Jannedig he c'hemeras evid eun « Itron » ha kaer meurbet e oa gant he dilhad seiz gwenn kann.

— Bugulezig koant, eme an « Itron Wenn » d'ar baotrez nec'het, hep beza ankeniet, ro d'in unan eus da oanigoù gwenn !

O ! burzud ! Muzelloù ar plac'hig vat a zistagas kaer ar c'homzou-man evit respont da gomzou an « Itron », ar pezh a ziskoueze he devoa klevet mat gant he diskouarn pareet :

— An denved-ze n'int ket d'in; d'am zad int ha ma fell gantan o rei d'eoc'h, o roin d'eoc'h a galon vat.

An « Itron Wenn a reas eur mousc'hoarz a drugarez hag a lavaras :

— Kerz d'ar gêr, da gaout da dud, ha goulenn eun oan evidon diganto !

— Met piou neuze a ziouallo va denved epad ma vezin oc'h ober va zro, eme Jannedig.

— Me, va-unan, eme an Itron.

Stlapet ganti he baz, ar plac'hig a redas d'ar gêr.

E ti Yann Gourtel e oa bodet neuze eun toullad tud, deuet di, da ober eun ehan, goude ar gousperou ha setu Jannedig en ti mar gouie, ha da gonta ar pez he devoa gwelet ha klevet. Hag e vije bet kouezet ar gurun war ar geriadenn ne vije ket bet mantretoc'h an dud ; an tad hag ar vamm ne oant ket evit kredi, da genta er burzud ha koulskoude o merc'h a entente hag a gomze. Pa deujont enno o-unan e rankjont anzav gand ar re all an darvoud eurus hag ar vamm ne ehane ket da bokat d'he merc'h.

Holl dud ar c'harter o klevet an trouz a deuas en ti ha Jannedig goude beza displeget ar gefridi a oa bet fiziet enni gand ar Werc'hez he devoa mall da vont en dro, rak an « Itron » he devoa lavaret d'ezi dizrei hep dale.

Yann Gourtel a lavaras neuze :

— Ya ! kerz buan en dro da gaout da zenved ha lavar d'an « Itron Wenn » e roomp d'ezi n'eo ket eun danvad hepken, met ar vandennad zenved a-bez.

Kerkent ha m'oa en em gavet en dro, Jannedig a lavaras d'an Itron :

— Ar vandennad zenved a-bez a roomp d'eoc'h.

An Itron a vouse'hoarzas, a blegas he fenn hag a yeas kuit.

Evel e Lourd, diwezatoc'h, ar Werc'hez Vari a en em ziskouezas, meur a wech, evit disklaeria he hano hag evit rei da anaout he mennoziou.

En em ziskouez a eure adarre da Jannedig, d'ar 16, d'ar 17 d'an 18 a viz east.

— Me eo ar Werc'hez Vari ! emezi. Dibabet em eus al lec'h-man evit beza enoret ennan ; c'hoant em eus e vefe savet eur chapel em enor, e kreiz an takad-douar-man.

— Me ne d'oun nemed eur paourkaez mesaerez vihan, eme Jannedig ; ne ouezan netra ha n'em eus ket eur gwenneg ; n'oun ket gouest da rei skôr ebet d'eoc'h da zavel eur chapel.

— Kerz da gaout aotrou person ar Prennessaye, eme ar Werc'hez, ha lavar d'ezan e c'houlennan outan sevel eur chapel d'in e Kerrien.

Met kaer he devoa ar plac'hig lavarout d'he zud ha d'he d'he amezeien : « Ar Werc'hez Vari eo an hini a deurvez ganti en em ziskouez d'in. Goulenn a ra ma vo savet eun iliz d'ezi amañ. Lavaret he deus d'in mont da gaout an aotrou Person ; va c'hasit d'e gaout evit ma roin d'ezan da anaout ar pez oun bet karget da lavaret d'ezan ; den bet ne grede he c'has.

Hag hi da ziskleria he foan d'ar Werc'hez :

— « Va merc'h, eme ar Werc'hez, kea da gaout aotrou Person ar Prennessaye. Lavar d'ezan ha da dud Kerrien eus va ferz en em lakaat hep aon gand al labour : ar arc'hant ne vanko ket dezo : pardonerien a devoa a bep tu.

Kaset e voe erfin da gaout an aotrou Person. Heñ-mañ he digemeras gant dousder, met ne gre-das ket ober diouz he goulenn. Ha Jannedig d' em glemm ouz ar Werc'hez ha da lavaret d'ezi d'an 20 a viz east :

— Aotrou Person ar Prennessaye ha tud ar c'harter ne fell ket ganto kredi va c'homzou. Va sikou-rit, Itron vat, da rei d'ezo da gredi ».

Ar Werc'hez da ziskleria neuze.

« Evit rei mat da anaout e teu eus an neñv ar gefridi a roan d'it e roan da anaout e kavfot, dem-dost da feunteun Sant Gall, el lec'h hanvet ar

« poull », eur skeudenn hag a zo bet enoret gwechall er vro-mañ. El lec'h-ze eo e vezo savet eun iliz em enor. Kea ha laka toulla an douar el lec'h em eus lavaret ».

Toullet e voe an douar hag eur « skeudenn na gleb na lous » a voe dizoloet. Ar skeudenn vuzuduz-ze oa skeudenn ar Werc'hez Vari, ar mabig Jezuz ganti war he diwrec'h.

Hag an dud, o klevet hano eus ar burzud, a ziredas niverus da enori ar « skeudenn ». Met an aotrou Person, heñvel, e kement-se ouz hini Lourd e amzer Bernadette, ne gredas ket c'hoaz en em garga ouz an iliz goulennet gant ar Werc'hez.

Mari en em roas da welet adarre d'ar plac'hig. — P'eo gwir, emezi, ne fell ket gant an aotrou Person ober diouz va goulenn, kerz ha gwel an aotrou 'n eskob. Heñ a zelaono va goulenn hag a ray ar pezh zo ret ».

Goude beza klevet ar « vesaerez » hag an daou zen a oa deuet d'he digas betegheñ, goude beza kemeret kuzul e chaloned, an aotrou 'n eskob de la Barde a deuas war al lec'h. O klevet ar pezh a lavare an dud hag o lenn an traou en devoa an aotrou Person, e-unan, skrivet diwarbenn burzudou Kerrien an aotrou de la Barde a roas da anaout e teue, e gwirionez, eus a berz ar Werc'hez ar c'homzou en devoa klevet heñ e-unan eus genou Janned Kourtel, hag e lavaras :

— Mamm an aotrou Doue a fell ganti e vefe savet eun iliz er c'harter-mañ ha ni a fell d'comp ober he lavar outi gwella ma c'hellimp.

Hag abaoe an dud a deuas a vilierou, bep ploaz, dreist-holl d'ar 7, d'an 8 ha d'ar 14 eus a viz gwengolo da bardona da Gerrien evit pedi « Itron Varia pep skoazell » rak an hano-ze, endeeun, eo an hini a zo bet roet d'ezhi gant an aotrou de la Barde, warlerc'h tud an amzer-ze hag a la-

vare : « bez ez eo Gwerc'hez Kerrien skoazell kement hini a en em erbed outi. »

N'oar ket evit niveri ar grasou hag ar burzudou a bep seurt he deus « Itron Varia pep skoazell » rannet etre he fardonerien abaoe ar XVII^{vet} kantved.

II. — Breiz-Izeliz e Kerrien

N'eo ket hepken Breiz-Uheliz a deuas da Gerrien da bedi ar Werc'hez Vari. Breiz-Izeliz a oa boaz da vont da bardona da zant Lubin e Plemet ha da sant Mathulin e Monkontour. Kement a veze anezo ma veze pedet eur prezeger breizat da ober d'ezo eur « zarmon ». Hep mar ebet o tizrei eus Sant Lubin ar birc'hired ne vankent ket da vont da zabolina dirak « Itron Varia pep skoazell ». Rak-se eskoptiou Kerne ha Gwened a en em gave gant hini Sant Brieg evit kana meuleudiou ar Werc'hez Vari ha goulenn diganti he grasou. Ha Mari he deus pareet tud, bugale, merc'hed ha gwazed eus an tri eskopti-ze, hervez m'eo merket e skridoù Olier Audrain.

III. — Janned Kourtel

Petra deuas Janned Kourtel da veza goude ar gweledigeziou ? Setu m'oarvat ar goulenn a zo war ho muzelloù bremañ.

Goude beza bet bloaz hanter bennak e ti he zud e Kerrien Janned a yeas da dremen eun nebeut bloaveziou da vaner Ker-Hercoët e kichen bourg ar Prenessaye. Alies e kaver he hano war gajerou an iliz egiz maeronez. Gwellet mat gant an holl ha lakaet egiz eur « plac'h fur hag izel a galon » Janned a roas he ger d'an den mat Damian Saulnier. En dervez ma voent eureujet e iliz ar Zalver, d'ar 25 a viz c'houevreur 1675 e oa levez e kalonou an dud.

Dimezet, war ali he mamm hag hini an aotrou Person, Janned he devoe teir merc'h hag eur mab. Unan eus ar merc'hed a varvas abred hag ar paotr ne jomas ket pell kennebeut er bed-mañ. An diou vere'h all a zimezas da zaou zen mat hag a renk uhel.

Janned a varvas e Kerrien d'an eiz a viz here 1703, oajet a zaou vloaz ha tri-ugent. Beziet e voe e chapel Kerrien, evel m'eo bet beziet e iliz Santez Anna, an den mat Yvon Nikolazig an hini m'oa en em ziskouezet Mamm ar Werc'hez d'ezan.

IV. — Istor ar « Skeudenn »

Ar « skeudenn » kavet e « poull » Sant Gall oa, a greder an hini en doa Sant Gall e-unan, epad ar pennad m'eo bet o chom e Kerrien, lakaet en e lochenn hag e taouline dirazi da ober e beden-nou. En abeg-da-ze, eo bet galvet edoug ar wech chapel Kerrien chapel Itron Varia ha Sant Gall Kerrien.

Diwallet mat eo bet ar « skeudenn » gant be-leien ar chapel. D'an dispac'h vras eo bet kaset da Sant Brieg ha lod a lavar n'eo ket deuet en dro ac'hano.

N'eus fors penaos chapel Itron Varia Gerrien a zo da veza darempredet gant an holl Vreiziz, rak ar Werc'hez a zo bet diskennet war an douar ben-niget-se ha burzudou diniver a ra eno, e ken-meret hent Kerrien e kavoc'h en eur vro goant, eur chapel leun a draou kaer hag, en o c'hreiz, skeudenn ar Werc'hez Vari ho mamm hag a zo ouz ho kortoz evit skuilh warnoc'h he bennoz hag he grasou.

EUR PIRC'HIRIN.

Ostaleriou koz Breiz-Izel


Gwechall ne veze ket gwelet Breiziz o vont da vale tra ken nemed evid o flijadur, nag an diavrezidi o redek hon aochou hag hor c'hériou, evel m'o gweler breman. An hentchou a oa fall ; er goanv ne c'helled ket mont drezo hag, e peb amzer, en hanv kouls hag er goanv, e vezent danjerus, kement all a laeron a oa er vro.

Hon tud koz koulskoude a oa mat da vale hag adalek an deket beteg ar pemzekvet kantved e vezent gwelet, a viljerou, oc'h ober Tro-Vreiz hag o pedi hor seiz sant, en o seiz iliz veur ; an hent a heulient a oa anavezet mat ha merket gant kroaz-ziou, feunteunioù, chapelioù ha tiez savet aman hag a-hont gand ar venec'h, re an Templ ha re zant Yann Jerusalem, da rei lojeiz ha bevans d'ar bardonerien baour ha skuiz.

Ar pezh a nae ar gristenien, dre zevosion, ar vare'hadourien her grae dre youl gounit arc'hant ; gwelet e vezent o vont, gand o marc'hadourez, dre an hentchou bras, eus an eil tu d'egile d'ar vro ; mont a raent, niverus, d'ar foarioù bras, d'ar pardonioù brudet ha d'ar c'hériou a genwerz ; ar fizians da c'hellout distrei d'ar gêr, gand eur yalc'had vat a arc'hant a greske o nerz hag o hardisiegezh. An holl, gwazed ha merc'hed, a gerze war varc'h, en amzer-ze, p'o deveze penjadou mat a hent da ober ; en ostaleriou e vezed laeret buan a-walc'h hag en tiez gwella ma raed enno an diskenn e vezed debret gand an amprevaned lous. Eul leor eus an amzer goz a ro ali d'an dre-menidi da eolia o c'horf a-raok mont d'o gwelet.

ha da lakat eul louzaouenn c'houez vat etre al
linseleioù evit pellaat ar c'houenn.

Beza debret gant ar c'houenn a oa nebeud
a dra, e skoaz beza laeret ha lazeta rak an dra-
man, zoken, a zigoueze ivez alies.



Tremenidi oc'h ober o diskenn en eun
ostaleri.

E Gwerzion Breiz-Izel, Fanch an Uhel en deus
dastumet gwerz Erwanig Prijant, a zo hano enni

eus a zaouzek marc'hadour eus a Landreger a oa
bet chachet gant an aotrou Kergwezanger, d'e
vaner, maner ar Villaudren, e kichenik Pontivy,
hag en devoa lazeta, en noz warlerc'h, gant sikour
e wreg hag e vevelien evit gellout laerez o c'he-
zeg hag an nebeudig marc'hadourez a oa ganto.
Provost bras Roazon a rankas dont gant e zou-
darded da dapa peg en torfetour a varvas, e wreg
hag hen, war ar chafod, er bloaz 1570.

Yannig ar Bon-Garçon

Eur werz all, hini Yannig ar bon-Garçon, das-
tumet gant Fanch an Uhel, e Plouaret, er bloaz
1845, hag he deus kals henveledigez ouz Gwaz an
Aotrou Gwesken, a gaver er « Barzaz Breiz », a
gont d'eomp istor eur marc'hadour bihan eus a
Rouan, a vennas beza lazeta en eun ostaleri, e
Keraez d'ar foar kala-goanv hag a voe saveteet
gant unan eus mitizien an ti : digemeret mat e
voe gant an hostizez ha pesked dour doue a voe
roet d'ezan d'e goan ; eur wech pignet en e gambr,

Pa 'z ee 'r vatez Margodig 'vid ober ar gwele,

Yannig ar Bon-Garçon ganti a vadine :

Yannig ar Bon-Garçon ganti a vadine,

Ar vatez Margodig outan ' huanade :

— Matezig Margodig, na d'in-me lavaret
Na pa zellet ouzin, perak ' huanadet ?

— Aotrou ar marc'hadour, na d'in-me lavaret,
Ha c'houi c'h eus promesa gant plac'h yaouank
[ebet ?

— Matezig Margodig, me n'ho trahisin ket,
Hirio a zo teir zun, e oa de ma eured :

— Doue d'ho konsolo ha c'houi hag ho pried,
Rak oc'h aman er plas lec'h ma vesec'h lazeta.

Sellet, dan ho kwele, welfed eur c'hleze noaz
Baoe laza tri all n'eo ket bet gwalc'het c'hoaz.

Aze ' zo tri gorf maro o c'hortoz ar mare,
C'houi, Yannig 'r Bon-Garçon, 'vezo ar pevare.

— Pa ve ma inkane ha ma dibr alaouret
Ha m' valizenn arc'hant ha pa vent holl kollet

Ha me er ger a Rouan, gant Mari, ma fried
Matezig Margodig ne rafen kaz ebet.

Matezig Margodig, rekour d'in ma buhe,
Ar choaz eus ma breudeur, Margodig az peo te,

Ar choaz eus ma breudeur, Margodig az peo te.
Paotred an terrupla, marc'hadourien 'vel me.

Na pa zone an eur, an eur a hanter-noz,
Ar vatez Margodig, ne c'helle mui-repoz :

— Na, marc'hadour bihan, sav 'fa eus al lec'h-se,
Na mar e teus te c'hoant da rekour da vuhe.

Ha dre zor ar jardin ez int bet achapet
Breur kaer an hostizez en eus bet o c'hlevet.

A-raok an Dispac'h, pa voe kresket hospital
Keraëz e voe diskaret an ostaleri brudet fall m'oa
bet diskennet enni Yannig ar Bon-Garçon, hag e
voe kavet er c'hav eleiz a gorfou tud bet lazet en
ti-ze ha douaret eno didrous evit ma chomje ku-
zet an torfed.

Kollokou Gwilhou ar C'higer

Ma oa ostaleriou fall gwec'hall, e oa ivez ré vat,
a drugarez Doue ; e Kollokou Gwilhou 'r C'higer,
eus a Roskov, moulet evid ar wech-kenta, e Mon-
troulez, er bloaz 1626, diwar eul leor kals kosoc'h,
e kavomp an diviz-man etre eun ostiz eus Leon
pe Dreger hag eun toullad marc'hadourien a en-
em gleve level m'edo ar c'hiz, em sinzer-ze, da
ober hent holl a-unan ha da veza barrekoc'h a-ze
d'en em zifenn pa veze ezomm d'hen ober :

- Doue d'o miro ouz pep drouc, ma hostys (1).
- Deuet mat da vihet, Autrounez.
- Ha ny a halle logaff en mat en ty-man he noz?
- Guellot sur, Autrou. Pet so ahanoc'h hu ?
- Huec'h omp en eun compaignenez.



Ostaleri Sant-Yann ar Biz

- Logeys hon neus evit try quement all. Dis-
quennit pa plijo gueneoc'h.
- Ha huy oz eus merchaussy mat, fouen mat
ha querch mat ha laeter (litière) mat ; ha guin
mat oz eus huy ?

(1) Lezel a reomp brezoneg ar « C'hollokou » evel ma
oa skrivet breman ez eus 300 vloaz ; evelse hol lenne-
rien a welo ar wellaenn a zo deuet aboe ennan ha pa
ne vefe ken nemed en doare d'her skriva.

— An guellaff a quement so e kaer ; tavaff a grefet.

— Huy o eus netra da dibriff ?

— Ya sur Autrounez. Disquennit ep muy quen ; ne deffauto deoc'h netra.

— Hon traetit en mat rac scuyz oump ha hanter maro gat naoun a sê'het.

— Autrounez traetet mat vihet hag ho rounçet ivez.

Neuze ar varc'heien a ziskenn diwar o loened ha pep hini anezo a ro e c'hourc'hemennou da baotr ar marchosi evit lavaret d'ezan penaos entent ouz e varc'h ; arabad rei d'ezan da eva a-raok ma vezo ehanet da c'houezi ; ober eun torcha d'ezan hag hel lakaat da ober eur bale ; distronsa e lost, lakat kolo dindannan, gwelet ha mat eo ar senklennou hag her c'has antronoz, abred, abred, d'ar c'hovell, ma vank eun houarn bennak d'ezan. Ar mevel a lamm neuze boutou an tremeniad hag henman a ya er zal en eur zaludi ar re a zo digouezet en e raok. Goude beza azezet e tanver ar gwin — gwin eus ar gwella, eme an ostiz ouz e ziskanga, — e c'halver an ostizez hag e stager da zebri kig ejen ha kig moc'h sall, da genta, da zigeri ar galon, soubenn goudeze, kig rost, yer pe c'hlujjuri, frouez, gwerennadou mat a win a ever an eil da yec'hed egile. Unan, skuisoc'h eged ar re all, a c'houlenn mont d'e wele ; Jann, ar vatez, a bign neuze d'ar gampr, hag a ra fan enni ; a-raok ma tiskenn d'an traon, an tremeniad a c'houlenn outi :

— Pellec'h eman ar pot chambr ? Pellec'h eman an chambr cas ?

— Ma eulyit ha me deusqueuso deoc'h an hent. Pignit eün ouz crec'h hac en e gueffot en tu dehou.

Eur wech en e wele, an tremeniad, en eur c'hoarzin, a ra eur goulenn diweza :

— Ma mignounez, pocquit diff eur guez (eur wech) hac e couschiff guel a se.

War an hevelep ton goapaüs ar vatez a respont d'ezan :

— Cousquit, Cousquit ! n'en douc'h quet claff pa comsit a poche. Guel e gueneff mervel evit poche da un den en e quelle (wele) nac en lech all. Reposit en hanno Doue. Doue da roiff nos mat deoch ha repos mat.

Antronoz, savet kerkent hag an deiz, ar varc'hadourien a gemer viou poaz-kalet, poazet etouez ar glaou, kouignou tomm hag aman fresk hag a ya d'ar foar da brena o diankachou. Dizrei a reont gant briajou pakajou, e kaver enno beteg marc'hodennou d'ar vugale, hag e werennont ha goude e c'halvont mestr an ti :

— Countomp, ma hostys. Petra a dleomp ny ?

— Pevar guennec ha huec'h dyner a dleit evi-
doch hac ho rounçet.

— Dalet, ha huy so countant ?

— Ya ! sur, Aoutrou.

— Maz idy an matez (E pelec'h ema ar vatez) Quemerit, ma mignounez, chetu evit ho spillou.
Paotr, digaç ma march ama, ha te hen eus tretet mat.

— Ya sur, Aoutrou, me meus eff tretet en mat.

— Dall, chede guerz an guin evel ma em boa promettet d'it.

— : O trugarez, Aotrou.

Ha pa yeze renket ar sac'hadou hag ar c'hasedadou marc'hadourez war ar mirc'hier ha prest an dremenidi da vont en hent, an ostiz, diwar dreuz e di, a gimiade diouto :

— Na espernit an logeis pa tremenot, rac quer-
couls treset vihet ha servichet ! na eff ty a gue-
ment so en kaer.

• An Digemer laouen a gaved

Evelse eo e vezed digemeret er *Marc'h Gwenn*, e Montroulez, en tri *Filier* e Lesneven, e Landerne, er Faouet, er *Groaz C'hlas*, e Gwened, el *Leon Aour*, e Gwengamp. An ostaleriou en amzer-ze o devoa anoiou koant hag aes derc'hel koun anezho ; n'oa ket deuet c'hoaz ar c'hiz diskiant da rei d'an distera tavarn an hano lorc'hus a *Hôtel de France*, pe *de l'Europe* pe *de l'Univers*. Ostaleriou al *Leon Aour* pe ar *March Gwenn* a veze kavet e eleiz a gêriou ; e Montroulez e kaved ostaleri an *Turk Bras*, hini *Mab David* hag hini ar *Pelikan* ; e Landerne hini ar *Vrec'h Aour* hag hini *Taolenn Bacchus* ; e Kemper ostaleri an *Ti Bras*, hini an *Tok Rus* hag hini ar *Penn-Du* ; taolennou fentus da vont diouz an hanoiou-ze a veze livet a-us d'oriou an ostaleriou-ze da jacha sellou an dud warno.

Peadra da zebri ha da eva a gaved en ostaleriou-ze. E Breiz n'oa ket ker ar bevans en amzer-ze ; ar zaout, ar moc'h, ar yer, ar pesked a oa marc'had mat.

Er bloavez 1672, eur baleer-bro a lavare e oa red mont da Vreiz-Izel evit debri pesked mat. Perrot Claquedent, ar marlonk bras a zo bet skrivet e istor e « *Propos Rustiques* » gand ar skrivagner roazonat Noël du Fail, a youc'h, en eur jaokat war e gig :

— Na pebez tamm ejen mat ! Henez a dle beza eus a gosteziou Keraëz. Gwin. Bourdel ha gwin Spagn, a deve da Vreiz, dre vor, hag eyet e veze kalz, rak muia ma c'hounenze ar c'heriou gant ne-

tra oa gand ar gwir a veze paet d'ezo diwar an evachou.

Ostaleriou a veze savet, adelek ar XV^{vet} kantved n'eo ket hepken er c'heriou met ivez el le-c'hiau ma veze enno pardoniou brudet ha darn anezo a zo c'hoaz, en o sav, evel e Sant Yann-ar-Biz, e Folgoat hag er Merzer hag a gav c'hoaz, pa deu an hanv, eun tamm eus ar sked o devoa gwechall.


E penn kenta ar XVII^{vet} hantved eo e teuas ar c'hiz eus ar c'harroziou, peder rod dindanno ha pevar pe c'houec'h loen starnet outo ; ar c'hirri-ze, e c'hellit kredi, a ranke beza krenv, ker fall ha ma oa neuze an hentchou hag an dud a bigne enno da ober hent a veze torret o c'horf outo a-benn an noz ha mall ganto kaout eun dra bennek da zebri p'en em gavent en ostaleriou. Ker skuizus oa ober hent er c'harri-ze ma chomas, en he sav, ar c'hiz da vale war varc'h hag e penn kenta hon amzer e c'helled lenn c'hoaz war meur a ostaleri : *N... loge à pied et à cheval, remise et écurie*.

Ne gaved ket a gardi, evelato, e kement ostaleri a oa er vro ; evelse, e Rosporden, ar re a rae o diskenn e ostaleri an *Tri Marc'hadour* hag e hini an *Itron Varia* a ranke lezel o c'harroziou war an hent.

Barnedigez an diavaezidi

An diavaezidi a zo bet o troia e Breiz, n'en eur glemmont ket kals eus an ostaleriou ; kaout a raent enno pesked fresk, klujiri, frouez ha kouignou graet er vro ; e Kemperle e kaved gwin dreist ; eun dra hepken a gavet da rebech d'an ostaleriou : ne vezent ket dale'het kempenn a-walc'h ; ar rebech-se, avat, a c'helled da ober da

ostaleriou Frans, kouls ha da re Vreiz ; ne vezed ket kals e poan da loja e Benac'h (Belle-Isle-en-Terre) rak tud ar vourc'h-se, a lavared, o devoa gal hag aoun a veze da dapa ar c'hlenved-se diouto. En hanv, kentoc'h eget kousket en tiez, e kaved sasunoc'h kousket er maez, etouez ar foenn pe-e touez ar c'holo ; eur zaoz, Young e hano, a gredas evelato kousket en eur gwele, hag a voe ditunet, e kreiz an noz, gand an hostiz, a



Ostaleri an Tri Filier, gwechall e Lesneven

deue da c'houlenn dioutan ha gwerza a raje e verc'h d'eun dijentil en devoe e welet er c'hraou hag e gavet diouz e zoare ; digemeret fall e voe hag ec'h en em dennas mezok.
Hentchou a oa hag a oa eun danjer mont drezo;

al Leo-Draez, e Lok-Mikael hag e Sant Vic, trap-nienn Coat-Toull-Zac'h, etre Montroulez ha Landivisiau, diskenn Koat-ar-Roc'h, etre Lanveur ha Montroulez, gwaremmeier Coat-ar-Scour, e Plourin, a oa toullou hag a oa brudet fall, kement a laeronsiou hag a vuntrevez a oa bet digouezet enno. E ostaleri Mari Naga, e Plomodiern, e hini ar Riz, e Ploare e hini ar Pontou, e c'hoar-veze torfejou ker gwas ha re ostaleri ar Rohan, e Keraez hon eus komzet anezo uheloc'h.

Pa voe diskaret ostaleri goz ar Riz e voe kavet, er c'hav, eskern daou zen, tammou dilhad mar-toloded ar C'houarnamant warno ; an daou-zenze, sur a-walc'h, a oa bet lazet, en ti-ze, ha bet kuzet o c'horfou eno goudeze.

—Hon tud koz, daoust pegen danjerus e oa an hentchou e meur a lec'h, ha pegen diskempenn e oa an ostaleriou, e meur a vourc'h, ne gremet ket evit mont eus ar gêr : ne oant nag aonik na figus, ha daoust pegen dillo ez aer breman eus an eil bro deben, marteze ne fazian ket kals o lavarout ech anaveze gwelloc'h o Breiz Bretoned ar XV^{vet} kantved eget re an XX^{vet}.

G. P.



SONENN VA C'HALON

War eun ton anavezet e Bro-Wened ha kempennet gant an A. GRANIER, evit diou vouez.

Ar strolladou kanerien a gano gant diou vouez e BLEUN-BRUG Henbont d'ar 6 a viz Gwengolo a zeu o devezo ar zonenn-ze da gana.

So-net a - tao, Brei - ziz,
So-net a - tao, Brei - ziz,
So - net so - nen-nou Breiz - I -
So - net so - nen-nou Breiz - I -
zel, zel, Ar so-nen-
zel, zel, Ar so-nen-
nou he deus la - ret
nou he deus la - ret

ma mamm war - d-a cha - vell,
ma mamm war ma cha - vell,
Ar so - n - nou he deus la-
Ar so-nen - nou he deus la-
rei ma mamm war ma cha - vell.
ret ma mamm war ma cha - vell.

1

Sonet atao, Breiziz, sonet sonennoù Breiz-Izel
Ar sonennoù he deus laret ma mamm war ma c'havell.

2

Rak int o deus, e va c'halon, da vintin va buhe,
Hadet ar garantez wirion, ouz ma Bro hag ouz Doue.

J. L. M.





Kantvet bloaz ar skoliou libr

(*Hanterenn genta ar brezegenn-man a gavoc'h a « Feiz ha Breiz » miz Eost diweza p. 281-287.*)

V. — Prosez ar genta skol libr

Prest goude, an tri-man a voe galvet dirag ar justis, hag eno e lavarjont hep aon ebet, o doa digoret eur skol evit senti ouz o c'houstians a gristen hag a zitoyan. Prosez a voe hag an afer a deuas d'an 3 a viz mezeven dirag ar « c'horrectionnelle ». Mes pa voe en em gavet an holl, Lacordaire a zisklerias dirag al lezvarn, gand eur vouez krenv, e c'houlenne beza barnet gant 12 tad a familh ha nann gant barnerien. Ar re-mñ droug bras enno, ne rajont netra hag a gasas an traou uheloc'h. D'an 28 a viz mezeven, 100 vloaz deiz evit deiz hirio, e voe merket dervez-bras ar prosez dirag ar « C'hour d'appel ». Mes araok e teuas chenchamant; tad Charlez Montalembert a oa « Pair de France » eur garg dem-henvel ouz hini ar zenatourien, nemet e chome stag ouz ar menez familh. Mervel a reas d'an 20 a viz mezeven. Adalek an deiz-se, Charlez, e vab, eo a gemere e blas

dre wir hag a deue da veza « Pair de France » d'e 21 vloaz. An deputeed pe ar zenatourien evel a ouezoc'h, ne c'hellont ket beza barnet gand al lezvarn ordinal mes gand ar Gambr pe ar Senat. Er memez tra oa, kant vloaz zo, Montalembert a refusas mont d'ar varnedigez d'an 28 a viz mezeven, hag a c'houlennas beza barnet gant ar Gambr « Chambre des pairs » asamblez gand e zaou gompagnoun. Diwar neuze ar prosez-se, ken dister da genta, a oa o vont da ober trouz, dre ar Frans a-bez. Ar C'houarnamant a yeas e kounnar rus hag a glaskas mouga an afer, mes en desped d'ezan, ar Gambr a verkas an 19 a viz gwengolo evit kompeza an traou. An nep en defe klasket Montalembert, da vintin ar prosez, en defe e gavet en Iliz o pedi kalonek war e zaoulin. Pa zigoras an abadenn, eur bern tud, a oa eno evit gwellet e pe du e zaje. Pa c'houlennas ar Procureur digant Montalembert piou oa ha petra rae, e respontas: « Charles de Montalembert, maître d'école et Pair de France. » Ar ger « mestr-skol » a lakeas meur a hini da c'hrosmolat. Goude prezegennou an alvokaded, Montalembert a zavas en e zav evid en em zifenn eus ar pezh a damallet d'ezan, droug livet oa hag e vouez a grene, n'oa c'hoaz nemet 21 bloaz ha dirazan edo holl bennou bras ar vro.

E brezegenn, unan eus ar re gaëra a zo bet displeget biskoaz, a voe selaouet penn-da-benn gand ar brasa evez. Dirag an aotrouien-ze gwenn o bleo ar c'halz anezo, n'oa c'hoaz nemet eur c'hrouadur mes e vouez a oa ken c'houek, e gomzou ken nerzus, ma ne voe ket pell evit gounit an holl. Biskoaz eur c'hristen n'en doa kredet diskleria ken uhel e gredennou, en em zével gant kemend a hardizegez a-enep an dislealded graet d'ar Gatoliked. « Ken yaouank oun ha ken berr a-skiant, emezan, m'am eus evel aon o kaozeal dirazoc'h; koulskoude ar pezh a zifennan a zo eun dra ken sakr, an bano a gato-

lik a zougan a zo ker bras, ma roont nerz d'in da zével va mouez. Eun dra a zo c'hoaz, dre ar bed, emezan, eun dra hag a hanver ar Feiz, ha n'eo ket c'hoaz maro en holl galonou. Da zifenn ar Feiz-se, eo am eus me gwestlet va c'halon ha va bñhez... » Goude beza skoet war an dizursiou a gase ar vro da goll, e skoe war ar c'houarnamant he-unan « Petra emezan, eo ar c'houarnamant-se hag a lez an hudurnez d'en em ziskouez e pep lec'h, hag a deu da glask trabas ouz tri mestr-skol hag eun dournadig bugale. » Dre ma koueze gwirioneziou ker kalet a zioc'h o fennou, ar baotred koz a yoa eno, ar c'halz anezo hanter zifeiz, a c'hine hag a skrije evel pa vijent bet dindan eur barrad kazarc'h pe c'hreizilh. Pa azezas ar prezeger yaouank, oa aes gouzout en doa skoet mat; kalz a deuas da ginnig d'ezan o gourc'hemennou. Goude Montalembert an aotr. De Coux, a gomzas ive, mes ne voe ket selaouet. Lacordaire a yoa chomet a-ratoz-kaer da ziveza, anavezet oa dija evit beza eur prezeger bras hag e brezegenn, en dervez-se, a voe ken dispar, hag hini e vignon yaouank. « Keit ha ma chomo en hor gwazied eur veradenn wad, keit ha ma chomo en hor c'halon an distera eulfenn a-vuhez, a lavare en eur echui, ec'h implijomp ar gwad-se, e lakeomp an eulfen vuhez-se, evit difenn liberte ar relijion hag ar skoliou. Daoust petra vezo ho parnedigez, emezan, ni a yelo eus ar Gambr-man evit beva; or relijion hag al liberte ne c'hellont ket mervel. » Pell e padas an traou ha ne voe ket a amzer da zougen ar varnedigez en dervez-se. Antronoz, d'an 20-a viz gwengolo, meur a hini eus an aotrouien bet gounezet, gant nerz ha gwis'egez Montalembert ha Lacordaire, a votas en o enep hag ar re-man a voe koundaonet pep hini, d'eun amand a gant lur, evit beza digoret eur skol kountrol da lezennou ar vro. Dirag ar Gambr eta an tri den kalonek a oa kolleterien, mes dirag an dud er

vro, o doa gounezet eur viktor ha Lacordaire a c'helle skriva, neubeut goude « al liberte pa ne vez ket loet, a vez kemeret. »

Koulskoude evit lakaat o viktor da zougen he holl frouez, e voe ret gortoz c'hoaz pell, ha stourm kalet epad meur a vloaz.

VI. — Gwirioù ar gatoliked anavezet

D'an 28 a viz mezeven 1833, ar Gatoliked o devoa evelato, an eurvad da welet Ministr an Deskadurez, an aotrou Guizot, eur protestant koulskoude, o laoskaat lezenn ar skol. Diwar neuze ar Frered hag ar Seurezed a c'hellas digeri ar skoliou bihan hag o c'has endro, hervez o giz : eur bazenn genta oa war hent al liberte. Muioc'h a boan a voe gand ar skoliou bras. En desped da holl ijin ha da nerz-kalon Montalembert ha Lacordaire, sikouret gant daou zen brudet all, Louis Veuillot hag an Aotrou Dupanloup, e voe dare gortoz 19 vloaz evit kaout al liberte evid ar skolachou. D'ar 15 a viz meurzh 1850, e voe eur gwall grogad e Kambr an Deputeed; goude prezegennou entanet, ar gatoliked a chomas ganto ar viktor; ar skolachou. D'ar 15 a viz meurzh 1850, e voe eur tolaked a zavas ouspenn 250 skolach nevez ha pevar bloaz goude, ouspenn mil anezo a oa renet gant relijiuzed. Goude ar skoliou bihan, goude ar skolachou, e chome c'hoaz eur rumm skoliou all dindan dalc'h ar c'houarnamant : ar skoliou meur, e galleg « Universités ». Ken na o devoa bet ar viktor penn-dabenn, ar gatoliked ne ehanjont ket; koulskoude Montalembert ha Lacordaire a varvas a-raok ma voe gallet diframma al liberte en he fez, mervel a rajont an eil hag egile evel war an dachenn brezel. D'an 12 a viz gouere 1875, 5 bloaz goude ar brezel 70, e voe erfin votet er Gambr liberte d'ar skoliou-meur. Diwar neuze ar Gatoliked a oa mestr da gaout o skoliou, evel ma karjent hag hervez o c'hredennou.

VII. — Holl a-unan, kendalc'homp d'en em zifenn

Kaer oa goumit eur viktor evel hounnez, mes evel skuizet gand ar stourmajou o doa ranket da herzel, katoliked Frans a chomas goudeze da voredi ha da gousket. Keit ha m'oant chomet unanet endro da dud kalonek evel Lacordaire ha Montalembert, ez ejont a-neubeudou war araok; gwas a pezh a voe ec'h en em lakejont d'en em zispenn, d'en em zrailha; an dra ze eo o c'hollas hag a roas an dro aes d'ar Franmasoned da zével o fenn. Jalous euz ar vad a deuje d'ar relijion, eus al lezennou-ze, al lampouned a fardas en o zoullou kuz, lezennou nevez da ziskar ha da vihannaat liberte ar skolioù. Adalek ar bloaz 1880 e kourmanso dont al lezennou laik, a gendalc'ho goudeze a vloaz da vloaz betek ar bloavezh 1904, da grignat ha da zivoueda al liberte bet paet ker gand ar gatoliked. Ne c'hellomp ket miret da vont en egar, pa zeilomp 50 vloaz en-adrenv, ha pa welomp petra o deus graet ar Franmasoned abaoe. Lavaret a c'heller omp bet breset, kignet, touzet evel denved dindan skilfou ar bleizi. Koulskoude mevellien Paul Gornok n'int ket deuet c'hoaz a-benn d'hor pearlounka; mes n'eo ket c'hoant a vank d'ezo. Daoust ma koustont ker d'eomp, skolioù libe hon deus c'hoaz, a drugare Doue, ar skolioù-ze a ra avi d'ezo. An holl skolioù d'eomp-ni, emezo, huan ar skol unik ma vezimp ar vistri war an holl vugale. Hola! kanfarted, a-walc'h, ni katoliked ne fell ket d'eomp, tamm ebet beza debret, beza flastret evel denved; houman n'eo ket eur c'hoari eo; a-walc'h; poent eo e savje ar gwad d'hor penn. E gwirionez, setu ar pezh a zo en em gavet, abaoe ar brezel, ar Gatoliked divorfilet, o deus gouezet sevel war o zreid, en em starda, evit krenna o ivinou d'ar Franmasoned. An Emgleo katolik, renet gand ar Jeneral Castelnau, hag emaoimp holl enni, aman, ni gwazed Plouzane, a zo hirio krenv he mouez.

Ar Franmasoned a rank chom a-zav hag a zant c'houenn en o lerou. Chomomp unanet ha stag mat ouz an Emgleo ze n'eus nemeti hag a c'hellfe derc'hel penn da enebourien hor feiz. Evit senti ouz an emgleo katolik eo ez omp en em vodet, aman hirio, evid enori ar skol libe kenta. Ar gouel-man o lakaat dirak hon daoulagad, ar pezh a zo tremenet 100 vloaz, a ro tro d'eomp da gemeret kalon ha da gaout fizians e c'hellomp m'hon eus bolontez start, miret ar rest liberte a chom ganeomp ha paka a-nevez ar pezh a zo bet laeret eus a dre hon daouarn.

Doue ha liberte, setu ive ar pezh a glaskomp; horger eo: « Ni gar Doue e penn hor skolioù; hepdan skolvat ne gaver ket. »

J.-M. PHILIPPOT.

*(Prezegenn displeget e Plouzane, d'an 28 a viz me-
vezek 1931, evit gouel kantvet bloaz ar skolioù
libe).*



Sant Idy

Breiz eo bro ar Zent; eno e vleuniont evel ar gwez avalou e Kerne hag e savont evel ar gwez dero e traon Menez Are; an Tad Albert Le Grand hag an Tad Lobineau, Garaby ha Tresvaux o deus skrivet buheziou eleiz a dud santel; dastumet o deus ar pezh o deus gallet kavout pe glevout diwar o fenn; daoust da-ze ez eus c'hoaz kals sent all hag a zo patroned chapelioù pe barrezioù ha ne ouezer nag eus a be vro ez int ginidik, nag e pe amzer e vevent; eun dra hepken a ouezer: o hano.

Piou a oar eun dra bennak diwarbenn sant Prijant, eur zant hag en deus meur a filhor e Leon?

Sant Draff en devoa eur chapelig e Plouenan; santez Aouchdebeda a oa enoret gwechall e Plouyann; sant Alouarn, patron Treveoc, en devoa eur chapel



hag eur maner e Guengat; sant Evenoc a oa e chapel, e Lok-Evenoc, war ar vri, e Plougerne, en traon da chapel santez Mac'harit Kergasken hag e kreiz etre chapel sant Nikolas Kelerven hag hini sant Yann Chapel-Krist ha ne jom netra ebet anezi nemed eur c'halur-oferenna miret e iliz Plougerne gand ar gerioù-man warnan da ziskouez keit ha ma pado piou eo e berc'hen: St Evenoc.

Eur bern sent evelse ha ne ouezer ket kals a dra diwar o fenn a zo e Breiz met aman, ne gomzin d'eoc'h nemed eus unan: eus sant Idy en deus eur chapel e parrez Plouigneo, e kichen Montroulez hag e klaskin rei d'eoc'h da anaout ar pezh am eus gallet gouzout warnan va-unan.

Sant Idy a zo eur zant dishenvel a-grenn diouz sant Divy koulz ha diouz sant Yvy; ar chapel a oa bet savet en e enor, e traonienn ar Jarlod, a oa koz bras hag o vont da goueza en he foull breman ez eus eun kanter kant vloaz bennak; adsavet e voe neuze ha bihanaet eus an tri fars.

Itron Varia ar Sklerder ha sant Idy oa patroned ar chapel-ze hag o skeudennou a virer enni atao hag an Itron Varia, breman evel gwechall a vez pedet eno evid ar boan zaoulagad. Hano sant Idy a zo bet roet d'an daou yaner a zo tost d'e chapel: unan anezo a zo hanvet Lan-Idy hag egile Trev-Idy a skriver breman Lanidy ha Trevidy.

Chapel san Idy a oa stag ouz maner Trevidy hag en unan eus ar prenecher e weler c'hoaz tri skoued koz, livet war ar gwer hag a oa gwechall er chapel goz; ar skouejou-ze eo skouejou ar Borgned, aotroned Trevidy ha re o c'herent ar Gintined, ar Bolavesned, ar Sioc'haned hag ar Gwyovarc'hed.

An daou yaner-ze a oa en o sav er bloaz 1400, ar pezh a ziskouez ez eo enoret, a-bell 'zo, dre eno, ar zant e fougont e hano.

Skeudenn sant Idy hen diskouez gand eur gabell-

eskob pe eur gabell-abad war e benn hag eur chap war e ziskoaz; penn uhela e vaz a zo torret; rei a ra e vennoz gand e zourn dehou ha bresa a ra dindan e dreid eun diaoul glas hag hudur a zalc'h, en e zourn, eur e'hoaz tamm botez ler.

Pell a oa edon o klask gouzout perak e oa eun hevelep tra etre krabanou an diaoul hag edon warnez fallgaloni pa gavis war va hent eur paotr koz a gontas d'in ar marvailh-man :



Chapel Sant Idy

Bez e oa gwechall goz eur manac'h santel o veva e koad Lanidy, en eur c'heo, dindan eur garreg hag a hanver atao Toull-an-Ermit; er maner tosta e oa o chom eun dichentil direol ha meur a wech an ermit en devoa klasket e c'hounit da Zoue, met an aotrou-man a oa ken troet war an dastum danvez ma werzas e ene d'an diaoul evit gellout kaout muioc'h a

beadra. Sina en devoa graet ar werzidigez gand e wad, war eun tamm parch. Satan en devoa astennet e vuhéz d'ezan eus a zek vloaz ha da fin an dek vloaz-ze e tlee dont d'e gerc'hat da vont gantan d'an ifern.

Pa welas an aotrou edo oc'h ober e dalarou, war an douar-man, e savas enkreiz gantan; sonj a deuas d'ezan eus an ermit en devoa klasket ken alies e lakat war an hent mat.

Mont a eure d'e gaout ha goude beza en em daolet d'an daoulin dirazan e koveseas e bec'hejou hag e c'houlennas e bardon. Goude beza e c'hourdrouzet evel m'oa dleet, Idy a zellas ouz ar paper en devoa sinet an aotrou hag a lavaras :


— Va mab, p'eo gwir ho peus touet ha sinet, gant hoc'h holl anaoudegez, ez oc'h perc'hennet breman gant Satan; aze n'eus ket da lavaret nann; arabad eo mont morse a-eneb ar ger ha goude m'ho plije roet ho ker da Dad an droug e-unan; pa deuto d'ho klask e vezo red d'eoc'h mont gantan.

— : Siouaz d'in, eun den kollet oun neuze 'ta, eme an Aotrou o lenva fors.

— : Gortozit; arabad eo d'eoc'h fallgaloni; eur wech ma vezoc'h het kemeret gand an diaoul e vezo red d'ezan ho tioural ervat, rak ma c'hellit tec'hout eus a dre e grabannou, gwas a-ze d'ezan.

Diaes e vezo d'eoc'h en em jacha, met, a-bouez poania, marteze, e teuoc'h a-benn eus ho taol. Selaouit mat; dal m'en devezo tapet krog an diaoul ennoc'h e klasko ho kas d'ar Youdig, e kreiz ar Yeun-Elle, el lec'h m'ema dor an ifern. An hent a heulloc'h a dremen e menez Glahera; digouezet eno goulennit outan aotre da bignat eur pennad war ar roc'h a zo e lein ar menez da ober eur zell diweza war ho leve ha war drañnienn ar Jarlod ha Tremorgant el lec'h m'ho peus redet ken alies. Rei a rei d'eoc'h ho koulenn gant ma c'hello derc'hel krog en unan eus ho treid. C'houi a gavo an tu d'e lakat da veza krog en

ho troad kleiz ha ne vezo ganeoc'h; en deiz-se nemet eur c'hoz boutou ler hanter vrein, las ebet warno, ma vezo aesoc'h a-ze d'eoc'h en em zistroba anezo pa vezo deuet an eur. Me a vezo kuzet e touez ar radenn, e traon ar roc'h, pa dremenoc'h. Pa gavo d'eoc'h e vezoc'h barrek d'en em zizober eus Paol Gorniok, chachit ho troad ganeoc'h, en eun taol krenn ha reidit d'an traon d'an daou lamm rus; me ho tigemero eno etre va divrec'h hag ho tifenno ouz an enebour.



Maner Lanidy e Plouigneo

An traou a dremenas evel m'en devoa lavaret ar zant; kounnaret o welet ne jome gantan nemed eur c'hoz tamm botez ler, Satan a redas warlerc'h e zen, ar malloziou brasa o koueza eus e c'henou; kaout a eure dirazan Idy, eur sparf en eun dourn hag eur zailhad dour benniget en e zourn all.

— : *Vade retro Satanas*, eme Idy, en eur strinka dour war gein Paolig; an hini a zo bet d'it n'eo ket d'it ken pa 'z peus e lezet da dec'hout; n'ez peus gwir ebet ken warnan; resteurel a rei d'it an tenzoriou ez peus bet roet d'ezan hag en hent-se e vezoc'h kitez ho taou ha breman kerz ac'han ha dillo ma n'ez peus ket a c'hoant da veza toket gand ar zailh-man.

O klevout eun hevelêp gourdrouz an diaoul a grogas aoun-ennan hag a dec'has ac'hano evel eul luc'hedenn.

An aotrou a oa bet diframmet evelse eus a dre skilfou an diaoul gant Idy a deuas da veza unan eus wella kristenien hag e vugale, war e lerc'h, a heulias e roudou; unan anezo Yann Calloët, eus a Lanidy, a voe unan eus kuzulierien vras an Dukez Anna hag a voe hanvet da eskob a Landreger, er bloaz 1502. A-raok an Dispac'h e weled e skoued a-us dor maner Lanidy a oa bet adsavet gantan hag a viratao unan eus an touribellou a oa bet graet d'ezan en amzer-ze hag a welit war ar skeudenn a lakomp e serr ar skrid-man.

G. P.



Eur baourez eurus

Ne d'oun med eur goueriadez paour diwar ar mêziou,
 Ha kourlskoude oun eurusoc'h eget tud ar c'hêriou ;
 Ne ruilhani ket evelto aour nag arc'hant aleiz !
 Met me 'm eus kalzik gwelloc'h ; va yez kaer ha va feiz.

Me 'm eus kan al laboused ha c'houez vat ar bleuniou ;
 Ezennig fresk ar mintin ha dour ar feunteuniou ;
 Me am eus trouz ar mor bras... p'her c'hlevan o kroual,
 Va c'hâlonig paour em c'hreiz 'n em laka da dridal.

Rak me 'm eus bet her c'haret hag atao her c'haran.
 Daoust n'hen c'hlevan alies ; rak gwall bellik eman ;
 Mes e goueled va c'hâlon, e zonz a zo chomet
 Evel sonj eur mignon koz, morse ankounac'haet.

Bemdez epad ar bloaz me a zao mintin mat ;
 O ! nag a draou-kaer neuze a wel va daoulagad ;
 Er goanv kardenn ab leur gand ar reo gwenn kann,
 O lintri, gand al loar, 'vel eun douzier arc'hant.

En hanv me 'wel glizennou e beg ar gwez uhel
 O lugerni 'vell perlez gand an heol o sevel ;
 Hag e kreiz ar perlez-ze al labousedigou
 A gas holl, n eur dridal, d'an nenv meuleudiour.

Eus an eil bodenn d'eben 'maint o paravia
 Piou a gano d'e Grouer e zonz ar vraoa ;
 Ouz o c'hlevet em eus c'hoant da ober eveldo
 Da gas ive va fedenn d'am Zad 'zo en nenvo.

Ra vlot meulet va Doue, da veza d'in miret
 Yez karet va zadou koz hag o feiz benniget ;
 O brezoneg ken kaer, o feiz ker birvidik
 Am laka, ha me paour, da veza pânvidik.

Mirit d'eomp, o va Doue, a-dreuz ar c'hantvejou,
 Ar feiz-se atao ker start ha kerreg an aochou ;
 Ra zavo ar Vretoned, sounn o fenniou kalet
 Ha keit ma pado ar béd ra gomzint brezoneg.

Mirit d'eomp, o va Doue, gant sioulder ar mêziou,
 Disheol an hentchou doun ha goudor ar c'hoajou ;
 Lakit en hol leorzou bep bloaz kalz a vleuniou
 Ha d'o c'hutuilh, en o c'haer, kalz a vugaligou.

Mirit d'hor girzier dero kan drant al-laboused,
 Ha d'hor foenneier glas, hirvoud o gwaziou-red ;
 Ra welimp c'hoaz, pell-amzer, ar bleuniou alaouret
 Oc'h heja gand an avel war ar c'hleuziou lannek.

Diouallit, o va Doue, diouallit hor c'hroazion,
 Hon touriou dantelezet a-zioc'h hon ilizou ;
 Diouallit hor berejou, beziou hon tadou koz
 Ma c'hrellimp, en o c'hichen, mont eun deiz da repoz.

Hon dalc'hit, o va Doue, ha gwirion ha leal,
 Grit na zelaouimp morse, kenteliou an dud fall ;
 Hag evel an herminig ma livirimp bepred ;
 Gwelloc'h eo ganeomp mervel eget beza saotret !

MARIANNA ABGRALL,

*Gwerz kurunet e Gouel ar Bleun-Brug, e Kastell-Keryann
 d'ar 4 a viz Gwengolo 1906.*

KELEIER AR MIZ

XXI^{vet} Kendalc'h ar Bleun-Brug

en enor hag e koun da J.-P. Kalloc'h

Dindan penn-renadur an Aotrou Trehiou, eskob Gwened ha penn-renadur a enor an Aotrou Thoret, person Henbont hag Herweg, konseilhour jeneral ha m^{er} Henbont.

— D'ar gwener 4 a viz Gwengolo da 7 eur 30. Baleadenn dre vor a Henbont da C'hroe.

— D'ar zadorn, studiadegoù.

— D'ar zulf : Deiz ar bobl.

Da 8 eur : Kevererez etre bagadou kanerien ha kanerezed Breiz a-bez.

Da 9 eur : Kevererez evit displega, prezeg ha skriva e brezoneg.

Da 10 eur 30 : oferenn-bred.

Da 2 eur 30, e koad maner Kergar, abardaeziad plijadur.

Holl ar re a gar ar brezoneg a zo o lec'h e Henbont, en deizioù-ze.

Iliz Larret nevezet

E miz Genver 1930 hon eus lavaret aman e pe stad trefuzus edo iliz Larret; ker fall 'e oa an doenn ma voe ret chom tri bloaz hep lavaret an oferenn enni; beleien Porspoder, a drugarez Doue, a zo deuet abaoe war he sikour ha d'an 12 a viz gouere e oa gouel bras e Larret ha daou chaloni en e benn : gouel an iliz nevezet.

An A. Dujardin, rener skolach Lesneven, a ganas an oferenn-bred hag an A. Calvez, person Lesneven a gomzas eus beleien parrez koz Larret ha dreist-holl eus he di-


weza person a jomas start en e lezenn epad amzer an Dispac'h.

Ra vezo ar pezh o deus graet Larrediz ha Porspoderiz eur skouer evid an holl barrezioù o deus chapelioù hag a venn komeza en o foull.

Dervez Bleun-Brug Lambaol

Eun dervez mat evid ar Feiz hag evit Breiz eo bet dervez Bleun-Brug Lambaol d'an 9 a viz Eost diweza.


An oferenn-bred a voe kanet gant an A. Treussier, person Kastell Paol hag ar brezegenn a voe graet gant an Aotrou 'n Eskob de Guébriant.



An A. 'n Eskob de Guebriant hag a bep tu d'ezan an A. Treussier hag an A. Pérennès ha darn eus ar veleien deuet d'ar gouel.

Goude ar gousperou, ar glao, hag a goueze kaer abaoe ar mintin, a baouezas hag e voe gallet c'hoari er maez e porz an A. Jaffrès.

Er miz a zeu e tizroimp c'hoaz war ar gouel-ze.



*Eul lodenn eus ar re a oa deuet
da zellet ouz ar c'hoariadeg*

Hor mignoned

An A. Coetmeur, kelenner e Kloerdi bras Gwened, a zo bet hanvet chaloni, da zeiz pardon Santez Anna : hor gwella gourc'hemennou d'ar chaloni nevez.

An A. hag an I. Yann Brider a gemenn d'eomp ginivelez o mabig Glaoda : yec'hed ha buhez hir d'ar breizad bihan.



Divinadennou

Divinadennou mae, mezeven ha gouere a ranke beza gwall ziaes pe ne oa ket a amzer a-walc'h da bleustri warno rak klasker ebet n'en deus kavet respontchou a-walc'h evit kaout eur priz.

An daou a zo bet da genta, Louis Caro ha Louis Floc'h eus a Blomeur o deus kavet peb a eiz respont.

M. Yv. Cabon, Guisseny, Mari Laurent, Guipavas, Janu Marc'hadour, Cast, Mari Rosec, Lesneven, Suzanna Simon, Gwitevede o deus kavet peb a zeiz respont.

Er miz a zen e figorimp eur genstrivadeg divinadennou nevez ha ne vezint ket ken diaes hag, ouspenn-ze, epad nozvezioù hir ar goanv e vezo muioc'h a amzer d'o c'hask.

War wellaat atao

Goude deizioù hir an hanv, setu o tont nozvezioù hir ar goanv.. goude amzer al labouriou-korf, setu amzer al labouriou-spered : etouez ar binvioù red evid al labour-spered, *Feiz ha Breiz* a c'hell beza unan eus ar re wella ha setu perak ec'h en em droan ouz va lennerien yaouank hag e c'houlennan outo pere eo ar gwellaennou a vije dleet da zegas e *Feiz ha Breiz* evit ma raio muioc'h a vad c'hoaz etouez ar Vretoned eget n'en deus graet betek-hen.

Tri leor *Oberou an A. Gwilhou* a roin d'an tri a zegaso an teir respont talvoudusa d'am goulenn : Degas ar respontchou a-raok ar 25 a viz Gwengolo da : M. le Directeur du *Feiz ha Breiz*, Scrignac (Finistère).

Leor an A. Gwilhou

O deus rakprenet al leor e miz gouere :

An A. Geraint Dyfnallt Owen, Kervarzin, Bro-Gemre	1
An A. Le Jeune, Keradraon, Plougerne	1
An A. Le Jeune, Kervily, Plougerne	1
An A. L. Jeune, Keradraon, Plougerne	1
An Dim. Jos. Branellec, Kervaon, Gleder	1
An A. Louis Floc'h, Prat, Lannilis	2
An A. G. Kerebel, kure, Plouvien	2
An A. Berthou, person Kerlouan	1
An A. Calvez, person Plouédern	1
An A. Gall, person Lokirég	1
An A. Herry, kure, Penmerit	1
An A. Colin, Keradien, Plabenneg	1
An A. Ch. Lemarié, N.-D. d'Orveau, Nyoiseau, par Segré	1
An A. Lec'hvien, aluzenner, Landreger	5
An A. J.-M. Le Berre, Rue Amiral Duchaffaut, 4, Nantes	1
An A. Mayet, ograouer, Kemper	1
An A. Mikael de Kervennoel, person Pleyben	1
An A. Bihanneis, kure Pleyben	1
An A. Gargadennec, person Brennillis	1
	—
	25

Levriou rakprenet betek-hen 761 + 25 = 786.

Degas an hano hag an adres, heb an arc'hant, kenta ma vezo gallet, d'an A. Perrot, *Renner Feiz ha Breiz*, Scrignac (Finistère).

Ma teu, — ha fizians vat hon eus e teuo, — 14 hano all, e miz Gwengolo, e vezo kaset ar skridou d'ar voulerez a-raok miz here hag e vezo al leor nevez etre daouarn hol lenneerien a-benn gouelioù Nedeleg.

Imp., 4, rue du Château

Le Gérant: F. Georgelin.

Feiz ha Breiz

Liziri ar Seiz breur

Goulennet hon eus, er miz tremen, digant hol lennou pere oa ar gwellaennoù o devoa c'hoant da welet degas e Feiz ha Breiz. Setu amañ ar seiz lizer kaera a zo digouezet ganeomp war gement-se:

KENTA LIZER

Perroz, d'an 9^a viz Gwengolo 1931.

Aotrou Perrot ker,

Goude beza gwelet en ho « *Feiz ha Breiz* » diveza, ho koulenn ouz an dud yaouank « *war wellaat atao* », e fell d'in rei d'eoc'h va zammig ali ivez.

War va meno, evel emañ, ne 'z eus ket gwelloc'h eget *Feiz ha Breiz* : kement-se, avat, ne dalv ket da lavaret ne 'z eus ket eun dra bennak da reisaat en ho kelaouenn; hag an dra bennak-se, setu-hen amañ : da zudia muioù an dud yaouank evel-doun-me, e kav d'in e vefe mat moula eur romant a-bennadou : eun eiz pajennad bennak bep miz : er stamm-ze, an neb o gemerfe plijadur o lenn unan pe daou bennad, da c'houzout penaos ec'h echu ar romant, e vefe ret d'ezan prena holl niverennoù *Feiz ha Breiz* ma vefe moulet enno.

Bep gwech ivez, ma krogfed gand eur romant nevez evelse, e c'hellfed lakaat moula skritelloù d'hen embann. E doare-se, marteze e kreskfe niver al lenneerien.

Hogen, ha war ar poent-se, dreist-holl, e fell d'in poueza : ar skridou a dlefe beza berroc'h eget n'int a-wechou : muioc'h a se a blas a vanfe da lakaat re all — : Da lakaat re all, emezoc'h-c'houi; neuze e vefe ret d'imp kaout muioc'h a skrivagnerien eget n'hon eus ?

— : Ya ! hag an dra-se eo a vefe ar wellaenn vrasa a oufed da zegas e *Feiz ha Breiz*.

Rak-se, Aotrou Perrot, mar gallan ho skoazella en eun doare pe zoare, eun tammig bihan hepken, e c'hellit lakaat va hano etouez re skrivagnerien nevez « *Feiz ha Breiz* ».

Yann Abdewi (marteze hoc'h eus gwelet diou pe deir gwech an hano-se e « *Breiz* ») a vefe laouen brasoc'h ober d'eoc'h plijadur.

Gellout a rafed ivez labaat en hevelep pajennad gand an divinadennou ar pezh a vez hanvet e galleg « des mots en carré » hag all.

Va digarezit, me ho ped, mar em eus lavaret d'eoc'h traou didalvoud ha kazus marteze. Met p'eo gwir hoc'h eus goulennet, kuita ! em eus respontet.

Digemerit, Aotrou Perrot ker, va gwella gourc'hemennou. D'eoc'h e karantez Doue ha Breiz.

Jacques CONNAN.

Villa Saint-Pierre Perros-Guirec.

EIL LIZER

Gwitalmeze d'ar 14 a viz Gwengolo 1931.

Aotrou Perrot,

N'am eus ket tizet c'hoaz ho frugarekaat eus ho kemennadurez diweza; bennoz d'eoc'h rak eur gomzig hepken eus mignon ar brezoneg a frealz ar galon.

Gwelout a ran e tosta ar mare ma tevio leor an A. Gwilhou eus ar wask; gand ar brasa laouenedigez hel lakin e mesk al leoriou all e brezoneg, e kichen

niverennou *Feiz ha Breiz* a zo eur pres graet ganen a-ratoz kaer evid o miret abenn ma c'hello va bugale o lenn ha gellout evelse startaat o c'harantez evit hor Bro garet.

War *Feiz ha Breiz* ar miz-man e welan e c'houlennit digand ar yaouankiz an doare da zegas gwellaenn en ho kazetenn abenn miziou ar goanv. Va lezit, ha me eur paotr aet da goza, da rei va mennoz.

Kendalc'hit da zisplega istor hor chapelioù hag hor manerioù koz; setu eno traou kaer hag a laka doun e spered ar hobl, brasderioù an amzer dremenet koulz hag ampartiz o zudou koz. Ouspenn ha ne c'hellfec'h ket komz muioc'hik eus Goueled-Leon ken ankouna-c'haet hag a gûz koulskoude, kaerderioù ha pinvidigeziou estlammus a c'hellfen da lavaret.

E penn kenta *Feiz ha Breiz* e rankfe beza eur pennskrid diwarbenn ar vroadelez, Gouzout a ran ne c'hellit ket hoc'h unan skriva ar gelaouenn a--hed-a-hed; emichans e kavfec'h tud d'ho sikour !

Eur gerig c'hoaz. Perak ne lennan mui war *Feiz ha Breiz* PAJENNAD BREURIEZ VEUR AR BREZONEG ? Daoust ha foc'het eo an Aotrou Vallée ?

Grit ivez eur genstrivadeg abenn ar bloaz a zeu — abenn Nedeleg ar bloaz-man eo re ziwezat, — gant prizioù kaer d'ar re a zavfe ar c'hanaouennou kaera, ton ha komzou, abenn noz ar Pellgent. Hor yez ker brudet evit he c'hantikou dispar a zo paour raz-iliz war ar poent-se. ?

Paotred yaouank Gwitalmeze eo a vefe da genta ouz o c'hana da Bellgent 1932.

Goulenn a ran diganeoc'h pedennou evidon ha va zud hag e venegan d'eoc'h koulz ha da lennerien *Feiz ha Breiz* ginivelez eur mab a zo bet hanvet Loïz; eur verc'h am eus abenn-vreman a reer Annaïg anezi hag a zo c'houezek miz.

War am eus lennet er « *C'hourrier* » eo aet dreist gouelioù ar *Bleun-Brug* en dro e Henbont.

Daoust ha ne ve ket gellet o ober ivez e Gwital-meze ?

Drezo e lakafec'h ar vuhez vrezonek da zont er vro. An dud n'int nemet morgousket; eun eulfennig a lakafe an tan bras da gregi er glaouiad.

D'eoc'h a wir galon.

P. AR C'HADOUR, *Ab-Maël*.

TREDE-LIZER

Paris, 17 a viz Gwengolo 1931.

Aotrou Perrot ker,

Ma 'z eo bet eur blijadur vras ha santel evit va c'halon a gatolik hag a vreizad kemeret perz e goueliou kaer Lambaol, eur miz a zo, n'oun ket bet abao euid en em gaout nag e goueliou Plouescat pe re ar Faouet nag e kendalc'h ar Bleun-Brug. Da vihana, tremenet em eus, epad ar miz diweza, eun nebeud derveziou e Breiz-Izel, kouls e Bro-Wened, e Goueled Leon ha Kerne hag, er miz-mañ, ma ne c'hellan ket ober kement all, e teuan eus Paris, aliesha ma c'hellan, da dremen, e Breiz-Izel, daou, tri dervez d'ar muia, bep gwech, pe gentoc'h eur zulvez hepken.

Evel ma ouzoc'h, morse ne vezan skuiz o vale dre vaeziou Breiz-Izel pe a-hed he aochou, o welet tour kaer eun iliz pignet en oabl pe eur chapelig zister oc'h en em guzat a-dre ar gwez, o klevout trouz ar mor o tarza war ar c'herreg pe hiboud eur wazig dour o redek en eun draonienn didrous. Laouen e vezan ivez o vont d'ar pardonioù da bedi ha da gana a greiz kalon ha da zigemerout en hent-se grasou an nenv : evelse bet oun n'eus ket pell e pardonioù I. V. Gelven hag I. V. Grenenan, e bro Pondi hag e pardon I. V. Penhors hag hini I. V. ar Sklerded, e bro ar Bigoudenned.

Evit gwir, er Sklerded, disul diweza, n'em eus bet

nemed ar gousperou : diouz ar mintin e klaskis kaout an oferenn-bred e Sant Kadou : fiziout a raen war ar pezh a oa bet sbrivet war « Feiz ha Breiz » miz east diweza (p. 305) « ar pardon... a zigonez da eil sul n'iz gwengolo ». Deut war va zroad, eus a Gemper, ne welis, pa oan en em gavet er chapel goant-se, den ebet... ha pa n'oan ket re abred, n'hellis ket mont betek iliz Gouesnac'h da gaout an oferenn. Doue r'am fardono!

Neuze eo am eus bet ar menoz da genderc'hel gant va hent ha da dreuzi an Odet, e Benodet, evit kaout ar gousperou er Sklerded. Merc'hed am eus gwelet wardro chapel sant Kadou hag em eus goulenet diganto pegoulz e veze graet pardon ar manac'h santel hag o deus lavaret d'in e veze graet *d'ar pevare sul a viz gwengolo*. Kaout a reoc'h tro, marteze, da rei da anaout kement-se da lennerien *Feiz ha Breiz*.

Ha lenn a c'hellfen ivez war unan eus niverennou kenta Feiz ha Breiz pe da zeiz e tigouez ar pardonioù-man en enor d'an Itron Varia : Ti-Mamm-Doue, e Kerfeunteun, Kilinenn, e Landrevarezec, ar Mene-Hom, e Ploudiern.

Lenn a rafen c'hoaz, gant plijadur, em c'helaouenn ger, skridoù diwarbenn chapelioù am eus gwelet hag a garan, evel hini sant Mikael Tremenac'h, e Plouguerne; I. V. Pontrouarc'h, e Tregourez; I. V. Gernilis, e Korre; I. V. Tronoen, e Sant Yann Trolimon ha dreist-holl e bro ar C'hap, sant They ar Raz e Klédén ha sant Laorans Lannourek e Goulien.

Plijet ganeoc'h, Aotrou Perrot ker, digemeret va gourc'hemennou doujus ha kalonek meurbet.

Baron de PICHON-LONGUEVILLE,

110, rue Legendre, Paris.

PEVARE LIZER

Aotrou Rener, Courbevoie, 19 à wengolo.

Setu echu va amzer zoudard ganen, aet war ugent dervez, met n'hon eus ket kavet re hir an holl an amzer. Kals Bretoned omp aman hag a gar o bro hag he yez n'eus fors pegeit bennak emamp diouti; seul-vui m'emaomp pell diouti e welomp ervat pegen talvoudus eo gouzout hor yez kaer.

Daoust ma klask a-wechou eur gall genaouok bennak ober goab diouzomp Bretoned, ne vez ket pell evit beza kaset da gousket. *Feiz ha Breiz* ar gelaouenn vrezonek karet kement gand ar Vretoned a deu d'ar c'hazarn, hep miz, ha kerkent ha ma vez erruet e vez pres d'hen lenn ouspenn gand unan.

Plijadur a vez ouz hen lenn ha dreist-holl ar soniou a vez warnan a vez plijadur ouz o deski.

War *Feiz ha Breiz* miz gwengolo e c'houlennec'h pesort gwellaenn a ve da zegas e *Feiz ha Breiz*.

War ar goulenn-ze setu aman va respont.

Ar pezh a vez e giz Istor Breiz, marvailhou, gwerziou, divinadennou, a zo eus ar gwella, mes, evel ma lavare va mignoned e tefe beza ennan bep miz soniou evit an dud yaouank, brao ha plijadur da gana er frikojou hag e pep seurt bodadegou.

Setu aze an ali am eus da rei deoc'h, Aotrou Rener, rak seul-vui ma plijo *Feiz ha Breiz* d'an dud yaouank ha seul startoc'h e chomo ar brezoneg en e zav.

Alia a ran ivez ar Vretoned yaouank a deu da zerc'hel hor plas da gomananti da *Feiz ha Breiz*; herroc'h e kavint o amzer; en em zidui a raint ervat.

Ho mignon ker a ra d'eoec'h e wella gourc'hemennou. Eur Breton oc'h ober e gonje e Paris.

Gabriel SEGALEN,

Courbevoie 5° R. I., C. H. R.

Seine

Hag a-henn teir zizun aman e : Creach ar Voudenn, Plabennec.

PEMPET LIZER

An Trehou, 22 a viz Gwengolo 1931.

Aotrou Rener,

Eul lenner aketus oun da *Feiz ha Breiz* ha kerkent ma 'm eus lennet ar goulenn a rit ouz ho lennerien yaouank diwarbenn emzav *Feiz ha Breiz* em eus graet va sonj da respont d'ar goulenn-ze.

Pere eo ar gwellaennou dleet da zegas en hor c'helaouenn evit ma raio muioc'h a vad c'hoaz en hon touez eget n'he deus graet betek hen?

Setu aman pere int hervez va sonj : *Feiz ha Breiz*, her gwelet a reomp a zo renet ha skrivet gant tud a galon hag a skiant, desket bras war doare skriva ar brezoneg ha dreist holl war istor o bro; karget e vez, bep miz, a draou talvoudus, ken evid an daoulagad, ar spered hag ar galon, kouls hag evid an ene; dont a ra ouspenn eus eur vouterezh anavezet mat evit beza diguz ar re wella.

War ar poenchou-ze eta hor c'helaouenn a zo diazezet eus an dibab. Graet eo evid ar Vretoned, ken evid ar re a zo er vro, hag ar re o deus he c'huitaet, evito holl, bihan ha bras; koz ha yaouank, paour ha pinvidik. Graet eo evito holl hag evit Bretoned Breiz-Izel, dreist pep tra. Met eun dalc'h bras a zo : eur c'halz eus ar Vretoned n'hen anavezont ket pe n'her greont n'her prenont ket na n'her lennont ket pe n'her greont, n'her skignont ket; brao a-wechou pa ne zikouront ket he diskar e lec'h he difenn.

Klevet e vez tud o lavaret : « *Feiz ha Breiz*, a ! ya ! » « kazetenn ar re vras, ar juloded; *le journal des réactionnaires*; eur gelaouenn savet evit meuli, enori » « ha rei pouez d'an dud a zavez ha diskar an dud reuzeudik; mont d'her prena ouspenn ma 'z eo » « stlepel hon arc'hant dreist hor penn a zo rei sikour » « da drec'hi d'eomp hor gouzoug ! »

Setu aze kaoziou diskiant hag a ziler etouez an dud hag a ra ar gwall labour a ra ar spern a zo hano anezo e parabolenn an hader : niouga a reont ar greun mat a had dre ar vro ar gristenien hag ar Vretoned wella.

Evit diarbenn seurt kaoziou divergont na diaoulek, pet eus lennerien *Feiz ha Breiz* a laka o foan hag a zav o mouez?

E c'heller lavaret, hini, Kement-se a dle chench. Penaos? Da genta *Feiz ha Breiz* a dle kaoñt e blas e pep parrez e Breiz, e lec'h ma tle boda en dro d'e vanniell — aman skoomp war an tach — e lennerien kaloneka en eur c'helc'h-studi e vezo desket ennan petra eo, e gwirionez, o c'hannad, petra eo ar *Feiz* ha petra eo *Breiz* ha dre-ze beza gouest d'hen difenn evit gellout her skigna gwelloc'h a-ze.

Pa zigouezo an traou evelse, — ha digouezout a raint ma poaniomp, — pa gavo *Feiz ha Breiz* dor zigor e pep ti, daoust hag an dra-ze ne roio ket a nerz-kalon d'ar re a boagn kement evit hen ober kaer ha talvoudus, dre ma vezint sur e servicho o foan d'eun dra bennak ha zoken da galz a draou.

Ha dre m'en devezo kals fred, daoust hag elec'h beza moulet bep miz ne c'hellfe ket beza moulet bep pemzek dez ha zoken bep sizun?

Hag end-eeun beza gwerzet kerkouls marc'had hag an holl gelaouennou all, priz evit priz, niverenn evit niverenn, en eur c'hellout ouspenn-ze boda en dro d'ezan muioch a skrivagnerien ha rei d'ezo eur gwelloc'h digoll eus o foan.

Pa zigouezo an deiz kaer-ze, ha digouezout a raio, abred pe ziwezat, rak nak hor *Feiz* nak hor *Breiz* ne c'hellont ket mervel, neuze pobl *Breiz* a vezo eurus rak tridal a raio he c'halon gand ar garantez he devezo evid an daou c'her kaer ha skedus-man : Doue ha va Bro.

René SALAUN,
Leuzeuregan-Trehou.

C'HOUEC'H VET LIZER

Montroulez Miz Gwengolo, ar 26^{et} 1931.

Aotrou ha kenvroad ker,

Perak ne vefe ket dastumet an holl divinadennoù bet embannet e niverennoù « *Feiz ha Breiz* » da veza moulet e stumm eul leor a vije gwerzet mat war ar maez, diabar?

Ma ne vezer ket pinvidik a-walc'h evit *moula*, al labour a c'heller da ober atao : Dastum ar goulennou hag ar respontou. (Ar respont atao dioustu goude ar goulenn.)

Goanag mat em eus e wellin eun deiz eur seurt leor o tont er maez.

Ganeoc'h, Aotrou, e karantez Breiz

J. DELALANDE,

56, Rue Ange de Guernisac,
Morlaix.

SEIZVET LIZER

M. BERTHOÛ Yves,

8, Impasse Beg-Avel,
Saint-Marc.

Aotrou ker,

Daou eus va mignoned o labourat e Paris, en eur gelaouenn evid ar vugale — « *Cœurs Vaillants* » eo hano ar gelaouenn-ze, — a gar kals ar brezoneg. Tresa mat a ouzont, dispar zoken, hag ouspenn-ze e ouzont sevel traou evid ar vugale.

Diaes eo sevel traou evid yaouankiz, da lavaret eo traou hag a blijo d'ezo. Alies em eus gwelset e « *Cœurs Vaillants* » pennadoù sayet ganto ha tresa-dennou ma oa eun dudi o gwelout.

Karout a rafent ober eun dra bennak evid ar vu-

gale ; « Eun druez eo gwelout, emezo, ne 'z eus ke-
laouenn ebet evit bugale Breiz. Ha gwir eo. *Gwalarn*
a voul levriou a gas d'ar vugale eur wech, diou vech
er bloaz : n'eo ket a-walc'h. Sonjet o deus e Feiz a
Breiz.

Lavaret o deus d'in skriva d'eoc'h evit gouleun ou-
zoc'h ma vefe lezet eun nebeud pajennoù en ho ke-
laouenn evid ar vugale : unan pe ziu. Ma ne vefe
ket a genlabourerien, i a en em gargfe da zével pen-
madou ha da ober tresadennoù.

Hervez ma sonjot breman, skrivit d'in. mar plij.
Evid ma livirin d'ezo ar pezh ho pezo respontet d'in.

En eur c'hortoz ho respont, digemerit, Aotrou ker.
va gwella gourc'hemennou.

Erwan BERTHOU.

Liziri ar seiz breur-ze, — me lavar ez int breudeur.
dre ma verv en o c'hreiz eun hevelep karantez evit
Breiz, — a ziskouez splann, d'an holl, ez eus c'hoaz,
en hon touez, tud yaouank hag a gar o bro hag a venn
rei ar pezh a wenneien o deus en o yalc'h, ar pezh a
spered o deus en o fenn, ar pezh a nerz o deus en o
c'halon, evit he adsevel, en he c'haer.

An aliou a roont d'eomp a zo aliou fur hag a la-
kimp raktal da dalvezout.

I. — a) Evelse, prest omp da embann ar romant
kenta a vezo degaset d'eomp gant ma vezo savet gant
eur skrivagner a vicher ha skeudennaouet a zoare.

b) Prest omp ivez da rei degemer laouen en hon
touez d'ar skrivagnerien nevez; ra deuint eta da-
vedomp an niverusa hag ar c'henta 'r gwella : eun
emzav ha n'eus ennan nemet tud koz a zo eun emzav
hag a zo war hent ar vered. Ar vro a ro an nebenta
skrivagnerien da Vreiz eo Bro-Gerne ha koulskoude
brezoneg Kerne a zo tenzoriou ennan hag a rafe vad

o fuilha e pevar c'horn Breiz-Izel. Skrivagnerien
Kerne, dihunit, pe ema ho pro o vont da vervel!

II. — a) Kenteliou war ar vroadelez a c'hell beza
talvoudus bras ha skoueriou a c'hellomp da rei da
harpa hor c'henteliou pa ziskouez ar poblu bihan
all evelomp, — *en hon amzer* — kement a nerz-
kalon dirak ar poblou bras a venn o lakaat da ober
eun astenn d'o gouenn hag eun harp d'o yez.

b) An Aotrou Vallée, goude beza labouret, evel
m'en deus graet, o kas da benn e *C'heriadur gallek*,
brezonek (1) a zo deuet e zaoulagad da veza ker fall
ma n'eo ket gouest ken da genderc'hel gand e bajen-
nad.

An A. Emil Ernault, Rener Breuriez Veur ar Bre-
zoneg eo a skrivo, en e lec'h, hag er miz a zeu e ka-
voc'h aman *Skol Vihan an Emglevadeg*.

c) Eun dra vat e vije sevel Kanaouennoù nevez
evid ar Pellgent gant ma vezint savet hervez lezenn
aour nevez ar werzaouriez vrezonek hag a emban-
nimp hep dale.

III. — A-nebeudou e raimp tro holl ilizou ha cha-
peliou kaera Breiz-Izel, en hor *Feiz ha Breiz*, met o
veza ma ne c'hellomp embann nemed istor eur cha-
pel, bep miz, e lakimp meur a vloaz da beñ ober hon
Tro-Vreiz.

Ar pezh a c'hellomp da ober raktal avat eo sevel
eun daolenn hag e vezo kavet warni deizioù holl bar-
doniou Breiz-Izel. Evid dont a-benn eus a gement-se
e pedomp hol lennerien da zegas d'eomp, kenta ma
c'hellint, deizioù pardonioù holl chapelioù hag ilizou

(1) Moullet a strobadoù miziek. Evid e rakprena skrivit diou
tu da: Imprimerie Commerciale de Bretagne, 7, rue des Francs-
Bourgeois, Rennes.

Breiz-Izel. Ma 'z eus estreget eur pardon e peb iliz pe e pep chapel, o fedomp d'her rei da anaout d'eomp.

Taolenn ar foariou a gaver en almanagou; ret eo ivez e kavfed enno taolenn ar pardonioù, en amzer-man, dreist-holl, ma 'z eo ken aes mont da bardona a-bell diouz ar gêr.

Adalek Gouelioù-Pask, er bloaz a zeu, ec'h embannimp e *Feiz ha Breiz* taolenn pardonioù ar miz, ma teuomp a-benn d'hen ober, abenn neuze, war he hed ha difazi. Arabad lakat an dud da vont da glask pardonioù pemzek dez re abred!

IV. — Ar Sonioù ne vankint ket ken e *Feiz ha Breiz*. Bep miz e kavoc'h unan nevez hag ouspenn-ze n'eo ket da lavaret ho pefe desket ha kanet an 50 a zo e trede leor *Sonioù Feiz ha Breiz* embannet warlene hag a c'helloc'h da brena evid 20 real, e Keriltud, 11, rue Algésiras, Brest.

V. — a) Evel a lavar René Salaün, *Feiz ha Breiz* n'eo ket skignet a-walc'h e Breiz-Izel ha doanuis eo sonjal e vefe skridou brezonek ken kaer o kaout ken nebeud all a lennerien, pa weler ar skridou gallek distrantela o kaout lennerien a vilierou e Breiz. Ma vez kavet teodou diskiant d'hen dispenn, — arabad eo ober eur van outo; ne jomer ket da deurel mein ouz kement ki a harz, — ne vez ket kavet kals a deodou fur d'hen harpa.

Ar re o deus ar garg da streoui ar skridou mat er parrezioù, a zigoro hent d'ar skridou gallek, kentoc'h eget d'ar re vrezonek; sebezus eo an dra-ze ha re wir, evelato; ar skridou savet gand o c'henvroiz, er yez o deus desket o-unan war barlenn o mamm, ne dalvezont netra d'ezo, e skoaz skridou Pariz: ar vugale ivez a gav gwelloc'h bara an ti all eget bara ar gêr, graet gant o mamm; ar vugale a zo bugale, met tud hag

o deus ugent vloaz hag ouspenn n'eo ket bugale eo e tlefent beza ken!

b) E kalz parrezioù ez eus kelc'hou-studi evid ar yaouankiz. Rener eur c'helc'h-studi a c'hellfe kaout e kement niverenn a zo e *Feiz ha Breiz* studiadennoù eus ar re gaera da lenn ha da zisplega ha pasket diouz doare e studierien.

Pet anezo her gwel?

c) A-raok sonjal moula *Feiz ha Breiz* bep pemzek dez pe bep sizun eo red d'ezan kaout pemp gwech muioc'h a lennerien eget n'en deus breman.

P'en devezo kavet d'eomp pep hini eus hol lennerien, pemp lenner nevez muioc'h — n'eo ket eur seurt pezh kaer, — ec'h en em gavo *Feiz ha Breiz* adarre, bep sadorn da noz, e kement ti kristen a zo e Breiz, evel breman ez eus hanter kant vloaz, met,

Abenn neuze hag ac'han di en do harzet meur a gi

rak ar Vretoned ne ouezont harpa nemed eur yez, an hini n'eo ket o hini: ar galleg.

VI. — Ya! eul leor divinadennoù evelse emañ o klask sevel eur pennad a zo.

Emgleo sant Iltud a oa stag a-zevri warlene da zigeri hent d'al leorioù brezonek da vont betek holl diez Breiz-Izel, met an hini a oa bet fiziet ennan paolioù an alar en deus sellet war e giz... diaes eo kaout tud hag a oar mont war raok *atao*, hep fallgaloni morse; kavet e vezo evelato, rak Doue ha Sent Breiz a raio eur sell a druez ouz hor broadelez.

Pa vezo adsavet adarre Emgleo Sant Iltud n'eo ket leorioù brezonek eo a vanko etouez ar Vretoned.

VII. — Kevrenn ar vugale a vezo digoret e *Feiz ha Breiz*, er miz a zeu. Ar skridou a vouldimp evito a vezo

e lizerennou bras, e brezoneg fraes ha taolennet kaer :
daoust da-ze, gwelet a reoc'h, da veur a rener ha da
veur a renerez-skol, *Feiz ha Breiz* a raio euz c'hoaz :
brezoneg a vezo ennan!

Ar gwellaennou-ze holl ha re all d'o heul a vezo de-
gaset e *Feiz ha Breiz* adalek miz du a zeu.

Ar wazed a gavo ennan *kuzulioù* an A. Chevillotte,
eun ijinour touet war al labour-douar; ar merc'hed,
kentelioù Tintin Anna war al labourioù o deus da ober-
wardro an ti; ar re glanv *aliou* eur medesin; ar studie-
rien, *studiadennou* ar c'helenner brudet en holl vroioù
keltiek: an A. Emil Ernault, Rener Breuriez Veur ar
Brezoneg; ar re yaouank pennadou savet gand o mi-
gnoned; ar vugale, eur gevrenn aozet diouz o sperejou;
ar re vras, *sklêrijenn* war gemennadurezior an ti-ker
ha war gemennadurezioù an Iliz.

Ha p'eo gwir, lennerien ger, e welit ar boan a ge-
meromp da lakaat hor c'hannad da vont war well ho
pedomp ivez da boania, eun nebeud, diouz ho tu, d'e-
skigna, en dro d'eoc'h: grit da vihana eun esa; d'an
hini a gemer 5 *niverenn* e vez roet *Feiz ha Breiz* evit
10 lur, er bloaz; ha me 'lavar me, n'eus ket eur barrez
e *Breiz-Izêl* ha ne c'hellfed ket kaout pemp lenner
Feiz ha Breiz enni, ma karfed k'ask.

Ma kavit lennerien nevez d'eomp, ha kaout a reoc'h,
sur a-walc'h, ma klaskit, goulennit *niverennou Feiz
ha Breiz* miz du evito, dioustu, en eur skriva d'an
A. Georgelin, *Administrateur du Feiz ha Breiz*, 4, *rue
du Château*, Brest, evit rei d'ezan da c'houzout, — a-
raok an 20 a viz here, da zivezata, — pet *niverenn* ho
peus c'hoant da gaout.

Gwechall e oa eun tamm gwañ bennak dindan ivi-
nou ar Vretoned n'eo ket anat e vefe ken breset ha

divreset e vez dalc'h mat gwirioù o yez ha ne ran-
nont ger.

Bretoned, va breudeur, savit harpit ha skignit *Feiz
ha Breiz* brasa difenner ho Prezoneg hag ho Feiz!

Y.-V. PERROT.





Chapel Sant Ener e Gwerleskin

Breman ez eus pemp bloaz war nugen**t** bennak, pa reden bro Montroulez evit gwelet kement tra goz ha kaer a c'helle beza dre eno, e voe roet ali d'in da vont da ober eur sell ouz chapel sant Ener, e parrez Gwerliskin. Mont a ris gand eur c'hamarad hag e kavis e andor eur menez goloet a radenn hag a valan, a-uz eun draonienn e troe enni rod vras milin goz Kerret, eur chapel savet gant mein benerez ha gouest da badout c'hoaz ne oar den pet kant vloaz. Koz e oa koulskoude ar chapel-ze p'eo gwir e oa bet savet eno, e lec'h eun all kosoc'h, er bloaz 1597. Tabernakl an aoter a oa kaer gand e golonennou goloet gant skourrou eur winienn, laboused kluchet etouez he deliou o tebri he abostol hag a-uz d'ezan taolenn an Dreinded.

A bep tu d'ar c'heur e kaved skeudenn sant Ener,

gwisket evel eun abad, hini Itron Varia an Aelez ha re an *Ecce Homo* ha sant Nigoudem hanvet sant Negontam gant tud Gwerliskin.

Aet e oamp er maez eus ar chapel hag edomp o sellet ouz eur pikol maen plat, kleuzet eun tamm en e greiz, pa deuas eun tieg hag a oa o chom en unan eus an tiegeziou tosta d'ar chapel d'hor c'haout: « Ar maen-ze a welit aze, emezan, eo gwele sant Ener; ar zant-ze a vevas aman pell mat hag aman ivez eo e varvas; ar chapel-man a zo bet savet war e vez; evid ober pinienn, e kouske war ar maen-ze, hep golvec'h na palenn; ha breman e vez laket ar vugale vihan da c'hourvez warnan evid o c'hrenvaat hag o lakat da vale abred. Pa n'heller ket o digas betek eno dre m'o c'haver re vlank, o mamm pe o moereb, a deu hag a zoub o rochedou er feunteun a lakas sant Ener da darza aze, e kichen, da derri e zec'hed. Lakat a-raer ar roched c'hleb-ze d'an hini bihan hag a-walc'h eo an dra-ze alies evid e barea.

« Eur pardon kaer a vez graet aman, eme hon den mat, en devoa plijadur, anat oa, o komz eus e zant, d'ar zul diweza a viz east.

Gwechall e veze graet zoken daou bardon: unan, d'ar zul kenta a vae hag egile d'an trede sul a viz east. Parrez Botsorhel hag hini Plougras a deue aman e prosesion ha ni, Gwerliskiniz, a yea ivez e prosesion da Votsorhel da genver pardon sant Brenden e chapel Brevara ha da Blougras, da bardon sant Gonery. Ar re o deus c'hoant da gaout eur c'hras vras bennak digant sant Ener a ya da bardona d'e chapel a-raok sav-heol hag hep ranna eur ger gand an dud a c'hellfe digouezout ganto war an hent.

Hag evel ma c'houlennentoutan ha ne anavez ket eun dra bennak diwar buhez sant Ener e lavaras d'in:

« Evit dont aman ez eo bet ret d'eoc'h treuzi gouremm Koat-Losk. N'ho peus ket gwelet e chom an irvi koz enni c'hoaz, e meur a lec'h. Ha koulskoude

n'eus ket eur penn kristen o kaout sonj da veza bet gwelet unan bennak o labourat an dachenn-ze; setu aman, hervez ma n'eus klevet, penaos ha pegoulz eo bet aret ar waremm-ze. Sant Ener a en em glevas gand an diaoul evit digraka ar waremm a oa neuze dindan goat; Satan a c'houezas war ar c'hoat hag e halan a lakeas an tan er skourrou hag er c'hefiou; en eun hanter dervez e oa graet ludu gand ar c'hoat a-bez ha setu perak ec'h hanver abaoe an dachenn-ze Koat-Losk.

Hervez an emgleo o devoa graet, pep hini anezo a dlee en em starna ouz an alar d'e dro: Sant Ener a en em starnas da genta hag egile a oa krog e paouiou an alar; ar zant, bep wech m'en eur gave e penn e ero, a denne ar souc'h eus a zindan ar bomm hag a rae eur groaz gantan war an douar: Satan, bep taol, a grene gand e spont ha skuiz o krena e lavaras da Ener: « Sell, « va lez da gregi en alar rak kas am eus ouz ar « c'hroaziou-ze a res dre ma 'z es; gwell eo ganen « ober loden galeta al labour hag her c'has da benn « d'am giz. »

Sant Ener a oa skuiz a-walc'h ha ne c'houlenne ket gwell; starna a eure an diaoul ouz an alar, en e lec'h, ha betek an noz ez ejont en dro gand o alar koat; Ener pa wele an diaoul o vennout fallgaloni a zistage eun taol skourjez gantan diwar e gein.

Pa voe kempennet an douar, an diaoul a glaskas gouzout petra en divije evid e boan: « Petra 'zo gwella ganez, a c'houlennas ar zant outan, pe ar pez a vezo war gorre an douar pe ar pez a vezo dindan? »

Goude beza graet mat e zonz, Paol Gornok a lavaras e oa gwell gantan kaout ar pez a vije en douar.

Sant Ener a hadas ed du hag an diaoul ne jomas gantan nemed ar soul. Kounnaret net e lavaras da Ener: « Er bloaz a zeu e vezo va zro d'in da gaout ar pez a vezo war gorre an douar! »

Ar zant, er bloavez warlerc'h, a hadas panez hag an diaoul n'en devoe netra n'holl d'e lod rak ar strew

o-unan a voe suilhet, a-raok o foent, gand eun noz-veziad reo gwenn. Kement-man hel lakeas da fallgaloni a-grenn: « Re fin out diouzin-me, emezan d'ar zant; ne fell ket d'in beza kolleter ouspenn daou vloaz dioc'htu. Kenavo! » Gwaremm Koat-Losk a zo chomet dindan letoun abaoe.

Dizroet oun bet da welet chapel sant Ener eun nebeud bloaveziou a-raok ar brezel. Nevez graet e oa an eost hag ar merour en devoa berniet e ed er chapel hag ar bern a oa ken uhel ma em boe poan o vont beteg an aoter. An hini a grede ober kement-se, anat oa, en devoa nebeud a zoujans evid an traoz santel; an tieg am oa kavet, dre eno, dek vloaz kentoc'h, hag a gare kement sant Ener a ranke beza maro ha gantan e oa tremenet ivez ar fizians o devoa hon tud koz e ebestel kenta Breiz-Izel. Kredi a raen e vije lezet ar chapel goz, en he sav, hag e teuje Gwerliskiniz da renka a-nevez eun dra ker kaer, savet ha karet gant o zud koz.

Fazia am oa graet: gwerzet eo bet, — ma n'eo ket eur vez, — ar chapel goz: he bered evid ober eul letounen d'ar zaout da heuri hag he mogeriou evit sevel tiez: Ya! ne lavaran gaou ebet va zud vat, *chapelion sant Ener, sant Thegonneg ha sant Tremeur, tri zant keltiek o zri, a zo bet gwerzet ha diskaret da zevet tiez nevez*. Diouz eur photo digaset gant person Gwerliskin d'ar « *Société Archéologique du Finistère* » eo anat ne jom mui en o sav eus chapel sant Ener nemed an daou dalbenn ha talbenn an tour ne zaleo ket da goueza. An holl draou all a zo aet a gleiz hag a zehou, tamm gant henman tamm gant hennont, gant tud hag a zo gwelloc'h ganto kout mein evit netra kentoc'h eged o faea. Met n'eo ket me eo a garfe beva e tiez savet o tiskar tiez ar zent. Evit tud a zo n'eus ket a lezennou fall; holl int mat peo gwir ez int lezennou hag

o heulia a c'heller, dreist-holl ma roont tro da zastum
danvez diwar goust an Iliz!

Br. toned, va breudeur, ouspenn ar vez, eur perc'hed
eo d'eomp lezel da goueza chapelioù ar zent koz, o deus
pleustret douar Breiz-Izel, o klask lakat sklerijenn
ar feiz da bara eus an eil penn d'egile d'ar vro: kriste-
nien, ker gwas eo d'eomp lezel ti-bidi unan eus hor-
zent koz da goueza ha ma 'z eo da vibien eun tad ka-
rantezus terri e vaen-bez da stanka poullou pri an
hent a gas d'o zi.

G. P.

AN ANZAV

♩ = 72. Moderato. Son vrezonek. J.-L. MAYET.

P *mf*

Me ho kar! Pe - rag e kre - nit? An an-zao

Crescendo

euz va cha - rau - tez A nij war va mu-zell, le-

f *P*

zit ho tourn em ni - ni, va mes - trez, Me ho

ralent

kar... Pe - rag e kre - nit?

II

Me ho kar!... Perag e ruziit
Mennoz va c'halon a zo glan.
Krenv ha tener... Va selaouit!
Bennoz Doue a zo varnan.
Me ho kar... Perag e ruziit.

III

Me ho kar!... ha n'am c'hredit ket!...
Met ne c'heller, heb ho karout,
Nag ho klevet, nag ho kwelet,
Nebeutoc'h c'hoaz hoc'h anaout.
Me ho kar!... ha n'am c'hredit ket!...

IV

War ho kalon, va c'halonig
A brederio ' pad ho puhez
En em harpit, ô va dousig,
Me ho ped, war va c'harantez
Hag em dourn lezet ho tournig.

Skridou an Tad Maner

An Tad Maner, deuet da skolaj Kemper evit ober skol, ne anaveze ket ar brezoneg. E eskopti Raozon, el lec'h m'oa ganet, ne veze komzet nemet galleg.

Lavaret hon eus penaos, e chapel Ti-Mamm-Doue, e Kerfeunteun, e c'houlennas digant ar Werc'hez ar c'hras da c'hellout deski ar brezoneg evit prezeg hag ober katekiz da dud Breiz. Selaouet e yoe e bedenn hag abenn eun nebeut derveziou oa gouest d'ober katekiz ha da gelenn e brezoneg. Ha da c'houde ne ehanas mui, betek fin e vuhez, da brezeg e brezoneg ha da skriva ive.

Hiniennou a glever o lavaret : « M'en deus gellet an Tad Maner komz ar brezoneg dre vuzud, ar burzud n'eo ket bras, rak e vrezoneg n'eo ket eus ar re binvidika. »

Fazia a reont ar re a gomz evelse. An Tad Maner a implije ar memes brezoneg gant ar breze-gerien eus e amzer, brezoneg Mikael an Nobletz hag ar re all. Ar breze-gerien, boazet da zeski ar skianchou sakr e latin, a wiske ar gerioù latin e brezoneg, hag an dud o entente. Hirio c'hoaz ar c'hatekiz a gomz eus kontrision, kovesion, satisfaksion, a zo gerioù latin digemeret e yez ar Vretoned.

An Tad Maner en deus studiet kalz ar brezoneg. Hen eo a zo bet da genta o lavaret e tleer skriva ar brezoneg evel ma vez distaget gant ar muzel-
lou. Skrivet en deus eur yezadur hag ennan e lennomp traou fur meurbet.

« Perak, emezan, skriva : ar goaff (hiver), an

Haff (été), da bezaff, gueneff, an neff, ma Tat ? Ha n'eo ket gwelloc'h skriva : ar goanv, an hanv, da veza, genen, an nenv, ma Zat ! »

E vrezoneg a oa sklaer, aes da gompren. Setu aman eur gentel tennet eus eul levr skrivet gantan. (Quentelioù christen eus ar collech sacr Iesu-Christ).

Derc'hel a reomp an doare skriva en doa. Ar v hag u a oa henvel neuze. « Piou en deus hor chrouet ha laquet er bed-man ? Doue. — Pe euit petra ? Euit e anaout, e caret hag e servicha. — A re a garo hag a servicho Doue hag a varvo e stat vat, pelec'h e zaint ? Er barados da velet Doue. — Pégueit e chomint-y eno ? Birvuiquen. — Nag a re a offanço Doue maruelamant hag a varvo e goal stat, pelec'h e zaint-y ? En ifern. — Petra raint-y eno ? Deui, blasphemi, disesperri. — Petra eo ar brassa, an necessera, an importanta affer hon eus da sourcia er bet-man ? Servicha Doue hag en em savetai. — Pet tra so requis da ober evit servicha Doue ? Pemp tra. — Pere int-y ? 1. Cridi e Doue. 2. Esperout e Doue. 3. Caret Doue o tec'het dioc'h ar pec'het. 4. Caret Doue o pratiqua ar vertuzioù, 5 ha receo ar sacramanchou requis eguis ma renquer.

Ma teufe hirio er gador da brezeg evelse, n'eus forz e pe iliz eus hon eskopti, an holl a gomprenfe.

Bez en deus gerioù hag a zo hirio dilezet siouaz ! Evel : digas da goun. Breman e laker : digas da sonj. Ar ger koun eo ar ger brezonek.

Ne lavaran ket e komze an Tad Maner difazi ar brezoneg. Pa lenner e skridou, e weler n'en doa ket komzet ar brezoneg ez vihan, n'oa ket bet savet en eur vro vrezonek. Skriva a ra : o kontempli ar glac'har e Vam ; an tri mignon d'ar Roue ; ar galonou an holl dud. Ar a zo a re. La-

varet e vez : glac'har e vam, tri vignon ar roue,
kalonou an holl dud.

Skrivet en deus kalz kantikou, ha dre ar c'han-
tikou e teske o relijion d'an dud hag e Iakaë en
o c'halon karantez Doue.

N'int ket troet ker brao ha re an aotrou Guilhou,
person Penmarc'h. Met n'int ket gwall fall. Aes
int da entent ha da zeski.

Setu aman eun tanva anezo.

Act a Adoration

M'oc'h ador, Jezus, ma Doue,
C'hui so ma Mestr ha ma Roue ;
Eus a vremen bete mervel.
Deoc'h e fell din beza fidel,
Bouchet (1) a ran a galon vat
D'an douar rusiet gant ho Coat ;
Bouchet a ran d'hoc'h oll darou (2),
D'ho kalir leun a dourmanchou ;
Hoguen, siouas, piou ezoun-me
Da dostaat ouzoc'h, ma Doue ;
Ne doun nemet poultr ha ludu
Ur pec'her guez vil a bep tu.

Eul lodennig eus ar *stabat mater dolorosa* troet
gant an e brezoneg.

Pa edo Jezus hiniguet
Evidomp oll crucifiet,
Esedoa e Vam melconiet
Ehars ar Groaz ma oue staguet,
Pa sellas hi ous e boaniou,
Ous e Oat scuillet ha Gouliou,
Ur c'hleze terrubl a doullas
He c'halon gant nec'hamant bras,
Piou a ouffe lavaret

(1) Pokat ; (2) daerou.

He c'heus bras hag estrench meurbet

O contempli he Map Jezus

Carguet a boaniou truezus...

D'ar fin pa rentin va ene

D'am Autrou Jezus Map Doue,

Grit d'in pignat d'ar Baradoues

Da veuli Doue da james.

Eleiz a gantikou en deus savet, ha moulet int
bet meur a wech : *Canticou spirituel* ; Skignet
dre Vreiz, kanet en traoenniou, er menezioù ha
war vor, o deus epad pell amzer laket da dre-
garni hor bro gaer ha troet an dud ouz Doue.

En unan eus e gantikou e tisplege buhez Sant
Kaourintin, patron Kerne.

Evit skigna e Breiz an deskadurez war ar reli-
jion, e skrivas meur a levr, henvel ouz levriou
katekiz, gant goulennoù ha responchoù, evel al
levriou *Quenteliou Christen, Templ consacret da
Baston Jesus-Christ*.

Skrivet en deus ive levriou gallek : *chemin
assuré de la pénitence, abrégé de la science du salut*,
a zo evel levriou katekiz.

E holl skridoù n'int ket bet moulet. Diwarbenn
ar misionou e skrive bep tro e latin eun dra ben-
nak, hag er skrid latin-ze e kaver kalz traou tal-
voudus meurbet evit anaout stad Breiz er zei-
tekvet kantved. Ar skrid latin n'eo ket bet mou-
let, na kennebeut buhez Mikael an Nobletz, e
latin ive.

Skrivet en doa buhez an Tad Bernard, an hini
a labouras gantan epad pell amzer. Ar skrid-ze
siouaz ! a zo kollet. Ma vije kavet, e vije ennan
traou a briz bras da lenn.

Buhez Katell Danielou, buhez Marie-Amice Pi-
card, buhez an aotrou a Dremaria n'int ket bet
moulet kennebeut. An aotrou a Dremaria a oa

bet misioner gant an Tad Maner, Katell Danielou ha Marie-Amice Picard a oa diou vaouez santel meurbet, met o doa bet da zougenñ er bed-man kroaziou pounner, da c'houzanv en o c'horf poaniou spontus; gouzanv a raent laouen, hag e kin-nigent o foaniou da Zoue e pinijenn d'o fec'hejou ha da bec'hejou an dud all. An Tad Maner a c'houlenne alies diganto pedi evitan hag evit ar misionou, hag en doa eur fizians vras en o feden-nou.

Re all, abaoe, o deus bet laket moula buhez an diou vaouez-ze.

Evel a weler, an Tad Maner n'en deus ket kollet e amzer. Evit skriva kement a draou hag ober misionou evel m'en deus graet eus an eil penn d'egile da Vreiz, n'en doa ket da ebana.

Ne ehane tamm. Atao edo o sonjal e mad an eneoù, en doare d'o c'helenn ha d'o maga eus gwirioneziou ar feiz. E brezegennou da genta, e gantikou, e skridou o deus skignet dre Vreiz karantez Doue, startaet enni ar feiz, digaset enni giziou fur ha santel. Ha morse ne c'hellimp e drugarekaat awalc'h eus ar pezh en deus graet evit hor bro.

Kerzomp dre an hent en deus diskouezet d'eomp. Henez eo an hent a gas d'ar Baradoz. Setu aman an hent-ze, merket en unan eus kenteliou *Collech sakr Jesus-Christ*.

Pa omp crouet gant Doue euit e garet hag euit e seruicha, a c'hui a gred ferm n'en deus affer er bet necesseroc'h nag importantoc'h euit an affer e c'hloar hag hon siluidigez ? — *Ya*.

A cueus oc'h eus u da veza faziet voar an hent a gondou map den d'ar baradoz o veza offancet Doue ? — *Cueus ameus*.

A c'hui en em offr da Zoue corf hag ene euit e c'hloar hag euit e seruich ? — *Gran*.

A c'hui bromet desqui gant graç Doue ar pemp poent a so necesser da seruicha Doue ? — *Gant ar memes graç*.

A c'hui bromet cridi e Doue, esperout e Doue, tec'het diouz ar pec'het, ober an oeuriou mat, pratiqua ar vertuziou ha receo ar sacramanchou requis, evel maz eo ordrenet gant Doue ? — *Gran*.

A c'hui oulen digant Doue ar c'hraç d'e garet ha d'e seruicha ? — *Ya sur*.

A pidi a rit-u ar Verc'hes, S. Joseph, S. Joacin, Santes Anna, S. Mikel, och Æll mat, S. N. Parron oc'h eskopti, S. N. ho parron, S. N. Parron ho Parès, d'ho sicour e quenver ar poent ar gloar Doue hag ho siluidigez ? — *Ya*.

E *Templ Jesus-Christ* e lavar d'eomp : « Ho pet Jesus en ho calon bepret, ha likuit evez ne zispartio nepret an Imaich ar Grueñfi eus oc'h ene. Sant Bonavantur a lavaras ar memes tra d'e Vreudeur :

Pe c'hui a asez, pe c'hui a sao,
Pe c'hui a brezec, pe c'hui a dao,
Ho pet en ho calon ato
Jezus, e Groas hag e Varo.

Y. U.



Plac'h nevez Trobodec


En abardaez-ze e oa eun toullad chaseourien bodet en dro d'eun tantad mat a dan, e sal vras ostaleri Kroaz-Per el lec'h m'o devoa koaniet; chom a raent eno da c'hortoz eur an tren a dlee o c'has d'ar ger hag evit kaout berroc'h o amzer e oant en em laket an eil goude egile da gonta marvailhou.

— : Me ivez avat, eme Laurans Bonnicc, eun tregeriad seder e dal ha sounn war e zivesker c'hoaz, evel eur paotr yaouank, daoust ma oa aet en e dri ugent vloaz, a gonto d'eoc'h eun istor ha ne vezo enni a c'haou nemet marteze eur ger pe zaou, e lec'h ho re c'houi n'int nemet sorc'hennou, met an istor ez an da gonta d'eoc'h a zo ker spontus m'ho pezo aoun ouz he c'hlevet.

— : Ya! M'oarvat, sur, a lavaras ar re all; n'eo ket bugale omp ken hag e c'heller ober aoun d'ezo, oc'h ober hano dirazo eus ar bleizi pe eus an viltansou. Dibuna a c'helles da gudenn; hiñi ebet ac'hanomp ne gousko nebentoc'h en noz a zeu.

— : Deomp d'ezi, neuze, eme Laurans o lakat tan war e gorn. An istor-man, evel m'a 'm eus hel lavaret d'eoc'h a zo gwir ha va unan em eus gwelet darn eus ar pez ez an da gonta d'eoc'h. C'houezek vloaz am oa neuze; va zud a oa o chom e Gurunhuel, e kichenik

Gwengamp, en eun tiegez bras, tri ugent dervez arat douar mat stag outan. Hon ti a oa nevez hag en e gichen edo kastell koz Trobodec, eur pikol ti bras karre gand eun tour ennan e pep korn. An ti-ze a oa dirapar, rak ar perc'henn, mab ar boure'hiz eus Pontreo en devoa e brenet digand ar C'houarnamant, en amzer an Dispac'h, ne lake kempenn ennan nemet diou pe deir gampr, d'ezan da c'hellont loja enno pa deue



Maner Trobodec

dre eno da dremen eur pennad da vare ar chase. Ar rest a oa perc'hennet gand ar razed, al logod hag al laboused-noz.

Er maner-ze eo e rae Fontanellan e ziskenn (1); Gwengampiz a deuas di da glask e dapa, met kaout a reas an tu d'en em jacha ac'hano dre eun-hent ben-nak dindan zouar hag eun nebeud deziou goudeze.

(1) Fontanellan, al laer bras a voe dispennet e gorf, war ar rod, e Paris, d'ar 27 a viz Gwengolo 1602.

edo e Koattrec, e parrez Ploubezr, e kichenik Lanhuon. Fontanellan ouuspenn ma oa eur gwall zen a oa ivez eur paotr fin.

Me em beze plijadur o redek eus an eil kampr d'eben hag o pignat e beg an touribellou e weled diwarno Menez-Bre ha Menez Are. Diou zor hepken a veze dalc'het prennet dalc'h mat: an hini a zigore war gampreier ar mestr hag an hini e tiskennet drezi e kaviou ar maner. Va mamm a vire an daou alc'houeze hag evit ma ne deuje ket a c'hoant d'in da ziskenn e toullou kuz ar maner e kontas d'in an istor-man, pa oan deut da gaout oad a-alc'h da gompenn an traou.

E hanterenn ziweza an triouec'hvet kantved, markiz Kerdanguy hag e dud a oa o chom e kastell Trobodec. N'en devoa nemed eur bennherez, Suzanna-Agnès Kerdanguy, eur verc'h koant hag a blijas d'eun ofiser yaouank eus rejimant Dragoned Jarnac a oa neuze o chom e Gwengamp, an Aotrou Florans d'Adhemar de Pardailhan, ginidik eus al Languedoc. N'em eus ket ankounac'haet an hanoiou ha gouzout a ran, evit beza bet e Gurnhuel o sellet ouz ar paperiou koz, e voe tureujet Florans ha Suzanna, dirak Doue ha dirak an dud, d'an 12 a viz mezeven 1763; Florans en devoa neuze pemp bloaz war nugen ha Suzanna triouec'h vloaz. Kals tud a a oa deut d'an eured eus ar manerioù tro-war-dro ha niverus mat e oant, en amzer-ze, e bro Dreger.

Goude lein e tleet dansal war al letonenn met glao a deuas hag a badas; evit ma teuje ar re yaouank da gaout berroc'h o amzer unan bennak a ginnigas d'ezo mont da c'hoari koukouk a-dreuz krampeier ar maner; ar c'hinnig-ze a blijas d'an holl ha raktal ar baotred yaouank hag ar merc'hed yaouank a oa aet hini aman hini a-hont d'en em guzat, e dereziou, e kaviou, e solierou hag e kement korn-tro a gavent e Trobodec. Mont a raet da glask ar re a veze en em guzet ha pa vezent kavet e save youc'h ha c'hoarz eus an eil penn

d'egile d'ar maner. Ar c'hoari-ze ha ne gouste netra a blij e kals d'ar yaouankiz en amzer-ze.

Goude beza bet o redek, o klask hag oc'h en em guzat epad teir eur, tud yaouank Trobodec, skuiz o c'hoari, a en em vodas er zal vras, an eil goude egile; Unan hepken a jomas hep dont: Suzanna, ar plac'h nevez; an holl a gredas, o veza ma ouiet er'h anaveze mat holl doullou hag holl ribouliou ar maner, e chome kuzet evit lakat an holl d'he c'hlask. En em lakat a rejod, e gwirionez, d'he c'hlask ha d'he gervel, met kaer a voe he c'hlask ha kaer a voe ha gervel ne voe ket kavet e nep lec'h. He zud hag he fried a redas ar maner eus an eil kampr d'eben hag eus an eil penn d'egile: Ne gavjont roud ebet d'ezi e tu ebet. Unan bennak a lavaras e c'helle beza aet er maez hep gouzout dare da zen; c'houliet e voe ar c'hardiou, ar c'hrevier, ar c'houldri, ar c'hoat; ne voe kavet plac'h nevez ebet e nep lec'h.

An noz a deuas; an dud yaouank a yeas ac'hano, heb o c'hoan, doaniet bras; ne jomas e Trobodec nemed ar markiz, ar varkizez, ar gwaz nevez hag ar garent tosta; graet e voe a-nevez tro ar c'hastell, pisa ma voe gallet, ouz sklerijenn ar goulou: ne gaved plac'h nevez ebet atao e doare ebet. Antronoz e voe goullonderet ar puns hag ar lenn ne gavjod ket he c'horf: den n'he gwelas ken. Goude beza he c'hlasket c'hoaz, en aner, epad meur a zervez, an Aotrou d'Adhemar, fallgalonet, a zistroas d'e rejimant. Ar markiz hag ar varkizez, skuiz en eul lec'h hag a oa ker kasaüs-evito p'eo gwir o devoa kollet ennan o merc'h, a guiteas Trobodec evid atao hag a yeas da jom da Roazon el lec'h ma varvjont, o daou, hep dale, o lezel o madou bras gand o c'herent a-bell.

Meur a hini, er vro, a gredas e ranke Suzanna Kerdanguy beza kouezet en eun toull doun bennak bet kieuzet gwechall gant Fontanellan evit digeri eun hent dindan zouar da dec'het eus ar maner, en deiz ma


savje re a vec'h warnan, ha va mamm a lavare d'in ec'h en em gavje ker gwas all ganen ma klaskjen diskenn e kaviou ar c'hastell. E c'hellit kredi, pa oan bihan; n'eo ket bet dare d'in lakat va dourn war an alc'houez bras a welen a-zistribilh ouz eun tach, war vantell ar chiminal.

Koulskoude, pa zistrois, d'am c'houezek vloaz, da Drohodec, eus skolach I. V. wir zikour, e kave d'in e oa eur gwaz ac'hanon ha n'em oa ket a ezomm da gaout aoun ken evit diskenn e toullou-kuz hag e hentchou dindan zouar ar c'hastell. Ne liviris netra da zen, met eun dervez ma oa aef va zud d'eur servich bras da Bont-Melvez ha setu me kregi en alc'houez da welet ha dont a c'helljen a-benn eus va zaol. N'edon tamm ebet o c'hortoz gwelet ar pez edon o vont da welet.

Wardro teir goude kreizteiz, endra m'edo ar mevelien er park, setu me en em rinkla, gand eur c'houlaouenn hag eur vouestad alume ez, er c'hastell dilezet. Poan am boe o lakat an alc'houez da drei e potailh dor an c'hav, ker merglet ha ma oa. Diskenn a ris gand an dereziou hag e tigouezis gand eur renkennad kaviou bolzennet gand mein. Kaer em boe klask ne gavis penn hent dindan zouar ebet e nep lec'h; ma oa bet unan, en eun tu bennak, an nor warnan a ranke beza stanket pell a oa. Edon o vont da bignat d'an nec'h pa welis diou pe deir derez hag e pigned drezo en eur riboul denval lambrusket gand pannellon koat. Ha me er riboul; pa zonjen an nebeuta va goutaouenn a gouzas eus va dourn hag a varvas. He dastum a ris hag endra m'edon o klask he enaoui a-nevez ec'h harpis va c'hein ouz ar speurenn goat; ar bannell m'en em harpen outi a blegas gouestadik ha me gand va diouskoaz a vountas c'hoaz warni; en eun taol, hep gouzout ervat penaos e oa digouezet edon war va c'hein

en tu all d'ar speurenn hag e klevis eun trouz, henvel ouz eun nor nevez digoret hag o serra kerkent all.

Pa zavis em sav, strafuilhet holl, ne ouien mui pelec'h edo va goulou. Gant va daouarn e ris tro an toull m'oan kouezet ennan hep kaout potailh, na mo-



Laurans o tiskenn e kav Trohodec.

railh, na prena ebet e nep lec'h. An toull m'edon ennan a oa bihan hep sklerijenn hag heb aer; abouez klask gand va dourn e kavis, en tu pella diouz ar riboul, eun toull kleuzet er c'hoat hag e kreiz an toull-ze eur ruilhennig houarn. Chacha a ris warni ha kerkent e klevis adarre trouz eun nor o tigeri, eun nor houarn hou-

man hag a guze eun dereziou mein e pare eun tammig sklerijenn warno. Tridal a ris pa welis ar sklerijennze e c'helljen ganti kaout va hent d'en em denna eus an toull daonet-ze. Diskenn a ris an dereziou hag ec'h en em gavis en eur gamprig vihan gant chiminal, e oa enni eur gwele, diou gador hag eun daol. Eur vaouez a oa ouz an daol-ze, doare d'ezi da veza kousket, gant he fenn harpet war he brec'h hag eul leor bras digor dirazi.

O welet ar vaouez-ze e kreskas c'hoaz va fizians da c'hellout en em jacha ac'hano-rak p'eo gwir e veve, dre eno, e ranke ivez mont d'an nec'h, da gemeret an aer, eun wech an amzer. Kousket e oa, met he dihuna a c'hellen; doare he devoa da veza yaouank rak he dilhad a oa skler hag he bleo melen. Eur prenestr bihan, uhel er voger ha barrennoù houarn warnan, a daole warni eun tamm sklerijenn; he gervel a ris met ne reas respont ebet d'in. Lakat a ris va dourn war he skoaz ha ne finvas ket. Eur zonj spontus a deuas em spered; n'eo ket eur vaouez veo eo a oa dirazon met korf dizec'het ar paourkaez Suzanna Kerdanguy hag a oa kouezet, kant vloaz a oa, en toull m'edon ennan va-unan hag a oa marvet eno gand he aoun hag he naoun. Stra-fuilhet holl e klaskis dizrei war va c'hiz; sionaz, an nor houarn a oa en em zerrret ha n'oan ket evit kaout tu ebet d'he digeri; tapet e oan eno, d'am zro, ha ne m'oa netra da ober nemet gortoz ar maro dirak ar c'horf maro-ze a oa warnan c'hoaz e zihad eured.

Skrijus eo kompren peger bras e voe neuze va anken; youc'hal a ris ha gouela endra c'hellen ha pedi Doue hag ar Werc'hez da zont war va sikour. Skuiz o ouela ec'h azezis, war eur gador, er c'horn pella diouz ar c'horf maro, va fenn pleget ganen etre va daouarn.

Diouz ar pardaez, e kave d'in klevet tud ouz va gervel; klask a ris respont, met gwelet a raen e youc'hen en aner: va mouez n'oa ket evit treuzi ar mogeriou teo-ze. An noz a deuas hag e chomen, war va c'hador,

heb finval, o c'houlenn ouz an Aotrou Doue, ma ne venne ket va dilivra digas d'in eur maro trumm e lec'h va lezel da vervel gand an naoun hag ar sec'hed. Tra souezus, deuet e oan ha n'em oa mui aoun rak ar c'horf maro a oa dirazon. Lavaret a raen ennon va-unan edo ene Suzanna Kerdanguy pell a oa er baradoz hag e lec'h kaout aoun araozi her peden da gaout truez ouzin.

Moredet e oan, eun tamm, pa voen dihonet, en eun taol, gand eun dra bennak o lammad war va barlenn: ar c'haz eus a zu-man oa ha raktal e stagas da lavaret e gredo; n'eos den ebet gouest da gompren ar blijadur a reas d'in al loenig kaez-ze o tont d'am gwelet en toull tental-ze. Fizians a deuas d'in da c'hellout en em jacha eus an toull fall-ze; ar c'haz-ze a ranke dont eno, bep noz, dre ar prenestr, c'hoant d'ezan, marteze, da zerc'hel kompagnunez d'an hini varo.

N'oan ket evit mont er maez ac'hano d'e heul, met gouest e oan da denna talvoudegez anezan evit rei da c'houzout d'am c'herent e pe lec'h e oan kouezet.

Eun tamm paper hag eun tamm krayon a oa ganen em godell; derc'hel a c'hellis ar c'haz, war va barlenn, betek ma teuas da veza deiz a-walc'h d'in da c'hellout skriva kement-man d'am zud: « En eur gampr din-
« dan an douar emañ, el lec'h ma m'eus kavet korf
« Suzanna Kerdanguy. Evit va zenna ac'han kemerit
« an dereziou a ya en eur-riboulla gavoc'h en tu kleiz
« d'an eil kav; bountit war banell ar speurenn a zo en
« hevelep tu, e kreiz ar riboul ha digorit, en eur ja-
« cha war eur ruilhennig vihan; eun nor houarn a ga-
« voc'h eno. Grit an dra-ze dillo, avat, m'ho peus
« c'hoant d'am c'haout beo. Laurans. »

Eur wech skrivet va zamm paper ganen her plegis hag her stagis ouz ar c'haz-gant va mouchouer: al loenig paour-ha n'oa ket boaz da gaout eun hevelep samm, war e gein, a lammas ac'hano, evel ma vije bet krog an tan en e du adrenv. Ha me gortoz eur ar zil-

vidigez. Daou zervez e rankis gortoz. An nor houarn ne zibrenne ket hag eun hirnez e voed o klask he zerri. Ar Fontanellan, sur a-walc'h, eo a ranké beza bet o lakat ober eun hevelep dor.

Pa deujod a-benn da zigeri warnon, va zad ha va mamm a oa kel laouen ma ankounac'hejont va gour-drouz. Relegou ar paourkaez plac'h nevez Suzanna a voe sebeliet e bered Gurunhuel. Va c'herent a baeas an holl vizou ha dal ma voen diskiuzet diouz ar c'horfad enkrez am oa bet ez ejont ganen da bardona da Itron Varia 'r wir zikour da Wengamp. Eur pennad mat a zo abaoe m'eo en em gavet an darvoud-man. Mont em eus ranket eus ar vro warlerc'h va bara ha kastell koz Trobodec a zo bet diskaret, met pa lakan c'hoaz dirak va daoulagad taolenn ar plac'h nevez-ze koezet en eun islonk ken euzus da noz kenta he eured, e krenan c'hoaz gand ar spount ha konta fall a-walc'h am eus graet va istor ma ne grenit ket evel-down.

G. P.

Eur vro hag a zo bet pedet eviti

Etouez ar boblou kristen o deus gelliet terri o ereou, er bloaveziou tremen, ar Pologn, hep mar ebet. a zo unan eus ar re gaera : adkavet he deus he frankiz, frankiz he c'horf ha frankiz he ene, met eur vro eo ivez hag a zo bet pedet eviti.

Setu aman pedenn gaer Adam Mickiewicz a rae Poloniz, evid o bro, e Varsovia, e miz eost 1831, da lavarout eo breman ez eus, dres, kant vloaz :

« *Dieu, trugarezus meurbed, ni a venn ober pinijenn evit hor pec'hejou... N'omp ket lorc'hus ken, evel ma oamp gwechall, ha n'eus ket a galonou brein ken, ken nebeud, en hon touez; gwalc'het hon eus gant hon daelou hor pec'hejou tremenet ha breman e kerzomp skanv war hent santel ho kourc'hemen-nou...*

«... Ar vro a laka he fizians e-Dieu ne varvo ket; eun eulfenn esperans a luc'h e kreiz an denvalijenn. Dourn an Holl-C'halloudek eo a ren ar gurun. Ar Pologn a vezo delivret; he feiz her salvo; he enebour a zo aet e grisder dreist an aroudenn. Gand an disterra tra a deurvezoc'h ober eviti ema salvet; o! n'it ket da nac'h ar burzud-ze ouz bro Mieczislas en deus desket d'ar Pologn anzav ez oc'h an Holl-C'halloudek ha kaout mat atao ar pezh a raec'h d'ezi!

Evelse bezet graet!

Ar bedenn gaer all-man a veze lavaret ivez, er bloavez-ze, evid ar Pologn, e holl ilizou Varsovia :

« *O! Gwerc'hez santel, mamm gunv an dud! Tri ouec'h kant eur bloaz ha tregont a zo abaoe m'en deus tridet ho kalon o klevout an Ael o lavarout d'eoc'h. Lakat a reoc'h er bed Salver ar boblou! Pedit bre-*

man evit ma teurvezo gant ho mab degas eun Ael da laouenaat ivez kalon eur bobl he deus dalc'het ker-kouls d'e lezenn abaoe keit all a gantvejou.

Ra deuiio ar Pologn he deus ho kemeret da Rouanez hag a zo bet ken alies skoazell ar bed kristen, da vleunia, a-nevez, e goudor an Aviel ha da vezo diouallerez frankiz ar boblou. Gwerc'hez santel, m'ent deus an Holl-C'halloudek, en e furnez, kavet mat c'houzanvje hor bro gristen ar verzerenti, evel ho Mab Doue, ra c'hello da vihana he gloar lakat da greski gloar peurbadus ar bed! »

Hor Breiz a zo diskaret ivez, en hon amzer, ken izel ha ma oa diskaret ar Pologn, breman ez eus kant vloaz.

Pedomp eviti hag he bez a deuiio da veza he c'havell; he brezoneg a vezo desket d'he bugale gand an tadou hag ar mammou, er gêr, ha gand ar vistri hag ar mestrezed, er skol, ha neuze, goude ma vefe c'hoaz kabestret he c'horf, diouaskell he ene, da vihanar, o devezo frankiz, ar pezh a girint, da nijal eus an eil penn d'egile eus he douar benniget hag eus an eil pajenn d'eben eus he istor burzudus.

Y. V. P.

KELEIER

Keleier ar miz-man hag a oa niverus a ranko gortoz ar miz a zeu.

Leor an A. Gwilhou

O deus rakprenet al leor e miz Gwengolo

An A. Henri Le Bec, 4, Place des Echaudées, Pont- l'Abbé	2
An A. F. Jézéquel, person Bohars	1
An Intanvez Roussel Lanahouarn, Plouguin	1
An A. F. Jezegou, Enez-Inoc, Plouguerne	1
An A. P. Grannec, Kerseuc'h-Pleyben	1
An A. J. Guivarc'h, 52, rue Kereon, Kemper	1
An A. Yv. Le Menn, person Quemeneven	1
An A. Borgne, Tranouez, Cleder	1
An A. Adrien de Carné, villa d'Arvor, Bourg-la-Reine (Seine)	1
An A. A. Riou, person Plourin	1
An A. Yv. Le Lec, Renner Skol gristen, Cleder	1
An A. Segalen, Mespaul	1
An A. Pennec, person Mespaul	1
An A. Perrot, Collège de la Ste Famille, Hérouan (Egypte)	1
An A. J. Connan, villa St Pierre, Perros-Guirec	1
An A. P. Cadour, bourc'h Gwitalmeze	1
An A. Baron de Pichon-Longueville, 110, rue Le- gendre Paris	1
An A. Gabriel Segalen, Creac'h ar Voudenn, Plabennec	1
An A. Rene Salaün, Leuzeureugen, an Trehou	1
An A. J. Delalande, 56, rue Ange de Guernisac, Morlaix	1
An A. Erwan Berthou, 8, Impasse Beg-Avel, Saint-Marc	1

22

Leoriou rakprenet betek-hen: 786 + 22 = 808

Skridou al leor nevez eta a vezo laket etre daouarn ar mouler er miz-man; kals keroc'h e kousto pa deuiio eus ar voulerez d'ar re n'o devezo ket e rakprenet eget d'ar re o devezo e rakprenet.

Rak-se, ar re o deus c'hoant c'hoaz d'e gaout evit 10 lur hag ar mizou kas ouspenn a zo pedet da zegas o'hano hag

o adres heb o arc'hant, kenta ma c'hellint d'an A. Perrot, *Renner Feiz ha Breiz*, Scrignac (Finistère).

D'ar seiz o deus skrivet al liziri talvoudus a lennit e penn ar *Feiz ha Breiz*-man e roomp, evel m'hon devoa lavaret, er miz tremen, peb a leor an A. Gwilhou.

En deiziou-man ez eus en em gavet ganeomp c'hoaz skridou, savet gand an A. Gwilhou, a zo hep par, ha ne anavezemp ket.

An neb en defe re all c'hoaz, evelse, a zo pedet d'o degas d'in, abenn goueliou kel-ar-goanv, da ziwezata.

Dastumomp pis ar pez a jom ha diouallomp ne 'z afè netra da goll: skrivagnerien evel an A. Gwilhou, mar d'int bet hadet stank a zo diouanet rouez. Y. V. P.

Nevezentiou Emgleo Sant Iltud

Gouel Mikael hag an Ankou
A ra kals a chenchamanchou.

Rennerien Emgleo sant Iltud a zo bet en em vodet, e Brest, derc'hent Gouel Mikael diweza hag o veza ma n'he deus ket a yec'hed a-walc'h ken, eur pennad a zo, an Itron Raoul, evit entent ervat ouz he bugale hag ouz eur c'henwerz a gresk al labour bemdez war e dro, o deus kemeret da zere'hel he flas diou c'hoar, *an dimezelled Torcol, eus a Zant-Martin*.

An diou-man eta, adalek Gouel Mikael eo a vezo e penn stal Emgleo Sant Iltud, hag en o zi e vezo kavet, evel gwec'h, *a bep seurt levriou hag a bep seurt paperiou, priachou Kemper hag ar c'haera ha marc'hadmata gloan a zo e ker Vrest*.

Adalek Gouel Mikael ivez an A. Jean Cosquer, 1, Place A. Cloarec, Morlaix hag an A. Albert de Kermeuguy, Manoir de Keromnès, Carantec, eo a redo ar vro en hano an Emgleo.

**Bretoned, grit ho tiskenn
e Keriltud, 11, Rue Algésiras, Brest:
Digemer laouen a gavoc'h eno atao.**

Feiz ha Breiz

Prezegenn pardon Santez Anna 'r Palud (1) gand an Aotrou UGUEN, person Plougastel

Santez Anna, pedit evidomp.

Aotrone eskibien, (2)
Va Breudeur ker,

Kaer eo klevet ar Vretoned, re an Arvor ha re an Argoad, o kana a bouez penn :

D'Hor Mamm Santez Anna,
D'an Itron Varia,
D'Hor Zalver benniget,
Ni vo fidel hepred.

Hag e gwirionez, daoust ha n'eo ket merket aze feiz ar Vretoned ? Karet a reont Hor Zalver Jesus-Krist, ha da genta, evel just : d'Ezan enor ha gloar breman ha da viken ! Karet a reont an Itron Varia : e pep lec'h o deus savet chapelioù d'He enori. Ha karet a reont santez Anna. Santez Anna eo patronez Breiz-Izel. Den ne c'hell lavaret abaoe pe vare eo enoret en hor bro. Keit ha ma c'hellomp mont war hor c'hiz, o studia ar skridou koz, e kavomp chapelioù da Zantez Anna, amañ er Palud, a-hont e kichen Gwened, santez Anna Wened. D'ar chapelioù-ze eo diredet heb

(1) Graet d'an 30 a viz Eost diweza.

(2) An Aotrou Duparc, eskob Kemper : an aotrou Cessou, ganet e Kemper hag eskob misioner en Togo, Afrik.

ehan ar belerined. En holl barreziou e kavit eun aoter, pe eur banniel, pa eur skeudenn da zantez Anna.

Ar Vretoned o deus eta komprenet abred pebez enor a zo dleet da zantez Anna, Mamm ar Werc'hez Vari, ar Werc'hez dinamm. Mari eo ar grouadurez dispar a zo bet dibabet gant Doue etouez holl verc'hed ar bobl a Israel, an Hini a zo bet benniget dreist an holl gwragez, konsevet hep pec'hed, karget gant Doue eus an holl c'hra-sou, *Ave gratia plena*, an Hini n'he deus ket ana-vezet breinadurez ar bez, p'e gwir he c'horf a zo bet savet gant Doue da c'hloar an Nenv, evel m'her c'hanemp n'eus ket pell, da c'houel kaer Hanter-Eost. En Nenv Mari a zo Rouanez an Elez hag ar Zent, savet uheloc'h eget an holl grouadurien.

Met ar Werc'hez Vari, da biou eo merc'h, nemet da zantez Anna ? Enni, e santez Anna, e voe fiziét an tenzor-ze, ken kaer, ken priziüs. Hi eo he deus taolet evez war ar Werc'hez Vari, p'oa bihan, maget anezi, labouret eviti, he difennet ouz an danjeriou, he savet evel m'oa dleet hag evel ma c'houlenne Doue.

Pa gomzer eus galloud Mari, e vez lavaret, ha gant gwirionez, eo ar c'halloud-ze dreist muzul, rak Jezus, he mab, eo an Holl-c'halloudek ; war an douar, gwechall, e sentas ouz e Vamm ; hirio, en Nenv, petra a c'hellfe nac'h outi ? Ato ec'h ana-vez Mari evit e Vamm, hag o kas d'Ezan hor pedennou dre ar Werc'hez Vari, omp sur da veza selaouet.

Daoust ha n'hellomp ket lavaret demhenvel o komz eus santez Anna ? Hi eo Mamm ar Werc'hez Vari, Mamm-goz Hor Zalver. P'en em erbedomp ouz santez Anna, daoust ha n'hellomp ket lavaret d'ezi : « O santez Anna venniget, ni a laka hor

fizians ennoc'h ; c'houi a zelaouo hor pedennou. C'houi a blij da Zoue abalamour d'ho Merc'h, ar Werc'hez Glorius Vari ; c'houi he fedo da lavaret eur ger da Jezus, hag ar grasou a c'houlen-nimp a vezo roet d'eomp. »

Evel a welit, mat a ra ar Vretoned o lakaat o fizians e santez Anna, mat a reont o kemeret anezi evit o Rouanez, o Fatronez.

O santez Anna, ne ehanit ket da veilha war ho pugale. Kenderc'hel a reont, warlerc'h o zud koz, d'en em erbedi ouzoc'h, da zont d'ho pardonou, da zaoulina en ho chapelou.

Britonum tuorum salus esto. Savetai ar Vretoned, ho pugale devot. Lakit da ziskenn war-nomp bennoz, grassou an Aotrou Doue, d'hon difenn en danjeriou, da gas pell diouzomp pep droug ken evit ar c'horf, ken evit an ene, dreist-holl, Beilhit war ene ho pugale, mirit na 'z aint da goll, pedit evit ma chomint ato fidel da Zoue, d'e Iliz, ma kerzint ato dre an hent a gas d'an Nenv.

Serva fidem. Dalc'hit ar feiz krenv ha start en hor bro. Oh ! va c'henvroiz ker, taolit evez, me ho ped, ha dalc'hit mat d'an tenzor a zo deuet deoc'h digant ho tadou, me lavar tenzor ar feiz. Anez he feiz Breiz ne vije mui Breiz. An douar-man, abaoe pemzek kant vloaz, a zo eun douar zantel, bro ar zent. Abaoe m'eo bet digaset amant kelou-mat an Aviel, an Aotrou Doue a zo bet ato karet ha meulet. Fals-kredennou an heretiked n'o deus ket gallet gwrienna en douar-man. Nag a veuleudi a zo savet ac'halemm etrezeg an Nenv ! Tiegeziou kristen a c'holoe douar Breiz, piou a c'hellfe ho meuli evel m'eo dleet ? En tiegeziou-ze, Doue a veze pedet mintin ha noz, e hano san-

tel a veze doujet, e c'hourc'hemennou a veze sentet outo ; d'Ezan e veze kinniget al labourou, ar poaniou, ar joa hag an dristidigez ; pep tra a veze graet evit plijout d'Ezan ; pa zigase levez, e veze trugarekaet ; pa skoe, pa zigase gwalinier, kroaziou, e veze benniget e hano. An tiez a veze leun a vugale, ha ne vanke ket a vara d'ezo, rak Doue, an Hini a vag laboused an nenv, hag a wisk ken kaer bleuniou ar parkeier, penaos e c'hellfe lezel en ezomm al lodenn wella eus e grouadurien, an dud a labour hag a laka o fizians ennan ?

Eürus ar broïou a zo enno krenv ha yac'h ar feiz ! Eürus an dud o deus, evit o sklerijenna, epad o beach war an douar, ar sklerijenn-ze a zeu eus an Nenv, hag a ziskouez d'ezo an hent o deus da heulia. An dud hep feiz a zo henvel ouz ar vag hep stur, kaset ha digaset gant ar mor, hag a skoïo ouz ar reier, sklaer eo.

Ar re, avat, a vale ouz sklerijenn ar feiz, a oar da belec'h ez eont ha petra o deus d'ober, hag e kerzont gant o hent, hep morse fall-galoni, n'eus forz petra a c'hoarvezo. Gouzout a reont, Doue a sko a-wechou e wella servicherien, evit rei tro d'ezo da gaeraat o c'hurunenn evit ar baradoz. Gouzout a reont e vezint digollet gantan hag ez aint, goude o maro, da eur vuhez welloc'h. Ya, ar feiz eo nerz ar gristenien.

Santez Anna pedit ma chomo krenv hor feiz, hor brasa tenzor.

Sikouret e vezoc'h gant santez Anna, met eus ho tu, va Breudeur ker, e rankoc'h ober ar pez a zo ret evit diwall ar feiz en ho kalonou hag e kalonou ho pugale.

Ar feiz a dle beza difennet ouz ardou ha fallagreiz enebourien. Jesus-Krist ne ehanont da daga ar feiz en o skridou, en o levriou hag o c'haze-

tennou fall. Sarrit mad dor ho ti ouz ar skridou difeiz.

Ar feiz n'hell ket mont a-unan gant ar pec'hed ha kement a zoug d'ar pec'hed, da lavaret eo ar plijadureziou difennet, an dizursiou, an dansou, ar c'hoariou divalo. El lec'h m'en em ro ar yaouankiz d'an traou-ze e teu buan ar feiz da loskaat hag a-nebeudou da vervel.

Ar feiz a dle beza diwallet. Met a dle ive beza maget. Ha maget e vez dre ar bedenn hag ar zakramanchou.

Ret eo pedit. E pep ti kristen ra vo gwelet bemdez an tad, ar vamm, ar vugale o pedi. Ra vo pedet Doue araog al labour, araog ar pred. Ra vo pedet da zul en iliz-parrez. Ar zul eo deiz an Aotrou Doue. En deiz-ze tleer lezel a gostez pep labour, evit sonjal en ene, pedi Doue, goulenn digantan e vennoz war ar zizun a zo o tigeri. Siouaz ! Nag a hini o deus aman da skei war o stomog, da c'houlenn pardon evit beza dizentet ouz an trede gourc'hemenn a Zoue ha roet skouer fall endro d'ezo. Nag a hini a vez gwelet o labourat da zul hep ma vije digarez, ezomm ebet ! Nag a hini a dremen ar zul o redet du-man du-hont, ne leveront pedenn ebet, ne zonzont morse en o ene, en Aotrou Doue ! Penaos e chomfe beo feiz an dud-ze ?

Penaos ive e chomfe beo feiz ar re ne dostaont morse ouz ar zakramanchou ! Hor Zalver, en e vadelez, en deus lezet ganeomp e zakramanchou. evit hor c'hennerza, hor zikour d'ober hor zilvidigez, ha ne dostaer ket ouz ar feunteun a vuhez, fae a vez graet war donezonou ar Zalver, grasou an Nenv ne ziskennont ket en ene, hag ar feiz a zeu da glouaraat. Tostait alies ouz ar zakramanchou, deuit da zigemeret korf ho

Toue en eur galon leun a garantez, ha maget gant korf ha gwad ho Salver, e c'helloc'h lavaret : « Buhez Jesus-Krist eo a zo ennoun »

Hag ar feiz hoc'h eus bet digant ho tadou a dleit da lezel gant ho pugale. An dra-ze a dalvezo d'ezo muioc'h eget holl vadou an douar-man, rak madou an douar a goller pa zonjer nebeuta, madou ar feiz, avat, pa vez houman sanket doun er galon, n'hellont ket beza lammet diganeomp. Hep kaout eleiz a vadou er bed-man e c'heller beva. Hep feiz ne c'heller ket. Savit eta ho pugale e doujans Doue, hervez ma lavar d'eoc'h hep ehan an Tad santel ar Pab hag an aotrou'n eskob, deskit d'ezo abred o c'hredennou, ha pa vezint deuet en oad da vont d'ar skol, e tleit o fiziout e mistri kristen, a roio d'ezo eun deskadurez kristen, evel m'eo dleet.

Mores corrobora. O santez Anna, pedit evit ma reno ato an urz vat er vro-man, ma vezo an dud ato fidel da Zoue, ma kendalc'ho ar vertuziou kristen da vleunia aman betek fin ar bed, ma vezo sentet ouz gourc'hemennou Doue ha re an Iliz, rak kement-se a zo ret evit beza salvet : « Ma feil d'eoc'h en em gaout em rouantelez, heuilhit va gourc'hemennou. »

Ha war ar poent-man ez eus adarre da deurel evez. Abaoe ar brezel, e vije lavaret eo troet penn an dud war an tu eneb, hag o welet petra a dremen e pep lec'h, n'heller ket en em viret da zonjal er ganaouenn vrudet :

« Petra zo nevez e ker Iz,
Mar d'eo ken foll ar youankiz ? »

Ma teufe eus o beziou hor misionerien koz, Mikael an Nobletz hag an Tad Maner, e vijent souezet hag e savjent adarre o mouez da goundaoni

ar vuhez diroll a ren hirio eur c'halz eus an dud... « N'e ket evelse a lavarjent, hor boa desket d'ho tadou beva. An den n'eo ket laket war an douar-man evit klask e blijadur, rei o gwalc'h d'e holl ioulou, met evit karet ha servicha Doue. Buhez an den war an douar a zo eur brezel heb ehan, hag an hini hepken en devezo stourmet, an hini a vezo bet trec'h d'an drouk-spered, d'e dechou fall, hennez hepken a vezo kurunet. An hini en devezo heuilhet an drouk-spered, staget e galon ouz ar bed, en em roet d'ar pec'hed, hennez a c'houzanvo en ifern poaniou ha ne vezo fin ebet d'ezo. »

Tribue pacem. Digasit d'eomp ar peoc'h. Ar peoc'h, na kaera tra ! Dirak kraou Bethleem an Elez a ganas : « Gloar da Zoue e barr an Nenvou ha peoc'h war an douar d'an dud a volonte vat ! »

Setu aze ar peoc'h a glaskomp, ar peoc'h a zeu eus an Nenv hag a vez roet d'an dud a gar Doue, a zalc'h o ene e stad a c'hras. P'hon eus ar peoc'h-ze, omp eüruz, ha ne vank netra d'eomp.

Santez Anna, pedit evit ma teufe an dud d'en em drei ouz Doue, da garet Doue a greiz o c'halon ha da garet o nesa abalamour da Zoue. Neuze e vezint e peoc'h ganto o-unan hag e peoc'h gant ar re all.

Lakit, santez Anna, unvaniez etouez an dud, ma roint holl an dourn an eil d'egile, m'en em zikourint an eil egile d'ober o zilveridigez.

Sellit a druez ouz ho pugale ho ped hirio gant ar vrasa fiizians. Bennigit an holl belerined a zo diredet aman, bennigit o familhou, ha gant ho pennoz, gant gras Doue a lakeoc'h da goueza warno, hag ive gant ar volonte vat a ziskouezint hiviziken, e talc'hint start betek ar fin war hent ar Baradoz.

Evelse bezet graet.

Labouriou ar^o merc'hed wardro an ti

Daoust ha sonj o deus lennerezed *Feiz ha Breiz* eus ar c'henteliou a veze diskleriet aman, breman ez eus tri pe bevar bloaz diwarbenn ar pezh o devoa da ober er gêr ha wardro ar gêr.

Warlene ec'h em em gavis en tren, gand eur wreg yaouank hag a oa o lenn *Feiz ha Breiz*. Kement-se a lakeas evel eul liamm etrezomp, dioc'htu, hag e stag-jomp da varvailhat evel diou gamaradez koz.

— : Hag a draou kaer a vez moulet war ar ge-laouenn-man, emezi; an holl, bras ha bihan, a gav enni boued d'o spered.

— : Ha pere, emeve, eo ar pennadou a blij ar muia d'eoc'h?

— : An Tad Maner hag ar soniou, pa vez, emezi, rak ne vez ket bep miz; hag ivez ar pezh a skriver diwarbenn an ilizou kaer ar chapelioù didrous hag ar c'hestell koz, rak eben evit doare ne ro ket ken he c'henteliou.

— : Eben? emeve, piou 'ta?

— : Tintin Anna! Maro eo; n'oun ket nec'het, rak anez e skrivfe eur gerig bennak ivez, beb an amzer.

— : Mat, emeve, livirit eun *De profundis* eviti ha peoc'h d'he ene!

M'en em gav al linennou-man da goueza dindan daoulagad ar vaouez yaouank-ma, — hag e raint — e vezo souezet bras, sur a-walc'h, o welet eo deuet an hini goz eus a varo, da veo. Kregi a ra adarre en he labour rak prenet he deus eun tamm skiant abaoe ha poellet ez eus c'hoaz meur a dra da lavarout ha meur a gentel da rei. Droug a zo enni pa wel kement a levriou gallek da zeski d'ar merc'hed an doare da

zerc'hel o ziegez kempenn hag hini ebet e brezoneg. Ma n'eo ket eun droug hag eur vez.

E brezoneg eo hon eus desket aoza yod, ober kram-pouez ha lakât toaz e go; e brezoneg ivez e c'hellomp deski poaza eur penn-yar, rosta eun tamm kig leue hag ober eur wastell. Hiviziken e roimp sklerijenn aman war an traou-ze ha merc'hed Breiz n'o devozo ket ezomm ken da furcha levriou gallek evit deski keginat. Sevel a rin kenteliou berr ha sklêr evito hag a dalvezo evit brasa mad o breudeur, o friejou hag o zadou a en em gavo eurus en o serr; en eun ti renket mat ez eus keusteurenn vat, skouerioù mat, karan-tez, emgleo ha peoc'h.

Eur vaouez vat, laouen ha kempenn eo ene an ti, rak eun ti hep maouez a zo evel eur c'hoif heb ene ha gwelloc'h eo eun ti hep maouez ebet en holl eged eun ti ha n'eus ennan nemed eur vaouez dibredet:

Eur vaouez kempenn a dalv aour

Unan dibredet a varv paour!

Gwechall goz, en eur vro estren edo ar c'hiz, gand ar merc'hed yaouank, da lakât en dro d'o gouzoug chadennoù kaer hag ouz ar chadennoù-ze e veze stag metalennoù, skeudennaouet warno ar vertuzioù e oa dleet d'ezo kaout: c'houec'h metalenn a oa ha setu aman petra veze warno:

War ar genta, eun durzunell hag ar c'homzou-man: « Bevit kuzet! » War an eil, eun dibe: « Bevit glan! » War an drede, eun erer: « Bezit skiantek! » War ar bedervet, eur c'houibon: « Bezit anaoudek! » War ar bempet, eur gaouenn: « Bezit war evez! » War ar c'houec'hvet, eur goulmig: « Bezit devot! »

Ma sent ar plac'hed yaouank ouz kenteliou al la-boused-ze, e vezo, en eur mare bennak, urz vat ha peoc'h, en tiegeziou, rak alc'houez an eursted eo kement-man: beva kuzet, beza war evez ha karout Doue

dreist pep tra! Ar merc'hed yaouank a ra an dra-ze eo a chach warno sellou ar baotred yaouank fuñ ha gouest da ober o eursted.

Er miz a zeu e livirin hano eus an dansou a goll eur maread tud yaouank hag eus an arc'hant a foraner, heb lenna vad ebet anezan, en amzer-man.

N'eo ket evit kaout plijadur hepken emañ war an douar; evid ober vad emañ ivez; pleustromp war ar wirionez-ze epad miz an Anaon, ma savo furnez en hor penn ha ma tec'ho diouzomp ar skanvadurez a goll kement ar yaouankiz.


Eun dervez, diouz an noz, eun Ofiser yaouank a c'houlennas digand eur c'hamarad d'ezan mont gantan d'an teatr: « Ya, eme egile, gant ma teui ganen da genta, da eun ti hag em eus ezomm mont ennan a-raok an noz! »

Mont a rejont o daou d'eul lochenn hag e oa enni eur vamm ha pemp krouadur o ouela, e kichen gwele an tad, klariv pell a oa — : Gwella em eus da ober, eme an ofiser, o welout eun daolenn kén ankenius, eo lezel aman an arc'hant em dije dispignet o vont d'an teatr; paket oun ganez ha laouen oun evelato! »

Goude beza roet o aluzen d'ar vamm ez ejont ac'hano d'an iliz da bedi ar Werc'hez e lec'h mont da zellet ouz traou didalvez ha gouest da ober gaou d'o ene.

Pleustrit, crvat, war gement-man, lennerien ha lennerezed.

Tintin ANNA.



Teir barvenn aour baro an diaoul

Gwechall, breman 'z eus pell amzer,
D'ar c'houlz m'o devoa dent ar yer,

ha p'edo kastell ar Roc'h-Morvan, en e gaer, Duk Rohan hag e bried a oa o chom ennan. Houman a c'hanas eur verc'h vihan hag a voe graet enoriou bras d'ezhi da zeiz he badiziant; p'edod o vont ganti er maez eus an iliz, edo miliner milin ar Roc'h, o tont ebarz da lakat badezi ivez eur paotr bihan a oa bet ganet d'ezan en deiz-se; an duk a dosteas ouz ar vagerez a zouge mab ar miliner, a reas aus zell ouz an hini bihan, hag a ginnigas e wella goure'hemen-

nou d'e dad: « Aotrou Duk, eme heman o vous-
c'hoarzin, n'ouzon ket petra a zo kiriek da-ze, met
eun dra bennak a lavar d'in e timezo va mab d'ho-
merc'h, eun deiz pe zeiz ! »

An Aotrou Rohan-ze a oa eus a ouenn noblans.
brasa Breiz ha lorc'hus kenan e oa gand an dra-ze.
Dizoare e kavas komzou ar miliner ha trei a eure e
gein d'ezan gant fae. Ar gomz-ze, koulskoude, a jo-
mas da rodella war e spered; pa dremene ebou ar
vilin e c'houlenne kelou eus ar bugel ha pa gleve
lavaret e oa seder, krenv, speredok ha koant e goun-
nar ne rae nemet kreski gwasoc'h gwas. Eun dervez
e c'halvas ar miliner d'e gastell: « Selaou aman ga-
nen; da vab a zo o vont da veza daouzek vloaz; eur
paotr kaer eo ha spered en deus; pec'hed eo d'it e
lezel dre aze da goll e amzer o sellet ouz rodou da
vilin da drei; mar keres me her c'haso d'eur skol
bras d'an Naoned hag a baeo evitan e skol eno; des-
ki a ray al latin, mont a ray da veleg ha lakat a rin
an Aotrou 'n Eskob d'hen henvel en unan eus gwel-
la parreziou Bro-Leon.

Ar miliner daoust m'en devoa diegi o welet e vab
o tec'het dioutan ne gavas ket mat enebi ouz an ao-
trou en aoun da ober gaou ouz e vogel. Eginer, —
an hano-ze eo an hini a oa bet roet d'ezan da zeiz e
vadiziant, — a yeas eta d'an Naoned, war eul lestr hag
a yea di eus a Landerne. Met an Aotrou Rohan en
devoa roet urz da gabiten al lestr da lakaat ar paotr,
dal m'en em gavje en Naoned, war eul lestr all hag
a vije o vont d'an Amerik pe d'an Indez ha gwella-
ze ma ne c'hellje ket kaout ken an hent da zistrei d'ar
gêr.

Eginer a voe roet eta evel mous da gabiten eul lestr
hag a oa o vont d'ar Bresil; evel ma ouele dourek o
welet ar pezh a rae d'ezan goude komzou kaer an
Aotrou Rohan, pec'hen al lestr hag a oa unan eus

marc'hadourien pinvidika an Naoned, a gemeras truez
outan hag a c'houlennas digantan: « N'es ket da
gaout doan, paotrig bihan; ne 'z i ket ac'han; chom
a ri ganen ha savet e vezi evel ma vijes bet va mab;
pa vezi bras e c'helli dizrei daved da dad. »

Betek e ugent vloaz an den yaouank a jomas e ti
e vadobrerour; savet ha skoliet e voe evel ma vez
savet ha skoliet ar vugale pinvidika. Hogen eun der-
vez an Aotrou Rohan a deuas d'an Naoned hag a
reas e ziskenn e ti ar marc'hadour pinvidik evit pre-
na gwin digantan: eno e tigouezas gantan en em gaout
gand Eginer hag o welet an doare vat en devoa e
reas e c'hourc'hemennou d'e vignon o kredi e ar paotr
yaouank mab d'ezan: « Eginer n'eo ket mab d'in,
tamm ebet, eme an Naonedad; Eginer a zo eur paour
kaez paotr am eus kemeret aman breman ez eus eiz
vloaz, kentoc'h eged e lezel da vont d'en em goll, en
eur vro bell, d'an oad en devoa! » hag e kontas an
istor penn-da-benn, d'an Duk a welas ervat eo mab
ar miliner eo a oa adarre dirazan. Kement-se a lakeas
eur barrad kounnar ennan: « Ret eo d'in, emezan,
outan e-unan, en em zizober eus an den yaouank-
se n'eus ket da lavaret nann; ne c'hellin ket beza
dinec'h keit ha ma vezo e buhez! » Goulenn a reas
neuze ouz ar marc'hadour fiziout ennan e baotr
yaouank epad eun nebeud derveziou hag her c'hasas
da gas eul lizer da c'houarner Joslin; setu aman eun
diverra eus ar pezh a oa war al lizer-ze: « Dal m'ho
pezo lennet ar skrid-man e stlapoc'h, e toull doun-
na an tour teoa e vogeriou, an den yaouank en deve-
zo her c'haset deoc'h hag e vevo eno diwar bara ha
dour ken na varvo! »

Ar paourkaez Eginer a yeas war varc'h etrezek Jos-
lin hep gouzout netra eus an digemer spontus en de-
voa gourc'hemennet an Duk ober d'ezan p'en em gav-
je e penn e hent. Diouz an noz, e tiskennas en eun

ostaleri hag e koanias eno gand eun dijentil a zoare a c'houlennas outan ober eur pennadig c'hoari ar c'har-tou gantan. En em lakaat a eure da c'hoari hag evel ma ne ouie ket hen ober gwall vat e kollas kement gwenneg a oa gantan. Eginer, a bignas d'e gambr-dies e benn, a en em lakas en e wele hag a en em roas da gousket. Ar gounideg a deuas keuz d'ezan : « Mont a ran, emezan, da gas d'am mignon, hep ma ouesfe, ar skouedou en deus kollet ! Pec'hed eo d'in gounit kement-se, diwar e goust, pa 'z eo ker yaouank ha pa ne oar ket c'hoari ! » An dijentil madeleuzas a reas ar pezh a oa war e spered hag a lakas e arc'hant da Eginer, war e daol, heb e zihuna. Edo o vont en dro pa welas lizer an Duk war gorn an daol. Hag hen d'hen digeri; strafuilhet holl e voe ouz e lenn : « N'oun ket gouest, emezan, da lezel ar paourkaez paotr yaouank-se, da goueza evelse e toull an Ankou; dont a rankan war e zikour ! » Hag e rogas lizer an duk hag e reas eul lizer nevez, o lakat e skritur da veza henvela ma c'helle-ouz skritur an duk hag el lizer-ze e lavare — : Gourc'hemenn a ran d'eoc'h digemeret gand ar brasa enor an hini a gaso d'eoc'h al lizer-man, rak, hep ma ouesfe, ema va sonj rei d'ezan va merc'h da bried !


Antronoz, Eginer a roas eta ar skrid-ze da gabiten Joslin a reas ar pezh a oa en e c'halloud evit digemeret brao an den yaouank. Nebeud goude e voe gwelet an dukez hag he merc'h o tont d'ar c'hastell : Kaout a rejont eno mab ar miliner a reas o dudi dre ma ouie beva evel an dudhentil vrasa ha marvailhat evel eur barz-baleer. Eur miz goude, an daou zen yaouank a oa ken troet an eil ouz egile ma lavare ar verc'h yaouank d'he mamm e varvje gand ar rann-galon ma n'hel lesje ket da zimezi gand Eginer.

Pa deuas an Duk, d'e dro, e chomas mantret o kaout dirazan, ker seder ha tra, mab ar miliner hag

a gave d'ezan a oa o tizec'ha war e dreid e dounna toull a oa dindan touriou e gastell; mantretoc'h e voe c'hoaz pa lavaras e verc'h d'ezan e felle d'ezi e gaout da bried. Karout a rae e verc'h met ken lore'hus e oa, ma oa laket nec'het pis ! Mont a eure da gaout eur sorser koz a oa o chom en unan eus touriou ar c'hastell hag a lavaras d'ezan : — Livirit d'ho merc'h n'he lezoc'h da zimeri gant an den-ze nemet degas a rafe d'eoc'h an teir barvenn aour a zo e baro an diaoul : mervel a ray pe fallgaloni, hep dont a benn eus e daol, hag eur wech aet eus ar vro ne glevoc'h ket hano anezan ken.

Eginer a voe laket gwall nec'het pa lavaras hano an Duk d'ezan eus eun hevelep tra : « Penaos e c'hell-

lin-me biken tenna teir barvenn evelse eus a douez baro an diaou ? » Koul-skoude, evel ma kare kals merc'h an Duk, ec'h en em lakeas en hent, en eur vale atao etre-



Kastell an Diaoul

zek an hanter noz. Goude beza redet hent-chou hir ha dispignet arc'hant bras, en aner, ec'h en em gavas, eun abardaez e traon eur menez uhel e weled, war e gern, eur pikol kastell du. Chom a eure, a-zav, da ziskuiza, e kichen eur feuteun hag e welas eur vaouez koz o tont da gerc'hat dour gand eur zailh koat, met ar zailh a oa ker skarnibet gand an heol, ma ne jome ket eur berad dour ennan a-benn ma veze en em gavet an hini goz gantan e beg ar c'hastell. Ha neuze e veze gwelet o tiskenn adarre d'ar feunteun heb en em glemm hag hep fallgaloni morse.

— : « Mamm goz, eme Eginer, biken ne deuoc'h a-benn da gas dour d'an nec'h gand ar c'hoz sailh-ze ken laosk all ha m'eo deuet an tufennou da veza ennan. Gortozit. Mont a ran da welet ha me c'hellou her renka d'oc'h ! » Kemeret a eure tamm truilhou, geot ha pri prad hag e stankas ker mat ar zailh ma ne vere ket kouls lavaret ken.

— : Va bennoz d'it, va mab, eme an hini goz, laouen bras; ouspenn kant vloaz a zo emañ o klask kas dour d'an nec'h, hep gellout dont a-benn eus va zaol met, da ober petra e teues-te, dre aman ?

— : Me a zo deuet, dre aman, mamm goz, da glask an diaoul.

— : N'helles ket en em gaout gwelloc'h, rak me eo mamm an diaoul hag er c'hastell a weles aze d'an nec'h eo emañ o chom. Petra 'z peus da c'houlenn digantan ?

— : Me garfe kaout an teir barveur aour a zo en e varo. Tad ar verc'h yaouank a garan en deus lavaret d'in e ranker kas an teir barveun-ze d'ezan araok ma roje d'in e verc'h ha deuet oun aman d'o c'hask. Ma ne c'hellan ket o c'haout, n'hon eus netra da ober, va dous ha me, nemet mont d'en em grouga.

— : N'es ket da fallgaloni, evelse, va mab. Eur

paotrig yaouank evel-dout hag a zo bet ker mat evidon ne jomo ket heb e c'hoprou. Arabad eo d'it goulen netra ouz va mab; lez an affer ganen ha deus d'ar c'hoz-kastell.

P'en em gavas er gegin an hini gez a en em lakeas da ober krampouez d'an diaoul a dlee en em gaout dizale. Ne veze ket pell evit leda he c'haot war ar billig a oa ker bras hag eur maen milin ha dizale e oa eur bern war an daol, ken uhel ma 'stoke ouz an treustou. Klevet e voe neuze eun trouz bras : —

Taol evez, eme an hini goz; setu aze va mab o tont d'ar gêr. Sell, diskenn er c'houfr-se buan. Ma 'z kwel aman eo gouest d'az lonka ez veo, kement a naonen devez pa vez bet oc'h ober eun dro dre ar bed !

A vec'h m'en devoa gallet Eginer en em gazat ma teuas an diaoul en ti; en em deurel a eure war ar c'houfr a oa ouz an daol : « Naon am eus, mamm, naon du ! » Hag ec'h en em lakeas da zebri krampouez, en dra c'helle; a zousennou ez aent gantan; eur wech an amzer e ranke ehana da denna e halan pe da eva eur skudellad chistr. Pa voe torred e naon, eun tamm, e c'houesaas en dro d'ezan hag e lavaras d'an hini Goz :

— Sebezus eo, met me gred e klevan c'houez ar c'hristen.


— : Ya da ! oc'h hunvreal emañ, va mab. Penaos, a gav d'it e c'hellfe kristenien pignat betek aman; debr krampouez, leiz da gof, 'zo gwelloc'h d'it; n'o c'haves ket mat ?

: Mat kenan, int mamm; met, m'hen assur d'oc'h c'houez ar c'hristen a glevan er gegin-man. Ma kav an unan hel lounkan rakal hag en hent-se, da vihanan, e karg'n va c'hof. Mont a ran d'e glask.

Hg ec'h en em lakeas da glask a-gleiz hag a-zehou

hep kaout den rak an hini goz a oa azzet war ar c'houfr hag an diaoul ne gredas ket he direnka.

Skuiz o welet ne gave netra, an diaoul a en em lakeas da zislevi-gen ha da astenn e zivrec'h. — :



Ar bennherez o c'hortorz Eginer da zistrei

Koll a ran va amzer, emezan; gweli eo d'in mont da gousket rak skuiz maro oun!

Hag hen d'e wele ha diou vunutenni goude e ro-c'he ker krenv ma krene ar c'hastell gantan.

An hini goz a zigoras neuze ar c'houfr hag Eginer a lammas er maez; mont a eure e kampr he mab ha Klask! hag e chachas hag e teuas gant unan eus an teir barvenn aour. An diaoul a skrabas e elgez, met ne zihunas ket. Eur pennadig goude, an hini goz a ziframmas an eil barvenn. An diaoul a droas en e wele ha ne zaleas ket da jom adarre en habaskder. Neuze, klak! an hini goz a dennas an trede barvenn; an diaoul, en taol-ze, evelato, a zihunas hag a en em lakeas war e goañez:

— Mamm, n'oun ket evit kousket aman kement e krog ar c'houenn ennoun; unan deo a dle beza dreist holl hag he deus flemmet va elgez d'in a benn teir gwech; mont a ran da c'hourvez d'ar marchosi.

— Ya! Ya! va mab, kae 'ta. Neuze an hini goz a zastumas, en eun tamm lien an teir barvenn aour, o devoa peb a zaou droatad pep hini anezo hag a boueze ouspenn eul lur pep hini, hag o roas da Eginer :

— Ha breman, va faotr, kerz ac'han dillo rak war-c'hoaz va mab ne zigounnaro ket pa welo en devezo kollet e deir barvenn aour. N'ouzon ket petra en deus c'hoant da dad kaer da zont da ober ganto, met, en e lec'h, me 'm befe difizians eus traou evelse.

Ar paotr yaouank ne jomas ket pell da zale, dre eno; kaout a eure e varc'h e traon ar memez, hag e tizroas buana ma c'hellas da gastell Joslin. An Aotrou Rohan n'en devoa klevet kelou ebet anezan, c'houec'h miz a oa a zonje ne zizroje ket ken; p'her gwelas e ruzias gand e gounnar:

— A! al lampon zo 'nezan, emezan; ret eo d'in kaout an tu d'en em zizoher anezan, en eur c'hiz pe c'hiz! An

Aotrou Rohan, pinvidika Aotrou a zo e Breiz, n'ema ket c'hoaz o vont da rei e verc'h da vab eur miliner !

Eur stultenn a deuas en e benn hag e lavaras da Eginer :

—Teir barrenn aour a ziskouezes d'in aze, met petra lavar d'in eo an teir barrenn-ze teir barrenn eus haro an diaoul. Me a rank kaout eun testeni all bennak abarz kredi : anez n'eus marc'had graet ebet.

En eur lavaret ar geriou-ze e kemeras an teir barrenn a ginnige an den yaouank d'ezan. Met, a vec'h m'en devoa kroget enno ma lezas eur youc'hadenn spontus; ar harrinier-ze ha ne raent droug ebet d'eur c'hristen mat, evel Eginer, a oa gwalinier hag a gas-tize ar re a oa e stad a bec'hed marvel; o steki outo-hepken e oa bet devet dourn he brec'h zehou an Duk betek e skoaz; o koueza d'an douar e lakjont an tan e leur ar gampr hag e kouesjont er c'hav el lec'h ma ne gredas den ebet mont d'o c'hlask. Da gredi eo, e oant dizroet, dre eno; d'en em spega adarre ouz elgez o mestr; ar c'hastell a voe dare d'ezan beza devet ha poan a voe o vouga an tan. An duk a varvas en noz warlerc'h goude beza anzavet e bec'hejou, hag o fallagriez e kenver Eginer. Henman, tri miz goude-ze, a zimezas gand merc'h ar c'hastell; daoust d'ar c'hany e voe eur pred ha ne oa ket fall beza ennan. Mamm gunv va mamui-you a oa keginerez ha ganti eo em eus klevet ar marvailh koant-man

ha n'eus ket ennan eur ger gaou
met marteze unan pe zaou !

G. P.

DA ZAOULAGAD

(J.-G. MAYET)

♩ = 63. Allegretto.

Da zaou-la - gad lir-zin meur-bet. No deus ket
o far dre ar bed; O liou glas a zo du - di -
us, hag o sel - lou ma - de - le - zus.

I

Da zaoulagad lirzin meurbet,
N'o deus ket o far dre ar bed;
O liou glas a zo dudius
Hag o seltou madelezus.

II

Eus an deiz o deus ar sklerder,
Eus an noz o deus ar c'haerder;
Meun ar baradoz a gredan,
En da zaoulagad a zlouan.

III

E kreiz da vousc'hoarz hegarat
E vez gwelet da zaoulagad,
Gand an euhl aour perlezennet
Hag a lugern evel stered.


IV

An oabl glas-mor, gwarisius,
A venn kaout o liou dudius;
N'o deus ket o far dre ar bed
Da zaoulagad lirzin meurbet.

Yann al Lagadec hag ar C'hatolicon

Ma 'z eus tud, en hon touez, hag a ra fae war ar bre-
oneg ha n'hen deskont ket d'o bugale, eo hepken dre
ia 'z int tud diwarlerc'h hep spered hag hep deska-
durez, rak ar brezoneg a zo eur yez uhel ha pinvidik
ha n'eo ket an holl eo a c'hell dont a-benn d'her gou-
zout kaer. Adalek ar XV^{vet} kantved ez eus bet tud gwi-

ziek oc'h en em rei a-
zevri d'e studia; klasket
o deus e lezennou ha
dastumet e c'heariou.
Labouriou eur c'hals



Maner Mezedern e Plougonven

anezo a zo kollet; eur geriadur (1) koul-
skoude, eus an amzer-ze, hag a zo bet tri vreizad

(1) Eur geriadur a zo eul leor hag ez eo renket ennam gerion
eur yez; *dictionnaire* eo a vez gret, e galleg, eus eul leor
evelse.

hag, en o zoueg, daou veleg, o labourat warnan a zo
deuet betek ennomp.


Brudeta ha brasa oberour al leor koz-se eo Yann
al Lagadec bet ganet e Plougonven, eur barrez hag
a zo teir leo diouz Montroulez hag a oa gwechall, en
eskopti Treger. Bachelour e oa, ar pezh a ziskouez e oa
speredet mat ha desket bras; gwas a pezh a zo, ne ana-
vezomp diwar e benn nemed ar pezh en deus bet la-
varet, anezan e-unan, e penn kenta eun darn eus e
labour, en eur skrid, skrivet gand an dourn, hag a
virer c'hoaz e mirdi al leoriou. — Bibliothèque Na-
tionale, — e Paris, dindan an hano a :

Vocabularium-armorico-latinum

Setu aman petra lavar er skrid latin-ze:

Principio dominum rogo primum semper in unum
Ut Britonum librum valeam complere novellum.
Si quid in hoc opere videaris non bene dictum,
Non mox arguere studeas tanquam male peractum;
Primo consulere placeat tibi sepe peritum.
Qui sciatur instruere nec non discernere scriptum.

» Quum quidem multi scolares adhuc in limine gymnasii,
non nabeutes periciam latinitatis, trahunt vocabula latina;
ad sensum extraneum et extortum, squamas avibus et plumas
piscibus apponentes; alii quippe de novo latinum fingunt et
alii barbarizant, etiam quia quamplures britones multum
indigent gallico, ideo, ego Johannes Lagadec, parrochie
de Plougonven, diocesis Trecorensis in artibus et decretis
bachalarius, quamvis indignus, ad utilitatem pauperum cle-
ricorum britannicæ, vel rudium in pericia latinatis, hoc opus-
culum composui, primo ponens et ordinans britonicum, se-
cundum ordinem quem frater Johannes Januensis tenet in suo
catholicon: sibi addiciens gallicum deinde latinum ejusdem
significationis, ut per illud britonicum poterint ad gallici et
latine pervenire cognitionem. Hic enim supplebitur quidquid
ex hujus defectu hactenus pretermisum est. Quæso autem
mente devota super hujus operis imperfectione, veniam a
scolaribus et magistris, postulans ut non bene dicta corrigant,
defectus suppleant et in melius reforment, ac britonicum
secundum eorum prolacionem hic inter serant, ut melius utesque
convalescat. Datum die xvj mensis augusti, anno domini
millesimo quadringentesimo sexagesimo quarto. »



Kenta pajenn ar C'hatolikon

Yann al Lagadec a dle beza bet ganet e Plougonven, e maner Mezedern. Ar maner-ze a zo bet perc'hennet gant al Lagadeien, epad 350 vloaz, da nebeuta; er bloaz 1396, Gwillhou al Lagadec, eus a Vezedern, a en em renke etouez gwazed an A. Rohan.

Yann al Lagadec a dlee beza mab da Even ha Janned Goasvennou a oa o chom e Mezedern, er bloaz 1443; e vreur hena, Tugdual, a zimezas gant Mari Goetqueveran, c'hoar pe nizez Auffret Koetqueveran, chaloni Landreger. An Aotrou-man a oa chaloni pa varvas an Aotrou Ploëuc, eskob Landreger, er bloaz 1453 ha beo e oa c'hoaz ha person e Plourin-Montroulez, parrez stok ouz Plougasnou, er bloaz 1491.

Ouspenn ma oant amezeien ha kerent, ar beleg hag ar chaloni, a gare kals ar brezoneg ha pa deuas ar maro da Yann al Lagadec, Auffret Koetqueveran a glaskas peur-ober labour e vignon hag a stagas outan e hano; edo o vont da lakaat e voula gant eur mouler, Yann ar C'halvez, a oa o paouez digeri e stal e Landreger, pa deuas ar maro ivez d'her skei; eun trede breizad, Euzen Roperz, a reas eun adtremen diweza war ar geriadur hag her c'hasas da voula da di Yann ar C'halvez da Landreger. Peurvoulet e voe al leor nevez d'ar 5 a viz du 1499.

Yann al Lagadec evid ober e labour en devoa kemeret skouer war geriadur latin Yann Janua, ar C'hatholicon, moulet evid ar wech kenta, e Strasbourg, er bloaz 1466.

Leor Yann al Lagadec a zo 105 delienn-baper ennan; moulet eo gant lizerennou godek; e hano a zo roet d'ezan, e korn uhela tu kleiz ar bajenn genta, evelhen:

Cy est le Catholicon en trois langaiges savoir en breton francoys et latin selon l'ordre de l'a. b. c. d. etc.

Dindan ez eus eur skeudenn graet diwar goat hag

a zoug merk ar mouler Yann Galvez (a oa, en hevelep amzer, mouler ha porzier an eskopti.) Daou gi, krog unan a bep tu, a zoug eur skoued a ispill ouz eur wezenn, war ar skoued-ze ez eus eur skouer hag eur vouc'hal: benviou eur c'halvez. Hano Yann Galvez a zo e traon ar bajenn.

Setu aman petra lennomp war bajenn ziweza al leor:

Cy finist ce presant livre nommé le Catholicon, le quel contient trois langaiges scavoir breton, franczoyz et latin, le quel a esté construit, compilé et intitulé par noble et venerable Maistre Auffret Quoetqueveran en son temps chanoine de Treguier recteur de Ploerin près Morlaix, prevoians que cestoit une chose propice et utile de mettre ces trois langaiges concordans l'ung a l'auttre quant affin et pour instruire les simples gens à avoir la cognaissance desditz langaiges ainsy que le livre le démontre. Et imprimé à la Cité de Lantreguier par Jehan Calvez le cinquiesme jour de novembre l'an mil cccc iiii vingt et dix neuf.

An notenn-ze ha n'eus hano ebet enni eus a Yann al Lagadec, meneget evelhen er bajenn genta: *Incipit dictionarius britonum continens tria ydiomata... a M. J. Lagadec, dioceses Trecorensis, compositus ad utilitatem clericorum novellorum britannie*, a verk dre ar geriou: *en son temps*, e oa marq Auffret Coetqueveran e-unan, er bloaz 1499.

Euzen Roperz hag a beurgasas pelloc'h al labour da benn a zo bet falvezet gantan staga ivez e hano outan dre an teir linenn rimet-man:

*Euzen Roperz credet querz a Kaerdu
En composas ung pas ne fallas tu
Bed enn yssu hac en continuas.*

Catholicon Yann al Lagadec a zo rouez bras, en amzer-man; ne anavezet nemet pevar leor anezan ken; daou, — ha c'hoaz unan n'ema ket en e bez, — a zo

e Paris e Mirdi al Leoriou, (Bibliothèque Nationale), eun all e Roazon, eun all e Kemper.

Diwar al leor a virer e Kemper eo em eus lennet ar skeudennou a ya da heul ar skrid-man. Al leor-ze a oa gwechall da Dadou Kompagnunez Jezuz skolach Kemper; roet e oa bet d'ezo, er bloaz 1634, gant aotrou Trevigne, e kichenik Lesneven.

Ar ger brezonek eo an hini a zo bet laket da genta hag ar geriou gallek ha latin ma troer ganto ar ger brezonek-ze a deu warlerc'h; setu aman eun nebeud skoueriou:

BRENC AN PESQ. *g* (allice). C'est ce qui est en Poreille du poisson en quoy on voit s'il est froys (frais) ou non. *l* (atime) branchus. *Item* branchia, *g*. ioe (joue) de poisson.

BROCH. *g* tesson, une beste sauvage. *l* melo, melota, melus. *Item* melota signifie here a vestir ou peau de tesson de quoy estoit vestu saint Jehan Baptiste quand il estoit au desert, ou painetière. *Item* taxus. *g*. boudouant. *b* (ritannice) broch.

EZOMEK. *g* souffrateux ou besoigneux, poure (pauvre) qui n'a de quoy vivre, *l* egens. *Item* inops, *Item* egere. *g*. avoir deffault de biens. *b* ezomecat.


MESENN. *g* gland, le fruyt de chesne. *l* glans. *Item* c'est une plombée de plomb pour getter à la fronde. *Item* glandula. *g*. petite glande qui naît entre la chaer et cuyr, *b* groagrenn.

Oberour ar *C'hatholicon*, anat eo, a zo bet pell hag hir amzer o veva war ar maez hag e Montroulez, eur gêr-vor; anaout a ra ar geriou implijet gant al labourerien-douar, ar wiaderien, ar gilvizien, ar vilinerien, ar boderien hag all; anaout a ra ivez eleiz eus ar geriou implijet gant an dud a vor koulz hag ar brezoneg trefoet implijet el lez-varniou hag en ilizou.

Pajennou a-bez a zo er *C'hatholicon* hag ar geriou brezoneg a zo enno n'int nemet geriou gallek-stummet e brezoneg, ar pez a ziskouez pegen trefoedet e oa neuze ar brezoneg gant an dud a en em emmelle d'her skriva. Abaoe, a drugarez Doue, ez eus deuet gwellaenn.

D'ar gêr Montroulez, Montrelaix ou Morlaix; Yann

a. Lagadec a lavar eo ginidik eus ar c'hosteziou-ze, — de parochia de Ploegonven, — hag ez eo hen an hini en deus graet ar gieriadur: — *Constructor hujus opus-*



Diweza pajenn ar C'hatholiceon

cult — Coetqueveran ha Roperz n'o deus ket graet kals o dra.

Teir gwech eo bet advoulet ar *C'hatholiceon*: er wech kenta e Paris, er bloaz 1501, gant Yvon Gillevere, eur mouler o chom e Paris hag a oa ginidik eus a Vro-Leon; eun eil gwech eo bet advoulet c'hoaz, goude eun divanka graet d'ar vouladur genta, ne ouezer ket, mat a-walc'h, avat, pe da vare, gant Yann ar C'horr, eun tregeriad; eun trede gwech gant Fransez ar Menn, e ti Ed. Corformat, en Oriant. An A. Menn en deus lezet a gostez ar pep brasa eus ar pezh a oa e latin.

Maner Mezedern a weler c'hoaz, en e zav, eur c'hart eur bale diouz bourc'h Plougonven en tu-dehou d'an hent pa 'z eer da Lanneanou.

Daru anezan a zo bet adsavet er bloaz 1553, evel m'her merk ar skrid a zo bet kizellet uheloc'h eget doriou ar porz kloz hag e weler a-us d'ezo c'hoaz en deiz a hizio, eur skoued maen harpet gant daou leon, kizellet warnan armou al Lagadecien, da lavarout eo teir delienn velchen glas war leur arc'hantet ar skoued.

E c'hellit kredi ar skoued-ze a zo bet graet eur pigosa d'ezan gant morzoliou Dispac'herien ar bloaz 1793.


E tu kleiz an nor-borz ez eus eun tour gant tartzelou e traon e vogeriou hag en tu dehou ema ar chapel goz ec'h enoret sant Nikolas enni, gwechall, hag a zo breman... dilezet.

E traon ar porz, en ti brasa hag ez eus eun nor gaer da vont ebars, ez eus eun dereziou mein hag eur chiminal e kaver warnan armou Gwyen al Lagadec, (mab Tugdual) hag e bried, Mari ar C'hoz-Kastell, aotrou hag itron Mezedern, er bloaz 1480.

Yann al Lagadec, contr Gwyen a c'hell beza, bet meur a wech, o tomma, en e gozni, ouz tan ar chiminal-ze; ar pezh a zo sur, da vihana, ganet eo bet er maner-ze hag, eun deiz pe zeiz, ar Bleun-Brug a vije mat d'ezan ober eur gouel brezonek e Plougonven.

ha kemeret tro ac'hano da staga eun daolenn varbr war moger an ti koz-se da rei da anaout d'an dud a dremeno, dre eno, al labour vat a reas en e amzer. mab Mezedern hag hanoiou an daou her skoazellas ar muia: eur c'hernevad: Auffret Coëtqueveran, ginidik, war a gredan, eus a Zant Hernin hag eun tregeriad evel dan: Euzen Roperz.

G. P.



Skoned Gwyen al Lagadec ha Mari ar C'hoz-Kastell e bried, aotrou hag itroun Mezedern, er bloaz 1480.

Ho pet Koun !

Du 1, 1399. — *Maro an dug Yann IV.* An dug-se, anvet c'hoaz Yann Vonfort, a zo brudet e stourmadennoù enep da Charlez Bleiz. O daou e lakaent da dalvezout o gwir war ar vro. Charlez Bleiz a c'halvas ar C'hallaoued war e sikour, Yann a c'halvas ar Saozon. Chom a reas an trec'h gant hemañ. Met siouaz, ne voe ket prizet hag e rankas kuitaat e vro. E-keit-se, avat, ar vro a gouzas ken izel ar stal ganti ma voe ret mont d'e bedi da zont en-dro D'an 3 a viz eost 1379 e filestras e Dinarz, saludet gant an holl Vreiziz; Janed Pen-teur, hec'h-unan, e enebourez touet a oa eno.

Goude e varo Breiz a vevas er peoc'h hag er hinvidigez e-pad 80 vloaz ken na deuas adarre ar C'hallaoued da glask trabas ouz ar Vretoned.

Du 11, 1765. — Roue Bro-C'hall a glask trabas ouz La Chalotais hag e vignoned. O zorfed? — Beza difennet gwiriou o bro !

Du 11, 1918. — Diwez ar Brezel Bras, 13 vloaz a zo abaoe. 240.000 Breton a lezas o eskern er brezel euzus-se.


Du 14, 1812. — Pitre Chevalier a zo ganet e Pembro (Bro-Naoned). Ar Vretoned a dle derc'hel en o spered ez eo heñ eo a gredas evit ar wech kenta, en e levr « *La Bretagne ancienne et moderne* » [Breiz koz ha nevez] (1844) lavarout o gwirioneziou d'ar C'hallaoued.

M. A. C'H.



Abati Gwenn

Ar *Bleun-Brug* a dle ober eun deizvez gouel, e Kemperle, d'an 29 a viz du a zeu, en enor d'an Tad Abgrall, ar misioner bras, a zo bet epad seiz vloaz, kure er gerze, 1879-1886, hag a vezo da virviken eur skouer evid



Doriou Abati Gwenn

ar Vretoned a rank beva pell diouz o bro. Ar *Bleun-Brug* a gemero tro ivez, ac'hano, evit lakaat staga eun daolenn-varbr ouz moger ti Leanezed ar Retred, el lec'h m'edo gwechall abati Tadou Sant Dominik, da



Ti ar Retred e Kemperle

(*Abati gwenn*)

rei da anaout d'an holl e tremenas, dre eno, sant Visant Ferrier, breman ez eus 512 pe 513 vloaz.

C'houek eo gouzout pegoulz e pleustrer douar bet pleustret gand eur zant hag a zo ker brudet ha sant Visant.

Abati Tadou Sant Dominik Kemperle a voe savet, war lez ar ster Elle, er vourc'h nevez, gand Gwenn Navarr, pried Yann I, Duk Breiz er bloaz 1254 ha setu perak e voe hanvet *Abati Gwenn*.


An abati-ze a zo bet karet a-viskoaz gant Duked Breiz. Yann I hag e bried o devoa o c'hampreier ennan; eun dachen zouar a dri dervez arat a stagjont outan hag ar c'heuneud o deveze ezomm ar venec'h, evid o bloaz, e c'hellent mont d'o c'herc'hat da goat an Duk, da Garnoet.

Yann Vontfort, ar c'henta Montfort a stourmas ouz Charlez Bleiz, pa varvas, e Henbont, d'ar 26 a viz gwenglo 1345, a c'houlennas ma vije sebeliet e gorf e Abati Gwenn.

O veza ma ranked ober eun dro vras evit mont eus an Abati, da gêr Kemperle; an duk Yann a roas aotre d'ar venec'h da ober eun-pont war an Elle eun hag eun da zor vras o abati; ar pont-ze a voe hanvet pont sant Dominik; an aotre-ze a voe nevezet divezatoc'h gant Yann IV d'ar 25 a viz eost 1381, ha divezatoc'h c'hoaz, er bloaz 1638, gant ar roue Loeiz XIII, Meur a wech e savas prosez diwarbenn ar pont-se hag evit kaout peoc'h dioutan pelloc'h; ar venec'h her roas da gêr Kemperle, er bloaz 1767.

D'an 23 a viz Genver 1384, Yann IV a roas 100 lur leve da venec'h Abati Gwenn; eleiz a gristenien all a stagas douarou ouz an Abati ma vije pedet Doue evito, goude o maro.

D'an 12 a viz ebrel 1434, evit pinvidikaat an Abati, an Duk Yann V a grouas foar ar Vourc'h Nevez, hanvet ivez foar sant Gregor, dre ma veze graet, da genta,



Parc Abati Gwenn var-lez an Elle

da zeiz gouel ar zant-se, unan eus patroned an abati, d'an 19 a viz meurzh Breman, ar foar-ze, a vez graet d'ar 25 a viz gouere, da c'houel Sant Jalm a oa ivez patron an Abati.

Abati Gwenn hag a oa ennan 12 manac'h, er bloaz 1623, 20 er bloaz 1635, 16 er bloaz 1662 ne oa mui nemet tri manac'h ennan pa deuas an Dispac'h; gwerzet e voe er bloaz 1793, da eun den hanvet Beauvais her gwerzas dem-goude d'an A. ha d'an I. Le Maistre; ar re-man a jomas ennan betek ma teuas Leanezed ar Retred d'her prena diganto, e miz genver 1808 hag abaoe emaint ebarz: al lojamanchou a jom ganto eus an abati koz a zo bet savet er bloaz 1636 ha 1671.

Sant Visant Ferrier, embanner bras ar varn ziveza, pa reas e dro Vreiz er bloaz 1418 ha 1419 a brezegas e Kemperle hag a reas e ziskenn e Abati Tadou e Urz. Eun dra vat eo eta e teufe ar Bleun-Brug da bokat da roudou e dreid benniget.

Y. V. P.

KELEIER AR MIZ

Dervez Bleun-Brug Kemperle

d'an 29 a viz du

en enor d'an Tad Abgrall, vikel vras an Tonkin a zo bet seiz vloaz kure, e Kemperle, 1879-1866, a-raok mont da visioner d'an Annam.

Reolenn ar Gouel

Etre 8 eur ha 9 eur 45. — Kenstrivadeg (concours) war al lenn brezoneg hag ar c'han.

Ar ganerien a gano o-unan koulz hag ar re a gano a-strollad, gant diou, feir pe beder mouez, o devezo peb a ziou ganaouenn da gana; ar ganaouenn gourc'hemennet d'ezo eo: *Breudeur, ni glev ho klemmou!* Eben a zibabint el lec'h ma kirint.

Da 10 eur nemet kart, — e vezo digemeret an A. Duparc, Eskob Kemper ha Rener ar Gouel.

Da 10 eur. — Oferenn-bred.

Da greisteiz. — Lein gant prezegennou da gloza ar pred: 15 lur, dre benn. Kas an hanoiou pe da Renerez Ti-Retred Kemperle, pe d'an A. Saout, person Sant-Goazec, abenn ar 25 eus ar miz da ziwezata.

Da 14 eur, — e vezo dizoloet an daolenn savet e Abati Gwenn (ema ennan breman Leanezed ar Retred), evit merka e tremenas sant Visant Ferrier, dre eno, p'edo oc'h ober e dro Vreiz. An Aotrou'n Eskob a rayo eur brezegenn dirak an daolenn nevez.

Da 14 eur 1/2. C'hoariadeg vrezonek; a-raok-he digeri an A. Perennes a raio eur brezegenn war an Tad Abgrall.

Raktal goude ar c'hoariadeg bennoz ar Zakramant da gloza ar Gouel.

Bleun-Brug Brest

Miz Gwengolo 1932

D'an 28 a viz gwengolo diweza, an A. Cornic, Rener meur ar *Bleun-Brug* hag an A. Perrot, Rener *Feiz ha Breiz*

a zo bet oc'h en em glevet gand an A. Lombard, hag an A. Rochemulet, Renerien Gouelioù Brest, e Kampr ar C'henwez, evit ma vezo er gêr-ze, xxii^{vet} Kendalc'h ar *Bleun-Brug* e miz gwengolo a zeu.

Kêr Vrest a ro he ger e raio ar pezh a vezo en he galoud evit ma vezo enoret en deiz-se yez hep par ar Vretoned; ar Vretoned, eus o zu, a raio tra pep tra, evit ma vezo kêr Vrest, edoug an deiziou-ze, eur mor a gan, a c'hened hag a levezez.

Eureujou hor mignoned

D'ar 15 a viz Here eo bet eureujet e iliz-veur Gwened, an A. Raphael Tallec, medesin, hag an Dimezell Mac'harit Le Milon, merc'h an A. Le Milon, tenzorier *Bleun-Brug Breiz*.

D'an 20 a viz Here, eo bet eureujet ivez e iliz Tredaniel, e kichennik Moncontour, an A. Emmanuel Chevillotte, mab Kergroadez, e Brelez hag an Dimezell Gwennola Coroller, c'hoar an I. du Guerny, oberourez al leor Histoire de Notre Bretagne. A-raok benniga o eured, Rener *Feiz ha Breiz* a reas meuleudi ar Vretoned a gendalc'h, daoust da bep tra, da vale war roudou o zadou.

Bennoz Doue ha Sent Breiz war an daou goublad tud nevez-ze.

Leor an A. Gwilhou

O deus rakprenet al leor e miz du.

An Itron Gueguen, Rubeo, an Trevous	1
An A. J. Bihan-Poudec, Prat-meur, Plouider	1
An A. René Guichaoua, mestr-skol, Plounéour-Lanvern	1
An A. F. Vallée, 23, rue St-Benoit, St-Brieuc	1
An A. E. Ernault, 14, Place St-Michel, St-Brieuc	1
An A. Kerroc'h, kure Plouigneo	1
An A. Pape, kure Plouigneo	1
An A. Cozic, person Ploneis	1
An A. Bot, person Enez-Sizun	1
An Dimezell M. Gourlaouen, rue de la Corderie, Douarnenez	1

An A. Joseph Jourden, Keronvel, Konk Leon.....	1
An A. J. Capitaine, person Lok-Maria Berrien.....	1
An A. Alain Penñec, Maison du Sacré Cœur, 2, rue Levasseur, Lille	1
An A. Le Gall, Maison du Sacré Cœur, 2, rue Le- vasseur, Lille	1
An I. M. Yv. Lamour, Keroman nevez, Ploumoguier..	1
An A. Blons, kure Kraon.....	1
An A. Y. de Kervennoael, person Gwiniventer.....	2
An A. Saig ar Gall, Lezoudestin, Plabennec.....	1
An A. Guivare'h, Plouzeniel (eil goulenn).....	5
An Dimezell Perrine Abjean, Plouzeniel.....	1
An A. Fanch, sakrist Plegat-Moysan.....	1
An A. Picart, person Ploumoguier.....	2
An A. Y. Jezequel Kloerdi bras Sant-Brieg.....	1
An A. Claude Goachet, maire de Milizac.....	1
An A. François Tanguy, rue du Cimetière, Landéda.	1
An A. Guillaume Perrot, Trebaol, Milizac.....	1
An A. Poulhazan, person Plougouvelin.....	1
An A. Bizien, kure Plougouvelin.....	1

Lecriou rakprenet betek-hen : 808 + 35 = 843. 35
 Degas an hanoïou d'an A. Perrot, Rener *Feiz ha Breiz*,
 Scrignac, ar re o deus c'hoant da brena al leor a-raok
 ma vezo moulet : degas an hano heb an arc'hant.
 Ma c'hellfemp kaout 1.000 rakprenet, an dra-ze a vije
 kaer.

Paour-kaez gwennilied !

Gwall abret eo deut ar yenijenn er bloaz-mañ.
 Betek ar gwennilied a zo bet tapet. En Aostria o
 gwelet a vilierou, kropet gant ar riu, dare da
 vervel. Gwella pezh a zo paotred ar *vreuriez evit*
difenn al loened o deus kalon vat. Lakaet o deus
 ar gwennilied e kaouedou, o sammet war girri-nij
 hag o c'haset betek Venezia, en Itali, el lec'h ma 'z
 eo tommoc'h an amzer, emichañs.

Ar gwennilied kaset dre girri-nij, setu n'oa ket
 bet gwelet c'hoaz, a gredomp.




Yannig, e dog hag al logod




1. — O! va Doue! S-!l'ta! va zok o tansal. Biskoaz kemend all!



2. — An diaoul a rank beza ennan! setu ma lamm breman.



3. — Gwasoc'h gwas! breman e red war va lerc'h ! Mamm ! Mamm ! an diaoul !



4. — Asa! na me zo aonik! Mont da redek a-raok diou logodenn.

DIVINADENNOU MIZ DU

I. — Petra eo yena daou dra zo en ti ?
20 p. ar R. Degaset gant F. ar Goff, Lestorhen vihan, Gvi-nevez.

II. — Breur ha c'hoar,
O vont d'ar foar,
Unan a lavar gwir, egile lavar gaou
Ha koulskoude, e leveront, henvel o daou.
20 p. ar R. Degaset gant Y. Le Vasseur, Logonna-Daoulas.

III. — Geriou henvel pe c'honi o lenno eus a gleiz da zehou
pe eus an nec'h d'an traon.

IV. — X X X X Graet evit mala.
X X X Lavaret evit brouda.
X X Kavet e dihalana.
X E penn an tour ema.
20p. ar R. Degaset gant eur Mespaolliad koz.



IV. — Gwillou goz a zo
benval e benn; eur pennad
a zo e vez al laer gand e
avalou ha kaer en deus kour-
zi warnan, n'eo ket evit e
welet hag hen harp outan
koulskoude. E peléc'h eman
al laer-ze eta ?
20 p. ar R. Degaset gant
H. Caouissin, Paris.



V. — Saig ar Marc'heg a
glask e vab hag a ya d'her
goulenz ouz Melar ar Jus-
tinog. Henman n'en deus ket
e welet, emezân, hag hen stok
outan. E peléc'h eman eta ar
mab dianket-ze ?
20 p. ar R. Degaset gant
H. Caouissin, Paris.

Degas respontchou ar miz-man da heul re ar miz a zeu.
Priziuo a vezo d'ar re a gavo da nebeuta 7 respont war 10.

Feiz ha Breiz

KLOERDI NEVEZ KEMPER

Lizer Aotrou 'n Eskob Kemper ha Leon da veleien
ha da dud fidel e Eskopti, evit goulenn sikour da
beurzevel e Gloerdi Nevez.

En dra ma skrivomp d'eoc'h al lizer-man, ema ar
gloareged o tizrei d'o c'hêr goz; deuet eo da veza kals
re vihan diouz an niver anezo : mall eo sevel d'ezo
o c'hêr nevez ma vezo aesoc'h d'ezo pedi, studia ha
chom yac'h.

Ar wazed a zo bet e Kemper, d'an 13 a viz gwengolo,
o deus gellet gwelet ar pezh a zo bet graet gand o ar-
c'hant.

Dre ma kresk al labourion e kresk ivez an dispi-
gnou, e c'hellit kredi hag, a-raok ar bloaz nevez hon
devezo peurc'houllonderet ar c'hef e oac'h bet ker
brokus da deurel arc'hant ennan, breman daou vloaz.

Ha setu perak e rankomp astenn an dourn d'eoc'h
eur wech all c'hoaz.

— N'hellomp ket kas hor beleien, da gesta, evid an
eil gwech, eus an eil ti d'egile, ha ne c'hedomp ket,
en taol-man eun aluzen ker brokus hag an hini genta.

Kredi a reomp, evelato e vezo eleiz a dud, eus hor
c'hêriou koulz hag eus hor parrezioù diwar ar maez,

hag a roio adarre eur prof bennak d'o beleien da zegas d'eomp.

Gand ar profou nevez-ze zoken, daoust peger bras e c'hellfent beza, ne vezo ket peurbaeet al labour.

Ha setu perak e c'houlennomp ouz an dud vat o deus arc'hant, da bresta, pesta d'eomp o arc'hant, heb interest, pe eviñ nebeud a interest.

Ar pez a c'houlennomp ouz an holl eo skoazell o fedennou.

Ni eus hon tu, a bedo a-unan gand hor c'hloareged eviñ kement hini a roio eun aluzen, bras pe vihan, d'hor sikour da zewel hor c'hloerdi nevez.

Hag e vezo lennet al lizer-man e holl ilizon ha chapelioù hon eskopti, d'ar zul warlerc'h ma tigouezo er barrez.

Graet e Kemper d'an 3 a viz Here 1931 da zeiz Gouel Santez Thereza ar Mabig Jezuz.

† ADOLPH,

Eskob Kemper ha Leon.

— *Kas an aluzennoù da : M. Pierre Sparfel, économe du Séminaire, 14, rue Verdelet, Quimper. C. C. 1-77-25, Nantes.*



E-tal an tan

Gant piou ar wirionez ?

1. — AR BREZONEG EO HOR YEZ.

A-viskoaz eo bet ar brezoneg yez ar Vretoned. E *Brezoneg* e komze ar Sent a zeuas d'hor bro, ganto, tud d'he fobla

A-rumm da rumm, e-doug kantvedou ha kantvedou ar BREZONEG a zo bet komzet gant hon tadou-koz.

Ar Brezoneg n'eo ket galleg trefoet eo ez eo.

AR BREZONEG A ZO EUR YEZ.

Ar brezoneg en deus eur yezadur (grammaire), koulz hag ar galleg.

Bez' en deus kement a c'heriou hag ar galleg.

E brezoneg e c'heller displega pep tra, koulz hag e galleg.

AR BREZONEG A ZO EUR YEZ VEO.

2. — ENEBOURIEN AR BREZONEG

A) Da genta, Gallaoued Paris, mistri ar vro, kement a lorc'h anno gant o galleg. Kenta, braoa, dudiusa yez ar bed, emezo.

Siouaz d'ezo !

Hag e fellfe d'ezo mouga an holl yezou all. Setu petra e lavare o rener koz, Poincaré :

« Quels que puissent être, en effet, la richesse, « la saveur, et le charme des dialectes germani- « ques, celtiques, basques ou romans usités dans « ses provinces, la France n'a jamais connu « qu'une seule langue nationale, celle dans la- « quelle trouve son expression, ce génie français, « fleur de la synthèse de nos particularismes na- « tionaux. »

Evit laza gwelloc'h hor yez her goloer a veu- leudiou !

N'eus ket a yez dreist d'eun all, avat ! An eil a dalvez eben.

Pep pobl he deus he himi. HA MAT EO SE.

Eur bobl kollet ganti he YEZ, A ZO EUR BOBL KOLLET GANTI HEC'H ENE.

Komprenit mat, Bretoned.

B) Bourc'hizien Breiz, lorc'h enno da c'houzout eur ger galleg muioc'h eget Yann Gouer.

Tud balc'h ha tud dizesk.

HAG AR VRETONED A SENTO ATAO OUTO ?

3. — BREZONEG D'IMP

Kement den a skiant a zo er bed a zifenn gwiriou ar yezou bihan. Hag ar brezoneg a zo unan anezo. Tud a bep stad.

Hon Tad Santel ar Pab a gemenn d'ar veleien komz d'ar poblou en o yez.

War an tu enep-krenn mistri Bro-Rusi a zesk o yez da boblou ar vro, *n'eus forz pegen munut e vent.*

He yez da bep brôad

AR BREZONEG DA VREIZ !

4. — BREZONEG ER SKOL HAG ER BUREOUIOU

Setu eur randonenn a glevomp bemdez.

— Lakaat ar brezoneg er skol, va Doue ! daoust ha ne ouzomp ket brezoneg a-walc'h a-benn bre- mañ. Galleg eo a rankomp da zeski. Da belec'h ez i gant da vrezoneg, paour kêz paotr ?

Breman marteze ne 'z in ket pell; met, lakit ar brezoneg e holl skolioù ar vro:

Grit ma ouezo an holl gargidi ar brezoneg, HOLL.

An noter, an archerien, kerkoulz ha resever an tailhou. OBERIIT

hag e WELOT

ha ne c'hellfer ket mont gant ar brezoneg e pep lec'h, *kerkoulz ha gant ar galleg.*

Da c'hortoz, avat, e vo ret stourm kalet, ha dreist holl e vo ret d'eoc'h koll ar pleg fall da veza prest atao da lipat seuliou an estren.

Nekwir, Bretoned ?

Bez' emañ ar gargidi en ho servich pe c'houi en o servich ?

MAB AR C'HOADOU.

Kantik Sant Kaourintin

Goulennit, abenn eil sul Miz Kerzu, deiz pardon Sant Kaourantin, ar c'hantik kaer savet en enor da batron Kerne, gand an Aotrou Giwldhou : 7 lur 10 gwenneg ar 100.

Skrivit d'her c'haout d'an Dimelled Torcol, 11, Rue Algerisas, Brest.

Kenteliou d'ar baotred Yaouank

Lavariou diskiant a vez skignet dre ar bed hag a zo ret teurel evez outo, ma n'eus ket c'hoant da veza kollet. Ar bagou, war ar mor, a dle tec'het diouz ar reier treitour, rak ma stokfent outo, ez afent d'ar goueled. An dud yaouank ive a dle en em ziwall diouz ar fals lavariou hag ar gwall-skoueriou evit chom war an hent eün.

En amzer goz, evel hirio, e veze tud o klask touella an dud yaouank hag e lavarent d'ezo evel ma lavarer breman : « Setu evidoc'h ar mare da gaout plijadur. Lakit eta war ho penn kurunennou roz, it da zansal, it da eva, it da c'hoari, rak piou a oar ha c'houi a vezo warc'hoaz e buhez. Breman eo emaoch en oad da danva dudi ar vuhez. Pa vezot koz, ne c'hellot mui. »

Setu aze eün diverra eus ar c'hanaouennou savet e pep lec'h evit an dud yaouank.

An dud yaouank a dle beza laouen, a dle gouzout c'hoari; gouzout kana, sklaer eo. Ne zere ket ouz tud ugent vloaz beza henvel ouz tud a bevar ugent vloaz. Trist e vije ar bed, ma ne vije ket gwelet bugale o redek, o lammet, tud yaouank o c'hoarzin, o kana.

Met bez ez eus plijaduriou onest, ha re all dizonest, hag ar re genta hepken a c'heller en em rei d'ezo; ar re all a zo difennet; ar re genta a ra vad, ar re all a ra droug, a zo noazus d'an ene ha noazus ar c'horf.

Talvoudus bras eo eta kemeret abred an hent mat ha tec'het diouz an hent a gas da goll. War an hent-houarn, pa vez an trêñ el linenn merket d'ezan, e tigozezo hep droug ebet e penn e veach. Mar d'eo

laket da vont dre fazi war eul linenn ha n'eo ket e hini, ec'h en em gavo marteze penn-oc'h-penn gant eun trêñ all hag e vezo kalz tud ma'hagnet.

Tud yaouank, sonjit mat, ha klaskit perak e selaouit fals-doktored ar bed hag e sentit outo. Daoust hag ar wirionez a zo ganto ? Ha bez ez int tud leal, eün ? Nann; gouzout a rit ne dalvezant netra, n'int ket tud da veza meulet, karet.

Met aon ho peus rak an dud yaouank eus hoc'h oad. « Petra a lavarint diwar va fenn. » Hag ez it d'o heulia, hag e rit eveldo. Gouzout a rit n'eo ket mat, met nerz-kalon n'ho peus ket da lavaret nann pa vez ret. Setu aze perak e weler kement a re yaouank oc'h ober poan ha mez d'o c'herent.

Eun den yaouank, war ar studi e Paris, Frederik Ozanam, breman ez eus kant vloaz, s skriva : « A-wechou, emezan, pa veze brao an amzer ha klouar, e kichen iliz santez Jenovefa, c'houec'h pe zeiz den yaouank, krog-an eil e brec'h egile, a veze o pourmen, oc'h sklerijenn al loar, war ar blasenn; komz a raent eus kalz traou, traou an Nenv, traou an douar, eus Doue, eus o c'herent, o mignoned chomet er gêr, eus o bro, eus ar bed holl. Ar Barizianed a dremene ebiou evit redek d'o flijadureziou ne gomprenent netra en traou a lavare an dud yaouank-ze; re uhel oant evito. »

Eus an divizou-ze etre tud yaouank kristen eo deuet konferansou sant Visant a Baol ha kals traou all o deus graet kement a vad er c'hantved diweza.

Kristenien katolik a dle sevel sounn o fenn, en em unani, en em glevet, rei an dourn an eil d'egile evit beza krenvoc'h hag harpa evelse ouz lazerien an onestiz.

Sant Aogustin, a-raok en em rei evit mat da Zoue, a heulie ive tud yaouank penn-skanv a rae goap eus kement a oa mat ha santel. « Mont a raen ganto, emezan, ha goulskoude n'edon ket eveldo, rak heug

am oa ouz o buhez direiz. Henvel' oant ouz diaoulou, o taga ar furnez, an onestiz, ar zantelez. »

Daoust hag ar re a ra ar vicher da c'hoapaat glanded ar vugale hag an dud yaouank, santelez sakramant ar briedelez, an doujans dleet d'an tad, d'ar vamm, d'ar beleg, daoust hag hevelep tud a zo da vezh selaouet. Petra a dalv o c'homzou ? Ha kemerout a rafec'h evit hoc'h hentcha, en eur c'hoad bras, eun den kollet gantan e benn ?

Pa glaskit o didamall dirak ho kerent a ra d'eoc'h rebechou evit beza bet ganto, e livirit : « Foll eo o spered. »

Perak neuze kaaout aon rak ar pezh a lavaront ? Perak ober eveldo, mont war o rondou ?

« Petra a vo lavaret ? » — A ! den yaouank dinerz ha digalon. Aon ec'h eus n'ouzout ket rak petra. Kerz ta gant da hent, dispont, sent ouz mouez da goustians, gra kement a c'houlenn diganez da Zoue. Hag an dud a lavaro e rez mat, n'o devezo nemet meuleud da rei d'it. Ma weles unan bennak oc'h ober an neuz da c'hoarzin, selaou : hennez, e goueled e galon, a zo marteze tost da drei ganez. Kendalc'h, hag e vezo gounezet, hag e raio evel dout. »

A-walc'h eo en eur barrez kaout eun nebeut tud yaouank dispont, ato prest da vont war a-raok, evit lakaat an traou da wellaat ha buan.

Er bloaz-man ez eus bet alies hano eus Montalembert, an hini en deus labouret ar muia, er c'hantved diweza, evit liberte ar skoliou kristen. P'edo war ar studi eh eur skolach bras eus Paris, n'oa ket ouspenn uhan dre ugent oc'h en em ziskouez kristen. « Pa z' ae unan bennak eus ar skoliou-ze, emezan, en eun iliz, an dud a veze ken souezet ma sellent outan. »

Lavaret e veze en amzer-ze oa graet gant ar relijion e Frans.

Ha setu ma voe gwelet a-nebeudou gwellaenn o tont er vro. Warlerc'h Montalembert, Ozanam ha tud yaouank all dispont ha direbech, skolaerien a gantchou hag a villierou a ziskoueze doujans evit lezennou Doue ha re an Iliz, a zirede da zelaou prezegennou an Tad Lacordaire e iliz-veur Itroun-Varia Paris, hag a rene eur vuhez e gwirionez kristen. Hag en deiz a hirio, e skoliou brasa Paris, ez eus kalz hag a zo kristenien eus ar re wella. Eur pennad zo e teuont holl a-unan d'ober o Fask er memes dervez en eun iliz eus Paris, hag o niver a gresk bep bloaz.

Met e parrezioù Breiz, war ar maez, n'eo ket henvel. Epad ma weler gwellaenn o tont er c'heriou bras, ni war ar maez, e Breiz, a zo o tiskenn, o vont war fallaat. An dud yaouank o deus evel mez oc'h ober evel o zadou, mez o tiskouez ez int kristenien. Pa vezont meur a hini bodet, pep seurt traou diskiant a vezo lavaret eneb ar relijion, eneb an onestiz, hag hini ne gredo sevel e vouez da zislavaret. Ma tremenont dirag eur groaz, dirag eur beleg, ne zaludint ket, rak aon o deus an eil rag egile; ma vijent o-unan, e rafent, met gant re all, ne raint ket; aon o deus rag eur ger, eur mousc'hoarz. Oh ! krenerien, setu aze penaos e vez kollet eur vro.

Petra zo d'ober ? — Kemerit skouer war Montalembert, Ozanam ha re all, ha bezit kristenien en ho komzou, en hoc'h oberou, er gêr hag er maez eus ar gêr, dirag an holl.

Eur wech, en eur skol vras eur Paris, d'ar mare m'oa enni kalz tud yaouank hep relijion, e voe kavet en eur zal eur chapeled. An hini her c'havas a vodas e gamaraded er porz bras. Ar chapeled a voe laket a istribilh ouz skourr eur wezenn. An hini en doa her c'havet a lavaras gant eur vouez goapaüs... Kamaraded-an neb ac'hanoc'h en deus kollet e chapeled, dont d'e gemeret. »

An holl a zell, o c'hedal kaout lec'h da c'hoarzin. Met unan a dosta, a grog en e chapeled hag a lavar d'an hini en deus her c'havet : « Trugarez. Ar chapeled-ze a zo bet roet d'in gant va mamm, hag abalamour da-ze her c'haran kalz. O veva eur vuhez kristen, ne gav ket d'in em bije dizenoret ar skol. » Hag e lec'h c'hoarzin, an holl a lavaras : « Mat eo ! setu aze unan ha n'eo ket eur c'hrener ! » N'oa ket eur c'hrener, ha n'e ket eun azen oa ive, rak ar plas kenta a c'houezas da fin ar bloaz.

Eur jeneral o tremen dre ar porz hag o veza klevet petra a oa c'hoarvezet, a dosteas hag a lavaras d'an den yaouank : « Kendalc'h evelse. An neb a oar derc'hel d'e feiz ha d'e Zoue, a ouezo ive difenn e vro ha mervel eviti, ma vez ref. »

Mez d'ar grenerien !

Y. U.

Daou levrig nevez e yer Gwened

FEST EZO : 8 real dre er post.

BUZUL FUR : 4 real dre er post.

Distal bras dre gant Niverenn.

O goulenñ ouz an oberour, an A. Loeiz Herrien, Renner
Dihunamb, St-Karadeg, Henbont. C/C 241-28. Naoned.

Kenteliou d'ar merc'hed yaouank diwarbenn an dimeziou

Mab eur vignonez d'in, — Perig a vez graet anezan, peurvuia, daoust d'e bemp bloaz war nugen, — a zo bet ouz va gwelet, pemzek deiz a zo, ha raktal e stagas da gomz d'in diwarbenn ar pennad-skrid diwez a lakis war *Feiz ha Breiz* miz du :

— Mardouen, va noun, emezan n'eo ket gwall aes heulia ho kenteliou ha kaout an evnig dispar e livirit hano anezan; va alia a rit da zimezi hag en oad d'hen ober emañ; klask a ran, dre ma 'z an ha ne gavan maouez ebet !

— : Maouez ebet, kanfart ! ya ! re figus out !

— : Pa vez meneg da ober an dibab-ze ne vezer morse re figus, rak evid ar vuhez eo ha ne fell ket d'in degas du-man da verc'h kaer eur foranerez pe eun danserez; va kamarad Janmar a lavare d'in, n'eus ket pell, en devoa klevet gant tad e hini goz e oa gwelloc'h marc'had sevel dek krouadur eget kaout eur vaouez evel an hini en deus bet e vab hena : teuzi a ra an arc'hant etre he daouarn.

— : Va faotr kaez, emeva, estreged ar seurt-se a zo, evelato; merc'hed fur a zo c'hoaz, a drugarez Doue : Sell ouz Oliv, ouz Jannedig, ouz Renea...

— : Oliv ne daol evez ouz netra; Renea a zo berr he spered ha Janned n'eo ket devot ha c'houi a gav d'eoc'h emacun-me o vont da strani gant merc'hed en doare-ze !

— : Eur filhorez am eus, Per, hag he devezo an holl vertuziou... met gedal a ranki, rak n'eo nemet c'houec'h pe zeiz vloaz c'hoaz.

— : Goap a rit ac'hanoun, va noun, eme Berig, droug ennan ha koulskoude... ma karc'fec'h...

— : Ma karfen petra ? kristen paour, re vuan da fall-galoni !

— : Skriva eur pennad all da ziskleria d'ar merc'hed yaouank pegement a c'haou a reont outo o-unan o vont da zansal evel ma reont hag o stlepel kement a arc'hant ha ma reont e dilhad kaer; e lec'h chacha sellou ar baotred vat warno, ne reont nemed ober heug d'ezo. En han Doue lakit moula eur ger bennak evelse.

— : Mat ! emeve, hen ober a rin rak ar wirionez a zo ganez.

Perit n'eman ket e-unan, o sonjal kement-se, merc'hed keiz ! Tri bloaz a zo em oa lennet eul lizer kaset gand eur mortolod d'e vreur hag e verke ennan kement-man : « Daoust ha ker sot eo atao plac'hed yaouank ar barrez ? Ne zonzont nemed en dansou hag en dilhad kaer. Na te, na me, Job, n'hon eus ezomm eus ar seurt-ze ! »

I. — An Dansou

Dansou ha dansou a zo; e Breiz gwechall e oa dansou dereat ha kaer, met re v Rao int evit plijout da yaouankizou hon amzer; an dansou a raer breman, en tiez-dans, a zo plijadureztou savet gand an diaoul evit koll an dud; bez ez int eur prosesion da vont d'an ifern hag e penn ar prosesion-ze eman Paol Gorniok ! Evel ma vez distrujet eur parkad gwiniz gand ar c'hilheien-radenn, evelse, e vez distrujet eur barrez gand an dansou ! Sant Augustin a lavare : « Pec'hed bras eo labourat da zul, met pec'hed an danserien a zo kals gwasoc'h c'hoaz ! Sant Yann-Vari Vianney, person Ars, en devoa klevet gand an diaoul, e-unan, ar stad a rae eus an dans : « Petra leveres eus an dano ? » en devoa goulennet outan, eun dervez, ar person santel. Ha Satan a respontas : « Evel eur voger tro-war-dro d'eul liorz, ema an diaoulou tro-war-dro d'an danserien. »

Eun tad fur a lavare d'e vrec'hed yaouank : « Terri ! rafen ho tivesker ouzoc'h, kentoc'h eget rei aotre d'eooc'h da vont da zansal », hag eur skrivagner, laosk en e, feiz, koulskoude, a roe ali d'eur vamm war ar poent-se :

« N'it ket da lezel ho plac'hed yaouank da vont d'an dans m'ho peus c'hoant e chomfont glan, sentus ha mat. »

Viktor Hugo, ar barz gall, a lavare :

Kals gwelloc'h e vije,
Kaout truez ouz eur paour,
Rei ar peoc'h d'eun ene,
Entent ouz eur c'hlanvour,
Eget d'erc'hel goulou,
Pad an noz, en eur zal
Da vaga gwall-youlou
Tud skanv-benn o tansal !

Marvailhou tud varo, pell a zo, eo ar re-man, met marvailhou tud speredek int ha ma weljent ar pez a dremen, en hon amzer, e vije kaletoc'h c'hoaz o barnedigez war an dans.

II. — An dilhad kaer

Ar merched a vez troet war an dans a vez ivez, peurliesia, troet war ar ficherez ! kaout a rankont dilhad kaer, dilhad nevez, bep tro, da vont da zansal hag ar gwenneien, pe ar paper, da vihanan, dastumet gant poan a vez foranet evid ar blijadur. Mil luriou a vez dispignet evelse, bep bloaz, hag ar gerent n'o deus netra da lavarout. Klevet em eus hano eus eur micherour hag en deus savet eur benherez diboell ha digalon; evit ma c'hello ar rouanez a c'hiz nevez-se, beza gwisket, hervez he faltazi, e rank an tad labourat noz-deiz; n'en deus ehan ebet ha ma fell d'ezan diskuiza eun tammig, da zul, prena eun tammig butun, trinka ouz eur c'hamarad e vez rebechet ar gwenneien-ze d'ezan, rak dont a ra ar galon da galedi gand an arc'hant ha gand ar blijadur. Hounnez ne ra ket fors evit gwelet he zad och en em laza o labourat; gant ma c'hello kaout dilhad re v Rao diouz he renk ha mont da zansal eo mat ar stal ! Ne wel ket he deus deveriou e kenver he zad, he mamm hag he nesa; ne zonzj morse e dever an aluzen.

Eur wreg yaouank, eur vaouez a feiz hag a galon, a deuas eun dervez da gaout he ferson : « Aotrou Person, emezi, va gwaz he deus degaset d'in, eus a Bariz, eur

vantell a 1.200 lur; sonjit 'ta ! 1.200 lur ! Gand ar prize, lur evit lur, e c'heller kaout 1.200 lur vara; re bounner e vefe d'am diouškoaz eur vantell a 1.200 lur; he c'haset em eur en dro ha setu 1.200 lur d'eoc'h da ober vad er barrez ! »

Ped eus ar merc'hodennou a weler breman o redek an hentchou a zo gouest da ober kemend all ? Ne zellint ket pegement da zispign evito o-unan, met n'o devezo ket eur gwenneg da rei d'ar paour, d'ar paour a zo evel Jezuz-Krist, war an douar, p'eo gwir en deus lavaret : « Napun am oa hag oc'h eus roet din da zebri; e noaz edon hag oc'h eus va gwisket ! » Ne zonzont ket, ar pennoù goullo zo anezo, e vezo goulennet eun deiz diganto pe seurt implij o devezo graet eus o danvez, roet d'ezo evid ober vad, eus o zreid, roet d'ezo evit redek war zikour o nesa, eus o daoulagad hag eus o daouarn a lakont da dalvezout evid ober gaou ouz o ene hag enec'h ar re a zarempredont.

C'hoant o deus da zimezi, met, n'ho pet ket aoun. Tapout a c'hellint eul lampoun bennak, inarteze, en o rouejou, met ne vezint morse diouz doare Bretoned vat, evel Perig, hag eun niver bras a re all a glask evit sevel o bugale mammou a feiz, evel o mammou o-unan a zalc'ho kempenn an ti hag a vezo piz war an arc'hint gounezet, nemet tro o defe da ober aluzen; n'eo ket ouz ar c'hinklerezou eo e sell ar baotred yaouank a-benn met ouz vertuziou ar vaouez. Warlerc'h eun doktor eus an amzer goz, eun den yaouank a lavare d'in n'eus ket pell : « Pa 'z an d'ar foar da brena eul loen e sellan mat outan; klask a ran gouzout e arvezioù, ma 'z eo reiz ha mat da labourat, met ne zellan ket eur begad nag ouz an dibr a zo war e gein nag ouz ar c'habestr a zo war e voue; pa zibabin eur vaouez e klaskin gouzout da genta ma 'z eo devot ha da c'houde ma 'z eo mat da boania, met ouz he dilhad ne rin ket eur zell, nemet re zic'hizet en holl e vefe ha ma 'z eo e troin kein d'ezi raktal ! »

Da gloza diweza kentel ar bloaz-man e lakan aman gourc'hemennou ar plac'h yaouank ha mat e vije d'ar merc'hed a venn dimezi o deuki dindan evor hag o lakat da dalvezout.

III. — Gourc'hemennou ar plac'hed yaouank

- I. — Plac'h yaouank a-raok dimezi,
An oad d'hen a c'hedi.
- II. — Abredik eo d'it klask kaout gwaz,
A-raok seitek pe driouec'h vloaz.
- III. — War roudou da vamm e kerzi
Ha, fur, en he serr, e kreski.
- IV. — Heb asant da dud ne gredi,
Gwech ebet, paotr darempredi.
- V. — Danvez eur gwaz mat p'her c'hlasiki,
N'eo et en davarn her c'havi.
- VI. — Nag en davarn, nag en ti-dans,
An tiez-se 'zo eur viltans.
- VII. — Difzians vras a gemeri
Eus ar c'homzou flour a glevi.
- VIII. — Ouz komzou flour diouall ervat :
Ar c'haz a guz ivin e droad.
- IX. — Eur c'hristen mat a gemeri,
Gantan e c'helli dimezi.
- X. — Hag en dro d'ho taol, bugale,
A c'hoarzo ouzoc'h, hep dale !

TINTIN ANNA.

Baleadenn ha prederiadennou

Edon an deiz all o vale gant eur vaouez yaouank ha gant he gwaz.

E Bro-Leon e oa.

An heol, skuiz gantañ da vouza, a bare en oabl glas digoumoul hag a skuilhe warnomp e van-nou madelezes. Ar c'helien a leunie peoc'h an endervez gant o safronez diastal. An hent terdouaret a skede dirazomp evel eur meleour. A-hont, penn begek ar c'hloc'hdi a save uhel e-us d'ar gwez ha d'an tôennou glas. Hag a-wechou e teue betek ennomp, douget gant eur mouch-avel, diskan heskinus kanaouenn diweza Paris. Rak, er gêrig koz-se, ma 'z aemp war-du enni, e oa hirio trouz ha cholori ha plijadur e-leiz : deiz ar pardon e oa.

A-hiniennou pe a-vandennou e stage an dud da vont d'ar gêr. Unan bennak, evet gantañ kloukadennou re niverus, a horjelle war e ziouhar en eur zifreta e zivrec'h.

Ar vaouez yaouank, hag hi eus ar vro, a oa ganti eur ger hegarat evit pep-hini.

D'eur plac'h yaouank, mistr gant he c'hoef gwenn, a ziskenmas a-ziwar he marc'h-houarn da zivizout eur pennadig ganeomp, e voe komzet e galleg.

D'eur paotr yaouank, eun tammig tommet e benn gantañ, e voe lavaret eur ger bennak e brezoneg.

Gant eun den e karg ha gant e wreg en em gavas ganeomp e-kichen ar vourc'h, ne voe, evel just, nemet galleg.

Hag o tremen e-biou d'an ti ma-chom ennañ eur vaouez koz hanter-diot e tregernas a-nevez silabennou sklintin ar brezoneg.

Soñj a zeuas d'in e skeudenne splann an holl zivizadennou-se stad truezus hor yez.

Neuze, e savas c'hoant ganen da lavarout d'ar vaouez yaouank :

« Itron gaez, lorc'h a zo ennoc'h, marteze, abalamour m'hoc'h eus komzet brezoneg gant daou pe dri den. Kavout a ra d'eoc'h hoc'h eus graet ho tlead e-keñver yez ho pro. Ha koulskoude, o komz brezoneg gant hemañ ha galleg gant hennez, d'as-megañsi ar brezoneg ne rit ken, hag a zo gwasoc'h, e lakait ar re all d'hen disprijout. Rak atao e vez rannet an traou er memez doare : d'an dud uhel, d'ar pennou bras e vez servijet tammouïgou lipous ha meuziou eus an dibab, d'ar beorien, d'an dud vunut a zo azezet e-traoñ an daol, a-walc'h eo evito kaout ar pezh a vez lezet gant ar re all. Eun amzer a zo bet ma c'helled ober evel-se ; an amzer-se n'ema mui. Tud ar bobl n'int ket sotoc'h eget ar re all, n'int ket heñvel ouz an delwennou ma komz ar salmour anezo : daoulagad o deus da welout ha ne welont ket ha diousskouarn da glevout ha ne glevont ket. Ha setu : ho klevout a reont o komz e galleg ouz ho kwaz, ouz ho pugel, ouz ho mignoned, a zo kêriz evelloc'h. Ha kounnar a sav enno p'ho kwelont o tont dave-to e brezoneg ; ken gouest int, war o meno, da gomz galleg eget ar re all, ha re wir eo evit eun darn vat anezo. « Hounnez, emezo, a gav d'ezi ez eo mat a-walc'h ar brezoneg evidomp pa n'her c'hav ket mat eviti hêc'h-unan ! » Setu petra soñjont. Ha setu perak ez eo ken diaes a-wechou lakaat tud 'zo da respont e brezoneg. Evel-se e vez feuket an dud ganeoc'h ha daoust d'eoc'h. Ganin ez

eo c'hoarvezet kemend-all. Va c'hredit, Itron, n'eus nemet eun doare da zirouestla ar gudenn evit ar vrogarourien : *Argas ar galleg, degemer ar brezoneg er gêr, rei d'ezañ digorr ; re bell ez eo bet serret an nor outañ.* Komz brezoneg gant ar re a garomp, gant hor bugale dreist-holl, en doare ma vezo *ar yez n'eus nemeti en tiegez, ar yez ma reomp ganti da zeski o fedennou d'ar vugale, da c'houre-hemenn d'ar vatez kenkoulz ha da gomz diwar draou uhel etrezomp.* Pa vo ar brezoneg hor gwir yez, aesoc'h e vo d'eomp prezek d'an dud da zerchel d'ezañ. Rak hor skouer, ho skouer-c'houi, Itron vat, a dalvezo kement ha mil prezegenn c'houllo. »


Ne lavariz netra, avat, gant aon da feuka an itron yaouank a gerze, ken dibreder ha tra, war « hentou Breiz », en eur gomz galleg ouz he gwaz.

Hag o tevel ne ris ket kennebeut va dlead e-keñver yez va bro.


Miz gwengolo 1931.

Paotr e vragou bras,

An douar^o 'zo kousket




An dou - ar 'zo bre - man kous - ket, ste - re - den -



net - an nen - vou, Gouet du, an noz a zo le -



det war skour - rou gwez ar c'hoa - dou, An dou - ar



'zo bre - man kous - ket, Din - dan an nenv zo si - ou - l'et.

Pell, pell, du-hont, e vez klevet
Mouez aelez o kana,
Vid eur bugel 'zo gourvezet
En e gavell o lenva.
Ar bugel-man nevez ganet
Eus an nenv a zo diskennet.

Klevit, klevit, war ar maeziou,
Eskell gwenn-kann o trouza ;
Klevit, klevit, kaera soniou
A c'hell an aelez kana.
Kanit aelez ho Klória
Ganet Jezuz, Alléluia!

Ezans hag aour, myrrh ho kalon
Kinnigit holl d'ho Salver,
Ho kalon eo an donezon
A c'houlenn ho Tasprenner.
Kanit, kanit ho Klória
Ganet Jezuz, Alléluia!

AN EOSTIG.

O NOZ SIOUL

O noz si-oul, o noz san-tel, Ne gie-ver o se-
 vel trouz e.-bet war an dou-ar, kous-ket ki-chen da
 vamm, kousk, bu-gel ka-ret, kousk en noz si-ou-
 lêt, kousk en noz si-ou-lêt.

O noz sioul! o noz santel,
 Klevet 'vez kan Aeled,
 D'ar bastored, dihun, souezet,
 Eur c'helou evurus 'zo kaset :
 Hor Zalver 'zo ganet.

O noz sioul! o noz santel,
 War golo e gavell,
 Na peger c'houek e vouse'hoarz Jezuz
 Redek a ra war e vuzell ruz
 Eur c'hoarz madelezus!

Noz! n'eo ket noz, met deiz gwiric'h.
 Digorit ho kalon.
 Kristenien da dan ar garantez
 Adoromp Jezuz gant levenez
 Tre ma kan an Aelez!

AR VOCH RUZIG.

Pedenn da Zant Kaourintin

Sant Kaou-rin - tin, Pa-tron Ker - ne, Di - oual - lit
 mat hor bro; Grit ma vi - rimp le-zenn Dou-
 e, Be - teg eur ar ma-ro. C'noui zo bre-mangand
 an Ae - -lez, Ske - dus ho ku - ru - nen : Ni
 zo er bre-zel, Di-dru-ez, er boan hag en an-ken. Sant Kaou-rin-

Diskan

Sant Kaourintin, patron Kerne,
 Diouallit mat hor bro ;
 Grit ma virimp lezenn Doue
 Beteg eur ar maro !

I

C'houi zo breman gand an Aelez,
 Skedus ho kurunenn ;
 Ni ' zo er brezel didruez,
 Er boan hag en anken.

II

Eus an ifern eo deuet Satan
 Evit mouga hor Feiz ;
 Teurel a ra moged ha tan
 E pep korn eus a Vreiz !

III

An dud n'o doa ket kalon greny,
 A zo dija d'an traon ;
 Mil ha mil all 'gouezo ive
 Ha kreski 'ray hor c'haonv.

IV

Ar groaz, an iliz, an aoter,
 A gren betek koueza ;
 Ma pad re bell ar barr-amzer,
 Setu kollet pep tra.

V

E Kerne, menez ha traonienn,
 Zo d'eoc'h a berz Doue,
 Glepet int bet gant ho c'houezenn ;
 Dalc'hit start d'ho leve.

VI

Ho prec'h a zo dizec'het
 Mes bepred eo nerzus ;
 Dirazi e ranko tec'het
 Enebourien Jezuz.

VII

Doue da dad, c'houi da batron,
 Bardoz d'o ene,
 Mari da Vamm ha da Itron,
 Setu c'hoant tud Kerne.

Y. WILHOU.

Leor an A. Gwilhou

O deus rakprenet al leor e miz du :

An A. N. Madeo, 56, rue de la République, Brest.....	1
An A. Floc'h, Kure Lok-Maria-Plouzane.....	3
An A. Even, noter e Landreger.....	12
An A. Renan Hall, Keroman, Ploumoger.....	1
An A. J. Bodenes, Keriell, Plougerne.....	1
An A. Jak Leon, Plougerne.....	1
An I. Le Gars, Kerreffren, Landrevarzec.....	1
An A. Couloigner, Kure Lesneven.....	1
An A. P. Mesangroaz-Penker, Gwinevez-Lokrist....	1
An A. F. Perrot, Lannou, Plouganvelen.....	1
An Dell Y. Martin, skol gristen Gwikar.....	1
An A. F. ar Bris, Pennhavre, Goulc'hen.....	1
An A. Godu, San Calisto, Trastevere, Roma, 14.....	1
Leoriou rakprenet betek-hen : 843 + 26 = 869.	

Lizer eur rakprener :

Pl., 16-11-31.

Aotrou Rener,

*N'eo ket gant plijadur eo e skrivan d'eoc'h al lizer-man,
 met gant dispiljadur, o sonjal emañ va unan e... o kas
 va hano evit prena leor an A. Gwilhou.*

*Nevez deuet oun c'hoaz eus a zoudard ha setu perak
 emañ eun tamm divezat oc'h ober va goulenn :*

Bretoned eleiz ' zo e Breiz,

Bretoned, war o meno;

Pe vezont kortet piz ha reiz

N'eus ket eur mil anezo !

P. M.

*Eur wirionez kasaüs, ha ne c'hell den mont en he eneb,
 a ziskleri hor mignon P. M. en e lizer : ar Vretoned vat
 mar d'int bet hadet stank a zo diouañet rouez.*

*Da vihana ar re o deus c'hoant da lakat c'hoaz o hano-
 war daolenn a enor Breiz-Izel o deus amzer d'hen ober-
 keit ha ma-ne vezo ket peurvoulet al leor nevez hag hen-
 man, diouz ma lavar ar mouler, a zo labour gantan daou
 pe dri miz c'hoaz.*

*Degas an hanoioù d'an A. Perrot, Rener Feiz ha Breiz,
 Scrignac, ar re o deus c'hoant da brena al leor a-raok
 ma vezo moulet : degas an hano heb an arc'hant.*

Skolig an Emglevadeg

*Clair, souple, riche, exact, tel est le pur breton :
N'en ayons qu'un, mais qu'il soit bon!*

I

Eur ger araok, war ar brezoneg gwejall

Klevit, mé ho ped,
Eur werzig 'zo groet,
'Zo grêt argentou
D'eoc'h-hu, Bretoned,
'Vit ho yez karet.
Goude 'r gwerzennou
E vo notennou
War 'n hini 'oa bet
En holl Vreiz skrivet
(Komz plên ha rimou)
Gant ho kourdadou
Hanter-mil bloaz so
Bremañ, pe war-dro.
O keverata
Gand ar yez koz-ma
Rannyezou ho pro
A glevêr hirio,
C'houi, na petra ta,
Evelse 'hallo

Barn reiz entrezo;
C'houi 'hallo 'stase
Dibab etreze
Ha war dra pe dra
O difazia
An eil dioc'h eben
(Rak n'eus yez na dén
A ve hep nep si) ;
Neuze a-zevri
O feurunani
Stag-ha-stag a-grann,
Hep gwall da hini :
Madou pep-hini
'Vo ténzor an holl.
Dre zerc'hel a-stroll
Ne vint ken ar-goll :
Unvaniez 'ra Nerz
'Vit chóm sounn ha serz
Hag ober pep berz.

Hervez geriou-stur « Breuriez-veur
Ar brezoneg » : *War-rók bepret!*

Kerzomp, breudeur,

En hent ar Wirionez hag ar Mad, a-gevret ;
A-unan gant « Kor ar Varzed »
Youc'homp : *Ar Gwir eneb ar bed!*

La Petite Ecole de l'Entente Commune

*Clair, souple, riche, exact, tel est le pur breton :
N'en ayons qu'un, mais qu'il soit bon!*

I

Un mot, d'abord sur l'ancien breton

Écoutez, je vous prie, un petit chant qui a été fait, qui a été fait dernièrement pour vous, Bretons, en faveur de votre chère langue.

Après les vers, il y aura des notes sur celle qui était écrite dans toute la Bretagne (prose et rimes) par vos aïeux, il y a cinq cents ans maintenant, ou à peu près.

En comparant avec cette ancienne langue les dialectes de votre pays qu'on entend aujourd'hui, n'est-ce pas, vous pourrez ainsi juger exactement entre eux; vous pourrez, de la sorte, entre eux choisir, et sur tel et tel point les corriger l'un par l'autre (car il n'y a homme ni langue qui soit sans nul défaut), et alors avec soin les unis ensemble d'un solide lien, sans dommage pour aucun : les ressources de chacun seront le trésor de tous.

En se tenant réunis ils ne seront plus en danger : l'Union fait la Force pour rester fermes, droits, et réussir en tout.

Suivant la devise de « l'Académie Bretonne » : *Progrès constant ! marchons, frères, ensemble sur la voie de la Vérité et du Bien; d'accord avec le « Chœur des Bardes. », acclamons Le Vrai en face du Monde !*

II

War trede oadvez lavar Breiz-Izel

E *Feiz ha Breiz*, 'n eur barzoneg
Hanvet *Skol an Emgleo*, danevellet em eus.
Arlène, penôs, 'voe dre reuz
E pevar zamm rannet ar brezoneg
Goude diwez e grennamzer ;
Ha pep tamm dispennet e briz-vrezonegou,
Dister vruzunigou ;
'Vel gwejjall e Babel lorc'h ha dizunvander
A flufas stank ha stank eur bern trefoedachou...

'Vit kompeza stuman ar skridou
Hag o sklerât d'ar paourkêzik lenner,
E voe eul labour tenn graet gand an Tad Maner,
N'oa ket koulskoude eur Breizad.
War e lerc'h eur gwir Leonad,
Ar Gonideg, ha re all, gredus mat
Er park-se a boanias
O lezel d'ober kalzik c'hoaz...

Gwall-rannet etrezo, e derou hon c'hantved
Gouryezigou Gwened
O deus rôet ar skouer
D'em unvani.

Neuze e voe gand an *Emgleo*
Kenreizet rannyezou Leon, Kerne, Treger.

Bet pell dispartiet, ar peder c'hoar emberr
'Vo dre 'n *Emglevadeg* c'hoaz a-unan; poent eo
'N em adklevout 'trezomp, Breiziz Gwened, Kerneo,
Ha Treger ha Leon;
Ur feiz, ur yez, ur galon,
Eur c'hiz koz : ar c'hiz wirion!

Ur brezoneg reiz 'zo trawalc'h
E skridou ha komz 'n holl Vreiziz ;
Eur gaer a yez: fraez eo, sklêr, gwevn, puilh ha resis,
Pa vez kempennet mat — eno emañ an dalc'h.

II

Sur le troisième âge de la langue bretonne

Dans le *Feiz ha Breiz*, en un poème appelé l'École de l'Entente, j'ai raconté l'année dernière comment le breton fut, par malheur, divisé en quatre morceaux à la fin de sa période, et chaque morceau brisé en menu parlars bretons, misérables miettes; comme jadis à Babel l'orgueil et la désunion firent pulluler un tas de patois...

Pour simplifier l'aspect des écrits et les rendre plus clairs au pauvre lecteur, un travail ardu fut accompli par le P. Maunoir, qui n'était pourtant pas Breton. Après lui un vrai Léonard, Le Gonidec, et d'autres, avec un zèle pieux labourèrent ce champ, en laissant encore pas mal à faire...

Très divisées entre elles, au commencement de ce siècle les variétés du vannetais ont donné l'exemple de s'unir.

Alors l'Entente coordonna les dialectes de Léon, Cornouaille et Tréguier.

Depuis longtemps séparées, les quatre langues sœurs vont s'unir de nouveau, grâce à l'Entente Commune. Il est temps de rétablir votre accord, Bretons de Vannes, de Cornouaille, et de Tréguier et de Léon. « Une seule foi, une seule langue, un seul cœur », cette vieille coutume est la bonne coutume!

C'est assez d'un pur breton, dans le langage et les écrits de tous les Bretons; c'est une belle langue : elle est nette, claire, souple, abondante et précise, quand elle est bien maniée — là est le grand point.

III

Tri lavar skiantek evid ober mad

D'an Aotrou Abad P. Er Go.

I

Experto crede Roberto.

Kentañ a lavar Skiant-vat
Da neb na oar ket labourat :
— Digand ar gof desk goveliat! —

II

Primum non nocere.

Kentañ a lavar Skiant-vat
D'al louzaouer : — Diwall lakat
Louzou'rafe d'an droug gwasât! —

III

Ne tiron pas sur nos troupes!

Kentañ a lavar Skiant-vat
Da bep brezelour : — Arabat
Tenn war da genseurted, er gad! —

IV

Penn ha Lost ar C'haz

*D'an Aotrou Markiz an Estourbeillon, bet kannad ar
Morbihan, saver ha Penrener Kevredigez-Vreiz.*

Eur c'haz rous ' c'hoari gand e lost, 'zo teñv
Ha hir, blêvet flour, elfet gwevn ha kreñv :
Gwech war-c'hed, evel pa ve ' logota,
' Ra van da gousket ken sioulik ha tra,
Ha prim ' tól warnañ e bao; war-du 'n neñv
Primoc'h savet sounn, goab a ra!

III

Trois paroles sensées

A M. l'Abbé P. Le Goff.

I

Experto crede Roberto.

Ce que dit d'abord le Bon sens
A celui qui ne sait pas travailler :
— Apprends du forgeron à forger! —

II

Primum non nocere.

Ce que dit d'abord le Bon sens
Au médecin : — Garde-toi d'employer
Un remède qui aggraverait le mal! —

III

Ne tiron pas sur nos troupes!

Ce que dit d'abord le Bon sens
A tout guerrier : — Il ne faut pas
Tirer sur tes compagnons d'armes, au combat! —

IV

La Tête et la Queue du Chat

*A Monsieur le Marquis de l'Estourbeillon, ancien
député du Morbihan, fondateur et Président de
l'Union Régionaliste Bretonne.*

Un chat roux joue avec sa queue, qui est épaisse et
longue, avec des poils doux au toucher, des nerfs sou-
ples et forts. Tantôt aux aguets, comme s'il chassait les
souris, il fait mine de dormir bien tranquillement; et
vite, jette sur elle sa patte; elle, plus vite encore, vers
le ciel se relève, et se moque de lui!

Gwech, p'hen gwel, hañval ouz ur pikol naer
 Gourvét 'n e gichen er yeot, disonj kaer,
 E lamm d'hen tapout ha d'hen danta start :
 Hogen c'hoaz c'houit war e daol trubart :
 Endro, war e gein e lamm al lost taer.
 Pebez ijin 'zo 'barz er seurt kañfard !

Rouzig, 'vat, en deus ive trôidell ;
 'Vit trec'hi, 'lakay nerz ha korvigell.
 Heñ ' red war e lost a-herr, 'vel barrwent ;
 Al lost dirazañ, herrus-dall, kerkent
 A dec'h ; hag o trei 'giz eur gornigell,
 Penn ha lost a ya, a ya 'r memes hent.

Pa vez skuiz eun tu a kornigellat,
 Kornigellat 'ra dre 'n tu all tima t
 'Vel gwilenn hedro pa dro n' aveliou ;
 Tro-distro, e lost pa ra 'r penn troïou
 'Rôk pe 'dreñv, a dro war un dro dalc'hmat ;
 Ken ' gouezont o daou faez hep ken fiñvou...

Penn Rouzig 'zo deut mezevellet holl
 Kouls ha pa vije skôet gand an heol ;
 Al lost ne oar ket nemeur petra ' sant,
 'N eil ouz egile ez int drouk-kontant ;
 Ken 'mañ genou 'r c'haz, 'n e vrouez dinoll
 Krog e beg al lost gand eur gwall-dôl dant !

Eur skrij a sav skiltr : ar penn 'n eus dantet,
 Ar penn eo a glemm ! Al lost 'lâr mann 'bet,
 'Met soñjal : — Ma-zro-²-deuy-abarz-nebeut :
 Flipad 'vit dantad ! — Ouz 'n em astenn reut,
 Wa 'rar min danter en deus diskarget
 Eur c'houistad, a strak 'vel en tan keuneud.

Eur skrij c'hoaz, ha fuc'h... hag eur fustad all
 War skoarn deou Rouzig 'zo deut da strakal ;
 Ken stank ha grizilh, lostadou 'bep tu
 A gouez war e benn, bloñset du ha ru ;
 Eut lagad tarzet ; euzus o viaoual
 Penn-follet ha fuc'h-difuc'h, gant trefu

Tantôt, quand il la voit, pareille à un grand serpent
 étendue à son côté dans l'herbe, insouciance, il s'élançe
 pour l'attraper et la mordre dur ; mais il rate encore
 son coup perfide : la queue se redresse vivement sur son
 dos. Que de malice dans cette gamine !

Mais Rouzig est malin aussi : pour vaincre, il em-
 ploiera forcé et ruse. Il court sur sa queue, impétueux
 comme un coup de vent ; la queue devant lui d'un élan
 aveugle s'enfuit ; et tournant comme une toupie, tête et
 queue, vont le même chemin.

Quand il est las de virer d'un côté, vite il vire de
 l'autre côté, comme une girouette tournoyante quand le
 vent tourne ; tournant et détournant, sa queue, quand la
 tête fait des tours par devant ou par derrière, tourne
 en même temps toujours ; si bien qu'ils tombent tous deux,
 accablés, sans plus bouger.

La tête de Rouzig est devenue toute étourdie, comme
 si elle avait eu un coup de soleil ; la queue ne sait guère
 ce qu'elle sent, ils sont mécontents l'un de l'autre ; si bien
 que la bouche du chat, dans sa colère furieuse, mord le
 bout de sa queue, d'un terrible coup de dent.

Un cri retentit, strident : c'est la tête qui a mordu,
 c'est la tête qui se plaint ! La queue ne dit rien, mais
 elle pense : — Mon tour va venir : coup de fouet pour
 coup de dent ! — S'étendant toute roide, sur le museau
 qui mord elle a flanqué une tape, qui craque comme le
 bois dans le feu.

Un cri encore, et ffou !... et un autre coup cinglant sur
 l'oreille droite de Rouzig a claqué ; durs comme grêle,
 des coups de queue de tout côté tombent sur sa tête,
 noire et rouge de meurtrissures ; un oeil crevé ; miau-
 lant lamentablement, affolé et jurant des ffou..., tout en
 émoi

E tec'h rag e lost ! Em stokañ 'ra 'r c'hêz
 Ouz ar gwez, ar mein, ar stroez hag an drez
 Hag ar chas ; erfin, pegen gwaz spourom
 Pa wej eo arru war-lez eur stêr don !
 Heñ ' garfe souzañ ; al lost digernez
 A s'itap war e chong eun tól, a son,

Kem a renk mont ' rôk ha sailhat en dour,
 'Lec'h ' voe penn ha lost beuzet hep rekour...

Petra 'n doa 'n e gorv ? eun diaoul, m'hen argarz :
 An Dizunvaniez, a ra 'n droug gant c'hoarz !
 Diouz 'n aerouant-se hon diwall, ael flour,
 Emgleo, joa 'n dud reiz, tad pep mad, pep marz !

Kanaouennou Nedeleg

GOULENNIT :

NI HOC'H ADOR MABIG JEZUZ

a gaver e *Kanaouennou Bleun-Brug 1922*, renket gand
 an Aotrou Mayer evit teir motiez dishenvel .

Skrivit d'he c'haout d'an dimezelled Torcol, 11, rue
 Algésiras, Brest, a gaiso d'ec'h, evit 22 real, al levr ema
 ennan.

GOULENNIT :

O NOZ SIOUL

hag

AN DOUAR ZO KOUSKET

daou gantik Nedeleg war doniou savet gand an Aotrou
 Mayer, ograouer iliz-veur Kemper.

7 lur 10 gwenneg ar 100 anezo o daou.

O goulenñ ouz an *Dimezelled Torcol*, 11, rue Algésiras,
 Brest.

Il fuit devant sa queue ! Le pauvret se cogne contre
 les arbres, les pierres, les halliers et les buissons, et
 les chiens ; enfin, quelle terrible épouvante, quand il se
 voit arrivé au bord d'une rivière profonde ! Il voudrait
 reculer ; la queue impitoyable lui applique sur la nu-
 que un coup sec, qui sonne,

Si bien qu'il doit avancer, et sauter dans l'eau, où il
 fut, tête et queue, noyé sans remède.

Qu'est-ce qu'il avait au corps ? Une diablesse exécrable,
 la Discorde, qui fait le mal en riant ! De ce monstre
 infernal garde-nous, doux ange de l'Étente, joie des bra-
 ves gens, source de tout bien, de toute merveille !

Emil ERNAULT

Barz ar Goued,

Renner Breuriez-veur ar brèzoneg.

(Da genderc'het).



Feiz ha Breiz ar Vugale

Tostaat a ra adarre Goueliou Nedeleg; evel Fantig ha Julianig, eleiz a baotred hag a verc'hed bihan a gempenno mat o bouteiier a-raok o renka e korn an oaled pa vezo eteo Nedeleg o tevi epad noz kaer ar Pellgent; o zud, m'o deus c'hoant da ober vad ha plijadur d'ezo a lakaio en o bouteiier *Feiz ha Breiz* 1932 a vezo ennan, bep miz, eur bern traou dudi, skrivet ha skeudennaouet a-ratoz kaer evid ar vugale vihan.

GLAOSTRE JOBIG



Jobig. — Ugent lur, e klaonstre! Julig, ne onezes ket pegement a ra 1 ha 2.

Julig. — O! eo, avat! 1 ha 2 a ra 3; sell. Gounnezet em eus.



Jobig (o skriva). — Nann, pa lavaran d'it; 1 ha 2 a ra 12; ha-nann 3... ro d'in da 20 lur; o gounnezet mat em eus.

Eun Istor evidoc'h AN NAER-GALET hag an EOSTIG

Setu eun istorig vrag hag a zo bet kontet d'in gant eur voereb koz. He skriva a ran evit lenne-rien *Feiz ha Breiz*. Sur oun e plijo d'ezo.

Piou ne anavez ket an *naer-galet* (1); ha piou ne oar ket e chom, pa vez trouc'het, an tammou anezi da finval epad meur a eurvez goudeze.

Piou ne anavez ket an *eostig* ha piou n'en deus ket e glevet o kana e-pad an noz, o kana ken flour ma 'z eo eun dudi.

D'ar mare ma c'hoarvezas an traou kontet amañ n'o devoa al loened nemet eul lagad pep hini anezo, eul lagad e kreiz o zal.

Eun devez kaer a nevez-amzer eur par-moualc'h a zemezas gant eur voualc'hig koant beg-melen. Hag holl laboused ar brouskoad a voe pedet d'al lein friko, servijet e beg ar wezenn dero.

Plijout a reas kalz ar c'hinnig d'an eostig.

A-benn eur pennad, avat, setu nec'het e benn. Faro e oa an tamm anezañ hag e lavare outan e-unan :

— Den ne sello ouzin-me ken rouz ha ken dilufr eo va fluñv e keñver re va c'henderv ar boc'h-ruzig ha zoken e-keñver re ar beufig a zo liou an tan war e vruched, re ar pabor ha re an tignouz glas.

Setu ma tigouezas gant e vignonez, an naer-galet.

(1) An naer-galet pe ar vuzugenn.

- Naerig, emezan, prest d'in da lagad 'ta !
- Evit petra ?
- Evit mont da eured ar voualc'h.
- Heu !
- Eo, evit eun devez hepken !
- Ma, mes te hen degaso d'in warc'hoaz vintin.
- Ya !

An naer-galet kaez a rôas he lagad. Setu an eostig kuit, foug ennañ, d'an eured.



Kaer meurbet e voe an eured; hag e beg ar wezenn-dero, al laboused a reas eul lip-e-bao eus ar gwella.

An eostig a reas anaoudegez gant eun eostigez koant hag a zañsas ganti a-hed an abardaez. C'hoant a grogas ennañ da zimezi ganti.

An eostigéz a asantas. P'eo gwir en doa he mignon daou lagad e-lec'h unan.



Evit plijout d'ezi, avat, an eostig a reas eun taol divaló d'an naer-galet. Ankounac'haat ' reas e bromesa ha derc'hel ' reas he lagad gantañ.

Abaoe an amzer-se an Aotrou Doue en deus roet pep a zaou lagad d'an holl loened. Nemet an naer-galet a zo chomet dall, hag an eostig a gan e-doug an noz. Rak, her gouzout a ra, ma teufe d'ezañ kousket e teufe an naer-galet da skrapa al lagad digantañ. Hag evit tremen e amzer eo e kan e zoniou ken drant.

MAB AR C'HOADOU.

KELEIER AR MIZ

Bleun-Brug Henbont

Ar gwall amzer a reas gaou ouz gouelioù Bleun-Brug Henbont rak ar re a yeas da bedi war bez Y.-P. Kalloc'h, d'ar gwener, 4 a viz Gwengolo, ne c'helljont ket dizrei er pardaez-ze da Henbont hag evelse dervez ar studiade-gou a voe kollet, penn-da-benn, kouls lavaret, war ar mor.

Da vihanan an trede dervez a voe kaer ; tud a deuas eleiz d'ar gouel ; an A. Mary, d'an oferenn-bred, e iliz I. V. an Nenv, a gomzas c'houek d'ar Vretoned bodet a vil vern, en dro d'e gador : « Eur bobl, emezan, a dle kiaout he zreid, en amzer dremenet, he c'halon, en amzer-vreman hag he fenn, en amzer da zont ! »

Lein a voe renet gant an A. Trehiou ha d'an tri pe bevar c'hanf breizad bodet en dro d'ezan, eskob Gwened a c'hourc'hemennas, eur wech c'hoaz, labourat da unvani o brezoneg.

Goude lein e voe c'hoariadeg ha kaniri e Koat Kergar, betek an noz.

An A. 'n Eskob e-unan a embannas ar prizioù ha setu aman roll ar c'hounideien :

Kan

Strolladoù a beder mouez :

Kenta priz { Kanerien St Loeiz an Oriant.
 { Kanerien Gwiskriv.

Teir mouez :

Kenta priz : Kanerien Ploue.

Eil priz : Kanerezed St Wazeg.

Kanerien o-unan :

Mouezioù uhel :

Kenta priz : Helena Evannou, an Oriant.

Mouezioù kreiz :

Kenta priz : Gaston ar Bastard, an Oriant.

Moueziou teo :

Kenta priz : Joseph ar Boru, an Oriant.

Prezegerez :

Kenta priz : An D^o Kourted a Benkesten.

Eil priz : E. Iehann Dream a Blénier.

Displegadur :

Keta priz : D^o an Orsi, an Oorient; Jann Guillory, a Noal-Pondi ; Bernadett Gargasson, Noal-Pondi.

Ti koz eur zant adrenket

Chapeliou Breiz hag a zo pajennadou eus istor hor gouenn stag ouz o mogeriou a venn koueza, en o foull, an eil goude eben.

Hini ar Vadalen., e Penmarc'h, hag a oa ker kaer a zo eun druez he gwelet ; a drugarez Doue eo stag an A. Cadiou, person nevez Penmarc'h, da glask arc'hant d'he renka.

Teir all, da vihana, a zo bet kempennet er bloaz-man : hini Lokiltud e Sizun, hini Larret, e Porspoder, hag hini Toull-ar-Groaz, e Skrignag.

Komzet hon eus diwarbenn an diou genta; eur ger ivez diwarbenn an drede.



Ar prosesion o vont da ziambroug ar zent ha d'o c'herc'hat en dro d'ho chapel goz.

Savet e oa bet, breman ez eus pevar pe bemp kant vloaz, en enor da zant Kaourintin ha... dilezet ; abaoe 1918 n'oa bet oferenn ebet enni ; he zoenn a oa kouezet tamn ha tamn hag an ilio a c'hollae an treustou hag a stanke ar prenecher ; he sent, glao o koueza warno trizek vloaz a oa, a oa bet prenet gand ar « Fédération des Syndicats d'initiatives de Bretagne » ; laket he-unan, e gwerz, an A. Perrot, person nevez Skrignag, her prenas d'an 23 a viz kerzu 1930; eiz miz goude, gand skoazell eleiz a dud vat, ti koz sant Kaourintin a oa adrenket ha benniget d'an 20 a viz gwengolo, gand an A. Kerouanton, person Plouigneo ; eun dudi e oa gwelet ar zent koz, adroet d'ar chapel gand ar re o devoa o frenet, nevezet o saeou d'ezo gand eun den yaouank dournet kaer, o tizrei d'o c'hêr goz, war diouskoaz, pe gentoc'h war galon ezech ha gwragez an tiegeziou tro-war-dro, ouz son ar c'hloc'h ha kan an Te Deum hag ar re goz, o welet ar pez a welent, a ouele.

Goude an oferenn-bred, galvet gant soniou skiltrus binioù skosek Gweltas Jaffrennon, ouspenn kant den a



An A. Kerouanton
o venniga ar feunteun nevez.

azezas da zebri o lein, ouz taoliou bleuniet savet dindan gwez avalou Intanvez ar C'hotonhec, ha goude ar gousperou, kanerien c'hoarierien ha gourinierien eus ar vro, a lakeas kement hini a oa deuet d'ar pardon da dremen laouen eurtou diweza an dervez kaer ha santel-ze.

« Bleizi » koat Gwernaon o deus diskouezet eno e oant tud hag a ouie beva ha kristenien hag a ouie pedi ; ra gouezo warno dalc'h-mat ha war gement hini en deus roet an douan, en eun doare pe zoare, da adrenka chapel Toul-ar-Groaz, bennoz ha pardon sant Kaourintin, patron Kerne.



Eun daolenn nevez

(ne weler aman nemed an hanter anezi)
graet gant Yv. ar Floc'h, evit Toul-ar-Groaz.

Ar vuhez hag ar maro

An Aotrou hag an Itron Léon Toutemont o deus an eurvad da gemenn d'eoc'h ginivelez o mab Erwan.

Ploueskad,

Ar 15 a viz Here 1931.

Yec'hed ha bennoz Doue d'ar breizad bihan ha d'e gent.

An A. Gantois, unan eus ar gwella mignoned en deus Breiz e bro-Flandrez, a zegas d'eomp kelou doanuis maro e dad, an Doktor Albert-Felix Gantois, maro e Watten, d'ar zul 22 a viz du, en e bempet bloaz hag hanter kant, ha beziet eno d'ar yaou warlerc'h da 10 eur hanter. E erbedi a reomp ouz hol lennerien ma teuo Doue d'e bardona.

EUR GAVADENN

An A. Perennes, eil rener ar « *Société Archéologique du Finistère* », a gavas e Mespaol, breman ez eus pevar bloaz, eur maen-harz torret e c'helled lenn mat, warnan c'hoaz, an darn geriou latin-man :

MANICUS AXUMUS TRI POTEST

(Germanicus maximus tribunicia potestate)

Ar maen-ze a dle beza eus an trede kantved ha laket eo bet eno war lez eun hent bras graet gant ar Romaned en dra m'edont c'hoaz oc'h ober o mistri en Arvor.

Kavadenn an A. Perennes a zo bet kaset da virdi (musée). Kemper, en deiziou tremen, ha laket eno e kichen eur maen-harz all, daou c'hant vloaz kosoc'h egetan, bet kavet e Kerskaq, war lez an hent bras a rea eus a Geraëz, dre Verrien, Lambaol ha Kernilis da aochou Plougerne.





Responchou Divinadennou Miz Du

- I. — Penn-glin an ozac'h ha fri ar c'hi.
- II. — Eun houc'h hag eur wiz.
- III. — Dant.
asa.
na.
t'.

IV. — Penn al laer a weler mat etre skourrou brasa ar wezenn.

V. — Mab Saig a weler e benn e pleg brec'h kleiz Melar ar Justinog.

Taolit evez. O veza ma n'hon devoa ket bet laket c'hoaz a zivinadennou a c'hiz nevez evel ar bevare hag ar bempet a oa er miz tremen, e roomp aman dioc'htu o responchou gant re an divinadennou all a oa d'o heul, evit diskouez d'ho lennerien penaos o c'haout hag evelse hor c'henstrivadeg c'hoanv ne zigoro nemet gant divinadennou ar miz a zeu — Pedi a ran ar re a anavez divinadennou ha n'int ket bet moulet aman c'hoaz d'o degas d'eomp. Plijadur a raint d'hon tud yaouank ha d'hor bugale.

KANAOUENNOU BLEUN-BRUG

Brest a zo er voulerez hag a vezo e gwerz, e Keriltud, abenn Gouelioù Nedeleg a zeu : 22 real ar pezh, kaset dre bost.

TAOLENN 1931

KENTELIOU

PAJENN

E tal an fan, <i>gant L. B.</i>	1
Eun nebeud mennozioù, <i>gant J. L'Helgouac'h</i>	4
An holen, <i>gant G. Dewi</i>	22
War dreuzou ar bloaz nevez, <i>gant L. Herrieu</i>	41
An Tad a familh, <i>gant an A. Duparc</i>	81
Tiez annez, <i>gant G. Dewi</i>	99, 133
Kentelioù an Ti-Kêr, <i>gant J. B.</i>	103
Ene bras an Indez : Gandhi, <i>gant Y.-V. Perrot</i>	121
Judica me, <i>gant E. Berthou</i>	130
Miz Ebrel, Askellig an hanv, <i>Y.-V. P.</i>	153
Mari, <i>gant an Tad L'Helgouac'h</i>	161
Theresa Neumann, <i>gant Y.-V. Perrot</i>	181
An teir gwalenn	202
Kentelioù Mâtral, <i>gant Tintin Anna</i>	209
Breiz, mor a gan, <i>gant Tintin Anna</i>	225
Pardon bras santez Anna Wened	241
Eur rod da c'horro ar zaout, <i>gant Y.-V. P.</i>	257
Kantved bloaz ar skolioù libr <i>gant J. M. Phlÿppot</i>	281
Libera nos a malo, <i>gant Tadig</i>	306
Lourd Breiz, <i>gant eur pirc'hirin</i>	321
Liziri ar Seiz Breur, <i>gant Y.-V. Perrot</i>	361
Eur vro hag a zo pedet eviti	397
Prezegenn pardon santez Anna, <i>gant Y. U.</i>	401
Labourioù ar Merc'hed, <i>gant Tintin Anna</i>	408
Kloerdi nevez Kemper, <i>gant an A. Duparc</i>	441
Gant piou ar wirionez, <i>gant Mab ar C'hoadou</i>	443
Kentelioù d'ar baotred yaouank, <i>gant Y. U.</i>	446
Kentelioù d'ar Merc'hed yaouank, <i>gant Tintin Anna</i>	451
Baleadenn ha prederiadennou, <i>gant Pôtr e vragou bras</i>	456
Skolig an Emglevadeg, <i>gant e Ernault</i>	464

ISTOR

An Tad Maner, <i>gant Y. U.</i> , 7, 47, 93, 125, 173, 204	244, 288	382
Leanezed ar C'halviar, <i>gant Y. U.</i>		44
An Aotrou Gwestriant, <i>gant Tintin Anna</i>		53
Oferenn sant Brendan, <i>gant G. P.</i>		61
Maner Kergroadez, <i>gant G. P.</i>	67,	141
Ar c'houldriou, <i>gant G. P.</i>		111
Kastell Perzel, <i>gant G. P.</i>		138
Puns Maner Kervezeg, <i>gant G. P.</i>		147


Al liver Y. L. Nicolas, <i>gant G. P.</i>	187
Kastell Keryann, <i>gant Tintin Anna</i>	195
Maner Kerroue, <i>gant G. P.</i>	212
Chapel sant Iltud Sizun, <i>G. P.</i>	221
Ar C'holonel Olier Gervelleg, <i>gant G. P.</i>	230
Sant Edern, <i>gant G. P.</i>	249
Listri breizat kizellet er vein, <i>gant G. P.</i>	266
Santez Azenor, <i>gant H. C.</i>	278
Enezennou Glenan, <i>gant G. P.</i>	292
Chapel sant Kadou, <i>gant G. P.</i>	301
Ostaleriou Breiz, <i>gant G. P.</i>	329
Sant Idy, <i>gant G. P.</i>	348
Chapel sant Ener, <i>gant G. P.</i>	376
Yann al Lagadec hag ar C'hatolikon, <i>gant G. P.</i>	422
Abati Gwenn, <i>gant Y.-V. P.</i>	432

SONIOU HA GWERZIOU

Eus an Arvor d'ar menez.....	26
Al Lignez Veur, <i>gant E. ar Moal</i>	69
Ar vintorezig, <i>gant F. Vallée</i>	156
Dinec'ha marc'hadour, <i>gant F. G.</i>	164
Kalon Jezuz, <i>gant an Tad L'Helgouac'h</i>	201
Kloareg Koad ar C'hrammou, <i>gant ar Skour</i>	214
Eul leo a zo hir.....	220
Ha pa oan-me denik yaouank.....	260
Pedenn evit Breiz, <i>gant Y.-B. Kalloc'h</i>	273
Sonnenn va C'halon, <i>gant J.-E. Marechal</i>	340
Eur baourez eurus, <i>gant M.-A. Abgrall</i>	354
An Anzav, <i>gant J. L. Mayet</i>	381
Da zaoulagad, <i>gant J.-L. Mayet</i>	421
An douar zo breman kousket, <i>gant J.-L. Mayet</i>	459
O Noz sioul ! <i>gant J.-L. Mayet</i>	460
Pedenn da Zant Kaourintin.....	461

MARVAILHOU

An diou voutailh, <i>gant G. P.</i>	12
Ar c'hi hag ar c'horn.....	20
Miser, <i>gant Yann Gostarreun</i>	63
Penmoc'h bras Hellez, <i>gant G. P.</i>	70
Aotrou Traon-Kerret, <i>gant G. P.</i>	105
Aotrou Run ar Vran, <i>gant Y. Gostarreun</i>	143
Aotrou Pont 'n Abad, <i>gant G. P.</i>	166
An tri Goulenn, <i>gant G. P.</i>	262
Plac'h nevez Trobodec, <i>gant G. P.</i>	388
Teir barvenn aour baro an diaoul, <i>gant G. P.</i>	411
An naer-galet, <i>gant Mab ar C'hoadou</i>	475



Archives et bibliothèque diocésaine de Quimper et Léon

Document numérisé
Source : <http://catholique-quimper.ccf.fr/diocese/bibliotheque-et-archives.html>

2011